

AL LIAMM 198

TAOLENN

Hervelina Germeur gant Sten KIDNA	3
Porno gant Añjela DUVAL	5
Daleañ a ra gant Reun MENEZ-KELDREG	6
" Pipi " gant Dominique RENARD	15
John Millington Synge ha Breizh gant R. DELAPORTE	17
Galloeg, normaneg hag all gant Sten KIDNA	35
Yec'hed ar vamm-gozh gant Loeiz ANDOUARD	40
Priz Langleiz 1979 d'un c'helenner skol-veur amerikan gant Herve LANNDIERN	46
Danevelloù brezhoneg troet hag embannet e kembraeg, gant Gwyn GRIFFITHS	49
Nann ! ne zevimp ket hon ilizoù gant F. KERVENDAL	53
Avelioù-tro gant GORWENAL	58
Notennoù	61

Hervelina Germeur

Ar potin zo druz,
He daouarn zo ruz
Ha skuizh he divhar.
Un tammig bouzar
Gant trouz ar ru.

Hag Hervelina Germeur
Boemet gant ar vro-hud
A laosk he spered da nijal
Trema an ti, 'tal ar palud,
Trema Teno war vord ar Sal
Flouret d'ar mor pa zeu ar chal.

Keramili ha Koetrivas
Langolvas ha Kergolvi.

« Hastit afo Hervelina,
E petra emaoc'h o soñjal ? »
'Aters an Itron Becdelièvre.
« M'ho klev o vourboutil
En ho lavar divalav. »

Kermadio ha Talroz
Lannvaaz ha Bodivo.

« Soñjit 'ta,
Me a zegemer hiziv
Les Durand-Lachaux et les Pitard-Labonne.
Nag un enor evidoc'h
Servijout ouzh taol pitaoted ken bras. »

Kerbederi ha Rosnarho
Talinis ha Koetkourzo.

4

Mouest ar gegin,
Tomm ar fornigell
Blaz ar c'haviar
A ra doñjer dezhi.
Asiedoù da dorchañ tuchant.
Trouz dizehan ar c'hirri-tan
Noz-deiz en tu 'rall d'ar voger.

Ar Stangala ha Minijs
Tregevir hag ar Salo.

Neoazh, penn raz an Aotrou Becdelièvre
- Ken ruz hag ar rosbif en e asied -
Zo heñvel ouzh gargoul al Lubrisite,
Hag e zorn dindan an daol a glask gouzout
Mar deo seiz pe reion
Brozh an Itron Pitard-Labonne.

Lannroz ha Brezilberin
Kerbredeva ha Perin

Ha barr he c'halon gant ar Sevenadur
Hervelina Germeur
A daol he zavañjer wenn,
A grog en he malizenn,
A ya war-du Montparnasse.
Ha re c'houstonad an tren
A gas Hervelina,
- Hervelina hag a vennas
Anavet joaiou ar gêr vras -
Davet Job Gwegan
Job Gwegan a laras dezhi :
« Te ' vo mestrez e-barzh hon ti. »

Keriagun ha Lokmalo
Talara hag al Lizio.

A gas Hervelina
D'ar vro-hud,
Da Deno war vord ar Sal
Flouret d'ar mor pa zeu ar chal.

5
Añjela DUVAL

Porno

Bez' zo kailhar ha kailhar.
Bez' zo kaihhar eo gouest an dour d'o gwalc'hiñ
Bez' zo kailhar eo a-boan d'an tan hen ober
Kailhar-pusun ur skritur
War ur bajenn hollc'hlan :
Glaour ha lin brein
War ur follenn hollwenn.
War ar paper gwerc'h bremañ gwallet.
O tougen arouezioù ar Vezh, ar pec'hed.
Divergontiz ha pistri marvel
Ar gwashañ si... Ha mervel ' ray laouen
Ar bajenn wenn gwallet
E flamm an Tantad.
Ne chomo outi nemet ur brizhenn ludu
Testeni eus an drama.

11.11.79

* * *

Ar varzhoneg " Pirc'hirined " bet embannet war an niverenn 197 a oa gant J. L.
DEY ha neket gant Per Diolier. Pediañ a reomp an oberour d'hon digareziñ.

DALEÑ A RA...

Dievezh e lezas dorig an nor-borzh da serriñ. Un tammig re laosk e tlee bezañ biñset gwinterell ar stourmer ha stekiñ a rae bep tro ma veze lezet da vont. Kant gwech en devoa soñjet komz eus an dra-se d'ar porzhier, rak hegasus e oa. Hogen ne soñje e kement-se nemet pa lakae e dreid war bazenn uhelañ an diri a rae ur seurt pondalez war ar straed, evit mont d'ar gêr, echuet gantañ e labour.

Kemeret en devoa ar boaz, abaoe pell zo, d'ober un arsav aze bewech ma kuitae e vurev, a-raok diskenn an teir fazenn a gase d'ar riblenn-straed. Ur sell dievezh a lezas an deiz-se da barañ war ar vuhez a virvilhe dirazañ er boulouard bevnet a wez-tilh. Re a santadurioù a zeue dezhañ evit gallout o resisaat, glasvez ar gwez, braventez ar merc'hed en o saeoù skañv liesliv, an aer fresk - daoust da domnder an amzer - kemmesket gant c'hwez ar bezhin o tont eus ar porzh hag hini badaouus al lireu a greske el liorz dres en tu all d'ar straed. Boazet e oa da gutuilh gant ar brasañ plijadur e foñs e zaoulagad hag e don e fronelloù santadurioù an aer yac'h goude bezañ chomet eurvezhioù-pad en hini enket e vurev daoust d'ar prenester bras digor.

D'ar mare m'en em gave war ar pondalez e kroge evitañ ur vuhez nevez. Hep gouzout dezhañ, e chome meur a wech peulet e-pad un nebeut amzer, o c'hortoz a-drek e gein, stlakadenn an nor war he fostoù. Ar stlakadenn-se hag a seblante ober un diskrog e don e emskiant, a oa deut da vezañ evel un arouez evitañ. Ha marteze a-walc'h e oa abalamour da se ne oa ket kemend-all a bres warnañ komz d'ar porzhier eus biñs an norig. Fetis e sante an aer oc'h en em sankañ e don e skevent. Evel just ne bade seurt gortozadenn nemet un amzerig a netra. Hir a-walc'h a oa koulskoude evit ma c'hellfe tañva ar santadur-se a c'houlloder a rae dezhañ chom e-pign, etre div vuhez - hini e labour hag hini e frankiz - hag ur seurt skrijadenn a levez a verze bep taol o redek war groc'hen e gein.

7

En endervezh-se e raksantas e falveze dezhañ un dra bennak evit gallout, evel boaz, en em gavout dieubet diouzh ar pezh a leze a-dreñv e gein. Re e talee stlakadenn an nor ha distreiñ a reas estonet, evit gouzout ar pezh a c'hoarveze. Souezhet e chomas dirak ar stumm postek a zen en em zalc'he e toull an nor, tostik-tre ouzh e gein, o herzel outi da serriñ. Ur momed e chomas, e zaoulagad paret war ar furm dic'hortoz a zirenke e voazioù. Hegaset en em sante. En em c'houlenn a rae perak ha penaos e c'helle unan bennak emellout, ken divergont, en e vuhez.

Egile a seblante ken hegaset all kaout da c'hortoz a-dreñv kein ur seurt luguder evit gallout tremen. Sellout a rejont, diseven a-walc'h an eil ouzh egile. Hogen ne badas ket pell o souezh. A-gevret e voe sklerijennet o dremmoù gant ul levez trumm hag an hevelep estlammadenn a zeuas eus o genou : - Te !

Un den ne anaveze ket en em zalc'he sko a-dreñv kein e vignon.

Mignoned vras e oant bet o daou en amzer o yaouankiz, da lavarout eo etre o ugent hag o femp bloaz warn-ugent, pa 'z aent, disoursi ha didrabas, da redek bro, o tastum tomatez e Jerzenez, o c'horiñ saout e Bro-Friz, pe o fardañ fourmaj-laezh, melloù torelloù, en Helvetia. An den all a oa un estren evitañ, hogen ne rae ket forzh gant kement-se rak mignon ur mignon a zo ur mignon.

Goude ar c'hentañ gourc'hemenoù ha taolioù dorn war an divskoaz ha war ar c'hostezioù ez eas an tri anezho da glask goudor er c'hentañ ostaleri.

En-dro d'ur garidon, en ur vlazañ chugon sklaset, e tirampas o soñjou diouzh ar vuhez hag an traoù a c'helc'hie anezho evit kounaat gant c'hoarzhadennoù diouzh al lakepoded disoursi ha divoneiz e oant gwechall, muioc'h a vall warno kargañ o daoulagad gant gizioù a-wechoù iskis ar broioù estren, eget leuniañ o yalc'h.

Pell e padas an diviz hep dezho zoken en em rentañ kont eus an amzer o tremen. Ha sur a-walc'h en divije gallet tremen nouspet kard-eur all ma ne vije ket deuet ar mignon da c'houlenn digantañ keloù eus e diegezh. Darbet e oa bet dezhañ lonkañ e chugon a-dreuz, rak pa venegas e wreg e teuas da soñj dezhañ en dije dleet mont, diouzhtu goude e labour, da gerc'hat e baotrig er skol-vamm.

8

Trumm e savas. E berr gomzoù en em zigarezas : pemp munutenn ken ! rak ar skol a zo amañ kichen-tre er straed kentañ war an tu dehou.

- Mont a ran d'an daoulamm. Gortozit ac'hanon dreist-holl ha gwelout a reot bremaik ar mailherig he deus dozvet din va gwreg. Evel just, e kendalc'has, dont a rit ho taou da goaniañ d'an ti. Va gwreg ne bardonfe ket din ho lezel da vont da bredañ d'un ostaleri !

Hag hep gortoz o respont, dillo, e skarzhas er-maez.

Ul lamm gouez a reas war an nor. Houmañ a zigoras a-daol-trumm dindan ar bouzadenn. Gant un taol-dorn he stlapas war e seulioù hag a-boan er-maez en em lakaas da redek.

D'an daoulamm ez ae ganti. Ur blijadur e oa evitañ redek evel-se, war gorf e roched. N'en devoa ket soñjet zoken kemer e borpant a chomas istribilhet ouzh kein e gador en ostaleri ! Skañv en em gave ha koulskoude ne oa ket didrabas-tre. Evel just al levenez a leunie e ene da vezañ adkavet e vignon kollet a wel abaoe bloavezhioù, hogen en hevelep amzer, bremañ pa rede davet ar skol e sante e galon oc'h en em stardañ.

E don e emskiant ne c'helle ket degemer seurt digarez evit en em zidamall diouzh e verrboellegezh. Penaos 'ta e oa deut a-benn da ankounac'haat e vabig ha d'e lezel keid-all e-unanik en ur sal-degemer digenvez, dilezet krenn marteze gant an implijidi aet skuizh gortoz seurt tud digalon ? Ha kement-se abalamour m'en devoa kavet e dad ur mignon. Empentiñ a rae an daeloù o ruilhal war e jodoù tener.

Ur bern menozioù all a zeuas d'en em gemmeskañ en e benn dre ma rede.

Soñjal a reas ivez e selloù fuloret e wreg, bremaik, pa lavarfe dezhi pezh a oa c'hoarvezet.

Redek a rae...

Pep hini, er bed-mañ, en deus ar gwir, p'emañ war ar straed, pe da vale ingalik, pe da redek, pe d'ober e ruz reor, pe da sankañ tizh. Eñ en doa dibabet redek. Dizereat e c'hell se seblantout bezañ marteze. Hogen, an aliesañ, pep hini en deus trawalc'h da bleidiñ gant e venozioù e-unan evit koll amzer da chom da arvestiñ pe da varn doareoù kerzhed ar re all.

9

Kazi sur en divije gallet redek didrabas ha didamall betek korn ar straed, ma ne vije ket bet degouezhet da zaou boliser en em gavout peulet war ribl ar straed, dres dirak dor an ostaleri ma tifoupas diouti ken trumm. Seblantout a ra alies emañ an dud-se o koll o amzer hag o fonnusañ labour a ginnig meur a wech bezañ gortoz an amzer da dremen. Arabat eo faziañ war o c'hont. Ranell ez int. Pep fiñv, pep tra dic'hortoz, a chom enskrivet en o daoulagad. Difoupadenn drumm un den diouzh un ostaleri ha stlakadenn an nor war e seulioù a zedennas o evezh.

Trouz an nor o stlakañ war he fostoù en divije gallet a-walc'h tremen hep o souezhiñ re. Hogen ar redadenn... aze e oa an dalc'h. Gallout a ra unan treiñ kein d'un ostaleri en ur feson rust, pe mont er-maez diouzh seurt tiez, hegaset. Ha pa vezer fuloret an diotañ tra a c'heller ober eo, lakomp, disvantañ ur votezadenn d'an nor ha mat ! An hini a red e seurt degouezhadenn ne zoug ket ur goustiañs naet. Redek n'eo ket pellaat. Redek a zo tec'hout. Hag an hini a dec'h en deus aon. Hag, evel just, an hini en deus aon a zo kablus. Re sklaer eo en deus graet un dra bennak divalav. It da welout petra ! Ul laeroñsi bennak ! Met den ne oa deut er-maez war e lerc'h da c'hopal « Al laer ! Al laer ! ». Met, diouzh an tu all, den marteze n'en devoa bet betek-hen an tu da verzout an torfed. Ur gudenn a oa. Int eo a oa aze evit displegañ seurt kudennoù. Test e oant, hag evel just, gallout a rafent diskleriañ pezh a oa c'hoarvezet ma vije douget klemm. Ya, met re ziwezhat e vije. Evel boaz. Atav ar memes tra. Ha p'eo ret, goude se, goulennata an testoù n'eus netra vat da dennañ diouzh o lavarioù. Gwir eo, an taol-mañ, ne vije ket heñvel. Int a c'hellfe liveañ ur patrom resis eus an den-se. Met klevout a raent dija blejadenn ar rener pa ziskleirfent dezhañ e oant aze, dirak an ostaleri, pa oa deut er-maez. Klevout a raent, a-ziagent, e vouezh rust o c'hopal dezho : « Hag hoc'h eus e lezet da achap dirak o fri, hep zoken ur c'hwitelladenn ? ». Ha pegeit e padfe goude se e imor fall-put en o c'heñver ?

Ya ! Re vuan kalz re vuan e rede hennezh. Arabat e vije e lezel da skampañ ! Evel war emglev, pep hini a daolas ur sell a gorn war e geneil. Hag a-gevret, daou zorn dehou en em sankas er godelloù ; ha war un dro div c'hwitell en em gavas sanket er genaouioù. Ha trumm ur c'hwitelladenn dregernus a leunias ar straed.

10

An den, degouezhet bremañ un daou ugent metr bennak outo a gendalc'he gant e redadenn, a lammoù lijer, en ur ober lammoùigoù a-gleiz pe a-zehou evit chom hep stokañ ouzh an dreminidi. Ne seblante ober van ebet ouzh ar c'hwitelladennoù. Evel just, klevet en devoa. Hogen, re ac'hubet e oa e spered gant e venozioù personel evit ma vije distroet e evezh gant an darvoudoùigoù a c'helle c'hoarvezout a-dreñv e gein war ar straed. « Ur blenier bennak difoutre, » a soñjas. Ne zeuas ket d'e spered avat e c'helle-eñ kaout un dra bennak da welout gant ar c'hwitelladennoù. Diseblant e chome ouzh ar pezh a c'helle degouezhout a-dreñv e gein. Douget en em gave, en abardaez klouar, gant ur seurt levenez kemmesket a enkrez. Kablus en em sante e-keñver e vabig. Gwir eo en devoa bet ul levenez dispar oc'h adkavout e vignon. Hogen kement-se ne oa ket un digarez d'e skañbennerezh. Soñjal a reas ivez en e wreg. Pet eur eo ? en em c'houlennas. Ur sell a daolas ouzh e eurier hep gorrekaat : tost seizh eur hanter. Kement-se am eus daleet, a soñjas. Gwir eo e oant chomet ur pennadig brav a amzer da estlammiñ war ar straed, ha goude n'o devoa ket hastet e mod ebet dre ma 'z aent etrezek an ostaleri. Hag eno o devoa tremenet amzer o varvailhañ.

En e soñj e wele e baour kaezh gwreg, degouezhet a-benn bremañ er gêr, abaoe tost da un eur. « Pennfollet e tle bezañ, » a brederias an taol-mañ a vouezh uhel. Den en ti, na mab na gwaz ! Evel se e oa e wreg. Un draig a netra, dreist-holl pa selle an dra-se ouzh he bugel a rae dezhi koll he foell. He gwelout a rae o turlutañ dre an ti, o vont diouzh ur gambr d'un all, o tigeriñ pep armel, pep tiretenn, o tiblasañ kadorioù hag o redek, en un taol, d'ar prenestr da deurel ur sell er-maez. Ha ne welfe, evel just, na pried na bugel, peogwir en em gave c'hoazh eñ, amañ er straed, o redek war-zu ar skol da gerc'hat e vugel. Digalonekaat a rafe e wreg goude he zaol-lagad er-maez. Mont a rafe neuze d'ar gegin, azezañ a rafe, hec'h ilinoù harpet war an daol, he daou zorn juntet dirak he bizaj, he daou viz meud sanket dindan he chink, he bizied yod o tont dres da dizhout beg he fri. Hogen ne badfe ket pell er stumm-se. Hag adkregiñ a rafe, nebeut goude, gant un droiad all er sal-debriñ, ha goude, a-nevez er c'hambroù betek ma tistrofe ar paotr bihan d'ar gêr. Kizidik e oa, kalz re gizidik. Ne ouie ket mui pet gwech en devoa lavaret dezhi e oa arabat en em chalañ evel-se, evit traoùigoù didalvez. Hogen kalon ur vaouez, dreist-holl pa

'z eo ar vaouez-se ur vamm, a zo un dra ne c'hell morse kemmñ gant alioù an nesañ.

11

Redek a rae...

A-benn un ugent metrad bennak e trofe war an tu dehou, un tregont metr bennak all a gasfe anezhañ dirak dor ar skol. Dres pa soñje e kement-se hag e virvilhe al levenez en e galon e tourtas gant un den en devoa, a seblantas dezhañ, en em daolet a-ratozh kaer dirazañ.

... Feuket en em gavas an daou bolis, teir pe beder gwech o devoa c'hwitellet war-lerc'h an istrogell-se hep ma reas an disterañ van teurel kont eus o gourc'hemmenoù c'hwitellet.

Ne oant ket chomet da rambreal. Hag a-dreñv e gein, dre ma rede dichal ha disourci diouzh kement tra na selle ket ouzh e vab, ar boliserien o devoa loc'het, d'an daoulamm, war e lerc'h. Ha pell e oant da vezañ stroallek, gourdonet m'int war meur a sport. O c'hwitelladennoù a gendalc'he da dregerniñ er straed. Hag etre div c'hwitelladenn e kavas amzer unan anezho da c'hopal a-bouez-penn : « Harzit anezhañ ! » hag e vrec'h astennet a vuke war-zu ar reder. Hogen daoust d'o safar ha d'o galvoù, ar reder a rede, didrabas. Koulskoude buan-tre e teujont a-benn da zedennañ evezh an dremenerien, niverus a-walc'h d'an eur-se war ar straed.

Un arvest dedennus eo bet a-viskoazh gwelout poliserien o redek war-lerc'h un torfedour. Pep arvester a het, evel just, gwelout ar urzh o kouezhañ war skoaz al lavagnoned, dindan stumm dorn pounner ur poliser. Hogen, ar peurvuiañ, n'eo ket qwall vras niver ar re a zo prest da reiñ da hemañ un taol dorn en e labour. Pep hini a oar, dre anien. ez eo dañjerus emellout e seurt hemolc'hadenn. Re vuan e c'hell degouezhout d'unan lakaat e vuhez en arvar evit traoù ned int, e mod ebet, e afer. Rak prim a-walc'h e vez c'hoariet gant pistolennoù er jeu-se.

An taol-mañ, koulskoude unan en em gavas, marteze hardisoc'h, marteze drochoc'h eget ar re all, hag a sailhas war ar preizh ma rede ar boliserien war e lerc'h.

Piv e oa ? Diouzh pelec'h e teue ? Perak ec'h astennas e droad evit ober d'ar reder ur c'hrog-gouren ? N'ouzer ket. Un dra iskis eo d'unan en em gavout, evel-se, dres war hent un torfedour ha gellout, ken aes, ober dezhañ tapout e lamm. Kablus ? Digablus ? Petra vern ? Amzer a gemeras da jediñ e daol, rak seurt traoù a rank unan dont a-benn d'o seveniñ hep an disterañ fazi. A-hend-all n'o deus talvoudegezh ebet hag e vije gwelloc'h zoken chom hep o boulc'hañ.

12

Ne fazias ket. Un astennig gar a oa bet trawalc'h, rak an hini droch-se, e-lec'h sellout pelec'h e lakae e dreid, a rede, beg e fri war reor al loar... Ur spluj a reas. Ha p'en em gavas ledet war ter-du ar riblenn straed e chomas ken abafet gant e lamm ma ne zeuas ket a-benn da gompren ar pezh a c'hoarveze gantañ. Nebeutoc'h c'hoazh ez intentas pa santas pouez ur c'horf all o kouezhañ warnañ. Kentañ tra a reas oa en em c'houlenn penaos e c'helle bezañ ken dievezh ! Diouzhtu goude, divrec'h nerzhus e vriatas hag a zalc'has anezhañ pladet war an douar. Re souezhet en em gavas zoken evit klask, war an taol, en em zizober diouzh divrec'h an hini a sailhe warnañ. Balbouzat a reas etre e zent, ne ouie ket re vat pe evitañ e-unan pe evit egile : « Biskoazh kemend-all ! Hemañ a dle bezañ da stagañ ! ». Hag en un taol e kounnaras. Soñjal a reas e oa un druez, gant ar vezh, d'unan gouzañv seurt dismegañs en e gêr, p'emañ kant lev diouzh e spered klask chigard eus nikun. Daoust d'e souezh ne chomas ket pell amzer da dermal. Ur boulezadenn nerzhus ha trumm a reas. Egile, souprenet, a ruilhas a-gostez. Ha prim en em gavas war e dreid, sonn ha kounnaret, kounnaret-yen. Er momedoù-se ne brederier ket, soñj e vab a nijas pell diouzh e spered. Aze e chome, peulet dirak ar genaoueg-se en devoa graet dezhañ kouezhañ, o c'hortoz anezhañ da sevel, rak, ne oa ket da dortañ dav e

vije dezhañ displegañ e emzalc'h ! Ne c'helle ket lezel seurt dismegañs da dremen. Ken euzhus, ma n'eo ket gwashoc'h, hag ur skopadenn e-kreiz e zremm e kave kement-se. Hep prederiañ en devoa kemeret stumm ur stourmer, e gorf damstouet war-raok, e zaouarn serret, prest da dagañ. Hogen ne gavas ket an tu da skeiñ, na zoken da dabutal, rak hep dezhañ gouzout diouzh pelec'h e teuas an taolioù en em gavas, ur pennadig goude, dibradet da vat, ha ken prim ma kouezhas evel ur bern war an douar. Daou all (piv e oant ? diouzh pelec'h e teuent ? perak e dagent ?) a oa deut a-drek e gein. Unan a zisvantis un taol spontus war gostez e benn e-pad ma sanke egile un taol botez war e ufern, d'ober dezhañ blejal. E-keit-se an hini kentañ, o welout sikour o tont dezhañ, en em lakaas a-nevez war e dreid. Tri e oant eta oc'h ober dezhañ e stal. Hag evel ma vijent en em glevet, hep zoken eskemm ur ger etrezo, e krogas an taolioù botez da gouezhañ warnañ didruez. En em lakaat a reas war e gof evit gwareziñ e vouzelloù diouzh an taolioù hag e sankas e benn etre e zivrec'h. Ne savas ket e selloù da gontañ e enebourien, met seblantout a rae dezhañ e oa degouezhet tri pe bevar all da skoazellañ an dioded o devoa e daget ar c'hentañ.

13

E nebeut a amzer e oa bloñset e gostezioù, friket e vuzelloù, kignet e fas. Unan eus e zivskouarn a oa hanter zistaget hag ar gwad a strinke diouzh ur faout en e dal, o c'holeiñ e zremm. Ne oa ket posupl dezhañ gouzout niver an taolioù a resevas en e feskinier, en e gostezioù, en e zivesker. Ha pa zeuas, nebeut goude, an daou boliser da dizhout lec'h an emgann en em gavent dalc'het er-maez eus ur c'helc'h graet gant un dousennad a dud gronnet en-dro d'ur c'horf mastaret, astennet en e wad.

Ret e voe d'ar boliserien blejal meur a wech, ha d'ar fin, sailhañ a-dro vrec'h war an dud fuloret a felle dezho « echuiñ » an torfedour. Rak, evel just, evit pep hini eus an dud-se, d'un torfedour, ha da biv ken, e oa bet graet e stal.

A-benn ar fin ar c'helc'h en em zistardas hag an daou boliser a c'hellas teurel o c'hrabanoù war o freizh. Semplet e oa hag en ur stad vantrus.

Kablus evel ma oa e vije bet koulskoude gwelloc'h dezhañ gortoz hag herzel d'o urzh ! ne vije ket en em gavet er stad ma oa bremañ.

D'ar c'homiserdi ez eas unan da bellgomz. Nebeut goude e tegouezhas ur c'harr.

Diwadañ a rae ar c'horf astennet dirazo dre c'houlilioù niverus. Serret e oa e zaoulagad hag e c'henou hanter zigor a leze da welout dent drailhet. Flac'hotañ anezhañ a oa bet ret evit ober dezhañ adkavout e spered. Glaour ha gwad kemmesket a zivere diouzh korn e vuzelloù. Ur faout hir ha ledan a verke e dal. E zaouarn, koeñvet ha mastaret a chome hanter zigor. Astennet en devoa e zivrec'h war an douar, pezh a rae dezhañ bezañ par a-walc'h d'ur C'hrist diskennet diouzh ar groaz. Diniverus e tlee bezañ ar goulioù kuzhet dindan an tamm roched roget pe an otoù saotret.

Ar c'harr-polis a zegouezhas d'ar fin. Sammet e voe neuze hep teneridigezh. Da seurt forban ne zouger ket doujañs. Poulloùigoù gwad a chomas war ar riblenn straed. Paotred ar c'harr-teil a daolo aze warc'hoazh un taol-skub.

Pell amzer e chomas ar wazed a oa bet mestr d'an torfedour da varvailhañ diwar o mestr-taol goude disparti ar c'harr-polis.

14

Plijus-kenañ eo fougeal goude an trec'h. Uhel e oa ar gaoz ha jestraouiñ a rae an darn vuiañ Pep kilhog a gav atav e vernig teil evit e gan. Er fin ez eo o zeodoù a c'houlennas truez hag ar baotred a fardas a-gevret en ostaleri penn ar straed.

Daou zen a oa aze ivez e sioulder an abardaez dirak gwerennoù goullo.

Unan anezho a lavaras :

- Daleañ a ra.

Skoliad trede bloavezh gant Skol An Emsav, Roazhon

" PIPÍ "

Mont a rae Pipi ganeomp d'ar c'hentelioù Esperanto e skol Sant Loeiz d'ar meurzh da noz. Pipi a veze graet anezhañ, hogen den ne ouie e anv gwir nag a-belec'h e teue. Ur paotr bras ha treut e oa, gant blev rous ha daoulagad teñval, un tammig trist. Atav e veze o farsal pe o kontañ degouezhioù digredus met morse ne lare grik eus ar pezh a soñje e don e spered. Pa vezemp o tivizout diwar-benn kudennoù pouezus an amzer a vremañ, e chome da selaou ar pezh a lare ar re all hag a-benn ar fin e laoske un nebeut komzoù displann evel ma vije bet rediet da lavaret un dra bennak.

Dilabour e oa. Hogen p'en em gavemp gantañ e kêr, n'en doa morse amzer da gaozeal. Ur pakad levrioù dindan e gazell e rede da di unan bennak hag en doa afer eus ar re bouezusañ gantañ.

Evit ar wech kentañ ne voe ket ken gwelet e-pad daou viz. N'en doa laret da zen ez afe kuit, ha biskoazh den ne ouezas da belec'h e oa aet. Ur pennadig goude e zistro, e voemp pedet d'ur friko gantañ. Chom a rae en un ti bihan, yen ha teñval e-kreiz ur c'harter kozh eus Bourges. Sabatuet e voen pa welis neuze kement a draoù dastumet e-barzh ul lec'h ken strizh : luc'hskeudennoù kozh melenet o c'holeiñ ar mogerioù, binvioù sonerezh freuzet ha poultrennek, levrioù a-gantadoù ma n'eo ket a-viliadoù skrivet e kement yezh a zo er bed ha klenket e-barzh teir bezh armel, ha dreist-holl ur bern traoù divoutin strewet war al leur end-eeun. Ne chome ket ken kalz a blas evit ar gwele bihan damguzhet etre div eus an teir armel hag evit un daol hir ha divalav diazezet e-kreiz ar sal.

16

Fonnus ha fardet mat e voe ar pred hag an holl a gavas o flijadur ; hogen petra bennak ma oa hor mignon o c'hoarzhin hag o farsal ganeomp evel boaz, e voemp souezhet o welout anezhañ o chom hep debriñ hag evañ. Ha pa 'z ejomp kuit dioutañ diwezhat en noz, ne respontas ket ouzh hor « c'henavo » drant. N'em boa ket merzet neuze un daeraouennig o ruilhal war e jod. Un nebeut amzer goude, e veizjomp ar pezh en doa kuzhet diouzhomp hag an abeg eus ar friko-se : laret en doa « kenavo » deomp hervez e c'hiz, rak biskoazh ken ne voe gwelet Pipi e Bourges.

Miz Du 1979.

Levr di Breizhek
 Librairie - Galerie Bretonne
 G. L. Thomas
 1, rue des Fossés, Roazhon
 30 98 80
 Leurioù brezhonek, pladennoù, Istor
 kement tra a sell ouzh Breizh
 Kerkent hag embannet e vez kavet levrioù Al Liamm er stal.

John Millington Synge ha Breizh

pe

un damsall war vuhez John Millington Synge ha levezon Vreizh warnañ

J.M. Synge (1871-1909) a zo anavezet mat gant ar re a lenn brezhoneg pe, da vihanañ, e tlefe bezañ anavezet ganto, o vezañ ma 'z eus bet troet daou eus e bezhioù-c'hoari gant Youenn Drezen : an hini gwellañ-holl (d'am meno) *War varc'h d'ar Mor* (" Riders to the Sea ") embannet e Gwalarn (1926) ha diwezhatoc'h *An Draonienn hep Heol* (" In the shadow of the Glen ") e War-du ar Pal (Goañv 1938), hag adembannet e niv. 14 Skrid.

Brudet eo Synge dreist-holl evit e c'hwec'h pezh-c'hoari en un arvest : *In the shadow of the Glen, Riders to the Sea* ; e daou arvest : *The Tinker's Wedding* ; hag e tri arvest : *The well of the Saints, The Playboy of the Western World* ha *Deirdre of the Sorrows* ; brudet eo ivez war un dro evit ar perzh en deus kemeret e krouidigezh C'hoariva an Abati (The Abbey Theatre) a-gevret gant W.B. Yeats ha Lady Gregory. Bez' e voe rener an ti-c'hoari-se adalek 1905 betek e varv e 1909. Don-tre e voe levezon an oberourien-se war ar c'hoariva en Iwerzhon, ha dedennet eo bet meur a skrivagner eus hon emsav lennegel ganto. Unan eus pezhioù-c'hoari W.B. Yeats " Kathleen Ni Houlihan " a zo bet troet gant Jord ar Mee, dindan an anv *Katell merc'h Houlihan* hag embannet war AL LIAMM (Niv. 39, p. 31, Gouere-Eost 1953). A-douez pezhioù-c'hoari Lady Gregory e voe lakaet meur a hini e brezhoneg : *Roue ar Bed a-bezh* gant Y.V. Perrot; *Ar Vrud a red, Ar Reder-Bro* hag *An Daou Gozh en Ospital* gant Per Bourdelles (" Al Liamm " niv. 12-13, Genver-Ebrel 1949, pp. 54-61) , *Dor an Toull-Bac'h* hag *Al Loar o sevel* gant Ronan Huon (Tir na n-óg " niv. 3 (Genver-C'hwevrer 1947) pp. 10-24. Troidigezhioù a zo bet savet ivez gant Iwan an Diberder diwar bezhioù-c'hoari Lady Gregory ha W.B. Yeats, met n'emañ ket o roll ganin.

18

Mar deo anavezet Synge dreist-holl war dachenn ar c'hoariva, en deus skrivet ivez barzhonegoù ; ar re-mañ avat a zo pell da vezañ prizet kement hag e skridoù all ; met e levr notennoù war an Inizi Aran (" The Aran Islands ") er c'hontrol a zo talvoudus bras hag a vez meulet gant gwir abeg.

* * *

Dellezout a rafe pezhioù-c'hoari Synge hag e notennoù war Aran bezañ studiet a-ratre. Labour un den barrekoc'h evidon war al lennegezh e vefe, ha pal ar pennad-mañ a vo dreist-holl reiñ da c'houzout d'ar Vretoned e voe levezonet Synge, evel skrivagner gant Breizh hag he yezh, un dra zianav en hor bro, a gredan ; talvoudegezh al levezon-se, eviti da vezañ bet notennet e berr gomzoù gant ar re o deus skrivet buhezioù Synge, ne seblant ket bezañ bet prizet evel ma vije bet dleet. Evit hen diskouez, e vo ret teurel ur sell war vuhez Synge, ha war an dud hag an darvoudoù o deus bet levezon warnañ.

E ANV HAG E ORIN

A-barzh kregiñ avat, ne vo ket fall lavarout ur ger diwar-benn e anv : hennezh a ziskouez diouzhtu e oa ganet Synge er renk-tud protestant a vez graet anezhañ en Iwerzhon « the Ascendancy » (1), da lavarout eo diskennidi an drevadennerien deuet da ziazezañ en Iwerzhon, da biaouañ douaroù an Iwerzhoniz ha da ren ar vro, da heul trec'hioù an armeoù saoz. Saoz eo e anv, hag ar Synge kentañ a zegouezhas en Iwerzhon a zeuas er seitekvet kantved. Penaos distagañ an anv-se ? Ar respont a gaver, roet gant Synge e-unan, en e varzhoneg " The Curse

(Ar Vallozh) : bez' e tleer distagañ *sing* (evel ar verb « kanañ » e saozneg) peogwir e klot gant « bring » :

19

« Lord, this judgment quickly bring,
And I'm Your faithful servant, J.M. Synge ».

Pa soñjer en orin-se ne c'heller ket chom hep bezañ sebezet e vije deuet Synge da vezañ unan eus krouerien ar c'hoariva broadel a-vremañ en Iwerzhon pa seblantje pep tra tonkañ anezhañ da vezañ enebour da gement tra ouezelek ha broadel.

Met den diouzh e zoare e-unan e oa John Millington Synge ; ne oa ket un den seder ; troet e oa er c'hontrol da brederiañ, ha techet zoken da zebriñ soñjoù alies. Pa c'hoarveze gantañ bezañ nec'het gant kudennoù ha mennozioù, ne oa ket den da gas diwar e spered prederiadennoù, evito da vezañ displejus, ma oant a-bouez bras evitañ d'e veno. C'hoant en devoa da ober eus e vuhez un dra dalvoudus, ha pell e klaskas e hent. A-benn ar fin e bersonelezh, e gizidigezh arzel, hag ar prederiadennoù maget gant levezon an darvoudoù hag an dud, a vroudas anezhañ, goude meur a daol-esa war dachennoù all, da vezañ skrivagner ha da livañ, en e oberennoù, buhez e genvroiz paour, met ken buhezek, a veve e kuzh-heol pellañ Iwerzhon.

(1) « The most important effect of the transplanted (17th Century) was not a movement of population, but a great change in the ownership of land, and in the distribution of political power. What had been established over most of the island was in fact a landed ruling class, mainly of English or Scottish origin, professing some form of Protestantism and dominating a native Roman Catholic and still Gaelic-speaking peasantry. This was the Protestant Ascendancy which, lasted, in its essentials, into the last quarter of the nineteenth century. » Máire and Conor Cruise O'Brien, *A Concise History of Ireland, Thames and Hudson, London, 1977, p. 69.*

Troidigezh

Pennañ dilerc'hadenn a zeuas diwar « an Dreuzplantadeg » (17vet kantved), n'eo ket un dilec'hiañ tud an hini voe, hogen ur c'hemm bras e perc'henniezh an douaroù hag en ingaladur ar galloud politikel. Ar pezh a oa bet diazezet war an darn vras eus an enez a voe ur rummad renerien stag ouzh an douar, Saizon pe Skosiz ar pep muiañ anezho, oc'h heuliañ doare bennak a protestantiezh, hag oc'h ober o mestri war gouerien ar vro, katoliked roman anezho ha dezho c'hoazh ar gouezeleg da yezh. Setu petra oa ar « Protestant Ascendancy », hag a badas, hep kalz a gemm, betek karter diwezhañ an naontekvet kantved.

20

E DIEGEZH, E VUGALEAJ, E OAD KRENN

Evel m'eo bet displeget uheloc'h, e teuas Synge er bed en un tiegezh a oa bet unan pinvidik hag uhel ; ur familh a roas pemp eskob d'an iliz protestant « Church of Ireland » (Iliz Iwerzhon), a oa en Iwerzhon dindan ar Saizon an Iliz ofisiel evel « Church of England » e Bro-Saoz : ur bodad-tud hag a vez peurliesañ ledan o spered ha na vagont ket kasoni ouzh ar Gristenien all. A-berzh e vamm avat e oa disheñvel-tre familh Synge : e dad-kozh, Robert Trail, ganet e kontelezh Antrim, a oa deuet eus hanternoz Iwerzhon da bastor e Scoil Mhuire (Schull e saozneg) e kontelezh Corcaigh ; ur presbiterian a oa anezhañ, garv ha strizh-speredet spontus, eus ar ouenn a anver en Iwerzhon « black protestants » (protestant du), divarrek n'eo ket hepken da gompren met zoken da c'houzañv ar Katoliked, da lavarout eo 90 dre gant eus an Iwerzhoniz o vevañ en-dro dezhañ (un den a-seurt gant ar Rev. Paisley e Hanternoz Iwerzhon hiziv an deiz).

Ganet e voe John M. Synge e Dulenn d'ar 16 a viz Ebrel 1871. Mervel a reas e dad er bloaz war-lerc'h ; setu e voe savet gant e vamm, ha gant e vamm-gozh,

intañvez ar ministr Trail, a oa o chom en ti tostañ : div vaouez vat a dra sur met strizh-speredet-kenañ. Degaset e veze soñj d'ar paotr dizehan gant e vamm eus an ifern a oa prest da zigeriñ dindan e dreid ; ouzhpenn-se c'hoarioù ha sportoù a oa difennet-krenn da sul, ar gatoliked hepken a rae traoù ken divergont!

Ur paotr kizidik e oa Synge ha kontañ a ra e-unan, en ul levrig notennoù, pegement en devoa da c'houzañv en aergelc'h trist ha yen-se ; bec'h mennoziou ar familh a oa lakaet da bouezañ gwashoc'h c'hoazh war e spered dre ma veze kelennet er gêr peurliesañ gant mistri-prevez hervez giz tud pinvidik ar mare-se, e-lec'h bezañ kaset d'ur skol evel ar vugale all ; eno en dije bet digarez d'ober anaoudegezh gant keneiled disheñvel dioutañ, ha tu marteze da glevout mennoziou ledanoc'h.

Troet e oa da lenn, hag e levraoueg an ti e kavas ur bern levrioù ; ar re a blije dezhañ ar muiañ a oa levrioù diwar-benn an natur. E lennadennoù, ha da gentañ levr Darwin war an « emdroerezh » - ur mennoz nac'het krenn gant kelennadurezh ar gêr - e lakaas tamm-ha-tamm da goll ur feiz a oa re strizh ha re yen evitañ : ur stourm ene a badas meur a vloaz hag a voe kriz meurbet. D'e seitek vloaz, e oa deuet da vezañ digristen ; rak m'en devoa dinac'het kredennoù e vamm, ne oa ket deuet tostoc'h evit-se ouzh feiz katolik ar pep brasañ eus an Iwerzhoniz. Un druez eo war dachenn al lennegezh - pa na ve ken - rak mirout a reas outañ da gompren ha da livañ en un doare gwirion en e bezhioù-c'hoari unan eus perzhioù pouezusañ spered e genvroiz : ur feiz don ha birvidik. Ar skeudenn zistreset a roas eus o c'hredennoù abalamour da se a feukas anezho hag a voe penn-abeg d'an trouz ha d'an tabut - re bar da hini Hernani e Bro-C'hall - a darzhas pa voe c'hoariet, da gentañ, lod eus e oberennoù, dreist-holl " The Playboy of the Western World ".

21

Ma voe pellaet Synge diouzh e genvroiz, koulz protestant ha katolik, gant ar c'hemm c'hoarvezet en e emzalc'h e-keñver ar relijion, e teuas e emdro war an dachenn iwerzhonat d'e dostaat ouzh pobl e vro a-feur ma dianzave mennoziou e renkad-tud er c'heñver-se. Ganet e oa bet - un estren en e vro e gwirionez - en ur renkad trevadennerien a selle ouzh ar bobl evel ma ra ar Saozon ouzh « the natives » hag ar C'hallaoued ouzh « les indigènes » en o zrevadennoù. Daoust da se e veze mantret gant an doare kriz ma veze taolet ar verourien er-maez ha devet o zi gant al « Landlords » (ar berc'hennad vras) ; feuket e voe pa welas unan eus e vreudeur a oa kourater evit unan anezho oc'h ober ken gwazh all e kornog Iwerzhon. Ne voe ket evit gouzañv kement-se hag hen disklêriañ a reas sklaer, ar pezh na blijas ket d'e gerent o devoa douaroù bras o-unan.

Daoust da se, ne dorras ket e zarempredoù gant e familh ; re greñv e oa al liammoù-tiegezh o unane. Un taol-treitur e vije bet d'e veno treiñ kein d'e gerent. Ha daoust ma nac'he mont a-du gant o c'hredennoù hag o oberoù, e viras bepred en e galon ur garantez don evito, dreist-holl evit e vamm.

TRINITY COLLEGE

Pa zeuas ar mare dezhañ da vont d'ar Skol-veur ez eas, evel just, da Skol an Dreinded (Trinity College) e Dulenn, ur skol-veur brotestant d'ar c'houlz-se. Evitañ da vezañ speredek, ne oa ket gwall dechet d'ar studioù, ha ne heulias nemet ar minimum a gentelioù a oa ret evit bezañ aotreet da dremen an arnodennoù ; kavout a rae gwelloc'h lenn ar pezh a blije dezhañ. E-touez an danvezioù a studias e-keit m'edo er skol-veur e voe « Irish Antiquities » (Hendraouriezh hag Istor Iwerzhon) ; studiañ a reas ivez Hebreeg hag Iwerzhoneg a oa lakaet war ar c'h-curriculum evel danvezioù relijiel, an iwerzhoneg o vezañ talvoudus evit ar misionoù e-touez an Iwerzhonegerien gatolik ! Daoust da se e voe dre e studioù e Skol an Dreinded e teuas Synge da ober anaoudegezh ha da garout lennegezh kozh Iwerzhon ; lenn a rae en Iwerzhon " Bugale Lir " ha " Diarmuid ha Grainne ", un diaze talvoudus evitañ pa grogas diwezhatoc'h da zeskiñ iwerzhoneg komzet, ha da skrivañ " Deirdre of the Sorrows " (Deirdre an Ankenioù). D'ar mare-se avat e veze dedennet Synge dreist pep tra all gant ar sonerezh ; studiañ a rae skiant ar sonerezh er skol-veur hag e-keit-se e c'hoarie ar violoñs er gêr ; sevel a

rae pezhioù sonerezh e-unan, hag e teuas da vezañ ezel eus ul laz-seniñ. Ar sonerezh a oa deuet da leuniañ e vuhez a-bezh.

22

AR SONEREZH : BRO-ALAMAGN

Souezhus e seblanto bezañ marteze, met e garantez evit ar sonerezh eo a dlee kas anezhañ dre un hent kammigellek pell eus e vro da Vro-Alamagn da gentañ, ha goude se da Bariz e-lec'h m'en em gavas gant an teir levezon a ziskoulmas kudenn e « gefridi » hag a reas anezhañ unan eus dramaourien vrudetañ Iwerzhon.

Da unan eus e genitervezed, Mary Synge, ur biancoerez a-vicher o chom e Londrez ha deuet da dremen vakañsoù er familh, en devoa displeget e c'hoant da zont da vezañ ur violoñser a-vicher o reiñ abadennoù sonerezh klasel. Goude bezañ klevet anezhañ o c'hoari e tivizas houmañ e oa ret dezhañ evit se mont da Vro-Alamagn da gaout ar gelennadurezh ret ; mont a reas gentañ e miz Gouere 1893 evit heñchañ anezhañ ; studiañ a reas Synge alamaneg da gentañ e Oberwerth e-pad ur pennad ha neuze e yeas da Würzburg e-lec'h ma feurmas ur piano ha ma kemeras kentelioù sonerezh. Skrivañ ' rae barzhonegoù ivez ur wech an amzer. A-benn miz Mezheven 1894 avat, pa zeuas en-dro d'ar gêr, en devoa meizet, war a seblant, ne oa ket graet evit ur seurt micher : re nervus e oa evit c'hoari dirak an dud, hag evit ar pezh a selle ar sevel-sonerezh e oa bet lakaet da gompren ne oa ket barrek a-walc'h. E dibenn an hañv, e tisklêrias d'e familh en devoa divizet dilezel ar sonerezh evit en em lakaat a-zevri war studi ar yezhoù estren. Mont a reas da gentañ da Oberwerth en Alamagn, e-lec'h m'en devoa mignoned, evit gwellaat e alamaneg da vat ; ha neuze « d'ar c'hentañ a viz Genver 1895, ez eas kuit da Bariz gant chomlec'h ur studier breton anvet Albert Cugnier, en doa anavezet en Oberwerth. Cugnier a gavas ur gambr evitañ, 94, straed Lafayette, gant ur familh anvet Arbeau » (D. Greene and Ed. Stephens, J.M. Synge, New-York 1959, p. 45).

23-24

O KLASK UR PAL D'E VUHEZ

Ar wech kentañ e oa da Synge kejañ gant ur Breton ; derou ur vignoniezh e oa, rak an darempredoù a gendalc'has etrezo, evel ma vo gwelet pelloc'h.

Evit bremañ avat, n'en devoa Synge pal ebet nemet deskiñ yezhoù, ha galleg da gentañ penn. Reiñ a rafe kentelioù saozneg, a skrive d'e vamm, evit paeañ e studioù er Sorbonne ; kelennadurezh war al lennegezh c'hall a oa krog da huliañ eno. Soñj en devoa da zont da vezañ skridvarnour, ha kas da gelaouennoù Iwerzhon ha Bro-Saoz pennadoù diwar-benn levrioù ha darvoudoù arzel ha lennegel Bro-C'hall. Gwall zivarrek en em sante c'hoazh evit ur seurt micher, hag ouzhpenn e oa digalonekaet d'ar mare-se gant ar garantez dispi a vage evit ur plac'h eus Dulenn, Cherry Matheson, a nac'he dimeziñ gant un den difeiz.

Daoust da se pe, marteze, en abeg da se, e veze bepred e spered chalus ha nec'hidik o vroudañ anezhañ da zizoleiñ ha da studiañ mennozioù nevez ha da glask hent ar wirionez hag an eürusted er vuhez. Hag a se e yae da brezegennoù diwar-benn ar voutinelezh (goude unan gant Fauré e skrive e galleg en e gaierig-notennoù : « intéressant mais fou ! » (dedennus met diboell) ; lenn a rae a bep seurt levrioù evel " Principes du Socialisme " (Pennreolennoù ar Gevredelzh), " L'Anarchie " (An Diveli), h.a. ; mont a rae da vodadennoù an " Theosophical Society " (Breuriezh a Gevrinouriezh) hag a lenne studiadennoù war " Psychic phenomena " (Phenomena-ene) hag " Applied Mysticism " (Kevrinelezh lakaet da dalvezout). D'ar mare-se ivez en devoa « dizoloet » Thomas a Kempis hag e-pad mizioù e lennas bemdez e latin pennadoù eus e levr brudet " De imitatione Christi ". E-kreiz ar reuz spered-se eo e skrivas en e notennoù, gwasket hep mar gant an anken, ur studiadenn iskis : " Etude morbide or Imaginary Portrait ". War-dro ar mare-se ivez eo e krogas da zeskiñ italianeg hag e reas ur veaj pevar miz en Itali.

25

Ne veze ket troet John Synge da zigeriñ e galon d'ar baotred a anaveze mat hag a oa e vignoned. Ne gomze ket dezho eus e gudennoù a garantez hag a relijion. Souezhus eo eta pegen aes e krogas da gontañ pep tra da bemp pe c'hwec'h plac'h yaouank (protestant, katolik ha digredenn) a anavezaz en Alamagn, e Pariz hag en Itali. E-pad mizvezhioù da c'houde ec'h eskemmas lizheroù ganto o resev alioù diganto e-keñver e garantez evit Cherry hag e feiz kollet !... un digoll a glaske marteze eus ar pezh en devoa ranket dioueriñ a-berzh e vamm ?

AN TEIR LEVEZON VRAS

Kalz muioc'h a c'hellfe bezañ lavaret war e zarempredoù hag e veajoù ; ret eo troc'hañ berr avat pa fell deomp diskouez n'eo ket bet dister levezon Vreizh e-touez ar re o deus pouezet war Synge. Teir anezho a zo bet a bouez bras : levezon an Iwerzhoniz all e Pariz, an hini greñvañ hep mar ebet, levezon kelennadurezh d'Arbois de Jubainville er Sorbonne, hag erfin levezon ar Vretoned hag al levrioù diwar-benn Breizh, he zud hag he hengounioù. A-raok teurel ur sell war bep hini anezho, ne vo ket didalvoud notenniñ pegen mat e kenlaboure an teir levezon-se da gas Synge war-du an hevelep pal, ha penaos e teue efed pep hini anezho da greskiñ nerzh ar re all.

An Iwerzhoniz

Kerkent ha degouezhet e Pariz e reas anaoudegezh gant Iwerzhoniz a oa o chom eno. Menegomp Edward Denny, an Dr James Cree, un den eus Dulenn ganet en hevelep renkad-tud ha Synge, met en ur familh a oa bet a-du gant Parnell. Diwezhatoc'hik e kejas gant daou zen a zeuas da da vezañ e vignoned : Stephen MacKenna ha Richard Best ; pa zeuas, kaset gant MacKenna da welet hemañ e Pariz e Genver 1898 e lavaraz dezhañ : « Je suis Synge - pas singe ». Met d'an 21 a viz Kerzu 1896 eo e oa c'hoarvezet 3n darvoud pouezusañ ; an deiz-se e skrive Synge en e garnedig : « Fait la connaissance de W.B. Yeates » (sic) , Graet anaoudegezh gant W.B. Yeats) ; d'ar memes amzer en devoa kejet ivez gant Maud Gonne a oa o krouiñ e Pariz « L'Association Irlandaise » pe « Irish League » (Kevredigezh Iwerzhon). Synge, dedennet gant he frezegennoù entanet diwar-benn stad reuzeudik he bro a zeuas da vezañ ezel eus ar bodad-se, hag unan oberiant. Buan avat, koulz eñ ha Maud Gonne a welas ne oa ket den da ober war-dro politikerezh : reiñ a reas e zilez daoust ma kendalc'has da sikour. Ne vern penaos ne veze nemet brogarourien e-touez an Iwerzhoniz a zaremprede e Pariz. Kement-se na souezho Breton ebet pa anavezomp re vat n'eus netra par d'ar vuhez e-mesk estrenien evit lakaat un den da dommañ ouzh e vro. Ne c'helle ket Synge eta chom diseblant o santout an emskiant vroadel o tihuniñ en e greiz.

26

Hag ouzhpenn, daou eus e vignoned nevez o devoa personelezhioù dispar ; tud veur a oa anezho e gwirionez : Maud Gonne, ur vaouez dispont a oa da vezañ brudet en emsav an dieubidigezh ; W.B. Yeats a oa da vezañ ken brudet all war dachenn al lennegezh ; eñ eo e gwirionez en deus bet an donañ levezon war Synge. Bez' e oa bet ezel eus « Breuriez Republikan Iwerzhon » (Irish Republican Brotherhood), met bez' e oa dreist-holl gouestlet da lennegezh e vro, ha dont a reas da vezañ unan eus ar skrivagnerien wellañ a lakaas al lennegezh iwerzhonek da advevañ e saozneg. Pa oa ret da Synge dibab e gefridi da vat, a-benn ar fin, ez eo Yeats a roas dezhañ ar vountadenn ziwedhañ a lakaas anezhañ war an hent mat pa lavaraz dezhañ e oa o koll e amzer e Pariz hag e oa ret dezhañ mont da Inizi Aran evit ober anaoudegezh gant Iwerzhon wirion ha labourat war-dro he lennegezh. Un atizadenn vurzhodus, evit gwir, evel ma notenn Micheál Mac Liammóir, ar c'hoarier brudet, pa skriv : « Un dra espar eo, pa anaveze ken nebeut Yeats an Inizi Aran, ha pa oa disteroc'h c'hoazh e anaoudegezh eus o yezh, e vije deuet da santout gant kement a nerzh e oa da Aran e tlee Synge mont m'en devoa c'hoant da zizoleiñ ar stumm-skrivañ a glaske » (2) (Rakskrid da embannadur oberennoù Synge, 1958). Lavaret 'z eus bet c'hoazh e oa en Inizi Aran en devoa kavet Synge « Peace and purpose » (ar peoc'h hag ur pal d'e vuhez).

(2) « It was strange that Yeats who knew the Aran Islands so slightly and whose

knowledge of their language was slighter still, should have felt so insistently that Aran was where his new discovery (Synge) should go in quest of his medium. » (Introduction by Micheál Mac Liammóir to J.M. Synge's Plays, Poems and Prose, Dent, London, 1958, p. V).

27

Yeats eo ivez a lakaas anezhañ da ober anaoudegezh gant Lady Gregory ha da genlabourat da sevel ar c'hoariva broadel. N'eo ket ret komz hiroc'h eus levezon Yeats hag an Iwerzhoniz all war zisentez Synge, un dra diarvar hag anavezet mat. N'en dije ket gallet ur seurt levezon bezañ ken efedus, avat, ma ne vije ket bet distrouezhet an hent gant levezonioù all e Pariz.

d'Arbois de Jubainville

Mamm John Synge, en ul lizher d'e vreur a skrive : « Paourkaezh Johnnie !... Tud evel Yeats hag ar re all a douell anezhañ hag e lak da soñjal eo pouezus lennegezh Iwerzhon, hag an iwerzhoneg hag an holl draoù-se emaint o klask adveañ, ha ret eo din lavarout, daoust pegen trist eo, e seblant Johnnie krediñ kement a lavaront dezhañ... » (3). Spi he devoa e c'hellfe bezañ digoret e zaoulagad dezhañ gant levezon al lennegezh c'hall !

Siwazh dezhi ! daoulagad « ar paourkaezh Johnnie » ne voent ket distroet diouzh ar mennozioù iwerzhonat gant ar vuhez e Pariz, pell ac'hane ! rak levezonioù all a oa o labourat hag a zedenne anezhañ muioc'h-mui davet lennegezh e vro. Levezon kelennadurezh H. d'Arbois de Jubainville er Sorbonne a oa unan anezho. E miz C'hwevrer 1898 e krogas da heuliañ e gentelioù war sevenadurezh Iwerzhon keñveriet gant hini Homeros : « sur la civilisation irlandaise comparée avec celle d'Homer » (sic, e notennoù Synge).

Unan eus brudetañ kelennerien war ar Yezh, ar Sevenadur hag ar Gwir Keltiek e oa d'Arbois de Jubainville d'ar mare-se ; un den speredek dreist, ledan meurbet e ouiziegezh, dedennet-tre gant kudenn vroadel Iwerzhon ha gouest da lakaat re all da dommañ ouzh ar pezh a gelenne. Klevet em eus ma zad a zo bet unan eus e studierien o veuliñ anezhañ, ha, war a gredan, mar deo bet ken troet ma zad, ur brezhoneger mat anezhañ, da studiañ ar yezhoù keltiek all, o istor hag o sevenadurezh, n'eo ket bet dister levezon d'Arbois war ar pleg-se. Anat eo e voe pouezus ivez levezon e gelenner war Synge : e-ser keñveriañ sevenadurezh kozh Iwerzhon gant an hini brudetañ eus ar sevenadurioù klasel e tiskouezhe dezhañ pegen dispar ha talvoudus e oa henlennegezh Iwerzhon ; hag en ur geñveriañ an iwerzhoneg gant ar yezhoù keltiek all e lakae war wel e lec'h e framm ledanoc'h ar sevenadurezh keltiek. Dedennet e oa Synge hag e 1902 e heulias ur rummad kentelioù all war an Heniwerzhoneg. Anaoudek-tre e oa evit an deskadurezh en devoa gounezet evel-se, rak en ur pennad embannet e " L'Européen " (15-3-1902) e veule e gelenner hag e tisklêrie e devoa e gentelioù « un dalvoudegezh dispar da gement hini en dije c'hoant da vezañ sklêrijennet war zanvez al lennegezh keltiek » ; e 1904 ec'h embanne c'hoazh er gelc'hgelaouenn " The Speaker " ur rentañ-kont eus an droidigezh graet gant e vignon Best eus " The Irish Mythological Cycle " (Kelc'h Mitologiezh Iwerzhon) gant H. d'Arbois de Jubainville. Levezon hemañ a voe anzavet gant Synge e-unan eta.

(3) « Poor Johnnie !... men like Yeats and the rest get round him and make him think Irish literature and the Celtic language and all these things that they are trying to revive are very important, and, I am sorry to say, Johnnie seems to believe all they tell him. » (D. Greene and Ed. Stephens, J.M. Synge (1871-1909), MacMillan, New-York, 1959, p. 125).

28

Ken anat eo, d'am meno, levezon hor Bro, dre he skrivagnerien pe ar re o deus skrivet diwar he fenn, ha dre ar Vretoned o deus lakaet Synge da gejañ hengounioù ha sevenadur Breizh.

Anatol ar Braz

Unan anezho a voe A. ar Braz. Tamallet eo bet dezhañ e Breizh, gant meur a

hini, bezañ re droet da « sebeliañ » e yezh hag e sevenadur, evitañ da vezañ ur brezhoneger a-vihanik. Gwir a-walc'h eo marteze, met kement-se a oa emzalc'h tud ar mare-se : n'eo ket disheñvel diouzh hini an Uhel. Dispar eo bet o labour koulskoude, rak evit gwir o deus dastumet traoù prizius a vije bet kollet da vat hepdo.

Al labour en devoa graet Anatol ar Braz war dachenn an hengounioù hag ar c'hoariva e Breizh eo a roas tu dezhañ da gaout ul levezon spleitus war Synge. Edward Stephens en e levr *My Uncle John, Life of J.M. Synge* (Oxford University Press, 1974) a gont penaos e c'hoarvezas : e miz Ebrel 1897 e oa aet Synge d'ur brezegenn gant A. ar Braz. Burzhodus e kavas gred hemañ evit ar sevenadur hag an hengounioù keltiek e Breizh ; « spegus » e voe trivliadoù ar Braz ha ken skoet e voe Synge gant e gomzoù ma yeas da gomz gantañ kerkent hag echu ar brezegenn. « Ne oa ket diaes, eme e niz, gwelout heñveledigezhioù etre kudennoù Breizh ha re kornaoueg Iwerzhon » (p. 106) (4) : « Anatol ar Braz, gant e daolennadur eus pobl geltiek Vreizh a greskas damant Synge da dud e vro e-unan, ha dreist-holl d'al lodenn iwerzhonek eus ar boblad a vev a-hed aod ar c'huzh-heol » (p. 107) (5).

(4) « It was not difficult to see similarities between the problems of Brittany and those of the west of Ireland. » (Edward Stephens. *My Uncle John, Life of J.L. Synge*, Oxford University Press, 1974, p. 106).

(5) « Anatole Le Braz, by his description of the Celtic people of Brittany, had intensified his interest in the people of his own country, and particularly in the Celtic fringe of the population living along the western coast. » (Ed. Stephens, *ibid.* p. 107).

29

Da heul ar gejadenn-se, e krogas Synge da lenn levrioù ar Braz : *Au Pays des Pardons, Vieilles Histoires du Pays Breton, La Légende de la Mort chez les Bretons Armoricains*, ha neuze levrioù all diwar-benn Breizh meneget gantañ en e zeiziadur. Hengounioù ar Sinadoù, ar Marv hag an Ankou, ken bev e Breizh en amzer-se, ne c'hellent ket chom hep skeiñ un den ken prederiet ha ma oa Synge gant kudenn ar Marv. Diwezhatoc'h, en Inizi Aran, e kavas an hevelep emzalc'h hag e Breizh dirak an « tonkadur » ; eno ivez e vo degaset soñj dezhañ eus pardonioù hor bro ; notenniñ a ra en e levr " *The Aran Islands* " (p. 100) : « Fenezh, ma devezh diwezhañ en enezenn, emañ noz ar " pattern " ur gouel un tamm evel " pardonioù " Breizh ». (*Pátrún* e vez lavaret en iwerzhoneg, displeget e geriadur iwerzhoneg-saozneg Niall O Dónaill gant : « pattern, festivities connected with patron-Saint's day »). E 1898-99, ec'h embannas Synge e kelaouennoù skridvarnadennoù meulus-tre evit ar Braz. Kejañ a reas gantañ adarre e Dulenn e 1905.

Ouzhpenn Cugnier, meneget endeo, e reas anaoudegezh e Pariz gant Bretoned all a oa troet gant traoù o bro. Kejañ a reas gant lod anezho emichañs e kentelioù d'Arbois de Jubainville. Gouzout a ran e voe degemeret ma zad ha keneiled all gant Synge en e gambrig, a oa enni ken nebeut a gadorioù ma rankas unan pe zaou azezañ war ur val ; evit doare e voe degaset ar gaoz war gudenn Iwerzhon, rak Synge a lavaras ne oa ket gwelet mat gant an holl en e vro en abeg d'e orin. Breizh hag he yezh ne voent ket ankouaet kennebeut a dra sur.

30

Ken dedennet e oa Synge gant Breizh ma krogas da zeskiñ brezhoneg. Meneget eo kement-se en ul lizher skrivet gant W.B. Yeats da Lady Gregory (14-2-1899) ; ennañ e lavar : « Gwelet em eus Synge. Un den dispar eo e gwirionez. Bevañ 'ra en ur gambr vihan, gant arrebeuri prenet gantañ. Ober a ra pep tra e-unan. Labourat a ra tenn hag emañ o teskiñ brezhoneg. Un den gouiziekiel talvoudus-tre a vo anezhañ » (6).

SYNGE E KEMPER

Ha neuze, pedet gant Cugnier, a oa studier d'ar mare-se hag a zeuas da vezañ diwezhatoc'h ofiser a vor, e tivizas dont da Gemper e-lec'h m'edo mamm e

vignon o chom. Tremen a reas pemzek deiz eno e miz Ebrel 1899. E-keit m'edo e Kemper e reas anaoudegezh gant an Dr Ch. A. Picquenard, ezel eus ar Gorsedd, a oa e anv barzh « Charlez Kerambarz ». Hemañ a savas ur varzhoneg e brezhoneg " Karit ho prezhoneg " kinniget da J.M. Synge : « Do Sheaghain M. Synge, Mac na h-Eireann » (ar ginnigadenn e gouezeleg mar plij !) hag a voe embannet e-barzh LE BAS-BRETON, kelaouenn Gastellin (7-10-1899, p. 3) gant un droidigezh c'hallek. (An disaouzan-se a gaver e levr Maurice Bourgeois " John Millington Synge and the Irish Theatre ", Londrez 1913 ; n'am eus ket testenn ar varzhoneg).

An Dr Picquenard a skrivas dezhañ ar bloaz war-lerc'h e miz Gwengolo d'e bediñ da zont da Vreizh evit ar Gorsedd : « A-benn neuze, emezañ, an holl Iwerzhoniz, Skosiz ha Galianed (? !) a gar evit gwir o broadelezh voutin en em vodo amañ hag e c'hellomp kinnig deoc'h ur gambr plijus-tre. Kejañ a reot gant hor barzhed veur : Vallée, ar Fusteg, Jaffrennoù, h.a. ha gwelout a reot pebezh araokadenn en deus graet mennoz Broadelouriezh Vreizh... ». Ne zistroas ket Synge da Vreizh hag a se ne gejas ket gant Vallée hag ar re all, met, en ur ober anaoudegezh gant keltiegezh Vreizh e voe lakaet da gompren al lañs en devoa, evel Iwerzhonad, war « skrivagnerien o vevañ e lec'hioù m'eo bet ankouaet nevezamzer ar vuhez lec'hel » (Greene, p. 96). Gwelet en doa sklaer talvoudegezh dispar al lennegezh pobl hag an hengounioù chomet bev er broioù keltiek, ha pa grogas da daolennañ buhez tud e vro en devoa ur ouiziegezh eus kudennoù yezh ha sevenadur a c'helle reiñ avi d'ar skrivagnerien all hag ur spiswel a oa deuet lemmoc'h dre ar pezh a anaveze eus Kelted an douar-bras.

(6) « My dear Lady Gregory, ... I have seen Synge. He is really a most excellent man. He lives in a little room, which he has furnished himself. He is his own servant. He works very hard and is learning Breton. He will be a very useful scholar. » (The Letters of W.B. Yeats, Edit. Allan Wade, Hart-Davis, London, 1954, p. 314).

31

Keit ha ma talc'has da dremen darn eus ar bloaz e Pariz, e kendalc'has da zaremprediñ Bretoned, e vignon Cugnier dreist-holl, a grogas, aliet gantañ, da dreiñ e galleg oberenn Oscar Wilde " Intentions " ; diouzh e du Cugnier a reizhe ar pennadoù skrivet gant Synge evit kelaouennoù gallek.

War-dro an hevelep mare, skridoù ur Breton all, Renan, o devoa lakaet Synge da spurmantiñ tristidigezh ur vro p'emañ he yezh hag he boazioù kozh o vont da get.

PIERRE LOTI

E-touez al levrioù diwar-benn Breizh lennet gantañ da heul prezegenn sklerijennus ar Braz, hini ebet avat n'en devoe kement a levezon war Synge ha re Loti. Daoust ma ne oa ket Breton e oa deuet Pierre Loti, anv-pluenn Julien Viaud (1850-1923), un ofiser a vor, da anavezout, war al listri-brezel, Bretoned o doa kontet dezhañ, moarvat, o buhez pa yaent da besketa war-dro an Douar-Nevez pe e mor an Islant. Dont a reas e galon da dommañ outo hag e skrivas levrioù o taolennañ o buhez garv. Kerkent ha ma lennas Synge Pesketour an Islant (Pêcheur d'Islande) e kavas dezhañ e oa dispar al levr. D'e soñj e oa Loti ar gwellañ skrivagner e komz-plaen a oa o vevañ d'an ampoent. Synge a seblant bezañ kaset al levr-se gantañ dre bep lec'h ma yae. Bez' e oa e-touez ar re a yeas gantañ d'an Inizi Aran. Ha John Masefield a welas anezhañ war daol Synge e Londrez, pedo hemañ oc'h adskrivañ dornskrid e Notennoù war Aran.

E vignon Richard Best, o komz eus levezon Loti war Synge, a zisplege : « Soñj am eus e lavare Synge din e felle dezhañ ober evit an Inizi Aran un dra bennak evel ar pezh en devoa graet Loti evit Breizh » (7). An disklêriadur-se a oa anavezet mat peogwir e vez adlavaret koulz lavaret ger evit ger (lod o spisaat : « pesketourien Vreizh ») gant kement den en deus skrivet istor e vuhez pe a zo bet lakaet da gomz diwar e benn, da skouer Greene, M. Bourgeois, John Masefield ha Pádraig Colum.

(7) « I remember Synge telling me that he wanted to do for the Aran Islands

something like what Pierre Loti had done for Brittany. » Richard Best quoted in J.M. Synge, Interviews and Recollections, Edited by E.H. Mikhail, MacMillan, 1977.

32

Daoust da se, e lavar Greene : « Levezon Loti war e oberoù n'eo ket bet ken kreñv ha ma 'z eus bet lavaret » (8). Pádraig Colum a zo a-du gantañ pa zistag : « Iskis eo soñjal bremañ e veze tud e Dulenn - ha ne oant ket dispered - o lavarout e tegase soñj *War Varc'h d'ar Mor* eus *Pesketour an Islant* Pierre Loti » (9). Ha Greene, evit kreñvaat an disklêriadur gantañ bet roet uheloc'h, a zegas da soñj en devoa kavet Synge abeg en doare m'en doa skeudennet Loti tud chomet « primitive ». Anzav a ra n'en deus ket bevet pell a-walc'h e-unan en Aran evit gellout barn tud plaen ha didro ha meizañ anezho, hag e rebech da Emilia Lawless bezañ skrivet ur romant war vuhez Araniz hep bezañ bet o vevañ en o mesk ; met, eme Synge, « m'he deus graet ur fazi n'eo ket aet ken don e-barzh ha m'en deus graet Pierre Loti e *Pêcheur d'Islande* » (Greene, p. 87) (10).

Kement-mañ a ziskouez ne oa ket Synge dic'houzvez eus gwanderioù Loti. N'eus eno prouenn ebet avat ne vije ket bet levezonet gantañ. Ar fazi graet gant Greene ha Colum, evit gwir, a seblant bezañ lakaat « levezon » da dalvezout kement ha « drevezadur » ; n'eo ket tamm ebet evel-se e tleer kompren « levezon », a gredan.

Evel just, pep hini eus an daou skrivagner en deus taolennet buhez pesketaerien e vro en e zoare e-unan : Loti en deus skrivet ur romant e-keit ma save Synge ur pezh-c'hoari ; ouzhpenn-se, stummoù-skrivañ an daou oberour ne c'hellont ket bezañ disheñveloc'h : levr Loti, ur gontadenn hir, laosk ha pompus a-walc'h, d'am meno, a zo ar c'hontrol-bev eus pezh-c'hoari Synge, heverk dre m'eo ken fetis ha nerzhus, ha ma tizh ken trumm e ziskoulm.

(8) « But the influence of Loti on his work has been exaggerated. » (D.H. Greene and Ed. Stephens, J.M. Synge, MacMillan, New-York, 1959, p. 49).

(9) « It is odd to recall now that in Dublin quite intelligent people spoke of it " Riders to the Sea " as being reminiscent of Pierre Loti's " Iceland Fisherman ". » Padraic Colum quoted in J.M. Synge, Interviews and Recollections, Ed. MacMillan, 1977.

(10) « Miss Lawless if she has erred has not done so deeply as Pierre Loti in his *Pêcheur d'Islande*. » (D. Greene and Ed. Stephens, *ibid.* p. 87).

33

Gwir eo, evel just, evel m'hel lavar M. Bourgeois en e studiadenn war Synge « e c'heller kavout un heñvelidigezh anat a zanvez, a aergelc'h hag a zarvoudoù en div oberenn » (11), ha zoken un nebeut frazennoù o tiskouez ar memes spered en dud. Da skouer, ar vaouez kozh e levr Loti hag a chom difrom, a-benn ar fin dirak ar marv « kemend-all a vibien ha m'he doa kollet » a denn kalz da emzalc'h ar vamm e " *War Varc'h d'ar Mor* ".

Met, e gwirionez, ar pezh a zo heñvel e Synge hag e Loti eo ar skoet m'int bet o-daou gant ar memes tra : drama ar mor hag emzalc'h kalonek ha zoken difrom an dud vunut-se dirak an darvoudoù mantrusañ a lak anezho da vezañ tud veur, re-bar dirak an « tonkadur » d'ar re a weler e trajediennoù Aesc'hulos.

Setu, hep an disterañ mar ebet, ar pezh en deus skoet Synge e levr Loti, ha setu aze levezon wirion hemañ warnañ, un dra kalz donoc'h ha prizioc'h eget heñvelderioù diwar-c'horre.

* * *

Ya, Synge a oa levezonet ha dedennet-tre gant Breizh, hag unan eus an traoù diwezhañ en doa c'hoant da ober, ha ne voe ket evit seveniñ, a oa dont ur wech c'hoazh da weladenniñ hor bro. Setu penaos e rankas tremen hep dont.

E Dulenn emedo o vevañ, kalz labour war e chouk : skrivañ pezhioù-c'hoari nevez, bleniañ gant harp Yeats ha Lady Gregory C'hoariva an Abati dre e vloavezhioù kentañ, teurel evezh war bleustradennoù ar c'hoarierien. E yec'hed ivez en doa nec'het anezhañ, hag un nebeut bloavezhioù kent e oa bet oberataet evit ar pezh a anved ur wagrenn c'hwezet pe ur werblenn ; ar berranal a veze alies o waskañ anezhañ ouzhpenn.

Daoust da se, e seblante ar vuhez mont war wellaat evitañ : berzh o doa graet e oberennoù, bourrañ 'rae en e labour war-dro ar c'hoariva, hag e-touez ar c'hoarieried en doa kavet unan, Molly Algood, a blije dezhañ dreist. En em garout a raent ha dre eurvad ne voe lakaet skoilh ebet gant mamm Synge. Divizet o devoa eta bezañ euredet hep dale. Pep tra a hañvale mont mat eta. Synge a zivizas mont d'ober ur veaj verr da Vreizh, e-keit ma yae Molly, gant strollad c'hoarierien an Abati, da ober un droiad e Bro-Saoz.

(11) « One may indeed detect a striking parallelism of subject, atmosphere and situation in the two works. » Maurice Bourgeois, *John Millington Synge and the Irish Theatre*, Constable, London, 1913, p. 168).

34

Siwazh dezhañ ! e yec'hed a fallaas a-daol-trumm, ret e voe dezhañ, e lec'h mont da Vreizh, asantiñ bezañ kaset gant e vezeg d'an ospital evit bezañ oberataet, rak ar « wagrenn » a oa bet arouez kleñved Hodgkins. A-benn ar fin e voe divizet gant ar surjianed e vije didalvoud e oberata : un nebeut devezhioù goude e varve d'ar 24 a viz Meurzh 1909 ; ne oa ket c'hoazh 38 vloaz.

Greene, e rakskrid e vuhez, en deus roet e berr gomzoù ur varnedigezh kriz ha gwirion eus e blanedenn : « ur reuziad kerseoù, ur berzh-mat re ziwezhat, ur marv re abred » (12).

(12) « Synge's career of frustration, belated achievement and early death. » (David H. Greene, *Introduction to J.M. Synge (1871-1909)* by David H. Greene and Edward M. Stephens, MacMillan, New-York, 1959, p. VII).

Galloeg, normaneg hag all

Yezh, rannyezh, is-rannyezh, lavar, parlant, trefodach, hini ebet n'en deus diferet en un doare sklaer ha resis ar pezh a vez huzhet dindan ar gerioù-se.

A-c'houde kantvedoù, ar fransieg a zo deut da vout ar galleg komzet ha skrivet. Galleg komzet, da skouer, gant komediancherion an " Théâtre de France " hag ar c'hoarivaoù arall. Galleg klevet en tele, er radio, er sinema, galleg komzet ha skrivet ivez en holl skolioù. Dindan levezon an " Divina comedia ", rannyezh Firenze a zo deut da vout an italianeg lennegel komzet, skrivet ha komprenet ivez eus Mesina da Dorino.

D'an aliesañ emañ ur sort. Koulskoude e-tal ar yezhoù-se, an dud o deus dalc'hed da gomz parlantoù disheñvel, daoust dezhe bout an hevelep orin.

En Italia, da skouer, Kalabriz, Sikiliz, Milaniz a implij parlantoù ha nen dint ket komprenet gant ar re 'rall. War chanterioù an Hanternoz e vez gwelet Kalabriz oc'h ober goap ag ar Vilaniz. Ar re-se a reskont, e milaneg el rezon, ha Kalabriz ne goprenont grik. Met pa zegouezh ar c'hontre-mestr, hemañ a gomz en italianeg lennegel, hag an holl her c'hompren.

En Alamagn emañ ur sort. Suised Baasel, Elzasiz Kalmar pa gomzont etreze nen dint ket komprenet gant ar Brusiz da skouer. Neoazh an holl a gompren, a lenn hag a skriv an alamaneg lennegel.

Hent ar furnez.

Hini ebet en Italia ne ra anv ag ar yezh kalabrek. Hini ebet en Alamagn n'en deus c'hoant da stourm evit ar yezh bavariet. Perak neuze tabutal ha stourm evit ar galloeg pe an normaneg ? Kebekiz o-unan, dezhe koulskoude ur parlant pell a-walc'h diouzh ar galleg lennegel n'o deus ket lakaet en o soñj sevel kazetennoù e « joual » pe stourm evitañ (1). Neuze, mar deo ar galloeg ur « yezh », perak ne vefe ket hor gwenedeg pe hor c'herneveg ur yezh ivez ? Ne faot ket mont re bell ganti.

36

Neoazh n'hon eus ket dirouestlet ar gudenn, rak, anat eo, nen deus ket muioc'h a gemm etre ar spagnoleg lennegel hag ar c'hatalaneg eget etre ar galleg hag an normaneg. An holl, neoazh, a laka da wir ez eus ur yezh katalanek.

A-c'houde kantvedoù en deus ar c'hatalaneg ur lennegezh skrivet hag emañ Katalounia unan eus pinvidikañ kornadoù-bro a Vro-Spagn. Pouez al lennegezh skrivet, pouez an istor, pouez ar galloud politikel pe ekonomikel a c'hell lakaat da yezh ur parlant ha ne vefe sellet outañ lec'h arall nemet evel ur rannyezh pe un trefodach.

Ar c'hontrol eo evit ar berbereg. Ar Verbered n'o deus na lennegezh skrivet, na galloud politikel pe ekonomikel. Met disheñvel-krenn ez eo ar berbereg diouzh an arabeg, setu perak e reer ur yezh anezhañ. Memes tra evit hor brezhoneg. Distroomp d'an normaneg, hini Jerzenez pe hini Serk. Pennad Jorj Gwegen (" Al Liamm " niverenn 195) a zo plijus da lenn. Furchet en deus. Met un dra ne lavar ket : yezh an inizi-se a zo bet hag a zo c'hoazh - un tammig hepken - hiziv an deiz, ar galleg. Evel Kebekiz, evel Pikardiz, Normaned an inizi, ma raent gant an normaneg evel yezh komzet, a rae gant ar galleg evel yezh skrivet.

Ar bibl gallek a veze lennet er familhoù, galleg lennegel a vez gwelet e-barzh an ilizoù, war sichenn ar monumantoù, e pep lec'h. A-hend-arall, tra

souezhusoc'h c'hoazh, hi eo a veze ar yezh ofisiel, ar yezh ofisiel nemeti betek 1904 !

Perak neuze ez eo aet da get koulz lavaret ?

Ar Saozon n'o deus ket klasket he lazhañ e feson ebet ; n'eus forzh penaos, an inizi gant o emrenerezh - ur gwir emrenerezh - gant o lezennoù savet gante o-unan a oa tre da stourm oute.

Ret eo klask abegoù arall. Da gentañ, daoust d'an inizi bout kalz tostoc'h ouzh Frañs eget ouzh Bro-Saoz, kenwerzhed o deus gant Bro-Saoz dreist-holl. Arabat disoñjal pinvidikezh an inizi a gas da Vro-Saoz o avaloù-douar, o zomatez, o bokedoù ha zoken o rezin - ya, ya, rezin, hag e kroger mem d'ober gwinn ! - da borzhioù-mor Bro-Saoz. Yezh an darempredoù kenwerzhel, ar saozneg, yezh an darempredoù politikel ivez, deut eo a-nebeudigoù da vezañ ar yezh ne c'heller ket dioueriñ anezhi. Ne oa ket paot anezhe, a-raok an eil brezel ar Fransizion a yae da Jerzenez pe da Wernenez. Muioc'h a zo bremañ met muioc'h c'hoazh a Saozon a zeu da glask heol ar « Sunny Islands ». Douar a zo bet prenet gante, rak hervez lezennoù Jerzenez, ne vez ket paeet a vizoù war-lerc'h marv ur partikulier gant an heritourion.

37

- « Qu'voulez-vous bentôt y'aura autant d'Anglais et que d'Jersiais. Tous ceux qu'ont d'la galette ils achètent nos terres. Une colonie que j'vous dis qu'on s'ra bentôt » (2).

E pesort yezh e komze ar c'houer-se, normaneg pe galleg ? Ne vern. Atav em eus er c'homprenet mat-tre.

Ouzhpenn abegoù ekonomikel, re 'rall a zo. Sanket eo bet 'barzh pennoù an dud ne gomzent ket ar gwir galleg : « C'est point du bon français qu'on cause nous autres, c'est du patois » (3). Memes tra a vez klevet amañ e Bro-Gwened : « Hur Berton-ni nen de ket gwir Berton dam ! Berton ar Finister, hennezh zo er gwir Berton ».

Hag ouzhpenn c'hoazh, pesort dianvezerion a veze klevet o komz galleg ? Tud ar werin, an dud vunut, ar Vretoned paour a zeue bep bloaz da denañ patatez evit tevaat un tammig o foch argant. Yezh an dud kozh, yezh an dud dister, evel ma ouzhoc'h ne vez ket heuliet, na skouer ar re gozh, na skouer ar re baour. Mar da da goll eta, ken ar galleg lennegel ken ar galleg rannyezhel, pe normaneg mar karit - bezomp doujus - n'en deo ket dre ma 'z eo bet handeet gant ar Saozon.

Met amañ, tra souezhus, ne vez ket gwelet ar yaouankiz o stourm a-enep lanv ar saozneg. Korsika, Okitania, Euskadi, Breizh, Kernow zoken, e pep lec'h ar rummoù yaouank - ul lod ac'hoel - en deus adkavet o bro, o yezh. Perak nen deo ket ur seurt gant Jerzeniz pe Werneneziz ?

N'en don ket evit respont. Dre ma santont ez int dieub marse ? Dre ma ouezont ez eo bet diseblant ar Saozon ouzh ar gudenn-se ? Rak, arabat distagañ diotachoù, livañ gevier istorel, evel ra alies ar Fransizion : « An inizi-se a zo bet gall gwechall ». Gwechall ? Ya e gre Karlez-Veur, met a-c'houde feur-emglev Saint-Clair-on-Epte (912) emaint deut da vout norman hag an Normaned eo o deus aloubet Bro-Saoz. Er c'hontrol, Kernow ha Kembre a zo bet aloubet gant Bro-Saoz. Disheñvel ar c'hudennoù.

38

Met setu Yann pell a-ziouzh e gazeg : petra eo ur yezh ? Klasket 'm eus respont.

Met meur a wech e vez graet yezh ag ur parlant bennak dre vrasoni an dud. Rak, mar deo ur yezh galloeg Loudia pe Préchaté, embannomp neuze ez eo isrannyezh Kiberen ur yezh ivez : « Meun Diu atchen ti iei hoah de chebechat er blâ-moun ? » (4). Pendegwir e spir an alamaneg skrivet evit an holl yezhoù a orin germaneg, e spir ivez ar galleg skrivet evit an holl rannyezhoù oil gant ma

vo lakaet e-barzh gerioù is-rannyezhel. Gerioù galloeg, da skouer. Rak pinvidik-mor eo ar galloeg : « La p'tite là s'est engouillée avec son morceau d'gateau » (5). « L'gàs Louis aurait mieux fait d'rester veuvch plutôt qu' dépouser une femme qu'est au chabou » (6).

Ur wech ma oan o c'hwennat « redaktionoù » er Vro-C'hall, ur mestr-skol a fuloras dre ma nac'hen-me izelaat notenn ur paotr en doa skrivet : « C'était la véprée, on était à euger des pommes » (7). Eürusamant Ronsard a zeuas da sikour ar paotr ! « Engouillée, au chabou, véprée, euger ». Klaskit gerioù gallek... pe vrezhonek ker resis, da lakaat en o lec'h !

Greomp hor seizh posupl evit mirout teñzorioù ar rannyezhoù, met ne glaskomp ket ober anezhe « yezhoù » gant ur skritur dezhe o-unan. Kement-se a vefe merk ar vrasoni.

Hag ar pezh a zo gwir evit an alamaneg pe ar galleg a zo gwir ivez evit ar brezhoneg.

Edon o peurechuiñ ar pennad-mañ pa glevan huchadennoù e-barzh sal-degemer an ostaleri. Ar Veljed ur wech ouzhpenn o tabutal : « Pires que les inciviques Myrtil. Donnez une cuillerée aux Flandrins ils en voudront plein la bouche (8) ». Deskiñ a ran gante ez eus bet adarre freuzh ha reuz etre Waloniz ha Flandreziz. E Fourons. Kudenn ar yezhoù : un tavarnour en deus tennet gant e garabinenn ha glozet tud, glozet Flandrezerion, ar re-mañ, neuze o deus torret gwerennoù tiez-koñvers ar gallegerion ! Tri c'hant archer (Flandreziz) e-lec'h nav ! Evel ma ouzoc'h hanter ha hanter a zo bremañ galleg ha flandrezeg. Ha koulskoude... war-dro 1830 ne oa ket gwelloc'h stad ar flandrezeg eget hini ar brezhoneg. Dismegañset gant bourc'hizion Brusel, ar flandrezeg ne oa mui komzet nemet gant dud vunut, evel e Breizh. Er velestradurezh, en arme, ar galleg a oa roue. Ya, met ar Flandreziz o deus stourmet. Ur bobl en he fezh he deus stourmet. Setu aze ar c'hemm. E Breizh, Bretoned zo o deus stourmet, ar bobl, nann ! Prederiit bremañ : Berberiz, Breizhiz, Jerzeniz a chom dre vras diseblant ouzh dazont o yezh. Re 'rall, Suomiz, Flandreziz a zo aet ar maout gante.

39

It da gompren perak. Atav, evel-se mañ an traoù, hag ur stourmer a rank sellout an traoù evel m'emaint.

Pobloù flav a zo marse, ha re 'rall kalonek. E-keñver ar yezhoù ac'hoel.

(1) Antonine Mailet, ar skrivagnerez vrudet, a laka tudennoù he levrioù, Akadiz anezhe, da gomz hervez mod ar vro . « Et ceusses-là adgermés de Gos Coudjean... ».

(2) Kent pell kement a Saozon evel a Jerzeneziz a vo dre-mañ. An holl re o deus argant a bren hon douaroù-ni. Un drevadenn a vo ac'hanomp a-raok pell.

(3) Nen deo ket gwir galleg a zeu ganimp. Trefoedach eo.

(4) Evelkent, evelkent va Doue, te a yelo c'hoazh da jiboestat ar bloaz-mañ ?

(5) Aet eo an tamm gwastell en toull kontrol gant ar plac'h vihan-se.

(6) Gwelloc'h e vefe bet da Loeiz chom intañv, kentoc'h eget dimeziñ gant ur vaouez tomm he revr.

(7) Goude kreisteiz e oa. Edomp oc'h hejañ ar gwez avaloù.

(8) Gwashoc'h eget an dreitourien (a genlaboure gant an Alamaned) eo ar Flandreziz. Roit un dornad dezhe, ur vriad a c'houlennint.

Yec'hed ar Vamm-gozh

Ar pennad-skrid emeur o vont da lenn amañ a zo bet savet gant unan eus gwellañ kelaouennerien ouezelek, unan hag a zo, sur-mat, e-touez gwellañ mignoned hag harperien yezh vroadel Iwerzhon.

Me 'zo koumanantet abaoe 1963 d'ar gelaouenn sizhuniek " Inniu ", embannet penn-da-benn e gouezeleg, hag e-keit ar 14 bloavezh-se em eus gwelet war bep niverenn anezhi ur pennad, hag a-wechoù daou, savet gant *Proinsias Mac an Bheatha*.

Bet e oan bet d'e welout e 1963 pa oan aet da Iwerzhon evit ar wech kentañ goude ar brezel. Soñj am eus e oa bet diaes a-walc'h an diviz em boa bet gantañ rak ne felle ket da Broinsias komz saozneg ha me ne oan ket gouezeleger a-walc'h evit ober gant yezh e galon, na kennebeut-all gant ar spagnoleg evel m'en doa kinniget. N'eus forzh, dre lenn kazi bep sizhun e bennadoù em eus gallet gwelout penaos e feiz e dasorc'hidigezh ar gouezeleg a zo aet, tamm-ha-tamm, war-goazhañ. Ha se n'eo ket souezhus rak evit an neb boas da vont da Iwerzhon ha da sellout ouzh an traoù gant daoulagad dibikous e oa anat ne dae ket ar yezh war-raok. War-gil, ne lavaran ket.

Soñj am eus penaos e oa bet graet hogos un « azen » ac'hanon p'am boa kredet lavarout kemend-all un noz e Kamp ar Vrezhonegerien e Kintin dirak un istrogell a Iwerzhonad kozh - ur gouezeleger mat anezhañ hag, ouzhpenn, un den hegarat - a gave dezhañ, evel just, ez ae pep tra evit ar gwellañ e-keñver dasorc'hidigezh ar yezh.

Nemet Iwerzhoniz a zo Kelted anezho hag, evel an holl Gelted, ne blij ket dezho gwelout an traoù evel m'emaint, gwell ganto o gwelout evel ma karfent e vijent.

41

Ha setu perak e ranker bezañ anaoudek da Broinsias Mac an Bheatha da lavarout ar wirionez diwar-benn stad ar yezh vroadel en Iwerzhon en amzer-mañ. Evel just n'emañ ket ar wirionez en he fezh gant Proinsias nemet e c'heller lakaat da wir o deus c'hwitet Iwerzhoniz pep gwech m'o deus klasket reiñ lañs en-dro d'o yezh vroadel. Kentelius e vefe danevellañ istor ar c'hwitadennoù-se rak klasket o deus, e gwirionez, lakaat o yezh da advevañ ha dispignet kalz a amzer hag a arc'hant evit se. Ar strivadenn veur diwezhañ bet graet evit reiñ lañs en-dro da zasorc'hidigezh ar yezh vroadel a voe embannidigezh ar " Buntus Cainte " ur doare kelenn nevez hag arnevez ar gouezeleg, diazezet war un enklask pizh ha skiantel graet dindan renerezh an Tad Colman, anezhañ ur yezhour brudet hag ur gwir vignon d'ar gouezeleg, a zo siwazh o paouez mervel.

Seul genteliusoc'h e vefe studiañ istor ar gouezeleg abaoe dieubidigezh Iwerzhon m'eo bet harpet ha skoazellet e pep doare gant ur stad he doa graet anezhañ ur yezh ofisiel nemet, hag eno emañ an dalc'h, n'he deus graet biskoazh da vat gantañ. Rak-se, er-maez eus ar gouezelvaoù, ar gouezeleg a zo chomet ur yezh studiet hag anavezet, muioc'h pe nebeutoc'h, gant un drederenn eus an dud nemet ne veze ket implijet ganto hag a chome er-maez eus buhez wirion ar vro. N'eo ket souezh enta en dije kollet an darn vrasañ eus e dalvoudegezh evit ar bras eus ar boblañs dre ma tremene an amzer. Evel ma lavare din, ur wech, gant un tamm c'hwervoni un den eus Baile an Fheirtearigh (Ballyferouter e saozneg, resped deoc'h !) : « Ya, ur yezh vray eo a dra sur ar gouezeleg nemet ganti n'hellit ket mont pelloc'h eget Trali ! ». Hag e c'hellan-me lavarout ouzhpenn : « Ha c'hoazh ! n'eo ket sur », rak zoken a touller-tikedoù er " bus " a yae da Zoun C'hin (Dun Chaoin) a rae peurliesañ gant ar saozneg hag a selle a-gorn ouzhoc'h pa'z aec'h dezhañ en iwerzhoneg.

TAOL AR MARV - TIEGEZHIOÙ SAOZNEK AR GOUEZELVA

Gant PROINSIAS MAC AN BHEATHA

Darn eus va mignoned n'int ket laouen ganin abalamour d'ar menozioù am eus bet displeget er pennad-skrid bet savet ganin dindan an talbenn : " Ur Vro-Saoz nevez a zo Iwerzhon hec'h anv " ma tisklerien ennañ va soñjoù diwar-benn amzer-da-zont ar gouezeleg. Lavarout a raen n'en deus mui ar gouezeleg ar galloud da zont da vezañ yezh voutin komzet ar vro na kennebeut-all ar genyezh, a-gevret gant ar saozneg, eus ur vro divyezhek.

Hervez lod eus va mignoned n'en deus an dic'hoanag gounezet brezel ebet ha ne vez biskoazh an traoù ken fall ha ma ijiner emaint.

Ret eo din lavarout eo hennezh va sellad abaoe ur pennad. Ne voe biskoazh ker splann stad ar gouezeleg evidon hag an deiz ma kuitais va labour e burev ar gelaouenn-mañ em boa darempredet ingal e-pad an tri bloavezh a zeuas war-lerc'h va dilez eus ar garg em boa bet dindan ar gouarnamant.

Tro em boe neuze da gompren ar wirionez diwar-benn ar gouezeleg evel m'emañ evit mat. Evit ar wech kentañ abaoe bloavezhioù hir e oan dispartiet a-grenn diouzh gouezelegerien ha diouzh emsav ar gouezeleg evel ma reer eus ar strivadennoù rouez ha digenvez graet da herzel ouzh koazhidigezh ar yezh ha da gregiñ gant he dasorc'hidigezh.

Hep talvoudegezh, hep nerzh.

Gwelout a ris splann neuze an toull bras a zo etre hor c'homzoù pe an traoù evel m'edont, gouez deomp, ha buhez vras ar saozneg er vro-mañ ma'z eus a-boan enni ul lec'h evit ar gouezeleg.

E komzoù all, splann e voe evidon ar wirionez ma n'hell ket ar gouezeleg mont war-raok etrezek ar pal a voe a-viskoazh em fenn evel en hini an emsav : advevañ ar gouezeleg evel yezh komzet an dud.

43

Er-maez eus hon ti ez eus ur voestig-houarn a zo skrivet er metal anezhi ar ger « uisce » (= dour) ; boest an duellenn o kas an dour en ti an hini eo. Ul laouenedigezh bennak en deus roet din a-viskoazh lenn ar ger-se warni. Un den bennak a voe gredus a-walc'h evit lakaat ober se bloavezhioù pell a zo. N'eus mui, avat, na talvoudegezh na nerzh er strivadenn-se, difrouezh m'eo chomet. Evel-se emañ ar gouezeleg en deiz a hiziv, hag, hervezon, ez eo anat n'eus louzou ebet d'ar c'hleñved.

Taol ar marv

N'eo ket marv ar yezh c'hoazh, evel just. Bev eo-hi, ma'z eo a-boan hag ez eus kened enni c'hoazh. Talvezout a ra ar boan he c'homz, talvezout a ra ar boan he skrivañ. Hogen n'eus mui na talvoudegezh na nerzh enni.

Gwir eo emeur ouzh he c'homz c'hoazh evel ur yezh vev e lod eus ar Gouzelvaoù, en un niver a diez el lodenn all eus ar vro hag e lod eus ar skolioù. Me 'gav din, avat, ne c'hell padout kement-se zoken nemet e-pad ur mare bennak.

Spi hor boa lakaet a-viskoazh er Gouzelva. Gant skoazell Doue e c'hellfe bezañ brasaet. Ur ministr eus ar Gouzelva a voe ouzh e ledanaat, drezañ e-unan nemet ma oa gwir evitañ piv, avat, a grede se ? Pe ma n'hellemp ket astenn

anezhañ neuze e c'hellfemp-ni tennañ eus ar binvidigezh a oa c'hoazh ennañ peadra da hadañ el lod all eus ar vro.

Ne oa ket diskiant penn-da-benn marteze, an huñvre-se ken en em ziskouezas ar wirionez lentik ha splann ur bloavezh bennak a zo : emañ tud ar Gouzelva, al lod brasañ anezho n'eus forzh penaos, o komz saozneg gant o bugale hag o lezel gant ar skolioù ar garg da zeskiñ gouezeleg d'ar rummad nevez.

Kemenn ar Ministr.

Komzet em eus dija eus ar « skandal »-se er gelaouenn-mañ ur pennad 'zo ha tud 'zo a voe drouklaouen ganin.

44

C'hoarvezout a reas, avat, ma venegas Ministr ar Gouzelva, Donncha O Gallchobair, ar wirionez-se pedo o tigeriñ Gouel an Dóilin, er Cheathrú Rua, e kreiz miz Eost. Goulenn a reas d'an dud komz gouezeleg ouzh o bugale, evel yezh an tiegezh, pe neuze e vefe graet gantañ.

N'emañ ket eñ, da nebeutañ, o vont e-biou evit diazezañ fals-gouzelvaoù.

Koazhet eo dija ar yezh, evel just, en darn vrasañ eus ar gouzelvaoù. E kornioù 'zo, a vez graet bepred gouzelvaoù anezho hag a vez brudet abalamour da se, ken er c'hreisteiz, en hanternoz hag er c'hornog, n'eus mui nemet dilerc'hioù eus

*« Ar gouezeleg c'hwek a veze sioul e sonerezh
Mibin, meur ha kreñv evel tarzha ar mor... »*

Gwanded ar marv a zo eno. Bevañ 'ray ur mare all c'hoazh dre m'eo eñ an hini a zeu ar primañ e genou an dud p'emaint o komz a-gevret. A-barzh nemeur, avat, e teuo ur rummad all hag ar saozneg eo a vo ar buanañ war o muzelloù ha, neuze, ne vezo mui klevet ar gouezeleg nemet gant an dud gredus, ma'z eus anezho c'hoazh.

Diwezh an emrousted.

Ur wirionez all zo a brederian warni : n'eus mui a emrousted evel ma oa. An aozadurioù gouezeleg zoken a chom bev c'hoazh en deiz hiziv en abeg da arc'hant ar gouarnamant. Panevet an arc'hant-se e vefe echu warc'hoazh gant an emsav « ofisiel ».

Gredus a-walc'h edomp gwechall evit reiñ brokus hon arc'hant d'ar c'hevredigezhioù a oa anezho ha laouen edomp o reiñ hon amzer da zastum arc'hant pe da werzhañ embannadurioù a oa arc'hant da c'hounit a-ziwarno. Barrek e oa hor c'hevredigezhioù, neuze, da baeañ o dispignoù : lizheroù-feurm ha goprou - daoust ma ne veze ket uhel ar re-mañ laouen e oa an dud c'hredus da labourat evit nebeut peogwir e oa evit ar yezh e oa.

Kement-se, avat, a zo echu-tout, pe hogos, hag abalamour m'emañ an emsav o vevañ diwar goust ar gouarnamant n'emaomp ket sur eo bev evit mat.

45

Buhez kollet ?

Gwir eo ez eus c'hoazh tud o labourat en aozadurioù a glask chom bev gant re nebeut a arc'hant evit kas o buhez en-dro evel ma vefe reizh.

Evidon va-unan, spi a oa ganin e c'hellfe va rummad bezañ efedus ; keuz am eus ne voemp ket efedusoc'h ha ne zeuas ket frouezh gwelloc'h a-ziwar hol labour.

Kerse eo gant an neb a lavar dezhañ e-unan en deus kollet e vuhez o

labourat evit ur pal na c'helle ket tizhout - nemet ha n'eo ket evel-se e vez ar vuhez ?

Ne c'hell an den, avat, nemet ober eus e wellañ.

A-ziwar " Inniu ", niv. ar 7 a viz Here 1979,
lakaet e brezhoneg gant L. Andouard.

NOTENN. - Sellout ivez AL LIAMM, niv. 143, p. 498 : " Ar c'hil meur " ha niv. 146, p. 206 : " Hogen aet omp war-raok ".

Priz Langleiz 1919 d'ur c'helenner skol-veur amerikan

Daoust hag e vefe arouez an amzerioù nevez ? Setu unan ouzhpenn e-touez hor barzhed wellañ eus an amzer-vremañ o tont eus hon Diaspora. Setu adkavet ar pezh a seblante bezañ kollet ha foranet da viken.

Eus pep kornig eus ar blanedenn ma oant bet rediet, gant an ezeved, gant an dilabour, gant an heskinerezh, da vont d'an harlu, he mibien a-strew a zalc'h o c'halon stag ouzh o mammvro goapaet ha moustret.

Youenn Gwernig, barzh e teir yezh, a zo deuet en-dro hiziv da adkemer telenn an emgann goude kement a vloavezhioù tremenet war zouar Amerika bell, hag eus Amerika ivez an hini eo e kas deomp Reun ar C'halan ur c'halvadenn leun a don.

Reun ar C'halan a zo bet ganet er C'hastell-Nevez d'ar 27 a viz Genver 1923.

E dad a oa genidik eus Edern hag e vamm eus ar C'hastell-Nevez, o-daou eus tiegezhioù labourerien-douar. Rankout a reas e dad divroañ abalamour d'an dilabour. Evel kalz tud all eus war-dro ar C'hastell-Nevez ez eas da Amerika. Pemp bloaz e oa Reun neuze, hag e vamm a yeas da gavout he gwaz un nebeut bloavezhioù goude.

Gounezet ur yalc'had gant ar paotrig e voe kaset da lise Kemper. E-pad ar vakañsoù e tistroe da diegezh e dud kozh war vord ar Stêr Aon.

Ne veze graet nemet gant ar brezhoneg war ar maez en amzer-se hag evel-se en deus kroget da zeskiñ ar yezh, o komz gant e dud kozh ha gant an amezeien.

El lise, e Brest, e oa kalz tud yaouank a studie evit mont da " Navale " pe da " Saint-Cyr ". " Navale " a blije dezhañ, met ne oa ket mat a-walc'h e zaoulagad. Diaes eo da grediñ, met morse ne oa anv eus an Emsav en-dro dezhañ. Ar skolidi ne ouient ket e oa Roparz Hemon, an Nemo-se a oa kelenner war ar saozneg. Forzh penaos, n'eus ket da grediñ ez eo e-touez ar baotred graet o soñj da vont da " Navale " pe da " Saint-Cyr ", e vije bet kavet danvez emsaverien.

47

War-lerc'h ar brezel, goude bezañ bet e « Strouezh » ar C'hastell-Nevez da vare an dilestradeg e Normandi ha bet kaset goude-se evel letanant d'ar 24vet Rejimant war droad e Bro-Alamagn, ne voe ket pell evit kavout ne blije ket dezhañ buhez an arme.

Dispartiet e oa bet diouzh e dud abaoe ouzhpenn dek vloaz. Goulenn a reas e baperioù-diskarg, ha mont da gaout e dad, e vamm hag e c'hoar en Amerika e derou 1947.

Degemeret e voe diouzhtu e Skol-veur Yale (Connecticut), a oa tost-tre ouzh ti e dud. Ar Skol-veur-se a zo bet mat-tre en e geñver : roet e voe dezhañ un nebeut eurioù labour, trawalc'h evit paeañ e studi hag e frejoù. Goude an doktorelezh e voe kinniget dezhañ ur gador a gelenner war al lennegezh c'hallek e Wellesley College, hag eno eo chomet abaoe.

Perzh dispar ar skolioù-meur amerikan eo o deus ar gelennerien, en tu-hont d'o c'hentelioù, da sevel ingal studiadennoù war an danvez a gelenont. En ur ger ne vezont ket maget evit netra.

Evel-se eo ez eus bet embannet kalz a oberennoù e saozneg hag e galleg. Reun ar C'halan en deus skrivet studiadennoù ha levrioù war Proust, Baudelaire, Rimbaud, Saint John Perse, ha Cocteau dreist-holl ha pennadoù stank a-walc'h war skrivagnerien vrezhonek pe vreizhat zo, evel Ernest Renan (" Ene keltiek Renan ", Yale Press 1959), Maodez Glanndour, Per Jakez Helias, Añjela Duval, Youenn Gwernig, S. Duigou, Youenn Coic, Y. Le Men, D. Trelu, X. Grall en deus Reun ar C'halan embannet pennadoù diwar o fenn e meur a gelaouenn amerikan.

Dimezet en deus, hag ar bloavezhioù a zo aet e-biou, gant ar vugale da sevel, ar c'hentelioù da brientiñ bepred, ur pennad pe ul levr da skrivañ, betek an deiz m'eo deut da gompren e teue da vezañ laoskoc'h-laoskañ pep liamm etrezañ hag ar Vro. Neuze en deus kroget da vat da studiañ yezh, istor ha lennegezh Vreizh.

Marv e dad hag e vamm, tost da zek vloaz 'zo a voe un taol mantrus evitañ, ha d'ar mare-se eo en deus skrivet e gentañ barzhonegoù : " D'an hini a gerzhas araozañ " ha " Pedenn ", e koun e dad hag e vamm. Embannet int bet en dastumadenn " Gouelec'hioù an eñvor ". Dizoloet en deus neuze e oa douget da skrivañ e brezhoneg ha deuet eo da vezañ un ezhomm evitañ.

48

E-kerz ar bloavezhioù diwezhañ en deus embannet, e-barzh **Skrid** hag e-barzh Al Liamm, dre dammoù, lod eus ul labour kalz pouezusoc'h : " Levr ar blanedenn ", e c'hwec'h lodenn, ul labour a zo o paouez bezañ kurunennet gant Priz Langleiz.

N'on ket evit barn hiziv an oberenn souezhus-mañ. Tud all, kalz barrekoc'h egedon, hen graio em lec'h. Adkemer a rin hepken ar pezh a zispleg an aozer e-unan en e raklavar.

« Ar skridoù da heul a zo bet savet etre 1977 ha 1979. Disheñvel int evit pezh a sell ar stumm. Lod a zo skrivet e komz-plaen, ha lod e gwerzennoù dieub, gwerzennoù na sentont ket ouzh reolennoù strizh a-zivout an hed pe ar glotenn.

Un ere a zo etrezo koulskoude. An hevelep mennoz a vo kavet e pep hini : ar blanedenn.

- " Lenn ar C'hemmoù ", an I Ching, a veze implijet gwechall e Sina gant an diouganerien.

- " Skeudennoù eus levr ar Blanedenn " a daolenn ar c'hartoù implijet gant ar Jipsianezed.

- Istor " Malinal " a zo diazezet war doueedoniezh an Asteked hag ar v-Mayaed (s.o. Al Liamm niv. 191, pp. 409-421.)

- Danvez an danevell " Laora " a zo bet tennet eus mojennoù ar Rheingau.

- " Planedenn ar barzh kozh " a zo bet awenet gant haikai ar Japaniz. An titl a zo displeget er varzhoneg kentañ. Hervez ur vojenn sinaat e varvas ur barzh kozh en ur strivañ da gutuilhañ skeudenn al loar adskedet en dour. Risklañ a reas er-maez eus ar vag hag e voe beuzet. Mezv e oa d'ar mare war a hañval (s.o. Al Liamm niv. 193, pp. 83-88.)

Levezonet eo bet ar skridoù kentañ gant mennozioù ar Sinaiz, an Asteked hag an Egiptiz diwar-benn ar blanedenn, al lodenn diwezhañ - Kelenn ar Profed - a zo tostoc'h he spered ouzh al Levr Santel.

Setu " Levr ar Blanedenn ", un oberenn gaer ha glan, ur berlezenn nevez e skrin hol lennegezh.

Danevelloù brezhoneg troet hag embannet e kembraeg

N'eo ket alies e vez kavet pennadoù a skridvarnerezh e-barzh Al Liamm hag un druez eo rak kement-mañ a zo alies al lodenn blijusañ da lenn en ur gelaouenn lennegel gant an notennoù. Embannet e vez bremañ ur bern levrioù e brezhoneg pe e yezhoù all diwar-benn Breizh hag ar broioù keltiek met n'eus ket tu da brenañ na da lenn pep tra. Plijus eo lenn skridvarnadennoù evit gouzout pezh a dremen hag evit dibab levrioù da brenañ. Dudius-kenañ e oa ar skridvarnadennoù e-barzh Barr-Heol (kavet e vezont bremañ e-barzh Imbourc'h) ha mat e vefe moarvat kavout muioc'h a bennadoù a seurt-se en ur gelaouenn lennegel vras evel Al Liamm. Broudet e c'hello bezañ lennerien 'zo da gregiñ en o fluenn goude bezañ lennet ar pennad-mañ bet savet gant ur C'hembread, Gwyn GRIFFITHS.

Anavezet eo Gwyn Griffiths gant meur a hini en Emsav. Deuet eo alies da Vreizh ha savet en deus ur bern pennadoù diwar-benn hor Bro e-barzh *Y Cymro* ha kelaouennoù all eus Bro-Gembre. Savet en deus zoken ul levr touristelezh diwar benn Breizh, « Chwydro Llydaw » (Ergerzhout Breizh), bet embannet e miz Kerzu 1977 gant an Embannadurioù Christopher Davies eus Abertawe (Swansea). Emañ o paouez echuiñ ul levr e kembraeg diwar-benn marc'hadourien onion Rosko, an « Johnies ». Dont a raio er-maez al levr-mañ a-benn un nebeut sizhunvezhioù gant an titl « Y Sionis Olaf » en Embannadurioù Gwask Gomer. A-benn ur miz pe zaou e teuo er-maez ivez ul levr bet prientet gantañ c'hoariva Tangi Malmanche bet troet e kembraeg. Gant Gwyn Griffiths ez eo bet troet « Gurvan ar Marc'heg Estrañjour », « Ar Baganiz » hag « An Intañvez Arzhur », gant an Itron Rita Williams, « Gwreg an Toer ». Embannet e vo al levr-mañ gant an Embannadurioù Christopher Davies. Tu a vo marteze da gavout al levrioù-se da brenañ e Gouel ar Brezhoneg e Plabenneg (14-18 a viz Mae).

BERNEZ AN NAILH.

50

* * *

Embannet ez eus bet nevez 'zo e Bro-Gembre un dastumadenn danevelloù berr bet troet e kembraeg diwar ar brezhoneg. Al levr-mañ : « Storioù o'r Llydaweg » (Istorioù diwar ar brezhoneg), a zo an eizhvet eus un dastumadeg anvet « Storioù Tramor » (Istorioù tramor) ka kavout a reer ennañ 22 zanevell, eizh gant Roparz Hemon, peder gant Ronan Huon, teir gant Jakez Riou, div gant Abeozen, hag unan gant pep hini eus ar skrivagnerien-mañ : Kristian Brisson, Youenn Drezen, Youenn Gwernig, Per-Mari Mevel ha Per Trepos. Pa soñjer ez eus bet dija teir danevell gant Roparz Hemon embannet en eil levr eus an dastumadeg « Storioù Tramor », peder gant Jakez Riou hag unan gant Abeozen en trede levr, e weler o deus bremañ ar Gembraegerien un dibab brav a zanevelloù tennet eus al lennegezh vrezhonek a vremañ.

Abaoe pell ez eo bet dedennet kembraegerien gant kontadennoù hengounel Breizh hag he lennegezh dre gomz a zo hep mar ebet unan eus ar re binvidikañ dre ar bed. Gant Geraint Dyfnallt Owen e voe embannet daou levr a-raok ar brezel, « Straeon o'r Llydaweg » (Istorioù diwar ar brezhoneg) ha « Helynt y Pibydd » (Strafuih ar biniaouer). Diwezhatoc'h e teuas an dastumadenn « Aderyn y Gwirionedd » (Labous ar wirionez) embannet gant J. E. Caerwyn Williams. E saozneg e kaver ivez dastumadennoù a gontadennoù-pobl eus Breizh.

Diwar vremañ e c'hello al lenner kembraeger dizoleiñ ivez un darn eus « un doare lennegezh arnevez war un dro kaer ha fromus », evel ma lavar Per Denez, da lavarout eo an danevelloù berr-se awenet gant Roparz Hemon hag Emsav Gwalarn. Seul heverkoc'h eo hengoun an danevell verr e brezhoneg maz eo bet skrivet an

holl zanevelloù-se goude an dispac'h lennegel degaset gant Roparz Hemon dre Walarn. Heverkoc'h eo c'hoazh pa soñjer en niver dister a dud o deus lennet anezho goude ma voent skrivet. Kilpennerezh a ranke bezañ gant an holl skrivagnerien-se, kement ha gant " Fañch Toulhoad " en istor kontet gant Per-Mari Mevel.

51

Disheñvel-tre eo danvez an danevelloù hag emzalc'h ar skrivagnerien en dastumadenn-se. E 1925 e felle da Roparz Hemon troc'hañ gant hengoun lennegel an amzer dremenet. Splann eo kement-mañ en e istorioù kizellet fraezh e doare perverzh ur surjian, hag an holl anezho pe dost o livañ tud eus ar c'hêrioù, tud n'en em gavont ket en o aez en o endro, pe dud dic'houest da gaout darempredoù don ha gwirion gant o amezeien, o friedoù, o bugale.

Levezonet eo bet re all gant hengoun poblek an istorioù dre gomz. « Lan Arwerthwr y Llundw » (Lan ar marc'hadour ludu) a zo ur skouer gaer eus kement-se evel « Pererin Calan-gaeaf » (Pirc'hirin Kala-goañv), a voe embannet abretoc'h en trede levr eus an dastumadeg « Storiâu Tramor ».

Disheñvel-krenn eo doare Jakez Riou diouzh strizhder Roparz Hemon. Kaermeurbet eo e daolennoù eus ar maezioù, krisoc'h e seblant bezañ avat tonkad an dud livet eget re Roparz Hemon. Gant ur sioulder sebezus e kont fin Yann ar C'herneis.

E kêr e tremen istorioù Ronan Huon, evel re Roparz Hemon, kentoc'h eget war ar maez. E-kreiz c'hwitadennoù ar vuhez en em gav ivez an dud livet gantañ met kengarantez en deus evito ha dispar eo e zonezonoù evit taolennañ an traoù.

Pevar istor am eus kavet dreist, en dastumadenn gaer-se :

- « Rym y Tad Herri » (Rom an Aotrou Person) hag « Un ar ei dyfiant » (Un danvez-den) gant Abeozen, an hini kentañ abalamour d'e vousfent hag an eil en abeg d'e ampartiz evit mont e-barzh spered ur skoliad yaouank ;

- « Y dwr o Gylch yr Ynysoedd » (An dour en-dro d'an Inizi) e-lec'h ma liv Youenn Drezen, gant mentadur ur Jack Kerouac, ur c'hizellour yaouank o klask e awen en andon keltiek, pezh a zo heverk a-walc'h pa soñjer ez eo bet skrivet e 1932;

- evit echuiñ, « Sant Evardon », marteze en abeg d'e ster politikel a-zindan.

Karet em bije kavout aliesoc'h damvenegoù politikel, met skrivañ brezhoneg a zo moarvat, drezañ e-unan, un ober politikel. Abeozen en doa skrivet un danevell verr awenet gant darvoudoù c'hoarvezet gantañ e toull-bac'h goude ar brezel. Laouen e vijen bet da gavout an danevell-se en dastumadenn-mañ.

52

Gant an Itron Rita Williams ez eo bet dibabet an danevelloù ha troet lod anezho hag ul labour dispar he deus graet aze e gwirionez. Ur rakskrid talvoudus-tre he deus skrivet ivez ha kavout a reer ouzhpenn-se el levr notennoù klok war bep hini eus ar skrivagnerien vrezhon. Ouzhpenn an Itron Williams ez eus bet troet istorioù ivez gant an Aotrou J. C. Caerwyn Williams, gant Dewi Morris-Jones ha gant c'hwec'h den all, bet studierien d'am soñj gant an Itron Williams e Skol-veur Aberystwyth.

En amzer dremenet, o lenn kontadennoù-pobl boemus eus Breizh ez eus bet stad ennon da vezañ ur C'helt. An hevelep trivliad am eus bet o lenn an danevelloù-mañ.

Notenn : Embannet eo bet « Storiâu o'r Llydaweg» gant Gwasg Gomer, Llandysul,

Dyfed, Cymru. Ul levr keinet eo, 170 pajenn ennañ. E briz a zo 3,95 lur saoz, da lavarout eo war-dro 36 lur gall. Prenet e c'hell bezañ dre lizher digant Oriel Bookshop 53, Charles Street CAERDYDD CF1 4ED CYMRU.

Nann ! ne zevimp ket hon ilizoù !

Da heul pennad an Ao. Loeiz ar Floc'h o rebech da Y. Talbot bezañ aet da gantren war un hent arvarus ha darempredet fall (peogwir oa Karl Marx gwallvrudet du-hont e penn an hent) on aet me buan da glask AL LIAMM. Evit adkavout danvez an tamall. Met siwazh din, pe ne ouien ket klask, pe marteze va zamm spered ne gerzhe ket mui re vat... ne gaven netra ! Ne oa nemet ur varzhoneg, troet - adaozet kentoc'h - gant Yann gaezh. Kaoz oa e-barzh eus devañ an ilizoù !

Adlennomp, emezon, rak setu sur abeg ar rebech. Daoust ha kondaonet e vin, me ivez, ma kredan lavarout on bet fromet don gant ar skrid-se ? Kavet am eus kaer ar gerioù-tarzh-mañ, o livañ kriz ar boan, ar reveulzi, an dizesper.

Ur galon gouliet ha laosket... o tiwadañ.

Ennon an enkrez-se o krignal. Ur seurt spont, dirak kement a zic'hoanag. « Ha te, petra ac'h eus graet eus da vreur ? » Galv skrijus ur galon en arvar un tu bennak ; o lezel seurt garmadenn ; penaos mont davetañ ? Penaos reiñ un tamm konforz ha balzam ? Hag ivez, perak ur reveulzi kengarv ? Perak... Perak ?

N'emaomp ket, hini ebet ac'hanomp brezhonegerien kar-hor-bro, na Y. Talbot na me, o vont *d'ober tantadoù gant hon ilizoù !* Fitei ! An tantadoù, gwechall - pell 'zo - oa lidoù pagan ar Gelted Kozh. Ni avat, zo kristenion modernaet, deut poellek hag erfin... erfin Bretoned Sevenaet ! Bez' hon eus (krouet eo) sevenadur Dreist an « Terminal Bomb » ! Peoc'h war an douar. Ilizoù, chapelioù, yezhoù, beredoù, hag all, hag all... Ar Peoc'h ramzel. Ha da viken ! Met da c'hortoz ?...

54

Ya ! Gwir. Da c'hortoz hon eus Arz hor bro da wareziñ start. Ilizoù, met dreist-holl chapelioù niverus, savet a-vil-vern war douar Breizh. Da saveteiñ emaint ; ar pezh a c'heller c'hoazh salviñ. Ar pezh n'eo ket bet lezet da gouezhañ en douflez. Ar pezh n'eo ket bet laeret, preizhet, devet ! Arz sakr Breizh int. Ul lodenn all ivez zo bet lezet e fraost, ken disprizet, ken mezhekaet : va yezh eo. Hini ar bloukistanez ma 'z on c'hoazh hiziv. Va arz pemdeziek din-me. Hag ar gerioù leun a zroukrañs-mañ, daoust ha ne vefent ket bet skrivet eviton ?

Ha tud a oa oc'h embann
Ur wirionez
Na oa nag o hini
Nag hon hini...

Embann va gwirionez er yezh he deus lazhet (pas tre koulskoude peogwir am eus legadet anezhi d'am bugale vihan !) va hini, n'eo ket, ha ne c'hell ket bezañ va gwirionez. Va hini zo ur bloc'h ; n'eus tu ebet d'he rannañ, n'eus tu ebet d'am dispartiañ diouti anez frailhañ va boud.

Bevañ (klask kentoc'h, ken fall allas !), bevañ ar bedenn veur, bemdez. Bevañ va yezh ivez ; war ur c'hornig eus ar vro-se zo bet a-viskoazh va herezh.

Soñj am eus bezañ lennet alies un istor gaer : bez' e oa un tropellad deñved, dindan sell ar mesaer, o tiskenn eus ar menezioù. Sioul. Fur. Doujus ha tout... ha tout. Unan siwazh ! ur penn fall, oa dianket. Ar mesaer zo aet daveti. Pell marteze ? N'ouzer ket betek pelec'h... Lezet en deus du-hont an holl re fur, ar re sentus, ar re zoujus, ar re tropellet brav, da genderc'hel er

furnez boas ! Ar mesaer-se a gare ar penndoleg fall disuj hag aheurtet. Gouzout a ouie e kavfe-hi, an dañvadez, hec'h-unan-penn... ar marv marteze ?

Ni, hiziv en hon ilizoù, zo ar re fall, ar re zisuj, ar benndoleged aheurtet. Met, pelec'h eo aet 'ta hor mesaer ? En ilizoù-se, a nac'homp-ni devañ er c'hontrol d'ar varzhoneg, n'hon eus mui plas ebet. N'hon eus mui gwir ebet. N'eus mui evidomp nag ilizoù, na chapelioù digor. Harluidi en hor bro : ni zo ur ghetto ! Ha koulskoude eo ni c'hoazh a zalc'h en hon daouarn ar Piled enaouet : Arz sakr hor yezh.

Petra ? Perak seurt rebechoù diamzeriet ?

N'hon eus nemet heuliañ an tropellad. Gouzañv ar c'habestr ; rak, petra zo ac'hanomp nemet un dornadig tudigoù divergent ! Klevout a rit, mesaer ? Un dornadig, a lavaromp... daouzek hepken Ho poa evit kemm fas an douar gant Ho k-ghetto deoc'h-c'hwi ! Daouzek Plouk-arameek !

55

Ya ! Gouzañv. Em iliz parrez d'ar sul-hont. An hini a-raok gouel an Hollsent. Graet am eus en deiz-se ul lev hanter mont-dont war droad, evit heuliañ an oferenn. Evit klevout petra ? Komzoù divlaz, goular, diene. Sonerezh euzhus o kammikañ, « taol-ri, taol-roeñv », war silabennoù gerioù ken paour alies, div wech re hir da glotañ gant notennoù ar sonerezh !

Ret chom eno. Ar beleg, e-keit-se, a lide an oferenn. Hag evit an oferenn-se am boa da vale 6 km ! Met ret mat oa prientiñ a-zoare lidoù nevez (alies e vezont nevez bremañ !) an Hollsent neketa ! Perak avat on chomet eno ? Klevout a raen (ur bennozh !) dre va eñvor bombard hud Riwallan o seniñ meurdez kantik an Anaon. Breudeur, kerent ha mignoned, en an' Doue, va sikouret ! Chomet on. Reveulzet. Penaos 'ta e c'heller bezañ ken dizesk, ken di-sevenaet rik, ken trevadennet o kavout kaer seurt pedennoù ? Ha krediñ eo an dra-se Arz Sakr ? O Kembre o kanañ an imnoù ! O ar vorianed o pediñ gant ar Spiritual !

Ha ni ! An tropellad (int-i ?) o teurel el lastez arz kaer sonerezh Breizh. Nann ! Ne zevimp ket hon ilizoù ! Met na c'houlennit ket diganin avat, pediñ - pediñ, a lavar an - enno ken. Gwelloc'h eo din bezañ dirak splannder divent ar mor. Aesoc'h eo din aze goulenn truez evit va bro. Hag ivez evidon !

Gouzout a ran emañ o vont da feukañ tud gant va c'homzoù. Siwazh din-me, digarezit ! met ganet on bet eus ur ouenn dud ha na oa na sentus, na douget d'un doujañs hep muzul. Krediñ a ran eo ret klask, bemdez ; hag adklask ennomp, gant ur spered ouesk, leal ha digor, hor gwirionez. Ar wirionez-se gant hor mankoù diniver, pa lavaromp, ni kristenien Europa, ar Bater. Ha pa sellomp ouzh stad truezus ar bed. An drougiezh veur, 'vel ur reverzhi, oc'h aloubiñ ac'hanomp... An den enep an den. Kasoni. Brezel. Tan. Ludu. Ar marv !

C'hwezh dous an ezañs
Hol lakae da zisoñjal...
N'en devoa brezel an dud
En diavaez, paouezet morse.

Daoust ha ne vevomp ket bemdez, sioul ha kuñv, hon trevell boas ? Hag e-keit m'emañ an div drederenn eus engroez ar bed o vervel gant an naon, ne vefemp-ni na krignet, na spontet, na merzheriet, betek an dic'hoanag ?

56

Nann ! Ni Bretoned ne zevimp ket hon ilizoù ! Ul lodenn eo deomp eus Ene sakr hor bro. Un deiz (piv 'oar ?) e c'hello ar ghetto ploukistan kas enno ar justis adarre ! Evit yezh Vreizh. Un deiz ec'h adsavo piled diskaret ar c'hernevog kristen... Hag e lugerno adarre Keltia... Ar misi !...

Nann ! N'eo ket ni a zevo hon Ene

6/12/79

S.O.

- Al Liamm niv. 195, pp. 262-263 : Yann Talbot, " Devet hon eus an ilizoù ", kempennet diwar F. Chagneau ;
- Al Liamm niv. 196, pp. 399-400, lizher Maodez Glanndour.

57

EMBANNADURIOU AL LIAMM

Roll ar romantoù, danevelloù, eñvorennoù :

Alanig an tri roue, gant Roparz Hemon	14 L
Aquis Submersus, gant Storm (Tr. Per Denez)	6 L
Geotenn ar Werc'hez, gant Jakez Riou	13 L
An Irin glas, gant Ronan Huon	20 L
Ho kervel a rin en noz, gant Roparz Hemon	25 L
An dour en-dro d'an Inizi, gant Youenn Drezen	11 L
Sizhun ar breur Arturo, gant Youenn Drezen	11 L
Tangi Kerviler, gant Roparz Hemon	15 L
War ribl an hent, gant Roparz Hemon	28 L
Tristan hag Izold, gant Langleiz (skeudennet)	35 L
Skol Louarn Veig Trebern, gant Youenn Drezen	
- Levrenn I	30 L
- Levrenn II	30 L
- Levrenn III	30 L
Ur galedenn a zen, gant Yeun ar Gow	9 L
Ar follez yaouank, gant Meavenn	9 L
Nenn Jani, gant Roparz Hemon	30 L
Romant ar Roue Arzhur, gant Langleiz	36 L
An deiz-ha-bloaz, gant Youenn Olier	28 L
Mari Vorgan, gant Roparz Hemon	23 L
Ti Vatriona, gant Soljenitzyn (tr. E. ar Barzhig)	14 L
Emgann Kergidu, gant Lan Inizan	
- Levrenn I	36 L
- Levrenn II	36 L
Itron Varia Garmez, gant Youenn Drezen	58 L
Pinvidigezh ar paour, gant Goulven Jacq	24 L
Diougan Gwenc'hlan, gant Per Denez	28 L
Ar Chalboter Huñvreoù, gant Tudual Huon	28 L
Glas evel daoulagad c'hlas ha ne oant ket ma re, gant Per Denez	27 L
Va zammig buhez, gant Jarl Priel	25 L
E skeud Tour bras Sant-Jermen, gant Yeun ar Gow	45 L

AVELIOÙ-TRO

(Genver-C'hwevrer 1979)

1 a viz Genver. - Ur c'hanton dezho o deus bremañ Jurasiz Bro-Suis goude stourm e-pad 30 bloavezh evit bezañ distaget eus kanton Bern. Chom a ra c'hoazh kreisteiz o bro e krabanoù alamanegerien Bern. An hanternoz avat a zo ken emren hag ur c'hanton suis all.

4 a viz Genver. - Gant an F.L.B. eo bet lakaet da darzhañ burev kelaouiñ an aerlu e Kemper.

8 a viz Genver. - Un dell-gastiz a 1 000 lur en deus bet Fañch ar Floc'h, ul labourer-douar eus Landrevarzeg, en doa skrivet da Brezidant ar Republik ul lizher o sevel a-enep d'an adlodennañ en e zouarou. Ar gelaouenn " Combat-Nature " he doa embannet e lizher a zo bet kondaonet d'un dell-gastiz a 2 000 lur.

9 a viz Genver. - « Nann d'ar sponterezh, » a ziskleir Kuzul Jeneral Euskadi. « Fellout a ra d'ar sponterien kemer ar galloud dre un taol-reveulzi. » « Hor pobl a fell dezhi kaout an demokratelezh hag an emrenerezh »

10 a viz Genver. - Embann a ra Rektor Roazhon da heul pennadoù moulet e-barzh " Ouest-France ", eno « traoù diwir pe diglok », ez eus bet roet 720 eurvezh evit kelenn brezhoneg ar bloaz-mañ hag ez eo dre-se « sevenet an holl ezhommoù ».

12 a viz Genver. - Roet ez eus bet lañs d'un abadenn vrezhonek nevez er skingomz, " Pebr ha Holen " hec'h anv. Skingaset e vo bep gwener e-pad tri c'hard eur.

13 a viz Genver. - Drouklazhet eo bet Jose Manuel Pagoaga lesanvet Peixoto e Donibane Lohitzun. Unan eus pennoù an ETA e oa, ha repueta abaoe ur pennad e Norzeuskadi.

14 a viz Genver. - Peulioù linennoù tredan kas-uhel a zo bet lakaet da darzhañ e-kichen Brenniliz, e-lec'h m'emañ diazezet ar greizenn nukleel nemeti a zo e Breizh.

17 a viz Genver. - Da geñver beaj Giscard da Roumania e skriv daou c'hant a sperederien c'hall dezhañ evit ma taolfe e evezh war « stad vantrus » minorelezh hungarek Roumania.

18 a viz Genver. - Klemm a ra an aotrou Pierre-Charles Krieg, depute R.P.R. eus Pariz, a-enep da gampagn S.A.V. evit ar chekennoù brezhonek. Goulenn a ra digant ar gouarnamant ober un dra bennak evit mirout ouzh seurt doareoù.

26 a viz Genver. - E Naoned ez eus bet embannet gant ar c'hazetennoù " Presse-Océan " ha " L'Eclair " ur bajenn vruderezh evit kreizenn nukleel ar Pirc'hirin dindan an talbenn « E.D.F. vous informe ».

27 a viz Genver. - Adkemeret eo bet o aotre-bleniañ digant tri faotr o doa kaset en-dro o levrioùigoù-soudarded evit diskouez e oant a-enep da dachenn-embregata al Larzac. Setu ar c'hastiz a zo bet divizet reiñ dezho gant Lezvarn Digne (Okitania), hervez lezenn an 11 a viz Gouere 1975 a vez graet « Principe de la peine substitutive » anezhi. Ne ouzer ket, ma n'o defe ket bet a aotre-bleniañ, peseurt pinijenn a c'hellfe roet dezho.

59

28 a viz Genver. - Gant an tan eo bet distrujet kannati Bro-C'hall e Béal Feirste.

29 a viz Genver. - Kinnig a ra Marcel Boiteux prezidant E.D.F. e vefe keroc'h an tredan e Breizh eget e Bro-C'hall peogwir e teu an tredan deomp eus ar Reter, ha « ne vez ket gounezet tredan a-walc'h e Breizh ».

30 a viz Genver. - Trouz a zo bet e emvod Kuzul Armerzhel ha Sokial Breizh e Roazhon pa oa ar gomz war « ar Chart Sevenadurel goude ur bloavezh ». Klasket o deus un nebeut tud yaouank displegañ skritelloù a-du gant ar brezhoneg met skrapet int bet diganto gant ur poliser (s.o. Al Liamm niv. 195, p. 330).

31 a viz Genver. - Harzet ez eus bet 24 Euskarad repuget er Stad C'hall. « N'eus abeg ebet evit reiñ bod da sitoianed Bro-Spagn, » en deus diskleriet ar gouarnamant gall. « Bremañ eo ar Stad spagnat ur gwir demokratelezh. Ne vo ket asantet ken reiñ bod da stourmerien an ETA. »

2 a viz C'hwevrer. - Kement-se a lak 2 500 den da vanifestiñ e Baiona, Norzeuskadi ha Kuzul Uhel ar Repuidi en A.B.U. da sevel klemm.

3 a viz C'hwevrer. - Echu et eo prosez emrenerien dTahiti barnet evit bezañ lazhet rener an Ti Air-Liquide en enezenn, ha bezañ lakaet da darzhañ ti-post Papeete e miz Eost 1977. Daou anezho a zo bet kastizet da 20 bloavezh galeoù. Tra souezhus : daoust « m'emañ Tahiti e Bro-C'hall » o deus gellet an damallidi kaozeal polinezieg a-hed o frosez.

5 a viz C'hwevrer. - Peogwir o doa harzet un tren e gar Kemperle ez eus bet roet P.V.-où d'un nebeut tud, an depute Loeiz ar Peñseg en o zouez.

7 a viz C'hwevrer. - War-lerc'h an UDB, ar PS, ar CFDT, hag all, e ya ar CELIB e fulor abalamour da gomzoù Marcel Boiteux, prezidant E.D.F. « N'eo ket evel-se e vo lakaet greantiourien da zont e Breizh ».

10 a viz C'hwevrer. - Mont a ra « hor » C'hentañ ministr karet, an aotrou Barre, da Vro-Gebek. Eno eo bet degemeret gant manifesterien o huchal : « Vive la Bretagne libre ».

11 a viz C'hwevrer. - Lakaet eo bet da darzhañ en Aiacciu ur skol-vugaligoù e-lec'h ma veze desket korsikeg.

14 a viz C'hwevrer. - Adkregiñ a ra P. J. Helias gant e bennadoù sizhuniek e-barzh " Ouest-France " « Etre deh ha warhoaz ». Dre ma oa galvet e pep korn ar bed evit komz eus e levr brudet " le Cheval d'Orgueil " en doa ranket dilezel " Ouest-France " e-pad daou vloaz.

18 a viz C'hwevrer. - E parrezioù Milhau, Creyssels ha La Covertoirada ez eus bet aozet ur referendom evit goulenn ouzh an dud o soñj diwar-benn tachenn-embregata al Larzac. An niver-muiañ anezho o deus lavaret ne felle ket dezho e vefe brasaet ar c'hamp.

60

20 a viz C'hwevrer. - Echu eo prosez a boserien Béal Feirste o doa lazhet 19 den, ur bugel eizh vloaz en o zouez. Kondaonet eo bet an 11 den a oa izili gwechall eus an " Ulster Volunteer Force ", da 2 098 bloavezh toull-bac'h, pezh a ra 190 vloavezh evit pep hini anezho.

22 a viz C'hwevrer. - Dont a ra G. Marchais d'ober tro Vreizh. E-touez frazennoù all e tiskleir : « Ezhomm ho peus eus kreizennoù nukleel ha dav 'vo deoc'h o c'hemer ».

24 a viz C'hwevrer. - Manifestadeg an U.D.B. en Oriant. Mil den a oa deut evit goulenn « labour e Breizh ».

26 a viz C'hwevrer. - Embann a ra Parlamant Europa e Londrez ul levrig a lavar ne vez ket douget muioc'h a vri da Wirioù Mab-den e Bro-C'hall eget e Bro-Spagn en amzer Franco, pe eget en Unvaniezh Soviedel, pe c'hoazh e Bro-Chile.

Tamall a ra d'ar Stad C'hall bezañ lakaet en toull-bac'h Yann Fouere hag un nebeut Bretoned all er bloavezh 1975. Raktal e tiskleir ar gouarnamant gall eo dismegañsus seurt doareoù-ober ha goulenn a ra e vefe paouzet gant skignañ al levrig. Graet e vez « frankiz war an embann » eus seurt traoù.

27 a viz C'hwevrer. - Trouz a zo bet e Parlamant Italia abalamour da skingasadennoù gallek « Radio-4000 » ha a Radio-Canal-Blanc » a vez klevet e Suis, e Savoia, hag e a Proviñs italianek » traonienn Aoste, hag a zo, « anat eo », graet gant « disrannourien a glask terriñ Bro-Italia ».

28 a viz C'hwevrer. - E-barzh levr-roll 1979 ar P.T.T. ez eus tu da gavout e Pariz niverenn-bellgomz Kannati Bro-Gebek (" Ambassade du Québec "). Betek bremañ koulskoude ne oa nemet " Ti ar C'hebek " o vezañ ma n'emañ ket c'hoazh dizalc'h ar vro-hont.

NOTENNOÙ

Hor mignoned

Nolwenn LOUARN ha Rens GASTINGER a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o mab Kilian, e Strasbourg d'an 11 a viz Kerzu.

Lizig GOAOG hag Herve HUON a zo laouen o kemenn deoc'h ez int bet euredet e Sant Filiber (Bro-Wened) d'an 29 a viz Kerzu.

Frañsoaz ar Gov ha Malo LOUARN, Gwennin, Viviana, Arzhur, a zo bet laouen o kemenn deoc'h ganedigezh Essyllt, d'ar 16 a viz Genver, e Roazhon.

Hor gourc'hemennoù d'an holl.

Kañv

Gant glac'har hon eus gouezet e oa bet lazhet en ur gwallzarvoud Gwenola ABIVEN d'ar 25 a viz Kerzu. Bez' e oa gwreg hor mignon Yvon Abiven ha merc'h Ernest ar Barzhig, aet da anaon daou vloaz 'zo.

Da Yvon Abiven ha d'ar familh a-bezh e kasomp hor gourc'hemennoù a gengañv.

Profoù

Miz KERZU.

- Leopold Getin, 10 lur ; Yann Bouessel du Bourg, 120 ; Job ar C'horr, 30 ; Ronan Tremel, 15 ; Roparz Carré, 50 ; Gilberz Kerouanton, 30 ; Dan Kernalegen, 10 ; Jili Bernard, 50 ; F. Roque, 50 ; A. Souffes-Despré, 50 ; Xavier ar C'hoseg, 30 ; It. C. Paulus, 20 ; Yann ar Gall, 50 ; Roje Moride, 39,30 ; It. L. Morvezen, 30 ; A. Billant, 50 ; Goulc'hen Kervella, 5.
- War un dro, 639,30 lur.

Miz GENVER 1980.

- Ronan an Henañ, 10 lur ; Roje Bizien, 20 ; Mikael Kerotret, 30 ; Rouan ar Glev, 25 ; Mikael ar Gwilhou, 450 ; Yann Bouessel du Bourg, 120 ; Yann Vari Renault, 100 ; Dr H. ar Floc'h, 5 ; Andrev Kerhoas, 5 ; It. A. Gourmelen, evit trugarekaat SKOL OBER hag an holl re evel tud AL LIAMM hag a ra un dra bennak evit ar brezhoneg, 300 lur ; Dr K. Delalande, 55 ; J. M. Tilly, 25 ; Marc'harid Gourlaouen, 10 ; Dr P. ar Gall, 50 ; Y. E. Pouliken, 50 ; It. Mari Maze, 10 ; M. an Hir, 15 ; J. G. Konan, 42 ; Perig Herbert, 35 ; Alan Gachet, evit azginivelezh ar yezhoù keltiek hag o embannadur, 15 ; G. ar Floc'h, 5 ; G. Merel, 10 ; J. J. Tilly, 25 ; Loeiz Donal, 5 ; Yann Oulc'hen, 15 ; Emil Bleuzen, 5 ; Erwan Goarin, 45 ; Per Gwilhou, 20 ; Dr Briag Cherel, 100 ; Dr A. Maury, 5 ; Alberz Herri, 95 ; Jakez Konan, 10 ; Gwilhom Dubourg, 45 ; Mark Drean, 45 ; It. V. de Bellaing, 45 ; J. Rohou, 45 ; G. Kernevez, 15 ; Gerard Bailloud, 50 ; Frañsez Prigent, 25 ; Yann Chapel, 45 ; Glaoda Millour, 25 ; Janed Korr, 10 ; F. ar C'haloneg, 5 ; F. Kadoret, 5 ; A. Coquio, 45 ; Frañsez Kervella, Lannuon, 435 ; Benead, 45 ; Herri al Lann, 145 ; Annig, Keffeleant, 50.
- War un dro, 2 792 lur.

Bet hon eus evit 1979 12 986,30 lur a brofoù. Ar sifrenn-se a zo un tamm mat

uheloc'h eget er bloavezhioù a-raok (10 302 lur e 1978 7 652 lur e 1977).
Trugarekaat a reomp hor skoazellerien a-greiz kalon ha goulenn a reomp diganto
bezañ digarezet pa ne c'hellomp ket kas pep a c'her dezho evit o zrugarekaat. An
amzer a ra diouer deomp siwazh.

Kontoù 1979

DISPIGNOÙ	lurioù
Moulañ	
Niv. 192	10137,62
Niv. 193	12313,64
Niv. 194	11415,43
Niv. 195	11390,36
Niv. 196	11105,63
Niv. 197	11182,50
	67 545,18
Bandennoù	554,29
Pegsun	1 299,95
Mizoù-post ha burev	3 790,36
War un dro	73 189,78
ENKEFIADURIOÙ	lurioù
Koumanantoù	44337,63
Niverennoù gwerzhet	3642,80
Chomlec'hioù kemmet	48,00
Profoù	12986,30
Profoù Kuzul ar Brezhoneg 2 500 1299,95 (pegsun)	3799,95
Gwerzh ar pegsun	880,67
Kampi	432,52
T.V.A. restaolet	4478,83
War un dro	70606,70
63	
STAD AR C'HEF	lurioù
Koll 1979	2 583,08
Koll ar bloavezhioù all	11 484,39
An toull er c'hef	14 067,47

Un nebeut evezhiadennoù :

Priz ar moulañ a zo uhel, met chomet eo evelato hep kemmañ e-pad ar bloaz, koulz
lavaret.

- Sifrenn ar c'houmanantoù a zo aet war gresk ; kalz koumanantoù studierien,
soudarded ha tud dilabour a zo avat, ha gant se n'eo ket re uhel ar sifrenn-se.

- Notomp ivez ne werzhomp ket kalz a niverennoù kozh, nag a begsunoù, ha n'eus
ket kalz lennerien o kas ur skoed deomp pa gemm o chomlec'h, ha koulskoude ez
eus kalz anezho o tilojañ. A-hend-all, profet eo bet d'Al Liamm a-walc'h a
arc'hant da baeañ un niverenn vrav.

- Koll ar bloaz (2 583,09 lur) n'eo ket re uhel. Krediñ a reomp zoken n'hor bije
ket bet a goll m'hor bije gallet embann hon niverenn 197 a-raok dibenn ar
bloaz : o vezañ ma 'z eo deut er-maez gant dale, n'hon eus ket degemeret kalz
skodennoù e miz Kerzu.

Tra m'emaomp o komz eus kudenn an arc'hant, ret eo lavarout e vefe ur gounid mat
evit ar gelaouenn ma kasfe an holl lennerien o skodenn kerkent ha ma vez

goulennet diganto.

Niverennoù kozh " Al Liamm "

Prenañi a c'heller an niverennoù-mañ : 29, 69, 70, 71, 72, 74, 75, 76, 77, 79, 80, 83, 87, 91, 92, 93, 94, 95, 103 betek 197.

Priz an niverennoù a zo : 10 lur pep hini (nemet an niverennoù 116 ha 151 hag a goust 12 lur pep hini, an niverenn 120 diwar-benn Iwerzhon, an niverenn doubl 166-167, an niverenn 190 diwar-benn Roparz Hemon hag a goust 18 lur pep hini).

Tu a zo da brenañ bloavezhioù klok, 55 lur pep hini, eus 1965 betek 1979 (niverennoù 108 betek 197).

An niverennoù a vez kaset kuit a vizoù-post. 10 % a zistaol a vez graet pa brener 50 skouerenn pe ouzhpenn. Ar goulennoù a zo d'ober digant Per ar Bihan.

64

Lizhiri

Digant R. A. H., Lokarn :

« Ar vezh ganin-me da vezañ gortozet ken pell all a-raok adkoumanantiñ d'ho kelc'hgelaouenn, ken stank ha ken pinvidik an danvez a gaver enni, ha ne c'hellfen ket tremen hepti.

Digant H. A. B., Gwipavaz :

« Plijadur 'zo o lenn Al Liamm bep gwech. Kontadennoù Fañch an Uhel o deus dedennet kalz ac'hanon. »

Digant C. M., Clamart :

« Souezhet on o resev ho kelaouenn en ur mod ken dizingal ha me o paeañ va c'houmanant en un doare resis-tre.

Anaout a ran an trubuilh a zo evit embann ur gelaouenn holl-vrezhonek, gant enebiezh ur gouarnamant estren a glask abaoe bepred diskar hor yezh vroadel.

Met, n'eus forzh, ar goumananterien gozh evel don o deus paeet reizh o c'houmanantoù hag e kentel o deus ar gwir ma vo graet war o zro en un doare spletusoc'h.

O c'hortoz e vo taolet muioc'h a evezh evit embann e koulz ar gelaouenn ez on memestra a-du ganeoc'h. »

Digant J.A.L., Old Caulsdon, Bro-Saoz :

« Un tamm brezhoneg desket el levrioù 'zo ganin, met n'em eus ket prenet ur geriadur brezhoneg c'hoazh. Emaon o teskiñ va-un gant " Le breton sans peine " (Assimil). »

Digant J. B., Gwengamp :

« Va chekenn adkoumanant am eus graet e brezhoneg, pezh a raio diaesterioù deoc'h marteze evit enkefiañ anezhi, peogwir renerien ar " C'h-Crédit Agricole " a zo tud dizesk war ar brezhoneg. N'em eus ket gallet kemmañ a di-bank c'hoazh. Bez' ez eus daou anezho a asant ober gant chekennoù brezhonek.»

Digant J.H., Kaodan :

« Me 'zo chomet pell a-raok reiñ eus va c'heloù. Me 'zo kouezhet klañv. Amañ n'on ket sikouret gant va c'hamaladed hag a zo diaes da zerc'hel. 'M eus ezhomm da vezañ kalonekaet ha me a chom gant va soñjoù. Ur blijadur eo evidon lenn brezhoneg ha me ' lavar deoc'h ez on a-du evit adkoumanantiñ. »

Digant R. C., Lesigny

« Setu amañ va chekenn-adkoumanant. Un deskard on (ha me 55 vloaz), met pouezus eo evidon lenn bemdez en hor yezh, hag adkavout spered hor bro. »

65

Digant M. K :

« Chalet on o welout n'eo ket deut c'hoazh Al Liamm er-maez. Perak kemend-all ? Kavout a ran hir an amzer, o c'hortoz bemdez, ha netra ne zeu daoust maz eo boulc'het mat ar bloaz nevez. Fiziañs am eus, n'eus forzh penaos, ne chomo ket va boest-lizhiri goull e-pad pell c'hoazh. Evit ar mare emañ o lenn niverennoù kozh Al Liamm bet ganet kalz diouto, em raok. Un tregont bennak am eus bet digant va c'helenner brezhoneg hag e lennan anezho gant plijadur, o tizoleiñ dizehan e pep amzer vak, ur bed a gelennadurezh evit ar brezhon maz on. ... Laouen e vefen o kaout Al Liamm bep miz dre lakaat ar priz. Re hir e vefe va lizher o kanañ meuleudi war an holl bennadoù mat am eus lennet... »

Digant M. D. :

« Daou vloaz zo eo deut din, n'ouzon dare perak, ar c'hoant da zeskiñ ma yezh. War an hent-se on bet harpet mat gant ho kelaouenn, a oa deut da vezañ unan al liammoù pouezusañ am boa gant Breizh. Ur gaou bras e oa skrivañ deoc'h n'em boa bet tamm plijadur ebet gant al liamm-se : dre ma oa skrivet e brezhoneg e kaven bourrus ho kelaouenn.

Gwir eo koulskoude e kaven dister he danvez, pe gentoc'h ne gaven ket e-barzh traoù test eus ma buhez hag eus ma huñvreoù. « En-dro d'am ugent vloaz », « En ur dreiñ follennoù ma eñvor », « Roparz Hemon hag arz ar c'hoariva », « E koun Roparz Hemon », « En eñvor da Ernest ar Barzhig » n'entane ket ac'hanon : n'am boa ket bevet an amzerioù-se, nag anavezet an dud-se. Bourrus am boa kavet koulskoude, lenn « Testamant langleiz », o vezañ m'am boa kejet meur a wech gant perc'henn Kohanno, anavezet mat e Surzhur. Neuze e komprenan mat-tre e tedennfe ar pennadoù-se an dud koshoc'h egedon, a adkav enno ur bed a anavezont... Doare ho kelaouenn a gavan ivez tristik a-walc'h, nebeut-tre a skeudennoù e-barzh, netra nemet an testennoù : ur gelaouenn vanac'hel. Bep tro ma tigoran anezhi, e krenan gant aon rak kavout enni kemennadenn marv ar brezhoneg. Daoust hag e koustfe ken ker all silañ e-barzh un tammig muioc'h a luc'hskeudennoù hag a dresadennoù ? »

RESPONT : N'eus kudenn ebet, kalz keroc'h e vefe lakaat muioc'h a luc'hskeudennoù e-barzh ar gelaouenn hag a vev dija a-drugarez da brofoù he lennerien vrokus.

Levrioù Al Liamm

En tu-hont da varzhonegoù Per Diolier **Ar veaj-se, ur wech e oa** ha da romant-polis Kerwerc'hez **En ar rambreal**, emañ dindan ar wask oberenn Goulc'han Kervella **Ar Chase**. An tri levr-se a c'hell bezañ rakprenet betek ar c'hentañ a vis Mae. Priz " Ar Chase " a zo : 29 lur franko e-lec'h 34 lur diwezhatoc'h war baper kaer ha 23 lur franko e-lec'h 28 lur war baper all. Kasit ho chekenn da J. Queillé, 47 rue Notre-Dame, 22200 Gwengamp - c.c.p. 1136 82 Rennes.

66

Geriadur Vallée

Geriadur bras galleg-brezhoneg Frañsez Vallée a zo da rakprenañ diwar-vremañ. Setu amañ ar prizioù : boutin, 120 lur ; keinet, 160 lur ; kein ler, 290 lur. Skrivañ da Kevredigezh Vreizhat ar Sevenadurezh, 22, Quai Duguay-Trouin, 35000 Roazhon.

Dielloù Framm Keltiek Breizh

Ar c'haieroù II ha III eus " Dielloù Framm Keltiek Breizh " a c'heller goulenn digant Per Roy, 29, rue Joseph Turmel, 35000 Roazhon. Ar c'haier II ez eus ennañ 56 pajenn hag ar c'haier III, 72 pajenn. Ar pennadoù a gaver e-barzh a zo e galleg. Tu a zo d'o c'haout o-daou evit 12 lur franko digant Per Roy. Ar gounid a vo evit Al Liamm.

Kazetennoù da eskemm

Hor mignon R. Delaporte a glask an niverennoù-mañ eus Dihunamb :
Niv. 80 (C'hwevrer 1912) ; 166 (Ebrel 1925) ; 169 (Gouere 1925) ; 170 (Eost 1925) ; 171 (Gwengolo 1925) ; 172 (Here 1925) ; 182 (Eost 1926) ; 183 (Gwengolo 1926) ; 186 (Kerzu 1926) ; 212 (C'hwevrer 1929).

Setu amañ roll an niverennoù en deus da zioueriñ :
Levr. 1 : (1905-1906-1907) Niv. 1-30 : klok.
- 2 : (1908-1909) Niv. 31-54 : klok.
- 3 : (1910-1911) Niv. 55-78 : klok.
- 9 : (1929) Niv. 217.
- 10 : (1930) klok, nemet niv. 227 ; hag ouzhpenn niv. 225, 234.
(1931) klok, hag ur bloavezhad all klok nemet niv. 240 ; hag ouzhpenn niv. 237, 238, 244.
- 11 : (1932) klok hag ouzhpenn 247 (2), 249, 250, 251, 253, 258.
(1933) klok hag ouzhpenn 259, 260, 264 (2), 268, 269, 270.
(1934) klok, nemet golo an niv. 273 ; hag ouzhpenn 272, 274, 275, 276, 277, 278, 279, 282.
(1935) klok hag ouzhpenn 284.
- 13 : (1936) Niv. 295, 298, 307.
(1937) klok hag ouzhpenn : 314, 315, 316, 318.
- 14 : (1938) klok hag ouzhpenn : 320, 321, 322, 326, 328, 330. (1939) klok hag ouzhpenn : 331, 332, 333, 335, 337, 338, 339 (2), 340 (2), 41, 342 (2).
- 15 : (1940) Niv. 343, 344, 345, 346, 347, 349, 350, 351, 352 ; hag ouzhpenn 344, 346, 347, 349 (13 exemplaires).
(1941) Niv. 359, 360, 361, 362, 363, 364, 365, 366.
- 16 : (1942) klok (367-378).
(1943) Niv. 379 (Genv., C'hw., Meurzh), 380 (Imb.), 381 (Mae), 382 (Mehev.), 383 (Gour.), 384 (Eost). (1944) Niv. 392 (Ebrel).

Klask a ra ivez niverennoù eus Feiz ha Breiz : Niv. Kerzu 1925 hag ar bloavezhioù 1926, 1927, 1928, 1929 ha 1930. Ar bloavezh 1924 hag ar re a-raok a blijfe dezhañ kaout ivez ma kaver anezho.
Skrivañ da R. Delaporte, 33 straed an Ti-Kêr, 29119 Ar C'hastell- Nevez. Pellg. 81 70 34.

67

Ar Geriadur Istorel

Krog eo " Preder" gant adembannadur **Geriadur Istorel** Roparz Hemon azalek an niverenn gentañ. Moulet eo ar wech-mañ evel ar c'haieroù diwezhañ embannet. Deut

eo er-maez an teir niverenn gentañ, eus al lizherenn A betek ar ger *Bagon*. Al lizherenn A a-bezh a oa bet embannet e stumm ul levr gant " Al Liamm " e 1958. - Editions Preder, Penn Menez, Plomelin, 29000 Kemper. 6 rann : 120 lur ; c.c.p. Preder 16 093 13 J Paris.

Skridoù a bep seurt

- Emañ " Skol " o paouez adembann levr-kelenn Armañs ar C'halvez **Herve ha Nora**. Ar wech-mañ avat al levr a zo moulet ha skeudennet gant Yann-Vikael Lichou. Adwelet ha reizhet eo bet gant Yann Desbordes ha Yann-Erwan Abalan. Ugent kentel a zo ennañ, ur yezhadur o tennañ d'ar c'hentelioù a zo el levr hag ur c'heriaoueg. Goulenn digant Yola Chariou, 16, rue Hector Berlioz, 22000 Sant-Brieg.

- **Imbourc'h** 118. En niverenn-mañ ez eus div varzhoneg gant Añjela Duval, un testeni gant P. G., ar prosez war vuhez ha burzhudoù Sant Erwan gant Klerg ha notennoù a bep seurt. War an niverenn 119 e c'heller lenn ur pennad gant Añjela Duval, kendalc'h buhez an Emsav gant Youenn Olier : ar gelaouenn " Buhez Breiz ", bet savet e 1919 ; Geriadur ar c'henwerzh etrevroadel gant J. Pennec ha, gant Klerg, burutellerezh " Levr al labourer " skoueriekaet gant G. Pennaod.

- War niverenn 120 **Hor Yezh** e c'heller lenn ur pennad war ar sonerezh gant ar sonaozour Perig Herbert, ur pennad war an Apotikerezh, Yezh ar mor gant Gwenole ar Menn, Elfennoniezh (ur rollad gerioù) gant Gw. Berthou Kerverziou.

- Evel bep bloaz en deus Yann Desbordes embannet ur strobard anvet **Skol Vrezhonek** ennañ skridoù bet savet gant e skolidi eus Skolaj Sant-Frañsez Lesneven, skeudennet gant Yann-Vikael.

- **Round Pagan** a zo ul levrig ennañ 17 sonenn bet dastumet er Vro-Bagan. Kanaouennoù da zañsal an Dañs Round ez int. Da heul ar brezhoneg e kaver un droidigezh e galleg. Embannet eo bet gant "Pouloud" (alias Arz Breizhek). B.P. 1305 Rennes Villejean, 35000 Rennes Cedex.

68

- Gant **Brud Nevez** ez eo bet embannet er bloaz-mañ, dindan stumm tri c'haier skriverezet sketchoù Maria Prat bet c'hoarlet da geñver Beilhadegoù Treger. Adembannet eo bet, dindan stumm kaerigoù moulet, un nebeut kontadennoù gant Ernest ar Barzhig, " Kalonoù Tregeriat " (30 pajean) ha " Kaozioù Tintin Mari " (38 pajenn). Advoulet eo bet ivez " Gwad ar Garantez " gant Alan an Diouzet ha " Mevel ar Gosker " gant Pierre-Jakez Helias. Erfin ul levrig kanaouennoù a zo bet embannet er memes stumm gant ur minikasedig da heul.

- War niverenn 65 **Skol Vreizh**, e galleg, e kaver ur roll anvioù-familh gant o ster, bet savet gant Alan Chauvel ; ur pennad war al loaioù-karantez e Kembre, skeudennaouet ; ar binvioù sonerezh breizhek ha keltiek er skolioù, hag ar marc'had du e Breizh e-pad ar brezel diwezhañ.

- War **La Revue du Cinéma** niverenn 345 e c'heller lenn ur pennad gant Philippe Durand : « Petite Histoire du cinéma breton ».

Stag eo ar sinema breizhat ouzh ar stourmoù pemdeziek (Joint français, lanv-du hag all...). Graet eo bet war e dro gant tud savet e Breizh peurluviañ hag o vevañ er vro. Ur seurt sinema broadel eo, dizurzh-tre avat hervez Ph. Durand.

Kregiñ a ra etre 1928 ha 1948 gant « Chanson d'Armor » e brezhoneg, hervez, daoust d'an talbenn.

Setu amañ mareadoù ar sinema breizhat dre vras :
Bloavezhioù 1950 : Brittia-Film (Kaouissin), « Salaun ar Foll » ha... « Botrel »

(siwazh !) ;

Bloavezhioù 1970 : UPAB Vautier, N. ha F. Le Garrec, « Al lanv du » ;
1972-74 : « Torr e benn ». Nevezintioù filmet e Breizh. Stourmoù a bep seurt er vro ;
1975 : La Cinémathèque bretonne. Cassart (« Ti pri », a gaver kalz a vrezhoneg e-barzh). Displegadurioù e brezhoneg. « Nag ar vazh nag ar vezh ». Ar yezh a zo diaes da gompren meur a wech.

Anat eo ez eo troet ar grouerien er mare-mañ war-zu filmoù-stourm pe bruderezh kentoc'h eget filmoù-diduamant. A-hend-all ar filmoù e brezhoneg a zo rouez. Evel just ma c'houlennomp perak ne vez ket kavet en o zouez ur film evel « Un homme, une femme », da skouer, e roio ar re a ra filmoù breizhat ur bern digarezioù diaes da ziarbenn. An dra-se a garfemp gwelout koulskoude hag ur film savet diwar... « Ar marc'h a ourgouilh », e riskl bras da gouezhañ er folklor hag en doare retro, ne vo ket hennezh !

Pa ne vo ket mui filmoù war ar yezh, ar boazioù kozh pe ar stourmoù hepken e vo erru marteze ar sinema breizhat en e oad-gour.

69

Ober vad

Ne vezer ket boaz e-barzh Al Liamm nag e-barzh Kuzul ar Brezhoneg da bismigañ, da dagañ na da saotrañ labour ar re all hag ra war-dro ar brezhoneg, daoust d'ar mennozioù disheñvel a c'hell kaout an « emsaverien ».

Un nebeut tud avat n'o deus ket an emzalc'h-se. Embann a reont bemdez, e pep lec'h, e stourmont da zifenn ar brezhoneg, met tremen a reont un darn vras eus o amzer o klask distrujañ ha disteraat labour ar re all. Kerkent ha ma vez graet un dra bennak gant tud all, embannet ul levr, skrivet ur pennad, setu ar paour-kaezh tud-se o kemer o fluenn evit skrivañ ul lizher tagnous ha leun a falstamalloù. Mantrus eo o gwelout o foraniñ o amzer hag o nerzh e-giz-se pa 'z eus kement d'ober evit saveteiñ hor yezh. Skouerioù diniver eus an emzalc'h pilpous ha fallakr-se a c'hellfemp reiñ met n'hon eus ket amzer da goll gant se. Ar re o dije c'hoant da gavout ur skouer eus an doareoù-se n'o devo nemet sellout ouzh niverenn 30 ar gelc'hgelaouenn **Ar Falz** (5 Here-Kerzu 1979). Evit kelaouiñ he lennerien he deus embannet ul lizher bet kaset gant unan eus an ebestel-se d'ar gelaouenn c'hall **Pourquoi**.

Setu amañ, lakaet e brezhoneg, un arroudenn eus al lizher a oa bet kaset da Pourquoi : « ... an doare-skrivañ re vrudet anvet "zh" (Breizh, brezhoneg e-lec'h Breiz, brezoneg) hag a zo bet lakaet da dalvezout dre ret gant an nazied da vare an dalc'hidigezh (!) » hag an notennig-mañ a oa e dibenn al lizher : « Al Liamm a zo ur gelc'hgelaouenn lennegel e brezhoneg a live uhel met skrivet ez eus bet ganti en he niverenn 20 pajenn 31 : « Eus 1940 da 1944 e tremenas un avel a frankiz war Vreizh, ». Ur program kaer ! »

An digarez da lakaat an notennig-se, gant ur frazennig didroc'het, ne oa tamm ebet ur studiadenenn war ar gelaouenn Al Liamm. Penaos en devoa kavet ar c'hwil-se an tu da silañ e vinim ? Setu : ur pennad diwar-benn ar bandennoù treset e brezhoneg e oa... hag ar vandenn dreset kentañ e brezhoneg a oa " Fri Korloko " ha... " Fri Korloko " a oa bet embannet gant Embannadurioù Al Liamm ha... h.a. Ur digarez vrav e oa eta evit ober vad !

Lennerien Al Liamm a varno.

B.

Un enklask gant " Skingomz ha Skinwel ",

kevredigezh selaouerien ha pellarvesterien ar c'helaouennoù brezhonek

Pediñ a reomp ar selaouerien ha pellarvesterien hor skingomz ha skinwel, da respont d'ar goulennoù da heul, ha da gas o respontoù da Skingomz ha Skinwel, " An Askol ", Hent ar C'hastell Meur, 22820 Plougoussant.

70

- 1) Ha selaou a rit ar c'hasadennoù pa vez posupl deoc'h ?
- 2) Pere eo ar c'hasadennoù a blij deoc'h ar muiañ ?
- 3) Ha karout a rafec'h kenstrivadegoù gant prizioù ?
- 4) Ha kompren a rit mat ar speakerien v Pehini a blij deoc'h ar muiañ ?
- 5) Peseurt gwellaennoù a garfec'h ?
- 6) Daoust ha rebechoù hoc'h eus d'ober ?

Trugarez en a-raok evit ho kenlabour.

Skoazellit ac'hanomp en ur emezelañ en hor c'hevredigezh. Skodenn : 5 lur ar bloaz hepken, pe a-gevret gant ar c'houmanant d'ar gelaouenn sevenadurel breizhat kaer " Breizh " a embann ur stagadenn e brezhoneg " Dihun " : 55 lur. Teñzorierez : Marylène Capdevert, K.R.P. Roazhon 557 28 W.

Titouroù diwar-benn ur skol vrezhoneg digoust dre lizher, evit prientiñ arnodenn ar vachelouriezh pe evit un abeg all a c'hellomp reiñ.

A. OMNES

Skol-hañv evit deskiñ iwerzhoneg

War ginnig ar C'hevre Keltiek ez eo bet asantet gant *Comharchumann Cois Fharraige*, ur c'hevelerezh diazezet en Indreabhan, Conamara, aozañ ur skol-hañv evit estrenien hag o deus c'hoant da zeskiñ iwerzhoneg ha da wellaat o anaoudegezh eus ar sevenadur iwerzhonat. An Indreabhan a zo e Gouezelva Konnac'ht, 35 km bennak er c'hornog eus Gaillimh (Galway). Spi hon eus er C'hevre Keltiek e vo dedennet meur a hini eus hon izili gant ar mennad-se, met digor e vo ar skol-hañv d'an holl, n'eus forzh a be vro.

Comharchumann Cois Fharraige en deus skiant-prenañ war an dachenn-se, aozet en deus dija skolioù-hañv evit Amerikaned. Kelennerien varrek a zo en e servij ha gouzout a ra e peseurt tiez tro-war-dro e vez tu da lojañ ar berzhidi. Evit an hañv a zeu ez eo divizet dija kaout teir sizhunvezhiad kentelioù ha prezegennoù, o kregiñ d'ar pevar a viz Eost, evit un toullad Amerikaned. Tu a vefe da lakaat re all a-gevret ganto, gant ma ne vefe ket muioc'h eget un hanter dousennad bennak. Ma 'z eo niverus a-walc'h ar re a c'hell kemer perzh en ur skol-hañv a-ratozh, o kregiñ d'ar gwellañ d'an 18 a viz Eost pe a-hend-all d'ar 25, hag o padout pemzektez, e vo graet evel-se. Ar priz evit ar pemzekteiziad - kentelioù, prezegennoù, magadurezh, lojeiz, un droiad d'an Inizi Aran - a vo 100 lur saoz. Se zo marc'had-mat, e gwirionez, met sekretour ar c'hevelerezh a zo a-du-tre gant ar c'hinnig. Estreget div pe deir eurvezhiad a gentelioù iwerzhoneg a vo bemdez, prezegennoù diwar-benn ar Gouezelva hiziv an deiz, stad an iwerzhoneg dre ar vro dre vras, istor Iwerzhon e kement ha ma tiskleir ar sevenadur iwerzhonat, al lennegezh iwerzhonek, hag all. Abadennoù sonerezh ha kan a vo en abardaez gant harp tud eus ar c'horn-bro.

71

Evit bezañ gouest da ragaozañ pep tra e koulz ha gouzout hag-eñ ez eus tud a-walc'h evit ur skol a-ratozh goude hanter-eost e c'houlennomp ouzh ar re o deus c'hoant da gemer perzh : a) reiñ o anv ha chomlec'h an abretañ ar gwellañ da sekretour Skourr Iwerzhon ar C'hevre Keltiek, Cathal O Luain, 33 Br Bancroft, Tamlacht, Co. Atha Cliath ; b) kas dezhañ 25 lur saoz e-giz arc'hant-gouestl ; e) spisaat peseurt deiziad a zere outo ar gwellañ evit kregiñ, da lavarout eo ar

4, pe an 18 pe ar 25 a viz Eost. Kement-se da vezañ graet a-raok an 31 a viz Meurzh 1980. Ar peurrest eus an arc'hant a vo da baeañ a-raok dibenn Mezheven. Kenkas ne vefe ket a-walc'h a dud evit ar prantad dibabet e vo kaset an arc'hant-gouestl en-dro - ar C'hevre Keltiek a zo kret eus an dra-se - met ret eo da bep hini spisaat mat peseurt mare a zere ar gwellañ, pe na zere tamm ebet outañ. E derou miz Ebrel e vo divizet gant ar c'h-Comharchumann da be zeiziad kregiñ hag e vo roet keloù diouzhtu da gement den en devo kaset e ouestlad.

Alan HEUSSAFF,
sekretour-kreiz ar C'hevre.

Normaneg Jerzenez war gasedigoù

Pet a dud a c'hell c'hoazh komz yezh kozh Jerzenez ? Evit doare ne chomfe nemet 10 000 enezennad pe war-dro a vefe gouest d'hen ober, diwar ur boblañs a 70 000 a dud. Unan eus yezhoù minorezel Breizh-Veur eo normaneg Jerzenez. Betek-henn ne oa sonenrolladur ebet anezhañ, met emañ ar stal-levrioù «Lexicon» eus Sant Helier o paouez lakaat e gwerzh kasedig. Gant an Ao. Frank Le Maistre, hag eñ oberour an " Dictionnaire Jersiais-Français ", eo bet renet an traoù, hag ivez gant an Ao. Gordon Le Breton evit pezh a sell ouzh an teknik. Ugent normaneger a-vihanik o deus dibabet evit kas da benn al labour. Petra a gaver war bep kasedig ? Lennadennoù, divizoù, barzhonegoù, kanaouennoù ha kantikoù zoken. Tri bloaz en deus padet al labour. Heuliañ an hent bet boulc'het gant minorelezhioù yezhel all o deus graet an aozerien rak « *ch'est chein tch'est à et' fait partout l'Monde à ch't heu pouor sauver eune masse dé ches vieilles langues dé l'oublyi* » (« an dra-se eo emeur oc'h ober dre ar bed a-bezh evit mirout ouzh ur bern yezhoù kozh da gouezhañ en ankounac'h »). Ul levrig a zo bet aozet a-ratozh evit pep kasedig. War bep hini e kaver ar c'homzoù enrollet ha displegadenoù e normaneg Jerzenez hag e saozneg gant an Ao. Le Maistre ; notennoù e galleg a zo ivez. Pevar lur saoz e koust pep kasedig hag e levrig ; evit ar mizoù-kas e ranker lakaat 0.16 lur saoz ouzhpenn evit broioù Breizh-Veur ha 0.55 evit ar broioù all. Chomlec'h : Lexicon Book Co.Ltd., 72 King Street, St. Helier - Jersey.

Ur gelaouennig nevez, " Les Chroniques du Don Balleine " he zalbenn, a zo bet savet nevez 'zo ivez. Embannet eo e normaneg Jerzenez penn-da-benn. Div wech ar bloaz e teuo er-maez : da vare Gouel-Yann ha da vare Nedeleg. 1.50 lur saoz e koust ar c'houmanant bloaz. Evit titouroù e c'heller skrivañ d'ar penn-skrivagner : Ao. Frank Le Maistre, La Brecquette, L'Etacq - St. Ouën - Jersey - Channel Islands.

72

Ur bloazlevr sevenadurel o paouez dont er-maez

Gant Kreizenn Sevenadur Keltiek Bro-Naoned ez eo bet embannet nevez 'zo ur bloazlevr sevenadurel gallek (Guide-annuaire Culturel de Bretagne) hag a c'hello bezañ prizius evit ur bern tud.

Ur bern titouroù a bep seurt a gaver el levr-se, 124 fajenn ennañ : penaos krouiñ ur gevredigezh, penaos aozañ ur gouel, penaos krouiñ ur sine-klub, penaos goulenn ur skoazell-arc'hant, h.a... Ouzhpenn 1 000 chomlec'h a gaver ennañ : mirdioù Breizh, levraouegoù Breizh, tiez ar sevenadur hag ar yaouankiz, bagadoù, kelc'hioù keltiek, kevredigezhioù sevenadurel, arzourien, embannerien levrioù ha pladennoù, kelaouennoù gallek ha brezhonek, h.a... Ouzhpenn ur bloavezh labour a zo bet ezhomm evit sevel al levr-se. N'eo ket klok, pell a se (n'eus netra war ar c'hoariva na war ar filmoù da skouer) met neo nemet un embannadur kentañ hag adalek bremañ e vez labouret war an embannadur da zont.

Prenet e c'hell bezañ al levr-se e Kreizenn Sevenadur Keltiek Bro-Naoned pe

goulennet dre lizher o kas ur chekenn 25 lur - K.R.P. Centre Nantais de Culture Celtique 1 500 29 J Nantes - 52, rue du Marchix, 44000 Nantes.

Geriadurig kembraeg-brezhoneg

gant Risiart Hincks, moulet hag embannet gant Skol Ober 1979

Abaoe bloaz pe zaou emañ SKOL OBER o kelenn kembraeg dre lizher hag ez eo evit aesaat o labour d'he skolidi emañ-hi moarvat, o paouez embann ur geriadurig kembraeg-brezhoneg.

N'eo ket ar wech kentañ e klasker ober kemend-all peogwir, m'am eus soñj mat, en doa Gwilherm Berthou Kerverziou, da skouer, savet ur seurt skol dres a-raok derou ar brezel-bed diwezhañ.

Ar geriadurig nevez n'eo ket bet savet gant ur Breizhad met gant ur C'hembread, R. Hincks e anv. Sklaer ha moulet fraezh, eizh ugent ha daouzek pajenn a zo ennañ hag o lakaat e vefe un ugent ger kembraek bennak war bep unan anezho e c'heller soñjal ez eus ennañ un 3 000 ger bennak. Ar gerioù retañ hag ouzhpenn da anavezout evit un den o kregiñ gant e studi. Gwellañ gourc'hemennou, eta, da R. Hincks ha da Skol Ober evit o labour.

Daoust ma n'on ket ur c'hembraegour, na zoken ur c'hembraeger, lennet em eus gant plijadur ar geriadurig nevez penn-da-benn hag ar rebech brasañ a rafen d'e oberour eo n'en deus ket klasket a-walc'h diskouez ar gerentiezh a zo c'hoazh etre an div yezh rak daoust d'an Istor ha d'ar mor o deus miret ouzh an div vro da gaout darempredoù an eil gant eben e-pad kantvedoù, un darn vras eus ar gerioù boutin a zo ar memes re en div yezh. Aketus-bras e ranker bezañ, d'am meno, da ziskouez ar gerentiezh-se. Evel just, Hincks en deus troet *bara* ha *llaeth*, da skouer, gant *bara* ha *laezh*. N'on ket, avat, evit kompren penaos en deus kavet e oa a-walc'h dezhañ treiñ *neithiwr* gant « dec'h da noz » ha *gwynt* gant « avel » pa n'emañ ket dianavezet a-grenn c'hoazh ganimp na « neizheur » na « gwent ». Ne roan amañ nemet div skouer eus ar gerioù n'int ket bet displeget a-zoare, d'am soñj, evit chom hep hiraat betek re va skrid.

73

Daoust d'ar gerentiezh a zo etre an div yezh e chom ar c'hembraeg ur yezh diaes da zeskiñ evit ar vrezhonegerien ha diskouez an heñveledigezhioù a zo etrezo ne c'hell nemet kalonekaat ar studierien da zerc'hel gant o studi. Un doare eo da aesaat ha da zudiusaat o labour.

Unan en doa komprenet ervat talvoudegezh an hent aes da zeskiñ kembraeg eo Frañsez Vallée p'en doa embannet e levrig 33 fajenn : " GERIOU KEUMRAEK HA BREZONEK dastumet ha lakaet keñver-ha-keñver " (Montroulez, Lajat, trede mouladur 1916). Iskis eo n'he deus ket soñjet Skol Ober da adembann, da gentañ, al levrig talvoudus-se. Gwir eo ez eus c'hwez ar c'hozh un tammig gantañ nemet ne vije ket bet diaes ec'h arnevezekaat dre skarzhañ dioutañ gerioù 'zo n'int ket a-bouez ha dre sevel ur roll, hervez urzh al lizherenneg, eus ar 1000 ger kembraek bennak a zo ennañ Vallée a zo aet c'hoazh pelloc'h gant an hent-se p'en deus embannet skridoù 'zo en div yezh evel al levrig eus " Notennoù" bet gouestlet d'ar brezel.

Souezhet on bet ivez o kavout er geriadurig nevez war-lerc'h anvioù kêrioù brasañ Kembre ar stummoù saoznek anezho hag int hepken. N'eus nemet *Caerdydd* a zo bet roet dezhi he stumm brezhonek *Kerdiz*. Ne gav ket din e c'hellfemp kenderc'hel gant ar c'hiz fall-se. Kembre a zo re dost ouzh hor c'halon hag ar c'hembraeg re dost ouzh ar brezhoneg evit-se. Eno ivez Vallée en deus diskouezet an hent dre ober gant **Kêrnarvon** ha **Kêrvarzhin** pa oa kaoz gantañ eus **Caernarfon** ha **Caerfyrddin** ha ne welan ket perak ne rafemp ket eveltañ.

Derc'hel d'ar gerentiezh a zo etre an div yezh n'eo ket a-walc'h, d'am soñj, hag e rankomp hec'h astenn, he brasaat, p'hon eus tro d'hen ober. Arabat, avat, hen

ober n'eus forzh penaos. P'hon eus ezhomm eus ur ger evit un dra nevez, dereat e vefe, d'am soñj, klask gouzout m'o deus Kembreiz unan a c'hellfe tremen e brezhoneg. Gout' ouzon n'emañ ket an holl a-du ganin war ar c'hraf-se nemet e kavan plijus, da skouer, o dije ar Ouezeled ur ger tost ouzh hon hini evit envel an dra nevez ez eo ar C'henvarc'had. Ober a reont **Cómhargadh** anezhañ evit **Comh-mhargadh** [Comh = (ken) } margadh (= marc'had)]. Marteze, ur c'hendegouezh n'eo ken nemet, d'am soñj, ez eo se ur skouer eus ar pezh a rankfe bezañ graet. En enep, p'hon eus-ni gerioù anavezet-mat gant an holl abaoe pell, n'on ket a-du evit lakaat en o lec'h gerioù kembraek war zigarez e vefe keltiekoc'h ar re mañ. Setu perak, da skouer, e choman feal d'ar ger « relijion » ha ne ran ket gant ar ger « kravez » pe « krevez » emeur o klask degas e brezhoneg. Ober e giz-se, diaesaat ar brezhoneg n'eo ken ha diaes a-walc'h eo evel m'emañ ma rankan barn diouzh ar skolidi bet fiziet ennon ha n'eus ket bet unan war zek gouest da vont betek fin ar skol izel.

74

Daoust d'an evezhiadennoù am eus graet uheloc'h e chom ar Geriadurig nevez ur benveg talvoudus hag aes d'ober gantañ evit ar vrezhonegerien o deus ar galon da gregiñ gant studi ar c'hembraeg. Salv ma vint niverusoc'h-niverusañ.

L. ANDOUARD.

Kemenn : Koun-lid Unvaniezh Koadkeo 1980

Da Lun Fask 7 a viz Ebrel 1980, evel bep bloaz, e vo lidoù e koun an Ao. Yann-Vari Perrot, merzher Feiz ha Breizh, hag ar re holl a c'houzañvas hag a varvas evit hor Breizh broadel ha speredel :

- Da 10 eur, oferenn e brezhoneg e chapel Koadkeo. - Da 11 eur, dirak dismantrou chapel Sant-Kaourintin Toull ar Groaz, e-lec'h ma oferennas an Aotrou Perrot evit ar wech diwezhañ a-raok bezañ drouklazhet : pirc'hirinaj, prezegenn verr, pedennoù kanet. - Da 11 eur hanter, er Groaz Ruz, Lid an Dalc'h Soñj. - Da 14 eur, e Koadkeo, Emvod : kaozeadenn war buhez, skouer, kelennadurezh Abostol Feiz ha Breizh ha Tad speredel an Emsav, ha war ar Vreizhiz all a ouenn vat ; kan.

Kouviet eo da Lidoù Lun Fask ar re holl a gar Breizh ha dreist-holl hor yaouankiz evit adkavout gwrizioù hag hentenoù hor pobl e karantez Feiz ha Breizh, Breizh ha Feiz, en amzerioù enkrezus-mañ. « Koumoul du a zo war ar feiz, koumoul du a zo war Vreizh, met n'eus koumoulenn ebet n'eus forzh pegen du e vefe hep ur vevenn arc'hantet gant an heol a zo a-dreñv : ar c'houmoul du a dremenno. Ar feiz hag hor Breizh a skedo » (Y. V. Perrot).

Priz lennegel Y. K. Kernalegen

O vezañ ma n'hon eus resevet betek-hen oberenn ebet, ar priz a vo roet e 1980, spi hon eus. Ar vignoned a garfe kenstrivañ n'o deus nemet skrivañ dimp evit kaout an titouroù. Evel hon eus bet lavaret dija, un eil priz a 500 lur a vo roet, ma vez arc'hant a-walc'h er c'hef. Kas ar profoù d'an teñzorier Yvon Craff, konter, krp. 747 59 G Roazhon.

Ma ne vez ket trawalc'h a arc'hant evit tizhout ar 500 lur, e vo kresket ar priz 1 000 lur gantañ.

Priz Per Trepos

Pevare Priz Per Trepos a zo bet roet er bloaz-mañ da Añjela Duval evit he fennad

" Leve ar paour ha peorien nevez " (1 200 lur).

An eil priz a zo aet gant Goulven Jacq, oberour " Pinvidigezh ar Paour ", evit e zanevell " Ar Wastell ".

Kas a reomp hor gwellañ gourc'hemennoù d'hon daou genlabourer.

75

Kazetennoù nevez : " An Amzer " hag " Al Lanv "

Setu ur pennadig zo ez eo deut er-maez ar gazetennig **An Amzer**. Ur gazetenn sizhuniek eo ha dont a ra er-maez bep gwener. Setu amañ ar c'hemenn a zo bet kaset deomp diwar he fenn : « Keleier a bep seurt a vez kavet e-barzh " An Amzer ", keleier etrevroadel koulz a keleier eus Breizh, pe c'hoazh pennadoù sevenadurel, ar sportoù, h.a... N'eo ket bras-tre c'hoazh hor c'helaouenn, met brasaet ha gwellaet e vo tamm-ha-tamm.

Ma kavit e talv ar boan resev en ho poest-lizhiri ur gazetenn vrezhonek, an doare gwellañ d'hor sikour a zo, evit ar re a blij dezho skrivañ, reiñ deomp o skridoù, ha d'an holl koumanantiñ.

Koumanant evit 12 niverenn, priz : 18 lur ; studierien ha skolidi : 12 lur ; koumanant-skoazell : 25 pe 30 lur. - An Amzer, 2 straed ar Richardière, 35100 Roazhon - k.r.p. Decambourg Rennes 25 97 V. »

Ha setu amañ' kemenn an eil kelaouenn **Al Lanv** : « Ur gelaouenn vrezhonek nevez eo **Al Lanv**. N'eo ket " Al Lanv " kelaouenn ur strollad politikel bennak, n'emañ ket en hor soñj brudañ ar strollad-mañ-strollad.

Kinnig d'an dud un dielfennadur o tisplegañ stourm ar minorelezhioù, emdroadur ar c'heñverioù-nerzh er bed, ar stourmoù e Breizh war an dachenn sokial, sevenadurel, h.a., e vo pal " Al Lanv "

An niverenn gentañ a zo da zont er-maez hep dale. Setu dre vras ar pezh a vo lennet warni : un displegadur a-zivout Radio glas Fessenheim, pennadoù diwar-benn Iwerzhon, Euskadi, Katalonia, Douarnenez, ur porzh aet da get, burutellerezh filmoù ha pladennoù, ur pennad diwar-benn ar sonerezh reggae, peskerezh ar brilli, skeudennoù, tresadennoù, gerioù-kroaz ha kalzig traoù all...

Priz ar c'houmanant : 30 lur evit ar bloaz (6 niverenn) ; Koumanant skoazell : 50 lur (pe ouzhpenn !). - Kasit hoch anv, ho chomlec'h hag ho chekenn da : Al Lanv 5 rue du Recteur Henry, Villejean, 35000 Rennes.

Levrioù war baper kaer

Setu amañ ur roll levrioù war baper kaer niverennet a zo da werzhañ :

1 Emgann Kergidu I, war baper c'hwezhet arvelen	46 L
1 Emgann Kergidu II, war baper c'hwezhet arvelen	46 L
2 Geotenn ar Werc'hez, war Rives	28 L
1 Geotenn ar Werc'hez, war Alfa	25 L
2 An Intañvez Arzhur, war Johannot	35 L
1 Itron Varia Garmez, roudennet	70 L
1 Nenn Jani, war Arches	50 L
1 Evidon va unan, war Alfa Mousse	28 L
3 Pinvidigezh ar paour, war Ingres	36 L
2 Tristan hag Izold, war Lafuma	50 L
5 Vijelez an deiz diwezhañ, war Arches	20 L
2 Skol Louarn Veig Trebern I, war Lafuma	45 L

4 An deiz-ha-bloaz, war Romana	35 L
1 Mari Vorgan, war Ingres	35 L
2 Va zammig buhez, war Ingres	38 L
1 An irin glas, war Arches	32 L
1 Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh, war Johannot	35 L

Goulenn al levrioù-mañ digant R. Huon, 2 Venelle Poulbriquen, 29200 Brest - c.c.p. R. Huon 1629 14 C Rennes - kuit a vizoù.

76

Skolioù, Levraouegoù, Kevredigezhioù koumanantet d' " Al Liamm "

SKOLIOÙ

I.U.T. LANNUON ; C.E.S. GWENED ; C.E.S. Villejean, ROAZHON ; Skolaj Charles de Foucault, BREST ; Lise A. Pavie, GWENGAMP ; Skolaj Sant-Frañsez, LESNEVEN ; Kelenndi Sant Varzhin, ROAZHON , Lise La Poterie, ROAZHON.

SKOLIOÙ-MEUR

AN NAONED ; Skol-veur Breizh-Uhel, ROAZHON (4) ; Harvard College, CAMBRIDGE, U.S.A. ; LUNDS UNIVERSITET, SWEDEN ; Ruhr Universität, BOCHUM ; Sprachwissenschaftl. Institut, BONN ; TUBINGEN UNIVERSITAET ; St David University College, LAMPETER ; Skolioù-meur ABERYSTWYTH, BANGOR, CARDIFF, CORK, DUBLIN-SWANSEA, OXFORD.

LEVRAOUEGOÙ

Abati LANDEVENNEG ; Kêrioù BREST, KEMPER, SANT BRIEG, GWENED, AN NAONED, SANT NAZER ; National Library of Scotland, EDINBURGH ; Staatsbibliothek der Stiftung, BERLIN.

KEVREDIGEZHIOÙ

Bretoned Dugelez Breizh, LES LILAS ; Bretoned an Anjou, TRELAZE ; Bleimor, PLERIN ; Brezhonegerien Bro-Leon, KASTELL-PAOL ; Kreizenn Le Carroi, LA FLECHE ; Kreizenn breizhek arz poblek, BREST ; Kreizennoù sevenadurel breizhat, GWENGAMP, SANT MALO ; Kreizenn sevenadurel keltiek, NAONED ; Kelc'h sevenadurel breizhat, GWITREG ; Bretoned an Il, SANT GREGOR ; Emglev an tiegezhioù, ROAZHON ; Oaled sevenadurel poblek bro-vigoudenn, PLOUNEOUR LANVERN ; Kelc'h keltiek Steredenn Vor, LONGJUMEAU ; Kamp etrekeltiek ar vrezhonegerien, KEMPER ; Kêr-Vreizh, GRENOBLE ; Koun Breizh, SANT STEFAN MENEZ LUK ; Oaled Abherve, SANT BRIEG ; Skol an Emsav, ROAZHON KEMPER ; The Celtic League, RIALTO, U.S.A.

KOUMANANTET C'HOAZH

Centre régional de documentation pédagogique, ROAZHON ; FR3, BREST.

77

LEVRDIOU HAG A WERZH AR GELAOUENN " AL LIAMM "

Barbian et Saladin, FRIBOURG, HELVETIA ; Jos Hochneder, LANDHUT, ALAMAGN ; Martinus Nijhoff, DEN HAAG, IZELVROIOU ; Levrioù brezhoneg, LANNUON ; Librairie de Bretagne, ROAZHON ; Librairie du Palais, ROAZHON ; Galerie Bretonne, ROAZHON ; Levradi Jaouen, KEMPER ; Librairie des Méridiens, PARIZ ; Coop. Breizh, ROAZHON, AR BAOL, PARIZ.

Notomp an niver mat a skolioù-meur koumanantet en estrenvro, ha da gentañ-holl, er broioù keltiek. Notomp ivez war ar roll un toullad mat a skolioù ha kevredigezhioù e Breizh-Uhel, 2 e Rann-vro Bariz, met hini ebet e Pariz. Skol-veur Brest n'eo ket koumanantet c'hoazh, avat !

78

Kael niv. 8

	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
I	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-
II	-	-	-	-	-	-	X	-	-	-
III	-	-	-	-	-	-	-	-	-	X
IV	-	-	-	X	-	-	X	-	-	-
V	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-
VI	-	-	-	X	-	-	-	-	X	-
VII	-	X	-	-	-	X	-	-	-	-
VIII	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-
IX	-	-	-	X	-	X	-	-	-	-
X	-	-	-	-	-	-	X	-	-	-

A-led : 1. Pleg da skarzhañ. - II. Goude merenn ; Fin zo gant hini Breizh en Naoned (skritur K.L.T.). - III. Bev eo an arc'hant nemetañ a c'hellfe bezañ anvet evel-se e brezhoneg. - IV. War sin Per Peron ; Dres a-raok an dregontvet elfenn ; Sankañ a reer en dour evit mont warnañ. - V. N'eo ket ober kelern tamm ebet. - VI. Mann ebet ; Ar re-se a zeu war-lerc'h ar re nevez. - VII. Ar velc'houedenn a ya warnañ ; Brezel kozh. - VIII. Meur a vrezel kozh a voe digoret abalamour dezho. - IX. Roue ar bobl-se n'eo ket ankouaet c'hoazh e veaj e Brest ; Tremen a reer dioutañ. - X. Tu ; Repu al listri.

A-serzh : 1. Gorren ar c'hevell. - 2. En tu kleiz da Enez Sun ; D'en em wiskañ e barzh. - 3. Skoliet-mat eo bet Marc'harid Gourlaouen war ar poent-se. - 4. A zoarefe amañ ar bluenn koulz hag an teod ; Labour douar. - 5. Redek a reer a-dreuz dezhi. - 6. C'hoarvezen. - 7. Den Leon, hervez furnez Breizh. - 8. Dentourezed pe ardivinkoù dizouarañ. - 9. Poan gollet eo mont da bediñ Sant Tujan evit se ; Gwreg an Alarc'h. - 10. Bez ; Meur a hini a gaver e Bro-Skos.

GWALEREG.

DISKOULM D'AR GAEL niv. 7 :

A-led : i. Gallegadur. - II. Oriadez ; Ru. - III. Arem ; Ogllo. - IV. Pismigoù. - V. AAT ; Trugar. - VI. Egr ; Ealent. - VII, Road ; Fent. - VIII inorzenn. - IX. Ue ; Knout. - X. Ni ; Vi ; Eusa ;

A-serzh : 1. Goapaerien. - 2. Arriagon. - 3. Liestraoù. - 4. Lamm ; Drev. - 5. Ed ; Ite. - 6. Geografek. - 7. Azgoulenne. - S. Lugenoù. - 9. Uri ; Ant ; Us. - 10. Ruoort ; Eta.

Ur vi-koukoug ez eus bet er gael-se. Ret e oa lenn : 9. (a-serzh) ROUD an erer (ha neket ROUE an erer). Hol lennerien d'hon digarezo.

AL LIAMM 199

TAOLENN

Tarzh ar c'hañv gant Y. E. JARL	83
Tarzh ar sklaerder gant Y. E. JARL	84
Sant Pistrakig gant J.C. MIOSSEC	85
Un dro-besketa e Karanteg gant Laouig ar MEULER	88
Ar C'hwil-derv gant P. Mac PIARAIS	93
Gaston Latimier gant KLERG	97
E koun ur mignon kar-e-vro gant Andreu LATIMIER	106
Un dro e Levraoueg ar C'hendalc'h gant Bernez an NAILH	108
En ur gantreal dre straedoù Budapest gant Jorj GWEGEN	114
C'hoariva brezhonek gant Goulc'han KERVELLA	134
Avelioù-tro gant GORWENAL	140
Levrioù deskiñ nevez gant G. P.	143
Notennoù	145

Skeudennoù : Ar re a zo da heul ar pennad diwar-benn Budapest a zo bet prestat deomp gant " Ouest-France ".

Tarzh ar c'hañv

War vri ar mor
 Ne deuiio mui.
 He dreuzo ken
 An hent en traezh.
 Dirazon kaer ne chomo sonn,
 An hini a garen.

Ne redo ken d'am bag.
 Ganin-me ne zivizo
 Tre betek tarzh al lano.
 Ne dec'ho krenn he dorn,
 Na kuit diouzhin ne gerzho,
 An hini a garen.

Ne welin nij aourvelen
 He blev en avel,
 He fenn o vont da guzh
 Tro-kein an tevenn.
 War aodoù du va spered
 Biken ne skedo lagad glas,
 An hini a garis.

E bez ar mor, d'arselin,
 Ha ferv, ha kuñv, ha don,
 D'am min a larin
 Karantez mear va c'halon.
 Noz-deiz e luskin,
 Gant kan an donn,
 An douar a zoug
 An hini da viken a garin.

Tarzh ar sklaerder

Neb a gan, 'lec'h ne dalv dre ar bed
 a-hed an deizioù
 din a gan

Neb a ouel, 'lec'h ne dalv dre ar bed
 a-hed an nozioù
 warnon a ouel

Neb a gerzh, 'lec'h ne dalv dre ar bed
 a-hed an hentoù
 davedon a gerzh

Neb a c'hoazh, 'lec'h ne dalv dre ar bed
 a-hed an hañvoù
 ouzhin a c'hoarzh

Neb a stourm, 'lec'h ne dalv dre ar bed
a-hed ar vuhez
evidon a stourm

Neb a varv, 'lec'h ne dalv dre ar bed
henez hepken
a-daol am gav
hag am gwel

Sant Pistrakig

P'o deus va gwelet tud ar bourk, ganin va gwiskamant gwenn ofiser a vor ha va c'hasketenn pintet cheuc'h war va fenn ne ehanent ket da estlammiñ. Evito o-unan e oan chomet ur bugel... Alies ne wel ket an dud ez a ur c'hrouadur war goshaat. Ha souezhet e vezont bepred pa vez klevet ganto ez eo ar bugel-se aet da vartolod... Etre e c'hanedigezh hag e goñje ne welont ket an amzer o vont e-biou, ha mont a ra ken buan ha tra...

Met p'o deus va c'hlevet o lavarout dezho e oan o lestrañ e bourzh ul lestr-reder, e chomas digor bras o genou gant ar souezh. Ken brudet e oa ar vag-se ma oa deuet da vezañ anavezet dre-holl. Ar re yaouank hag ar re gozh o doa klevet anv anezhi. E meur a diegezh e oa he skeudenn ouzh ar voger, e-kichen almanak ar post.

Met souezhetoc'h c'hoazh int chomet pa'm eus lavaret dezho e oan evit loc'hañ kuit ganti da redek ar morioù etrezek Madagaskar.

« Madagaskar ! Biskoazh kemend-all ! »

Ne oa ket anv farsus an enezenn-se a lakae anezho da estlammiñ. Nann. Met setu ankounac'haet ganto o souezh em c'heñver. Hag int asambles da gomz din eus an Aotrou de ..., ken na grene o mouezh gant ar resped.

Pebezh sioulder ur wech distaget ganto an anv santel-se ! Rak ma vez Bretoned o chom er bed, n'eus nemet unan anezho nep hini par dezhañ o chom e Madagaskar. Hag em bourk genidik e veze graet anv anezhañ pemp gwech war ar pemdez d'an nebeutañ.

« An Aotrou de ... » Va Doue ! Piv eo hennezh ? Sed a gonted dija pa oa bugel, e seblante bezañ warnañ merk ar santelezh. Ur skouer eus ar re wellañ evit ar vugale all. Laouen ouzh an holl, prest da rentañ servij d'e dud kenkoulz ha d'e amezeien. Gwelet e veze, e-doug an oferenn-bred, o pediñ Doue hag ar sent a greiz kalon. Ken birvidik e oa e feiz ma roe da bep hini a selle outañ un alberz eus ar baradoz. En neñv e nije dija e ene.

86

Ne oa en-dro dezhañ nemet an nebeut krak aotrounez hag a vage un tamm mat a erez outañ. Ne oa ganto nemet gerioù trenk leizh o genou diwar e benn. Pistrakig, SANT PISTRKIG o doa graet anezhañ ! Pistrakig ! Penaos e c'heller lesenvel ur paotrig ken hegarat en un doare ken dister. Kalz en deus gouzañvet dre glevout teodoù fall al lakepoded ouzh e c'hoapaat. Met morse n'en deus lavaret ger. Ar c'hontrol e oa. Pediñ a rae zoken evit e vourevien...

Ha setu eñ aet da veleg ha kaset d'ar broioù pell. Ken bras e voe ar mad graet gantañ, ma voe e anv ken brudet hag hini ur sant. Radio, kazetennoù, tele, n'o doa nemet meuleudioù da reiñ dezhañ. Bep an amzer e veze gwelet e-ser ar Pab.

E Madagaskar edo bremañ. Hag Eskob abaoe pell'zo ! Ha pep hini em bourk d'am c'huzuliañ da vont d'e welout en ur reiñ dezhañ un draig bennak eus o ferzh evitañ. Pebezh kefridi ! Bezañ resevet gant un den o oa bet resevet gant an Tad santel. Ha gant kement a nerzh e c'houlennent diganin mont ma legis dirazo.

« Ya ! M'hen tou deoc'h. Mont a rin d'e welout ! »

Eus Brest da Vagadaskar ez eus pemzek devezh merdeñ. Gant ar servij, hag an hañv nevez ganet, ne welen ket an amzer o tremen. Tommoc'h-tommañ e teue an

heol da vezañ. Ha setu ni o vont war-du an enezenn vras. Ur berlezenn war an dour. Morse n'em boa kavet ken meurdezus ur veaj. Ha bremañ, pa sonjan enni e teu va c'halon da dommañ gant an hiraezh dezhi. Bep tra a welen a oa nevez evidon. An oabl, ar mor, betek ar steredennoù zoken... Liv an oabl ha liv ar mor o vont mesk-ha-mesk en ec'honder.

Un dudi e voe an degouezh er vro-se. Ur bed all da lavarout ar wirionez ken na chomen da zispourbellañ va daoulagad da sellout ouzh un arvest dianav brav-kenañ.

Tri devezh e rankemp chom eno kent loc'hañ kuit. E-pad daou zevezh e chomen da c'henaouegiañ ouzh pep tra a welen, ankounac'haet ganin ar gefridi a oa bet fiziet ennon gant va c'henvroiz. Setu an trede devezh o tont. A-benn ar fin e ris va soñj mont da welout an eskob.

War an uhel edo e iliz. A-feur ma saven war-du enni e teue d'am spered karantez vat tud va bro en e geñver. Ha pounneroc'h-pounnerañ e kaven ar valizennig a oa ganin em dorn hag a oa enni an holl brofoù evitañ. Ne oan nemet un isofiser. Hag eñ un eskob brudet er bed a-bezh.

87

Edo oc'h oferenniñ pa oan en em gavet en iliz ; tomm berv e oa an heol er-maez, evel plom teuzet o kouezhañ war hor choug. Met fresk ha teñval e oa e-barzh. Trouz ebet, mouch avel ebet. An arvest sioul a oa dispar. Lammat a rae va c'halon em c'hreiz. Ne oan ket evit lavarout grik hag en desped d'an tommer e chome va zeod peget ouzh va staon gant ar from. Karantez tud va bro a zougen war-du ennañ ha ne baden ket da dridal gant al lorc'h. Em spered trubuilhet en em veske kefridioù va c'henvroiz. Ha daoust hag e vefen din a-walc'h evit o seveniñ ? Hag ar bern traou am boa da lavarout dezhañ ! hag ar bern traouigoù am boa da reiñ dezhañ !

- « Ar pakadig-se eus perzh Fañch ar Moal. »

- « Hennezh eus perzh Chob an Du. »

Ha betek Chanig ar Rous, an hini goshañ eus ar vourc'h, he doa fellet dezhi fardañ krampouezh a-ratozh-kaer evitañ !

Hag evel-se ugent gwech. Ganin e oa an holl bakadoù dister renket brav em sac'h martolod.

Ya ! Penaos e c'hellfen-me komz gant un eskob ken brudet ? Souezhus e vefe ivez gwelout un den eveltañ o tiskenn en ur renk ken dister evit komz ouzhin...

Echu an oferenn. Aet ar gristenien kuit. Goullo an iliz. Aet kuit eskob ha beleien. Edo ar sakrist, gantañ ur benveg iskis en e zorn, o lazhañ flammouigoù ar boujiennoù bras.

Ha me va-unan-penn e toull dor veur an iliz aet bihan va c'halon...

Ur c'hammedig a ris war-du an aoter... Unan all. Unan all c'hoazh. Hag e tigoris dor ar sakristiri goustadik ha gant kement a evezh ma ne oa ket evit gwigourat an nebeutañ.

E-unan edo an eskob, ken gwenn en deñvalijenn gant e sae beleg hag ar mogerioù gwenn-kann nevez razet. Daou dasmant gwenn, o sellout an eil ouzh egile. Ur jestr madelezus a reas war-du ennon. Ur jestr eskob. E berr gomzoù, met gant kalz a reverañs, e tisplegen dezhañ piv e oan hag ar pezh e oan deuet d'ober.

Va selaou a reas, sirius. Ne ouien ket ken mui da be sant en em ouestliñ. Hag ar valizenn em daouarn ! Met pa voe echu va frezegenn e paras war e zremm ur mousc'hoarzh estlammus evel ma vije deuet holl sklerijenn ar bed dre e zaoulagad.

« Eus Ploueskad ez out, paotr ! O ! Lavar Pistrakig din ! »

d'an 9 a viz Gouere 1979.

Un dro-besketa e Karanteg

C'hwec'h eur d'abardaez eo. Poent eo din kas va chatal er-maez a-raok an noz. Aze emaint, e korn ar gambr, o c'hedal o mestr. Bez' emañ an olifanted liesliv, ar c'hezeg roudennet, an ejened o c'hroc'hen marellet, ar marmouzed hag a gomz koulz ha tud, ar c'hizhier gouiziek, ar miti pemp troad, an naered daou benn, ar bleizi pevar lagad hag all... Arabat deoc'h bezañ spontet, doñv int ha sentiñ a reont ouzhin.

Digeriñ an nor ha setu ni er-maez. Mont a ran dre an trepasioù hir hag an derezioù serzh ha dre ma'z an emañ va holl loened en-dro din, an olifanted o nijal a-zioc'h va fenn, ar c'hezeg roudennet o ruzañ a-hed ar mogerioù hag an naered-gwiber oc'h ober din kurunennoù ouzh va zal. Chom a ra an dud mil-souezhet o welout ac'hanon-me, gant ur sklerijenn dreist-lugernus en va zro. Strakal a ra ar vugaligoù o daouarnigoù ha youc'hal forzh. Gouzout a ran ec'h huñvreont ganin-me en nozioù teñval ha ne dalv ket d'o zud hisañ anezho da zeskiñ er skol rak ganin-me hepken emañ o holl spered. Spered piv ne vije ket ?

Emaomp en em gavet el liorz, e-touez ar bleunioù kaer dispaket-holl da vannoù diwezhañ heol miz Mae. Bremañ ez eo goloet al letonenn gant va anevaled. En em hegañ ha chourañ a reont. Mont a ran en o zouez ; strakal a ran va skourjez d'ober dezho chom reizh ha plegañ din. Ur c'hoari n'eo ken evidon rak hep skourjez e rafen koulz.

Echu ar bale pelloc'h ! Ur sell hepken, petra lavaran, ur soñj hepken diwanet en va spered ha setu bagad al loened o c'hened dispar hag o nerzh sebezus o tont war-lerc'h o mestr holl-c'halloudek etrezek o c'hambr. E-kichen ar prenestr o c'hraouian. Bihan ez eont kuit d'am direnkañ. Dont a reer da zegas hor boued war an daol. E bouloùigoù hag e beradoù e vez lakaet ar boued-se bremañ, nebeutoc'h a se a chastre ganto. O lonkañ a ran evit va loened ha kerkent setu leun o c'hof ganto. En va gwele ez an. Buan a-walc'h e teu ar c'houked din.

89

Ne blij ket kaer din ar pennad kentañ eus an noz. Gwall-huñvreoù am bez alies a-walc'h. Sell ! Hirio emeon en un ospital evit ar re ziskiant ! Ma ! Biskoazh ! Serret hag alc'houeziet eo bet an holl zorioù war va c'hein. Tud gwisket e gwenn a zo oc'h intent ouzhin noz ha deiz. A-wechoù e teuont d'ober pikurennoù din en va feñsoù. A-wechoù e teu pemp pe c'hwec'h anezho da gregiñ yud ennon, ha da lakaat kourant em fenn d'ober din kouezhañ e droug-sant. Va Doue ! Pebezh gwall-huñvre skrijus adarre !

Evurusamant setu ma'z on bet dihunet gant trouz ar radio. Douetus am boa disoñjet e lazhañ a-raok mont da gousket. Unnek eur eo. Roc'hal a ra va loened e korn ar c'hogn. Azezañ a ran em gwele ha selaou. Brezel zo savet etre ar broioù tomm hag ar broioù yen. Ar broioù klouar ne ouzont ket c'hoazh war be du treiñ. Emañ ar freuz hag ar reuz o kas ar bed war e benn. « Kernez, Brezel ha Bosenn, gwalennoù gwashañ mab-den. » Sell 'ta . Penaos, emeve ? Va anv a zo bet lavaret er post bihan ! War a leverer e vije ganin-me galloud brasañ ar bed. Sed ' aze avat un abadenn all ! N'heller kuzhat netra outo ken ! Adarre e rankin chom war-zihun en noz-mañ, p'am boa c'hoant kousket c'hwek ! Warc'hoazh edon da gregiñ gant un droiad sirk e bro an Amerik, war c'houlenn ar prezidant Karter. Klask a ran lazhañ ar radio. Netra d'ober ! N'on ket gouest da stourm ouzh an elektronik brein-se !

N'eus ken nemedon-me, emezo, kement a ve gouest d'ober d'an heol, d'al loar ha d'ar stered diniver sentiñ. Avi o deus an alamaned ouzhin ha setu m'emaint o sevel armeoù en tu bennak tre chapelig Sant-Eflamm ha tosenn Menez-

Bre, da zont da gemerout ar galloud-se diganin. Adarre e rankin en em gannañ en noz-mañ. An noziou diwezhañ em eus her c'hraet c'hoazh a-enep da baotred o lañsoù gwenn deut da glask tennañ va mad-da-gas-karr diganin ha da baotred o c'hroc'hen du a damalle din bezañ bet o laerezh o ferlezennoù diamant evit sevel un iliz-veur da Zoue ar Brikoli e-kostez Gwinevez.

Emañ an arme alaman o tostaat. Trouz ponner ar c'hirri-arsailh ha bouderezh ar c'hirri-nij a glevan o talmañ en aer. Emaint erru din. D'ar red ez an 'barzh ar post da stankañ outo an hent gant dornerezoù kozh ha kirri-dre-dan c'hwezhet an tan enno. Keit ha ma vezint o tigeriñ klaz dreizo em bezo me amzer d'ijinañ un dra bennak d'o diarbenn.

90

Strakal a ra ar gurun en noz teñval. Da bep luc'hedenn e welan dir ar c'hirri-emgann o luc'hiañ ha tokeier-houarn ar soudarded war-droad dre gant ha dre vil oc'h ober kemend-all. Ganto ez eus war o fas peb a werenn gromm. Kanañ a reont d'en em generzhañ rak gwall-abadenn o deus da gavout ouzhin-me. Se a lavar paotred ar c'hazetennoù a zeu war o lerc'h. Piv n'en dije ket gwall-abadenn ouzhin, genaouien ?

Tost emaint erru. Brasaat a ra va skingomz. Kas a ran anezhañ er-maez a-raok ne vefe re strizh an nor dioutañ ha kuit da zihuniñ va loened. Ne fell ket din e vefent trubuilhet gant disterachoù evel-seik. Gortoz a ran. Setu bremañ ar gweturioù-brezel kentañ o tont er-maez, unan hag unan. D'o heul e teu ar soudarded war-droad. En em vodañ a reont en ur vandenn, dispaket en un hanter-gelc'h. Pet a zo anezho, emit-hu ? Kontañ a ran dek, kant, ur mil, dek mil..., ha c'hoazh n'o gwelan ket holl rak mogidell zo savet war ar vro. Mogidell, emeve ? Daoust ha ne ve ket moged gwenn, kentoc'h ? Anvet ez eus bet ur pab nevez e Kastell-Paol, emit-hu ?

Tavet eo trouz an arme. Emañ ar jeneraled oc'h en em guzuliañ da c'houzout eus pe du kregiñ ganin. « Ac'htung ! » eme Goebbels en e barlant. Ha kerkent setu ma kouezh war va skoazioù ha va c'hrebez ur c'hastad tennoù eus o fezhioù-kanol. A-vec'h m'o santan ouzh va c'horf. « Paket ha graet out, eme Goebbels din. Ro din da c'halloud hag e vezi lezet da vont ! » Dirollañ da c'hoarzhin a ran. « Kit da skrabat, emeve ! » Ha me ha mont e-touez ar c'hirri. O zaoler a ran a-gleiz hag a-zehou. Sevel a ran lod a-zioc'h va fenn ha lod all a voustran dindan va seulioù. Krog eo ar vrezelerien en va bragez da glask pignat betek va c'halon d'he flemmañ. Gouzout a reont emañ eno eienenn pep buhez. Hejañ a ran va divesker ha setu int o kouezhañ war stern o c'hroc'hen. Ar jeneral Goebbels, spouronet-mik, en deus kavet ur c'hozh inkane hag en deus tec'het kuit war e gein, en ur lezel e arme war e lerc'h. Anat deoc'h ne 'z aio ket paotred ar c'hazetennoù da embann seurt keloù. Nag ez eo treis ha tromplus ar massoù-media !

Un distruj bras a gasan da benn en arme enebour. Kerkent ha marvet e savont bev en-dro. Ur rann-galon eo bremañ gwelout bugale en o c'hevell, krennarded, kozhidi ha klañvourien degaset d'en em gannañ ouzhin.

91

« Mabig bihan ar Baradoz, » eme ur vouezh din. Ur vouezh dous ha kuñv o tont eus an neñvoù. Sevel a ran va daoulagad hag e welan ur steredenn brasoc'h eget ar re all hag a daol ur sklerijenn splannoc'h. « Mabig bihan ar Baradoz, » emezi adarre, ne dalv ket dit chom aze d'en em skuizhañ. Petra a c'hounezi ouzhpenn ? Divent eo da vrud ha diniver da guriou kaer. Kae da ribl ar mor hag eno az pezo dibenn d'az anken. Kerzh, mab ! » ha neuze e welan ar steredenn oc'h astenn ur vrec'h da ziskouezh dre be hent mont.

Mont a ran eta ha war va lerc'h e teu bagad an alamaned. Hep ehanañ emaint oc'h hegañ ac'hanon, o klask c'hoazh hag en aner da zont a-benn ouzhin. Evidon-me ne ran ket nemeur a van. Sederat eo va c'halon. E-kreiz ul levenez bras-sebezus emeon. Ha goude ma vije mil milion a soudarded war va seulioù n'em bije ket a gas outo. Truez kentoc'h ha kerse evito. Nag ez eo dister o stourm, na dall o daoulagad, na didalvez o freder.

War hent Karanteg e kerzhan. Hanter-norz nemet kard. Den war vale nemet kizhier-norz Sant-Pabu bet o vrennigañ e pleg-mor Montroulez ha paotred Rosko war o mirc'hed-houarn karget a sammouñ ognon, o vont da Vro-Saoz. Pesketaerien a zo ivez war ar c'hleuzioù o tresañ o rouedoù. O saludiñ a ran holl en ur vont. « Amzer da doullañ kaoz n'am eus ket, emeve, rak gwall-sammad a zo ganin. »

En em gavet omp e-tal an aod. Mont a ran en dour hag hervez gourc'hemenn ar steredenn-werelaouenn e veuzan arme an alamaned. Mont a reont an eil war lerc'h egile, sioul, reizh ha kempenn. Ur bobl veur oa, Doue d'he fardono !

Petra ober ac'han da hanter-norz ? Nemet pesketa ! Amañ evit doare, ez eus kranked ha kevnid, forzh pegement. Diwar ur garreg e splujan er mor. Sklaer eo ar strad anezhañ. Glas, gwer, ruz-melen ha ruz-glas eo an dour. Bleizi-mor, dour-mirc'hed, frikorneien ha jirafenoù a zo o kanañ en-dro din. Va ambroug a reont betek penn pellañ ar morioù don. Pesked roudennet kaer ha marellet iskis a deu da gargañ va faner. Kas a reont ac'hanon betek dorioù ur c'hoad bras el lec'h m'eo ruz ar geot, mouk ar gwez ha melen-aour ar stêrioù a sav da lein ar menezioù-perlez. Gelper a ran laboused ar c'hoad a zeu da reiñ din frouezh saourus meurbet da zebriñ. Eno e welan un hanter wiber o c'horiñ ur sarpant, ha kement-se zo nebeut e gwirionez.

92

Ul labous gouzoug hir a lavar din en deus al lestr Hilda graet peñse er-maez a Santeg. Kerkent e teuan war va giz rak n'eus nemedon-me hag a ve gouest da saveteiñ o buhez d'ar voraerien. Emañ al lestr war e c'henou e goueled ar mor didruez. N'eus na you na fiñv o tont dioutañ. Sachañ kreñv a ran war va alan ha mont d'e gaout. Bugale, merc'hed ha gwazed a vilieroù zo eno astennet, aet ar vuhez diouto. En o c'hichen emañ o fakadoù. Edont o vont da chom war enezennoù pellañ Bro-Skos da sevel ur vro nevez diazezet war genwerzh al laboused-aod. Stagañ a ran da zegas buhez enno en-dro. C'hwezhañ a ran aer fresk en o skevent, ken e teu o divoc'h da ruziañ, o daoulagad da zigeriñ. En ur vont d'an aod e kanont meuleudi din.

Foug zo ennon rak bremañ e c'hellan chom ouzhpenn teir eur-horolaj dindan an dour hep tennañ va alan. Emañ hogozik holl deuet da vev en-dro. An hini ziwezhañ zo ur plac'h yaouank. Flour eo he c'hroc'hen, mistr ha moan hec'h izili, korfet-kaer gant blev du-pod. Lammad ra he bruched ha digeriñ ra un daoulagad gwer, kaer-meurbet. Me eo a ginnig semplañ bremañ gant ar garantez. Seurt kened n'am boa gwelet biskoazh. Kavet en deus va galloud e vestr. Mont a reomp hon daou da neuñv war-c'horre an dour. Stardet ha liammet eo hon daou gorf. Ennon-me emañ-hi hag emañ enni.

Ruziañ ' ra an oabl eus tu ar reter. Ret eo din distreiñ d'ar gêr, siwazh ! Kimiadiñ a ran diouzh va c'harantez. Leñvañ ra he daoulagad ha leñvañ ra va c'halon. War an traezh e teu ar besketaerien da sec'hañ va c'horf. Va c'halon avat n'int ket evit sec'hañ. Va holl besked a roan dezho.

Dre ma teuan en-dro d'ar gêr e welan forzhig kirri-tan gwenn, kroazioù glas outo, o vont war-zu Karanteg. Archerien gant chas a welan o redek er parkeier. En em guzhat a ran rak ne fell ket din bezañ trugarekaet evit al labour vat am eus graet. Piv a vije !

N'em gavet en ti e welan tud strafuilhet o vont hag o tont. Peñse an Hilda zo kaoz. En va c'hambri int bet zoken, rak digor-bras eo an armelioù ha freuzet ar gwele. Ouzh va c'hask int bet evit mont war sikour al lestr goueledet. Evurusamant n'o deus ket dihonet va chatal. Warc'hoazh e livirin dezho lakaat evezh. Marteze zoken e roin dezho peb a freskad skourjez, dreist-holl d'an hini a zo en o fenn hag en em gemer evit ur... ur... Ma ! Debret eo ar ger ganin. Gwelloc'h kousket bremañ ma rankan sevel abred...

troet a-ziwar ar gouezeleg gant Loeiz ANDOUARD

Ar C'hwil-derv

Ur chiminaou eus kontelez Jois deuet e ti va zad a gontas deomp an istor-mañ e korn an oaled e-pad un nozvezh c'harv eus ar goañv. Edo neuze an avel o leñvañ en-dro d'an ti, ken ho pije lavaret ur vaouez o ouelañ d'un den marv, e-keit ma komze ar chiminaou hag, abalamour d'an avel, e lakae e vouezh da sevel ha da ziskenn hervez ma save ha ma tiskenne mouezh an avel. Ur gwaz mentet bras e oa anezhañ, daoulagad gouez dezhañ hag e wiskamant a oa graet gant kozhdilhad. Un tamm aon am boa bet razañ pa oa deuet en ti ha ne vihanaas ket va spont pa glevis e istor.

« An tri loen ar muiañ benniget er bed a-bezh, » eme ar chiminaou, « a zo ar morlouan, ar voc'hruzic hag ar vuoc'h-doue. Hag an tri loen milligetañ er bed a zo an naer-wiber, al laouenan hag ar c'hwil-derv. Ar c'hwil-derv, avat, eo ar milligetañ anezho. Her gout a ouzon. Ma c'hoarvez d'ho mab bezañ lazhet gant un den, moereb, arabat deoc'h ober c'hwil-derv anezhañ. Ha ma teufe ur vaouez d'en em lakaat etrezoc'h-c'hwi hag ho pried arabat deoc'h lakaat anezhi e-skoaz gant ar c'hwil-derv. »

« Doue ra viro ! » eme va mamm.

« Amen ! » a respontas ar chiminaou.

Ne lavaras mui netra e-pad ur pennadig. Chom a rejomp da selaou rak e ouiemp ervat edo o vont da gontañ un istor. Emberr e krogas da gomz adarre.

« P'edon yaouankik, » eme ar chiminaou, « e oa er barrez ganeomp ur vaouez hag an holl dud o doa aon razi. En un ti-soul digenvez savet en un toull eus ar menez edo-hi o chom. Den ne dremene e-biou d'he zi ha ne dae-hi kennebeut e-kichen ti den ebet. Ne veze ket komzet outi p'en em gaved ganti war an hent. Ne lavare-hi ger pe geloù da zen ebet. Un druez e oa gwelout ar paour kaezh maouez o vont gant he hent ha hi bepred hec'h-unan-penn. »

94

« Piv eo ? » emezon d'am mamm ; « perak ne gomzer ket outi ? »

« Klev 'ta, va faotr, » a respontas va mamm, « hi eo ar c'hwil-derv. Ur vaouez villiget eo. »

« Petra he deus graet eta ha piv eo an hini en deus taolet ar vallozh warni ? »

« Ur beleg an hini eo a daolas ar vallozh warni, » eme va mamm. « Den, avat, ne oar petra he deus graet. »

Setu avat pezh a zeskis diwar he fenn pa voe ur paotr yaouank ac'hanon. Hag e gwir, tudou, ne glevis netra all nemet he doa graet ur pec'hed mezhus bennak e derou he buhez hag en doa taolet an Aotrou Person e vallozh warnezi dirak an holl abalamour d'ar pec'hed-se. Ur sulvezh, pedo an holl dud en oferenn, e troas ar beleg war o zu hag e lavaras :

« Bez' ez eus ur vaouez ganeomp a zo dellezek da vezañ daonet da viken evel kement hini a yelo en he c'hompagnunezh. Ha setu ma lavaran d'ar vaouez-se ez eo-hi ur vaouez villiget hag e c'houlennan ouzhoc'h chom hep kaout ken nebeut a zarempred ganti hag ho pije gant ur c'hwil-derv. Klev 'ta, c'hwil-derv, » emezañ, « arabat dit hiviziken daremprediñ an dud a zoujañs-Doue ! »

Sevel a reas ar paour kaezh maouez hag ez eas raktal er-maez eus an iliz. Ne voe graet anezhi, a-ziwar neuze, nemet « C'hwil-derv ». Ankounac'haet e voe he gwir anv hag he lignez. Lavaret e veze e oa sorset he daoulagad. Ma selle-hi ouzh ul leue pe ouzh ur penn-deñved bennak, mervel a rae al loen. Ne leze ket ar mammoù o bugale er-maez p'edo ar C'hwil-derv o vont gant hec'h hent.

Dimeziñ a ris, neuze, gant ur plac'h a-feson pa voe tizhet va femp bloaz warn-ugent ganin. Ur baotrezig vihan hor boe ha spi hor boa da gaout ur bugel all. Un deiz m'edon o troc'hañ mouded er yeun ha m'edo va gwreg o voueta ar yer war an hent setu ma welas-hi. Doue d'hor bennigo ha d'hor gwarezo ! - ar C'hwil-derv o tont war he zu hag hi o tougen hor c'hrouadurig bihan. Edo divrec'h ar plac'hig vihan e kerc'henn ar vaouez hag he doa houmañ lakaet he chal da c'holeiñ korf an hini vihan. Va gwreg ne rannas ger. Kemer a reas hor merc'hig en he c'herc'henn. Merzout a reas va gwreg e oa gleb he dilhad ganti.

« Petra 'zo c'hoarvezet dezhi ? » emezi.

95

« Kouezhet eo er poull. O klask lili-dour edo, moarvat, hag edon o tremen e-biou pa glevis anezhi o youlc'hal. Ha me ha mont dreist d'ar c'hleuz ha kregiñ enni hep muiken. »

« Ra vennigo an Aotrou Doue ac'hanoc'h ! » eme va gwreg. Hag ar vaouez kuit a-raok n'he devoe amzer da lavarout ur ger muioc'h. Kas a reas va gwreg ar bugelig e-barzh an ti evit e sec'hiñ hag e lakaat da gousket. Pa zeuio en-dro eus ar yeun e voe kontet din pezh a oa c'hoarvezet. Bennigañ a rejomp ar C'hwil-derv en noz-se.

Antronoz e krogas ar plac'hig vihan da gomz eus ar vaouez he doa he saveteet : « Edo an dour o tont em genou, em daoulagad hag em diskouarn, » emezi ; « gwelout a ris luc'hedennoù gwenn hag e klevis un trouz bras ; edon o risklañ, o risklañ pa santis ur vrec'h en-dro din ha neuze e lakeas ac'hanon en he c'herc'henn hag e pokas din. Soñjal a ris edon er gêr pa voen en he divrec'h hag he chal en-dro din. »

Daou devezh goude e verzas va gwreg n'edo mui ar plac'hig vihan war he zro. He c'hilask a reas e-pad meur a eurvezh. Pa zeuas-hi en-dro d'ar gêr e lavaras e oa aet da welout ar vaouez he doa he savetaet. « Gwestell he deus graet din, » emezi. « N'eus den ebet en ti o vevañ ganti ha neuze em eus lavaret dezhi ez afen d'he gwelout pep abardaez. »

Ne gavjomp, me ha va gwreg, ger ebet da lavarout en enep. Edo ar C'hwil-derv o paouez saveteiñ he buhez d'ar plac'h vihan ha ne vije ket bet mat mirout outi da vont d'he zi. A-ziwar neuze ez eas ar plac'hig vihan war lein ar grec'hienn bep eil deiz.

An amezeien a lavaras ne oa ket mat. Ur seurt douetañs a oa ganeomp ivez ne oa ket mat kennebeut nemet penaos mirout outi ?

Ha krediñ a rafec'h ac'hanon, tudoù ? A-ziwar an deiz m'he doa ar C'hwil-derv taolet he sell war ar plac'hig vihan e krogas houmañ da goazhañ, da goazhañ evel ma koazhfe un tan dilezet. N'he doa mui c'hoant da zebriñ. A-benn tri miz ne oa mui nemet ar skeud anezhi. Ur miz war-lerc'h edo-hi er vered.

Ar C'hwil-derv a ziskennas eus ar menez en deiz ma voe douaret. Ne voe ket lezet da vont e-barzh ar vered. Mont a reas kuit hag e kemeras penn hec'h hent er menez hec'h-unan. Truez em boe ouzh ar paour kaezh maouez rak e ouien ervat ne oa ket brasoc'h hor glac'har eget he hini. Kemer a ris va-unan hent ar grec'hienn antronoz vintin. Me a felle din lavarout dezhi n'hor boa, va gwreg ha me, tamall ebet da ober outi. Skeiñ a ris war an nor. Ne deuas respont ebet. Mont a ris tre. Ruz e oa ar regez war an oaled. Ne welis den. Merzout a ris a-benn ar fin ur gwele en ur c'horn. Mont a ris betek ennañ. Edo ar C'hwil-derv en he gourvez warnañ. Marv ha yen e oa.

A-ziwar neuze n'em boe chañs ebet na va c'hompagnunezh kennebeut. Mervel a reas va gwreg hag hi dougerez ur miz goude. Ar bugel ne vevas ket kennebeut. Ar c'hleñved a voe war va chatal er goañvezh war-lerc'h. Kaset e voen er-maez eus va atant gant ar perc'henn. Ha, bremañ, me 'zo ur baleer-bro gant hentoù Konnac'ht digor dirazon.

N'eus ken.

NOTENN. - P'edon o peurdreiñ an danevell-mañ ez on chomet sac'het ur pennad mat a amzer rak ne oan ket evit gouzout peseurt loen a c'helle en em guzhat dindan an anv « bó dé ». N'edo ket er geriadurioù am eus. Diskleriet e oa hepmuiken gant « god's horse » er « gerioù diaes » displeget e fin al levr gant Peadar O Dubhda. Gwashañ zo hemañ ne oa ket kennebeut er geriadurioù saoznek. Meur a hini a voe pedet ganin da glask petra an diaoul e oa ha ne gavjont netra. Skrivañ a ris, a-benn ar fin, d'am mignon Diarmuid O Laoghaire, s.j., a respontas din ne oa « god's horse » nemet ur fazi. « God's cow, » an hini e oa an displegadenn wirion. « Bó dé » a zo eta « buoc'h doue ».

" An dearg daol " (= Ar c'hwil-derf) a zo an eil danevell a gaver en eil levr kontadennoù savet gant Padraic Mac Piarais. Al levr am eus labouret warnañ a zo ar pempvet embannadur eus an oberenn a voe moulet e Dundalk e 1920. Roet e voe din gant Roparz Hemon ur wech ma'z is d'e welout e Brest goude bezañ kaset dezhañ troidigezh " Isagan ". Kinniget e oa bet dezhañ « le mór-mheas » gant ur Gouezel, Cilian O Brolchain e anv. Ar gontadenn gentañ a gaver el levr a zo " An Mháthair " (Ar vamm) he zalbenn. Troet e brezhoneg ganin e voe embannet gant " Barr-Heol ur gelaouenn aet da get n'eus ket pell ha n'am eus ket ehanet da gaout keuz anezhi abaoe. Kavet e vo war niverenn 47-48-49, Meurzh-Gwengolo 1966, gant un tamm kentskrid savet ganin ha, siwazh... kalz vioù-koukoug.

Gaston Latimier (1924-1980)

Deiz Merc'her-al-Ludu, 20 a viz C'hwevrer 1980, e oa bet beziet e bered Lokronan-ar-Porc'hoed, Gaston Latimier (Tonig an Timeur, evel ma plije dezhañ skrivañ), un den anavezet mat en Emsav, desket gantañ ar brezhoneg, hag unan eus paotred a-raok Romaneg Breizh-Uhelm, pe ar Gallaoueg, e-giz ma plij dezho lavarout.

Ganet e oa bet Gaston d'ar 24 a viz Meurzh 1924 e Langourla, ur barrez eus kanton Koadlinez, e bro ar Menez. Genidik e oa e dad eus parrez Gaoson, hag o labourat er post. Galvet e oa bet Aleksandr Latimier, tad Gaston, da resever an ti-post, da Lokronan, hag eno e chomas da labourat betek e retred, hag eno goude bezañ bet e retred e reas e chomaj gant e wreg en ti savet gantañ er Chabr, tre war ribl an hent kozh roman : Korseul-Gwened. Ne oa Gaston nemet daou vloaz bennak pa zeuas da heul e dad hag e vamm da Lokronan. N'eus ket ezhomm da lavarout n'en devoa soñj ebet eus e barrez c'henidik, hag e voe Lokronan e wir barrez. Ober e reas e studioù kentañ e skol vihan Lokronan, ha pa voe en oad diouzh se, ez eas da Lise Sant-Brieg d'ober e studioù eil derez. E Sant-Brieg en devoe Abeozen da gelenner war ar yezhoù klasel, methep n'en devije hemañ tamm levezon ebet warnañ e-keñver Breizh.

Goude e vachelouriezh, o vezañ ma oa akuit war an treserezh, ez eas da Skol an Arzoù-kaer da Roazhon. Met ne chomas ket pell eno, evit abegoù ha na anavezomp ket. Cheñch a reas hent neuze hag e teuas da vezañ skolaer. Skolaer e voe en enez ar Gerveur, ha da c'houde e teuas d'an Alre, da Vaod, ha da echuiñ e teuas da vezañ kelenner war ar saozneg e Lise Job Loth, e Pondi, hag eno e tremenas e Gapez (Capes). Pa oa en Alre e stagas da skrivañ traoù diwar-benn tud ar c'hornad-se, ispisial ar familhoù bourc'hizien, ha da zastum kontadennoù, e galleg hag e brezhoneg, chomet diembann met kempennet a-benn ar moulañ.

98

E C'HALVIDIGEZH

Emaomp o paouez lavarout en devoa dastumet kontadennoù brezhonek, e bro an Alre. Daoust dre benaos e oa deuet d'ar yezh ? Amañ e kavomp kudenn e c'halvidigezh, hag a seblant bezañ aes da zifuilhañ.

A-viskoazh e oa bet troet Gaston gant an « traoù kozh » hag ar « gallaoueg ». Ha setu end-eeun ar pezh a damalle e dad dezhañ : - Te 'zo troet gant kozh traoù kozh ! Petra a ri gant se ? An traoù-se a zo traoù tremenet pell'zo, ha n'eus ezhomm ebet da blediñ ganto. Gwell ez eo dit studiañ an traoù nevez, ar seurt a servijo dit, met en an' Doue, laosk a-gostez ar c'hozh traoù-se... Ha perak mont da goll da amzer gant « trefodaj » ? Galleg mat an hini ac'h eus ezhomm da zeskiñ ha n'eo ket galleg fall 'seurt a vez komzet e Lokronan.

Ma ! hep gout dezhañ en devoa Aleksandr Latimier dihunet en e vab ar c'hoant da enebiñ ! Ne droas ket e gein d'an « traoù kozh » ha ne laoskas ket an « trefodaj » a-gostez. Er c'hontrol.

Diwezhatoc'h avat, eo e teuas Gaston d'ar brezhoneg. Da heul e zarempredoù gant Dom Duchauchix... Hemañ a oa eus ur familh-vourc'hizien eus Lokronan, un den desket-tre, maer e barrez, ezel eus ar C'horsez, broadelour hag anaoudek war ar brezhoneg. War an diwezhadoù e tlee mont da vanac'h da Gergonan. Evitañ da vezañ manac'h e talc'he da gaout darempredoù gant tud-diavaez, dreist-holl broadelourien. War e leverer, e oa bet paket gant e briol lizheroù bet kaset da Zom Duchauchix. Bec'h a savas, hag ez eas hemañ da Abati en Uhelgoum, da Vro-Savoia e-lec'h ma tlee mervel d'ar 24 a viz Meurzh 1957 (dres pa oa Gaston o

skoulmañ e 33 bloaz !). Skrivet en deus Dom Duchauchix e vuhez hag emañ an dornskrid etre daouarn ar mouler gant un toullad kontadennoù dastumet gantañ e bro ar Menez, pe savet gantañ e-unan (1).

Tonket e oa da C'haston, evel just, ober anaoudegezh gant ur c'henvroad ken brudet. Hag hemañ eo a roas dezhañ da intent e oa bet, kent d'ar gallaoueg aloubiñ Lokronan hag ar Porc'hoed, ur yezh all o vleuniañ eno : ar Brezhoneg ha ne oa tu ebet da gompren istor ar vro, hep studiañ ar brezhoneg. Setu eta Gaston troet bepred gant e « draoù kozh » gant e « c'hallaoueg » o tivizout deskiñ brezhoneg !

99

War a seblant ez eo dreist-holl yezh Gwened eo a studias da gantañ : e Bro-Wened eo edo kelenner (Er Gerveur, en Alre, e Baod hag e Pondi). Ha kement-se a voe ur rikour evitañ a-benn diwezhatoc'h, rak pa oa bet marvet gwechall ar brezhoneg er Porc'hoed, e oa deuet da vezañ heñvel a-walc'h ouzh rannyezh Gwened, da heul un emdroadur naturel ; hag aesoc'h e voe da C'haston displegañ traoù 'zo e romaneg e vro c'henedik. Mestr a-walc'h e oa Gaston war ar yezh evit bezañ gouest d'he c'helennañ ha da dremen an arnodennoù d'an danvez-bachelourien. Ne c'heller ket koulskoude lavarout en devoa meizet ervat ijin ar yezh : un diazez bennak a vanke dezhañ evit bezañ barrek d'he skrivañ ervat. Met lenn ha kompren a oa ur c'hoari evitañ.

Ennañ eo e voe fiziet dornskridoù Dom Duchauchix da embann, ha setu dre benaos e teuas betek BARR-HEOL " Seurez Kerwenañ " hag ur gontadenn bennak ouzhpenn a voe lakaet e brezhoneg diwar ar galleg (2).

*

Setu m'am eus meneget anv BARR-HEOL. Plijet gant lennerien va digareziñ bremañ ma roan ul lodenn re frank d'am darempredoù personel gant Gaston.

Ne lavarinn ket deoc'h peur e oamp deuet d'en em zaremprediñ ha d'ober anaoudegezh an eil gant egile. Tu a vefe marteze da c'houzout dre furchal e-touez al lizheroù o ruilhal e tiretennoù va armelioù, met ne dalvez ket ar boan. Ur wech bennak e oa kroget Tonig da zegas keloù din ; ur wech bennak e oamp en em welet ha skoulmet mignoniezh leal ha feal an eil gant egile. Bet e oa du-mañ o lojañ meur a wech, gant e vab Ronan.

Troet e oa, na petra 'ta, gant kement a selle ouzh Keltia, ha desket en devoa un tamm kembraeg ; met gant e anaoudegezh war ar saozneg e c'helle donet ha monet dre ar broioù keltiek e-giz ma kare, gant e garr-dre-dan.

Er bloaz 1967 edo e Skol-Hañv Plaid Cymru, ha me a oa eno ivez gant an Aotrou Kalvez, e Dolgellau. En e vleud edo hag e vab Ronan a c'hoarie e n'ouzon ket peseurt yezh (en ur seurt esperanteg !) gant ar vugale all.

Ne c'helle ket, evel just, tremen hep klask anavezout Sent Keltia, eñ hag a oa ganet, pe savet da vihanañ, e-skeud ar Sant iwerzhonat-breizhat : Ronan ! Tamm-ha-tamm e savas ur Gouelier hir gant - anv kement, sant a c'helle da gaout. Diembann ez eo al labour-se, evel an darn vuiañ eus e skridoù.

100

BARR-HEOL a voe well-a-se eus e ampartiz war ar tresañ : sellit da skouer an niverenn 57, Gwengolo 1968, gant an titloù e lizherennoù brav-tre, hag a roe ur stumm dereatoc'h d'ur gelaouennig liesskrivet. Pa voe moulet BARR-HEOL dre offset e reas un talbenn a-ratozh hag a yeas da netra e berr-amzer ! dre... aked ar mouler !

E-keit ha m'emaon gant an tresañ, koulz eo din lavarout ez eo gant Tonig an Timeur eo e voe treset bez an Aotrou Kalvez (Doue d'e bardono !) ; hag evit ma vije skultet difazi an enskrivadur divyezhek ez eas betek ar vengleuz e-lec'h ma oa bet divrazet ar maen da sikour ar bikerien-vaen ha da verkañ e-unan al lizherennoù (3).

Kavadennoù an Timeur

Bremaik e raimp ur sell war labourioù Tonig war an Istor, met da c'hortoz setu ma rankomp ober ur sell war e gavadennoù. Div gavadenn eo a gomzimp diwar o fenn.

An hini gentañ eo an enskrivadur e henvrezhoneg en ur c'hoad bihan, e parrez Gomene, e-tal maner ar Wern (Les Aulnays). Eno war un dosennig ez eus pezhioù rec'hell ha war unan anezho e ouie ar bobl e oa kizellet gerioù ha ne oa gouest den ebet d'o lenn, na d'o c'hompren, evel just. D'ar sul 19 a viz Gwengolo 1965 eo e-kerz un droiad a-dreuz ar vro, e gwetur dre-dan, ma tizoloas Tonig an enskrivadur. Erru 'oa serr-noz pa lavaras dezhañ un den diwar-dro e oa un enskrivadur iskis war unan eus ar rec'hell. Setu ar pezh a voe kavet :

CEDPARTH SO.

An Aotrou L. Fleuriot, kelenner e Skol-veur Roazhon eo a zisklerias an enskrivadur :

CED = donezo, road, prof.
Parth = parzh, lod, rann.
So = an dra-mañ, kement-mañ.

101

Da lavarout eo « lod roet ez eo kement-mañ ». Ar furcherien a c'hello kaout war o hed, rentañ kont Tonig an Timeur, ha diskleriadur an Aotrou Fleuriot war ANNALES DE BRETAGNE, niv. 4, Kerzu 1969. Iskis a-walc'h ez eo galleg Tonig, met n'eus forzh ! Un tammig ez eo luziet e rannbennad diwar-benn orin an donezon-se, gant ar meneg a rae eus sent ar c'hornad ! Ne oa ket darev a-walc'h an traoù evit lakaat sklaer ar gudenn... Evit Latimier e oa bet roet al lodenn-se gant Grallon da venec'h Landevenneg, ispisial da Sant Wenaël en deus ur chapel war zouar Gomene end-eeun !

PAX, kelaouenn Landevenneg (niv. 85, Genver 1971) a zistaole kuit diskleriadur Latimier hag a venne klask tostoc'h da Landevenneg an donezon-se. D'hor meno ne vo tu ebet da ziskoulma netra, ken na vo prouet ez eo UNET (Saint) Lokronan an hevelep hini hag IDUNET Kastellin. Evidomp-ni ez eus aze daou sant disheñvel : Duned (cf. latin Donatus) hag Idunet (diwar ar brezhoneg kozh EIDDUNED = c'hoant, hegarat, karantezus). A-drugarez da labourioù all Tonig an Timeur n'eus ket kalz a riskl o kinnig lenn ivez Sant Duned evit Saint Unet : T ha D o vezañ troet en T en amzer ma komzed c'hoazh brezhoneg er Porc'hoed. Chapel Sant Wenaël, abad Landevenneg war-lerc'h Sant Wennole, ne oa ket bet savet e Gomene hep un abeg bennak. Gomene hag a oa gwechall eus eskopti Sant-Maloù a zoug un anv iskis a-walc'h o talvezout « Douar-Iliz » (Territorium Ecclesiaticum) (4) en deus tapet e anv evit un abeg bennak. Ha neuze evel ma verke ervat an Timeur emamp koulz lavarout war hent kozh Roazhon-Karaez. N'eus d'hor meno netra a-enep diskleriadur hor c'heneil, a gavomp gwell eget hini PAX.

An eil kavadenn graet gant Tonig an Timeur a sell ouzh ar « gallaoueg », da vihanañ ouzh ar yezh komzet e sitread Lokronan-Plouvaël : bez' ez eus er rannyezh-se kemmadurioù ! Biskoazh kemend-all ! Goulennet em boa digant Tonig studiañ a-dost ar c'hemmadurioù-se da glask dizoleiñ peseurt reolennoù a heulient. Allas ! nevez-kavet e oa an dra-se gantañ ha n'en deus ket bet amzer d'ober al labour am boa goulennet digantañ, ha c'hoazh, d'an eur m'emaon o skrivañ ar pennad-mañ, emañ bepred skridoù Gaston, e Roazhon... Kemmadurioù gwirion an hini ez int ha n'eo ket distagadurioù hag a zo diaes gouzout eus a belec'h e teuont, evel da skouer, lavarout « un gamion » e-lec'h « un camion ». Traoù all o tennañ a-grenn d'ar brezhoneg a gaver. Ur skouer hepken : *une berwée* o treiñ *berwadenn* (evel birviñ dilhad). Pa vo bet renket notennoù diniver G. L. e vo tu d'ar ouizieien da vont donoc'h war an dachenn-se a rankomp lezel a-gostez.

102

Enklaskour hag istorour

Adalek eñ bihan e oa troet G. Latimier gant an « traoù-kozh » evel ma lavare e dad dezhañ gant dispriz evit hen distreiñ diouzh studi an Istor. Gant e garg a gelenner ne oa ket aes dezhañ mont don war an dachenn-se. Evel kelenner war ar saozneg en devije fent o komz diwar-benn emgann Azinkourt (1415) hag o tezevell marc'heien an div gostezenn o kanañ pouilh an eil d'egile e galleg kozh (pa oa ar yezh-se yezh noblañs Bro-Saoz d'ar mare-se), da lavarout eo ur yezh o tennañ d'ar « gallaoueg » !

Meur a dra o sellout ouzh istor ar Porc'hoed, levezonet, ma oa Tonig gant skouer ha studiadennoù Dom Duhauchix, en devoa dizoloet, met un taol dic'hortoz a zlee ober dezhañ mont donoc'h er studioù-se. Bezet al lennerien ar vadelezh d'am digareziñ, rak amañ e rankan komz adarre diwar va fenn. Ha c'hoazh n'eo ket me a oa kaoz d'ar c'hemm-se, met bugale Skolaj Itron-Varia ar Sklerder, eus Plouvael pa c'houlennjont un deiz bennak diganin displegañ dezho holl anvioù-lec'h ar barrez ! Kontet em eus kement-se dija war VARR-HEOL (niv. 80, Meurzh 1974) ha ne dalvez ket ar boan moarvat adkontañ an istor. Bezet a vezo - daoust d'ar fazioù anat amañ hag ahont - e voe pennad Barr-Heol evit tud evel Tonig an Timeur un dizoloadenn a bouez. Un diazez start en devoa kavet d'e studioù e-unan. An anvioù-lec'h displeget da c'houde war an niverennoù war-lerc'h eus BARR-HEOL evel LANGASPRE (Langast-Bre), BERTON (Bre Togn), BRELOUVACHE (Bre al Louc'h Vas) PONT-ERRET (Pont an Teir Red) hag all hag all, a c'honezas diouzhtu e asant : ur brouenn ouzhpenn e oa bet brezhonek da vat ar rannvro en amzer dremenet. Frankaet ha ledanaet, resisaet hag ec'honaet war un dro tachenn e studioù. Hag e kavas ur c'henlabourer eus an dibab, ur beleg eus Plouvael, a bermeto din moarvat lakaat e anv e-kichen hini Gaston: Job Martin. Hag o-daou didrouz, divrud, met pennek-meurbet a stagas gant ul labour ramzel e gwirionez : dibluskañ pezh ha pezh taolennoù-douar Lokronan ha Plouvael, hep kontañ troioù-enklask un tamm e pep lec'h.

103

Diskouezet o deus da skouer e fazie pennskrivagner BARR-HEOL, pa lavare e oa *Langast* evit *Langall* (gwel. Barr-Heol, niv. 81, paj. 34 sg.). Evito, hervez an dielloù kozh, n'eus arvar ebet emañ ar wirionez gant tud evel F. Gourvil a oa a-du evit kompren LANN-KAST. Div Langast a zo eta : parrez Langast (stag bremañ ouzh Plouwinaz) ha neuze ar gêriadenn vras diazezet war gein ar Bre-Togn : LANGAS(t)-BRE. Fichennoù sof-kont, kartennoù ha tresadennoù a-leizh o deus savet o-daou (ken akuit an eil hag egile war ar seurt labour !); Hep mar ebet, ez eus kalz eus o martezeadennoù hag a vo dislavaret gant kavadennoù nevez. Met sur-mat e chomo sebedennet hag amgredik ar re a lenno al linennoù-mañ o klevout o deus bet Tonig an Timeur ha Job Martin savet diwar levrioù saoznek ha kembraek taolennoù-nested BREC'HAN, da skouer, hag adkavet anvioù diwar lignez ar BRYCHAN brudet-se, e Bro-Lokronan ha Plouvael.

Goude m' am boa bet graet al labour goulennet gant studierien yaouank Skolaj Itron Varia ar Sklerder eus Plouvael, em boa savet ur pennad e galleg mar plij evit ar person-kanton da lakaat war e gannadig-parrez. Ken batet e chomas ma ne embannas netra, dre ma kemere an holl draoù-se evit ijinadennoù diziazez. N'em boa ket muioc'h a chañs gant ar person a zeuas war e lerc'h ! Hemañ am boa pedet e 1976, bloavezh ar sec'hour bras, da c'houlenn digant an dud teurel evezh ouzh an traoù iskis e c'hellfent kaout en-dro d'o ziez pe en o farkeier, e-skeud an tomnder hag ar sec'hour ! Ma ! Koll a reas va notennig hag e voe kollet moarvat doareoù o devije mil-rikouret Tonig hag an Aotrod Martin en o enklaskoù.

Ret e vo gortoz (pelloc'h bremañ siwazh !) ken na vo embannet labour an daou enklasker kent bezañ gouest da varn an dalvoudegezh anezhañ. Met hep mar ebet, e vo ennañ traoù dic'hortoz-krenn. Ha pec'hed eo n'eus ket muioc'h a furcherien war an dachenn !

*

Kalz a draoù all a vefe da lavarout diwar-benn Tonig an Timeur, met ret eo dimp krennañ.

Plijout a rae romaneg Breizh-Uhel dezhañ hag eil prezidant Mignoned ar parlant gallaouek e oa. Setu Al LIAMM (niv. 198, Genver-C'hwevrer 1980, paj. 35 sq.), oc'h embann ur vurutelladenn kriz a-walc'h diwar-benn ar « gallaoueg ». Ma ! goude labourioù Tonig an Timeur, e kav din e c'heller keñveriañ Romaneg Breizh-Uhel ouzh ar Yezh komzet bremañ e Kernev-Veur. Yezh Kernev-Veur n'eo mui kerneveg ha n'eo ket saozneg kennebeut, met kalz a droioù kerneveg hag a c'herioù kernevek distaget en un doare iskis a zo ennañ. Piv a gredfe labourat da reiñ ton ha lufr d'an trefodaj saoznek-kernevek komzet e Kernev-Veur ? Talvoudek-tre avat, e c'hellfe bezañ ar studi anezhañ, ha plijus-tre ober gantañ E-giz-se, d'am meno, emañ kont gant yezh Breizh-Uhel, dreist-holl yezh rannvro ar Porc'hoed. Brasañ riskl a zo ez eo koufoniñ amzer, arc'hant ha zoken gouiziegezh o reiñ kement-se a don da yezh Breizh-Uhel, daoust ma'z eo mat ober gouelioù folklorrel a bep seurt da enoriñ ur yezh hag a zo abaoe kantvedoù yezh pemdeziek ar bobl, yezh o c'halon, yezh o darempredoù, ha zoken yezh o buhez don.

D'am meno ar pep talvoudusañ evit pezh a sell ar gallaoueg ez eo klask ennañ an testenioù gwellañ diwar-benn keltiegezh ha brezhonegezh Breizh-Uhel. Me ' gav din ez eo evel-se e wele Gaston an traoù.

Da glozañ

E-kreiz e splannder e oa Gaston pa oa bet kavet dilavar en e wetur en Oriant, skoet ma oa bet gant un taol-gwad, seizet ur c'hostez anezhañ : war e 56 vloaz edo. Darev e spered, don e zeskadurezh ha gouest da reiñ dimp oberennoù a dalvoudegezh. Evit darn ne seblante ket sirivus a-walc'h hag e rebechent dezhañ bezañ re dechet da heuilh e faltazi, re dechet da grediñ e-unan ar pezh en deveze faltaziet. Ya ! dre gomz ! Met a-hend-all e tiwalle mat da embann traoù diasur : klask-ha-diglask a rae, furchal-ha-difurchal en dielloù. Re verr, kalz re verr ez eo ar vuhez evit tud evel-se !

D'e obidoù e oa deredet tud a bep korn eus Breizh, dreist-holl eus Roazhon gant ar banniel Gwenn-ha-Du. Goude an oferenn e oa bet dichañset din lavarout un toulladig gerioù e brezhoneg, e-giz ma teree. Un dra bennak evel-hen am boa lavaret : « ...ar pezh en deus graet unvaniezh buhez hor mignon Gaston ez eo e feiz gwriziennet don en e greiz ; hag a-drugarez d'ar feiz-se eo en deus gallet harpañ e degouezhioù start e vuhez.

Ar pezh en deus graet unvaniezh e vuhez ez eo e garantez evit e vro c'henidik, evit ar c'hornad-douar-mañ eus ar Porc'hoed, ha war poent-se en deus heuliet skouer unan eus brudetañ bugale Lokronan : Dom Duhauchix. Bet eo Gaston un diskibl fidel da Zom Duhauchix ha setu perak en devoa hemañ fiziet ennañ e skridoù da embann un deiz bennak.

Ar pezh en deus graet unvaniezh buhez hor mignon Gaston ez eo e labour evit adkavout ar gwrizioù kristen o deus maget pobl ar Vretoned hag ispisial pobl ar Porc'hoed e-pad kantvedoù ha kantvedoù. Dreist-holl roudoù Sant Ronan, patron ar barrez-mañ, hag e-skeud Sant Ronan, sent Keltia a-bezh p'en deus savet ur roll hir anezho d'ober evel ur c'halander evit holl zeizioù ar bloaz : Sent Breizh, Kernev-Veur, Kembre, Iwerzhon, kalz anezho, ar memes re, evel Ronan an Iwerzhonad.

A-unan gant ur beleg troet eveltañ gant istor ar c'hornad-mañ, en deus bet dastumet notennoù prizioù o teurel ur sklerijenn dreist-ordinal war gornad Lokronan, Plouvael, Merenieg, Gomene, ha me 'oar. Un teñzor e vo an notennoù-se pa vint embannet.

Gallout a reomp, daoust d'hor glac'har, trugarekaat an Aotrou Doue eta, da vezañ bet roet dimp an den gouiziekañ-mañ, un istorour, ur c'hristen, evel an hini ez omp deuet da bediñ evitañ. Gras dezhañ da vezañ degemeret e kompagnunezh Sent

ar vro-mañ : Ronan, Derrien, Yegu, Mael, Sulien, Maeog, Gouenou, Santez Gwenn
eus Lantenag (5), Gwenael, Bran...

Doue d'e bardono ! »

NOTENNOU :

(1 - 2) Sinañ a rae RONAN KERMENE. Embannet en deus bet Barr-Heol ur gontadenn
diwar e bluenn, SEUREZ KERWENAN (eil mouladur 1971) gant ur rakskrid diwar zorn
T. an Timeur, hag ur stagadenn Chapeled ar Plac'h varv (troidigezh gant Jul
Gros).

(3) Gant an Timeur e voe treset taolennoù evit OTELLO (eil mouladur, diviet ;
eus ar mouladur kentañ 1959 e chom un nebeudig skouerennoù).

(4) L. Fleuriot : Geriadur Heuvrezhonek.

(5) Lantenag a c'hellfe bezañ evit Landanog. Faziuz eo an anv Lantenac evit ar
re n'anavezont ket ar vro. Lantenag a zo ur gêriadennig gant ur chapel gouestlet
da Santez Gwenn ; ha neuze ur c'hard lev izeloc'h war ribl ar stêr Lie edo an
Abati : Abati Lantenag.

E koun ur mignon kar-e-vro

E gwirionez, n'on ket bet alies fromet donoc'h eget d'ar meurzh 19 a viz Chwevrer p'en deus Jili Morin, paotr a-raok « mignoned ar parlant gallo », kemennet din dre bellgomz penaos e oa aet da anaon en deiz a-raok en Oriant, hor mignon ar stourmer mat hag ar Breizhad gredus Gaston Latimier.

Abaoe pell e oamp e darempred an eil gant egile. E-pad ar brezel, e Pariz, e ris anaoudegezh gantañ, e Kêr-Vreizh, 'm eus aon : ha klevet am boa anv anezhañ pellik a-walc'h a-raok. Hag abaoe, ret din lavarout, ahalamour d'an heñvelderioù a oa etrezomp : hevelep anv, hevelep oad, stumm diavaez a c'helle bezañ keñveriet aes, hevelep metoù ivez evel just, ez omp bet, a-hed hor buhez, kemeret alies an eil evit egile. Betek nevez zo, ne dremene ket ur miz hep na vefe pellgomzet evitañ. Ha zoken pa 'z eus bet kelou eus e varv ez omp bet c'hoazh kammgemeret an eil evit egile (lizher gourc'hemennoù kañv skrivet d'am gwreg, kamaraded d'am bugale o vont d'an obidoù).

Spi am eus e vo dastumet hag adembannet e dresadurioù, reoù 'zo pouezus evit istor an Emsav hag ivez plijus-kenañ rak donezonet kaer e oa war arz an tresañ*. Ret e vefe ivez gallout embann al labourioù a oa gantañ war ar stern. Un imbourc'her diouzh an dibab e oa, ennañ ur skiant lemm eus personelezh Vreizh. Soñj am eus klevout anezhañ, en unan eus ar bodadegoù dalc'het e Roazhon e sigur prientiñ ar Chart binniget, o kontañ d'e vignoned breizhuheliz pegen dudiet e oa o vezañ dizoloet en un doare resis pegoulz e oa aet ar brezhoneg da get en e barrez c'henidik.

* Peurvuiañ e sine T. an Timeur (T. evit Tonig, goude bezañ bet graet gant C'h... evit " C'haston "...). Gwelout ivez ar pennad dudius bet savet gantañ war Fañch Elies-Abeozen en niv. 100 Al Liamm, p. 368 (Gwengolo-Here 1963).

107

Ampart kenañ e oa ivez war ar saozneg, danvez e vicher kelenner : soñj am eus pegen souezhet e oa Kerlann - hag eñ koulskoude ur saozneger mat ivez - e-kerz gouelioù Bleun-Brug Kastell-Paol e 1948 o klevout anezhañ o tisplegañ d'un toullad Iwerzhoniz kudenn Vreizh en un doare entanet, ha leun a feiz hag a fiziañs.

Re alies en em sil c'hwervoni en darempredoù etre emsaverien. Pa sko kalet evel-se an tonkadur, neuze e komprener sklaeroc'h pegen tost ez omp an eil ouzh ar re all ha pegen kreñv e c'hell bezañ al liammoù breudeuriezh etrezomp. Mar gellfe marv trumm un den gwirion ha leal, ul labourer onest hag ur Breizhad start evel Gaston levezoniñ ac'hanomp, dimp da gas war-raok ar stourm gant ur spered digor ha komprenus ne vefe ket marteze peurgollet aberzh ur stourmer a oa evitañ Dazont e vro hag e bobl ar preder kentañ.

Un dro e Levraoueg ar C'hendalc'h (Washington, USA)

Pa dremener dre Washington e ranker mont da welout Levraoueg ar C'hendalc'h (The Library of Congress). N'eo ket darempredet kalz gant an douristed, evel m'eo an Ti Gwenn pe Bered Arlington, e-lec'h m'emañ bez John Fitzgerald Kennedy, ha koulskoude ez eo kalz dedennusoc'h ha talvoudusoc'h, d'am soñj. Levraoueg ar C'hendalc'h a zo moarvat an hini vrasañ dre ar bed ha kavout a reer enni ouzhpenn 74 milion a levrioù, dielloù ha skridoù. Plediñ a ra gant an holl dachenoù eus gouiziegezh mab-den ha mirout a ra frouezh e spered e meur a zoare, eus paperenoù-broenn an Egiptiz kozh betek ar mikrofilmoù a vremañ

Levraoueg ar C'hendalc'h a dalvez da gentañ da izili ar C'hendalc'h, senedourien ha kannaded ar Stadoù-Unanet, met levraoueg vroadel ar Stadoù-Unanet eo ivez ha kenlabourat a ra gant ur bern levraouegoù all en Amerika hag er peurrest eus ar bed. Talvoudus eo evit ar gelennerien, ar studierien, an arzourien, an imbourc'herien hag ar skiantourien, er Stadoù-Unanet hag en diavaez.

E 1791, un nebeut devezhioù hepken goude ma oa bet gounezet da vat o frankiz gant ar Stadoù-Unanet, e tivizas ar Prezidant George Washington krouiñ diwar netra ur gêr nevez, war ribl ar stêr Potomak, da vezañ kêrbenn ar vro en amzer da zont. Mervel a reas a-raok gwelout e huñvre deuet da wir met e anv a voe roet d'ar gêrbenn nevez-se. E 1800, pa oa John Adams Prezidant ar Stadoù-Unanet, e teuas Washington da vezañ kêrbenn ofisiel ar vro ha staliet e voe enni ar Gouarnamant hag ar Parlamant (ar C'hendalc'h). Evit titouriñ izili ar C'hendalc'h e voe krouet ul levraoueg ha prenet ur bern levrioù, an darn vrasañ anezho e Bro-Saoz. E 1812 siwazh e tarzhas ur brezel nevez gant Bro-Saoz hag aloubet e voe kêrbenn ar Stadoù-Unanet gant ar soudarded saoz. E miz Eost 1814 e voe tangwallet ganto ar C'hapitol, ar savadur a oa ennañ ar C'hendalc'h, hag al levraoueg vihan a yelas da ludu...

109

Ur miz war-lerc'h, avat, e kinnigas Thomas Jefferson e levraoueg personel evit adsevel Levraoueg ar C'hendalc'h. Prezidant ar Stadoù-Unanet e oa bet Jefferson hag edo neuze o vevañ war e leve. A-hed e vuhez, e-pad ouzhpenn 50 vloaz, en doa dastumet levrioù a bep seurt hag ar brud he doa he levraoueg da vezañ unan eus ar re vrasañ er Stadoù-Unanet. Pa oa bet o chom e Pariz, o labourat er c'hannaddi, en doa tremenet devezhioù ha devezhioù o furchal er stalioù-levrioù hag o prenañ kement levr a selle ouzh Amerika hag ivez levrioù war an holl dachenoù eus ar skiant. Goude divizoù hir ez asantas ar C'hendalc'h da ginnig Jefferson, e miz Genver 1815. E zastumadeg, enni 6 487 levr, a zeuas da vezañ derou ul levraoueg vroadel vras.

Hiziv e kresk buanoc'h-buanañ Levraoueg ar C'hendalc'h. Degemer a ra ouzhpenn 7 000 levr ha diell nevez bemdez hag en em astenn a ra bremañ he dastumadegoù war ouzhpenn 600 kilometrad a glenkadelloù. Kavout a reer enni 18 milion a levrioù, un drederenn anezho hepken e saozneg hag ar re all e 470 yezh all. Bez ez eus ivez enni 33 milion a zornskridoù, en o zouez paperenoù 23 Frezidant. Enni e kaver an dastumadeg vrasañ a gartennoù er bed, enni 3,5 milion a gartennoù hag a gartennaouegoù. Ret eo menegiñ ivez 4 milion a skridoù-sonerezh o vont eus ar sonerezh klasel betek ar rock 9 milion a luc'hskeudennoù hag engravadurioù, 250 000 film ha 3 milion a vikrofilmoù . (Evit keñveriañ gant levraouegoù Breizh ez eus 350 000 levr ha kelaouenn e levraoueg-kêr an Naoned, an hini vrasañ e Breizh, 260 000 e levraoueg-kêr Roazon, 100 000 e levraoueg ar C'hloerdi Bras an Naoned, 90 000 e levraoueg-kêr Kemper, 72 000 e levraoueg-kêr Sant-Brieg, h.a....)

Evit reiñ bod d'an holl binvidigezhioù-se ez eus bet savet eus 1889 betek

1897, e-kichen ar C'hapitol, ur savadur bras ha pompadus e doare an Azginivelezh italian, gant kizelladurioù, taolenoù ha livadurioù-moger niverus, bet graet gant 50 arzour amerikan. Brav-brav n'eo ket ar savadur-se evit un Europad met meurdezus eo koulskoude. Graet eo bet ar sal vras gant marmor italian penn-da-benn. Er sal-lenn pennañ e sav kreiz ar volz da 50 metrad a-us d'al leur ! Kavout a reer enni 44 000 levr-titouriñ, geriadurioù, kelc'h-ouiziegezhadurioù, kartennaouegoù, h.a..., hag ul lodenn eus ar c'hatalog pennañ, ennañ 20 milion a fichenoù. En trepasoù e vez diskouezet dornskridoù, tresadennoù, kartennoù ha levrioù divoutin. Tu 'zo da welout, da skouer, unan eus an 3 skouerenn anavezet eus Bibl Gutenberg, anezhañ al levr kentañ bet moulet er C'hornog gant lizherenoù distag, eus 1450 da 1455. Diskouezet e vez ivez un teñzor prizius all an hevelep mare, Bibl bras Mainz, bet skrivet penn-da-benn gant an dorn ha leun a dresadennoù kaer.

Kefridi gentañ al levraoueg a zo bezañ ur greizenn-gelaouiñ ha titouriñ evit ar C'hendalc'h. Ur rann ispisial anezhi a zo bet krouet 60 vloaz 'zo dres evit reiñ da izili ar C'hendalc'h an holl ditouroù o deus ezhomm anezho evit kas da benn o labour en un doare fur hag efedus. Respont a ra ar rann-se da ouzhpenn 300 000 goulenn bep bloaz, goulennoù eeun a-wechoù ha luziet-tre a-wechoù ivez. Prientiñ a ra krennadurioù eus al lezennoù nevez ha berradurioù eus ur bern danvezioù all evit mirout ouzh ar parlamantourien amerikan da vezañ beuzet gant an holl destennoù nevez a zeu er-maez bemdez. Kaset e vez da vat al labour-se gant ouzhpenn 800 den, en o zouez ijinourien, tud a lezenn hag arbennigourien (spesialisted) a bep seurt. O labour a zo reiñ da izili ar C'hendalc'h ditouroù resis, onest ha klok war ur bern danvezioù o tisplegañ ar perzhioù mat hag ar perzhioù fall eus pep tra. D'an dud dilennet gant ar bobl eo da varn ha da zivizout goude...

Met digor eo ivez Levraoueg ar C'hendalc'h d'an holl dud, a-hed ar bloaz, zoken d'ar sulioù ha d'an deizioù-gouel, nemet Nedeleg ha Kala-Genver. Pep hini a c'hell mont da labourat enni ha da studiañ levrioù ha dornskridoù (n'eo ket ken aes-se er " Bibliothèque Nationale " e Pariz). Bet on bet o furchal er c'hatalog hag o c'houlenn un nebeut levrioù am eus gallet studiañ, ha n'eo bet goulennet netra diganin, ket zoken va c'hartenn-anv. E pep lec'h ez eus evel just ijinenoù da ober luc'hskridoù (a vank en darn vrasañ eus hol levraouegoù e Breizh) ha tu a zo ivez da lakaat ober skeudennoù ha mikrofilmoù. Goude bezañ leuniet ur fichenn da c'houlenn ul levr ne c'hortozer ket re bell, etre 10 munutenn hag un eurvezh, hervez niver an dud a zo el levraoueg hag hervez al levr evel just. Tu a zo da zebriñ el levraoueg rak kavout a reer enni ur « snack-bar », ur gafeteria hag ardivinkoù da werzhañ sandwichoù hag evajoù. Marc'had mat eo pep tra ha tu a zo da verennañ evit 2 pe 3 dollar (8,50 - 13 lur gall). Ret eo lavarout ivez ez eus un ehanlec'h eus ar metro (nevez-flamm ha brav-tre) tost-tre eus al levraoueg. Aes-tre eo eta evit an holl mont da furchal ha da labourat e Levraoueg ar C'hendalc'h.

111

N'em eus tremenet enni nemet un nebeut eurvezhioù da geñver ur veaj verr am eus graet e miz Du er Stadoù-Unanet, met amzer am eus bet koulskoude da welout pegen pinvidik e oa danvez Breizh el levraoueg-se ha souezhus eo kavout enni levrioù diwar-benn Breizh ne gaver ket e levraouegoù brasañ hor bro evel re an Naoned pe Roazhon. Bez' ez eus ur bern levrioù brezhonek, ur bern geriadurioù, yezhadurioù ha levrioù diwar-benn ar brezhoneg ivez. Kavout a reer da skouer oberennoù Ar Brigant, La Tour d'Auvergne, d'Arbois de Jubainville, Ar Gonideg, Kervarker, Arzel Even, Frañsez Falc'hun, Yann Brekilien, Marsel Guieysse, Jorj Gwegen, Ronan ar Glew, Gregor Rostren, Viktor Henry, Emil Ernault, Jul Gros, Elmar Ternes, Harald Haarmann, William Smith, Bernard Tanguy, Christian Guyonvarc'h, Per Denez, D.W.F. Hardie, C. Uguen ha V. Seite, Wolfgang Dressler, Josef Loth, Kenneth Jackson, Frañsez Gourvil, Loeiz Herrieu, Erwan Berthou, Fañch an Uhel, Taldir, hag evel just ur bern levrioù bet skrivet gant Roparz Hemon.

Ur bern levrioù, kantadoù anezho, a zo ivez diwar-benn istor Breizh, hec'h ekonomiezh, he sevenadur, h.a... Ouzhpenn « Barzaz Breiz » Kervarker e galleg

hag e brezhoneg, e kaver e Levraoueg ar C'hendalc'h an droidigezh saoznek (« Ballads and songs of Brittany ») bet embannet e London e 1865 hag an droidigezh alamanek (« Bretonische Volkslieder ») bet embannet e Kologn e 1859. Bez' ez eus ivez ur bern levrioù diwar-benn kudennoù Breizh, bet embannet e broioù all. Gwelet em eus da skouer e oa bet embannet e Chicago e 1924 ul levr diwar-benn an darempredoù etre Breizh-Veur, Iwerzhon ha Breizh gwechall-gozh (« Early British relations with Ireland and Brittany », gant Clark Harris Slover) hag unan all dek vloaz 'zo e New-York diwar-benn kudennoù Breizh hag enkadenn ar renadur kozh (« The Brittany Affair and the crisis of the Ancien Regime », gant John Rothney). Bez' ez eus ivez ur bern levrioù bet savet gant istorourien eus Breizh-Veur diwar-benn istor hor Bro : Michael Jones, Nora Chadwick ha re all... Gwelet em eus ivez e oa bet embannet e Philadelphia e 1948 ur studiaden diwar-benn Markiz ar Roueri... Ne ran nemet menegiñ amañ un nebeut traoù bet kavet er fichennaoueg evit diskouez pegen pinvidik eo al levraoueg-se. Hep mar ebet ez eus kalz muioc'h a draoù c'hoazh da ziskoachañ.

112

Tu a vefe c'hoazh da venegiñ al levrioù-beajoù hag al levrioù-touristelezh bet skrivet diwar-benn Breizh rak kavet em eus ouzhpenn kant anezho. Souezhus eo gwelout niver ar Saozon hag an Amerikaned hag a zo deuet da weladenniñ hor Bro abaoe ur c'hantved ha zoken a-raok. Gant Fañch Morvannou e oa bet studiet, un nebeut bloavezhioù 'zo, an doare ma oa bet gwelet Breizh gant ar skrivagner gall Gustave Flaubert. Dudius-tre e vefe ivez studiañ an doare maz eo bet gwelet hor bro gant beajourien estren all abaoe 200 vloaz. Setu da skouer un nebeut titloù :

- « Breton folk : an artistic tour in Brittany » (Henry Blackburn, 1880
- « A look of Brittany » (Sabine Baringgould, 1901),
- « Narrative of a walking tour in Brittany » (John M. Jephson, 1859),
- « Brittany and the Bretons » (George W. Edwards, 1910),
- « Letters written during a tour through Normandy, Brittany and other parts of France in 1818 » (Mn Anna Eliza Bray),
- « King Arthur's Country » (Frederick John Snell, 1916),
- « A ramble into Brittany » (George Musgrave, 1870),
- « Cook's Handbook for Normandy and Brittany » (T. Cook & Son, 1898),
- « Shooting and Fishing in Lower Brittany. A complete and practical guide to sportsmen » (John Kemp, 1859), ha kalz re all...

E-touez al levrioù-touristelezh nevesoc'h ez eus evel just ur bern levrioù e galleg, e saozneg hag en alamaneg met souezhet a-walc'h on bet o tizoleiñ e oa ivez levrioù diwar-benn Breizh en izelvroeg : « Normandië en Bretagne » (Wil de Kreuk, 1970), « Gids voor Normandië en Bretagne » (Leonardus van Egeraat, 1968), e tchekeg : « Bretan, dcera oceánu », da lavarout eo « Breizh, merc'h ar mor » (Frantisek Koziuk, 1973), e svedeg : « Liten by i Bretagne » (Harriet Hjorth Wetterström, 1971) ha zoken e japaneg : « Burutanyu to Norumanji » (skrivet evel just e lizherennoù japanek) (Kikuchi Kazumasa, 1968)... Talvoudus e vefe gwelout petra a lavar levrioù-se diwar-benn ar brezhoneg, istor ha sevenadur Breizh...

113

E gwirionez n'em eus gwelet nemet ul lodenn vihan eus ar fichenoù a denn da zanvez Breizh ha sebezus em eus kavet, avat, pinvidigezh al levraoueg-se diwar an nebeut traoù am eus gwelet. Mat e vefe da furcherien pe imbourc'herien vreizhat mont da labourat e-pad un nebeut mizvezhioù pe un nebeut sizhunvezhioù da nebeutañ e Washington panevefe nemet evit sevel ur roll eus an holl binvidigezhioù a zo eno hag a c'hellfe talvezout da wellaat hon anaoudegezh eus istor Breizh, sevenadur Breizh hag ur bern danvezioù talvoudus all. Mont d'ar Stadoù-Unanet n'eo ket mui un dra diaes na koustus-meurbet. Aozet e vez ur bern beajoù « charter » etre Europa ha Norzamerika a-hed ar bloaz, dreist-holl e-pad an hañv ha tu a zo ivez da vont du-hont dre nijerezed Freddy Laker a ya bemdez eus London da New-York evit ur priz izel a-walc'h (1 400 F mont-dont). Ne goust ar veaj dre garr-boutin pe gant an tren eus New-York da Washington nemet war-dro 120 F hag e-keñver koust ar vuhez e Breizh hiziv n'eo ket mui ken uhel-se koust ar vuhez er Stadoù-Unanet dre vras. Keroc'h eo traoù 'zo met kalz marc'had-matoc'h eo traoù all. Talvoudus e vefe ivez moarvat mont da furchal e

levraouegoù all er Stadoù-Unanet evel hini Skol-Veur Harvard e Boston hag hini Skol-Veur Golumbia e New-York.

Frañsez Vallée

GRAND DICTIONNAIRE FRANÇAIS-BRETON

advoulet dre offset

Priz rakpren :

- 120 lur, 160 lur keinet, 290 lur gant ur c'hein ler

Kasit ho chekennoù da : Association Bretonne de Culture, 22, quai Dugay
Trouin, 35000 Rennes

En ur gantreal dre straedoù Budapest

Skeudennoù kaer meurbet a gaver forzh pegement er skridoù-bruderezh a vez strewet ken brokus gant ar burevioù-kelaouiñ-touristed e Breizh hag e lec'h all. Meur a hini eus al levrioùigoù skeudennet brav se am boa troet e bajennoù dezhañ a-raok erruout en Hungaria. Ur foto dreist-holl a zedenne va selloù : an hini o tiskouez gwel-meur Budapest da serr-noz. Gouleier diniver o lugerniñ a-hed riblennoù an Danub ; gouleier a-vil-vern o steredenniñ er pellder war dorgennoù Buda, betek trolinenn veneziek an dremmwel ; hag e-kreiz ar vantell varellet-se, monumantoù ar gêrbenn o sevel e-giz enezennoù ruz, gwer, melen, strinket warno bannoù sklerijenn gant pikoloù lampoù. Budapest by night. Kaer dispar ... « Ale, emezon, amañ eo bet troet re vrav an daolenn ganto evit bezañ gwirion ! Toulloù-trap an holl fotoioù-se ! Mat int da bakañ an douristed re c'henaouek. Dres evel ar c'hartennoù-post e Breizh. Taolennoù kaer, taolennoù jentil : tiez-plouz, brugeier, chapelioù puchet ar c'hlasvez. Breizh « Jos ». Breizh « Iris ». Nann, n'eo ket dre lagad boestig-poltrejañ Jos Kastellin e weler ar vro penn-da-benn e-giz m'emañ-hi. Ul lodenn eus ar vro nemetken. Al lodenn frealzus, c'hwennet mat al louzoù fall diouti. HLM ebet, labouradeg ebet o tivogediñ he loustoni chimik. Breizh di-vetoñs. Liv ar spern-gwenn ganti. Gant ma vo dornet mat paotr e g-Kodak e teuio n'eus forzh petra da vezañ ur burzhud. « Collectionnez les cartes postales ! » Ya, gouzout a ouzon. Memes boutik tout gant Budapest by night, kazi sur ! »

115

Soñjoù fall a seurt-se a oan o chaokat, ha me o klask va hent en ur vont a-dreuz d'an dud war gaeoù porzh-houarn *Keleti* e Budapest, da nav eur diouzh an noz. Mall a oa ganin gwelout peseurt neuz a oa war ur gêrbenn ha na anavezen nemet dre skeudennoù. Pignat a ris en un taksi. Heuliañ a reas hemañ un hir a voulouard, tres baliou bras Pariz gantañ. Ha tizhet ganeomp penn ar boulouard, setu a-greiz-holl an Danub dirazomp, hag ul lodenn vras eus ar gêrbenn astennet pell-pell, gant he gouleier o skediñ e pep lec'h hag he monumantoù sklerijennet flamm, kaer-sebezus, dres evel war al luc'hskeudenn ma oan bet o sellout outi ken diskredik. Evel e-kreizig-kreiz ar foto edon bremañ, ur foto ramzel, ledanaet he bevennoù dezhi betek menezioù an dremmwel.

Siwazh, ken buan all e steuzias ar gwel, gant an hejet-dihejet ma oan, rak va blenier e d-« ticheurt » melen a oa krog mat diaoulegezh ar sankañ-tizh en e groc'hen. Splujañ a rejomp ken buan dre ur straed dindan-douar ken e wic'he pneuioù ar Fiat bihan en ur gorntroiañ a-rez ar bevennoù betoñs. Sot-nay eo aet kalz blenierien daksi gant ar c'hondiñ e Budapest. Seblantout a ra din e vez ar sankañ-tizh un dra a bouez bras war ar vicher-se en Hungaria. Seul vuanoc'h e vez kaset ur c'hliant d'al lec'h m'en deus goulennet mont, seul vui e kresk brud-mat ar blenier. Ur gwir Istvan-koll-e-vara (*) a vefe graet eus unan a yafe re drankillik gant e hent 'm eus aon. Bemdez en deus trouz gwic'hus gweturioù-taksi o riklañ war ar pavez lakaet ac'hanon da skrijañ.

*

Ur gêrbenn ramzel eo Budapest, ouzhpenn daou vilion a dud o vevañ enni hag en he banlevioù, da lavarout eo tost d'ur c'hard eus poblañs ar vro. Ur stad kreizennet groñs a zo eus Hungaria abaoe pell. N'eus nemet sellout ouzh kartenn roued an hentoù-houarn evit merzout sklaer an dra-se. War-zu ar gêrbenn emañ an holl anezho o kas, dres evel e-barzh an Egzagon. N'he deus hini ebet eus kêrioù all ar vro en tu-hont da 200 000 a annezidi. Herrus-dall eo aet poblañs v-Budapest war gresk, pa soñjer ne oa nemet 1 300 a dud o chom enni e fin ar 17vet kantved ha 35 000 e fin ar 18vet !

(•) Istvan = Stefan pe Sten : sant-paeron Hungaria ha poblekañ anv-badez evit ar

baotred.

116

Betek 1873, n'eo ket ur gêr hepken a oa eus Budapest. Teir ne lavaran ket : Buda, Obuda ha Pest. E 1848-1849 dija, da geñver emsavadeg vroadel Hungariz a-enep da Aostria, e voe unanet ar c'hêrioù-se a-benn dont da vezañ kêrbenn Republik zigabestr Hungaria, a-hed un nebeut mizvezhioù. Pest-Buda a voe graet eus o c'hêrbenn gant an dispac'herien.

Goude hirbrederiañ hag hirdermal e voe fur a-walc'h an impalaer yaouank Frañsez-Jozef evit reiñ en-dro he frankizoù da Hungaria. Dre an tamm skiant en doa prenet e ouie ervat ne vije peoc'h ebet endra ma chomfe Hungariz o tispac'hañ. Furoc'h e oa eta skoulmañ un emglev ganto. Evel-se e voe graet e 1867. Impalaer Aostria ha roue Hungaria war un dro e teuas Frañsez-Jozef da vezañ. Dindan an anv a « Impalaereded Aostria hag Hungaria » pe « Monarkiezh aostriat hag hungariat » e voe anavezet ar Stad nevez diwar neuze.

Div gêrbenn a vije eta : Wien ha... Pest ? Buda ? Pe... ? Ret mat e oa da Hungariz kaout ur gwir gêrbenn. Abalamour da se e voe unanet Pest, Buda hag Obuda prestig goude. Hag evel ma vez troet aes a-walc'h pobl Hungaria da vezañ un tamm mat a lorc'h enni eo ur gêrbenn eus ar re gaerañ an hini a felle dezho kaout... seul vui ma oa bremañ pobloù sujet dezho o chom e-diabarzh harzoù o rouantelezh emren : Slovakiz, Roumaniz, Kroated...

Tisavourien, kêraozourien, ijinourien-liorzhoù, a stagas hardizh gant o labour stummañ-kêr. War vord ar stêr eo ur parlamant ramzel an hini a voe savet diouzh patrom hini Westminster, met brasoc'h c'hoazh eget hini ar Saozon, ha nevez-gotek e zoare evel ma oa ar c'hiz e broioù 'zo e dibenn ar c'hantved diwezhañ. Lakaat an dud da grediñ e oa koshoc'h an traoù eget natur setu pezh a glasked ober, dres evel ma vije bet Hungaria chalet kenañ gant an diouer a savadurioù testenius d'o istor en o bro ! Ha ret anzav o doa kerzhet an traoù ganto war o zu mat gant an diaes m'eo d'an estrañjour hiziv an deiz divinout eo er bloavezh 1902 e oa bet peurechuet ar savadur-se, neuz un iliz-veur eus ar Grennamzer warnañ !

Kentañ linenn-vetro Kreiz-Europa a voe digoret e 1896, da-geñver milvet deiz-ha-bloaz diazezadur Hungaria. Mod-se e vefe aesoc'h d'ar vicherourien mont mintin mat d'o labour... Nann ! mod-se e vefe trankiloc'h ar vourc'hizien en o c'harterioù, a lavar an teodoù fall... E-lec'h mont bemdez dre ruioù kran an dud a-feson e tremenfe dindan-douar ar vicherourien o dilhad gros ! Bezet e vezo e voe Frañsez-Jozef e-unan an hini a voulc'has beaj kentañ an tren bihan. Bagon prenn-akajou an impalaer-roue a c'heller c'hoazh gwelout e Luna-Park, nepell diouzh penn al linenn.

118

*

Evel ma felle da Vudapestiz kaout en o c'hêrbenn delwennoù testenius d'o istor e voe kroget da sevel, e 1896, ur monument a reer "Millenniumi Emlékmű" anezhañ da lavarout eo " Monument ar Milved " a oa en e gefridi eñvor milvet deiz-ha-bloaz diazezadur Hungariz e plaennoù an Danub. N'eo nemet er bloavezhioù tregont e voe kaset da benn al labour avat. Bez' ez eus anezhañ ur bodad delwennoù war varc'h, o tiskouez donedigezh marc'hegerien hungariat er vro, er bloavezh 896. Evel ma oa rannet pobl an alouberien etre seizh meuriad eo seizh marc'h a zo ivez er vandennad, unan evit pep penntiern-meuriad.

119

Awenet kaer e oa bet an arzour, rak troet int o seizh war-zu ar c'huzh-heol. Oc'h arvestiñ ouzh ar vro dirazo emaint. Setu Tétény, Ond, Kond, Elöd, Huba, Tas hag Arpad, ar penntiern meur, an hini a ra Hungaria « Tad ar Vro » anezhañ. Seblantout a ra lavarout : « Hemañ, va Breudeur, eo an douar hirc'hortozet a dalvezo da vammvro d'hor pobl ». Petra a ouezer diwar o fenn ? Nebeut a dra e gwirionez. Fetisoc'h c'hoazh eget hini ar Vretoned eo henistor Hungariz. Gwechall gozh e oa anezho katreerien o vevañ diwar magañ loened war

ar plaennoù-geot divent en em astenn a-c'haoliad etre Europa hag Azia. Lod eo Hungariz, evel Finlandiz, Estoniz ha Kareliz, eus ur rummad pobloù a reer « finnat-ougriat » anezhañ. Abalamour da se eo e vez komzet en Hungaria ur yezh disheñvel a-grenn diouzh yezhoù all Kreiz-Europa.

Un delwenn all, kalz disteroc'h he ment, a gavan don he c'helenn. En tu all d'an Danub emañ, e Buda, war Dorgenn ar Chastell, e-kichenig-kichen an Hotel Hilton. War-zu ar c'hornog eo troet marc'hegerien « Monumant ar Milved » ; war-zu ar reter eo troet an daou zen a weler ar wech-mañ. Daou vanac'h a zo anezho — daou zominigad. Faezh-marv, dinerzhed-naet int o-daou. O trabidellañ emañ an eil, ur ur vrec'h astennet gantez war-zu ar reter ; war benn e zaoulin emañ egile, oc'h en em ruzañ war an douar ; c'hoant a zo dezho o-daou da dizhout pal o beaj a-raok mervel. Notennet em eus pezh a c'heller lenn e traoñ an delwenn, war blakennoù engravet e c'hwec'h pe seizh yezh :

« E 1235 e kemeras penn an hent an dominigad Juluan, gant tri c'henvreur dezhañ, a-benn adkavout an Hungariz chomet e bro o c'havell. Goude meur a drubuilh ez eas en-dro da Hungaria daou eus e gervreudeur, tra ma varve an trede, Gerhardus e anv, a-raok tizhout ar pal. E-unan penn e tiraezas Juluan ar Volga, war-dro ar v-Bakiri ; eno e voe adkavet gantañ Hungariz ar Reter. Met e 1237, da geñver e eil veaj, ne voent ken adkavet gantañ : lazhet e oant bet gant Mongoliz. Bez' ez eus eus an Tad Juluan ar c'hentañ beajour europat en dije pourchaset diwar-benn Mongoliz titouroù a c'heller fiziout enno. »

Diskouez a ra kement-mañ o doa Hungaria dalc'het soñj eus bro o c'havell ouzhpenn tri c'hant vloaz goude bezañ bet graet o annez e plaennoù Kreiz Europa.

*

120-121

Diaes eo evit ar weladennerien merzout sklaer eo bet savet en ur ober ur c'hantved al lodenn vrasañ eus ar gêrbenn-mañ, a reer alies « Rouanez an Danub » anezhi. Oberenn ur bobl a-bezh a zo eus Budapest, ur bobl a felle dezhi diskouez d'ar bed holl e chomfe bev kousto pe gousto.

Gant ur varrennig-stagañ ez eus bet dalc'het da skrivañ anv kêrbenn Hungaria pell amzer : BUDA-PEST (distagañ : Bouda-Pécht). Reizh e oa ar varrennig-stagañ a dra sur, rak disheñvel eston eo an div rann eus ar gêrbenn. E tu ar sav-heol d'an Danub emañ Pest, kompez rik he zachenn. Amañ eo e krog ar plaennoù divent en em astenn betek an harzoù gant Roumania, war div drederenn eus gorread ar vro. Puszta (distagañ : Pousta) a reer anezho, ur seurt ger-alc'houez hag a zo brudet tre er broioù estrañjour. Ar c'hontrol bev eo e Buda, e tu ar c'huzh-heol d'an Danub, kement a uhelennoù, a dorgennoù, a rozioù a zo. En ur vont eus Pest da v-Buda e tremener diwar neuze eus Hungaria gomez da Hungaria zigomez. Tiez Buda a weler strewet e pep lec'h e-touez ar gwez hag al liorzhoù. Kenkizoù bet savet gant tud pinvidik etre an daou vrezel-bed a zo alies eus an tiez-se. Liv ruz o zoennoù o varellañ ar c'hlasvez a zegase din da soñj torgennoù Euskadi a-wechoù.

E Buda emañ koshañ karter ar gêrbenn, pintet war un dorgenn. Kelc'hiet a vogerioù emzifenn eo ar c'harter, ha pa vezer o kantreal dre e straedoù strizh e kaver warnañ neuz ur vourc'h kozh a-ziwar ar maez. Livet eo ar mogerioù e melen, e glas, e ruz... evel k'eo ar c'hiz e Kreiz Europa, ha lod eus an tiez a zo dorjoù-porz dezho, e-giz ma vijent prest da reiñ bod da garradoù foenn pe da vroevioù barrikennoù. Anat eo e vourr kenañ an douristed o pourmen e Buda Gozh ; n'eo ket souezh diwar neuze ma 'z eo bet savet amañ un Hotel Hilton nevez-flamm, rak ne vezer ket figus ken en Hungaria war wenneien an estrañjourien binvidik.

*

An ostalerioù eo kentelius mont da guriuzennañ war o zro. Darn anezho eo modern-tre o stumm ; darn all eo *belle époque* a-grenn o doare, o vezañ ma'z int bet savet war-dro 1900 evit noblañsoù Kreiz Europa a yae di da bareañ o

c'hleñvedoù dre an « dour a vuhez », e-giz ma lavared gwechall, rak brudet eo Budapest evit he stivelloù dour tomm abaoe an Henamzer. Pinvidien broioù Kornog Europa o deus kemeret plas noblañsoù gwechall. E-kichen an hotelioù a-feson e weler o c'hirri-tan postek Mercedes-où hag all. Alamaned ar c'huzh-heol, Suisiz hag Aostrianed a zo anezho dreist-holl. E trowardroioù an hotelioù bras e kustum paotred dispart tremen-distremen o klask fred. Dollaroù, lurioù gall pe saoz da eskemmañ e kuzh ? 50 % muioc'h a förint (*) eget na roio deoc'h ar bank-stad ! Studieren a c'hell bezañ alies eus an drokerien-se, c'hoant dezho dastum a-walc'h a « voneiz kreñv » evit tremen didrabas o vakañsoù e broioù ar C'hornog. Ha pa vo un den war ho seulioù o lavarout deoc'h a-daol tak e pleg ho skouarn : « Kognak ? Pepper-mint ? » e ouezoc'h ez eus boutailhadoù hini-kreñv evidoc'h e-barzh ar sac'h a zo gantañ en e zorn, gant ma plijo deoc'h eskemmañ gantañ un nebeut eus ho lurioù prizius. Met gwall risklus e vez evit Hungariz an eskemmadegoù-kuzh-se, o vezañ ma 'z int bet difennet groñs gant o gouarnamant.

(*) Förint (distagañ : Feuri'nt) = moneiz Hungaria.

122

A dra sur e ra ar Stad hungariat he gounid eus prizioù ker-ruz al lojeiz e-barzh an hotelioù bras ; e-leizh a zollaroù hag a zeutchmark a zired puilh e-giz-se en he c'hefioù. Met fall put e vez seurt doareoù evit pezh a sell ouzh an darempredoù etre an estrañjourien ha tud ar vro. Diouzh gweturioù cheuc'h an douristed pinvidik a gustumont gwelout e-kichen an hotelioù bras e vez techet re a Hungariz da grediñ diwar skañv ez eus ur paotr-e-Vercedes eus pep estrañjour o tont eus broioù ar C'hornog. Gwall nec'hus e kavan-me an dra-se.

E-barzh hotelioù eil klas eo e vez kaset « breudeur » ar broioù komunour da lojañ : Tcheked, Slovaked, Poloniz, Roumaniz, Alamaned an DDR, hag all. Ha tud ar C'hornog neuze, penaos e vezont lojet pa vez re doull o chakodoù ? Tachennoù kamping a zo e-leizh evito, ha dre chañs ez eus tu ivez bremañ da lojañ e ti Budapestiz e-pad an hañv. Pemp mil pe dek mil kambr bennak a zo e-giz-se, div pe deir gwech marc'hadmatoc'h eget re an hotelioù etrevroadel ; setu un diskoulm dereat da gudenn gasaus al lojañ evit an douristed a zo re zister o « zalvoudegezh ekonomikel » !

*

123-124

Hag an tiez-debriñ ? A bep seurt a vez kavet e Budapest. Mat e vez ar boued. Ha marc'hadmat war un dro : etre div ha teir gwech gwelloc'h marc'had eget e Breizh. Erfin... evit un estrañjour da nebeutañ. Evit tud ar vro, eo diaesoc'h gouzout. Disheñvel kenañ eo sistem ekonomikel ar broioù komunour diouzh hini Europa ar C'hornog ; ret e vefe gouzout pegement e vez gopret ul labourer-douar pe ur micherour, peseurt dregantad eus he gopr e kustum dispign ur familh bep miz evit paeañ he lojeiz, evit prenañ dilhad, evit reiñ deskadurezh d'ar vugale, hag all ; ha neuze, e vefe tu da c'houzout ha marc'hadmat pe get e vez ar boued hag ar predoù en tiez-debriñ. Re ziaes e vije bet din ober ar gont, met diouzh ar restachoù a welen e-barzh asiedoù an dud war-lerc'h ar predoù, ne soñj ket din e vefe ar boued ur gudenn er vro-se. Ur pred en un ostaleri a-feson en Hungaria ne goust ket keroc'h eget unan e-barzh ur self ordinal e Breizh. Setu un nebeut prizioù am boa notennet e miz Eost 1978 :

- Tomatez e-giz digor-pred ; da c'houde : kig bevin ha legumaj ; ur gouign evit echuiñ ; hag ur voutailhadig bier da evañ : 55 Forint (= 11 lur). An ostaleri ne oa ket unan kran ; unan madik a-walc'h e oa koulskoude.

- E-barzh un ostaleri pobl bremañ unan a yae micherourien hag artizaned ar c'harter da zebriñ enni : un asiedad kig bevin gant riz, un tamm formaj-laezh hag ur banne bier : 34 Ft. 50 (= 7 lur).

- E-barzh un ostaleri kempennet bravik he sal-debriñ : saladenn ; asiedad kig ha patatez ; div grampouezhenn hag ur voutailhadig bier : 50 Ft. (= 10 lur). Un ostaleri slovakiat e oa ; kalzik anezho a gaver en Hungaria ha n'eo ket

souezhus peogwir emañ Slovakia e-kichenig-kichen. War a seblant e vefe ar c'hrampouezh ur meuz giz-ar-vro e Slovakia kerkoulz hag e Breizh ; gant laezh-goedennek e-barzh e oa bet servijet an div grampouezhenn din.

- E-barzh ur self bremañ : ur seurt yod patatez ha kig drailhet mesk-ha-mesk hag un asiedadig saladenn : 12 Ft. (= 2 lur 40). Ur pred all er memes self : ur skudellad soubenn ha da c'houde prun e-barzh dour sukret : 16 Ft. (= 3 lur 20).

Pa lavaran « soubenn », n'eo ket forzh peseurt hini. A bep seurt « soubennoù » a c'heller dibab en ur self en Hungaria. E melloù skudelloù e vezont servijet. Pezhioù tammoù kig a vez kavet e-barzh, mesk-ha-mesk gant legumaj. Pezhioù tammoù druzoni ivez ... ha seul varc'hadmatoc'h ar self, seul vrasoc'h an tammoù-se, 'm eus aon ! Ken fonnus e vez ar soubennoù a seurt-se ma talvezont da bred da dud 'zo - ar re ne vez ket gwall stank ar Förint en o godelloù ! Ur skudellad soubenn, un tamm bara, ur gouign vihan, hag echu.

125

Un nozvezh e oan o koaniañ en ur self bras. Chom a rae ar glianted ziwezhañ da stranañ un tammig. Mont-dont a rae ur vaouez gwisket paourik eus an eil taol deben en ur riñsañ ar restachoù a chome war an asiedoù ; daou sac'h plastek a oa ganti en he dorn ; e-barzh an eil ez ae an tammoù kig, hag e-barzh egile ar fritez. Ur paour-kaezh mamm-gozh a rae memes mod ivez, met drol e oa aet he fenn ganti un netraig ; mont-dont a rae eus an eil taol d'eben, eus an nor d'ar c'hontouer, mont a rae er-maez ha dont a rae en-dro e-barzh, he sachad restachoù ganti en he dorn, atav en ur vouc'hoarzhin ouzh ar glianted, ouzh an implijidi, ouzhin-me. Daou baotr, rok a-walc'h an tamm anezho, am eus gwelet ivez o riñsañ an asiedoù ; war-dro ugent vloaz e oant ; ur fritezenn diwar an asied-mañ, un tamm tartezen diwar ar plad-se, hag int-i kuit er-maez.

An tiez-debriñ marc'hadmatañ ne vez skrivet nemet " *Etterem* " war o zalbenn : diginkl int ha ral a wech e vez gwelet estrañjourien e-barzh. Pa vez skrivet "Restaurant " pe " *Etterem-Restaurant* " e sinifi e klask an ti sachañ klianted estrañjour en ur ober gant ar ger etrevroadel-se. Gwelloc'h dibab un ti-debriñ gant *etterem* skrivet warnañ ; aesoc'h a se e vez an arboellañ-gwenneien. Met pebezh torr-penn lakaat ar paotr servijer da gompren petra hoc'h eus c'hoant kaout da zebriñ ! Hen anzav a ran : teuziñ gant ar bec'h am eus graet meur a wech. Ma 'm bije komzet alamaneg e vije bet kalz aesoc'h din bezañ komprenet, o vezañ ma 'z eo gouest ur maread a Hungariz da gomz pe da zistripañ ar yezh-se. Siwazh din, ne ouezan ket kontañ en tu-hont da bemp an alamaneg... ha c'hoazh ! Evit ar galleg ne servijas ket din muioc'h eget... ar brezhoneg ! Gant ar saozneg e c'heller mont d'ar studier-mañ-studier... met e-barzh un *etterem*, se 'zo un afer all ! Dre chañs em boa prenet ur " Guide de conversation français-hongrois " embannet e Ti Garnier. Plijadur forzh pegement a oa bet ganin e-barzh an tren a-raok erruout, gant ar sot e kaven traoù 'zo e-barzh levrig Ti Garnier : « Faut-il laisser sa canne au vestiaire ? » (pajenn 120) ; « Je voudrais une pèlerine en caoutchouc avec capuchon » (p.157) ; « Je voudrais une paire de caleçons en zéphyr » (p. 158) ! Diouzh ar c'hiz un drugar ! Gant pajennoù ar boued e kouezhe va bizig em dorn ivez : « Donnez-moi un bifteck au beurre d'anchois » (p. 88) ; « Donnez-moi du ragoût d'oeie » (p. 91) ; « Donnez-moi un artichaut cru » (p. 92) ! Droch da stagañ neketa ! Marteze, ya, met glas e c'hoarzhis-me war an dachenn ha gras e kavis kaout va levrig ganin daoust pegen iskis e oa !

126

*

Peurechu eo bremañ marevezh glac'harus ar stalinourien, an hini « houarn-ha-dir » ma veze ar boblañs a-bezh gwisket gant botoù-galochoù ha mantilli gwer, griz pe liv-kistin - en ho tiviz ! « Marx adskrivet gant Kafka », evel ma lavare Georges Aranyossy. Bremañ e vez kavet marc'hadourezhioù e-leizh ken e stalioù kreiz kêr, ken e stalioù ar banlevioù, hag ar renkennadoù tud o lostenniñ dirak dor ar baraer pe hini ar c'higer a zo deuet da vezañ « imajoù Epinal » 'm eus aon. Gwir e oa c'hoazh pemzek vloaz zo, met n'eo ket gwir ken hiziv an deiz en

Hungaria.

E Pest emañ an darn vrasañ eus an tiez kenwerzh, eus ar burevioù, hag eus al labouradegoù. Doare ur gêrbenn gapitalour a vez alies ganti. Stank ha bouzarus e vez monedone ar c'hirri-tan ; kaout un « oto », setu huñvre gaer al lodenn vrasañ eus an dud, un tammig evel er bloavezhioù 60 en hor broioù-ni ; ur Budapest diwar zek en dije kaset da benn e c'hoant, pezh a zo a-walc'h evit leuniañ ken stank ha tra ar straedoù. Amañ ivez eo bet gounezet ar re yaouank gant ar « chadennoù stereo » japanat a weler e stalioù Hi-Fi ar balioù bras. Souezhet e vezer o welout nag a dud a vez gwisket en o faroñ. Plijout a ra kenañ d'ar re yaouank bezañ diouzh ar c'hiz... ar c'hiz Jeans evel just ! Seurt dilhad a vez graet en Hungaria, met anvioù « amerikan » a vez roet dezho : Jordan's hag all, na petra ta ! Krog eur ivez da begañ skritelloù kenwerzhel ouzh ar mogerioù ; met n'int ket a vent vras evel ar re a gaver e broioù ar C'hornog. Embann a reont perzhioù mat ar gompagnunezh-stad-mañ kompagnunezh, pe reoù marc'hadourezhioù ken dic'hortoz ha tra : Coca-Cola hag e vreur bihan Pepsi, « made » o-daou en Hungaria, ha Nivea, ar c'hoaven-rousaat dispar !

E straedoù 'zo e kreiz Pest ez eus bet kempennet gwitrinoù a-zoare evit sachañ dollaroù an douristed : stalioù arzoù-kaer, stalioù-artizan, stalioù dilhad, hag ivez levrديوù o werzhañ albomoù skeudennaouet kaer diwar-benn livadurioù Michel-Angelo, Rembrandt hag all ; troet eo al levrioù-se en alamaneg, saozneg, galleg pe italianeg ha gwerzhet ken ker ha du-mañ, pezh a zo kalz, o vezañ ma vez marc'hadmat kenañ al levrioù hungarek : war-dro teir gwech marc'hadmatoc'h eget re embannerien Bariz.

127-128

Sabatuet-mik e vezo meur a hini, sur a-walc'h, o welout a-dreñv gwitrin stalioù dilhad 'zo, mantilli feur a 20 000 pe 25 000 förint, da lavarout eo 5 000 lur nevez ; petra a soñj micherourien v-Budapest eus an dra-se ? Moarvat n'eo ket kalz a dra seurt prizioù evit ur vondianez estrañjour, met en ur Stad a embann ken dichek ha tra ez eo an ingalded he reolenn-stur e c'hell kement-se lakaat unan da brederiañ !

Ya, siwazh, dont a ra an triñchin end-eeun da heul ar pour. E-kichenig-kichen ar straedoù bev-birvidik ez eus straedoù trist-marv. Souezhus eo pegen buan e tremener eus an eil re d'ar re all. Stal ebet ken amañ, ha liv ar glac'har war ar mogerioù, dislivet gant ar glaveier. Pizh-lous e vezer war ar pentur er-maez ar straedoù a-feson. Ha pa zeu an noz, eo paour kaezh ampoulennoù hanter-zic'hastet a skuilh ur goulou melen-lous, pouez an anken gantai. Daou du a zo gant Budapest : an hini flamm hag an hini melen-lous. An eil o klask gwiskañ egile. En aner ! O klask kuzhat darvoudoù skrijus an istor - re 1956 ha re all. En aner ? Pelec'h emañ ar gêr wirion ? Tu-ha-tu ? Pe tu-pe-du ?

En ur vro evel Hungaria n'eo ket an traoù ken plaen, ken heñvel-heñvel hag e vefed troet da grediñ. Da skouer ? E-kichen an Danub, an Hotel Gellért, ur gwir balez : poull-neuiñ en-adreñv, kirri-tan pompadus ar glianted en-araok. Adal d'an hotel, Szabadsag-Hid, Pont-ar-Frankiz. E-kreiz ar pont, astennet war ar riblenn-straed, e vranell ouzh e gichen, ur paour-kaezh den o c'houlenn an aluzen. Ral a wech e weler klaskerien-vara e Budapest, koulz eo din hen anzav. Met seul rouesoc'h e vezont gwelet, seul vuioùc'h a se e vezer chifet. Un dallez a chomo pell amzer he zristidigezh engravet em spered. E digor ar metro edo. Ur vaouezig korfet moan, bazh wenn an dud dall en he c'hichen. Chom a rae en he sav, difiñv, harpet ouzh ar voger, evel seizes holl gant safar an engroez, boz he dorn damserret, evel pa vefe krog mezhenni o c'houlenn an aluzen. Reuzeudik ha balc'h e oa war un dro, evel ar re o deus ranket soublañ d'o flanedenn. Ha goulennet he doa bezañ sikouret ? E-barzh peseurt burev difoutre, e-barzh peseurt fichennaoueg euzhus, e-barzh peseurt ordinateur dinatur e oa sachet he faperennoù-goulenn-sikour ? He faperennoù-goulenn-justis !

129

Degas a ran da soñj edo ar glaskerez-vara e digor hentoù dindan-douar ar metro, rak metro Budapest n'eo ket forzh peseurt hini. Kêriz a vez un tamm mat a lorc'h enno abalamour d'o metro. Nevez-flamm eo linennoù 'zo : meinmarbr e pep

lec'h ha ken propr al leurenn ken ne vefec'h ket evit lezel un tamm paper bonbonoù war ho lerc'h. Gwir livenn-gein kêr eo deuet ar metro da vezañ ; bez' ez eus anezhañ an aesañ hent evit mont eus an eil tu d'an Danub d'egile. Ha daoust dezhañ da vezañ un tammig pompadus e zoare ez eo ken marc'hadmat ha tra mont gant an tren bihan dindan-douar : ur pezhig ur förint - da lavarout eo 20 sañtim hepken - a lakaer dre ur faoutig a-raok treuziñ ar gloued. Ur förint e koust ivez mont gant an tramgirri ; stank eo roued ar re-mañ e Budapest, pezh a zo aes-kenañ. Met ne vez ket gwerzhet a dikedoù e-barzh ar bagonioù ; ret eo prenañ karnedoù anezho er stalioù-butun da skouer. Boestigoù a zo e-barzh ar bagonioù ; lakaet e vez an tiked en ur faoutig ha bountet war un dornell evit ober toulloù e-barzh... Erfin, e-giz-se e tlefed ober ... met ur ral eo e vefe ken « mazokist » an dud ! Pegen plijus mont-dont dre ar gêrbenn evit ur bennozh-Doue !

Mont a ra mat en-dro an tramgirri, ar busoù hag ar metro e Budapest. Er porzhioù-houarn avat, se 'zo un afer all ! Da nebeutañ e porzh-houarn Keleti, an hini brasañ. Evit her c'hompren mat, n'eus nemet ijinañ e vije lakaet engroez porzh-houarn Montparnasse e-barzh hini Roazhon ! En ur vont e-barzh e sav heug ennoc'h, dreist-holl pa rankit mont a-dreuz d'an dud gant malizennoù. Kasedoù-mirout-pakadoù a zo a-gantadoù, sur, met leun chouk int an holl anezho. Mont d'ar virerezh-pakadoù neuze ?... An dra-se eo am boa klasket ober evit disammañ va divskoaz. Siwazh ! Tud a vagadoù o doa lakaet en o fenn ober ar memes tra, tud yaouank dreist-hall : Hungariz, Poloniz, Slovakiz hag all. Un eur diwezhatoc'h edon atav o lostenniñ, hag e komprenis, gant euzh, n'em boa ket graet an hanter eus an hent c'hoazh !

*

130

Ur farsus a dren bihan a zo war uhelderioù Buda. Pell diouzh kreiz kêr emeur eno ha war harzoù ar maezioù dija. " Uttöröóvasut " (dist.: Outteurreuvochout) a reer anezhañ, da lavarout eo " Tren bihan an difraosterien yaouank " - pe ar « bionierien » ma karer gwelloc'h. Er broioù komunour e reer « pionierien » eus ar vugale hag eus ar grennarded a zo e-barzh an aozadur ofisiel savet a-ratozh-kaer evito ; doare ar « skouted » a zo tamm pe damm ganto, skouted a vefe roet un ideologiezh-stad da lonkañ dezho ! Ganto e oa bet savet al linenn etre 1948 ha 1951 ; ur seurt skol « deskiñ en ur ober » a oa eus ar chanterioù-se eta, pezh ne oa ket sot. Hiziv c'hoazh e vez graet war-dro an tren bihan gant pionierien etre 12 ha 14 vloaz, eus mestr ar porzhhouarn d'ar gward-kloved, eus ar gwerzher tikedoù d'ar c'hontoroller tikedoù, hag eus ar c'hontoroller tikedoù d'an touller tikedoù. Gant yaouankizoù e vez kaset an traoù en-dro war-bouez unan : ur c'hanfard savet un tammig re a gof outañ... blenier ar marc'h-du, paket gantañ e hanter-kant vloaz ! Gwisket e vezont gant lifre ar bionierien : bragoù ha porpant gris, seizenn-c'houzoug ruz ha boned evit ar baotred ; brozh ha chupenn gris, boned, berrloeroù gwenn... ha seizenn-c'houzoug ruz ivez evel just, evit ar paotrezed.

Un tamm a folkloraj a vez ganto 'm eus aon ; mil digarez a vez kavet a-hed an devezh evit ober ar salud-soudard. Bep tro ma kuita an tren ur porzh-houarn e chom mestr an ti hag e « implijidi » en o sav sonn war ar c'hae : salud-soudard blenier ar marc'h-du da bionierien ar gar, salud-soudard touller-tikedoù ar bagon da werzher-tikedoù ar gar, hag all hag all ha vice versa. N'eus fin ebet d'ar c'hoari-saludiñ, ha pa lavaran « c'hoari » n'eo ket tamm ebet ar ger a dlefen implijout : un dra eus ar re sirusañ e seblant bezañ evit ar bionierien. Ha gwelloc'h d'ar beajour chom hep lakaat e dreid war ar bank dirazañ pe e vo kanet ar gousperoù dezhañ gant an touller-tikedoù

Met gwall hir e vez ur seurt dervezh labour evit bugale hag un tamm mat a ebatoù a oa gant tri pe bevar anezho, war-dro c'hwec'h eur diouzh an abardaez, e porzh-houarn penn al linenn an eil gwech m'on aet gant an tren bihan. O c'hoari toull-kuzh edont. Met a-greiz-holl, setu ur c'hwitelladenn skiltrus, hag an holl bionierien o tifoupañ a bep lec'h hag oc'h en em lakaat a renkadoù war ar c'hae. Un tregont bennak anezho a oa. Mont a refont d'ar paz betek ur porzh bras dirak ar gar, ur paotr tapet gantañ e bemzek pe e c'hwezec vloaz en o fenn. Eno, e

chomjont en o sav-(sonn evel just !) dirak ur peul bras gant banniel Hungaria war e varr. Youc'hal a rejont a-bouez-penn « Bevet ... (n'ouzon ket petra) » meur a wech ; diskennet e voe ar banniel ; ha goude se, d'ar paz adarre betek ar predlec'h.

131-132

Un dra 'zo am souezhas : an estrañjourien, ne oa ket kalz anezho e tren bihan ar bionierien ; bez' e oa eus ar veajourien tadoù ha mammoù deuet da bourmen gant o bugale, pe Hungariz deuet da Vudapest da douristañ. Seul blijusoc'h a se e veze ar pourmenadennoù. E-leizh a goadeier a zo war uhelennoù Buda ; eiltiez a zo ivez - teurvezit kompren : barakennoù bihan gant un tamm liorzh en-dro dezho. Un dudi, ken evit kêriz o jardinañ, ken evit an treniad beajourien o tremen gorrek.

*

" AUGUZTUS 27 " (27 a viz Eost), setu pezh a lennen war ur skritell a welen e holl stalioù Budapest - ur skritell e pep gwitrin. Bannieloù Hungaria ha bannieloù ruz a welen war un dro dispaket a-hed ar pontoù war an Danub, ha poltredoù « Tadoù ar Reveulzi gomunour » war c'horre al labouradegoù. D'ar sul 27 diouzh ar mintin e komprenis gwelloc'h penaos e oa kont : ur gouel brogar ha komunourgar a oa tamm pe tamm gant ar gouel. Urzhiet mat e oa bet an traoù ; pep hanter-kant metr a-hed kaeoù an Danub e oa bet staliet taolioù da lec'hioù-evañ : Pepsi-Cola ha dourioù-frouezh, rak ur bobl vras a dud a oa da servijañ ha tomm e oa an amzer. An implijidi a oa bet gwisket pep a flotantenn wenn ganto.

War an Danub eo e oa bet kaset an traoù en-dro. Ul lestr-ged, gant poltredoù « Tadoù ar Reveulzi gomunour » warnañ, a voulc'has an arvest, ha war e lerc'h e voe, e-pad un eur, un dremenadeg a vagoùigoù, bagoù, bagoù-dre-dan, dagoù-saveteiñ, bagoù-dilestrañ, pep a strollad soudarded e-barzh, pep a vanniel Hungaria hag a vanniel ruz o stlakal warni, hag evit klozañ e voe un diskennadeg parachutisted a-us d'ar stêr.

133

Setu un arvest plijus evit an tadoù, ar mammoù hag ar vugale, ur gouel brav evit an douristed, ha da gentañ penn re ar C'huzh-heol... ha ma teufe soudarded an dremenadeg da vezañ gwir soudarded, ha parachutisted an diskennadeg da vezañ gwir barachutisted ? Petra a c'hoarvezfe ma teufe ar soubenn da drenkañ da vat etre broioù ar C'hornog ha re « Emglev Varsovia » ? Daoust ha gwelet e vefe Hungariz, paket e-barzh ar roued soviedel, ha Breizhiz, e-barzh an hini amerikan, oc'h en em zistrujañ ? Yalta... Yalta... pegeit c'hoazh e vo ampoezonet Europa gant an hêrezh a gañv hag a c'hllac'har ?

Evit an 200vet niverenn
GOUEL AL LIAMM
e Pondi d'ar Sul 29 a viz Mezheven

Evit ar wech kentañ
un geriadurig brezhonek-saoznek
ELEMENTARY BRETON-ENGLISH DICTIONARY
gant R. DELAPORTE
embannet gant Cork University Press, 1979
110 pajennad
35 lur + 10 % mizoù kas, digant Yann Desbordes
1, Pl. Ch. Peguy, Poullbriant, 29260 Lesneven
c.c.p. Denis 1499 51 Rennes

C'hoariva brezhonek

Krog eo STROLLAD C'HOARIVA AR VRO-BAGAN da c'hoari dirak an dud NOMENOE-OE, bet savet gant Jakez Riou war-dro ar bloavezhioù 1935 hag embannet en e bezh evit ar wech kentañ er bloavezh 1941 gant *Skrid ha Skeudenn*. Din-me da c'houzout ez eo ar wech kentañ d'ur strollad bennak displegañ an oberenn vras-se e brezhoneg. Tammoù anezhi avat a zo bet c'hoariet en hemañ-lec'h meur-a-wech. N'eus ket keit-se ez eus bet unan bennak o skrivañ en " *Telegramme* " (Aux 4 Vents de la Culture bretonne) ez oa bet c'hoariet Nomenoe e Kemper er bloavezh 24. Diaes ve bet moarvat p'oa ket skrivet c'hoazh. E galleg avat ez eo bet displeget meur-a-dro gant STROLLAD YANN MOIGN, an TPB hag en deus kempennet ivez GURVAN AR MARC'HEG ESTRANJOUR.

Gant Ar Vro-Bagan eta ez eo bet c'hoariet evit ar wech kentañ d'ar c'hentañ a viz Meurzh e Tremenac'h, war barrez Plougerne el lec'h m'emañ diazezet ar strollad abaoe bloaz 'zo. Da c'houde se ez eo bet displeget e Kêr-Vrest, e Porsall, e Montroulez, e Gwiseni, e Brignogan, e Plouider ha Kleder, Etre ar c'hwec'h gwech kentañ eo un 1 100 bennak a dud eo o deus bet tro d'arvestiñ ouzh ar pezh. Lakaat a ran niver an dud rak un dra bouezus eo klask gwelet eus ur bloaz d'egile penaos ez a an traoù en-dro, pe war-raok pe war-gil e vefe. Endra m'emañ niver ar vrezhonegerien o vont d'an traoù emae e riskl da welet niver an arvesterien oc'h ober kemend-all. Diaesoc'h-diaes degas tud d'ar c'hoariva brezhonek hag evel-se e ranker poaniañ muioc'h-mui d'o dedennañ. Er pennad-skrid a oa bet savet er gelaouenn " *Breizh* " diwar-benn hor strollad er mizioù du ez oa bet chomet meur a fazi. N'eo ket evit 6 bloavezhiad-c'hoari eo hon doa bet 11 000 a arvesterien, ar pezh ne vefe ket kalz, hogen evit ar bloavezh 78-79 an hini oa.

135

Ar c'hazetennoù eo a zo da damall a-wechoù ma ne vez ket kalz a arvesterien da abadennoù zo. Ne reont ket atav al labour a zo en o c'harg : kemenn an abadennoù ha rentañ kont war-lerc'h rak a-bouez-bras eo d'an dud gouzout pe eo bet brav pe get, pe ez eus bet forzhig tud pe get. Kement-se a c'hell reiñ c'hoant da dud all da vont da welet ar pezhioù-c'hoari. Kalz a gazetennerien evit gwir a ra fae war an traoù brezhonek, na pa ve bet 400 a dud en un abadenn. Kement kig-ha-fars pe " *cyclo-cross* " avat a vezo glabouset forzh pegement diwar o fenn. Ha pa zeuy an douristed er vro neuze ! Aïou ! Paour kaezh brezhoneg !

Er mizioù da zont e vezo tro da welet NOMENOE e meur a lec'h : 16 ha 17 a viz Ebrel en Irvillag hag e Plabenneg evit Gouel ar Brezhoneg. D'an 31 a viz Ebrel war-dro Kastellin. D'ar sul lañ Mezheven er Releg e-kichen Montroulez, goude lein. Goude se e Plougastell, Bro-Dreger, Kernev, Leon, hag all...

N'emañ ket en va soñj displegañ amañ penaos ez eo bet kempennet ha c'hoariet NOMENOE ganeomp. Diwezhatoc'h marteze e vezo graet. D'an dud da zont da welet a-raok. Gant ar pezh-mañ da vihanañ atav ne vezo ket feuket an hemañ-hen. Gant BUHEZ MIKAEL ez oa chomet kuzhet meur a hini. Ar pezh n'en doa ket miret outo komz ha prezeg forzh !

Karout a rafen hepken embann amañ da heul un nebeut kuzulioù evit ar c'hoariva o deus talvezet deomp evit aozañ pezh-c'hoari Jakez Riou.

C'HOARI PEP HINIENN

Pep c'hoarier, pa vez o c'hoari pezh, a rank soñjal e 4 dra :

- peseurt lec'h en deus er pezh-c'hoari, pe en arvest-se eus ar pezh ;
- peseurt rôl pe perzh en deus da c'hoari ;
- soñjal er re all a zo o c'hoari asambles gantañ
- soñjal en dud a zo o sellet ouzh ar pezh.

I. - Peseurt lec'h en deus er pezh ?

Bez ez eo ur pezh-c'hoari un dra glok. Pep tamm eus ar pezh a rank bezañ stag mat ouzh an tammoù. Pep tamm a rank harpañ an tammoù all ha n'eo ket o distrujañ. Pep c'hoarier er pezh a zo un tamm eus ar pezh hag e rank kaout skiant eus ar pezh penn-da-benn pa vez o c'hoari anezhañ. Heñvel-mik ouzh ur soner a vefe o c'hoari ur pennad-sonerezh.

136

II. - Peseurt perzh en deus da c'hoari ?

Pep c'hoarier en deus desket ur perzh pe meur a hini. Ret eo dezhañ chom er perzh-se, chom en den-se, keit m'en deus d'e c'hoari. Arabat dezhañ dont er-maez eus e berzh pe mont en unan all. Na pa vefe o komz pe o c'hoari, pe difiñv ez eo ret dezhañ bevañ war al leurenn heñvel ouzh ar perzh m'emañ o c'hoari. Setu aze perak ez eo ret-mat da bep hini anaout mat e berzh, soñjal ennañ alies, bevañ gantañ. Lod a gustum skrivañ buhez ha trivliadennoù o ferzh evit mont aesoc'h a se ennañ.

Techoù fall a zo da zilezer. Alies ar c'hoarierien a ra an hevelep jestroù, forzh peseurt den e vefent o c'hoari, forzh peseurt trivliadenn o defe da ziskouez. Setu perak ar c'hoarier a rank soñjal ennañ e-unan ivez. En em c'houlenn : « daoust penaos e c'hoarian, peseurt jestr a ran, daoust ha mat a ran, ha sklaer eo ar pezh a ran ? ». En em lakaat eta un tammig er-maez da sellet outañ e-unan o c'hoari ; en em anaout mat, santout pep tamm eus e gorf o vevañ. Ur c'hempouez a zo da dizhout etre chom mat er perzh ha chom mestr eus e bersonelezh evelkent. A-wechoù evel just e teu ar perzh da vestroniañ ar c'hoarier penn-da-benn.

Ar c'hoari a rank bezañ sklaer hag anat, da vezañ komprenet diouzhtu na pa ve dilavar. Un drivliadenn a zo da ziskouez, da vevañ. Ur jestr a rank bezañ eeun, fraezh hag anat. An droug, ar joa, an dipit, ar vezh ne vezont ket c'hoarier heñvel. Alies e vez ranket ober ouzhpenn war ul leurenn, da lavaret eo muioc'h eget a reer er vuhez. Hogen an dra-mañ a zo hervez an doare-c'hoariva a reer.

III. - Soñjal er re all a zo o c'hoari asambles gantañ.

Pelloc'hik e vezo komzet diwar-benn ar pennad-mañ

IV. - Soñjal en dud a zo o sellet.

Kaout a ra din ez eo graet ur pezh-c'hoari evit an arvesterien ; ouzhpenn ar blijadur o devez ar c'hoarierien evel just. Pa ne vez ket taolet evezh ouzh ar sellerien e vez anat diouzhtu. Ur pezh fall liammet mat gant ar sellerien a vezo kavet gwelloc'h ha plijusoc'h gant kalz eget ur pezh mat, met pell ha distag.

137

Reiñ a ra ar c'hoarierien ur c'hoari ha komzoù d'ar sellerien. Ar c'hoari-se a rank bezañ komprenet ha kavet plijus, plijus o vezañ amañ ar c'hontrol eus enoeüs. Gouzout sellet ouzh an dud, bezañ tost outo, c'hoari ha komz evito, o c'hemer da dest, reiñ dezho da gompren e ouezer emaint aze.

Respont a ra an dud d'ar c'hoari : bamet, estonet, plijet sioul, plijet da c'hoarzhin, feuket, spontet, mantret, enouet... Ret eo d'ar c'hoarier santout kement-mañ, en ur selaou, en ur sellet, en ur santout ar saliad tud oc'h analiñ.

A-wechoù e vez ranket respont d'an dud : adlavaret, c'hoari sklaeroc'h pe buhezecoc'h...

Ar c'hoari graet evit an dud ha gant an dud. Liammañ ar sellerien ouzh ar c'hoarierien. Stagañ ar sal ouzh al leurenn. Reiñ ha resev. Krouiñ un aergelc'h a genlevenez (simpatiezh) er sal. Stourm kalet ouzh an enoe.

AR C'HOARI A-STROLL

I. - Ret eo d'ar c'hoarier taoler evezh ouzh ar re all a zo o c'hoari gantañ.

Arabat d'ur c'hoarier kuzhat pe vougañ c'hoari ar re all. Arabat kennebeut all e ve mouget pe guzhet gant ar re all. Mat eo en em zispartiañ e doare pe zoare diouzh ar re all pa vez o c'hoari pe o komz, evit ma vefe sklaer an traoù. Mat eo ivez gouzout en em lakaat en ur vandenn evit harpañ c'hoari unan bennak all. Arabat e vefe daou c'hoari disheñvel asambles war al leurenn, rak an dud ne ouzont ket da vat pehini heuliañ. Nemet e vefe c'hoant da ziskouez meskaj, ha c'hoazh ar meskaj er c'hoariva a rank bezañ renket tamm pe damm.

II. - Ret ea dezhañ taoler evezh ouzh ar lec'h m'emañ o c'hoari.

Da lavaret eo penaos e wel an dud ar pezh a zo war al leurenn ; renkadur ar c'hoarierien war al leur-c'hoari. Arabat e ve kuzhet lod, arabat e ve toulloù re vras, arabat e ve mesket, arabat e ve re gempouezet a-wechoù. Ar renkadur-se a zo un dra vev ; fiñval a ra.

138

III. - Arabat d'ar c'hoarier chom difiñv ha diseblant war al leurenn pa ne c'hoari pe ne gomz ket da vat. Ret eo bevañ ar pezh a zo o tremen, ar pezh a ra hag a lavar ar re all, e-giz ma vefe ar wech kentañ dezhañ d'o gwelet ha d'ho c'hlevet. Arabat kennebeut all ober re kuitez da sachañ re selloù an arvesterien diwar-goust an hini a zo o komz.

AR GOMZ HAG AN DISTAGADUR

I. - An traoù lavaret a zo da vezañ klevet ha komprenet.

A se e ranker komz kreñv a-wel d'an dud, goustad ha distagañ fraezh. Gant ar genou hag ar gorzenn e komzer ; o digeriñ mat. Ar gomz a rank bezañ bevet. Ne leverer ket « kaoc'h » er c'hiz ma leverer « va lellig ». Ar jestr ivez a rank harpañ ar gomz. Gouzout implijout an alan evit komz, gouzout pelec'h alaniñ. Arabat bezañ unton, gouzout peur pouezañ war ar gerioù. Pa vez troet e gein gant ar c'hoarier e rank komz distagetoc'h ha kreñvoc'h c'hoazh. Arabat e ve re a ziforc'h en ur strollad etre komz ar c'hoarierien : re greñv pe re wan.

II. - Soñjal en dud pa vez o komz.

Komz evit an dud ha santout an dud o selaou ar c'homzoù. A-wechoù pa c'hoarzhont e vez ranket gedal a-raok kaozeal. A-wechoù all e vez ranket lavaret en-dro pa ne vez ket bet klevet. Arabat e ve kollet ur ger hepken er pezh.

III. - Soñjal er c'hoarierien all ivez pa vez o komz.

Arabat ober trouz pa vez un all o komz. Arabat e ve daou o komz asambles, d'unan anezho da ziskregiñ. Pa vez un dra da lavaret asambles : komz fraeshoc'h evit ma vefe klevet ha komprenet, ar pezh zo diaes bras. Pa vez trouziou enrollet pe graet a-ratozh eo ret komz kreñvoc'h ivez.

Kement-mañ ne deo nemet kuzulioù-diazez. Lod anezho a c'heller kemeret abeg enno, rak meur a zoare a zo da gompren arz ar c'hoariva. Anat meurbet e hañval ar c'huzulioù-se bezañ p'o lenner. Pa bleustrer avat ne vezont ket anat atav.

Diskouez a reont ez eo ar c'hoariva ur vicher a ranker da zeskiñ ha prederiañ warni.

139

* * *

KELEIER DIWAR-BENN AR STROLLADOU C'HOARIVA BREZHONEK ALL

Emañ *Strollad Beilhadegoù Treger* oc'h echuiñ gant abadennoù ar goañv e Bro-Lanuoñ. Lod eus e bezhioù-c'hoari a zo bet embannet gant " Brud " pe " Ar C'helenner ".

Strollad C'hoariva Penn ar Bed en deus displeget warlene BITEKLE bet savet gant Gwilhou Gergourlay. 2 abadenn skinwel a zo bet savet diwar ar pezh-se, renket evit ar skinwel. D'an 8 a viz Mae e c'hoario ar strollad-se e bezh nevez O CHESUZ skrivet gant Kergourlay adarre, o kontañ e doare furlukin buhez Hor Salver.

Kroget en deus *Strollad Karaez* da zisplegañ MARION AR FAOUEZ, ar pezh-c'hoari nevez o deus troet ha kempennet diwar ar galleg. Kendalc'h a ra *Strollad Plougin* da c'hoari LOAN BLEIN PE MARC'H LIMON bet savet a-stroll ganto. Lod eus ar strollad-se a zo o kempenn GORSEDD-DIGOR Jakez Riou gant lod eus ar Vro-Bagan.

Strollad Lanhouarne ha Ploueskad a zo, m'eus aon, oc'h aozañ meur a bezh-c'hoari, unan anezho o vezañ AR C'HLERON diwar ur skrivagner brezhonek.

Mont a ra atav en-dro strolladoù traoñ Kernev, *Biskoaz-kement-all* hag hini Ar C'hap, hag ivez hini Youn Kraft eus Kemperle. E Bro-Wened a gav din emañ oc'h aozañ un dra bennak hag e Plouider ez eus ur strolladig oc'h ober sketchoù. Mont a ra hor c'hoariva war-raok eta. Prestik e c'hellimp ober un eil Festival ar c'hoariva brezhonek.

*

Chomlec'h nevez : AR VRO BAGAN, Ti-Tremenac'h, Kreac'h-ar-c'hamm, 29232
PLOUGERNE
pe skrivañ da Goulc'han KERVELLA, 10, straed an Dr Lefebvre, 29210 MOUTROULEZ.

AVELIOÙ-TRO

(Meurzh-Ebrel 1979)

1 a viz Meurzh. - An niver brasañ eus ar Skosiz (33 %), met an niver bihanañ eus ar Gembreiz (12 %), o deus votet a-du gant an " devolution " kinniget dezho gant gouarnamant Londrez. Ne vo ket lakaet da dalvezout koulskoude nag e Kembre, nag e Bro-Skos, rak hervez ar reolennoù e oa ret d'an danvez-lezenn bezañ asantet gant 40 % eus an dud en oad da votiñ.

- Mouezhiadeg ivez e Bro-Spagn. Aet eo ar maout gant an emrenerien en holl "rannvroioù" : Galisia, Inizi Kanaria, Andalouzia, Katalonia, Bro-Valencia, Aragon, ha dreist-holl en Euzkadi.

5 a viz Meurzh. - Adlavarout a ra Michel Rocard emañ a-du gant ar gremm nukleel. « Ne c'hellimp ket tremen heptañ ».

6 a viz Meurzh. - Abadennoù skinwel gallek a vez skignet tro-dro da v/Baton-Rouge e Louiziana gant Antenne 2.

7 a viz Meurzh. - Peder bombezenn a darzh e-kreiz an noz e Sant-Brieg, e Brest, hag e Pariz.

8 a viz Meurzh. - Dont a ra er-maez " Ar seizh boulen strink ". Tintin ivez a grog da gaozeal brezhoneg.

9 a viz Meurzh. - Gant Koun Nevenoe eo aozet kentañ " Gouel en enor d'ar Brezhoneg " e Redon.

10 a viz Meurzh. - War-dro 7 000 den a zibun e straedoù an Naoned o huchal a-enep da greizenn nukleel ar Pirc'hirin. E-touez ar re harzet e vo kondaonet ur paotr da zaou viz toull-bac'h.

11 a viz Meurzh. Diouzh an noz e tarz 31 vombezenn e Korsika.

12 a viz Meurzh. - An noz war-lerc'h e tarz 10 bombezenn e Korsika c'hoazh. Ar re gentañ a oa bet lakaet gant an FLNC ; an eil re gant ar strollad enep-emrener FRANCIA.

14 a viz Meurzh. - Embann a ra S.N.I. ar Mor Bihan ez eo a-du gant Diwan war boentoù 'zo.

18 a viz Meurzh. - Mouezhiadegoù evit ar c'hantonioù : ur c'hammed war-raok e ra an U.D.B. a zegemer 5,64 % eus ar mouezhioù, ha betek 12 % e Ploueskad.

19 a viz Meurzh. - Bremad m'emañ ar Chah en harlu e tihun ar Gurded en Iran. Goulenn a reont o emrenerzh : 170 den a varv en ur vanifestadeg e Sanandadj.

21 a viz Meurzh. - Goude gwalldaol diwezhañ an F L B e Sant-Brieg, e c'houlenn annezidi ar c'harter e-lec'h m'emañ ti an R.G., e tilojfe ar re-se evit mont pelloc'h.

22 a viz Meurzh. - Drouklazhet eo Sir Richard Sykes, kannad Breizh-Veur e Den Haag, Izelvroioù, gant paotred an I.R.A.

23 a viz Meurzh. - Lezet eo da vont Rhodri Williams ha Wynfford James, Prezidant hag Isprezidant Cymdeithas yr Iaith Gymraeg goude bezañ tremenet 4 miz en toull-bac'h en Abertawe. Barnet e oant bet e miz Du evit bezañ klasket gwastañ skinvaou ar B B C, ha kastizet e oant bet da 6 miz prizon.

141

27 a viz Meurzh. - Harz-labour bras e Palestina goude sinadur un emglev-peoc'h etre Israel hag Ejipt.

29 a viz Meurzh. - Ur gwallzarvoud e kreizenn nukleel Three Mile Island a lak ar gouarnamant amerikan da c'houlloñ ar c'horn-bro 8 kilometrad tro-dro d'an tredanva.

30 a viz Meurzh. - Mervel a ra an Ao. Airey Neave, karget eus aferioù Norziwerzhon e strollad ar Virourien, e tarzhadenn e garr e Ti ar C'humunioù.

1 a viz Ebrel. - Respont a ra an SNCF da gomiteoù-difenn ar garioù bihan emañ « o wellaat hag o aesaat doareoù beajiñ an dud » .

3 a viz Ebrel. - N'eo ket e Kurdistan hepken 'zo cheu. E rannvroioù all Bro-Iran, evel an Turkmenistan e vez lazhet tud bep sizhun e-kerz manifestadegoù a-enep d'ar c'hreizennañ d'an unyezhegezh ofisiel, d'ar polis estren...

4 a viz Ebrel. - Holl gêrioù bras Euskadi, Andalouzia, hag all, o deus dilennet maered eus ur strollad emrener.

5 a viz Ebrel. - Diskleriañ a ra ar CELIB n'eo ket gwelloc'h stad ekonomikel Breizh eget hini Loren, gwashoc'h marteze.

6 a viz Ebrel. - Lakaet eo da darzhañ kannati Bro-C'hall e Donostia (Euskadi).

7 a viz Ebrel. - Dieubet eo Erwan ar C'hoadig, unan eus ar baotred a oa bet harzet e miz Gwengolo 1978.

9 a viz Ebrel. - Renkañ a raio Ti an Taosoù-Skinwel paeañ 500 lur da Youenn Gwernig evit an droug hag an tregas en deus bet digantañ.

10 a viz Ebrel. - Annezidi Plouarzel-Breizh-Uhel a ya da Louiziana, ha re Saint-Martinville a zeu da dremen ur sizhunvezh du-mañ. A bouez eo seurt eskemmoù etrec'hallek evit ma chomfe bev o yezh e-touez ar Gajuned.

11 a viz Ebrel. - E nederlandeg e teu er-maez ul levr gouestlet da varzhaz Breizh, hag enni barzhonegoù diwar bluenn Añjela Duval, Youenn Gwernig, Per Denez, Ronan Huon, Tugdual Kalvez, ha re all... bet troet gant Jan Deloof.

12 a viz Ebrel. - Gant an FLNC zo bet lakaet 8 bombezenn da darzhañ e Pariz ha tro-war-dro.

19 a viz Ebrel. - « Dale a vo gant kreizenn nukleel ar Pirc'hirin, rak adstudiet e vo al lec'h a dostoc'h. » N'emañ ket pell eus an Naoned e-lec'h ma 'z eus kalzig a dud o chom memestra.

21 a viz Ebrel. - Taget ez eus bet un tren gant an I.R.A. e Norziwerzhon ha laeret an arc'hant a oa e-barzh.

22 a viz Ebrel. - Kendalc'h-studi deskiñ ar yezhoù a ziskleir e Strassburg arabat reiñ dreist-gwirioù d'ur yezh, ha pa vefe ar saozneg, a c'hellfe mougañ ar re all en Europa.

25 a viz Ebrel. - Kalz tud a varv gant ar c'hriagn-bev e Nevada e-lec'h ma oa arnodet bombezennoù atomek ar Stadoù-Unanet etre 1951 ha 1962.

26 a viz Ebrel. - Kastizet eo bet un embregour eus Rostren da dri mizvezh toullbac'h da c'hortoz, peogwir e oa bet laeret danvez-tarzh digantañ. Ret e vefe bet dezhañ kemer muioc'h a ziabennoù.

142

27 a viz Ebrel. - Ar gwir he deus pobl Sahara ar C'hornog d'en em ren hec'h-

unan, a ziskleir gouarnamant Maoritania a zilez an tamm eus ar vro-se a oa bet roet dezhañ gwechall.

29 a viz Ebrel. - Un eoullistr nevez a ya d'ar strad, en donvor da Eusa. " Gino " eo e anv, ha 40 000 tonennad a direoul a zo ennañ.

GORWENAL.

GOUEL AR BREZHONEG
e Plabenneg
eus ar 14 d'an 18 a viz Mae

Re a geleier bemdez

AN AMZER

Bep sizhun just ar pezh eo ret deoc'h gouzout

Priz : 2 lur er staliou

KOUMANANT:

3 miz : 18 lur, ha 12 lur evit ar studieren hag ar skolidi.

6 miz : 36 lur, ha 24 lur evit ar studieren hag ar skolidi.

12 miz (48 niverenn) : 72 lur ha 48 lur.

AN AMZER, 2 straed ar Richardière, 35100 Roazhon

- k.r.p. Decambourg 29 97 Roazhon -

LEVRIOÙ DESKIÑ NEVEZ

Un amzer voe, n'eo ket ken pell se diouzhimp, ma oa diaes a-walc'h kavout an tu da zeskiñ hon yezh. Un nebeut yezhadurioù (reoù Guillevic-Le Goff ha Le Clerc pergen), ha dreist-holl **La Langue bretonne en 40 leçons** F. Vallée, setu ar pennañ benvegoù a oa e kerzh an deskidi deboner. Da c'houde e teuas **Cours élémentaire** R. Hemon a zigoras un hent nevez hag a voe, evit daou-ugent vloaz hag ouzhpenn, « eureier » an nevezvrezhonegerion. Re hir ve reiñ ur roll hiziv an deiz hag an danvez deskard a chom kentoc'h gwall nec'het dirak dibab un hentenn. Setu pevar levr c'hoazh o pauez dont er-maez nevez zo, pep hini anezhe gant e berzhioù mat hag e wanderioù. Emañ marteze ar yezh o vervel e-touesk he yezherion naturel, mes biskoazh ne voe ken bividik lañs he ebestel fidel !

1. Meriadeg HERRIEU, **Le Breton parlé (vannetais)**, emb. Bleun Brug Bro-Gwened (hag e ti an aozer, 4, rue Keranna, Kervignac, F 56700 Hennebont). Dont a ra war-lerc'h **Le Breton du Morbihan vannetais**, bet savet war skouer **Le Breton par l'image** V. Seité evit tud Bro-Wereg. Den, gwell eget mab Loeiz Herrieu, ne c'halle pourchas da'r wenedourion un daolenn resis eus brezhoneg ar gevred a zo ken skedus e zoareoù e meur a geñver hag a vir aspadennoù yezh aet da get er rannyezhoù all. Diwar levezon vMeven Mordiern ez oar bet techet alies da zisprizout an danvez degaset da'r genyezh gant ar gwenedeg. Pa veze degaset bonnoù anezhañ, - ha R. Hemon en greas kalz, - ez oa hogozik dre guzh. Bremañ e komprenner gwelloc'h pinvidigezh an teodyezhoù-se ha setu perak, a gav dimp, e vo degemeret mat levr M. Herrieu. Ouzhpenn kentelioù zo e-barzh : staget en deus an aozer ur c'hantad a bajennadoù gouestlet da wellañ skrivourion e gornbro. Keuz hon eus hepken en deus kredet a-wezhioù « reizhañ » troiennoù zo a oa, hervezañ, « re drefoet » : anat eo dreist-holl evit oberennoù Le Strat, ha meur a wezh, ar pezh en deus kondaonet evel-henn oa skrivet yac'h-pesk. Talvoudek bras vo al levr evit yezherion ar gevred, mes ivez evit an holl vrezhonegerion o devo evel-se un daolenn gloc'h eus o yezh.

2. Visant SEITE, **Le Breton en bandes dessinées pour débutants**, skeudennet gant Joël-Jim SEVELLEC emb. an Aozer (Ti-Karré, F 29150 Châteaulin). Den ne oar, nompas memes an Aozer ! pet levr-deskiñ zo bet savet gant V. Seité ! Ar frer « katbra »-se a gonto, hep mar, e-touez ar re o deus graet ar muiañ evit degas hon c'henvroiz da zeskiñ pe addeskiñ o yezh ha diniver ar re o deus heuliet e gentelioù dre lizher. El levr-mañ ez adkaver holl berzhioù mat e oberennoù diaraok, ken evit an danvez, ken evit an doare d'e zegas. Un diskiblezh soutil eo ar bedagogiezh na c'haller he zizhout nemet goude hir a vloaziadoù embreg. Dedennus eo e dregont kentel ha yac'h ar yezh kenteliet. Ur rebech a refomp avat : re « henvoazel » e chom gwall alies e c'heriaoueg, evel pa vije tonket ar brezhoneg da chom ur parlant hengounel diwar ar maez. Da hetañ ve e silfe an aozer gerioù niverusoc'h o tennañ da'r vuhez kêrel modern, a zo buhez voas lod muiañ ar re a fell dezhe deskiñ hon yezh.

3 FañCh MORVANNOU, **Initiation au breton sans peine**, emb. Assimil, Paris. An aozer en doa savet dija un dornlevr en dastumadenn vrudet-se ; soñjet en deus avat e ve mat aozañ ul levr a-ratozh kaer evit ar re n'o deus anaoudegezh ebet eus ar yezh. Evel m'en goar an holl ez eus div zremm pennañ da'r brezhoneg, an eil, ma vez dre vras pouezet war silabenn eildiwezhañ ar gerioù, o klotañ mui pe vui gant ar pezh a anver KLT, egile ma pouezer, dre vras, war ar silabenn ziwezhañ, hag a renker evel W. Kenkoulz brezhoneg eo an eil teodyezhoù hag ar re all ha n'eus abeg ebet da vrientekaet ar re-mañ kentoc'h eget ar re-hont. Ur gudenn a save evit ar c'helenner, neuze : penaos deskiñ an daou zistagadur pennañ da'r studier hervez dibab hemañ ? Ret eo lavaret ez eo bet diskoulmet fall tre e **Breton sans peine** : un torr-penn eo digejañ an distagadurioù. Amañ, er c'hontrol, e vez roet distag an daou, A o verkañ «KLT.» ha B o taveiñ da'r «

W.». Er skrid e-unan e vez merket anat an diforc'hioù ivez ha fur tre peurliesañ, nemet e komprenner diaes en dije kredet an aozer kinnig ur skritur " koed ", da skouer, e-kichen koad, evit W. Ha ne vije ket bet spletusoc'h lavaret ur wezh evit an holl, e penn-deroù ar c'hentelioù : «Ar pezh a skriver oa a vez distaget /we/ e W. » ? Nebeudoùigoù eo avat (evel an ober gant an tok, e-lec'h un dildenn war an **n** ! sañset ne voe ket kavet a **n** e ti-moulerezh Assimil... Paour kaezh Frañs !), na viront ket al levr-se a vezañ savet mat tre evit unan a grog, an aozer o vezañ - evel ma reas Vallée ha Corbel - gortozet ur pennadig mat kent degas roud ar c'hemmadurioù da skouer.

4. Fañch MORVANNOU, **Le Breton sans peine**, lev. 2, emb. Assimil, Paris. Daou vloaz zo e veze embannet un eil mouladur eus Breton sans peine 1975, pe gentoc'h eus ar c'hentelioù 1-42 anezhañ, ma veze reizhet an niver brazik a vankoù a gaved er c'hentañ mouladur. Setu adembannadur an dibenn o tont er-maez, hag o keñveriañ gant ar c'hentañ mouladur e verzer diouzhtu n'eo ket evit mann ha netra e lavarer ez eo bet reizhet. Dibaot kenañ eo en hon metou tud evel Morvannou : pa vez lavaret dezhañ, gant abegoù sonn, en deus faziet war ar poent-mañ pe henhont, e kred selaou e vuruteller ! Gant ma ve eveltañ muioc'h a « c'hramadegourion vrudet », nag aesoc'h ve an darempredoù etrezomp hag an nebeudig a zister dra zo dazont hon yezh... Gant al levr-se e c'hellont enta an holl re a blij dezhe hentenn Assimil deskiñ ar brezhoneg en un doare dudius ha bev. N'eus tra parfet er bed-mañ, siwazh, hag evidomp, keuz hon eus e vije bet ret da vMorvannou heuliañ « ortograf fonetikel » euzhus holl levrioù Assimil evit an distagadur : ne aesa tamm ebet al labour evit ar c'hallegerion hag ur gudenn zibosupl eo evit an dic'hallegerion. N'eus nemet ar Frañsizion evit heulian c'hoazh doareoù ken sot e-lec'h ober gant al lizherenneg soniadoniel etrevroadel.

NOTENNOÙ

Hor mignoned

Erwan, mab da Yann ha Mari-Elen MORTIER, a zo laouen o kemenn deoc'h eo kresket an dud en e di : ganet eo e vreur bihan, Gwilherm e anv, d'an daouzek a viz C'hwevrer en Naoned.

Hor gwellañ gourc'hemennoù.

Albert GWILHOU ha Jakez KONAN a zo laouen o kemenn deoc'h ez eo bet euredet o bugale Marivon ha Gireg, d'an 19 a viz Ebrel e parrez Perroz.

Hor gwellañ gourc'hemennoù a gasomp d'ar priedoù nevez.

Kañv

Gant glac'har e kemennomp d'hol lennerien ez eo aet da anaon hor mignon Gaston LATIMIER, d'an 18 a viz C'hwevrer, en Oriant. Ganet e oa bet e Breizh-Uhel ha desket e oa bet brezhoneg gantañ.

E-touez hor skoazellerien gentañ e oa bet p'hor boa savet " Tir Na Nog ", ar gelaouenn gentañ e brezhoneg war-lerc'h ar brezel, e miz Genver 1945, p'edomp studierien e Roazhon.

Douaret eo bet e Laurenan d'ar merc'her 20 a viz C'hwevrer. Pemp bloaz hag hanter kant e oa. Tu a vo da lenn pennadoù Klerg hag Andrev Latimier diwar e benn.

Keloù hon eus bet ivez eus marv Erwan KELLEG en Oriant.

Hor gourc'hemennoù a gengañv a gasomp d'o familhoù ha d'o mignoned.

Lizhiri

Digant H. H., Ligny-en-Barrois :

« Setu amañ ur chekenn evit paeañ ur c'houmanant-bloaz d'Al Liamm. Mar plij ganeoc'h, ehanit bremañ da gas din ar gelc'hgelaouenn. Grit e-pad m'eo poent c'hoazh, rak n'eo ket laret e kasfen ur skodenn en amzer da zont. Evit lavarout ar wirionez deoc'h, n'on ket mui dedennet gant ar pezh a dremen er vro. Va Breizh-me, da lavarout Breizh va zud kozh, Breizh va mamm-gozh ha ne ouie ket ur ger galleg, Breizh va zad ha va mamm, Breizh va yaouankiz, Breizh paotred " Breiz Atao " a zo marv. »

Digant T. G., Roazhon :

« Kavout a ran Al Liamm talvoudus-kenañ, met un tammig re lennegel memes tra. Tu a zo da embann testennoù gouest da vezañ kinniget er bacho ? »

« Plijet e vezan o resev Al Liamm. N'on ket bet atav ! Me 'gav din ez eo kalonek emzalc'h ar rener hag a zigor ar gelaouenn da dud o menozioù disheñvel. Gant ma kendalc'ho gant an hent-se !

Evit pezh a sell an tabutoù ... difrouezh o c'havan, pa n'int ket komzoù goulo. Ar pennadoù embannet a dalvez dre o stumm, an doare-lavar h.a., perzhioù lennegel, kea ? Pep lenner a zo dieub a-walc'h da soñjal ar pezh a gar, d'en em ziwall, da glask keloù pe dielloù all el lec'hioù m'emaint. (Soñjal a ran en tabut savet a-ziwar ar pezh-c'hoariva diwar-benn Mikael an Nobletz).

Gant se eta, dalc'hit mat ha degasit dimp boued lennegel (er c'heñver-se e kavan dreist derc'hel da ginnig pennadoù digant an Uhel, o brezhoneg bev-buhezek, ouzhpenn ma vez atav un dudi lenn koñchenoù). »

Digant B.L., Cysoing :

« Dudiusoc'h-dudiusañ e kavan Al Liamm. Plijus eo lenn kontadennoù gant Fañch an Uhel hag ivez an hini gant J. C. Miossec en niverenn 197. Me ivez a soñj (evel T. G. eus Naoned en e lizher). Ul levr pouezus gant Roparz Hemon a zo bet ankouet en e rummad, ar Geriadur hollvrezhonek an hini eo. »

Digant J. F., Paris :

« Ho trugarekaat a ran evit al lizher hoc'h eus kaset din da heul va goulenn diwar-benn levrioù kembraek.

Diskleriadurioù am eus bet a-berzh Oriol hag ivez a-berzh ar « Welsh Books Council » hag digant « University of Wales Press » am boa kavet meneg anezho e studiadenenn dispar A. Le Calvez " Un cas de bilinguisme : Le Pays de Galles ". Soñjet am eus e c'hellfe lennerien all Al Liamm bezañ dedennet gant al lennegezh kembreat, kembraek pe saoznek hag e roan deoc'h chomlec'h ar « Welsh Books Council » hag en deus kaset din rolladoù klok-meurbet : Welsh Books Council (Cyngor Llyfrau Cymraeg) Queen's Square, Aberystwyth, Wales. »

Digant ul lenner eus Roazhon (sin dilennus) :

« Souezhet on bet gant lizher Y.V.R. eus Roazhon pa lavar e rae kêr Roazhon « strivoù bras ha meulus » evit stagañ skritelloù « Roazhon ». Evel ma vefe aet kêr Roazhon a-enep da zisentez ar Prefed.

Nann, tud ordinal, gant o arc'hant hag o daouarn, o doa fardet ar skritelloù-se. Ha tennet int bet goude.

En un departamant all, hini ar Mor Bihan, ez eus bet lakaet skritelloù en Oriant, brav hag ofisiel. Pegoulz e vo gwelet kemend-all e kêrioù all Breizh ?

'M eus aon e rank ar Vretoned ober un hej d'o c'horfoù ma c'hoantaont kaout panelloù brezhonek un deiz. Penevefe nemet skrivañ d'ar c'huzulioù-kêr, d'ar prefed... ha stagad ganti, gant o daouarn.

Kemend-all a rankont ober d'ar bankoù, ma c'hoantaont kaout chekennoù brezhonek. Ha da renerezh FR3, ma fell dezhe e ve kresket lodenn an abadennoù brezhonek er skingomz hag er skinwel

147

Ar re ne ziverglont ket o fluennoù, am eus aon, ne vint ket gwelet er c'hrogadoù kaletoc'h eus ar stourm.

« Al Liamm dre ar post, gant ur chomlec'h brezhonek », a c'houlenn Y.V.R. a-gevret gant I.K., eus Roazhon ivez.

Lakaomp e vefe kudennoù gant ar PTT. Ret e vo mont da glemm d'ober trouz er c'hazetennoù hag all. Nemet re skuizhus e vefe.

P.S. : Degas a ran da soñj e oa Al Liamm enep ar chekennoù brezhonek un nebeut bloavezhioù 'zo.»

RESPONT. - Ar re a fell dezho gouzout pehini oa hon emzalc'h e gwirionez n'o deus nemet sellout ouzh ar bloavezh 1977, pajenn 243 (Niverenn 182). Marteze e c'hello hor o'henskriver ober war-dro ar PTT hag all pa vo kaset en-dro an niverennoù d'ar sekretour hag a zo dija gwall sammet.

Gouel Al Liamm

E Pondivi, e-kreiz Breizh, e vo lidet hon niverenn 200. E 1963, da geñver ar 100vet niverenn e oa bet graet Gouel kentañ Al Liamm.

Setu bremañ 35 bloaz e teu Al Liamm er-maez ingal bep daou viz. Embannet ez eus bet ennañ ouzhpenn 18 000 pajennad brezhoneg ha kantadoù a dud o deus skrivet ennañ ur wech an amzer en o zouez an holl skrivagnerien vrezhonek eus an amzer-vremañ pe dost. Ur perzh pouezus en deus c'hoariet Al Liamm e buhez ar brezhoneg abaoe 35 bloaz. Setu perak ez eo ken pouezus devezh an 29 a viz Mezheven ha spi hon eus e teuo da gemer perzh ennañ un niver bras a goumananterien. Dibabet eo bet an deiziad-se, e dibenn ar bloavezh-skol met a-raok derou miz Gouere hag ar vakañsoù-hañv, evit reiñ tu d'an holl da zont, zoken d'ar re a chom pell eus ar Vro e-pad an darn vrasañ eus ar bloaz. Ra zeuio niverus-tre mignoned Al Liamm !

Pedet eo an holl d'en em gavout etre 11 eur hag 11 eur 30 e Palez ar C'hendalc'hioù (dirak Kastell Duged Rohan). Lavaret e vo un oferenn e brezhoneg da 10 eur, a-raok ar vodadeg eta, evit ar re o devo c'hoant (resisaet e vo al lec'h er c'hazetennoù). En em gavout a raimp evit ur pred bras ha laouen e vimp da gaout en hon touez sonerien ha kanerien.

Evel just n'eus ket tu da aozañ ur seurt pred evit 100 pe 200 den war ar prim ha pouezus-tre eo evit an aozerien gouzout en a-raok pet den a zeuio. Priz ar pred a vo 50 lur. Goulenn a reomp ouzh hol lennerien kas o enskrivadur adalek bremañ gant ur chekenn 50 lur (pe ouzhpenn) ha, d'an diwezhatañ, d'ar 15 a viz Mezheven, da istezzoror Kuzul ar Brezhoneg : Arzel Ivikel, Lumelen, Kervignag, 56700 An Henbont. - C.C.P. Kuzul ar Brezhoneg 3 020 20 T Nantes.

148

Levrioù nevez Al Liamm

Deut eo er-maez romantig Goulc'han Kervella **Ar Chase** gant ur golo kaer, e liv, diwar zorn Linn (28 lur ha 34 lur) hag **Ar veaj-se, ur wech e oa**, gant Per Diolier (18 lur ha 35 lur). **En ur rambreal** a vo prest a-benn ur miz bennak. Emaomp o prientiñ **Lannevern e kañv ha danevelloù all**, gant Jakez Konan.

Levrioù war baper kaer

Chom a ra c'hoazh un nebeut skouerennoù niverennet eus al levrioù war baper kaer :

1 Emgann Kergidu I	46 L
1 Emgann Kergidu II	46 L
1 Intañvez Arzhur	28 L
1 Evidon va-unan	28 L
3 Pinvidigezh ar paour	36 L
1 Tristan hag Izold	50 L
5 Vijevez an deiz diwezhañ	20 L
3 An deiz-ha-bloaz	35 L

1 Mari Vorgan 35 L
2 Va Zammig Buhez 35 L
1 Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh 35 L

Goulenn al levrioù-mañ digant R. Huon, 2 Venelle Poulbriquen, 29200 Brest -
c.c.p. R. Huon 1629 14 C Rennes. Kuit a vizoù.

Kamp etrekeltiek ar Vrezhonegerien

E Skaer, e Skol Sant-Alan, e vo dalc'het Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien er bloaz-mañ, eus ar 14 d'ar 26 a viz Gouere. Ezhomm bras a vo da gaout brezhonegerien ampart d'ober skol, d'ober war-dro an deskarded. Talvoudus-kenañ eo al labour a vez graet e K.E.A.V. abaoe ouzhpenn 30 vloaz (1948) hag ur bern emsaverien a vremañ o deus desket pe beurzesket brezhoneg eno. Reizh eo ez afe brezhonegerien ampart da skoazellañ ar re o deus c'hoant ober eus ar brezhoneg o yezh. Maget ha lojet e vo ar gelennerien evit netra. Skrivañ da : Anna ar Beg, 44, rue Jean Rameau, 29000 Kemper.

Rener Al Liamm o komz e France Culture

D'ar yaou 20 a viz Meurzh ez eus bet un abadenn war France-Culture gant Ronan Huon. Goulennataet eo bet e-pad 40 munutenn war e vuhez, e labour evel rener Al Liamm, embanner ha skrivagner. Hep dale e vo ivez ur pennad diwar-benn Embannadurioù Al Liamm war ar gelaouenn " Le Monde ".

149

Kelaouennoù a-vil-vern

Pa seller ouzh an niver a gelaouennoù a ziwan e Breizh hag e brezhoneg er mare-mañ e vefer techet da grediñ ez eus miliadoù ha miliadoù a dud barrek da lenn hor yezh hag e kresk bemdez an niver-se en un doare sebezus !

Pet lenner o deus ? Ne ouzer ket. Teir c'helaouenn sevenadurel moulet a zo bremañ, unan evit pep doare-skrivañ : **Al Liamm**, an hini goshañ a zo an hini nemeti a ziskleir ur wech ar mare niver he c'houmananterien : 1200. An div gelaouenn all a zo **Brud Nevez** ha **Planedenn**.

Un nebeut mizioù zo pa oa bev c'hoazh **Emsav** ha **Barr-Heol** am bije gallet lavarout pa zeuas " Planedenn " er-maez : setu hor pempvet kelaouenn sevenadurel voulet. Bremañ n'eus nemet teir eta. Ar pezh a zo kalz, diskiant a lavarfe lod, evit an nebeut a dud o deus desket lenn o yezh. Dreist-holl pa ouzer ne c'hell an hini goshañ, " Al Liamm ", bevañ nemet a-drugarez d'ar profoù, hag hi o kaout, a-bell, ar muiañ a lennerien.

Gwir eo ne zeu " Al Liamm " er-maez nemet c'hwec'h gwech ar bloaz (480 pajenn bennak) ; " Brud Nevez " dek gwech (300 pajenn) ha " Planedenn " peder gwech (252 pajenn). Ar c'houmanant a zo tost heñvel evit pep kelaouenn. 55 lur evit Al Liamm, 50 lur evit Brud Nevez ha 60 lur evit Planedenn.

Emañ o paouez degouezhout ganeomp, war un dro, div niverenn gentañ " Planedenn ". Ar renerien a lavar ez eo bet savet « abalamour ma save uhel-mat ar bern pennadoù brezhonek n'hellent ket kaer kavout o flas e-diabarzh kelaouennoù all emsav Ar Falz ».

Daoust ha disheñvel ar pezh a gaver er bidoc'hig ? N'eo ket nemeur : danevelloù, pennadoù-kaoz, barzhonegoù, pezhioù-c'hoari ha pennadoù-barn.

Kelaouennoù all a zo avat (ra vin digarezet ma tisoñjan unan bennak, kement zo !) ha n'int ket ken lorc'hus marteze, dre ma n'int ket moulet na ken tev. Teir a zo o paouez genel : **An Amzer** hag a zeu er-maez abaoe warlene (peder fajenn) bep sizhun, o reiñ keleier. Degouezhet eo gant he 16vet niverenn. Niverenn gentañ **Al Lanv**, liesskrivet kaer-tre ha skeudennet a zo deut er-maez e miz C'hwevrer 1980 (26 pajenn).

Degouezhet eo ganeomp ivez niverenn 0 **Bremañ** (Meurzh-Ebrel 1980) gant an titl « Kazetenn ar stourmoù e Breizh ». Embannet eo gant Skol an Emsav gant skeudennoù kaer eus Plogoñv enni.

Ha bez' ez eus c'hoazh ar c'helaouennoù «koz» e brezhoneg penn-da-benn evel **Hor Yezh, Skol, Imbourc'h, Evit ar brezhoneg** ha **Wanig ha Wenig**, kelaouennig ar vugale hag a zo erru d'an niverenn 131.

G. S. : Echu e oa an notennig-mañ pa 'z eo degouezhet ganeomp **An Nerzh**, ur gelaouenn skrlverezet hor boa ankounac'haet, marteze dre ma 'z eo « c'hwec'hmizvezhiek» evel ma 'z eo skrivet dindan an talbenn.

150

Skridoù

- Deut eo er-maez niverenn 126 **Hor Yezh**, enni ur studiadenn war an niver-daou gant Per Denez ha J. Y. Urien, Tro-geriaoua e Bro-Lanuon gant Mikael Briant hag un testeni dastumet e Douarnenez.

Pevare rann ar Geriadur Istorel (Bagoniad - Bez-meur) gant Roparz Hemon a zo deut er-maez moulet. - Ed. Preder, Penn Menez, Plomelin, 6 rann : 120 lur. C.C.P. Preder 16 093 13 J Paris.

- Tamallet zo bet deomp chom hep komz eus **An Teodeg**. Klasket hon eus eta e-touesk ar bern paperioù, kelaouennoù ha lizhiri bet degouezhet ganeomp er mizioù tremenet ha kavet ar c'hannadig-se. Goulenn a reomp eta digant an Dll Latour, ar renerez, bezañ digarezet. An niverenn 60 (Kerzu 1979) a zo diskouezet brav ha kempenn. Ugent pajenn zo enni. An darn vuiañ eus ar pennadoù a zo e galleg. Dedennet omp bet gant ar pennad digeriñ diwar-benn prosez an FLB hag ar pennadoù-barn. Ur pennad e brezhoneg a gaver ivez, " Goursav-heol goañv ", gant Goulven Pennaod.

Koumanant : 35 lur. C.C.P. Dugelezh Breizh 21 52180 G Paris.

- **Ar Falz**, niverenn 31, a zo e galleg evit al lodenn vrasañ. War an niverenn-mañ e kaver pennadoù diwar-benn ar stourm evit ar yezh er skolioù, daou bennad e brezhoneg, unan o sellout ouzh Kreizenn vakañsoù Ar Falz evit deskiñ brezhoneg d'ar vugale hag egile war Afer ar chekennoù.

Koumanant 4 niverenn : 40 lur. CCP Ar Falz 430 20 H Rennes.

- **Ar Soner** (e galleg), kelaouenn ar sonerien he deus kemmet stumm. He ment a zo brasoc'h hag en tu-hont d'ar pennadoù micherel e kaver en niverenn 252 ur bajennad o reiñ berr-ha-berr keleier war an emsav sevenadurel (al levrioù, ar c'helaouennoù, ar c'hoariva). - 5 lur an niverenn : P. Montjarret, Langroez, 56270 Ploemeur.

- Skol an Emsav a gemenn krouidigezh ur gazetenn nevez **Bremañ** :

« Bep daou viz e vo kinniget deoc'h ur gazetenn nevez : **Bremañ**. Kavout a reoc'h warni keleier diwar-benn ar stourmoù e Breizh hag e lec'h all.

Graet 'vo ar gelaouenn gant tud Skol An Emsav. Roet 'vo warni ar gomz d'an holl re a vez o stourm, en un doare araokour, war dachenn-mañ-dachenn. Klask a raimp lakaat warni ar pep pouezusañ eus ar vuhez sevenadurel, sokial ha politikel.

Un ezhomm bras a oa e-touez ar vrezhonegerien a vez kustum da lenn o yezh : kaout ur wir gelaouenn da lenn ha n'eo ket ur magazine bennak ouzhpenn. Setu ar pezh a glasko bezañ Bremañ. Klasket 'vo ivez lakaat ar vrezhonegerien n'int ket boas da lenn brezhoneg da vezañ dedennet gant Bremañ. Kavout a raint war vBremañ pennadoù skrivet en ur yezh yac'h, eeun ha modern war un dro. Daouviziek e vo ar gazetenn er penn kentañ met hor pal a zo kinnig anezhi bep miz gant ma vo trawalc'h a dud o koumanantiñ. »

Koumanant reizh evit 6 niverenn : 20 lur ; koumanant-skoazell: 30 lur (ouzhpenn) ; koumanant broioù estren : 25 lur. - Kas ar c'houmanantoù hag ar pennadoù da : " Bremañ ", 8, atraed Hoche, 35000 Rennes.

- " Diwan " a gemenn deomp ivez ganedlgezh ur gazetenn : « E fin miz C'hwevrer e teuo er-maez ur gazetenn nevez, hini " Diwan " hag a vezo hec'h anv **An Had**. Daou vil skouerenn a vo tennet, 16 pajenn e pep hini, c'hwec'h pajennad bruderezh en o zouez.

151

Div niverenn all a vezo embannet e miz Mezheven ha miz Here. Dre ar gazetenn-se hon eus c'hoant da gaout darempredoù gant an holl, evit displegañ dezho petra eo " Diwan ", penaos ez a ar skolioù en-dro ha peseurt labour o devez ar re a sikour " Diwan "...

Gwerzhet e vo dre an 13 skol hag an 20 komite-skoazell a zo e Breizh hag e lec'h all, dre Burev-kreiz " Diwan " e Brest. Kaset e vo evit netra d'ar re a sikour ac'hanomp dija. Tri lur nevez e vo gwerzhet an niverenn ha priz ar c'houmanant a zo bet lakaet da 10 lur ar bloaz d'an nebeutañ ».

Evit kas bruderezh d'ar gelaouenn ha gouzout hiroc'h ez eo ret skrivañ da " Diwan ", Jacques Bleunven, MPT Penn ar C'hreac'h, 29200 Brest - Pellg. : (98) 02.29.75.

Evit ar vugale : Wanig ha Wenig

War-dro 250 koumananter he deus bremañ ar gelaouenn Wanig ha Wenig. Ur gelaouenn viziek eo, leun a skeudennoù hag a c'hoarioù, ha ne goust nemet 25 lur ar c'houmanant-bloaz. Albomoù a zo bet graet gant niverennoù ar bloavezhioù 1978 ha 1979. Evit o frenañ skrivit da : Marie-Louise Fave, Wanig ha Wenig, Kernevez, 29250 Kastell-Paol.

Un niverenn a ziforc'h, bet prientet ha skeudennaouet gant Diwan Bro-Leon, a zeuio er-maez e miz Mae. Poent bras eo koumanantiñ evit kaout anezhi kerkent hag embannet.

Koumanant 12 niverenn : 25 lur C C P Lena Petton 682 54 L Rennes.

Celtic, a comparative study

Ur studiaden e saozneg eo, bet savet gant ar c'hembread D. B. Gregor. Studiañ a ra da gentañ ar c'hwec'h yezh keltiek o-unan. Keñveriañ a ra goude ar c'hwec'h yezh en ur studiañ o orin, o emdroadur, o diskar hag o stourm evit dreistvevañ e Bro-C'hall ha Breizh-Veur. Ul levr 398 pajenn ennañ. Priz : 5,95 lur saoz The Orleander Press, 17 Stansgate Avenue, Cambridge, CB2 2QZ England pe Orleander Press, 210 Fifth Avenue, New-York, N. Y. 10010 USA.

Yun evit kaout brezhoneg er skol

Krouer ar gelaouenn " Evit ar Brezhoneg ", C. Henry, kelenner e Skol-veur Breizh-Uhel ha tad daou vugel e skol Serwel, e-kichen Lanuon, en deus graet yun peogwir ez eo bet nac'het gant renerez ar skol e vefe graet kentelioù brezhonek daoust da asant ar skolaer. Harpet eo C. Henry gant ar gerent all ha kaset en deus ur pellskrid da enseller an Akademiezh evit diskoulmañ ar gudenn. Un emvod a zo bet d'ar c'hentañ a viz Ebrel ha krog eo en-dro da zebriñ. Met prest eo da adkregiñ gant e yun mar bez ret.

152

Gouel ar Brezhoneg

Dalc'het e vo er bloaz-mañ e Plabenneg etre ar 14 hag an 18 a viz Mae. Met azalek an 10 dija e vo c'hoariva gant strollad Karaez. D'ar merc'her 14 e vo ur veilhadek diouzh an noz gant kanerien ha konterien eus ar vro. D'ar gwener 16 e vo filmoù ha da 9 eur diouzh an noz c'hoariva gant Strollad Plougin hag un diviz war al labour-douar evit echuiñ. D'ar sadorn 17, goude lein, abadenn kanaouennoù, pred yen war-dro 7 eur, da 8 eur 30, c'hoariva gant Strollad ar Vro-Bagan, Fest-noz gant Diaouled ar Menez. D'ar sul, Kermes gant ur genstrivadeg kanaouennoù evit ar vugale, diskouezadegoù, gouren, sonerezh ; da 5 eur, c'hoariva gant strollad ar C.D.U.B. ; diouzh an noz, Kanenn Veur " Ar marc'h dall " en iliz Plabenneg.

Ur c'houmananter en deus da werzhañ

niverennoù kozh Feiz ha Breiz, Feiz ha Breiz ar Vugale, Ar Vuhez Kristen, Dihunamb, Gwalarn, Stur. Skrivañ d'ar merour, Per ar Bihan.

Emersion

Setu talbenn pladenn diwezhañ MYRDHIN (ar bempvet) a zo un danevellgan en la bemol evit an delenn varzhek. Dastumet eo bet gant an arzour temoù hengounel, keltiek pe eus ar Reter, ha plas a zo e-kichen an delenn, ar gorreboud, an daboulin, evit ar glockenspiel koulz hag evit ar sitar hag an tablas. Evel Stivell e soñj Myrdhin ez eus kerentiez e etre temoù-diazez ar sonerezh hengounel e pep bro.

Mar deo bet graet choaz eus pezhioù dishenvel, tonioù koroll herrek ha mentadurioù gorrek, o aozadur hag o liammadur o deus krouet un unvander. Heson eo, pistigus, ha gant an temoù adlavaret e teu ur seurt strobinielladur. Myrdhin a zo douger testennoù hag a zo er-maez eus ar vuhez voutin. Kanañ a ra brientinien Brekilienn pe Dir na n'Og. Mar deo gouestlet ar bladenn d'ar sonerezh hengounel, d'an delenn, ez eo gouestlet ivez d'ar vaouez.

Emañ bepred Myrdhin o klask Viviana, a-dreuz koadeier, reier, dre hentoù ar feunteunioù, ha deut eo da vezañ konter evit displegañ d'ar vugale mojenn an achantour. Mont a ra er skolloù, e-barzh aozadur ar J.M.F., d'ober abadennoù sonerezh. Se 'zo bet kaoz embannadur ur bladenn all, Merlin l'Enchanteur (pedervet pladenn Myrdhin), ma ro enni displegadurioù diwar-benn an delenn, o kinnig da skolidi yaouank Plouisi kanaouennoù ha sonerezh, gant skoazell Guntet ha Wolf.

Daoust da Vyrddhin bevañ e donder e spered hag e galon gant achantourien Brekilienn hag o hud, ez eo urzhiet mat e vuhez, rak emañ oc'h ober hent abaoe pell e broioù Europa. E derou ar bloaz e kano e kreisteiz Bro-C'hall ha goude se

e Bro-Velgia hag e Breizh. Berzh a ra sonerezh Breizh en Alamagn, Helvetia, en Izelvroioù, a-drugarez da arzourien evel Myrdhin. Un toullad sonourien eveltañ, brogarourien anezho, a ro bremañ kelennadurezh er skolioù. Meur a skol a zo bet digoret evit kelenn ar sonerezh keltiek. Tuet eo hor sonourien da grouiñ temoù nevez. Un arouez eo kement-se : dont a raio danvez nevez da binvidikaat hon hêrezh keltiek.

P. A. B.

153

Kendalc'h Keltiek 1980

Kendalc'h Keltiek 1980 a vezo graet e Dulenn, eus an 28 a vin Gouere betek an 2 a viz Eost. Lojet e vo an dud e St Patrick's Training College, Drumcondra, hag eno ivez e vo graet ar bodadegoù.

Evit en em enskrivañ ha kaout diskleriadurioù, skrivañ da Loik Chapel, Roc'h ar Bleiz, 29210 Morlaix.

Crash-course Skol-veur Breizh-Uhel

Graet e vo ar " crash-course " er bloaz-mañ eus an 30 a viz Mezheven betek ar 5 a viz Gouere : 9 eurvezh-skol an devezh. N'eo ket deraouidi hepken a vez degemeret er c'hrash-course : kentelioù a zo evit an holl liveoù-yezh, hag evit ar yezhadur ivez. Maget ha lojet e c'hell bezan an dud en tiez-studierien. Ar re o defe c'hoant da vont a zo poent bras dezho skrivañ : Cours Intensif de Breton, Formation Continue, Université de Haute Bretagne, avenue Gaston-Berger, 35000 Rennes-Villejean ; pellgomz : (16.99) 59.09.40.

Etudes Celtiques

(C. N. R. S., 15, quai Anatole-France, 75700 Paris) 1. 16, 1979, 160 F

E niverenn ziwezhañ Etudes Celtiques e kaver lies studi a denn d'ar brezhoneg :

- Léon Fleuriot, " Gloses inédites en Vieux-breton " (197-210). Ar spisc'heriennoù nevez zo : **cornn**, La. sistrum, « korn sentiñ » ; **butsill**, La. sistro, id., sl. krBr. **bucell** « muiment des beuffs ou des vaches » Ca. 28, **busell** GIB 185 ; **cronneth** La. sp(h)ere, deveret eus hBr. **cron(ion)**, Br. **krenn**, a vije bet °**krennez** « boull » ; (hl sciunt) **oithat hir pop lebred** = (i a oar) °**oazhat hir pop** °**levres** « sellout (prederiañ) hir pep klenved » . Amañ e welan en **oithat** un anv-verb en **-at** kentoc'h eget ur pennanv diheverzh en **-ad** evel Fleuriot da geñver ar ster ; **douoin pop amser** = °**douhenn pep amzer** « digasted pep amzer » , sl. hBr. °**douhinnom** = °**douhennoñ** « puñsañ tennañ » , Fleuriot DGVB 151 ; **guortmenu** La. diuortium « di-zimeziñ » pe « forc'h hent » = °**gourzhveno** ; **torriticion** = °**torridion** (ls. eus °**torridik**) « torret » ; **arimritiat** = °**arempredad** La. minister « gwaz, ministr » , sl. **darempred** ; **dilembretic** = °**dileñvredik**, **dislembretic** = °**disleñvredik**, sl. **leñv** kenster gwezhall gant Kn. **lef**, Kb. **llef** « mouezh » ha **bred** « spered » ha « diviz, barn » ; ars gerioù-se a dal, war a hañval, ar c'hentañ « hep son perzhek » , an eil « hep pouez-mouezh » .

154

- Gwenolé Le Menn, " Eloge funèbre de Peiresc en moyen-breton tardif (1638) " (211-221), ha " Un 'veni creator' latin-breton dédié à Anne de Bretagne en 1505 " (224-232). Ar skridoù-se a zegas gerioù dianav betek bremañ e krBr., netra a dalvoudegezh avat evit al lennegezh. An aozer en deus bet ar soñj mat da sevel ur roll gerioù klok bep gwezh.

- Pierre-Yves Lambert, " Les grammaires bretonnes : additions au tome XV, fascicule 1 " (233-236). Pouezus tre eo studienn Lambert bet klokaet amañ.

- Gwenaël Le Duc, " Le Donoet, grammaire latine en moyen-breton (suite) " (237-259). Talvoudus dreist eo embannadur an Donoed gant Gw. Le Duc (EC 14 (1975) 525-565) ; an notenoù en deus savet amañ zo ken prizius all. Faziañ a ra, a gredan, pa jubenn **euz** gant nBr. **eus** (p. 240) rak diwirhañval ve ar **-z**. Marteze a-walc'h, un arallstumm da **ouzh** n'eo ken.

Goulven PENNAOD.

Herve ha Nora, levr kentañ

Levr an Ao. Kalvez, brudet-bras e-touez an holl dud a studi hag a gelenn brezhoneg, ne veze mui kavet da brenañ.

Kinniget eo bremañ en un embannadur nevez, kresket ha skeudennaouet. Adwelet eo bet gant Yann Desbordes ha Yann-Erwan Abalan. Pezh a zo pouezusoc'h c'hoazh, implijet eo bet d'ober skol, e-pad ur bloavezh, gant pevar c'helenner. Skeudennoù nevez, yaouank o stumm, a zo bet savet evitañ gant Yann-Vikael Lichou.

Niver ar pajennoù : 176 p. - Ment : 21 x 15 - Priz : 35 lur. Embannet gant Skol. Pelec'h prenañ :

- Yola Chariou : 16, rue H. Berlioz, 22000 Sant-Brieg - ccp : Y. Chariou-Skol 2616 33 Rennes ;

- Yann Desbordes . 1, pl. Ch. Peguy, 29260 Lesneven - ccp : Y. Desbordes, 1493 79 C Nantes.

Distao 20 % pa brener dre zek pe muioc'h. Mizoù kas ouzhpenn.

20 kentel a zo, ha 4 lennadenn. Evit pep kentel e kaver : un destenn, ur roll-gerioù, ur pennad yezhadur, labour dre gomz ha dre skrid, poelladennoù. E fin al levr ez eus ur yezhadur hag ur c'heriaoueg.

Breizh war eeun

" Breizh war-eeun-Bretagne en direct " a zo anv un aozidigezh savet e Roazhon nevez 'zo. He fal a zo brudañ Breizh dre ar bed, kelaouiñ tud an holl vroioù war he fenn, dre implij ar yezh esperantek. Savet eo bet gant tud eus Klub Esperantek Roazhon, met digor eo d'an holl Vretoned a zo dedennet gant ar menoz-se. Evit kaout titouroù eo ret skrivañ da : v-Breizh war-eeun, 9 square de Provence, 35000 Roazhon.

155

Alan Stivell - Tir na Nog - Symphonie celtique -

CBS 88487

Setu neuze diwanet ar simfonienn hir-gortozet. Ul labour ramzel moulet war div bladenn gaer, leun a vuhez birvidik dacust d'un toullad hirderioù. Kinnig a ra Alan Stivell e bladenoù en un tamm skrid e galleg flour. Perak klask displegañ ur menoz don gant gerienoù droch, ezoterek ha goullo ? Dre eurvad e teu bravoc'h gantañ ar sonerezh eget ar c'hoari pluenn ! Tri c'helc'h a zo en div bladenn-se. Kelc'h unan a grog gant bommoù-lavar tibetan, heuliet gant an delenn. Ur strollad merc'hed berber Djurg Djurah a gan en o yezh. Klasket en deus Alan Stivell lakaat stok ha stok ur bern yezhoù bihan, disprizet ha

gwallgaset dre ar bed : brezhoneg, gouezeleg, ketchua, algonkan. Ur meskaj un tamm pounner avat. Kelc'h unan a zo ur veaj hir davet ur pal dianav c'hoazh. Kelc'h daou a grog gant sonerezh klasel ha modern, violoñsoù, ograoù, ha telenn. Amañ c'hoazh e kaver ur meskaj yezhoù : sanskritek, ketchua ; arouez ar pobloù munut o stourm. Bez' ez eo gest, « Imram d'an Inis ». « Tu 'zo deomp merdeñ betek keoded ar peurvoud ... » Un huñvre gaer met siwazh gwall bell eus darvoudoù ar vuhez pemdeziek ! Se avat n'eo ket barzhoniezh ! Ur pennad gitar tredan ha piano evit echuiñ. Gouestlet eo an eil pladenn d'an trede kelc'h. Degouezhet omp war an enez hag e klever kleier tibetan o tintal, pib veur ha piano da heul. Un tamm muzik kaer-tre. E gouezeleg e kan Alan Stivell, n'ouzon ket hag-eñ e kompreno an Iwerzhoniz ! Buhezekoc'h eo an trede kelc'h hag heñveloc'h eus ar pezh a glever peurvuiañ gant Alan Stivell. Echuiñ a ra ar gouel war an enez gant un ton dañs nerzhus. Div bladenn da selaou gant aked, disheñvel-mat int eus ar pezh hon eus bet tro da glevet betek-hen. Nevezadennoù e-leizh enno hag ur brouenn ne chom ket Alan Stivell da bilbasat.

T. H.

An demokratelezh c'hall o vont diwar-bouez un neudenn vreïn

- Emañ Alan Coraud en toull-bac'h abaoe miz Genver 1980. Kondaonet eo bet, e-giz Y. B. Ar Mat ha meur a hini all en e raok, gant lezvarn an arme da bemzek miz toull-bac'h o vezañ m'en deus nac'het gwiskañ dilhad an arme c'hall bet roet dezhañ. Evito n'eus ket da zibab : ur Breizhad ne c'hell servij e armeoù an enebour. Krouet ez eus bet ur gevredigezh, ar M.I.B., evit sikour ha difenn anezho.

Evit kaout resisadurioù e c'heller skrivañ da : Annick Coraud, La Pouivetière, 44430 Le Loroux Bottereau.

Embannet ez eus bet ur memorandum evit reiñ da c'houzout e oa Bretoned a doa divizet nac'hañ servij Bro-C'hall. Rener J. P. Le Mat, 29270 Plounevezel.

156

- Kaset eo bet Yann Puillandre eus toull-bac'h Fresnes da hini Fontainebleau. E-unan penn emañ en ul logellig. N'en devez nemet un eur bale bemdez ha nebeut tre a voued. Eno eo chomet, Stella, ar C'horsikan, e-pad nav miz. Tamm-ha-tamm e weler pegen livet fall eo dremm an demokratelezh.

- D'ar bevarzek a viz Meurzh ez eo echuet enklask foran Plogoñv war an nukleel. N'eo ket echu gant an afer avat rak gouzout mat a ra an holl pegen faos ha touellus eo an enklask. E Flamanville e oa krog al labourioù a-raok fin an enklask. Emeur o c'hoarzhin goap ouzomp. M'eo bet asantet ar c'hinnig nukleel gant an dileuridi vreizhat ez eo abalamour d'an arc'hant kinniget dezho. EDF a ranko paeañ tailhoù d'an holl parrezioù treuzet gant al linennoù 200 000 volt ha muioc'h. 1 000 pe 2 000 lur a vo roet ivez evit pep peul-tredan plantet ! Eus a belec'h e teu tout an arc'hant-se 'ta ?

Da betra klemm : en ur vro demokratel e rank ar bobl asantiñ da youl ar gouarnamant ha ma ne sav ket ar bobl a du e vez kaset an arme d'ober d'ar pennoù kalet plegañ !

Devezh Diwan

Devezh ar 15 a viz Mae a vezo devezh Diwan. Brudañ ar skolioù brezhonek evit ar re vihan eo pal an devezh-se. Dibabet eo bet abalamour m'eo bet devezh ar gest evit ar brezhoneg un nebeut bloavezhioù zo.

Diazezet e vezo war menoz ur redadeg-baleadenn e-giz ma vez graet e Bro-Saoz. Ar re a gemero perzh enni a ranko kavout tud hag a baeo etre 0,50 c. ha 2 lur pep km graet ganto. Met un devezh gouel ez eo ivez, ne vezo na krono na netra, an dud a c'hell redek pe bale, o-unan pe daou ha daou, pakañ ur banne, kaozeal gant an dud all war Diwan pe ar jogging...

E-pad an deiz e vo a bep seurt traoù, kanaouennoù, sonerezh, c'hoariva, a bep seurt c'hoarioù all er skol hag e lec'hioù all. Digor e vo dorioù ar skolioù evit lakaat tud ar c'horn-bro da anavezout gwelloc'h Diwan.

E fin an devezh e vezo ur fest-noz e-lec'h ma vo met un draig bennak d'ar re o devo kemeret perzh, da zerc'hel soñj eus an devezh, ha lavaret disoc'hoù an diouganou : ret e vo divinout an amzer lakaet gant pennoù bras ar sportoù, ar politikerezh hag all.

An deiz-se a ranko dont da vezañ devezh Diwan, a-benn un nebeut bloavezhioù. Aozet e vezo e Roazhon, Naoned, An Oriant, Pont-'nAbad, Sant-Brieg, Lanuon, Brest, Plouvian, Ar Releg, An Uhelgoad ha marteze Kastell-Paol ha Pariz.

DIWAN, Permanence, MPT Penn ar C'hreac'h, rue Prof. Chrétien, 29200 Brest - Pellg. 02 99 75.

157

Eñvor O Riordan

D'ar sul 24 a viz C'hwevrer, war-dro teir eur diouzh an abardaez, war bedadenn Strollad-eñvoriñ Seán O Riordán, e voe dizoloet gant ar C'hardinal Tomás O Fiaich ur blakenn en eñvor karet ar barzh lakaet war ziavaez an ti e kêriadennig Garbhach, Inis Cara e kontelez Korkig, ma chomas ar barzh ennañ e-pad 45 bloaz.

A-raok, da 10 eur diouzh ar beure, e Cloch Rua (= Maen Ruz), e lavaras an tad enorus Séan Mac Carthaigh un oferenn evit an anaon e gouezeleg evit ene ar barzh.

Tri bloaz a zo, d'an 21 a viz C'hwevrer 1977, e varvas Seán O Riordán. Emesk an niver bras a dud o karout ar barzh meur-se ne oa hini ebet a rae muic'h a stad anezhañ hag e kare muic'h eget e amezeien e Garbhach ken ne oa tremenet mat un hanter vloavezh ma voe savet ur bodad-eñvoriñ el lec'h-se end-eeun gant e amezeien hag e vignoned o chom en ardremez.

(Hervez " Inniu ", 22 a viz C'hwevrer 1980.)

An A.I.D.L.C.M. o tifenn ar minorelezhioù

Marcel Texier, sekretour meur ar gevredigezh-se (Kevredigezh Etrevroadel evit difenn ar yezhoù ha sevenadurioù en arvar) a skriv deomp n'eo ket anavezet a-walc'h ar gevredad-se e Breizh.

Krouet eo bet gant un 50 bennak a gelennerien eus broioù an Hanternoz Island, Bro-Sveden, Norvegia, Danmark, Bro-Suomi) en o zouez ar c'helenner brudet P. Naërt.

Ar gevredigezh hag a ziskleir « n'he deus pobl ebet ar gwir da zistrujañ re all pe e vije e-keñver sevenadur pe evel bro », a stourm e pep doare evit difenn ar minorelezhioù.

M. Tixier 8, rue du Pas-de-Calais, 78310 Maurepas.

158

Kannadig Keltia

O vezañ ma oa **Carn**, kelaouenn ar C'hevre Keltiek, diaes da lenn evit ar re ne oant ket saoznegerien vat ez eo bet savet **Kannadig Keltia**, lizher kelaouiñ embannet gant Skourr Breizh ar C'hevre. Dont a raio er-maez bep tri miz hag e vo kaset d'an izili ha d'ar goumananterien war un dro gant **Carn**. An niverenn 1 ez eus enni seizh pajenn e brezhoneg, peder e galleg hag unan e saozneg.

Kemenn a reer en niverenn e vo dalc'het bodadeg-vloaz ar C'hevre Keltiek d'an 30 hag 31 a viz Eost e Ti-Kendalc'h.

Koumanant d'an div gelaouenn : 28,50 lur., da gas da Jorj Abherve-Gwegen, Kervean-al-Liorzou, 29235 Plounevez-Lochrist.

Displegadeg e Dulenn

Da geñver ur vodadeg eus renerien Stadoù ar Gumuniezh Armerzhel Europat ez eus bet un displegadeg dirak Kastell Dulenn. Ar pal a oa tennañ an evezh war stad an traoù e Breizh an heskinerezh a-berzh ar bolis, ar saotrerezh, an arvar nukleel, ar gwaskerezh yezh.

Aozet e oa gant Breizhiz yaouank bodet en ur C'homite eus Gwirioù ar Vretoned. Gwelet eo bet displegadeg gant kalzig a gelaouennerien estren, luc'hskeudennet eo bet ganto ha meneget e kelaouennoù.

159

Kael niv. 9

	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
I	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-
II	-	-	-	-	-	-	-	-	-	X
III	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-
IV	-	-	-	-	X	-	-	-	-	-
V	-	-	-	-	-	X	X	-	-	-
VI	-	-	-	-	X	-	-	-	-	X
VII	-	-	-	-	-	-	X	-	-	-
VIII	-	-	X	X	-	-	-	-	-	-
IX	-	-	-	-	-	-	-	X	-	-
X	-	-	-	-	-	-	-	-	X	-

A-led : I. Pa rae ar Gwenn-ha-Du kemend-all, ne oa ket gant an avel hepken. - II. Kentañ kammed war-du an I. - III. Evit ur paotr pa garer, hervez. - IV. Unan en deus ur garg uhel ; Oa ac'hub (lizherenn-dal kemmet). - V. Da zoarean ar groaz Doue er Sterenn ; Meur a hini draezh a gaver e Breizh. - VI. Eno e kavas Nizan danvez e levr kentañ ; Gleb. - VII. Sunerien ; Ouzhpenn. - VIII. Rakger pe dibenn-ger ; Ar gwad a vez dindano a sav buan da benn an den. - IX. Nann, trugarez! Ger-mell. - X. Strobinnellañ.

A-serh : 1. Mod all. - 2. Rekisoc'h da ziouganañ eget da ziskontañ. - 3. Unan a oa moarvat e Foujera gwechall ; Semplet. - 4. Kaotigell ; Ger. - 5. Ri yalc'h a-dreñv ; Lagadennoù. - 6. Gant un troad hepken war hini ar saout eo ken bras-se ? Eosten. - 7. Hep kenavo ; Kemennet e Bro-Leon. - 8. Kelenn difrouezh peurliesañ - 9. Ur re glas a oa gant kontez Salisbury, moarvat. - 10. Unan vaen a oa mat gwechall da veajiñ. pell ; Si blot.

GWALEREG.

DISKOULM D'AR GAEL Niv. 8 :

A-ldd : I. Laoskentez. - II. Emberr ; Ero. - III. Gleborenn. - IV. Eor ; CU ;
Neu. - V. Sailherezh. - VI. Tra ; Enor. - VII. Nañ ; Bell. - VIII. Estrenezed. -
IX. Tai ; Redi. - X. Aezoni ; Dar.

A-serzh : 1. Legestreta. - 2. Amloar ; Sae. - 3. Oberiantiz. - 4. Seb ; Ar - 5.
Kroc'henenn. - 6. Erruen. - 7. Rober. - 8. Tennerezed. - 9. Ernez ; Leda. - 10.
Zo ; Uheldir.

AL LIAMM 200

TAOLENN

Da geñver an niverenn 200 gant Ronan HUON	163
Tarzh ar garantez gant Y. E. JARL	166
Evit ar re a zo en toull gant Yann-Ber TILLENON	168
Kil an ti gant Séan O RIORDAIN (tr. L. Andouard)	170
Unan eus troioù-kamm ar garantez gant L. TANGI	173
Karreg an Diaoul gant Laouig ar MEULER	180
An dud n'int ket fur gant R. M. KELDREG	186
Al lizher gant J.C. MIOSSEC	193
Ar skourjez tan gant A. ar BRAS (tr. Daniel Giraudon)	207
Studi al lec'hioù, un digor war istor ar vro gant F. KERVELLA	210
Avelioù-tro gant GORWENAL	222
Notennoù	224

Da geñver an niverenn 200

Setu ni degouezhet gant hon niverenn 200

Un hir a hent a zo bet graet abaoe mir Genver 1945 pa voe krouet Tir na n-og, 35 bloaz zo, e Roazhon, hag abaoe an emglevioù a oa bet graet, da gentañ gant ar gelaouenn KENED hag e 1948 etre AL LIAMM ha TIR NA N-OG.

E 1963, da vare hor c'hantvet niverenn, hor boa 500 koumananter. Seitek vloaz a oa bet ret evit tizhout an niver-se ! Betek 1968 ez eo chomet heñvel a-walc'h. Tizhet hor boa 570 koumananter e 1966 evit diskenn da 510 e 1968.

E 1968 avat ez eo bet digoret speredoù meur a hini yaouank. An dispac'h-se en deus dihunet kalz anezho hag o lakaet da zizoleiñ o doa ivez ur vro dezho o-unan, ur sevenadur dezho o-unan ha gwirioù evel ar re all. Ar birbilh-se a zo bet derou un eil buhez evit ar gelaouenn hag evit an embannadurioù en hor yezh. E nav bloaz hon eus gounezet kement a lennerien hag er seitek vloaz kentañ peogwir ez ea kresket o niver eus 510 da 1 023 e miz Du 1977.

Abaoe n'en deus ket kemmet kalz an niver-se, e miz Meurzh 1979 hor boa 1 129 koumananter ha kollet hon eus un nebeut er bloaz-mañ.

N'eo ket laret e c'hellfe niver ar goumananterlen kreskiñ kalz bremañ, er stad m'emañ an traoù. E-pad pell amzer ez eo bet AL LIAMM, koulz lavarout, ar gelaouenn nemeti o tont er-maez ingal bep daou viz. Bremañ avat ez eus kelaouennoù e-leizh ha n'eo ket mui dav, d'an holl re a fell dezho lenn brezhoneg, bezañ koumanantet d' AL LIAMM evel gwechall.

Diwar se n'eo ket souezhus e koazhfe un tamm niver hol lennerien e-lec'h kreskiñ.

Hiziv an deiz, an dud a lenn hor yezh a c'hell dibab etre ur gelaouenn bolitikel, pe unan sevenadurel hag a glot muioc'h gant o menozioù pe a zedenn muioc'h anezho. Bez' ez eus ivez kelaouennoù o plediñ gant ar relijion ha gant ar yezh. Galiout a ra al lennerien dibab zoken o skritur

164

Ni a fell deomp bezañ eus hon amzer ha sellout war-zu an dazont en ur ober hor mad eus an tremened. Daoust hag e teuomp a-benn ? N'eus forzh penaos, ar gelaouenn a zo graet gant hor c'henlabourerien, da lavarout eo gant ar re a gas skridoù deomp. Ne c'hell ket pep lenner bezañ a-du gant kement tra a vez embannet, pep den a chom kiriek eus e skridoù. Ret eo, d'hor soñj, bezañ digor a-walc'h, en ur glask mirout un unander.

Evit pezh a sell danvez ar gelaouenn, al lizhiri a ziskouez ar pezh a garfe al lennerien kavout e-barzh. An darn vrasañ a gav ez eo mat evel m'emañ. Lod a lavar ez eo re lennegel ha lod all n'eo ket trawalc'h.

Ne gredomp ket e tlefe AL LIAMM bezañ lennegel hepken, dreist-holl p'hon eus embannadurioù e-kichen. Dav e vefe kavout e pep niverenn, war un dro lennegezh-diduiñ ha studiadennoù a bep seurt. Ha kement-se evit dedennañ ar muian posupl a dud evit gellout derc'hel ar gelaouenn en he sav. Rak ar moulañ a zo da baeañ ha keroc'h-kerañ e vez a vloaz da vloaz.

En ur gelaouenn, enni pennadoù liesseurt, e c'hell pep hini ober e zibab, hag e-touez 80 pajenn e vefe souezhus ne gavfe ket pep lenner meur a bennad diouzh e c'hrad. Ne c'hell ket AL LIAMM bezañ tra un nebeut tud ha plijout penna-da-benn da 200 pe 300 lenner hepken.

Diaes a-walc'h eo avat embann war bep niverenn ar pennadoù a garfemp. Se

zo hervez an dornskridoù a zo degouezhet ganeomp ha meur a wech ne c'hellomp ket dibab dre ma n'eo ket niverus a-walc'h pe liesseurt a-walc'h ar skridoù a zo en hor c'herz evit gallout kempouezañ an niverenn.

Ur galv a rafemp eta d'ar skrivagnerien : kas deomp o fennadoù abred ha niverus a-walc'h, reizhet e pep keñver ha skriverezet en doare ma vefe tu d'o c'has war-eeun d'ar mouler.

Evit echuiñ e fell deomp trugarekaat an holl re a skriv e-barzh AL LIAMM en doare ma c'hellomp derc'hel da bourvezañ e koulz boued speredel ha diduamant d'hor mignoned, en ur yezh dellezek eus an anv-se.

165

Trugarez ivez d'an holl goumananterien a bedomp da glask en-dro dezho tud all evit ma teufent da greskiñ o niver. Trugarez d'ar brofourien vrokus o deus roet deomp tost da ur milion 300 mil lur kozh er bloaz tremenet ha sikouret, en doare-se, da baeañ koumanantoù d'ur priz izel d'ar re a oa berr an arc'hant ganto, ha dreist-holl d'ar re yaouank dilabour.

Spi hon eus e vo niverusoc'h-niverusañ ar re yaouank o kas oberennoù a dalvoudegezh d' AL LIAMM. Ur blijadur hag ur frealz eo bepred evit al lennerien gwelout anvioù nevez.

Eürus e vefemp ivez ouzh o gwelout o tont d'hor skoazellañ da gas ar gelaouenn war-raok evit mat hor bro hag hor yezh.

Ha bremañ dao dezhi etrezek an niverenn 300

RONAN HUON.

Tarzh ar garantez

Y. E. Jarl a zo bet unan eus kenlabourerien gentañ Gwalarn peogwir ez eo bet embannet e varzhonegoù kentañ war niverenn unan ar gelaouenn e 1925 hag e re ziweshañ war niverenn 150-151 e 1942.

Genidik eo Yann-Eozerz Jarl eus Sant-Nouga. Goude bezañ bet degemeret e « Centrale » ha « Polytechnique » ez eas da Skol ar Merourezh Arme hag e touas da vezañ rener Bitailherezh ar Rannvro. Emañ abaoe ur pennad mat, war e leve.

Avel spelc'h ar vali,
E kelc'hwent foll kala-goañv.
Fenozh a goeñv

Gant glav distan ha diglemm ar c'hounioù kent.
Sked da gened en o skeud,
A-aradenn, em c'hreiz a red.

Deizioù ened da zont.
Dienez va ene diannez
Ho kortoz hep ho karout.

Yender lemm ur yenn dir
E-kreiz anken ha dev va enkrez
A freuzh ennon pep frealzidigezh.

Un adglev e don da galon
'Adenaou bepred em adene
Ar gourc'han kaer a garez.

167
Biroù gouez frond ar brug,
Perak e toug ho proud
Ger ha pok ar garantez ?

Tan ar bedenn en noz teñval,
Da flammoù bev ne falc'hint ket
Lavar digemm va levenez ;

Dirazon, va dremm, a-dreuz
Bleunioù melen ar balan,
A glask c'hoarzh ar gouloù :

Gouloù-liv ar gouloù-deiz,
Lugern dous da lagad,
Tramor, trabed, ha tradeiz.

Kelc'hwent : korvent.
Gourc'han : kan gant ar rakger gour.
Tramor, trabed, tradeiz : gerioù gant ar rakger tra : en tu-hont da.

Evit ar re en toull

A-wechoù, ur frond o laka da soñjal en hañv tremenet, ur pouez-mouezh, ur jestr, liorzh an ti dilezet, a laka da zi-flukañ skeudenoù a gredent ankounac'haet. Gant poan e strivont evit kabestrañ o from. Dic'houest da vevañ war benn o daoulin, gourvezet, evel o c'henvroidi leun o c'hof er frankiz lazhet, re wan o unan-penn, dibourvezet, enket ha harzet, ez int bet paket ha kaset dirak furlukined ul lez-varn. Da chañs nemeti evito, ar sioulder, e kellig un toullbac'h.

Ar spi o doa da vezañ komprenet gant an dud all, ar re a ouie petra oa deut da vezañ o c'humuniez. Krediñ a raent bezañ skoazellet gant ar re emskiantek, ha pareañ ganto ar gouli bras savet pell'zo. Hogen e pep lec'h n'o deus kavet nemet diseblanted, er vro-mañ, stourmerion sañset, ar baotred anezhi !

Aet int, bloñset gant kement a zigasted, o soñjal eo bet boureviet ha lazhet ivez tud zo, evit ar memes bro !

Daoust hag a-benn e teuint da drec'hiñ war o c'hwervoni, o c'herseenn ? Da embregañ adarre war an douar-mañ, o minic'hi, da stourm en-dro gant nerzh a-enep d'ar mac'homerezh, evit n'anavezfe ket tud-all d'o zro an harlu hag ar vezh ? A brantadoù kuzh, anavezet ganto nemetken, e soñjont el liammoù flour o deus dilezet...

Er bed-mañ enepreizh, enkrezet, trubuilhet, emac'h o paouez bezañ skoet, breudeur ha keneiled. Pehini eo bet ho torfed, ma c'hallfe soñjal tud zo ho kastizañ ?

N'eus ket ac'hanoc'h ofisourion skedus, medalennet o bruched. N'eus ket ac'hanoc'h drouklazhourion speredek, sañset, o c'hounid emgannoù gant gwad ar re all... N'eus ket ac'hanoc'h stourmerion vrudet, a reer gopriddi anezho, o stourm evit lakaat arc'hant da sevel diwar ar marv...

169

Ho fazi nemetañ keneiled, a zo bezañ tud, tud war sav, hag a wel ! o welout eeun an traoù, ar gwir o vezañ ganeoc'h : un torfed eo diaes dezho pardonñ.

Pegoulz ez adwelot an nevez amzer o bragal, ar vran wenn o c'hoari, o'n em zistagañ war an neñv ? Pegoulz e klevot en-dro c'hoarzhadegoù ho pugale o c'hoari er park, e-kichen ar ouerenn oc'h hiboudiñ ?

Hag e chomfe a-sav ho puhez a-dreñv dor un toullbac'h ? Ha ne vije ket mui ac'hanoc'h nemet prizonidi, gwerzhet gant trubarded, da blijadur dister ur barner oc'h ober, lorc'h ennañ, e baour-kaezh micher druezus ?

En dreuzvuhez, e rakkambr ar marv, e-kreiz ar varbariezh, e chomit daoust da bep tra, o strivañ, war sav, evit gervel en ur youc'hal, an dieubidigezh.

Breudeur, keneiled, splujet e digenvez ur c'hraou, c'hwi hoc'h eus stourmet evit tud ho touar, diouzh ho kellig ni ho tenno !

Troet a-ziwar an iwerzhoneg

Kil an ti

Emañ " Tir na n'Og " e kil an ti,
 Ur vro hep par ken kenedek
 Tud peder c'har o vont di
 Hep botoù ganto na lavreg
 Hep galleg 'n o beg na brezhoneg.

Hag ez eus eno lastez e pep poull,
 Er vro-se ken kenedek,
 Hag e komzer ur yezh e kil an ti
 N'eus den 'vit he c'hompren 'met Aesop
 Hag eñ marv mil bell a zo.

Yer 'zo eno hag ur yarad poñsined,
 Gant houidi reut ha lizidour,
 Hag ur pikol ki du 'vel un enebour
 O c'hourdrouz ouzh pep hini
 Hag ur c'hazh, en heol, o huniñ

Er c'horn pellañ 'z eus traouajoù,
 Seizh marzhenn ar bed ' na petra,
 Lampoù, boukloù, ur c'hozh tog plouz
 Hag un drompilh mut ha peuslous
 Hag ur gastelodenn gwenn 'vel ur wazh.

Eno e teu Jipsianed a-strolladoù
 'N ur bompadiñ ha 'n ur c'harmiñ
 Ha 'vel er gêr e kil an ti
 Hag int o c'houlenn an aluzen
 E pep lochenn an enezenn.

171

Plijet edon e kil an ti
 En deñvalijenn betek diwezhat anezhi
 Ken na weljen eno ouzh sked al loar
 Ar mestr Aesop, 'n hini a oar,
 Hag eñ aet da gorrige deskidik.

Lakaet e brezhoneg a-ziwar " Cùl an ti " gant L. Andouard.

NOTENN WAR AN DROIDIGEZH

Ur wech m'edon e Doun C'hin (Dun Chaoin), e gouzelva Kirri, e ti Mallár, em eus bet etre va daouarn ul levrig koant barzhonegoù a oa e dalbenn : " Eireaball Spideoige " Lost boc'hruzig). Savet e oa bet gant ur barzh brudet eus kontelezh Korkig hag a zo aet da anaon nevez zo, Séan O Riordáin e anv. Unan eus e varzhonegoù dreist-holl a blijas din abalamour d'an danvez anezhañ, a dra sur, met ivez abalamour d'e anv : " Cul an ti ", ken heñvel ouzh hor brezhoneg-ni. Adskrivet em boa anezhañ hag abaoe em eus bet c'hoant d'e lakaat e brezhoneg. Her graet am eus hag e kavo amañ lennerien Al Liamm frouezh va labour. Nemet ur gwall labour eo treiñ barzhoniezh en ur yezh all ha n'ouzon ket petra a dalv, e

gwir, va zroidigezh.

Dre vras, e vefen a-walc'h a-du gant ar barzh gallek Guillevic pa lavar (1) n'eus nemet ur barzh a c'hell treiñ barzhoniezh. Daoust din bezañ savet meur a varzhoneg n'ouzon ket hag-eñ e c'heller ober ur barzh ac'hanon evit-se. Ne gredfen ket hel lavarout va-unan rak-se n'ouzon ket kennebeut hag-eñ em boa ar gwir d'ober al labour-se ha n'eo ket, koulskoude, ar wech kentañ e ran anezhañ. Nemet heñvel a-walc'h ivez ouzh Meven Mordiern e sav c'hoant ennon alies lakaat e brezhoneg ar skridoù e yezhoù all a c'hoarvez din lenn hag a blij din.

(1) " Mes poètes hongrois " (Va barzhed hungarat) gant Guillevic, kentskrid d'an embannadur kentañ, p. 22. Embannadurioù Corvina, Budapest.

172

A-hend arall, ma fellfe deoc'h lakaat e brezhoneg pe e spagnoleg ul levr douaroniezh hungareg pe rusianeg aes eo kompren e vefe bravoc'h, aesoc'h ha, dreist-holl, talvoudusoc'h ho labour ma vefec'h barrek war an douaroniezh hoc'h-unan estreget war an div yezh e labourit warno.

N'on ket sur, avat, da vezañ en em lakaet a-walc'h a-dreñv d'ar barzh gouezelek, evel ma erbed c'hoazh Guillevic e ranker ober, p' am eus graet va labour. Da skouer, gwerzenn diwezhañ ar poz kentañ a zo er skrid orin : « Gan Béarla acu na Gaeilge » pezh a dalv ger ha ger « hep saozneg ganto na gouezeleg » ha padal am eus skrivet « hep galleg 'n o beg na brezhoneg » abalamour, moarvat, m' am eus soñjet e sonfe bravoc'h en hon diskouarnoù breizhat.

En hevelep doare, n' am eus ket kredet treiñ « Tir na n'Og » e brezhoneg rak n'eo ket dres heñvel evidon ouzh « Bro ar re yaouank » pe « Bro ar yaouankiz ». Kredañ a ran, a-hend-all, eo anavezet a-walc'h ar bomm gouezelek heson-se evit ma c'hellfe tremen, evel m'emañ, en ur skrid brezhonek. Talbenn ar barzhoneg, avat, « Cùl an ti » am eus troet eeun hag eeun gant « Kil an ti », hep mont da glask pemp troad d'ar maout, daoust ma vije bet reishoc'h, moarvat, skrivañ « diadrefñ an ti » pe un dra bennak evel-se. Pec'hed e vije bet avat, d'am soñj, chom hep diskouez heñvelidigezh hon div yezh ur wech m'eo ken anat. An anv-kadarn « cùl » = kil hag ar verb cùlù = kilañ a vez implijet kalz en iwerzhoneg hiziv an deiz hag, evel just, ez on plijet-bras pa 'z en em gavan gant gerioù pe doareoù-lavar o tiskouez ar gerentiezh a chom etre hon div yezh daoust d'an amzer ha d'ar pellder evit chom hep o merkañ.

Evit echuiñ ha diskouez splann ar c'hudennoù en deus un troer barzhonegoù da ziluziañ e lavar in em bije gallet skrivañ linenn gentañ barzhoneg kaer Seán O Riordáin evel-se : « Emañ Bro ar re yaouank e diadrefñ an ti ». Hepmuiken !

D'al lennerien da varn hag-eñ em eus graet mat pe fall o klask lakaat en droidigezh, ha pa vefe diwar goust ar ster a-wechoùigoù, un tammig eus ar gened a zo er skrid gouezeleg hep bezañ sur, evel just, da vezañ tizhet ar pal a oa va hini.

L. ANDOUARD.

Unan eus troioù-kamm ar garantez

Lusian Tangi a zo kelenner war ar jedoniezh e lise Laval. Embannet ez eus bet dija ur pennad diwar e zorn anvet " Un dibunadeg " war niverenn 196 Al Liamm.

E Keribilkoad e oa div verc'h, Naig ha Korantinig, bihan o div ha didrouz evel div logodenn ; div werc'hez war an hent da vezañ div blac'h yaouank kozh.

Per a oa ur paotr yac'h, frammet mat, start d'al labour hag un den a galon vat. Klasket en doa dimeziñ meur a wech, met morse ne oa deut a-benn eus e daol, den ne ouie perak. Lod eus an dud, troet war ar farserezh, a damalle al lesanv goapaus a oa bet kavet dezhañ, met arabat e vefe d'am meno, bezañ a-du ganto. Perak 'ta ne gavfe ket " Penbroan " ur plac'h koant da zimeziñ gantañ ?

Gwelet en doa Per, ur wech pe ziv, Naig vihan en oferenn ha plijout a rae bremañ ar plac'h-se dezhañ, dreist-holl peogwir e oa bet kaset da c'hwitellat gioc'hed gant un nebeud merc'hed all.

Setu Per war an hent da Geribilkoad gant Loeiz " Lipebav ". Hemañ a oa brudet evit bezañ ar gwellañ er vro evit ober bazh-valan, ha gwir eo en deus an den-se, a-hed ar bloavezhioù, graet vad evit kalz paotred ha merc'hed yaouank. Ur mailh a oa Loeiz war ar vicher-se ha den ne ouie ken ha bez en doa bet gwechall ur vicher dereat bennak. Anavezout a rae ur bern tud e pep korn eus Bro-Gerne. Plijout a rae dezhañ bale bro ha pa zegouezhe dirak un daol, predoù lipous warni, e veze-eñ en e vleud koulz hag ar yar war ar bern kerc'h. Diwar an tech-se e oa bet savet evel just e lesanv kaer. Derc'hent dec'h e oa bet Loeiz, dre guzh diouzh an noz, e Keribilkoad evit gouzout dre vras penaos e vefe degemeret e c'houlenn gant Naig ha gant he zud. Kroget en doa gant e dammig labour kourater etre Naig ha Per, ha divizet e oa bet un emgav hiziv etre an daou zen yaouank.

174

E ti Naig e oa fichet kaer an dud abaoe kreisteiz da nebeutañ. An tad en doa troc'het pizh e varv du un tammig brizhellet war e chik, petra bennak ma ne oa ket ar sul. Boas e oa da sevel trouz etrezañ hag e varv bep gwech ma klaske diverrañ anezho, met hiziv ne oa bet klevet grik ebet. Kredañ a ra din zoken, en doa ouzhpenn kribet e vlev rouez a-raok klozañ anezho pizh gant e dog teir voulouzenn sanket don war e benn. Plouz fresk en doa lakaet en e votoù ha krennet e oa bet ar plouz-se eus a-dreñv eeunoc'h c'hoazh eget boaz. Pedet e oa bet gant ar merc'hed da wiskañ e zilhad sul met n'en doa ket asantet ober kement-se a ardoù : « Kerzhit d'an diamig ! Ne blij ket din lakaat ar bas war an hoc'h ! » en doa distaget krenn, rak evitañ ul labourer-douar a vez treuzwisket, dic'hizet ha disleberet pa lam diwarnañ e wiskamant labour.

Mamm an tiegezh he doa pintet war he fenn he c'hoef kaerañ, he c'hoef dantelezh sklaer, gwenn-kann, ampezet kalet ha bet kaset a-ratozh-kaer da di Chann ar ferourez, Ne oa ket c'hoazh warnañ un disterig kaoc'h kelien. Lakaet he doa ouzhpenn he jiletenn voulouz plaen, he zavañjer seiz du hag he botoù ler. Ha n'ouzon ket re vat hag-eñ n'he doa ket taolet un tammig « traoù c'hwez-vat » en he c'hrubuilh.

N'eo ket dav lavarout, rak pep hini a oar mat, e oa fichet cheuc'h an div verc'h, ken fichet d'an nebeutañ ha pa vezent pedet da zougen ar banniel pe delwenn ar Werc'hez Vari e pardon Sant Jermen.

A-hed ar mintinvezh e oa bet kempennet pep tra dre an ti hag er-maez. Luc'hañ a rae ar ganastell hag an armelioù gwelloc'h eget biskoazh ha c'hwez ar c'hoar a nije e pep lec'h. Kouevr ar potailhoù ha momeder an horolaj a oa bet spuret pizh ha lintrañ a raent evel tammoù aour. Ar c'hevrid ne oant ket diouzh friko : kalz anezho a oa bet flastret didruez gant ar valaenn, paket brav e-touez an neud o doa stignet e pep korn teñval eus an ti hag a-dreñv an arrebeuri dreist-holl. Ar re o doa harzet en ur sachañ prim o favioù kromm er mogerioù ne gredent ken diskouez o fennoù blevek heugus er-maez eus o zoulloù. Ar c'helien avat a nijelle didrubuilh eus an eil tu d'egile : ne oa ket bet graet brezel d'ar re-mañ.

175

Er porzh e oa bet rozellet ar vouilhenn hag ar c'haoc'h saout diwar an hent ha stlejet betek moger vein al liorz. Aze e oant bet kuzhet dindan ur c'harradig gouzer glas troc'het diwar dizh a-raok goulou-deiz. Dirak ar marchosi, ar bern teil kezeg, krennet ken brav hag ur bern plouz goude an eost, a zivogede fonnus, ha dont a rae, a vare da vare, an aezhenn domm diwarnañ betek an ti.

Ar c'hezeg - danvez ourgouilh al labourer-douar - a oa bet skrivellet gant evezh eus o divskouarn betek o lost, eus o moue betek o molinodoù... hag un tammig muioc'h a gerc'h a oa kouezhet en o laouer, dre zegouezh marteze.

Kempennet kaer e oa pep tra eta, ken kaer ha pa vezed bet o c'hortoz prosesion Gouel ar Sakramant.

Pa errujont e Keribilkoad e oa bet dav da Ber ha da Loeiz reiñ da gentañ un taolig lagad ouzh krevier ar saout hag ar moc'h, ouzh ar c'hezeg er marchosi, ouzh ledander ar bernioù plouz... ha dizourañ war an drez a-dreñv ar forn gozh. Daoust hag e oa deut Per da vezañ boas eus ar strivadennoù-se, e tennent avat bep gwech un tammig bec'h war e gorf ha war e c'hwezigell.

Klevet e oant bet evel just o vale er porzh, met den n'en doa fiñvet en ti. Pa erruas war an treuzoù e tistagas Loeiz gant e vouezh c'hroz : « Penaos emañ ar bed amañ ; kaer eo an amzer, » hag e chomjont a-sav en trepas. « Sell 'ta ! C'hwi eo Loeiz a zo degouezhet amañ ! » a respontas Yann, mestr an ti, hep sevel eus penn-laez an daol, en ur ober van da vezañ souezhet, hag eñ o c'hortoz abaoe kreisteiz ! Hag e voent pedet da zont tre.

Degemeret mat e voent bet en ti gant an tad, ar vamm hag an div verc'h, met na gwelloc'h na falloc'h eget ar marc'hadour moc'h pe an amezeg pa zeue da gerc'hat " Bijou " ar marc'h kozh da arat. N'emañ ket ar c'hiz gant tud ar vro-mañ da ziskouez war an taol o menozioù hag o santadurioù ; dav eo da bep hini kaout un tammig emzalc'h evit bezañ lakaet e rez un den a-zoare.

Ur pennadig mat e chomas Loeiz ha Per en o sav e-kichen an nor da gomz gant mestr an ti eus traoùigoù dister, evel tud erruet er gêr-mañ dre zegouezh ha prest da dreiñ seulioù o botoù dizale da vont er-maez. Meur a wech e oant bet pedet gant Katell, mamm an tiegezh, da deurel o fouez war ar bank ha bep a werennadig lambig a oa lakaet dezho war penn an daol, met ret e oa da Ber ha da Loeiz ober c'hoazh un tammig ardoù a-raok asantiñ da azezañ ouzh taol. Ne oa ket ar mare da ziarroudennañ diwar reolennoù sevended ar vro Vigoudenn !

176

Kerkent e kouezhas o feskennoù war ar bank e tegouezhas prim war an daol asiedoù, kontilli, fourchetezioù, gwerennoù ha kerkent all, bara gwenn, kig, krampouezh, gwin gwenn, gwin ruz ha sistr c'hwerv. Mont a rae ar merc'hed dre an ti eus an eil penn d'egile diwar dizh e-giz ur vandennad merien pa vezont hegaset e-pad o labour.

« N'omp ket deut amañ da glask boued, na da zebriñ friko, » a lavaras Loeiz en ur ober van da enebañ ouzh labour an ostizez. Ne glaskas ket avat bezañ re gendrec'hus rak dourenniñ a reas diouzhtu dindan e deod ha gwidilañ a reas un dra bennak en e gof, pa erruas betek e fronelloù c'hwez ilbouedus ar c'hig

klouar hag ar c'hrampouezh fresk. « A fidamdoue, mat emamp ganti hiziv, » a soñjas Loeiz ennañ e-unan. Ur mousc'hoarzhig a roufennas, hep gouzout dezhañ e zivjod hag e krogas da dreiñ etre e vizied beg e varvustell louet en ur louchañ a-dreuz war ar boued. Ne gleve ken ar mestr o tisplegañ doare an dachennad kerc'h du kaer en doa eostet ar bloaz-mañ en trest *, ken beuzet e oa e spered gant aezhenn an traoù lipous.

Per a oa tavedek a-walc'h abaoe ma oa degouezhet en ti. A-hed an hent da Geribiload e oa bet teodet mat koulskoude ha mont a rae ar gaoz en-dro etrezañ ha Loeiz koulz pe welloc'h eget pa vez div pe deir geben gozh o pradañ o c'houez e-tal ar poull-kannañ. Marteze e fistilhe Per un tammig muioc'h eget e oa dav evit en em lakaat dibled ha didrubuilh, pe evit klask disoñjal ar c'hlogorennoù savet en e dreid gant e votoù ler nevez hag a danailhe dezhañ bep kammed kig ha kroc'hen. Evel just n'en doa ket klemmet morse ha kerzhet en doa buan hag ingal, e gorf eeun ha sonn un dister re stardet en e borpant mezher du. Ne oa bet arsav ebet a-hed an div lev hanter nemet evit didanañ o gourlañchenn gant ur picheradig sistr pa errujont e " Toull ar Rev ". Dre ma tostaent ouzh Keribiload e sante Per e zaoulin o wakaat hag e zivesker o wanaat, ha pa soñje en abadenn en doa da c'houzañv bremaik e lamme e wad un tammig startoc'h.

177

Abaoe ma oa degouezhet ouzh taol, Per ne grede ken lavarout e oa dezhañ e benn-a-dreñv ha hejañ a rae e gorf war ar bank eus an eil tu d'egile e-giz ma vije bet ur bodig sporn du pe un dornadig linad tener o hegasiñ e groc'hen en e otoù. Loeiz, eñ, ne oa ket chalet gant netra, kas arae ar gaoz da benn ha mont a rae boued en e gorf. Deut e oa reut e sac'h ha tomm d'e fri pell a-raok ma tegouezhas ar mare da darlipat ar c'hafe ha da vlasaat evit doare ar c'hrampouezh gwinizh fresk. Komzet e oa bet, anat eo, diwar-benn an amzer, an eost, priz ar moc'h hag al leueoù... E gwirionez ne oa bet divizet eus tamm danvez a-bouez ebet, met mont a rae ar gaoz en-dro, ha war wellaat ez ae an teodoù dre ma tremene an amzer, dre ma tiskenne ar gwin hag ar sistr.

Izelaat a rae an heol a-dreñv gwez derv kromm al liorz ; e vannaù ruz-glaou, a-skelp d'ar prenestr, a drese war speurenn an trepas ur skeudenn iskis e-lec'h e fiñve hag e c'hoarie boudoù kevrinus ha diwirion. Klevout a raed er porzh ragach ar yer, echu ganto o devezh labour, o tostaat ouzh o c'hluad.

Deut e oa ar mare da " Lipebav " da gas da benn e dammig labour ; tost e oa bet dezhañ ankounac'haat e gefridi, ha deut e oa tost da vezañ besteod. « Plijout a rafe deoc'h, plac'h yaouank, dimeziñ gant Per ? » a lavaras Loeiz da Naig a oa chomet didrouz gant he c'hoar da bilpasañ er geuneudeg a-dreñv kein ar bank. Ha trouz ebet ken dre an ti, pep tra a oa sonnet hag an dud a oa mut o c'hortoz respont Naig vihan. Ar c'helien hepken a gendalc'he da nijal ha da lipat sukr ha krampouezh, den ne grede ken dichoual anezho.

Siwazh ! Naig ne responte ket. Trubuilhet e oa an dud hag e-pad ur pennadig pep hini a dennas e anal war-bouez ha gant evezh evit diwall da zirenkañ ar verc'h paour en he frederiadenn. Kuzhet he doa he fenn etre he daouarn ha klevout a raed anezhi o ouelañ hag o klemmichal. Ne ouie den ha gouelañ a rae Naig en abeg d'an doan pe abalamour d'ar blijadur. A-benn ur reuziadig e hejas, en ur zifronkal, he fennad blev du hag he c'hoef dantelez skañv evit lavarout : « Nann, » ha ne zistagas komz ebet.

Souezhet bras e chomas pep hini ha den ne rannas grik. Chifet ha mouspennet e voe an holl dud ha tostaat a reas tamm-ha-tamm o fri ouzh an daol. Per a gave dezhañ e astenne e zivskouarn hag e fri ha nec'het-tre e oa, o vezañ ma oa dija donezonet kaer war an traoù-se. Tost e voe bet dezhañ daskrenañ p'en em lakaas ar c'hwezenn yen da hegasiñ anezhañ dindan e dog hag e roched nevez-flamm.

178

Yann, mestr an ti, a ruze e votoù goustadig war al leur, marteze evit tresañ un arouez burzhudus bennak gouest da lakaat war an hent mat planedenn gamm e verc'h kilpennek-sot. Roufennet don e oa deut da vezañ e dal en un taol

krenn ha ne weled ken nemet gwenn e zaoulagad o luc'hañ dindan e abrantoù du ken stank hag ur c'harzhad strouezh. Dibunañ a rae dre e spered ur ribitailhad foeltradennoù ha kunujennoù n'int ket bet klevet alies er vro. Mezh en doa an den ; evitañ e oa dizenoret da viken tiegezh Keribilkoad en abeg da froudenn dic'hortoz e verc'h henañ. Ha gouzout mat a rae ouzhpenn e vije bet savet hep dale gant " Lipebav " milliget ur gontadenn goapaus ha dismegañsus diwar-benn an darvoud c'hoarvezet amañ hiziv, ur gontadenn skignet abred peder lev tro-dro da nebeutañ. « Seizh kant boulienn c'hurun, ne ouio morse honnezh pet c'hwenenn a beg en he fenn-a-dreñv ! Derc'hent dec'h pa oa deut Loeiz Lipebav da c'houlenn diganti ha degemer e rafe Per hiziv e oa bet-hi laouen bras ha fier-ruz. Kanet he deus abaoe a-hed an deiz evel ur vilfid diouzh un abardaez hañv. Ha setu bremañ kouezhet diouzhtu ar bouc'h e-barzh ar yod ! An diaoul a zo warni ha mallozh Doue war Geribilkoad ! Ha perak 'ta e terefe gwelloc'h outi un denig e fri togn ? »

Nec'het e oa Yann ken e oa nec'het. Ijinañ a rae e dachennoù kaer o tont da vezañ fraost, gwelout a rae o kreskiñ e pep lec'h al lann, an drez hag ar strouezh. Skuizh en em gave ivez : « Hep dale ne c'hellin ken kas al labour da benn hag e vo echu gant Keribilkoad... Mont a ray " Bijou " hag ar c'hezeg all gant ur marc'hadour bennak... ha me a vo astennet abred dindan pemp troatad douar druz, er gwasked e tu ar c'huzh-heol e " Park Yann Rest " », a soñje an den daoust ma ne oa ket boas d'en em chalañ.

Katell, anezhi ur vaouez dousik, hegarat, un tammig lent zoken, a oa chomet en he sav e-tal an daol. Ne oa bet klevet he mouezh nemet evit pediñ ar baotred da gemer boued ha da ziskenn gwin pe sistr. A-boan ma heje he fenn, a vare da vare, evit merkañ e oa-hi a-du gant divizoù ar wazed. E gwirionez ne gleve ket ha ne selaoue ket ragach ar baotred diwar-benn ar gouennoù kerc'h gwellañ pe ar mare gwellañ da zourañ ar pradeier : ne gompren ket ar vamm baour penaos e c'helled chaokat kement a c'hlaour evit displegañ kaoz ken divalav, dreist-holl peogwir e oa da zivizout diwar-benn un danvez pouezus meurbet. Hir he doa kavet an endervezh, met n'he doa ket kollet he habasketed rak disammet e oa he spered hag he c'halon pa soñje e oa en he zi danvez-pried he merc'h Naig. Gwelout a rae dija, en un huñvre, ur vandennad bugale vihan o redek hag o c'hoarzhin dre an ti pe o c'hoari tro-dro dezhi, istribilhet a-wechoù diouzh he brozh.

179

Saouzanet-tre e chomas Katell pa welas he merc'h o kas Per da sutal brulu ; hag echu ganti rambreal en un taol krenn. Didrouz, war beg he botoù e klaskas neuze an tu da vont er-maez war zigarez dichoual ar yar gozh a oa deut gant he zorrad poñsined melen da ziskrapañ war an treuzoù. Tennañ a reas eus he chakod he mouchouer tanav, pleget krenn ha feret pizh, evit sec'hañ un deraouenn pe ziv a rede klouar war he divjod.

Ar c'hi bihan, eñ e-unan, a oa sabatuet, ne fuste ken e lost e-tal an daol o c'hortoz kaout un tammig bara pe un donenn kig sall. Dirak an oaled e oa gourvezet bremañ ha van a rae da vezañ kousket.

En un taol krenn e lammas Korantinig war al leur dirak an daol, rusoc'h he fenn eget kripenn ar c'hilhog kozh : « Peogwir ne blij ket d'am c'hoar, Per... ma karfec'h... me a zimezfe ganeoc'h, » a lavaras-hi a vouezh izel.

Kalz tud, ha n'eo ket hepken teodoù fall, o deus lavaret d'ar mare-se e oa bet klevet e-kreiz an noz Loeiz Lipebav ha Per Penbroan o kanañ a-bouez-penn war an hent da vont d'ar gêr. Un dra a zo sur : daou viz war-lerc'h e oa friko bras e Keribilkoad.

* trest : un dachenn vras, ur park bras kentoc'h, tost peurvuiañ ouzh an ti feurm. Ne vez morse nemet un trest e pep kêr - pa vez unan.

Kasit ho koumanant e koulz ha kasit keloù pa zilojit !

Karreg an Diaoul

Pevarzek vloaz e oan pa c'hoarvezas an istor-mañ ganin. Deuet e oan da dremen vakañsoù da di va zud e Koad Tevennok. Bez' ez eo Koad Tevennok ur gêriadenn vihan war ribl ar mor, gant plegoù-mor e-leizh, goudoret brav, ha leun a enezeier bihan strewet amañ hag ahont. Ul lec'h kaer ez eo evit an hañv daoust ma ne vez ket re domm an holl an amzer eno atav. O tremen ehanou-skol e ti va zud edon eta, un ti bihan war an tevenn harp en aod. Tomm oa an amzer en hañvezh-se, un dev ! Ken ez edo ar gouerien en o biskig o welet o chatal o tizeriañ war o zreid hag o zrevadoù aet kras gant ar sec'hor ruz. N'edo ket kont evel-se gant an douristed deut da bourmen en hor bro, anat deoc'h !

Azalek ar mintin betek ar c'huzh-heol ne raen nemet heoliañ, war an traezh, neuñv war-gorre an dour ha merdeñ gant ur vagig hed-a-hed an aodoù. Ral ma 'z on bet gwelet er bourk e-pad ar miz am eus tremenet er gêr, paneve evit mont da brenañ an dra-mañ-dra-hont pe da welet an hemañ-hen. Va zud, daoust dezho da vezañ aet war o leve pell a oa, a gendalc'he da labourat ha da zaremprediñ aketus an aod, gwech o troc'hañ bezhin-du diwar ar c'harrigi da drempañ douar o liorz, gwech all o klask pioka, pe bezhin bihan, ul louzaouenn-vor ma vez graet ur maread a draoù ganti, koulz louzoù ha ludu. Aocherien oant bet a-hed ar wech hag e chomfent.

Reverzhi oa d'ar poent-bloaz-se ha disall bras gant ar mor eta. Fourrañ a rae eus un dervezh d'egile ken a veze dizoloet gantañ reier ha klosennoù dianav da galz a dud hag en ur zont en-dro e save uheloc'h-uhelañ ar gourlen. Reverzhi vras ar c'hantved a oa anezhi er c'hiz ma vez unan bennak bep bloaz koulz lavaret ! Ur mor a dud a veze gwelet en aod bemdez, lod o chifreta, ormela pe granketa, lod all o klask pioka pe bezhin ha lod all c'hoazh o rouzañ hag o c'hoariellat en dour ha war an traezh.

181

Un dervezh e ris va soñj da vont da neuñv betek un enezenn bell. Dre ma oa diskennet mat ar mor n'edo ket re hir din da vont di. Ha me en dour p'edo an dazre. Brav an amzer ha diroufenn ar mor, heñvel ouzh ur poullad-eoul ! Eoul avat ne oa banne ebet er mor d'ar marevioù-se. N'oa ket deut al listri bras daonet da richetiñ o c'haoc'h du war hon aodoù c'hoazh ! Salv ne vijent ket deut gwech ebet ! Buan a-walc'h ez aen war-raok, diwar-neuñv, netra o viret ouzhin da vont. Ur pennadig goude se e oan en em gavet war an enezenn. N'edo ket gwall-vras anezhi ; a-vec'h ma oa ur guchennig geot berr hag askol dister o poulzañ war he gorre. Reier bras a oa er penn all anezhi. Ha me da vont betek enno da heoliañ. Souezhet bras e voen avat p'en em gavis en o c'hichen. Rak eno e-touez ar vein ez oa bet savet un tiig-prenn, toet gant leton, hag eñ kuzhet gant pezhiadoù kerreg lakaet en ur bern. Hanter zigor oa an nor ha dre an toull e veze gwelet an diabarzh. Ur c'hohz gwele hag un daolig kamm a welis a oa ennañ. Freuzet ar gwele ha traoù war an daol. Neuze e klevis trouz en aod : unan bennak oa ahont izeloc'hik o treiñ mein. Ha me kerkent sachañ va skasoù ganin hag en dour adarre etrezek an douar bras.

Trubuilhet e chomis meur a zervezh da c'houde se gant ar pezh am boa dizoloet war an enezenn ahont. Edon o paouez kavout ul logenn, gant un den o vevañ enni, me hag a gave din ne oa tamm buhez ebet eno e-kreiz ar mor. Soñjezennoù a bep seurt a zeue war va spered ken ma chomen dihun nozvezhiennoù oa. Piv an diaoul a oa eno o chom ? Peseurt den oa ha perak e oa aet da guzhat d'ul lec'h ken distrob ? Ouzh va zad e ris un nebeut goulennoù hep diskuilhañ netra dezhañ. E-giz-se eo e teuis da c'houzout penaos e veze graet KARREG AN DIAOUL eus an enezenn-hont. Diouzh doare e oa ur spes pe un tasmant war ar roc'h-se abaoe pell a oa. Marteze zoken a levere an dud ez oa AR BOUDEDEO hag a oa bet paket eno gant al lanv. Kalz a dud a save sonn o blev war o fenn pa veze

meneg eus an istorioù-se hag evit doare pa veze garv ar mor ha foll an avel e veze klevet ur youc'hadenn skrijus o tont eus an tu-se ha gwelet tan ha luc'hed o tarzhañ a-zioc'h an enezenn.

N'on ket spontik na re droet da grediñ kaozioù ar re gozh, met an dro-se avat n'oan ket en va aes. Kaout a rae din zoken am boa gwelet lochenn an tasmant war Garreg an Diaoul. War an echu edo ar reverzhi pe dost. Gwall vannout a rae ar mor bemdez. Marvor oa bremañ. N'oan ket gwall galonek ken da vont betek ar Garreg-hont, sur ne oan ket 'vat. Foer a oa en va loeroù zoken. Chom a ris war an douar bras, met c'hoant gouzout am boa, ha ne baden ket gant ar c'hoant ! Benn ar fin e waskis war va aon ha gant ur vagig ar wech-mañ e skois war-zu an enezenn gevrinus.

182

Ned is ket betek enni avat ! Fur a-walc'h e voen da lezel ur pennad hent etrezi ha me, kerkaz ma vefe deut henhont da glask kastrilhez ouzhin. Tro an enezenn a ris, eus a bell, o sellet pizh ouzh kement toull ha kement maen. Netra n'am boa gwelet avat hag edo fri ar vag troet ouzh an douar bras. Ha me dipitet bras o treiñ va fenn ur wech all c'hoazh war-zu an enezenn, ken na welis un dra ; ket ! unan bennak ; ya, unan kozh a-walc'h, tro-kein ur garreg o sellet ouzhin. Ha den ebet ken kerkent. Kaer am boe sellet mat ne welen seurt ebet ken. Steuziet oa. A-walc'h am boa gwelet avat evit reiñ lamm d'am c'halon ha boued d'am spered.

Diwar an dervezh-se e nijas kuit diwar va spered istor an tasmant. Ne oa aze nemet kozh kaozioù sot gouest da spontañ ar vugale hag ar plac'hed yaouank kozh. Henhont oa un den penn-kil-ha-troad ! Piv 'ta e vije bet ? N'ouzon ket penaos e teuas da soñj din planedenn c'hilac'harus Mikael Kerdraoñ. A-raok mont larkoc'h gant va istor e rankan lavaret piv oa hennezh, ar C'herdraoñ-se. Bez' oa ur paotr yaouank kozh hanter-kant vloaz anezhañ, hag az eas trumm kuit diwar an douar-mañ un nozvezh c'hoañv pedo Sant Per ha Sant Paol o c'hoari bouloù war an daol, pemp pe c'hwec'h vloaz oa. Den ebet ne ouie petra oa deut da vezañ pe d'ar baradoz pe d'an ifern oa aet da gozhañ pe d'an enezenn ma vez graet Tir na Nog anezhi. Klask bras a oa bet warnañ e-pad meur a sizhunvezh, an archerien ha tud ar vro o furchal kement prad, foenneg pe laneg, kement poull hañvouezh ha bern teil a oa er c'hontre. An aodoù a voe turiet ivez met roud ebet eus ar paour-kaezh Mikael ne voe kavet. Lod a levere e oa bet lazhet ha plantet don en traezh rak ne oa ket deuet mat gant tud oa. Lod all a soñje dezho en doa en em zistrujet rak soñjoù du a zeue gantañ tachadoù. Mont a reas an teodoù en-dro e-pad ur frapad ha gant an amzer o vont e-biou e voe ankounac'haet Mikael gaezh.

Chom a ris-me da dreiñ an istor-se em fenn ha muioc'h-mui e teuen da grediñ e oa Mikael Kerdraoñ an hini am boa damwelet war an enezenn. Penaos 'ta e vije aet da chom ahont hep gouzout da zen ? N'am boa ket soñj vat anezhañ ken, daoust m'am boa e welet meur a wech o vont hag o tont gant e varc'h-houarn, hag eñ laouen atav. Soñjoù du war e spered, emit-hu ? Ne oa ket anat, diouzh e welet. Met piv oar enkrez un den, nemet e vreur e ve ?

183

P'edon o levian evit an eilvet gwech etrezek ar Garreg-hont n'edon ket diwar aon, diwar guriusted ne lavaran ket, c'hoant din d'ober anaoudegezh gant ar c'hozhiad. En arvar e oan bet chomet e-pad pell amzer. Gwelloc'h oa din, a soñjen, reiñ peoc'h dezhañ peogwir en doa dibabet da vevañ en doare-se pell diouzh an dud. Ha koulskoude e oan dedennet gant an enezenn-se e-giz pa vije bet un nerzh kuzh ha didrec'hus o sachañ ac'hanon etrezek enni. Hag un dervezh ne c'hellis ket padout hiroc'h.

Digoumoul oa an oabl, bev an avel hag un tamm houl a oa gant ar mor. P'edon o pellaat diouzh an aod e kave din edon o kuitaat ur bed evit antren e-barzh unan all kalz koshoc'h ha chomet gwerc'h. Ur hed manet naturel hep loustoni ha saotrezh ar bed a vremañ. A-viskoazh e oan bet troet gant ar vuhez « pell diouzh an trouz ha diouzh safar ar bed ». Ez-vihan am boa savet un ti-prenn en ur foenneg hag eno oa e tremenen ar bras eus va amzer o liorzhañ hag o studial an natur en-dro din. Un doare enezenn oa al liorzh-se din ivez. Setu

perak marteze e oan dedennet gant buhez souezhus kozhiad Karreg an Diaoul.

Prestik goude-se edon en em gavet. Ul lamm er-maez ha me war-eeun etrezek ar varakenn. Divizet em boa mont frank ha diardoù dezhi, hep klask en em guzhat. Daoust da se e lamme va c'halon en va c'hreiz dre ma tostaen outi. Klask a raen kaout un dremm seder hag ur bale sioul kement ha reiñ da c'houzout oa ur mignon oa o tont. War-hed un ugent metrad bennak diouti e chomis a-sav. Fiñv ebet war he zro. Serr an nor ha didrouz pep tra. « Tud zo ? » a c'houlennis. Respont ebet. Krog oan da gaout aon. Marteze oa cheñchet, aet da ouez abaoe ar geit m'edo eno e-unan. Marteze n'oa ket Mikael Kerdraoñ oa eno o chom. Faziet em boa ?

A-benn peder pe bemp munutenn, ar re hirañ em buhez kredit ac'hanon, e wigouras an nor hag e tigoras goustadik. Dont a reas ar paotr kozh er-maez eus e log. Rous-takenn oa e groc'hen gant an aer-vor. Ur pezhriad barv liv al loued a oa savet dezhañ hag a dape betek e vruched. Doare gouez avat n'en doa ket daoust d'e stumm diskempenn, d'e vlev diskramailh ha d'e zilhad peñseliet... Eno edomp hon daou, an heol-grilh o parañ warnomp, ha ni o sellet an eil ouzh egile evel daou zen o vont d'en em gannañ. Sec'h oa va staoñ ha ne gaven ger ebet da lavaret dezhañ.

184

Pegeit e padas an abadenn-se, piv da gantañ a gomzas, a-benn pegeit e tiroufennas tal ar c'hozhiad hag e paras ur mousc'hoarzh war e vuzelloù, ne oufen lavaret. Alies abaoe an hañvezh-se em eus bet klasket kaout soñj eus an darnig-se eus va buhez. En aner avat, e-giz ma vije bet diverket da vat. Eus ar peurrest avat em eus soñj vat pa grogas Mikael, rak Mikael Kerdraoñ oa, da gantañ din e vuhez. Kaout a ra din klevout c'hoazh e vouezh sioul o vont hag o tont, evel tre ha lanv. Meur a wech e teuis d'e gaout war-lerc'h an deiz-se ha bep tro e tribunas din un tamm eus e droioù war an douar. Bez' e oa bet en amzer e yaouankiz un den gae ha laouen. E kement gouel ha pardon e veze gwelet ha plijadur a veze gantañ. N'oa ket dezhañ evit lakaat an dud da c'hoarzhin pe da zañsal. Re a verc'hed a oa war e dro, n'en doa ket gellet kemeret hini ebet anezho da bried hag e oa chomet e-unan da gozhañ. Ha dre ma koshae e teue c'hwervoni en e galon o welet an dour o vont diwar e batatez.

« Erru ar gozhni a levere. Ha neuze gwelet ar vro o tistummañ, o tivalavaat hag o vervel tamm-ha-tamm, hag hi ker bev ha ken yac'h kentoc'h. Droug az ae ennon o welet an dud o sevel tiez war an tevinier, o tiskarañ ar gwez hag ar c'hleuzioù. Ar re yaouank o vont kuit ha tud estren o tont da laerezh hon douaroù diganeomp. Ha neuze spered an dud o cheñch, o klask marmouzañ o amezeien. »

Derc'hel a rae gant e gaoz war e bouezhig. Tamm droug ebet en e vouezh nag en e zaoulagad. Kerse ha melkoni avat. Kaout a rae din e oamp deut meur a zek vloaz war hon giz. Ne oa nemet mor hag inizi en-dro deomp. A-vec'h ma veze gwelet linenn danav an douar bras, e-giz ul lizenn zu, a-hont er pellder. Ne veze ket anat an tiez warnañ zoken. Huñvreal a raen gant an amzer-gozh pa zouje mab-den d'an natur ha n'oa ket klask gounid arc'hant diwarni oa.

« Abaoe ur pennad dija e oan gant ar c'hoant da vont kuit diouzh ar bed-se. O ! N'oa ket en em lazhañ am boa soñj ober. Tra 'ga ! Re e plij din ar vuhez. Mont da chom pell diouzh an dud kentoc'h en ul lec'h sioul. Hag un nozvezh c'hoañv ne voen ket evit padout. O pakañ ur banne e oan bet e Kreac'h-an-Avel. Ne oa nemet pennoù trist en-dro din. Pegeit a soñjen e c'hellfen ren ur vuhez e-giz-se c'hoazh, hep pakañ anezho pe en em reiñ d'ar boeson. Ha ne zistrois ket d'ar gêr ken. Da di ur c'hamarad kozh ez is da c'houlenn gantañ kemeret ur c'hanod kozh en doa. Hag abaoe emañ amañ evel-henn, hañv-c'hoañv, noz ha deiz. Kavout a ran pesked, kranked, ormel, a bep seurt traoù eus ar mor kea da zebriñ. A-wechoù ivez ez an da di va c'hamalad da gerc'hat patatez pe legumaj pe defotajoù pa vez deut an noz. Neuze ez an d'ober un dro betek va zi hag a zo bet gwerzhed abaoe. N'eus nemet ar chas o harzhal pa dostaan re ouzh an tiez. Ma ouezfe an dud piv a zo o vont e-biou d'o ziez d'ar marevioù-se yañ, int-i hag a gav dezho ez on bet debret gant ar c'hranked ! « Teuz Mikael a zo

bet en ti-ni en noz-mañ ! ha... ha... ha... ! »

185

Echu oa ar vakañsoù hag e rankis mont en-dro d'ar skol pell diouzh ar gêr. Ur bern trubuilhoù kouezhet war va buhez a viras ouzhin da zistreiñ da Goad Tevennok ken oa tri bloaz war-lerc'h. Kentañ tra ma ris p'en em gavis er gêr a voe mont war Garreg an Diaoul. Louet oa an amzer, doare glav ganti. War an enezenn ne oa roud ebet ken eus va c'hamalad kozh. Piv ouie petra oa deut Mikael da vezañ ?

Pa zeu an istor-se da soñj din e kav din ez on bet oc'h huñvreal. Un deiz bennak marteze, pa vin aet kozh, ez in me ivez da chom war Garreg an Diaoul ma ne vez ket gwerzhet 'benn neuze d'an douristed pe d'an arme.

NOTENNOU :

En o biskig : droug, dipit enno.

Karrigi : kerreg.

Trempañ : strujañ.

Aocher : du-mañ ez eo an dud hanter-labourerien-douar, hanter-labourerien-aod (pioka ha bezhin).

Disall : diskenn a ra kalz ar mor.

Fourrañ : mont pelloc'h-pellañ.

Gwall-vannout : diskenn nebeutoc'h-nebeutañ, e-pad ar reverzhioù.

Tachadoù : a-wechoù.

Rous-takenn : rous-teñval.

N'oa ket dezbañ : n'oa ket trec'h dezhañ, den ebet par dezhañ.

An dud n'int ket fur

Lavarout amañ perak ez eas e wreg da di he mamm, ha perak e kasas ganti ar c'hazh ne gasfe da zen un anaoudegezh resisoc'h eus an darvoud a c'hoarvezas e kêr an devezh-se.

Ar wreg n'he deus netra da welout en degouezh. Nag ar c'hazh evel just. Meur a wech e c'hoarveze gant ar vaouez mont da di he mamm. Evit gwalc'hañ c'hoant-gouzout unan bennak e c'hellan reiñ da c'houzout ne oa ket dreist yec'hed ar vamm. Bep tro ma veze ret d'ar wreg mont eus ar gêr he devoa kemeret ar boaz merkañ war ur follenn baper roll an traoù pouezusañ a chome gantañ d'ober, evel dourañ ar bleunioù (ur bern a oa anezho en ti), prenañ bara, pe laezh ; stlepel e boest an ti-post al lizher-mañ-lizher, hag all. E traoñ ar bajenn e skrive-hi bewech, e melloù lizherennoù gant ur c'hreion feltr : « an alc'houezioù » ; abaoe ma oa bet darbet d'he fenn-skañv a bried tremen tost un nozvezh a-bezh er-maez goude un dro iskis a-walc'h a c'hoarias dezhañ e-unan. Un drovezh, deuet d'ar gêr goude e zevezh labour, eürus en ur feson d'en em gavout e-unan-penn, en em daolas da vat da lakaat urzh en e baperioù. Goude un eur bennak a labour en devoa leuniet e baner aozilh. Diskargañ a reas an holl draoù er sailh-lastez ha, perak nann ? divizout he chas kerkent war ar straed. Hen sammañ a reas 'ta, ha mont, drant ha chichant, diri traoñ, en ur sotal, war gorf e roched. Brav-tre e oa an amzer, daleañ a reas en ur zistreiñ, dibrez evel ma oa. Pa astennas e zorn da zigeriñ e zor, ur wech pignet betek an trede solier e-lec'h m'en em gave e lojeiz e chomas genou digor. Lezet en devoa an alc'houezioù en ti. Ha, pep hini a oar kement-se, seurt dorioù a lakaer war an tier, a serr drezo o-unan. War ar pondalez e chomas, kollet, genaouek. Ne dalv ket kontañ ar sirk a oa bet ret dezhañ ober evit kaout un alc'houezer. Graet en devoa e venoz mont da dremen an noz en un ostaleri, ma ne vije ket deuet a-benn, er fin, goude bezañ galoupet dre gêr a-bezh da gavout un den kozh, seven a-walc'h da zont d'e sikour. Setu perak e kave abaoe, bewech ma 'z ae kuit e wreg, ar gerioù-se, flemmus a-walc'h evit e emvrud, e traoñ e listenn gefridioù.

187

Ha koulskoude, ne oa ket diot an tamm anezhañ. Er c'hontrol bev ! Ur garg uhel en doa en e labouradeg ha barrek-tre e oa war gement tra a selle ouzh e vicher. En ur feson, diaes e oa intent penaos ha perak en em ziskoueze ken dieñvor ha ken dievezh war gement tra a selle ouzh e di. Marteze e oa an dra-se un efed eus al levezon he devoa kemeret - pe, en devoa lezet e wreg da gemer - war bep tra a denne d'an ti. Evitañ, ne wele ket an dra-se gant daoulagad mantret ha n'en em gave izelaet e mod ebet e-keñver e wreg. Emichañs e tispigne re a nerzh en e vuhez vicherel evit bezañ rediet ouzhpenn da vezañ kiriek eus traoùigoù boutin buhez an ti.

Ha re laouen, e soñje, e tle bezañ ur vaouez pa c'hell kemer start ar c'habestroù evit bleniañ an ti. Eñ a lavare alies : « diaesoc'h eo dezhi dispign ar moneiz eget n'eo din o gounit ». Ne gare ket en em gavout e-unan er gêr. Pa c'hoarveze kement-se gantañ e samme e gabas, ha goude un taol sell d'ar paper lezet evitañ, peurvuiañ war daol ar gegin, e tiskenne prim d'ober e brenadennoù.

Ne gare ket digenvezded e di. Soñj a zeue dezhañ, a-wechoù, eus an trivliad a leunias e ene an taol kentañ ma oa bet ret d'e wreg mont d'ober war-dro he mamm. « Un devezh pe zaou, » he devoa lavaret. Soñjal a rae « n'eo ket fall d'unan en em gavout e-unan-penn, ur wech an amzer, gant e venozioù ». Ret eo lavarout ivez ne oa ket-eñ mui yaouank-flamm pa oant bet euredet. Krog e oa dija en e dregont vloaz. Hag evel just, amzer gaer en devoa bet da gaout boazioù a denne, mod pe vod, da re ur paotr yaouank kozh. Hegaset en em gave a-wechoù gant piltrot diehan e wreg en-dro dezhañ. Ouzhpenn dek gwech en ur c'hardeur e c'halve anezhañ adalek m'en em gave dispartiet outañ gant an disterañ speurenn.

Ha kalz hegasusoc'h e teue a-wechoù da vezañ he galvadenn eget he filtrot, rak anvioù iskis a roe dezhañ. Ha koulskoude p'en em gave e-unan en ti, en divije graet ne ouie ket petra evit gallout klevout an anv milliget « toutouig » a rae dezhañ skrignal e zent.

Degouezhet en ti, an devezh-se, en em daolas en ur gador-vrec'h. E sioulder divoutin an ti a c'hronne anezhañ, ne gleve nemet draskadennoù an arrebeuri pe an treustoù. Bras-divent eo un ti goullo. An arrebeuri, da skouer, bet dibabet gant kement a aked ganto o-daou hag a rae diouzh o zi ur gwir baradozig. Ya ! Hogen pa ne oa ket e wreg eno an traoù-se a zeue da gemer o stumm gwirion : traoù lufus, traoù yen, traoù marv.

188

An devezh-se 'ta e kemeras e gabas goude braslenn ar follenn kavet war daol ar gegin.

Ne gare ket kalz mont e-unan d'an ti kenwerzh. Pa 'z ae gant e wreg e vourre avat, rak neuze n'en doa diviz ebet da gemer. N'en devoa tra all d'ober nemet astenn e sac'h, pe garigellig ar stal hag o stlejañ betek ar c'hef. Gant e wreg e oa ur wir blijadur ober kefridioù. Tridal a rae e galon gant al levenez a verze war he dremm. Gwelout anezhi o tigemmeskañ bernioù « pilhoù », evel ma lavare evit « chigardiñ » anezhi, keñveriañ prizioù, ha prenañ er fin gant ar brasañ siriusted traoù, e ouie re vat, ne servijfet nag er gegin nag en ti a rae dezhañ mousc'hoarzhin. En em gavout e-unan evit ober ar c'hefridioù a oa un afer all. Marteze, e gwirionez, n'en divije ket displijet kement-se dezhañ, ma ne vije ket moustret gant ar menez n'en devoa gallet biskoazh teurel e dreid en ur stal hep disoñjal an hanter eus ar pezh en devoa da brenañ. Rak aheurtet e oa an den. Evit un tenn n'en divije ket kaset gantañ ar baperenn lec'h he devoa e wreg kemeret ar boan merkañ dezhañ roll an traoù rekis. Displegañ ha lenn, zoken dre guzh, seurt follenn baper villiget a chome dreist d'e c'halloud. Gwelloc'h e kave mont en-dro ur wech pe ziv da beurechuiñ e brenadennoù. Bep tro e c'hoarveze an hevelep tra, daoust d'ar striv pennek a rae evit kaout soñj eus pep tra. Ingal e c'hwhite war e dad.

An devezh-se e c'hoarzhaz a-greiz kalon en ur lenn bilhed e wreg. Dek tro, e soñjas, a vije ret dezhañ ober evit degas gantañ an holl draoù merket. « N'eus forzh, emezañ, graet e vo ! ». Sammañ a reas e gabas ha mont. D'ar supermarc'had.

Amzer en devoa.

Ober a reas, dibres, tro an astelloù, en ur sellout pizh ouzh pep hini. Rak pep hini en em ginnige d'e zaoulagad evel un tiig kenwerzh gwirion e-lec'h ne vije bet gwerzhet nemet ur seurt danvez. Lod anezho a zedennas pell amzer e selloù abalamour da fonnusted an traoù ledet warno. Bamañ a reas dirak hini ar c'hinkailherezh ha bitrakoù. Meur a wech en devoa merzet ur pouez gwaskus o vac'hañ war e skevent, gant an avi a c'houzañve prenañ tra pe dra en astelloù-se. Karet en divije kaout ostilhoù a bep seurt en e garrdi. Krediñ a rae en divije graet ur bern traoù m'en divije gallet kaout a-ratozh, dindan e zorn, ar benveg dereat evit ober an aozadur goulennet. Lavaret en devoa kement-se d'e wreg e-doug unan diouzh o zroioù er supermarc'had.

189

Mousc'hoarzhzet he devoa graet, ha gant kalz a deneridigezh he devoa respontet dezhañ : « Karedig, gwelloc'h e kavan ober en ti gant dornell vac'hagnet un nor eget gwelout va gwaz o vont d'e vurev gant un dorn mailhuret, pe e dal faoutet ». Ha re vat e ouie e oa ar gwir ganti. Ar pezh a dalveze d'un tal faoutet a reas dezhañ kounaat en devezh-se ma fellas dezhañ, e derou o friedelezh, stagañ stignoù a-us d'ar prenestr er sal-debriñ. Biskoazh ne zeuas da intent penaos e achapas ar morzhol diouzh e zorn ; na penaos, gwashoc'h, e oa deuet a-benn an diot a vailh-se da vont da stekiñ ouzh gwerenn vras ar prenestr goude bezañ sanket, en ur dremen, ur mell taol e korn e dal.

Ar gwir a chome gantañ, koulskoude, da arvestiñ ouzh an traoù ne c'helle ket prenañ, pa zeue, e-unan, ur wech ar mare, d'ober prenañ.

Gant keuz e vountas dirazañ e garrig, o sellout pizh ouzh pep tra en ur glask kaout soñj, gwellañ ma c'halle, eus e listenn dilezet war dad ar gegin. War un astell e kemeras bleud, daou bakad. Unan un tammig grosoc'h evit ober rous hag un all evit ar gwastilli hag ar c'hrampouezh.

Ha sukr. Ha margarin. Ha formaj-laezh goude bezañ digoret ar voest hag hen dastornet a bep tu evit gouzout hag-eñ e oa gwak a-walc'h. Dirak ar rezin sec'h e chomas a-sav goude. Kounaat a reas ne oa ket merket rezin war e listenn. Mousc'hoarzhin a reas en ur soñjal e lavarfe d'e wreg he doa disoñjet kement-se. Ar wech diwezhañ he devoa graet fars e oa bet rediet d'hen ober hep rezin. Ha c'hoazh m'he divije gallet lakaat ennañ prunennoù sec'h e vije bet dereat pep tra. Siwazh ne oa ket kennebeut ur brunenn sec'h en ti ! Ha fars hep rezin pe brunenoù sec'h ned eo netra. Goude se en devoa laezh da bremañ. Kemer a reas ar seurt diñs plastik-se ma vez troc'het ur c'horn anezhañ evit lakaat al laezh da zont er-maez. E deurel a reas, dievezh a-walc'h en e garrig, e-mesk e brenadennoù all. Mont a reas an diñs-laezh da stokañ ouzh un dra bennak kalet, ha darbet e voe dezhañ tarzhañ. Gant aon e tiverfe al laezh en ur saotrañ pep tra en e garrig e tastornas an diñs plastik evit gouzout e pe stad e oa.

190

Ha kit da welout penaos e tegouezh a-wechoù darvoudoù spontus e buhez mab-den ! An diñs-laezh o stokañ e strad ar c'harrig en doa strafuilhet anezhañ ne ouie perak. Kenderc'hel a reas koulskoude da sammañ traoù e-barzh met o lezel a rae bremañ da gouezhañ dre gaerik...

Neuze e chomas a-sav, krenn, hep gouzout ar pezh a c'hoarveze gantañ. E selloù a baras war ar sapre diñs-laezh. Hag en un taol e splannaas pep tra en e spered. E gegin en em ziskouezas ken splann ha ma vije bet e-barzh e gwirionez. Hag er gegin ar fornigell-aezhenn en devoa lakaet warni ur gastelodennad laezh da dommañ evit ar c'hazh, evel ma oa boazet. Ar menoz-se eo a aloube e spered hag a rae dezhañ, hep gouzout, kemend-all a dregas. Re drumm e tarzhas an eñvorennoù-se en e spered ha pennfolliñ a reas. Daoubleget e oa a-us d'e garrig hag hep gouzout dezhañ e teuas war e vuzelloù ar ger sebezus : « An tan ! ». Dislivet e oa e zremm hag un dra bennak, par emichañs d'ar spont a c'hounezas e vizaj, hag e zaouarn a grogas da gremañ. Met an holl a oar ne c'hell ket un den en em gavout e-unan-penn p'emañ oc'h ober e varc'had en ur supermarc'had... Atav en em gaver skoaz-ouzh-skoaz gant unan bennak, dreist-holl p'emeur, evel ma oa, dirak ur stal voued. Hag an disterañ evezhiadenn a ra unan a vouezh uhel a dizh atav ur skouarn bennak. Hag an aon a sailhas warnañ betek don e vouzelloù. Ur c'hwezenn fonnus a c'holoas e gorf. Evel bountet gant un nerzh galloudusoc'h eget e youl e kemeras e lañs. Ne soñjas nag er c'harr edo o leuniañ nag er pezh a falveze en ti, rak ne bare dirak e zaoulagad nemet ur skeudenn : hini al laezh o tont en tan hag o lazhañ ar flamm. Klevout a rae trouz an aezhenn a lipe en ur c'hwitellat revr ar gastelodenn, bremañ goulo. Gwelout a rae ken splann ha ma vije bet er gegin e liv glas tener dislivet ha santout a rae betek don e fronelloù he c'hwezh kigen diblusket ken arouezius !

Lijer e oa an den. Ha d'e oad e lammer dreist pep skoilh hep zoken teurel evezh outo. Amzer lavarout, e oa lammet dreist klouedig unan eus ar c'hefioù. Plac'h ar c'hef a gasas he dorn d'he brennid en ur lavarout : « Iche ! » hanter spontet gant un dra ken direizh. Menel a reas e-giz-se, beg digor, he dorn dehou o vac'hañ he bronñ gleiz. Ne ouie evel just na piv e oa an den, na petra a c'hoarveze gantañ, na da belec'h ez ae. Edo dija an den o tremen dre an nor vras hag o kemer e lañs d'an daoulamm ruz. Pa c'hellas, a-benn ar fin, tennañ hec'h anal, e pennfollas hi hec'h-unan d'he zro. Turlutañ a rae, o klask moneiz e tiretenn ar c'hef, pa glevas un trouz braouac'hus ha bouzarus, o sevel e penn pellañ ar stal. Div vaouez, unan kozhik, eben en hec'h oad gour, hogen ken pennfollet o-div, a rede d'o zro war he zu, pe, e gwirionez, war-zu trepas dor ar stal, en ur c'harmiñ : « An tan ! An tan ! ». A-dreñv an div-se, bourbl an engroez. E berr amzer, ugent pe dregont kristen a gemere d'o zro o lañs, par d'un tarzhañ mor un devezh korventenn, hag a zeuas gant nerzh dall un tropell

dichadennet da gemer an hevelep hent.

191

Hogen strizh eo an tremen etre ar c'hefioù, hep kontañ ar chadennoù stignet etre ar re ne oant ket e servij hag a n'em ziskouezas treitour-tre d'an divesker. Emichañs, m'o divije kemeret an amzer da dremen hep en em vountañ an eil egile, o divije gallet tremen hep an disterañ damant ha tizhout ar straed hep an disterañ bloñs. Hogen, piv a c'hell chom sioul, pa glev, a-dreñv e gein ur vlejadedg vouzarus, kemmesket gant garmadennoù, leñvadennoù, pa ne oa ket mallozhioù kounnaret un engroez pennfollet. Ouzhpenn, nerzh unan spontet a zo divuzul. Stlepel a rafe pep tra a seblant ober skoilh d'e dec'hadenn. Mac'hagnañ a ra, pilat, frikañ ha flastrañ kement tra a gav dirazañ. Hag amañ e oa bet ur bern tud mac'hagnet, pilet, friket ha flastret. Ar bloñsoù ne oant ket mui da gontañ.

Hag an hini a oa kaoz d'an holl reuz-se ?

Redek a rae, skañv, war ar riblenn-straed etrezek e ranndi. Kerkent ha ma oa en em gavet er-maez eus ar stal, hanter spontet gant soñj e gastelodennad laezh war an tan, e kerzhe gwall brederiet. Hag en ur drotañ, e seblante atav dezhañ klevout trouz an aezhenn o flistrañ eus ar gorzenn. Klask a rae jediñ pegement a aer hag a aezhenn a oa ret, pe a-walc'h kaout, evit ma c'hoarvezfe an darzhadenn a gasfe d'an diaoul ruz ha kamm e dammig ranndi, gant an holl draoù o devoa, e wreg hag eñ, lojet enni gant kement a aked. An dour a zivere diouzh e dal. Neuze e soñjas en e gazh. Mouget e vo, emezañ outañ e-unan. Dre e faltazi e wele ar paour-kaezh loen o krafignañ dor ar gegin, olammat etrezek gwerennoù ar prenestr en ur viaoual a-raok mervel. Tremen a raio, an dra-se a zo sur. Ha me ' vo lazhet gant Soazig, rak va diboellder eo ha netra ken a vo kiriek d'e varv.

Ha koulskoude, ne ouie ket perak, e spered a stourme. Klask a rae kaout soñj, met ne ouie ket re vat eus petra. En un taol en em c'houlennas pegeit ' oa en devoa kuitaet an ti. Diaes e oa, dreist-holl en ur redek, muzuliañ an amzer en devoa lakaet d'ober an hent, ha goude se da lugudiñ dirak ar staliou. Jediñ a rae an amzer, hag ar sifroù a felle dezhañ kompren a zañse en e empenn trelatet. Soñj ar c'hazh a zeuas a-nevez da skeiñ evel taolioù morzhol en e glopenn.

192

Kavout a rae iskis n'en devoa ket c'hoazh klevet ar « baoum » spontus ne falvezfe ket an aezhenn d'aber. Sevel a reas e selloù etrezek e ranndi, rak degouezhet e oa. Neuze e savas ur gudenn all en e spered. Ret e vije dezhañ pignat gant an diri, rak evel just ne c'helle ket lakaat ar bignerez dredan da vont. Rak un elfenn, ken un elfenn, a vije trawalc'h da... N'echuas ket e venoz. A vouezh uhel en devoa prederiet. Ha pa glevas e vouezh e voe torret krenn e lañs. Regiñ a rae en un taol ar seurt stign a ranne anezhañ diouzh ar bed. A-sav e chomas, o skrabat e dal gant e zorn dehou. « Genaoueg ma 'z on, » emezañ hag en em daolas da c'hoarzhin. Naet, splann, e teuas da soñj dezhañ en un taol he devoa kemeret e wreg ar c'hazh ganti etre he divrec'h pa oa aet etrezek an tankarr. Ha gant ar c'hazh, soñj en devoa mat bremañ, he devoa kemeret ar restaj laezh !

Ur frilien a gemeras en e chakod evit sec'hañ e dal. Analañ a reas kreñv ha don. Neuze e soñjas en e bourvezioù. Se, me zo droch ! a c'hrozmolaz c'hoazh. Ha, drantik, e reas tro davet ar stal vras evit kemer e garr bihan. Den n'en devo touchet ouzh hennezh, a soñjas. En ur gemer e amzer e c'hello bremañ kenderc'hel d'e leuniañ.

Eus a bell, rak en ur drotañ en devoa pellaet kalzik eus ar supermarc'had, e welas tud o redek er-maez eus ar stal, bern war vern, hag oc'h en em vountañ. Seul vui e tostae, seul welloc'h en em rente kont eus ar cholori, ar reuz, hag ar spont livet war dremmoù an dud.

Sabatuet e chomas. Diskred.

Herzel a reas da sellout, digalonekaet. Hejañ a reas e skoaz, hag en ur
dreiñ kein e c'hrozmolas :

« An dud n'int ket fur !... »

Al lizhiri

Yen e oa an amzer, yen skorn. Deuet e oa ar yenijenn en un doare dic'hortoz ha, ganti, dibenn ar bloaz, da lavarout eo : dibenn an tri miz skol.

An delioù sec'h, rev warno, a c'holoe ar gwenodennoù. An douar a oa deuet da vezañ noazh, gwisket gantañ liñsel reut ar goañv. En oabl e rede koumoul, dezho liv ar c'hañv, ha war an hent, riell tev, un dañjer bale warnañ.

Edo paotr-al-lizhiri o pignat war varc'h-houarn gant an hent a gas d'ar vereuri. Un diskuizh a reas evit kemer e alan en-dro, e-kreiz porzh atant Ti-Poazh. Tenn e oa warnañ, hag en aer yen, un aezhenn domm a zeue er-maez eus e c'henou.

Ur bern lizhiri, ardamezioù skol Sant-Frañsez treset warno a oa gantañ en e sac'h. Furchal a reas ennañ. Unan a dennas a-douez ar re all, skeiñ a reas war an nor... hag e c'hortozas. Ur rideoz a fiñvas a-dreñv ur prenestr, daoulagad du a sellas outañ gant disfiziañs. Edo an ozhac'h e-barzh an ti ; gant un amzer yen-ki ken kalet, ne oa gour o labourat er parkeier...

An nor a zigoras trumm. Un dorn blevek er-maez, hag al lizher e-barzh... Evel pa vefe bet bountet gant ur red-avel e stlakas an nor ; hag ar yenijenn adarre, kreñvoc'h eget a-ziagent war groc'hen ar paotr.

Ozhac'h Ti-Poazh ne oa ket un den hegarat, hag abaoe ma oa aet e wreg da anaon, ne oa ket aet an traoù war wellaat. Ne chome mui gantañ nemet e vab diwezhañ. E vuiañ-karet, evel ma lavare e vugale all pa vezent a-du gant an tad, al leueig, pa vezent a-enep dezhañ.

Ne blije ket re ar skol d'ar paotr, met, a-hend-all, bez e anaveze an traoù diwar ar maez dre ar munud. Dija, pa oa krouadur e ouie anv pep buoc'h en atant, kerkent ha ma wele beg ul lost. Meur a wech en doa divinet da biv e oa ar marc'h a oa o tremen war an hent, netra nemet diwar trouz e hern o tassoniñ war ar vein.

194

Paotr-al-lizhiri a chomas sebezet. Bep dibenn trimiz e teue ingal ur bern lizhiri eus Skol Sant-Frañsez. Merk amzer da zont ar re yaouank e oa, enno spi pe dristidigezh. E-pad bloavezhioù ha bloavezhioù e veze kaset tud yaouank, echu ganto skol ar c'hentañ derez, da skolaj Lesneven.

Meur a hini anezho a oa deuet da vezañ tud desket bras ; ken brudet, ma veze lennet o anv er c'hazetennoù eus eil penn ar vro d'egile, ha komzet diwar o fenn en tele hag er radio. E-touez ar re uhelañ e oa aet mibien ha merc'hed ozhac'h Ti-Poazh. Skouerioù a zeskadurezh evit ar vro, setu petra ' oant. Ha dellezek bras, int hag o zad, rak, ne oa ket an tiegezh-se, eus ar re a c'hell hep tregas kas o bugale war ar studi, ha, bep gwech ma teue o notennoù d'ar gêr e veze graet fest-bras en ti.

Pell e chomas al lizher etre daouarn an tad : termal a rae ken digeriñ ar golo. A ! pet gwech en doa digoret gant pres lizhiri e vugale all, gant pebezh plijadur ! O ! Ne ouie ket en un doare resis petra oa ennañ ; forzh penaos, n'helle ket bezañ gwashoc'h eget ar bloaz paseet. Ken fall e oa bet bloavezh skol ar mab ma oa bet darbet dezhañ bezañ argaset eus ar skol. Nann ne ouie ket en un doare resis petra oa ennañ. Morse ne gomze ar paotr eus e notennoù. Eus traoù an atant ne lavaran ket !

Evel tout an dud er vourc'h e ouie e kase, al lizher-se ur bern keloù fall

: rak, ne oa gour ebet e Ploueskad hep gouzout ne blije ket ar skol da vidoc'hig Ti-Poazh. Ar vugale a zo bugale neketa ? N'oa nikun anezho o vezañ chomet hep komz e doare pe zoare, diwar-benn plas mab diwezhañ Ti-Poazh. « An hini diwezhañ peurbadus, » a veze graet anezhañ. Ne oa nemet an tad oc'h ober an neuz da welout netra.

Digeriñ a reas ar golo, hag e lennas. Pep ger eus alioù ar gelennerien a oa gwashoc'h c'hoazh eget ar gwashañ kunujennoù. E vab muiañ-karet, lakaet e renk un azen ! Koulskoude ! Pegen lemm e veze e spered pa veze graet anv eus traoù an natur, an heol neuze en e zaoulagad. Ur wech ouzhpenn e c'houlennfe e vab digantañ hen tennañ eus ar skol hag e lakaat da labourat en atant. Daou vloaz zo e teue ingal ar memes goulenn e dibenn pep trimiziad.

An tad, avat, ne zizespere ket gwelout anezhañ o stagañ sirius, d'ar studi, hag ur wech ouzhpenn e nac'hfe, un tamm mat a zipit ennañ.

195

Daou zevezh war-lerc'h ez erruas ar mab er gêr, warnañ doare ur c'hi foetet. Met profoù e-leizh a oa ouzh e c'hortoz en desped d'e labour-skol fall. Pouchaset en doa an tad un Nouel a-zoare evitañ.

Ne oa ket an ozhac'h un den pilpous nag ur gogez, nag ar mab un yar-dour, met diaes e oa deuet da vezañ an darempredoù etrezo, ken na rannent ger, en un doare frank, eus ar gudenn-se a oa koulskoude war o spered.

An hini kozh en doa lakaet en e soñj : « Deiz pe zeiz e heulio roudoù e vreudeur hag e c'hoarezed ». Hen krediñ a rae start. Ar paotr avat, ne oa ket evit treiñ kein d'e natur wirion. Ken bras e oa e rangalon ma ne c'helle sellout ouzh e brofoù nemet gant keuz. Ne oa ket o c'hortoz ur prof eus ar seurt-se. Hag adarre, e-kreiz ar pellgent, pa oa erru an oferenn en he bravañ e c'houlennas digant e dad : « Tad, en anv Doue, va lezit da chom du-mañ da labourat ganeoc'h ». Un hir a huanad a voe ar respont, met an tad ne lavaras grik, stardet e zaouarn war aspled e gador.

Echu vakañsoù ar bloaz-nevez e voe ret distreiñ d'ar skol. Eus meur a lec'h a Vro-C'hall ez errue lizhiri digant ar vugale all, holl heñvel, oc'h hetiñ dezhañ yec'hed mat ha prosperite, holl akord. Amañ avat, en ti kozh, hetoù an eil a oa ar c'hontrol-bev eus hetoù egile.

An daou vezeg, an alvokad, o doa skrivet dezhañ war o faper-lizher a vicher. Netra ne c'helle ober muioc'h a blijadur d'an tad : lenn anv e diegezh e penn uhelañ ar bajenn. An tad a dride e galon o tegemer traoù evel-se, traoù boutin koulskoude. Ne oa ket e dri mab evit koll o amzer ken prederiet e oant a-hend-all gant o aferioù. An teir merc'h, kelennerzed o zeir, o doa kaset o hetoù war gartennoù-post, koant a-walc'h.

Hag edo ar bidoc'hig er skol, en desped dezhañ, o labourat gant diegi, an nebeutañ ar gwellañ, just gant aon da vezañ kastizet abalamour d'e labour skort. Nag hir a oa ar c'hentelioù ! Ne oa nemet ar brezhoneg o plijout dezhañ. Ar yezh kozh a zegase ganti c'hwez ar maez, ur frond evit ar gorzailhenn hag an teod. Met, da betra e talvez dezhañ gouzout brezhoneg ? Da betra gouzout muioc'h a yezhadur ha muioc'h a c'herioù gouzizieket eget ur Fañch kouer ?...

Ne oa anezhañ nemet unan eus ar beorien nevez, evel m'en doa lennet un tu bennak : peorien nevez o klask aluzen eus o sevenadur digant o zud kozh, o selloù hag o speredoù nec'het gant soñj o amzer da zont, ken n'eo un druez.

196

Ne gave en douaroniezh, nag en istor, seurt eus ar pezh edo o klask. « Met, a-benn ar fin, » emezañ un deiz d'e gelennerien, « da betra an diaoul eo mat gouzout penaos emañ an traoù e lec'h all, e-keit ma n'anavezomp tra eus an douar e-lec'h ma vevomp ? Ne chom mui, en hon touez, amañ, nemet un nebeut tud yaouank barrek a-walc'h evit kompren anv ar parkoù a gavont dirak o mereuri ! » Hag eñ da fuloriñ, kounnar ruz ennañ. Selaouet e veze, met pa gendalc'he gant e

soñjoù e veze graet skouarn vouzar dezhañ. Gwashoc'h c'hoazh, graet e veze al lu gantañ.

Ne oa nemet unan eus e gelennerien hag en doa lavaret, e pleg e skouarn, hep gouzout d'ar re all, e oa marteze ar skiant-vat gantañ. Ha setu holl.

Komzet en doa d'e dad evel just :

« Tad, penaos e c'hellit-hu sevel ho pugale ha, goude, bountañ anezho en ur bed ken disheñvel ouzh hoc'h hini ? C'hwi a zo bet savet gant ho kerent e brezhoneg, hag e savit ho pugale e yezh ar Gall. »

Ne oa ket an abegoù a rae diouer d'an tad. Un deiz, aet e fulor e respontas d'e vab : « Klask 'ta un dra bennak skrivet e brezhoneg hag a zispleg deomp penaos e ya en-dro keflusker an traktor ? ».

« Me 'zo kapabl da sevel unan, » en doa respontet ar paotr. Pennoù kalet e oant o-daou ha pep hini a zalc'he start gant e soñj. Kreñvoc'h-kreñvañ e teue da vezañ zoken o menozioù dre ma'z ae an amzer e-biou.

« Gant an oad, » e soñje an tad, e teuio furnez dezhañ. Poent zo bet, unan eus e c'hoarezed a oa eveltañ, met seurezed ar skol o doa he lakaet da vont en-dro war an hent mat. Ma ! Divorfilañ a raio deiz pe zeiz. Ha ma vez dav e krogo adarre en e vloavezh skol er bloaz a zeu. Yaouank eo c'hoazh !...

Er-maez e kouezhe an erc'h. En ur sioulder bras e talc'he an amzer fall ha yen gant he reuz. Gournijal a rae ar brini a wezenn da wezenn, ur skeud du war ar gwennder splann. Ar gwez a oa difiñv evel pa vije bet skornet an aer en-dro dezho. Moredet e oa an dour dindan dilhad ar goañv. Er c'hraou e veve al loened diwar ar pourvezioù : foenn ha bete. Moged ar siminalioù a save eeun etrezek ar c'houmoul teñval ; ul liamm iskis etre an tiez hag un oabl ken izel ma seblante pounner da zougen.

197

A-greiz-holl e fiñvas un dra bennak en ene kuzh ar bed. Kregiñ a reas ar stêrig arc'hant da ouelañ he ferlezigoù skedus. Tammouigoù skorn o teuziñ a neuie en dour red. Tamm-ha-tamm e kavas en-dro ar parkoù o liv glas. Etre ar c'houmoul kaset pelloc'h e spurmantet mousc'hoarzh abafet un heol morlivet.

Dispakañ a reas da vat a-benn ar fin ! Trec'h peurbadus an tommder war ar yenijenn. Evel ene an den emañ an amzer enno ez eus bepred stourm. Met bepred ivez e teu ar spi da lakaat an dic'hoanag da dec'hout kuit. Ha ne chom war an dachenn nemet un nebeut koabrennoù, da lakaat an dud da zerc'hel soñj e c'hell an amzer fall dont en-dro... hag eo ret bezañ war evezh.

Trumm, e-kreiz ar geot e tigoras bleunioù. Bep mintin e tispake buhezigoù nevez a zegase levezeg ganto, ar goanag a rene war pep tra. Un nebeut devezhioù, ha goloet e voe an douar gant ur pallenn bleunioù. Er gwez e c'hwitelle laouen al laboused, ha pelloc'h eget boaz e padas ar bokedoù laezh. Un dudi.

Met mousc'hoarzh ebet ne zeuas mui da sklerijennañ dremm ar paotr. Du e oa chomet taolenn du e glasoù. Ar wech-mañ, bez' e oa e notennoù gwashoc'h c'hoazh eget ar gwechoù all. Morse n'en doa labouret en un doare ken mantrus. Morse kennebeut ne oa deuet d'e spered ken fraezh ha ken splann e oa graet evit bezañ kouer ha netra all ebet.

*

Edo ar beleg kozh o pignat gant an hent a gase d'ar vereuri. E dour sklaer ar poull-kanañ e welas silioù. « N'eo ket deuet c'hoazh ar saotrerezh betek amañ, » a soñjas o tremen e-biou d'ar feunteun. Un ehan a reas evit sellout ouzh an dour boull. E-touez ar raoskl e nije nadozioù-aer, skañv, didrubuilh. « Stumm un helikopter, » a soñjas.

« Iskis eo, » emezañ a vouezh izel. « Emañ an den o sevel e oberoù dre varmouzañ an natur, ha pep gwech ma ijin un dra nevez e teu da heul, e berr amzer, flaer ha trouz spontus ! »

Mousc'hoarzhin a reas ar beleg. Diouzh ar mintin en doa lakaet un tamm lien limestra war zremm Doue ; daoust d'an nevez-amzer laouen, un tammig trist e oa koulskoude ar person. « Ene ur beleg a vez bepred en anken e-doug rak-amzer fask, » a huanadas, hiraezh ennañ.

198

Met, evit ar mare en doa ur gefridi all da seveniñ ; hag e kendalc'has gant e hent. An hent o kas da vereuri Ti Poazh e oa. E godell e soutanenn e veudas al lizher. Ya. Ul lizher en doa resevet digant rener skol Sant-Frañsez. Er skol-se e oa bet kelenner gwechall gozh, hag ar rener yaouank a vremañ a oa unan eus e ziskibien.

Un alvokad a zoare a oa eus ar person. Goulennet e oa bet digantañ mont da gomz gant ozhac'h atant Ti Poazh diwar-benn e vab. A-du e oa an daou veleg war ar gudenn. « Gant e skiant-prenet, » a soñje ar rener, « e teufe, sur, ar person a-benn eus kilpennerezh an tad. » Ezhomm bras en doa ar mab eus un difenner.

Ha setu perak e trotelle ar beleg kozh war-du an atant. Pa skoas war an nor, edo an ozhac'h ouzh an daol. E-unan-penn evel just. Boazet e oa, a bell 'zo, person ar barrez da zont da welout an intañv, anavezout mat a rae anezhañ ; hep gortoz ur respont e teuas tre. Gwall nec'het, met, ne oa ket evit lezel ar gudenn a-gostez, daoust ma ne oa ket hiziv ar gefridi eus an dibab. Daou pe dri c'hammed a reas, hag eñ da zistreiñ da serriñ an nor war e lerc'h a-raok tostaat ouzh an daol.

An ozhac'h a savas diwar e vank 'n ur sellout pizh outañ. Ger ebet, nemet : « Azezit Aotrou Person ». Grik goude. Eus an tu all d'ar voger e c'hellent klevout al loened o taskiriat er c'hraou.

An tad a serras e gontell gant trouz sec'h al laonenn ouzh an troad.

Neuze e savas ar beleg e vouezh.

Ur brezegenn ! Ya ! Sarmonal a reas d'an tad, hag hep e lezel da zistagañ un ger, ken na c'hlazas an ozhac'h gant ar vezh. Kement tra a lavare ar beleg a oa koulskoude, anat dezhañ, ar wirionez rik.

« Nann ! Ne oa ket ar paotr tonket d'ar studi ! Nann ! ne oa ket ur ruzer otoù war vankoù ar skol, met al labour-douar eo a gare dreist-goñvor. Er vereuri e oa e eurüsted ha netra ken. An douar en deus ezhomm evit e amzer da zont eus tud eveltañ, ha mankout a ra ar seurt-se d'ar vro ! Ha daoust hag e ouie an tad stad truezus e vab er skol : gwalleürus. Ha perak n'en doa morse respontet an tad da guzul ar gelennerien ? Ar re-mañ a oa a-unvouezh koulskoude ! »

199

Ken fromet e oa ar beleg ma krene e vouezh. Gant e vouchouer e sec'has an dour a zivere eus e dal. Hag e kendalc'has :

« Ret e vo deoc'h kaout un den bennak pa vo echu ho puhez-labour. Ret-mat e vo deiz pe zeiz d'unan bennak kemer ho plas ! »

« Kemer ma flas ? Gwerzhet e vo ar parkoù ha n'eo ket an douristed a vanko evit prenañ an ti ! N'aio ket va mab da gouer. Biken. Doue ra viro ! »

Pell e padas an tabut. Noziñ a rae pa 'z eas kuit ar beleg. E toull an nor e chomas an daou zen da gaozeal... Siouloc'h e oa an traoù, a-benn ar fin, ar beleg a lakaas e zorn war skoaz kleiz an tad. Hemañ a stouas e benn evel da asantiñ.

Pa zeuas ar mab en-dro d'ar gêr e vousec'hoarzh e dad outañ, ur

mousc'hoarzh hegarat, leun a garantez wirion. Chom a rae avat war e spered ar brezegenn paket gant ar person ha bepred e soñje er bromesa en doa tennet digantañ : « Va mab a yelo da gouer ma teu dezhañ c'hwitañ d'e vachelouriezh ».

Un tamm mat a eston a grogas er paotr. Gouzout a ouie e oa karet kalz gant e dad, ha keuz a savas ennañ. Ul labour-skol er mod-se ne oa ket evit padout. Ne oa ket posupl dezhañ lakaat ar vezh da zont pelloc'h war an tiegezh. Dija en-dro d'an atant edo an teodoù fall o vont en-dro. Drezañ e oa bet veñjet meur a gouer a wele o mibien o koll o amzer-skol ivez. Gwarizi an dud e-keñver e c'hoarezed hag e vreudeur a zeuas anat dezhañ. Neuze e krogas gant al labour. Evit ar wech kentañ e tigoras e levrioù evit mat, hag e stagas d'ar studi evel ma vefe bet an diaoul ennañ. Pemzek devezh-pad e poanias hep distag. Ne veze gwelet liv ebet anezhañ nemet da boent koan. Karout a rae e dad ha graet en doa e soñj, evel ur paotr onest ma oa.

Dre e brenestr digor bras e selle a-wechoù ouzh ar maez en ur genderc'hel gant e studi. Un avel skañv ha flour a zegase dezhañ c'hwez ar brikoli nevez troc'het. Trouz an traktorioù, c'hoarzhadegoù ar gouerien yaouank, a leunie ar parkeier. Ur wech an amzer e teue betek ennañ ur vouezh anavezet mat. Mouezh e dad dreist-holl o rannañ e labour da bep hini, pe mouezh unan eus e gamaladed skol. Er parkoù ! Aze eo e oa e blas. Met, a-benn tri miz e vefe ar vachelouriezh. Ur spontailh evitañ.

« Ma ! gwellañ a se evito ! Evidon, ret eo din klask pakañ an amzer gollet. »

200

Gant ar soñj-se e tistroas d'ar skol hag e stagas d'ar studi evel ma krog an den el labour pa fell dezhañ hen ober kousto pe gousto.

Dianav dezhañ e oa chomet gweladenn ar person, hag e dad n'en doa distaget ger war ar gudenn-se. Siwazh !

Ha siwazh ivez ! Penaos dont a-benn e-korf tri miz labour eus ar pezh a zo ret choukañ e-korf ur bloavezh ? Leun a galon hag a youl vat e krogas e pep danvez. Ha bec'h dezho. Simudet e chomas kuzul ar gelennerien. Edo eta ar paotr ken donezonet hag e vreudeur ? Ha muioc'h marteze ?...

Arnodenn dre skrid ar vachelouriezh ? Ur c'hoari a seblantas evitañ. Met evit al lodenn dre gomz... Chom a reas berr war ur gudenn a istor : ankounac'haet gantañ penaos ha perak e oa bet diskleriet ar brezel pevarzek ; ne c'helle lavaret nemet 'pezh en doa klevet gant amezeien gozh, hag ar re-se ne oa ket hir o zeod. Re skort e voe kavet. Ar pezh o doa gouzañvet ar soudarded kozh en o c'hroc'hen ne oa ket a-walc'h evit un enseller yaouank.

Korbellet ar paotr eta. E dibenn ar bloaz-skol avat, un nebeut devezhioù war-lerc'h an arnodenn, e teuas al lizher diwezhañ en ti. Ennañ traoù souezhus diwar-benn labour ar mab. Ne ouie ket mui ar gelennerien da be sant en em ouestlañ ! Notennoù mat e-leizh a oa ennañ. Ur bam !

An tad ne lavaras netra. Ar mab 'n doa graet kazeg gant an arnodenn evel just, met ur blijadur divent he doa aloubet e galon p'en doa gwelet e vab o tont a-zevri d'ar studi.

Un deiz, war-dro fin miz Mezheven, ar person a zeuas a-nevez betek Ti Poazh. Gwelout a reas ar mab en e bart e-unan. Er parkeier e oa an tad. Den ne c'hellfe kontañ tra pe dra diwar o c'homzoù ; met, anat e oa, laouen e oa ar paotr pa 'z eas ar beleg kuit.

An hañv a zegasas gantañ 'vel boaz ur bern touristed, en o mesk breudeur ha c'hoarezed ar paotr. Pebezh levnez en ti ! Ha pokat a-gleiz, ha pokat a-zehou. Ur c'hiz nevez oa, giz-kêr, dianav gwechall war ar maez. O ! ne oant ket deuet evit sikour an tad d'ober an eost, avat. Tamm ebet. Da ziskouez d'an holl o gwreg pe o gwaz, o bugale, o c'hirri-tan nevez-flamm ne lavarant ket. « Seul

gaeroc'h ar pluñv, seul gaeroc'h an evn, » setu moarvat ' pezh a gredent.

« Ha penaos emañ kont gant hor breur bihan ? » a c'houlennent. Hag hep gortoz ar respont ez aent kuit da gouronkañ. Santout a rae ar paotr e oa e diegezh feuket-bras gant e zroukverzh. Ur wech pe ziv en doa lakaet en e soñj komz d'he c'hoar henañ. Hounnezh, gwechall, he doa fellet dezhi chom war ar maez eveltañ. Hi eo he doa kemeret lec'h ar vamm pa varvas houmañ, o lakaat ar mabig er bed.

201

Pa gomzas dezhi avat, hep gouzout d'ar re all, evit displegañ e felle dezhañ bezañ kouer e vuhez-pad, e chomas e c'hoar digor bras he genou, alvaonet holl gant ar souezh.

Ha hi da lavarout diouzhtu ne oa ket ur vicher hounnezh. « Ur c'hast a vicher, » ne lavare ket. Eilgeriañ a reas dezhañ krak ha krenn, pegement a arc'hant e talvez e ur mizvezh labour kouer. Un druez ! Ar vouezh a gleve a seblante dianav dezhañ. Un estrañjurez e oa deuet da vezañ e c'hoar. Ar muzelloù livet ruz a gendalc'has gant o c'homzoù.

« Kerzh gant an hent, a lavar hon tad, » emezi, « hep ober forzh d'az soñjezoù a vremañ. Soñj en amzer da zont. Re yaouank out evit ober an diforc'h etre hor stad-ni ha stad ur c'houer, etre stad hon tad ha stad va gwaz ha me. »

E c'hoar henañ ! Mantret e chomas ar paotr. E c'hoar ! Gounezet, hi ivez gant ar vuhez-kêr-se ha gant an holl draoù a ro enogalloud-dreist an arc'hant, distaget a-grenn ha fae ganti war ar bed a oa ken tost d'e galon dezhañ.

« Met penaos e c'hell ar bed bezañ rannet e daou, » a soñje ar mab diwezhañ ; rak, evit ' pezh a selle ouzh tud ar vro-mañ, an darn vrasañ, tud diwar ar maez, ar bed nevez ne zegase dezho nemet stad truezus mevelien dister o skaotañ listri evit tavarnourien, ostalerioù hag all... e-keit ma oa ar re all o poaniañ er parkoù.

Cheñchet eo bet ene an divroidi, ha cheñchet, war un dro ene ar vro war o lerc'h.

*

An eost. Melen aour e oa ar parkoù. Troc'het eo bet an ed. E pep korn eus ar vro e klever ingal trouz ar mekanikoù o vont en-dro. War-lerc'h ar c'harradoù karget uhel, e chom pennoù-ed ha plouz e-leizh e brankoù ar gwez, o livañ e melen delioù ar wenojenn.

War al leur emañ an dornerez e atant Ti Poazh. Abred eo. Brumenn skañv ar ruzell-veure n'eo ket bet lonket c'hoazh gant bannoù gwan an heol o sevel. Al leur a zo chomet klouar, skuizhder an derc'hent warni. Plas pep labourer ne chomo ket pell diberc'henn. Setu int o tont, an eil war-lerc'h egile. Laouen. « Dal, setu Fañch eus Pariz. » Deuet eo Fañch, mab un amezeg, eus Pariz, a-ratozh evit sikour e dad d'ober an eost. « Degemer mat dit Fañch. »

202

Ha buan e trouz ar c'heflusker. War un dro gant hiboud ingal an dornerez e sav ar boultrenn ha c'hoarzhadegoù an dud. Bec'h 'zo war an hini a zo karget da vouetañ, ret eo pourchas fonnus ar malanoù. Stêr alaouret ar greun a strink er-maez evel ur froud. Ur stivell a vuhez, ken na zeu da vezañ ur mor a ed. Dougerien ar seier, en o monedone ingal, n'o deus ket kalz amzer da ziskuizhañ.

En e vleud emañ ar paotr, ankounac'haet gantañ soursi ar skol. Abaoe meur a warlene, ne vez mui, war dachenn al labour, gant ar re yaouank eus e oad. Eñ eo bouetaer an dornerez. Ul labour tenn.

Tomm-grizias eo an heol war greiz an deiz, diverañ a ra ar c'hwez diwar kroc'hen rouzet an eosterien, gleb dour-teil o rochedoù. Ha bec'h d'ar malanoù,

ha boud en dornerez, ken na weled ket an eur o treiñ.

Souezhet-mik e chomas ar baotred pa glevjont mouezh an ozhac'h o c'hervel evit mont ouzh taol. Ar c'horf a-bezh, ponner-plom e izili, a gavas c'hwek ober un diskuizh. Met, a-benn un nebeut amzer e c'hoarzhent holl leizh o genou, dremm bouldrennek ar baotred hag ar merc'hed o splannañ gant al levezeg hag ar mab a sante ennañ 'vel ur yec'hed nevez.

War an hent e tremenas un nebeut kirri-tan : ar vugale all o vont da bourmen. An ozhac'h a sellas outo, un tamm mat a gerse ennañ. Sellout a reas ivez ouzh e vab diwezhañ. Diaes gouzout e soñj.

Koaniet e oa. Edo an tad o lakaat tan war e gorn-butun pa c'houlennas un dornier a vouezh uhel digantañ :

« Neuze Paol, war a lavarer, e chomo ar wech-mañ da vab ganeomp war ar maez ? »

Flamm an alumetezenn a chomas a-ispilh war ar butun. Mervel a reas o flourañ bizied an ozhac'h evel pa vije bet mouget gant e huanadenn. Respont ebet.

Edo ar paotr ouzh o selaou. Un anken skrijus a vruzunas e spered, un dorn skornet a seblantas dezhañ gwaskañ e e galon, ha tommder an heol zoken en e washañ ne oa ket evit teuziñ seurt yenijenn.

« O ! paotred ! Debret hoc'h eus ? Poent eo deomp sevel ! »

Ha d'al labour en-dro. E divskouarn ar paotr e chome berr goulenn an dornier digant e dad. Evel ur verc'hodenn e labouras ar peurrest eus an devezh. Ne oa ket evit komz, ha c'hwerv e chome blaz an dipit en e greiz. Trelatet e spered, e lezas ur malan da vont e-biou.

203

« O ! Pelec'h emañ paotr ? »

Dihunañ a reas pa welas dent lugernus ur forc'h dirak e zaoulagad. Hag e-barzh...

*

Goude ar peurzorn int aet kuit, met ar mab n'en deus ket fellet kimiadiñ diouto. War al leur skubet mat e chom an dornerez c'houllo, sioul, evel pa vije abafet o chom hep debriñ tamm.

Ne bade ket ar paotr gant ar c'hoant gouzout. Edo an tad o vont da gousket pa savas ar mab e vouezh :

« Tad, » emezañ, » me 'zo aet skuizh amañ. Ne fell ket din mont en-dro d'ar skol. N'on ket mui ur minor. Roit din va lod eus ho tanvez, evit ma 'z in ac'han da sevel un atant all gant ar pezh a c'hellin prenañ. Anavezout a ran al lezenn. »

Simudet e chomas an tad. E-pad ur pennad mat a amzer ne c'hellas distagañ ger, ken berr warnañ ma ne oa ket evit komz. Abaoe eil gweladenn ar beleg, an tad hag ar mab a veve ur vuhez amjestr, gant darempredoù faos. Degouezh ar vugale all n'en doa ket lakaet an traoù da vont war wellaat. Met, warc'hoazh ez aint kuit, ha neuze e vo gwelet.

A-benn ur vunutenn pe ziv e teuas en-dro ar gomz dezhañ. Evel ur froud.

« Da lezel da vont da unan-penn ? Te 'zo aet sot ? Petra randonez-te ? Piv en deus roet dit betek-hen, ar bevañs ar gwiskamant ? Piv en deus paeet evit reiñ dit deskadurezh ? »

« An deskadurezh ? O ! un dra vat eo ! Drezi eo deuet din ar soñj mont da welout an noter. Ar gwir a zo ganin. Ar pezh a c'houlennan diganeoc'h a zo reizh. Se 'zo sklaer. »

Neuze, buan e savas an ton etrezo.

Klask a reas an tad distreiñ anezhañ diwar un hent hag a seblante ken fall evitañ. Met o welout kement a enebiezh ez eas sot gant ar gounnar.

« Ar beleg ? Asantet em eus dezhañ diwar fae, met, abaoe da labour diwezhañ er skol, eo deuet din ar soñj e oas ken barrek ha da vreudeur all ! »

« Va breudeur ! N'o anavezan mui ! »

O klevout kement-se ez eas droug en ozhac'h ken e palvatas e vab gant nerzh un den aet en egar, ha prim ha didruez e veze e zorn pa skoe. Ken kreñv e voe an taol ma vrallas ar paotr.

204

Ar paour-kaezh ne oa ket evit derc'hel penn outañ. En e zonañ avat e santas mezhekadur ar palvad-se. Trec'h e oa bet an tad dezhañ. Mont a reas kuit eus an ti en ur stlakañ an nor war e lerc'h.

Daou zevezh e chomas er parkeier. Kantren a rae a-hed hag a-dreuz. E pep tachenn e kave ur goudor bennak evit kuzhat ennañ ec'h lac'har. E vreudeur hag e c'hoarezed a oa aet kuit bremañ, ankounac'haet ganto o bugaleaj. Tud nevez er bed nevez, setu petra e oant deuet da vezañ. Ha petra a c'hoarvezo pa vo aet kuit an tad eus ar bed kozh ? Gwerzhet e vo an douaroù ur wech aet da anaon diwezhañ kouer o gouenn ? Ne oa ket evit krediñ. Hag an ti ? Gwerzhet e vo ivez ? Ur résidence secondaire 'vo graet gantañ ? Touristed, koukouged ar bed nevez, o klask repu e ti ar re all. Peoc'h ha sioulder evito. Dienez hag harlu evit ar re all.

Meur a wech e oa bet goulennet diganto gwerzhañ ur park pe zaou, dreist-holl an hini a oa e-tal an atant. Ken brav e oa arvestiñ ouzh ar mor a ziwarnañ, ma ne c'helle ket un tourist chom a-sav dirazañ hep genaouegiñ ouzh bae ar C'hernig.

Bae ar C'hernig... Ur meleour arc'hant hag aour mesk ha mesk pa veze an heol o vont da guzh. Sellout a reas outañ en abardaez klouar. En tu all d'an dremmwel, goustad, e kouezhe an heol ruz evel ma vefe bet dedennet gant ar glaster sioul. Ur pistig a stardas e galon, met tec'het e oa dioutañ an anken. Ur youl divent a vage e spered. Lavaret en doa an traoù en un doare splann. Ar soñj eus kemend-all a vadoù o vont da get n'helle ket chom pelloc'h e menozioù e dad. Sevel a reas eus ar c'hleuz e-lec'h ma oa kuzhet, hag eñ ha mont war-du an atant. Marnaoniet e oa.

Edo o tostaat ouzh ar porzh pa glevas c'hwitellerez ur c'harr-klañvdi o pellaat. Tud oa bodet dirak an ti ; a-greiz-holl e voe skoet gant ar gwall geloù : kavet e oa bet e dad semplet e-kreiz ur park ; hag ar paotr da redek etrezek ospital Brest. Siwazh ! Re ziwezhat, war lerc'h an ankou ec'h erruas. Kaset e oa bet erv diwezhañ an tad en un doare poanuis ha kriz. Gwashañ tra, kiriek en em sante ar mab ha kerse bras a vourevie anezhañ. Keuz, mil geuz gantañ gant pezh a oa tremenet.

205

Toull du ar bez, gwigour ar gordenn a-hed ar poleoù, trouzig an douar o kouezhañ war an arched, hag echu ur vuhez-labour. Den ebet ne gomze, ne oa ket, avat, an tiegezh evit chom pelloc'h... Ur bern labour o doa holl da ober. Diwezhatoc'h e vo graet war-dro lodennerezh an douaroù. Un atant kozh rannet e c'hwec'h lodenn ne dalv netra ! Mall 'oa ganto mont kuit, met den ne souezhas pa c'houlennas ar bidoc'hig mirout an atant evit ur bloavezh. Gant mouezh an dizesper e tisplegas e soñj dezho. Fellout a rae dezhañ mirout an douaroù ken na

vefe gwelloc'h an traoù.

An holl a asantas. Pebezh souezh ! E testamant an tad e oa ar memes menoz : ma teufe-eñ da goll e vuhez kent na vefe echu studi ar mab, e rankfe ar paotr dont en-dro d'an ti.

« En amzer Fask eo en deus goulennet diganin lakaat an dra-se war baper, » a zisplegas an noter.

Setu penaos en doa an tad dalc'het kont eus ar bromesa a oa bet tennet digantañ gant ar person.

Ar paotr a dride e galon e-kreiz e dristidigezh. Karout a rae e dad muioc'h eget n'eus forzh pehini eus e vreudeur pe e c'hoarezed.

Devezhioù, sizhunioù a dremenas. Betek tizhout Nedeleg. Miz Gwengolo, miz Du, miz Kerzu, ne baoueze ket an avel da yudal er-maez, nag ar paotr da labourat. A-wechoù en doa aon rak an amzer da zont, gwechoù all e teue da soñj dezhañ, ne oa ket gwall yac'haus bezañ re droet ouzh an amzer dremenet. Barnedigezh he c'hoar henañ a vourevie e spered evel ur broud. Ur mevel bras a oa gantañ d'e skoazellañ. Unan eus ar re o doa ranket kuitaat ar maezioù war-lerc'h dilez o atant... Ha levez en doa kavet amañ.

Dirak soc'h an alar e tibrade an douar teilet. Betek an talar e vo kaset an erv a-benn an noz. Ha zoken ! Goude ma teufe an noz, n'eus forzh, gouleier 'zo war an traktor. Ha n'eus forzh kennebeut peseurt amzer a rae, pe e vije glav, pe e vije erc'h pe skorn kalet, morse ne golle ar spi da lakaat an atant da vont en-dro.

Ken pell ma c'helled gwelout tro ar vereuri, ne weled nemet parkoù labouret, renkennadoù diniver brikoli ha kaol-fleur warno.

Ne oa nemet meuleudi da reiñ dezhañ. Ur wech an amzer e rente kont d'e vreudeur ha d'e c'hoarezed eus pezh a rae war-dro ar vereuri. Teneridigezh e-leizh a lakae en e skridoù. Respont ebet er penn kentañ. Met tamm-ha-tamm 'erruas ar respontoù. Lizhiri hiroc'h-hirañ a-feur ma tremene ar mizioù. Enno e veze goulennet keloù eus an amezeien, ar re doa ket gwelet e-doug ar vakañsoù, pe ar re o doa gwelet buan ha buan...

206

Ur blijadur vras en doa ar paotr ouzh o lenn. Eus pep korn Bro-C'hall bremañ e reseve lizhiri. E kalon pep breur ha pep c'hoar aet da bell vro e oa kresket ar garantez evitañ hag evit o bro. Nijet e oa anken ha strafuilh pell dioutañ, santout a rae a-nevez karantez e diegezh o tommañ dezhañ e galon.

Deuet mare an eost e voe gwall nec'het koulskoude. Penaos ober hep an tad ?

Ur c'hiz nevez a oa deuet er bloaz-mañ war ar maez : ober ur c'halvadenn d'an hañvidi.

« Tremenit ho vakañsoù en un atant ! » Hag eus pep lec'h, sañset, e terede touristed... evit sikour ar gouerien...

Ne chomas ket da c'hedal ur respont, ha mat a reas. An hañv a zegasas evel boaz ur bern touristed, hini anezho avat ne dreuzas kael ar porzh.

Ar wech-mañ, koulskoude, ne oa ket en o mesk breudeur ha c'hoarezed ar paotr. War-eeun e oant deuet en-dro d'ar ger : hag int da glask o breur yaouank dre an ti hag ar c'hrevier ; aze edo, o c'hor ar saout. Ar c'hoar henañ a hopas laouen, he mouezh o tridal, ken na lammas ar paotr gant ar souezh :

« Per. » emezi, « ni 'zo deuet da sikour ober an eost ! »

Ar skourjez tan

An istor-mañ a zo gwir bater. Gant ma zad-kozh e oa bet kontet din. D'ar c'houlz-se e oa o chom e parrez Kawan, lec'h en doa kemeret e feurm douaroù intañvez ar Maer kozh ma veze graet Perrine Jegou anezhi.

Ma n'en dije ket sinet al lizher-feurm-se, en dije bet nebeutoc'h a boan-spered, ha ni, e vugale vihan, ne vijemp ket bet paour-du evel ma 'z omp.

Perc'hennez douaroù Keranmene a oa tostañ, pishañ ha didruezañ maouez a oa dindan an heol benniget. Touzet he dije kein ul laouen-dar da werzhañ he blev m'he dije kavet unan bennak da breñañ anezhe. Me zo sur e konte betek delioù ar gwez a save war gleuzioù he farkeier. Ma, un devezh bepred, e voe diskaret gant un barr-avel ur c'hozh dervenn hanter-vrein ha treut evel Ankou Plouilio. « Ne oa ken mat 'met d'ober tan », setu aze petra en devoa laret ma zad-kozh d'e wreg. Se 'vat ne oa ket ur pec'hed marvel, 'boa ?

Ac'hanta, an itron a reas prosez dezhañ hag a laras d'an varnerien penaos e oa bet tapet ar wezenn-se hep kaout gwir ebet d'hen ober hag, ouzhpenn se, en doa ma zad-kozh sikouret an avel da ziskar anezhi. Ar justis, evel a ouzoc'h, a zo eus tu ar re binvidik. Kondaonet e voe ma zad-kozh da reiñ d'ar berc'hennez un digoll bras-tre. Ha c'hoazh en devoa bet chañs, hervez ar varnerien, pa ne oa ket bet kaset d'an toull-bac'h. E Lanuon 'n hini oa bet graet ken divalav dezhañ. Dont a reas d'an gêr leun a c'hilac'har. Espernet he doa ma mamm-gozh un nebeut skoedoù hag o miret gant aked a-drek ur bern liñselioù 'barzh he fres. Siwazh dezhe, an arc'hant-se ne dapent nemet ur bempvedenn eus pezh a gouste ar prosez. Ma zad-kozh a oa aet d'azezañ, digalonekaet, e korn an oaled. Evit klask reiñ kalon dezhañ e laras dezhañ e hini gozh :

208

- Na chomez ket aze da zaoubenniñ da spered evel-se, Yann. Me zo ' vont diouzhtu da di an Itron. M'he deus un tamm kalon en he c'hreiz, e vo teneraet gant ma fedennoù hag a roio deomp d'an nebeutañ un tamm amzer da baeañ hon dle.

- Gra evel a gari, a respontas ar paour-kaezh den. Met evit teneraat kalon honnezh, me lar dit e torrfe kentoc'h gant da zaeroù treuzoù-mein toull he dor.

A-benn un hanter eur goude e oa erru ma mamm-gozh war he c'hiz. Mont a reas en he c'hoazez a-geñver d'he gwaz en tu all d'an oaled hag he fenn ganti etre he daouarn, e krogas da ouelañ dourek.

- N'ouzon ket Yann, a laras en ur hirvoudiñ a-benn ar fin pa c'hellas kaozeal. Ez a da lakaat ar werzh warnomp.

- Soñjal a raen, a respontas ma zad-kozh, hep ger all ebet.

A-hed an noz-se ne gouskjont tamm ebet nag an eil nag egile. Ne c'helljont ket serriñ ul lagad. Gwelet a raent o c'hezeg, o saout, o moc'h, ha tout an arrebeuri bihan o vezañ gwerzhet. An deiz war-lerc'h, kentañ tra a glevjont a voe grizilhonoù karriolenn an ucher o chom a-sav er porzh.

Hag ar sul war-lerc'h, goude ar gousperoù, e voe graet ar werzh lakaet gant ar justis war Keranmene. Krediñ a rafec'h e oa dir a-walc'h war fas gwreg Jegou evit dont eno ? Kaeroc'h zo : er renk kentañ e oa o prenañ evit un dister-briz kement tra na c'houlle ket ar re all dioute. Ne vane mann ebet ken da embann ; betek ar chipot-holen a oa bet gwerzhet hag e oa ar c'hrier o vont da bediñ an dud da vont a-raok, pa welas ar serpantez-kozh ur skourjez-chareter,

ankoueet ouzh moger an ti a-istribilh ouzh un tach, hag hi o laret kreñv :

- Digarezit, ar skourjez-mañ a zo c'hoazh.

- Se zo gwir, a laras ma zad-kozh ha n'en doa ket c'hoazh rannet ur ger. Fiañs 'm eus ne stourmo den ouzhoc'h ha gras d'ar benveg-se da gastizañ ac'hanoc'h er bed-mañ kenkoulz hag er bed all.

Tapout a reas anezhañ divergont en ur chakat :

- An disterañ gounid a zo mat da gaout.

Diouzh an noz, er gwele laosket gante gant al lezenn, e laras ma zad-kozh d'am mamm-gozh :

- Rivinet omp, met ar skourjez-se a veñjo ac'hanomp.

Adalek an deiz-se, ha gwir, ne c'hellas ket Perrine Jegou kousket ken un dakenn.

209

Diouzh an noz e tihune gant ar spont, pistigoù dre he c'horf a-bezh evel pa vije bet kalkennatet gant ul lerenn tomm-berv. Ken e oa sodet gant ar spont. Teurel a reas ar skourjez milliget en tan da ober ludu, o krediñ e kavfe evel se he feoc'h. Met gwashoc'h a se e voe boureviet.

A-boan ur miz goude e voe kaset d'an douar hag en noz goude ma oa bet lakaet en he gourvez en he foull, e voe dihunet tud he zi gant trouz unan bennak o redek pennfollet en ur skrijal gwashañ ma c'halle.

Sevel a rejont da welet petra oa. Ar plac'h varv an hini oa, o redek en-dro d'an ti ha d'ar c'hrevier en ur yudal en un doare euzhus.

Ur skourjez-tan a oa en he c'herc'henn hag e oa o klask dilemel anezhañ hep gallout hen ober. Krial a rae gant ur vouezh vantrus :

- Dilamit ar skourjez-se diwarnon ! Dilamit ar skourjez-se diwarnon !

Ar moked a save eus he c'hig. Euzhus e oa da welet. Ne oa den evel just hardiz a-walc'h da dostaat outi.

An noz goude e teuas en-dro adarre ha noz an deiz war-lerc'h ivez ha bep noz da heul, ken na voe dispaket al loar nevez. Gwelet e voe en noz-se oc'h en em deurel er puñs, a oa chomet warnañ blaz ar soufr pell goude.

Troet gant Daniel Giraudon diwar A. Le Braz, La légende de la mort chez tes Bretons armoricains, p. 226-229, trede mouladur.

Studi al lec'hioù, un digor war istor ar vro

Emañ an hini a skriv ar pennad-mañ war-nes lakaat da zont er-maez ul levr hag a daolo, war e veno, ur sklerijenn nevez war amzer dremenet hor bro, hag a lakay war-wel meur a dra nevez ha dic'hortoz.

Diwar un degouezh eo bet savet. Goulennet e oa bet digantañ, hag eñ douarour diouzh e vicher, ha dre-se boas da labourat gant kartennoù, sellout a-dostoc'h ouzh lec'hiadur teir bourc'h eus bro ar Wilun izelañ ; unan anezho, « Arzal », en norzh d'ar stêr ha dre-se eus eskopti kozh Gwened : an div all, « Camoël » ha « Férel », er su, ha neuze 'ta en eskopti Naoned. Diwar ur gartenn en devoa e kave d'ar goulenner e c'hellfe bezañ bet pevar c'hilometr pe ul lev etre pep hini eus an teir bourc'h. Ouzhpenn-se e venegas e kave dezhañ e ranke bezañ bet « un urzh bennak » evit diazez al lec'hioù pennañ m'eo an ilizoù hag ar chapelioù. Un tamm diskredik e oa war ar poent-se an hini a skriv kement-mañ, rak evitañ o devoa an dud, a-viskoazh, klasket kentoc'h o aezamant : dour mat da evañ, gwasked ouzh an amzer c'harv, douar labour evit o zrevadoù, koad evit sevel o ziez ha kavout danvez tan, gwarez ouzh al laeron hag an enebourien, hag all...

Ne gavas un hed a bevar c'hilometr nemet etre div eus an teir bourc'h : Kamoel ha Férel. An daou gostez o kas da Arzhal a oa re hir, hag ouzhpenn ne oant ket keit-ha-keit kennebeut. Ne oa ket tu eta da lavarout e vefe un tric'horn reizh (da lavarout eo keit-ha-keit an tri gostez anezhañ), na zoken keitgarek (daou eus e gostezioù keit-ha-keit)...

Koulz ha pa oa bet dispaket ar c'hartennoù, setu ma ris koulskoude un nebeud muzulioù aprou war ilizoù ha chapelioù ar vro tro-dro. Ar parrezioù meneget n'emaint ket pell eus bro ar geunioù, hag e-touez ar re-mañ an hini vrasañ, ar « Grande Brière », n'eus tu da sevel ti enni nemet war an inizi, ar peurrest o vezañ dindan an dour e-pad ur pennad brav eus ar bloaz. Ma ! Zoken eno e kaved e oa alies muzulioù rik, levioù pe hanter levioù, etre an ilizoù pe ar chapelioù, n'eo ket bepred gant ar re a zo da dostañ an eil ouzh eben, met neuze gant unan all pelloc'h...

211

Setu 'ta un alberz a « reizhadur » o tont diouzh an tu a c'hortozfed an nebeutañ. Ret-holl e oa gwelout neuze ha kavet e vije un dra bennak heñvel e lec'h all. Ha setu ma voe astennet an enklask betek Gwened diouzh un tu, ha betek Kastell-Briant diouzh an tu all. Hag eno ivez e kaved darempredoù heñvel. Kement-se a c'hoarveze e miz Eost 1978 ; hag abaoe neuze, triwec'h miz tremenet pa skrivan kement-mañ, n'eus bet distag ebet d'al labour...

O vont eus aber ar Wilun da hini ar Rañs e kavas an enklasker peadra da lakaat anat darempredoù izo etre diazezoù ar pobladoù kozh hag ilizoù 'zo. Gouzout a reer e oa *Keursaout* (« Corseul ») kreizenn poblad ar gKuriozolited. Evel Arvorig en he fezh eo bet aloubet o bro gant ar Romaned. E bourc'h Keursaout e kaver bepred dilerc'hoù eus an amzer-se ; hag un hanter-lev war du Dinam e kaver ivez ur savadur all hag a zo bet graet anezhañ Azeulva Meurzh (« Temple de Mars »). D'ur mare bennak eo bet dilec'hiet kêrbenn ar Guriozolited ha kaset da Aled, er beg-douar a zo bremañ war zouar Sant Servan. Ha pa oa bet kristenaet ar vro e teuas da vezañ kreizenn un eskopti hag a badas betek an daouzekvet kantved, ma voe dilec'hiet d'al lec'h a zo bremañ Sant Maloù. Div barrez a zo hag emañ keit-ha-keit o iliz eus Aled ha m'emañ eus Templ Meurzh ; dre hentoù disheñvel avat : hini Pleudihen, war du reter ar Rañs a zo pemzek kilometr etrezi ha pep hini eus an daou lec'h ; n'eus nemet daouzek hanter avat etrezo hag iliz Plouaer, war an tu kleiz... Ha kement-se a oa ivez un testeni eus un « urzh » bennak el lec'hiadur.

Oberour ar pennad-mañ a oar re vat pegen diaes eo tennañ un dra bennak eus dielloù an istor. Setu perak e tibabas heuliañ doare-ober skiantoù an natur, ha dreist-holl ar re a studi an douar : klask an dilerc'hoù. An dilerc'hoù-se a c'hell bezañ anezho restadoù savadurioù evel Azeulva Meurzh a zo bet anv anezhañ bremaik. A-bouez eo ivez studi an hentoù kozh ; hag ivez studi anvioù al lec'hioù. Diazez ar studi a c'hell bezañ graet war gartennoù.

212

Kentañ a oa da ober eta eo gwelout petra a c'helle c'hoarvezout pa 'z aed un tammig e pep lec'h dre ar vro. Kavout an danvez studi, ha gwelout penaos ober war e dro en deus goulennet ur pennad amzer. Er penn kentañ e voe diazezet dreist-holl war ar c'hreizennoù parrez, hag evel ma oa ret mont buan ne veze keñveriet gant pep hini nemet un nebeud degadoù a lec'hioù. Buan e teuas da vezañ anat e oa un urzhiadur strizh etre ar braz eus al lec'hioù. Peurvuiañ e veze hed ur c'hilometr klok etre pep hini. Evel avat ne oa anavezet na metr na kilometr d'ar mare ma oa bet savet ar bourc'hioù hag an ilizoù, e oa dav soñjal el lev, homañ o talvezout pevar c'hilometr evit an dud a vremañ. Ha kendalc'h an enklask graet en deus diskouezet splann ez eo al lev pevar mil metr enni eo a voe implijet evit al lec'hiadur. Kaer em eus bet klask el levrioù koulskoude ne 'm eus kavet neblec'h an hed-se evit al lev gozh !

Evit ma vije aesoc'h al labour e kemeris da ziazez an hanterlev, aesoc'h da embreger eget al lev glok. Kement-se a ro ugent hektometr, a vo rannet e daou gilometr, pep hini eus ar re-mañ o vezañ ennañ hektometroù, dek anezho, niveret eus 0 betek 9. Unan eus ar c'hilometroù-se a vo par, an hini a echuo e verk-km gant 0, 2, 4, 6, 8 ; ampar e vo a echuo gant 1, 3, 5, 7 pe 9. Ar sifr a zeuy goude ar virgulenn a verko an hektometr (hm), un hed hag a zo c'hoazh aes a-walc'h da vuzuliñ war ur gartenn 1 : 100 000. Evel-se ma vuzuler 22,0 km eus al lec'h orin betek an hini emeur oc'h aprou e vezor war hm zero ur c'hilometr par ; mar kaver 16,7 km e vezor atav war ur c'hilometr par. Mar deo 5,0 pe 33,6 km eo a gaver e vo da ober gant ur c'hilometr ampar.

Goude un nebeud mat a arnodennoù amañ hag ahont e kavas mat an oberour kemerout da dachenn-arnod iliz e barrez c'henidik, Dirinonn. Hag evit doare e oad kouezhet mat en ur ober an dibab-se, rak kalz lec'hioù a gaved o kouezhañ war un hektometr 0 hag e-touez ar re-mañ en em gave Lannonn Kersent Plabenneg (12,0 km) hag iliz Sant Divi ar Forest (8,0 km) ; Nonn o vezañ ar santez enoret e Dirinonn koulz ha m'eo Sant Divi, he mab (hag e Dirinonn eo e veze miret skrid brezhoneg krenn " Buhez Santez Nonn "). Hag un nebeud skouerioù all a fell din menegiñ c'hoazh amañ evit diskouez penaos e c'heller lakaat darempredoù etre al lec'hioù ; ha da gentañ ar re a zo war gilometroù par gant un hektometr zero : Kernonnenn Lokmelar 18,0 ; Kernonnenn S. Noug 26,0 ; Kernonn Lokevred 32,0 ; Kernonnenn Taole ha Kernonn Berrien 36,0 ; Kernonn Plouie 40,0 ; Kernonn Pluskelleg 58,0 ; Kernonn Langoned 66,0 ; Kernonn Kerrien Gemperle 72,0 ... Ha gant ur c'hilometr ampar : Rosnenn an Treoù 9,0 ; Nonnod Pleiber 33,0 ; Kernonn Melar ha hini Plourin Vontroulez 39,0 ; Kernonn Plourac'h 53,0 ; Nonnig Plufur 57,0 ; Kernonn Pont Melvez 73,0, hag all. Ha mat eo ivez marteze menegiñ Irziri ar Merzher 11,0 km.

213

O vezañ ma veze graet ar muzuloù war 20 hektometr, e tleje bezañ bet, dre vras pemp lec'h war gant lec'h bet aprouet ; ha seul niverusoc'h al lec'hioù aprouet, seul dostoc'h d'an niver pemp-se e tleje bezañ bet. Ha padal n'eo ket pemp lec'h eo a gaved war an hektometr zero par, met ouzhpenn unan ha daou-ugent dre gant, ar pezh a rae en tu-hont da eizh gwech an niver edod o c'hortoz !

En ur ober an enklask war greizennoù all e kaved bepred ur « grommell » pe « gammell » stummet heñvel, zoken ma ne save ket bepred ar begoù ken uhel ha ma raent en hini Dirinonn. En ur welout se e voe kresket kalz ar c'helc'hiad, betek en tu-hont da bevar-ugent kilometr eus al lec'h orin (darn eus al lec'hioù bet meneget uheloc'h a zeu eus an enklask nevez-me ,) hag an holl lec'hioù dibabet ne oant mui lec'hioù « santel ». An enklask pishañ bet kaset da benn a zo bet graet adarre en-dro da iliz Dirinonn, en ur geñveriañ 3 381 lec'h all gant an

iliz-parrez-se. War an niver-se en em gave en taol-mañ 1 459 war un hektometr zero (lakaet a-gevret par hag ampar, ar pezh a laka an niver-etre da vezañ dek), ha ne oa nemet 25 hag a vije war un hektometr 1 pe 9 ; ouzhpenn 43 % eus al lec'hioù a chome atav war un hektometr zero, ar pezh a rae bepred en tu-hont da beder gwech an niver a oa tu da c'hortoz ; hag ouzhpenn-se en em gave 23,5 % war un hektometr 5, ar pezh ne leze nemet 34,5 % evit an eizh rummad all.

Kement-se graet e oa ret en em c'houlenn hag-eñ ne vije ket kavet dregantadoù heñvel er-maez a Vreizh. Kement-se a voe graet e gwirionez a-raok na voe graet an enklask ledan-se emañ o paouez menegiñ, ha niver al lec'hioù aprouet hag an niver lec'hioù keñveriet gant un iliz e c'hwec'h lec'h strewet dre ar Frañs a-bezh (en diavaez da Vreizh, anat eo) a zo bet etre 191 ha 376. Renket heñvel an hektometroù ne adkaved ket an urzh a gaved dre amañ : an niver uhelañ bet kavet war unan eus an ugent hektometr a zo bet 10,63 % (= un tammig ouzhpenn div wech an niver etre ; ha c'hoazh

n'edo ket war un hektometr zero, met war unan tri) ! Pe ne oa ket un urzh o tostaat d'an hini a gaver e Breizh (hag ivez e bro Avrank moarvat), pe neuze ez eo ar muzulier eo a zo disheñvel, rak ma na vez ket graet gant al lev pevar mil metr e vo pladet dre vras ar grommell dre ma pellaor eus al lec'h-orin. N'eus forzh penaos e tosta da vat, evit ar c'hwec'h lec'h bet studiet, an niveroù ouzh ar re a vije u dre zegouezh ».

214

Ur studiadenn war al lec'hioù gouestlet da santez Berc'hed a voe frouezhus ivez, met a chomas diglok dre ma oa diaes dont a-benn da c'houzout pelec'h emañ an holl lec'hioù m'eo bet enoret enno, setu ma oa ret tremen gant ar re a zouge anv ar santez hepken. Damstudiet e oa bet ivez sant Weltas ha sant Maloù... Met an dizoloadenn bouezusañ a voe graet d'an 21 a viz Gwengolo 1978 : Un tric'horn reizh hag a oa beget e 1) Iliz S. Wazheg, 2) Chapel Lanwazhog Plouzeniel, 3) Kerwazheg Pleuneg ; gant ar galonenn anezhañ o vezañ e-kichen Brigneun Dineol. Ar beg diwezhañ-mañ o vezañ bet dizoloet war hent Poull Gwazheg, ur porzh hag a zo war an dorn kleiz da stêr Waien. Pep hini eus tri c'hostez an tric'horn a oa dezhañ un hed a 57 km. Meur a lec'h Gwazheg all a zeuas war-wel prestik goude, en o zouez unan hag a zo bet iliz-tre gwechall : Landrewazheg (sant Izuned) e Plounevezel. Kavout a reer ivez Trewazheg e Kemperle (tu Gwened) ha Lanwazheg e Kernevel. Gant Poull Gwazheg, bet meneget uheloc'h eo e teuas avat anat evit ar wech kentañ e c'helle hemañ talvezout da lec'h-blein ha kement-se pa vez studiet e zarempredoù gant Lanwazhog Plouider ha Kerwazhog Landunvez : etre an daou lec'h-mañ e vuzuler 30 km ; ma troc'her ar pennad-linenn-se dre an hanter gant ul linenn all o tont eus Kerwazheg Pleuneg e weler al linenn-se o vont un tammig a-gleiz, troet evel ma vez ar c'hartennoù, da du an Norzh. Ma reer al linenn-se gant he fenn he PoullGwazheg e-lec'h bezañ e Kerwazheg, e vo gwelet o vont dres war du an norzh !

An enklask graet war an anv Berc'hed, ha da heul war hini Tevieg, en devoa sachet an evezh war SERV hag an adstummoù anezhañ evel Servan, Servon pe Servez, a-wechoù gant skriturioù disheñvel evel « Sert », « Cerf ». Hag eus hemañ e oa anat an darempredoù gant KARO ha GARO, Karv pe Garv, ha stummoù deveret evel Karvan. Ha da heul e weled diouzhtu pegement e oa bet c'hoariet gant ar gerioù.

215

Diwar ar re-se eo e voe dizoloet an eil fric'horn reizh. Unan eus begoù an tric'horn-mañ a oa e *Poull ar Serv*, Speied, e Kernev, war-hed ul lev hepken eus iliz S. Wazheg ; an eil a zo iliz *Servel*, e bro-Dreger ; hag an trede e *Kerc'haroù* S. Fregan, e Leon. Ur gavadenn gaer e voe honnezh, rak un darempred strizh a zo etre un tric'horn dezhañ kostezioù 66 km evel hemañ hag unan gant kostezioù 57 km evel ma oa hini Gwazheg : hed al linennoù hanteriñ en un tric'horn dezhañ kostezioù 66 km evel hemañ hag unan gant kostezioù 57 km evel ma oa hini Gwazheg : hed al linennoù hanteriñ en un tric'horn dezhañ kostezioù 66 km, a zo 57 km ; ha war an tu enep : treuziad kelc'h diavaez un tric'horn dezhañ tri c'hostez 57 km a vuzul 66 km !...

Ma oa bet diskouezet tu an Norz gant PoullGwazheg e talvezas ivez Serv ha

Gwazheg unanet da ziskouez tuioù all :

1) E parrez Plourioù, e Goueloù, ez eus ur chapel e *Lañserv*. Ma klasker penaos emañ lec'hiet ar chapel-se e-keñver iliz Servel e weler emañ tost da vat e tu ar reter, met un tammig muioc'h er biz. E parrez Servel, avat, ez eus ivez ul lec'h anvet Kerservel hag azalek amañ e kaver emañ *Lañserv* dres war linenn ar Reter.

2) An daou dric'horn reizh meneget o deus bep a gostez hag a zo tost da vat kenstur an eil gant egile : hini Lanwazhog-S. Wazheg ha hini Kerc'haoù-Poull ar Serv (sellit ouzh ar gartenn) ha troet int o-daou war du ar gwalarn. Hep bezañ tre koulskoude rak hini Kerc'haoù a gas un tammig re e tu an norzh ; hini Lanwazhog un tammig re e tu ar gornaoueg. Ma reer avat ul linenn all hag a chomo penn-da-benn hanter-hent etre pep hini eus an daou gostez e kaso honnezh just da du ar gwalarn pe da du ar gevred war ar penn all.

3) En ur sellout ouzh ul linenn hag a dreuze an daou dric'horn reizh, hag al linenn-se o tremen dre Landrewazheg goude bezañ troc'het ar c'hostez a gas eus bourc'h Servel da bPoull ar Serv (sellit adarre ouzh ar gartenn), e voe gwelet e oa tu da sevel meur a dric'horn keitgarek lec'hiet a bep tu da linenn Plougoñvelen-Landrewazheg. Al linenn-se a verk tu ar Reter, pe ar Gornaoueg ma seller ouzh ar penn all.

216

En ur glask an anvioù o tennañ da SERV e voe dizoloet daou er-maez a Vreizh, Breizh a vremañ da nebeutañ : *Champcervon*, ebro Avrank, en Normandi, ha *Rocheservière* e departamant ar « Vendée », met stok ouzh bevenn Vreizh. An hed bet muzulet etre an daou lec'h-se a oa war-dro 205 km, hag an hanter en em gave un tamm er reter da vourc'h « Thourie », e bro Roazhon. Met kavet e oa bet ivez ul lec'h e Goueled Breizh hag a oa keit-ha-keit etre an daou gorn bet meneget, al lec'h-se o vezañ Sant Servez, bremañ e parrez Pont-'n Abad. Ha muioc'h : war-dro 205 km a voe muzulet ivez ac'hano betek al linenn-diaz e-kichen Thourie. Un tric'horn keitgarek a oa eta, met un tric'horn keitgarek keit ennañ an diaz hag an hanterer a droc'h anezhañ. Doare en devoa eta an tric'horn-se da vezañ un ijinadenn, hag unan bet savet d'ur mare ma oa c'hoazh an daou lec'h-se eus ar reter e dalc'h ar Vrezhoned. Ar pezh a c'hellfe bezañ bet war-dro fin an navet pe benn kentañ an deket kantved.

Daou dric'horn all kalz brasoc'h a voe c'hoazh dizoloet diwezhatoc'h : an hini kentañ anezho a zo, evel hini Servel, unan eus e gornioù e Kerc'haroù, met 91 km eo a zo ac'hano betek an en korn hag a zo e GwazhC'haro Kemper-Gwezhenneg. Hag an trede, Kerserve S. Turien, a zo beget etrezek ar su, un tamm evel ma oa hini Servel. An hini all a zo c'hoazh brasoc'h peogwir en deus e gostezioù 102,6 km. Hemañ a denn da hini Gwazheg dre m'eo troet korn Plouserv war du an norzh, an daou gorn all o vezañ Enez C'haro Loktudi, e Kernev, diouzh tu ar mervent eta, ha Garo, e parrez Ploeren, tost a-walc'h ouzh kêr Wened. Ar pezh a lakaas an daou dric'horn-mañ war-wel dreist-holl eo an darempred o devez gant an dour. Plouserv e-unan a zo moarvat evit PoullServ o vezañ m'emañ war ribl ar stêr Yeodi, met kalz eus ar rannoù a c'heller ober war ar c'hostezioù pe al linenoù diabarzh (1/2. 1/3. 1/4. 1/6, hag all) a zo techet da vezañ en ur stêr pe ur wazh-dour (pe a-wechoù ivez, gwir eo, war un hent kribenn bennak !). Daoust ma 'z eo kalz stankoc'h an degouezh-se eget ne vijed o c'hortoz, ez eo anat koulskoude ne c'hell ket bezañ un dra wir evit an holl, hag e lec'hioù 'zo e vez kavet o c'hoarvezout war an troc'hioù 1/2, 1/4... ha nann war ar re 1/3, 2/3..., pe ar c'hontrol.

Peadra a zo da grediñ ivez ne deo ket hepken dre zegouezh e oad en em gavet da gentañ marteze war an anv Gwazheg. Na goude war ar Poullou Serv. Na kennebeut war Gwazh-C'haro, GwerC'haro pe Stank ar Garo !

217

Ha setu ma echuan gant un tric'horn reizh all, ar pempet eus ar rummad. Ha hemañ a zo dres unan eus e gornioù e Poull ar C'haro Skaer ; unan all o vezañ e Garzh ar C'haro KlostrPleiben ; an trede o vezañ e Kernonn Treogan. Hemañ eo ar

bihanañ eus ar pemp peogwir n'en deus pep kostez nemet 28,7 km. Met n'eo ket marteze an hini fallañ kennebeut rak, en ur vont eus Poull ar C'haro da gKernonn ez eer just etrezek ar biz : hag en ur vont eus hanter ar c'hostez-se da gorn Garzh ar C'haro e vezor troet rik war du ar gwalarn. Nonn koulz ha Karo a zo un anv « merker ».

Seul vui ez aed pelloc'h gant an enklask, seul vui e teue anat e ranke an holl lec'hioù kozh a Vreizh bezañ bet savet hervez ur raktres resis-tre, met ivez anvet hervez ur raktres. Evel m'eo bet savet ar plouezioù kozh ivez. Ha ma'z eus kement a lec'hioù gant o anv o kregiñ gant KER- ez eus tu da grediñ eo bet dibabet ar ger-se da stagañ ouzh un anv ha ne oa ket bet kavet un doare-envel resisoc'h evitañ. Ha Kervarker e-unan a zo un anv-merker, ar pezh ne vir ket ez eus, anat eo, tud hag a ve Marker o anv. Ha Nonn a zo ivez unan eus ar verkerien-se hag a zo bet graet an implij ledanañ anezho. Da heul Serv ha « Cerf », Serv ha Karo ez eus bet digarez da welout c'hoari gant ar gerioù. Ha Nonn a zo bet evel-se ivez mesket gant ar gwez Onn, e doare Nonnad e Kimerc'h ha Nonnod e Pleiber, ha meur a gKernonnenn a zo ha meur a gKernonn, evel ma tiskouez ar roll a zo bet roet uheloc'h er skrid-mañ. Hag evit ober muzul rêz e kaver ivez ur sant (pe santez) Onnenn ! Kement-se a c'hoarvez alies ivez gant an anvioù plant pe loened. Gant Kelenn da skouer e teuy Keleneg, Kergelenn pe Leskelenn : hag e meur a lec'h e kaver strollet Kergelenn gant Kervadeg. Beuz, Beuzid, Beuzidoù, Beuzidell a zo stank ivez, hep kontañ ar Gerizid pe an Avallod. Hag evit al loened e kaver da skouer Kerfraval, Roc'h ar Burtul, Roz ar Bik, Kerbiked, Kervran, Bodbleiz... ha meur a hini all sur-mat.

Ar chapelioù, dreist-holl ar re a zo a-hed an aod war an tevenn a dalvez peurvuañ da verkerien ivez. Evel-se emañ kont gant chapel sant Wevrog war aod Trelez. Merkañ a ra tu ar su gant bourc'h Dirinonn, iliz hag abati gozh Landevenneg, hag ivez iliz Plogastell. Chapel Sant Egareg (pe Tegareg ?) Kerlouan, pa heulier linenn kreisteiz a gas da Enez Nonna, dirak Beg Penmarch. Pep tra a dremen evel ma vije bet savet urzhiadur al lec'hioù evit triad ar voraerien, hag ez eo evel pa vije bet evel-se arouezioù evit diskouez dezho an hent pe diwall diouzh al lec'hioù treitour.

218

Un anv sant a zo hag a seblant bezañ trec'h da n'eus forzh pe hini eo MIKAEL. Alies e vez kavet o paeroniañ lec'hioù uhel, anezho menezioù pe grugelloù. En o zouez emañ, da skouer, MenezMikael Brasparzh ; hini Duot ; hini Porvenec'h (S. Varzhin ar Pradoù), hini Pleurdud pe c'hoazh ar chapel a zo war MenezGwenn Gwennin... Pe, a-hed an aod : Mikael Eusa, chapel Vikael e Tremnac'h Plougerne, krugell Vikael Karnag, chapel Leskoñv Beg ar Raz, hini Enez Vriad hag hini Enez Vikael Erge Bentevr (lec'hiadur homañ a c'hellfed tostaat ouzh hini Menez Mikael ar Mor, hep ar savadurioù kaer a gaver en hemañ avat !). Hag en em gavet aze eo ret ober meneg eus an darempredoù a zo anat etre al lec'hioù Mikael ha bevonn reter Vreizh.

Rak pep tra a ro da grediñ eo bet diazezet an harzoù e-keñver al lec'hioù a zoug anv an arc'hael, pe, war an tu enep, ez eo bet diazezet al lec'hioù-se e-keñver harzoù Breizh ! An tri « maen-bonn » diazez o vezañ : 1. St. Michel de Montjoie - 2. St. Michel de la Roe en Añjou - 3. Treize-Septiers er « Poitou » (n'ouzon ket avat ha bez e vefe ur Mikael bennak er barrez-mañ). Hervez ar muzulioù am eus graet e vefe 98 km etre Mikael Montjoie hag hini La Roe (ha 98 all eus al lec'h-mañ betek KerMichel Limerzhel). Etre St. Michel de la Roe ha Treize-Septiers e kavan 99 km, ar pezh a lavarte n'emañ ket Mikael ar « Roe » tre en hanter-hent, met da zistreiñ am bo war ar gudenn-se a-barzh klozañ va fennad. Un dra a zo heverk : ne gaver lec'h Mikael ebet war an hent etre hini Montjoie hag hini La Roe, muioc'h er su avat ez eus meur a hini, evel pa vije bet ret dre aze sellout a-dostoc'h ouzh an harzoù, marteze dre m'eo bet kalz kemmusoc'h ar re-mañ du-hont. An hini pouezusañ eus al lec'hioù-se eo ar Mikael a gaver war hent Naoned da gKlizun un tammig a-raok en em gavout e bourc'h « Le Pallet », e-kreiz bro ar gwin. Al linenn a c'heller ober eus al lec'h-se betek St. Michel des Loups (Mikael ar Bleizi) a denn un tamm d'an hini a zo bet meneget etre Rocheservière ha Champcervon, nemet ez eo berroc'h (180 km e-lec'h

205), an hanter o c'hoarvezout war-dro ur c'hartlev e mervent bourc'h « Essé » e bro Roazhon. Al linenn a ya eus Mikael ar Pallet da hini ar Bleizi n'eo ket merket muioc'h eget na oa « skoulm Thourie » gant ul lec'h annezet bennak. Netra nemet ar muzul graet da glask hanter al linenn. Ha, tra souezhus, dres el lec'h kavet en doare-se e tremene al linenn a gase eus St. Michel de la Roe da vMenez Mikael Porvenec'h ; dre hini Duot e kas ivez pelloc'h, en ur dremen dre gKerc'haroù S. Fregan, da chapel Mikael Tremenac'h ; un testeni muioc'h eus ar pouez en deus Mikael ar Roe e-barzh rouedad al lec'hioù Mikael. 241 km a zo eus Mikael Tremenac'h betek « skoulm » Esse ; ha 264,5 betek St. Michel de la Roe. En enep da linenn Thourie da S. Servez Pont-'n Abad n'eus ket amañ a dric'horn keitgarek, ha n'emañ ket homañ a-sonn war eben, met oc'h ober ganti ur c'horn 66° hepken. Meur a linenn a zo evel-se o vont eus an eil penn d'egile eus a Vreizh, a-wechoù en-eeun, a-wechoù all en ur ober un tammig gwar. Evel-se emañ Medig Plijidi en hanter-hent etre chapel Leskoñv ha St. Michel des Loups (124 km a bep kostez, hogen hep bezañ tre en eeun). D'ar mare diwezhañ avat em eus dizoloet e oa bet ur chapel Mikael ur wech bennak e parrez Bazh Werrann, hag ur beg-douar a vir bepred an anv. En ur ober ar muzulioù ret, eo bet splannaet kalz muioc'h an darempredoù etre an daou benn a Vreizh.

219

Ur wech kavet Mikael Bazh eta e voe taolet pled en em gave war hed 196 km eus St. Michel de Montjoie ; met azalek al lec'h-mañ e kaved e oa ivez an hed-se betek Lomikael Pleuvel. Ouzhpenn-se al linenn eeun a gas eus Bazh da Vikael Montjoie a dreuz kêr Roazhon, hag en homañ ez eus ivez ur ru hag a zoug anv sant Mikael. Mat e oa sellout eta a-dostoc'h ouzh an niver 196 a gilometroù (pe 49 lev) ; ha setu kentañ tra o tont war-wel eo e oa 98 km, ar pezh a zo an hanter eus an niver-se, da vont eus Mikael Montjoie betek St. Michel de la Roe, ha kement all ac'hano betek KerMichel Limerzhel, ar pezh a ra ivez 196 km (en ur ober tro avat, rak war-eeun n'eus nemet 160 etre Mikael Montjoie hag ar gêr-se a Limerzhel). Eus Mikael ar Roe betek Treize-Septiers ez eo 99 km eo a zo bet muzulet, ar pezh ne lakae ket Mikael ar Roe da vezañ tre en hanter ar pennad linenn a gas eus Mikael Montjoie betek Treize-Septiers. Fazi war ar c'hontañ pe ur c'hemm graet a-ratozh ? Rak un dra a bouez a zo : etre an daou lec'h-mañ e vez treuzet bevonn Vreizh trizek gwech gant al linenn-se (ha stoket outi zoken ur wech ouzhpenn !).

Ha koulskoude eus Treize-Septiers e kaver ivez 196 km betek chapel Mikael Pleurdud, hag en ur vont 110 km pelloc'h en em gavfed e Mikael Tremenac'h. Mat e oa eta sellout ha ne vije ket lec'hioù all gant ar pellder-se etrezo : meur a hini a zo bet kavet. En o zouez ez eus unan o kas eus Mikael Pallet da vMedig Plijidi ; unan all eus St. Michel Chef Chef da chapel Mikael Enez Vriad ; eus Enez Vikael Erge Bentevr da Vikael Enez Eusa. Azalek Bazh Gwerrann e kaver ivez an hed-se betek Enez Sun, ha marteze betek Beg ar Garreg Hir e Kameled ha betek Lanwazhog Plouzeniel.

220

Anat eo ne 'm eus gellet, er pennad-mañ, nemet reiñ un tañva eus ar pezh a zo bet lakaet dirazomp gant an enklask-se war lec'hiadurezh hor bro. Diniver ar c'henglotoù a weler o tiflukañ pa studier al lec'hioù o tougen anv Mikael, met n'emañ ket o-unan. Ha peadra a zo da chom « boud » ha da estlammiñ ouzh ar ouiziegezh a ranke sur kaout ar rummad tud o deus savet ar rouedad-se stignet war ar vro.

Ur goulenn avat a vez atav o tregasiñ ar spered : Penaos eo aet da goll an urzhiadur-se hep na vije chomet an disterañ eñvor anezhañ ? Ha da be vare eo c'hoarvezet kement-se ? Hep na chomje roud ebet eus ar pezh labour kaset da benn, nemet ar pezh a c'heller pennaouiñ bremañ en ur studiañ kartennoù graet-mat hag o labourat war an anvioù-lec'h a zo chomet evel testeni a-berzh ar re o deus o diazezet. Meur a sin, ha dreist-holl ar pezh a c'heller tennañ eus an darempredoù a zo gant al « lec'hioù santel », a ro da grediñ ez eo bet aozet pe meret gant ar venec'h. Moarvat ne oa ket kalz a ouizieien en diavaez eus ar manatioù e-pad pell. Emlod Mikael a ziskouezhfe da nebeutañ e oa c'hoazh bev-mat an urzhiadur war-dro an unneket kantved. Diwar goust ar brezel pe ar vosenn eo

e vije bet diouennet rummad an dud ampart ? Pe daoust a c'hoarvezout a reas tamm-ha-tamm pa gollas Breizh he emskiant vroadel, pa zeuas ur c'hemm bras e doare an dud da welout an traoù, ha pa greskas ar rouantelezhioù nerzhus ? Pa na voe mui ar brezhoneg yezh an dud uhel ?

Gwir eo ne deo ket hepken e-keñver al lec'hiadur eo ez eus ur gudenn. Bez ez eus ivez e-keñver « danvez Breizh » al lennegezh hag a aloubas e-pad meur a gantved ar broioù a zo en tu-mañ eus Europa...

An enklaskoù am eus graet a zigoro marteze ur « voulc'henn » a vo ledanaet gant re all a gendalc'ho gant an erv, hag a ledanaio an dachenn.

AVELIOÙ-TRO

(Mae-Mezheven 1979)

4 a viz Mae. - Trec'h eo ar Virourien er vouezhiadeg evit Ti ar C'humunioù e Breizh-Veur. Ne vo mui nemet daou gannad Plaid Cymru, ha daou gannad S.N.P. Ennañ...

7 a viz Mae - Evit lidañ e zeiz-ha-bloaz e lak Talbenn Dieubiñ Korsika 33 bombezenn da darzhañ en enezenn.

8 a viz Mae. - Tarzhañ a ra ur vombezenn e kamp-soudarded Askoleg e-kichen Dinan.

10 a viz Mae. - Dileuridi an T.S.A.B. a ya da gaozeal gant Rektor Roazhon da c'houlenn e vije lakaet hor « Chart Sevenadurel » da dalvezout.

13 a viz Mae. - Skrivañ a ra Yann Fouere da brezidant ar Republik evit goulenn e vefe graet war e dro gant Lezvarn europat Haagen.

18 a viz Mae. - E-pad un abadenn skinwel eo bet skarzhet kuit « manu militari » Jean-Edern Hallier en doa klasket prezeg en anv e strollad « Régions-Europe ».

22 a viz Mae. - Gant kannaded U.D.B. kuzul-kêr Roazhon eo goulennet e vefe sonet ar " Vro Gozh " war un dro gant ar " Marseillaise " gant Laz-seniñ ar gêr.

24 a viz Mae. - Goulenn a ra ar « C'huzul evit ur Yezh Europat » e vefe ar yezh ofisiel-se ar galleg...

25 a viz Mae. - Lazhet ez eus bet 4 ofisour a renk uhel e Madrid gant an E.T.A.

26 a viz Mae. - Harzet ez eus bet kalzig Morianed eus Kreisteiz Maouritania, a oa o vanifestiñ a-enep da arabekaet buhez ofisiel ar Stad.

27 a viz Mae. - Kentañ kerzhadeg evit Diwan e Lanuon.

28 a viz Mae. - Adlakaet eo bet da darzhañ ti an R. G. e Sant-Brieg.

29 a viz Mae. - Sevel a ra pobl arab ar C'houzistan a-enep da ziktatouriezh nevez C'homeini.

30 a viz Mae. - E-kreiz an deiz eo bet lakaet kenkiz ar c'homiser Tailhanter da darzhañ gant ur bagad paotred eus an F.L.B.

31 a viz Mae. - « Nozvezh c'hlas » e Pariz. A-raok na grogfe prosez 21 den eus an F.L.N.C., o deus tarzhet 22 vombezenn.

1 a viz Mezheven. - Harz-labour ha manifestadegoù en arsanailhoù Breizh : Brest, An Orient, Gwened, Roazhon...

4 a viz Mezheven. - Da geñver un dibenn-sizhun enepnukleel etrevroadel eo bet lakaet maen kentañ ur c'hraou a vo savet e Plogov war dachenn ar greizenn nukleel.

5 a viz Mezheven. - Kantadoù a dud yaouank o deus graet sez un ostaleri e-lec'h ma oa ur bagad C.R.S.-ed o chom en Aiacciu. Goude daou zevezh ha div nozvezh eo bet echuet hep ma ne vefe gloazet den ebet.

7 a viz Mezheven. - En Euskadi eo bet harzet gant al labour evit klemm a-enep da

lazhadenn ur plac'h yaouank gant ar polis.

223

14 a viz Mezheven. - Da heul tarzhadenn ti Le Tailhanter e harzer tud tro-dro da Rostren ha Kemper.

16 a viz Mezheven. - Dileuridi Herri Batasuna bodet e meur a gêr eus Euskadi a embann o deus ar gwir Euskariz ar 7 provins da vezañ unanet ha d'en em zispartiañ diouzh an div Stad a zo c'hoazh mistri war o aferioù.

17 a viz Mezheven. - Krog eo gant prosez 21 ezel an F.L.N.C. 20 bombezenn a darzh en Enezenn hag e Pariz.

18 a viz Mezheven. - Harz-debriñ a ra Glenmor ha Jean Le Kalvez e Groñvel evit sevel a-enep da feulster ar Stad, ha goulenn dieubidigezh ar brizonidi bolitikel vrezhon.

20 a viz Mezheven. - Dont a ra er-maez un niverenn ispisial eus ar gelaouenn **Autrement** gouestlet penn-da-benn da Vreizh (s.o. " Al Liamm " niv. 194, Mae-Mezheven 1979, p. 255).

24 a viz Mezheven. - Gant ur skipailh eus B.B.C.-Cymru ez eus bet graet un abadenn skinwel diwar-benn Breizh. E kembraeg o deus kaozeet gant an Aotrou Klerg ha gant tud all.

25 a viz Mezheven. - « Lakaet e vez da grediñ eo reizh klask paotred an F. L. B. e-touez izili ar strolladoù sevenadurel. » Setu pezh a ziskleir ar Bagad Bleimor n'eo ket plijet e vefe harzet pemp soner eus bro-Gemper.

26 a viz Mezheven. - Da heul drouklazhadenn un Euskarad repuget eus ar C'hreisteiz e Sajona e tiskleir E.T.A. e raio brezel d'ar Stad C'hall, d'an douristed c'hall, ha da bep tra a zo gall.

27 a viz Mezheven. - Dindan an titl « Gwirioù difennet » e teu er-maez ul levr graet gant daou gazetenn diwar-benn Alan Stivell.

GORWENAL.

Frañsez Vallée

GRAND DICTIONNAIRE FRANÇAIS-BRETON

advoulet dre offset

Priz : Boutin 160 lur.

Keinet plastik 220 lur.

Mlle J. Queillé, 47, rue Notre-Dame, 22.200 Guingamp

c.c.p. Rennes 1136 82 - Hep mizoù-kas evit ar mare

NOTENNOÙ

Hor mignoned

Erwan ha Jaketa BONVALLET a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o seizhvet bugel-bihan Gaella, goude Nolwenn, Jossilin, Ronan, Tristan, Saig ha Maximilien (er Baradoz), e Angers d'ar lañ a viz Ebrel.

Ganet zo ur paotrig, Gwendal e anv, e ti Jakez ha Rejina BAUDIG, d'an 3 a viz Mae, e Sant-Malo.

E ti Deneza ha Yann BOULBRIA, Jenofeva a zo eürus da gemenn ganedigezh he c'hoar Nolwenn, e Sant-Nazer, d'ar 17 a viz Ebrel.

Loeiz MOULLEG ha Mari-Helen FRIANT e bried a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o merc'h Trefina, d'an 28 a viz Ebrel e Palaiseau.

Anna GWILHOU hag Huberz ARZEL, a zo laouen da gemenn deoc'h ez int bet euredet e iliz Sant-Loeiz Brest, d'an 10 a viz Mae.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d'an holl.

Kañv

Hor c'houmananter Remont TASSEL, tisavour e Brest, a zo aet da anaon d'ar 16 a viz Ebrel. Bet e oa bet ezel eus Kuzul-ren " Breiz Atao " ha skrivañ a rae pennadoù e galleg diwar-benn an arboellerezh. Kenlabouret en deus e-pad pell d'ar gelaouenn *La Bretagne Réelle* dindan an anv R. Tugdual. Triwec'h vloaz ha tri-ugent e oa.

Hor gourc'hemennoù a gengañv a gasomp d'e wreg ha d'e vignoned.

Aet eo da anaon d'ar 25 a viz Mae, d'an oad a 67 vloaz, an Ao. Dr Ronan LEON bet e-pad 14 vloaz maer Pazieg, e-kichen Roazhon.

Bet ganet e Lesneven e chomas e-pad e vuhez feal d'e yezh c'henidik. Ouzhpenn se e roas da dud vrudet Breizh ul lec'h a enor en anvioù Pazieg. Abaoe an derou e oa koumanantet d' Al Liamm.

D'e intañvez, d'e vugale, d'e vugale vihan hor gourc'hemennoù-kañv mantret.

Profoù

MIZ C'HWEVRER

Gl. Barbotin, 5 lur ; Jakez Ducamp, 45 ; F. ar Bleiz, 45 ; Fañch Jestin, 245 ; Yann ar Beg, 200 ; Bernez Assicot, 25 ; Per Aoustin, 10 ; E. Kerouanton, 5 ; Remont Korr, 45 ; Ab. M. Blanchard, 15 ; Merwen Runpaot, 5 ; Anna ar Beg, 100 ; Alan Durand, 50 ; Andrev Roparz, 35 ; Lukian Raoul, 30 ; Herve Latimier, 10 ; Bernez Aodig, 25 ; Ronan Aodren, 45 ; Loeiz Andouard, 445 ; Yann L'Haridon, 45 ; Andrev ar Bihan, 45 ; V. ar C'haer, 10 ; J. P. Kloareg, 25 ; Paol Seutin, 5 ; Yann Bouessel du Bourg, 120 ; It. M. Renault, 50 ; Per ar Bihan, Pariz, 45 ; Per Manac'h, 5 ; Herri Kalvez, 100 ; P. V. Kerloc'h, 5 ; Añjela Duval, 25 ; Dr Yann

Perrot, 27 ; Loeiz Bothorel, 25 ; Madalen Miniou, 15 ; A. Kerhoas, 5 ; Ab. Erwan Miniou, 15 ; Per Losquin, 5 ; K. ar Brazideg, 5 ; Paol Aroget, 10 ; Herri Pungier, 45 ; Gab Mahe, 145 ; J. J. Collaud, 45 ; Pol Gales, 5 .
- War un dro, 2 242 lur.

225

MIZ MEURZH. -

R. Erwan Gwilhou, 45 lur ; Riwall Huon, 10 ; Bernez Leguy, 22 ; M. ar Chapelen, 45 ; Yann Bouessel du Bourg, 120 ; Jilberz Monroy, 5 ; Mikael Bertin, 33 ; Y. B. an Deuñv, 5 ; F. ar Gwailh, 50 ; Mari-Loeiza Fave, 5 ; Herri ar Floc'h, 10 ; Padrig Fourn, 100 ; R. Neveu, 5 ; Mikael ar Go, 100 ; H. ar Bitouz, 35 ; Gweltaz Omnes, 125 ; Yann Bizien, 10 ; Per Penneg, 600 ; J. Gedeg, 45 ; A. Merdrignag, 65 ; Ronan Pellen, 45 ; M. ar C'hog, 65 ; R. Delaporte, 35.
- War un dro, 1 780 lur.

Miz EBREL : Erwan Ropers, 60 lur ; F. Nedeleg, 50 ; Y. Alan ar Go, 5 ; A. ar Marouilh, 10 ; Andrev Daniel, 445 ; Yann ar Gall, 27 ; Jakez Nedeleg, 5 ; Maoris Piron, 5 ; A. Larnikol, 45 ; Yann Bouessel du Bourg, 130 ; Erwan Tymen, 10 ; Alberz ar Rouz, 45 ; Erwan an Heveder, 15 ; H. Arzel, 45 ; Lukian Bothorel, 45 ; Alberz Gwilhou, 245 ; J. Deloof, 9 ; Mikael Rageot, 45 ; Yann Kadoret, 45 ; Bernez ar Rallig, 45 ; Per Salaun, 15 ; Per Roy, 45 ; Fulub ar Gwailh, 200 ; Herve Kamm, 45 ; F. Favereau, 5.
- War un dro, 1681 lur.

Miz MAE : Y. N. Charon, 5 lur ; E. Souffes-Despre, 25 ; Yann-Ber Dhaese, 45 ; D. Guichard, 45 ; Mikael ar Rouz, 5 ; Yann Bouessel du Bourg, 130 ; Erwan Mervin, 45 ; Yann Kreff, 145 ; Charlez Moreau, 5 ; X. ar C'hoseg, 60.
- War un dro, 510 lur.

Kaset zo bet d'ar gelaouenn abaoe derou ar bloaz 9 005 lur a brofoù. Trugarekaat a reomp a-greiz-kalon hor skoazellerien.

1 059 koumananter

E dibenn miz Mae hon eus kontet 1.059 koumananter, lodennet evel-hen : Aodoù an Hanternoz, 138 ; Penn ar Bed, 296 ; Il ha Gwinum, 174 ; Liger Atlantel, 67 ; Mor Bihan, 77 ; Rannvro Bariz, 114 ; Departamantoù all, 120 ; Afrika an Hanternoz, 1 ; Afrika Du, 6 ; Iwerzhon, 9 ; Kembre, 11 ; Skos, 2 ; Bro-Saoz, 4 ; Alamagn, 9 ; Spagn, 1 ; Portugal, 1 ; Helvetia, 4 ; Izelvroioù, 4 ; Belgia, 4 ; Sveden, 1 ; Stadoù Unanet, 8 ; Kanada, 3 ; Inizi Jilberz, 1 ; Antilhez, 1 ; Aostralia, 1 ; Sri Lanka, 1 ; Republik China 1.

Kollet hon eus 70 koumananter e-doug ur bloaz. Kalz anezho a oa tud yaouank o teskiñ brezhoneg, koumanantet gant o c'helennerien. A-hend-all bez a zo bremañ kelaouennoù brezhonek all, ha setu un abeg ivez.

226

Disteroc'h eo bremañ niver hol lennerien e Rannvro Bariz, e Breizh-Uhel, met ivez er broioù keltiek tramor. Niverusoc'h int avat e Breizh-Izel hag er broioù germanek. Evit Rannvro Bariz, e seblant aet eno war vihanaat niver ar Vretoned emsklantek. E Pariz, da skouer, n'eus kevredigezh ebet war hor rolloù, na skolveur ebet kennebeut.

Tu ' zo da vont war-raok adarre. Moarvat dre m'omp chomet hep kontañ hol lennerien e-pad ur pennad mat, aet eo o niver war goazhañ. Greomp war-dro eta adarre.

Lizhiri

Digant M. K., Roazhon :

« Ma ya war wellaat an dibab levrioù embannet gant Al Liamm, n'hellan ket larout kemend-all diwar ar pennadoù embannet er gelaouenn. Bep bloaz e kavan diaesoc'h-diaes sinañ ma chekenn d' Al Liamm.

Ha n'hellfed ket gouzout e peseurt stad emañ tiretennadoù-skridoù an embanner ? Se a c'hallfe marteze broudañ tud 'zo da skrivañ. Talv a ra ar boan klask bepred... »

Digant E. K., Lannuon :

« Karout a rafen kavout el Liamm muioc'h a bennadoù faltazi eget na gaver er mare-mañ (skouer " Al Liamm " 198).

Gwellañ gourc'hemenoù evit embannadurioù Al Liamm er mare-mañ (levrioù Per Denez, T. Huon, G. Kervella ha Kerwerc'hez...).

Niverennoù kozh " Al Liamm"

Prenañ a c'heller an niverennoù-mañ : 29 69 70 71 72 74 75 76, 77, 79, 91, 92, 93, 95, 103 betek 198.

Priz an niverennoù a zo : 10 lur pep hini (nemet an niverenno 116 ha 151 hag a goust 12 lur pep hini, an niverenn 120 diwar-benn Iwerzhon, an niverenn doubl 166-167, an niverenn 190 diwar-benn Roparz Hemon hag a goust 18 lur pep hini).

Tu a zo da brenañ bloavezhioù klok, 55 lur pep hini, eus 1965 betek 1979 (niverennoù 108 betek 197).

An niverennoù a vez kaset kuit a vizoù-post. 10 % a zistaol a vez graet pa brener 50 skouerenn pe ouzhpenn. Ar goulennoù a zo d'ober digant Per ar Bihan.

Galv d'hor c'houmananterien

Ar goumananterien a vez peurliesañ dievezh pe lezirek pa vez poent adkoumanantiñ ha bep eil niverenn e vez ret kas 250 lizher-adkoumanantiñ, ar pezh a zo kalz a labour hag a goust ker a-walc'h.

N'ankounac'hait ket eta adkoumanantiñ pe reiñ keloù pa gemmañ chomlec'h. Ur gounid a vo e pep keñver. Ho trugarekaat a reomp en a-raok.

227

Da werzhañ gant ur c'houmananter

niverennoù Gwalarn, Dihunamb, Feiz ha Breiz Ar Vugale, Ar Vuhez Kristen, Kroaz ar Vretoned, Stur. Skrivañ da Ber ar Bihan.

Levrioù Al Liamm

Deut eo a-zindan ar wask romant Yann-Vari Kerwerc'hez **En ur rambreal**. Al levr ez eus ennañ 256 pajenn hag ar golo e liv a zo bet aozet gant Tudual Huon. E briz a

zo 40 lur.

Dindan ar wask emañ bremañ skridoù Jakez Konan. Talbenn al levr a zo **Lannevern e kañv** ha danevelloù all ha 224 fajenn e vo ennañ

Da rakprenañ betek an 30 a viz Eost d'ar prizioù-mañ : war baper kaer 37 lur hep mizoù-kas e-lec'h 45 lur ha war baper all 30 lur hep mizoù-kas e-lec'h 36 lur.

Kasit ho chekenn da J. Queillé, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp - k.r.p. Rennes 1136 82.

Priz lennegel Langleiz 1980

Ur priz d'an nebeutañ a vo roet er bloaz-mañ evel boaz, pe d'un oberenn e komz-plaen pe d'un dastumad barzhonegoù.

An oberenn a yelo ar maout ganti a vo embannet gant Al Liamm. Dav eo kas ar skridoù, teir skouerenn skriverezet, war un tu hepken eus ar follenn, da rener ar juri (Maodez Glanndour, Keresperz, Louanneg, 22700 Perros-Guirec), a-raok penn kentañ miz Du d'an diwezatañ.

Un diskouezadeg diwar-benn Barzhed Breizh, e Sant-Brieg

Levraoueg-kêr Sant-Brieg he deus aozet e-pad miz Ebrel un diskouezadeg war Barzhed Breizh hon amzer. An darn vuiañ eus an traoù kinniget - ouzhpenn 300 en holl - a oa bet danvez un diskouezadeg graet a-raok e levraoueg Kemper.

Gwelet hon eus eno gant plijadur dastumadennoù barzhonegoù Roparz Hemon, Maodez Glanndour, Youenn Gwemig, Añjela Duval, e-kichen oberennoù e galleg. Evel just e oa brasoc'h lod ar galleg eget hini ar brezhoneg. Mankout a rae lod eus hor skrivagnerien, R. Huon, Per Diolier, hag ar re yaouank nebeut anavezet c'hoazh.

Met gourc'hemenoù a c'heller ober da levraoueg-kêr Sant-Brieg rak unan eus ar re eo, e Breizh, a bren ar muiañ a levrioù e brezhoneg, hag a laka anezho a-wel d'an holl en he salioù. Dalc'hmat ez eus unan bennak war an dad e-lec'h ma vez kinniget d'al lennerien al levrioù nevez-prenet.

228

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien

Dalc'het e vo Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien (KEAV) er bloaz-mañ e skol Sant Alan e Skaer adalek ar 14 a viz Gouere mare koan, betek ar 26 a viz Gouere goude kreisteiz.

Renet eo ar staj e brezhoneg penn-da-benn. Digor eo d'an holl re o defe dija kroget da studiañ ar yezh, evit ma c'hellfent en em zibab hep tremen dre ar galleg.

Setu amañ da heul un nebeut resisadurioù diwar-benn ar staj.

AL LABOUR

Diouzh ar heur : kentelioù hervez al live.

Studi war ar yezh adalek oberennoù skrivagnerien, kaozeadennoù diwar-benn danvezioù liesseurt, enrolladennoù.

En endervezh : hervez c'hoant ar berzhidi hag an amzer ; stalioù-labour

(c'hoariva, montaj), baleadennoù, kaozeadennoù.

Gouda koan : abadennoù a bep seurt. Pep hini a c'hell degas binvioù seniñ, luc'hvannoù pe filmoù da ziskouez eus ur veaj, pe eus un danvez a blij dezhañ.

PRIZ AR STAJ : 500 lur. Goulennet e vez ouzh ar berzhidi kas en a-raok an hanter eus priz o c'hampad. Kas an arc'hant da : Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien, K.R.P. 2869 82 J Rennes, par chekenn-bost pe chekenn-vank.

Degas ur sac'h kousket, pe palennoù ha liñselioù. Ar re a garfe kaout ur gambr a zle her goulenn en ur gas o enskrivadur ar c'hentañ ar gwellañ, rak n'eus nemet un nebeut kambrou er skol.

Marteze e c'hell lod ac'hanoc'h kas ur velo, kaer eo ar vro.

EURIOÛ-TREN evit mont : Paris-Kemper, diskenn e Rosporden da... 18.53 eur (gwelloc'h eo deoc'h gwiriekat an eur-mañ).

An deiz kentañ (lun 14/7) e vo tud o c'hortoz ar berzhidi dirak ti-gar Rosporden, evit o c'has da Skaer (10 km).

Koan a vo servijet da 20 eur en deiz-se

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien
44 straed Jean Rameau, 29000 Kemper

Staj brezhoneg war ar maez e Bro-Dreger

Savet e vo evit an eil gwech ur staj brezhoneg war ar maez gant Kreizenn Sevenadurel Lanuon, e-pad sizhunvezh kentañ miz Gwengolo, adalek ar sul 31 a viz Eost betek ar sadorn 6 a viz Gwengolo. Digor e vo d'an holl re a zo barrek da gompren ar yezh hep re a boan hag a oar komz anezhi mat a-walc'h dija.

Plaset e vo pep stajiad en ur menaj e-lec'h e vo ret dezhañ labourat gant tud an ti ; lavaret e vo bet d'ar venajerien komz nemet brezhoneg d'ar stajidi, evel-se e teuo tamm-ha-tamm gante brezhoneg evel ma vez komzet bemdez gant tud ar vro.

229

Ret eo gouzout e vo start a-wechoù al labour, met gounidus e pep keñver, rak bevañ e brezhoneg gant tud ur menaj zo dreist evit en em lakaat da gaozeal en ur stumm naturel ha da anavezout muioc'h buhez an dud diwar ar maez.

Klasket e vo ivez sevel ur veilhadeg pe ziv e-kerz ar sizhun.

Ar staj-se ne gousto koulz laret netra deoc'h pa vo roet da bep stajiad boued ha lojeiz gant ar venajerien ha ne vo goulennet deoc'h nemet 50 lur evit bezañ enskrivet (an arc'hant-se a vo implijet evit paeañ an asurañs).

M'ho peus c'hoant dont d'ar staj, skrivit pe bellgomzit evit goulenn ur follenn-enskrivañ da : Soazig Grall, Res. La Frégate, 22700 Perros-Guirec. Pellg. (96) 23.33.42.

Kentelioù iwerzhoneg e Auch

Keloù zo deut betek Kuzul ar Brezhoneg e veze roet kentelioù iwerzhoneg e Auch (Gers) Bro-C'hall. Graet e vezont e stumm " Crash Course ". Evit gouzout hiroc'h, skrivañ da Ornicar, rue Dessoles, 32000 Auch.

Embannadurioù

- **Hor Yezh** (niv. 127, 128, 129). Al levrenn-mañ a dalvez eta evit teir niverenn (173 pajenn). Talbenn an niverenn a zo " Pesketourien Douarnenez ". Gwendal Denez en deus dastumet komzoù 9 den eus Douarnenez. E enklask a zo bet diazezet war gement tra a denne ouzh labour ar mor e yezh Douarnenez. Ger ebet n'eo bet kemmet ha miret eo bet ar stummoù rannyezhel, lakaet er skritur unvan. An oberour a zo en e soñj sevel diwezhatoc'h ur geriadur klok eus yezh ar mor er c'hornad. D'hor meno e vije mat lakaat ur frazenn-skouer da heul pep ger, ar pezh emañ moarvat e soñj ober ivez.

- War niverenn 22 **Skrid** e kaver barzhonegoù e-leizh gant J. L. Dey, Barbaou, A. Duval, Deneza an Danteg, Tereza, Herle Denez, Mabgwerin, ur pennad gant Kerlann war skol Blistin (1942-1944) ha troidigezhioù : « Annabella » gant E. A. Poe, troet gant Per Denez ha « Buhezskrid a-raok an amzer », ur pennad dedennus-tre diwar zorn ar barzh Rusian Yevtushenko troet gant Herle Denez. Koumanant evit 4 niverenn : 30 lur - k.r.p. Denis 1499 51 Rennes.

- Niverenn 2 **Al Lanv** (23 fajenn) a zo deut er-maez. Warlerc'h ur pennad-stur o kemenn d'al lennerien pehini eo o emzalc'h a gavomp reizh ha fur, e-keñver ar yezh a fell dezho implij, hag o emzalc'h « sokiabour ha breizhad », e c'heller lenn meur a bennad diwar-benn an estrenvro : Euskadi, Yougoslavia (marv Tito) ha Bro-Gembre, ur pennad gant P. Denez, An Tanio gant Tudou, Skol Diwan an Oriant hag un diviz gant Indianed eus ar C'hebeg. Luc'hskeudennoù ha tresadennoù-lu a zo da heul ar pennadoù. - Koumanant 30 lur. Al Lanv, 7 rue du Recteur P. Henry, 35000 Rennes.

230

- **Imbourc'h** niv. 122-123 a zo gouestlet d'un oberenn hepken « Kanevedenn ar vugale », 14 kontadenn gant Erwan ar Menga. Setu ar pezh a lavar an embanner er raskrid : « En div niverenn-mañ eus " Imbourc'h " e vo kavet un dastumad sorbiennoù ha kontadennoù gant Erwan ar Menga. Daoust ma 'z eus bugale eus an dud pennañ anezho, n'eo ket bet savet ar skridoù-mañ a-ratozh evit bugale ; mennet int dreist-holl da gounañ istor Breizhiz kristen ha stourm kristenion all, e broioù all, evit o feiz, en hon amzer ».

Gant an niverenn 124 e teu en-dro " Imbourc'h " d'ar stumm kelaouenn, enni div varzhoneg gant Añjela Duval, notennoù politikel gant Youenn Olier, prosez war vuhez ha burzhudoù sant Erwan gant Klerg, ha pennadoù gant Jil Erwan, Yann-Gristof Bouessel Dubourg (ur gontadenn) ha notennoù.

- War niverenn 32 **Brud Nevez** e kaver barzhonegoù gant Naig Rozmor hag Y. Brusq, un danevell " An tamm du " gant P. M. Mevel, eñvorennoù gant Louis Conq, kendalc'h " Eñvorennoù beaj " gant Y. Miossec ha notennoù, en o zouez ur varnadenn veulus war levr Tudual Huon " Ar Chalboter huñvreoù " savet gant Fañch Broudig.

An niverenn 33 a zo gouestlet d'ur pezh-c'hoari " O Chezuz ! " mister farsus ha goapaus bet troet ha kempennet gant Remi Derrien, diwar pezh an italian Dario Fo.

- Teir c'helaouenn a vez embannet bremañ gant strollad **Ar Falz**. An div hon eus resevet nevez zo Ar Falz ha Skol Vreizh ez eus enne dreist-holl pennadoù e galleg. Niverenn 31 " Ar Falz " a ro deomp keleier a bep seurt diwar-benn kudennoù an deskadurezh hag ar stourmoù kaset war-raok gant Talbenn Sevenadurel Araokour Breizh. Lennet hon eus ivez ur pennad dedennus anvet " Conscription, résistance, guerres ". " Skol Vreizh " a ginnig deomp ur studiadenn war al lec'hanvadurezh diwar zorn A. Deshayes, ar barzh Armant Robin gant A. Bourdon hag ur pennad e brezhoneg gant F. Favereau " Ober Skol Vrezhoneg ".

- " Lavar 07 " a zo talbenn niverenn 237-238 **Preder**. En niverenn-mañ e kaver

lizhiri ha notennoù-labour diwar-benn gerioù ha kudennoù yezhel a bep seurt.

- **An Had** niverenn 1 a zo kelaouenn Diwan (bet eo bet gwechall anv ur gelaouenn wenedek renet gant Sten Kidna). Reiñ a ra keleier e galleg hag e brezhoneg eus ar skolioù hag o c'hudennoù. Ouzh he lenn e c'hellomp gouzout ez eus bremañ 13 skol, 15 skolaer ha 150 bugel e skolioù Diwan. Luc'hskeudennoù e-leizh a gaver da heul ar pennadoù. - Koumanant 10 lur, koumanant-skoazell 50 lur. Diwan MPT Penn ar C'hreac'h, rue Professeur Chrétien, 29200 Brest.

- Dindan ar memes golo e krog en-dro **Bleun-Brug** gant an niverenn 1, n'ouzer ket mat perak. War a seblant ez eo dre ma 'z eus bremañ pennadoù brezhoneg gant an droidigezh e galleg e-kichen. An hanter eus ar gelaouenn pe war-dro a zo e brezhoneg. Bez eus pennadoù a bep seurt war ar relijion, barnadennoù «var levrioù galleg ha brezhoneg, kanaouennoù hag ur gontadenn bennak.

231

War niverenn 15 **An Nerzh** (14 pajenn liesskrivet) e c'heller lenn ur pennad gant ar rener Rieg, barnadennoù diwar-benn ar c'helaouennoù Planedenn, Imbourc'h hag An Amzer. Bez' ez eus ivez barzhonegoù hag un danevell "Pandulenn" troet diwar R. Topor.

- Degouezhet zo ganeomp ivez meur a niverenn eus ar gelaouenn e galleg **Bretagne Réelle** embannet, evel An Nerzh, gant J. Quatre-bœufs (alias J. Gallo). Unan anezho (426 bis Printemps) a zo tevoc'h eget ar re all. Anvet eo " L'impact de Bretagne Réelle " Enni e kaver ur roll eus ar c'helaouennoù o deus meneget embannadurioù B. R. gant, ur wech an amzer, un evezhiadennig a fentus » war-lerc'h. Enebour bras B. R. a zo ur spes ma vez graet anezhañ Saint Boicott (pe Boycott). Perak Sant ? Ne ouzer ket mat. Setu amañ ur skouer eus an evezhiadennoù-se : « On notera que cette revue bretonnante (Al Liamm) suivit nos travaux comme se devait de le faire un organe d'esprit national, mais toutefois avec une circonspection toute particulière, due aux " pieuses " pressions de notre Saint national ».

- War c'holo niverenn 257 ar gazetenn **Breizh** e c'heller gwelout ul luc'hskeudenn eus barzh brasañ hor mare, Maodez Glanndour. Aet eo Christian Giraudon, rener ar gelaouenn, d'ober ur gaozeadenn gant barzh Louanneg (Bro-Dreger). Pouezet en deus dreist-holl war ul lodenn eus labour Maodez Glanndour : e enklaskoù war ar c'hanaouennoù-pobl.

- **Keltica**, the inter-celtic quarterly, niverenn 1 a zo ur gelaouenn 104 fajenn enni, o tont deomp eus ar Stadoù-Unanet. Kavout a reer e-barzh pennadoù diwar-benn an holl vroioù keltiek, dreist-holl ar c'hevredigezhioù o stourm. Pemp pajenn zo diwarbenn Breizh en o zouez, ur pennad diwar-benn Roparz Hemon hag ur roll eus ar c'helaouennoù hag ar c'hevredigezhioù breizhat. Lennet hon eus ivez ur varnadenn a gavomp reizh a-walc'h war " The horse of pride ", levr gallek P. J. Helias hag a zo o paouez bezañ embannet gant Yale University Press (USA). Koumanant : 15 dollar. Priz un niverenn : 4,50 dollar. Keltica, 96 Marguerite Ave. Waltham, Mass. 02154 USA.

- Degouezhet eo ganeomp niv. 3 **L'Avenir de la Bretagne**, o reiñ keleier a bep seurt. Ehanet e oa ar gelaouenn da zont er-maez abaoe pell. Dont a ra er-maez bremañ bep eil miz. - Koumanant : 20 lur. B.P. 103, 22001 Saint Briec Cedex - k.r.p. Rennes 1132 86 J.

- Ur gaer a niverenn eo **Le Lian**, niv. 6 (journal d'informations gallo). Ar vent a zo kemmet, moulet brav eo ha leun a skeudennoù. Pennadoù zo e galleg ha re all e galloeg. An niverenn-mañ a zo gouestlet dreist-holl d'ar c'hoariva ha gouezet hon eus evel-se e oa bet skrivet pe aozet meur a bezhig-c'hoari e galloeg gant hor mignon Gaston Latimier aet da anaon nevez zo. Pemp pezh a zo meneget amañ, unan anezho e daou arvest a oa bet awenet gant " Ar Sivi ", bet embannet war " Al Liamm ". C'hoariet int bet holl e korn-bro hor mignon.

- War niverenn 29 **Carn** (ul liamm etre ar broioù keltiek) e c'heller lenn, evel boaz, pennadoù e gouezeleg, kembraeg, brezhoneg ha dreist-holl saozneg. Dont a

ra " Carn " er-maez teir pe beder gwech er bloaz. J. abHerve-Gwegen, Kervean al Liorzhòu, 29235 Plounevez Lochrist - 28,50 lur - k.r.p. 2204 24 Rennes.

232

- **An Lef Kernewek** (niv. 137) a zo ur gelaouenn liesskrivet e kerneveg penn-da-benn. Koumanant : 1 lur saoz, 93 Mount Pleasant Road, Camborne, Cornwall (G. B.).

- Yann Brekilien a zalc'h da skrivañ ha se war bep seurt danvezioù. Ar wech-mañ ez eo ur romant, 296 pajenn ennañ, anvet **Une reine sauvage**. Istor Boudicca, ur rouanez eus amzer Neron, ez eo ha tremen a ra e Breizh-Veur. Ar vaouez kelt, a sav an dud a-enep d'an alouber, met trec'het eo a-benn ar fin. Embanner J. P. Delage.

" Marion ar Faoued "

Tro hon eus bet da lenn pezh-c'hoari Strollad Karaez " Marion ar Faoued ". Er rakskrid e kaver displeget danvez ar pezh : buhez gwalleürus an dud vunut en 18vet kantved - gwasket ma oant gant gouarnamant Bro-C'hall hag an dud e karg - stad truezus ar merc'hed en amzer-se, hag evel just buhez Marion, plac'h dieub ha forbanez.

Ar strollad, o tibab ar pezh-se, a fell dezhañ kas da soñj d'an arvesterien, pe d'al lennerien, n'eo ket echu, en ugentvet kantved, ar stourm evit dieubidigezh ar re baour na, kennebeut, dieubidigezh ar merc'hed. Ur pezh engouestlet eta, hag hon eus bet ar brasañ plijadur o welout war al leurenn, daoust ma n'omp ket sur e vije bet pal Marion ober vat d'ar re baour !

Un tamall a rafemp d'al levr : perak skrivañ en ur yezh ken pell eus ar ranyezhoù all ? Ar rakskrid, d'an nebeutañ, en dije gallet bezañ er yezh unvan, nemet e vije al levr da vezañ gwerzhet e kostez Karaez nemetken ?

Ar pezh, hag a zo dedennus-tre, a oa bet skrivet da gentañ e galleg gant Colette Helard-Cosnier. Lakaet eo bet e brezhoneg gant Tremeur Bourlès. Skeudennoù ar c'hoarierien a gaver ivez el levrig.

E. M.

Gouel ar Brezhoneg e Plabenneg

C'hwec'h devezh en deus padet ar gouel. Un tamm re hir e oa marteze, rak d'ar sadorn 10 p'en deus c'hoariet Strollad Karaez ar pezh " Marion ar Faoued " e oa kalz nebeutoc'h a dud eget ar sadorn war-lerc'h. Ar re a zo deut avat a zo bet laouen gant o nozvezh. An eil abadenn a oa ar merc'her war-lerc'h hag e oa ivez nebeut a dud. Ar wech-se ez eus bet displeget barzhonegoù ha kontadennoù hag ez eus bet abadenoù kan ha sonerezh (Naig Rozmor, Saozig Jaouen, Noel Caban, An Triskell, J.F. Kemener...). D'ar yaou e oa aozet ur redadeg evit skoazellañ skolioù Diwan. En endervezh ez eo aet Strollad ar Vro Bagan da ziduiñ tud kozh Ti Retred Plabenneg ha klozet eo bet an devezh gant ur fest-nnoz. Filmoù savet gant ACAV Sant-Kadou ha re all gant FR3 a zo bet bannet d'ar gwener en endervezh. An nozvezh a oa gouestlet d'ar c'hoariva : da gentañ " Ar vuoc'h " c'hoariet gant skolidi Skol Sant-Jozef Plabenneg. Strollad Plougin en deus klozet ar veilhadek en ur c'hoari " Loan-blein pe marc'h-limon ". Ar sadorn goude lein a oa miret evit ar sonerien hag ar ganerien (Jazz, Patrick Ewen, Gwendal). A-benn neuze e oa krog an dud da zont niverusoc'h-niverusañ ha kalz a arvesterien a oa evit pezh Jakez Riou " Nominoe ", e stumm ur « show » gant kaniri kaer, c'hoariet gant Strollad ar Vro Bagan.

Diaouled ar Menez o deus laket an dud da zañsal betek diwezhat tre en noz !

Ar sul a oa deiz an diskouezadegoù (a bep seurt). Ar c'hevredigezhioù a ziskoueze - hag a werzhe - o marc'hadourezh. Tu oa da bep hini kaout e c'hoant... levrioù, kazetennoù, fourmaj-laezh pe... menozioù. War un dro e oa dindan an deltenn vras kenstrivadeg kanerien ha sonerien yaouank, evel er Bleun-Brug gwechall, ha gouren er-maez. E fin an endervezh eo bet c'hoariet " O Chezuz ! ", ur mister farsus gant Strollad C'hoariva Penn ar Bed. Dipitus eo e oa kement a drouz dindan an deltenn, rak an darn vuiañ eus ar c'hoarierien a oa barrek-tre.

Goude koan hag evit echuiñ e oa kinniget d'ar selaouerien kanenn veur " Ar marc'h dall ", sonerezh gant René Abjean ha komzoù gant Job an Irien, gant 120 kaner, An Triskell ha sonerien bombard ha biniou.

E dibenn ar sizhun edo FR3 e Plabenneg o c'houlennata tud ar vro hag ar re o doa aozet ar gouel ha skignet e veze an divizoù-se war-eeun war Radio Armorique, divizoù e galleg d'ar sadorn hag e brezhoneg d'ar sul.

Radio dieub

Abaoe an 3 a viz C'hwevrer ez eus bet krouet e rannvro Bariz meur a radio dieub. Tu a zo, da skouer, da selaou Radio Fest-Noz bep sadorn goude kreiznoz war M.F. 100-104 Mega-hertz ha Radio Breizh Dieub bep yaou eus 19 eur 15 da 19 eur 45 war 95 pe 100 Mega-hertz, M.F.

Diwan

Ar gevredigezh Diwan a vod ar skolioù-mamm brezhoneg. Ar skol gentañ zo bet digoret e miz Mae 1977. 14 ez eus bremañ e miz Mezheven 1980. Savet int bet dre ma ne oa doare all ebet evit enebiñ ouzh politikerezh ar Stad c'hall a glask a-viskoazh lazhañ ar brezhoneg. Met n'eo ket pal Diwan ober war-dro skolioù-mamm hepken. Rak evit chom bev, e rank ar brezhoneg bezañ implijet en deskadurezh eus ar skolioù-mamm betek ar skolioù-meur.

Ar skolioù publik pe brevez ne roont ket an tu da gaout ur seurt deskadurezh : kenderc'hel a reont da zistruj ur bobl o lazhañ he yezh. N'eus ket c'hoazh seblant e vefent prest da cheñch politikerezh ha d'en em ober ouzh ar gwir da vezañ disheñvel hag ouzh an emglevioù etrevroadel diwar-benn ar sevenadurioù.

Kondaonet eo neuze Diwan, a-raok ma vo lakaet e-barzh ur servij publik ofisiel a zoujo hor yezh, da grouiñ skolioù nevez ha da zigeriñ klasoù evit kelenn ar vugale e brezhoneg.

Bremañ eo deut poent da Ziwan digeriñ ar c'hentañ skolioù kentañ derez.

Ur samm nevez ouzhpenn eo evit Diwan, rak he skolioù zo neptu, poblek, digor d'an holl hag evit netra. An arc'hant a zo ezhomm da baeañ ar vistri hag ar frejoù a zo da vezañ kavet gant ar boblañs ha difennerien ar brezhoneg. Daoust d'ar servij publik gwirion rentet gant skolioù Diwan, ne zeu dezho koulz lavaret arc'hant ebet a-berzh ar Stad.

Ur galv nevez a ra eta Diwan d'hec'h holl vignoned evit kenderc'hel ha startaat ar stourm evit saveteiñ ar brezhoneg.

Eil Festival Diwan e Ploveilh

Kuzul-skoazell Diwan Ploveilh a gaso en-dro e eil Festival bras muzik ha kan e Kastell Kerambleiz e Ploveilh, an 18, 19 hag 20 a viz Gouere 1980.

Ar programm zo bet savet evel-henn :

- Gwener 18 a viz Gouere, da 8 eur noz, war blasenn Ploveilh :
 - * C'hoariva brezhoneg gant Strollad Ar Vro Bagan : " Nomine Oe ! ", pezh-c'hoari savet gant Jakez Riou eus Lotei, o kontañ trec'h Nominoe war Franked Charlez ar Moal hag a zegasas o frankiz d'ar Vretoned er bloavezh 845.
 - * Goude ar pezh : Fest-noz gant ar strollad Sak-a-Benn, sonerien ha kanerien eus ar vro.
- Sadorn 19, da 9 eur e Kastell Kerambleiz :
 - * Gweltaz ar Fur,
 - * François Béranger.
- Sul 20, adalek 2 eur d'abardaez e Kaatell Kerambleiz :
 - * Djamel Alam (muziker berber).
 - * An Triskell.
 - * Youenn Gwernig.
 - * Bill Deraime (blues).
 - * Bagad Kemperle.
 - * Glenmor ha Katell.
 - * Kevin Burke ha Mikael O'Donnal (Iwerzhon).

D'ar sul d'abardaez e vo animatourien a raio war-dro ar vugale.

Standoù e-leizh a vo kavet war an dachenn gant peadra da zebriñ ha da evañ.

Pegsunoù " Pellgomz "

Embannet ez eus bet adarre pegsunoù skrlvet warno ar ger **Pellgomz**. Graet int bet da vezañ lakaet war al logelloù pellgomz bet savet ken stank war ar straed hag an hentoù abaoe daou pe dri bloaz. Un doare da lakaat hor yezh dirak daoulagad hor c'henvroiz ha da hadañ enno fiziañs enno o-unan hag e dazont hor personelezh.

Melen-orañjez eo liv ar paper ha du al lizherennoù ; 6,5 kantimetr uhelder dezho. Pevar real nevez eo priz ar pegsun. Ar re a garfe kaout anezho, skrivent da Oaled Sant Erwan, 28 straed Charles Berthelot, 29200 Brest. - Kas arc'hant dre chekenn. Lakaat 15 dre gant eus ar priz evit ar mizoù-kas.

235

Diskleriadur a Feiz Paol VI

Er bloavezh 1968 en doa ar Pab Paol VI lavaret un Diskleriadur a Feiz da geñver klozadur Bloavezh ar Feiz. Ennañ e veze adlavaret kreda an Iliz Katolik ha sklerijennet lodennoù anezhi a-benn sikour an dud a vremañ en o buhez ene. Lakaet e oa bet e brezhoneg an destenn latin-se gant Maodez Glanndour hag embannet e stumm niverenn 14 bis " Studi hag Ober ".

Un nebeut skouerennoù hepken a chome eus an Diskleriadur-se. Rak-se eo bet embannet a-nevez. Aet eo Paol VI davet an Aotrou Doue, ar Feiz avat a chom digemm hag e ziskleriadur a chom priziuz da vezañ studiet gant an dud a-unanoù pe a-stroll. Ur sikour da anaout gwelloc'h ar Wirionez.

Pevar real nevez eo priz ar Diskleriadur. Da gaout anezho, skrivañ ha kas

arc'hant da Oaled Sant Erwan, 28 straed Charles Berthelot, 29200 Brest. Lakaat pemzek dre gant eus ar priz evit ar mizoù-kas.
Kampoù hañv " Emglev an Tiegezhioù " gant

Kamp-hañv Emglev an Tiegezhioù

gant " Emglev Kristenion Breizh " 1980 "

Evel er bloavezhioù tremenet e vo kamp-hañv Emglev an Tiegezhioù e 1980 a-gevret gant devezhioù-studi Emglev Kristenion Breizh. E Kistinid (56), etre Ploue ha Baod, e vo eus ar 7 d'an 12 a viz Gouere.

Lojet e vo an dud e Ti Parrez Kistinid. Eno e vo ivez ar predoù. Diouzh ar mintin e vo studiet brezhoneg. Goude merenn e vo pourmenadennoù ha gweladennoù dre ar vro.

Priz an devezh a vo 20 lur. - Degas seier kousket pe pallennoù.

Digor eo ar c'hamp hag an devezhioù-studi-se d'ar vugale adalek 10 vloaz, d'an dud yaouank ha d'an dud vras. Ar vugale dindan 10 vloaz a c'hellont dont gant ma vint asambles gant un den karget anezho. Ar vugale hag an dud yaouank dindan oad ha n'o deus ket a gretadur skol a ranko kaout ur c'hretadur kevatal.

Brezhoneg hepken a ranker komz e-doug ar staj-se, rak-se eo ret kompren un tamm brezhoneg da vezañ gouest da gemer perzh ennañ. Ampletus kenañ e c'hell bezañ evit ar re o deus bet labouret a-zevri war hoy yezh abaoe bloaz pe ouzhpenn, hag ivez evel just , evit ar re a oar mat brezhoneg.

236

Evit lakaat e anv, skrivañ da :

- Youenn Olier, 7, boulevard Burloud, 35000 Rennes pe da
Aotrou Person Kistinid, Kistinid, 56310 Bubry. -

Gant spered an Iliz Katolik e vez lusket buhez ar staj-se.

Beaj da Iwerzhon

Kemenn a-berzh Kristenion-Vreizh :

Warlene ez amp aet, en tu all da Vro-C'hall, betek Roma kêrbenn ar Gristenion a bep bro hag a bep yezh, dre maz omp Kristenion e brezhoneg.

Da Iwerzhon, bro gristen ha keltiek, e fell deomp mont er bloaz-mañ, dre maz omp brezhonegerion gristen.

Evel e Roma e kavimp war heno " Enezenn ar Sent " roudoù Kristenion gentañ hor sevenadurezh hag e klaskimp skoulmañ darempredoù gant o diskennidi a vremañ, Katoliked Iwerzhon, meulet nevez zo gant HTS ar Pab evit o fealded d'ar Feiz.

E-giz warlene e vezo pep tra e brezhoneg, evelreizh, an Oferenn, Pedenn an Iliz, ar studioù, ar gweladennoù, an diduamantoù, ar predoù h.a. Un eizhtevezh e brezhoneg !

Loc'hañ a raimp diouzh Rosgo digwener 5 a viz Gwengolo da 11 eur noz, hag e teuimp en-dro da Rosgo disul 14, da eizh eur hanter diouzh ar beure. Kalz marc'hadmatoc'h eo ar veaj er mare-se : 604 lur eo ar mont-dont (720 en ur gambrig). Ne baeer ket evit ar c'hirri pa vez 4 den e pep hini.

War-dro 700 lur e kousto bod ha boued en Iwerzhon e-pad eizhtez.

Evit prientiñ pep tra hon eus ezhomm gouzout piv a zeuio ha piv a zeuio gant e garr. Aesoc'h e vo beajiñ gant hor c'hirri, dreist-holl ma vezont leuniet, - ha marc'hadmatoc'h e vo.

Skrivañ da Baol Kalvez, 1, skwar Oslo, 35100 Rennes.

Oaled Sant Erwan - Brest - e 1979

Gant ur pred eo kroget bloavezh ar Strollad. Pemp ha tregont bennak a dud a leinas asambles d'an 20 a viz Genver. Muioc'h a lufre a voe roet d'ar pred ar bloaz-mañ en abeg m'edod o lidañ, un nebeud mizioù kentoc'h, dekvet deiz-ha-bloaz Oaled Sant Erwan. E-pad ma oa an dud ouzh taol e voe kan ha diskan gant an dimezelled L'Hour ha meur a gouviad all. War-lerc'h merenn e voe un abadenn filmoù.

Ma tilamer an trimizvezh hañv, ez eo ur wech ar miz eo en em gavet asambles mignoned an Oaled ha brezhonegerien all evit abegoù sevenadur : div veilhadez vrezhonek gant kan ha koñchennoù, un abadenn vargodennoù evit ar vugale - en anv Emglev an Tiegezhioù - ha pemp kaozeadenn, plijus-tre an danvez anezho :

237

- a-zivout ar C'hanada, gant an Ao. Y. Miossec, diwar eñvorennoù e veaj er vro-se, un nebeud bloavezhioù a zo. Danvez a voe evit div gaozeadenn ; an hini gentañ gouestlet da reter ar vro, an eil d'ar c'hornog ;

- ur c'hendiviz gant Youenn Olier diwar-benn " Katoliged Breizh hag an Emsav ", graet e div abadenn : unan e-pad an endervezh, eben diouzh an noz ;

- ur gaozeadenn-gendiviz gant an Ao. Chaloni Mevelleg, rener " Bleun-Brug Feiz ha Breiz ", diwar-benn buhez hag abostoliezh an Tad Juluan Maner ;

- e dibenn ar bloaz, ar pempvet kaozeadenn gant an Ao. J. Y. Le Guillou, diwar-benn ar gerentiezh a zo etre ar brezhoneg hag ar yezhoù skandinavek.

Ouzhpenn, ez eus bet daou emvod-studi evit dibab penaos kas da benn labour an Oaled hervez he fal . « Katolik a spered, brezhonek a yezh ». Evel just, studi ar yezh eo ar pouezusañ. Kendalc'het ez eus eta gant kentelioù evit tud a bep oad hag a bep live ; tud o kregiñ gant ar yezh, lod all o tont barrekoc'h warni. Klask a reer ivez silañ un tamm brezhoneg er vuhez foran, dre voulañ liketennoù, warno gerioù ha frazennoù berr. Da skouer, ar pegsun « Pellgomz » a zo bet moulet anezhañ ur 600 skouerenn bennak, ha darn anezho a zo bet peget war al logoù pellgomz.

Evit pezh a sell ouzh ar yezh komzet, pe ditouroù a bep seurt, e vez dalc'het dor zigor gant brezhonegerien bep sizhun d'an devezhioù ha d'an eurioù merket da heul :

- bep lun : 17 eur 30 - 19 eur 30 ;
- bep meurzh : 18 eur - 20 eur ;
- bep merc'her : 10 eur - 12 eur ha 14 eur - 16 eur ;
- bep yaou : 17 eur 15 - 18 eur 15 ;
- bep gwener : 18 eur - 19 eur 30.

Kenderc'hel a ra an Oaled d'en em reiñ da anaout pe da zegas soñj outi dre ober bruderezh ken e Brest, ken en diavaez.

Traktoù a vez eta darnaouet alies e kêr, met ivez e kement lec'h ma vez ur gouel pe ur pardon : er Folgoad da geñver ar pemp sul, e Rumengol evit ar pardon bras (da sul an Dreinded), e marc'had Lesneven, da c'houel ar brezhoneg e Roc'h-Derrien, e gouel Landouzen hag e Foar Vikael e Brest. En holl degouezhioù-se, ez eus bet divizet gant an dud hag alies eo bet staliet dastumad levrioù an Oaled

ha gwerzhed d'ar vizitourien. A-hend-all ez eus bet ivez peget liketennoù e Brest, e Gwipavaz, e Plougastell, e Sant-Divi, er Faou hag e Landivizio. Daou ezel eus an Oaled a zo bet oc'h ober bizitoù bruderezh er P.A.C. (Palez an Arzoù hag ar Sevenadurezh) hag e ti lod eus ar genwerzhourien. Kejet he deus ivez an Oaled gant Strolladoù all a Vrest, er P.A.C., evit keneskemm ar palioù a laka anezho da vezañ.

War an dachenn gatolik, Oaled Sant Erwan a zegemer ur wech ar miz ar c'helc'h studi kristen, renet gant ur beleg, lec'h ma vez pedet ha kendivizet e brezhoneg a-zivout ar Skritur Sakr ha kudennoù an Iliz en amzer vremañ. Menegiñ a c'heller c'hoazh ar pezh kemeret gant tud eus an Oaled er pedennoù a vez ur wech ar miz, diouzh an noz, e chapel Sant-Paol ; e pirc'hirinaj Sant Erwan er Minic'hi hag e Landreger hag evit lod, en hini « Kristenion Breizh » e Roma e derou miz Gwengolo.

238

Anat eo, ne c'hell ket ur greizenn evel Oaled Sant Erwan chom dizeblant e-keñver kudennoù Mab-Den. He savboent he deus roet e daou zegouezhad. Da gentañ, pa 'z eo bet aozet ur vodadeg e miz Here evit gouzout penaos degemer repuidi Indez-Sina. D'an eil, pa 'z eo deuet dirak breujoù-Pariz ar c'houlz da vreutaat evit gouzout ha skarzhet, dalc'het pe gadarnaet e vije al lezenn Veil. A-gevret gant un dek strollad all he deus diskleriet groñs he Doujañs d'ar Vuhez hag hec'h enkrez e-keñver dazont ar ouenn, en ur gas, e-kerz un amheuliadeg d'ar Prefedti, ul lizher brezhonek da vezañ roet da Brezidant ar Republik.

Evit klozañ, n'eo ket didalvez marteze reiñ pe adreiñ ar chomlec'h :
28, straed Charles Berthelot, 29200 Brest.
Deuit d'hor gwelout. Degemer mat a vo graet deoc'h.

Deiz-ha-bloaz emgann Sant-Albin

Kemenn digant Emglev an Tiegezhioù - Roazhon :

492 bloavezh 'zo, d'an 28 a viz Gouere 1488, e voe stourmadeg vras war " Laneg an Erngann " e Sant-Albin-an-Hiliber.

Eno e klaskas ar Vretoned stankañ an hent ouzh lu ar C'hallaoued deut da aloubiñ hor bro ha da zispenn gwirioù hor pobl.

D'al lun 28 a viz Gouere, deiz Gouel Samzun, a-hed an endervezh e vo emgav e-tal Kroaz ar Vretoned.

Lidet e vo un oferenn-goun da 6 eur.

239

Kael 10

	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
I	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-
II	-	-	-	-	-	-	X	-	-	-
III	-	-	-	X	-	-	-	-	-	-
IV	-	-	-	-	-	-	-	-	X	-
V	-	-	-	-	X	-	-	-	-	-
VI	-	-	-	-	-	-	X	-	-	-
VII	-	-	-	X	-	-	-	-	-	-
VIII	-	-	X	-	-	-	X	-	-	-
IX	-	-	-	-	-	X	-	-	-	-
X	-	X	-	-	-	-	-	X	-	-

A-led : I. Ar Frañsizien e Breizh, ket ar frañskilhoned, siwazh ! - II. Pa vez renet ar rener ; Ho. - III. Ober a ray berzh an dro-mañ ; Hennezh en deus breou. - IV. Seizh a ya d'ober lost an arar. - V. Kent ar c'hentañ ; Dougen bragez (skritur K.L.T.). - VI. War-giz pe diouzh ar skrign ; Spoueenn disec'hed. - VII. En hini diwezhañ e vez graet hiziv ar re vrasañ ; Warnañ e ve mat huchal « Harz ar bleiz ! » - VIII. Eus ; Danvez diktatour ; Da glevout. -IX. Flammik a oa he fried ; Tonket e oa da vezañ keginer ha koulskoude e kavas e varv en ur Sandwich. - X. Ne dalv ket da zivroudañ ; Stagell.

A-serzh : 1. Kozh-douar eo avat. - 2. Paotred er pellwel hiziv. -3. Unan n'eo ket taget he mouezh ; Torr ; 4. E penn kentañ miz Ebrel ; Ret-mat e ve huchal « Tie ! Tie » war ar re-se ; Tra. -5. Diwar ; Emañ atav o klask mont tre daoust ma chom e dreid er-maez. - 6. Hennezh, ma ne ra ket stad gant e vicher !... - 7. Gantañ e teu Eost en diskar-amzer ; Arouez. - 8. Grit mar fell deoc'h dont a-benn eus honnezh a-raok an hini gentañ. - 9. Rabin ; Re ar vro ne flemmont ket. - 10. Daoust ma vez anvet du-mañ « Bro an Hanternoz » ha du-hont « Bro ar C'huzh-Heol », emañ er c'hreisteiz deomp.

GWALEREG.

DISKOULM D'AR GAEL Niv. 9 :

A-led : I. Parstrakal. - II. Enaouadur. - III. Oad-dimeziñ. - W. Toer ; Zouge. - V. Runek ; Lev. - VI. Aden ; A-bil. - VII. Magnez ; Ali. - VIII. Ad ; Ivinou. - IX. Nukleel ; Ur. - X. Troenniñ.

A-serzh : 1. Peotramant. - 2. Anaoudadur. - 3. Radeneg ; K.O. - 4. Sodrenn ; Le. - 5. Tui ; Eden. - 6. Ramz ; Azven. - 7. Adeo ; - 8. Kuzuliañ. - 9. Arigelloù. - 10. Nev ; Lure.

AL LIAMM 201

TAOLENN

Tarzh ar baourentez gant Y.-E. JARL	243
Kêr-Iz bloavezh daou vil gant Goulc'han KERVELLA	245
Leve ar paour gant Añjela DUVAL	257
Friza an Hanternoz a-rez ar mor diroll gant Jorj GWEGEN	276
Gwynfor Evans gant Per DENEZ	299
Al levrioù gant L. ANDOUARD	302
Avelioù-tro gant GORWENAL	305
Notennoù	307

Tarzh ar baourentez

En doullenn zu, e gwarez blin
 An onn, e klin
 Ar straed sioul,
 Dienez dreist, karantez aour
 Ul lochenn baour
 Dindan ar soul.

Korn-zigor kaer ha draf ha dor
 D'an avel vor
 Pa lusk ar chal.
 Ouzh rugenn rok ar galleg brein
 Ar voger vein
 Bepred hep brall.

En-dro d'an daol, bugale taer,
 O lagad sklaer
 'Vel glizh ar run,
 Ha Tad ha Mamm, beleion gwir
 O c'homzoù dir
 A furnezh leun.

An trevell ruz a liv o fenn
 War erv tenn
 An douar don.
 Ha c'hoarzh ar sent a lintr 'n o dremm
 Gant lugern lemm
 'Vel trid an donn.

- Aba pegeit e sellez, den
 Ouzh douar yen
 Da vuhezgelc'h ?
 E-doug da hent perak e kroz
 Teñvalder-noz
 Da spered spelc'h ?

244

- Ne glevez ket ar bedenn drec'h
 A bign d'an nec'h
 Eus traoñ an ti ?
 Ne welez ket ar sked hep dalc'h
 A red a-walc'h
 War mor o spi ?

- Gant frailh ar gaou, ez kalon kuzh
 Ar vallozh ruz
 Hag ar skorn put
 Az tenn bep deiz war hent an droug
 A sav gant foug
 E ganenn hud.

- Gwa c'hwi, â tud, a zo 'n ho kerz
 An arc'hant berzh
 Alc'houeziet kreñv !
 War oaled du, ti keiz ar paour
 Al luc'hed aour
 A lamm d'an Neñv.

Pe Zoue, pe Zoug, pe sklav, pe ner ;
Pe c'hoarzh, pe zaer ;
Pe sart, pe drist !
Rak tal ar bed, paourentez noazh
Kan dimp 'ta c'hoazh
Aviel Krist.

- A Paour, Te eo ar Beleg meur
A ginnig skleur
Da aberzh sioul
E skeud didrouz ha laouen pur
Karantez fur
Ul lochenn soul.

Ner : ozhac'h, mestr-tiegezh.
Rak tal ar bed : A-dal d'ar bed, ouzh tal ar bed.

Kêr-Iz bloavezh daou vil

pe

Milin an Ankou

1

Term a oa gant Gradlon, ar roue kozh, en e wele. Ne zeue ket ar c'houked dezhañ. Hag e troe hag e tistroe, hag e kamme e gorf kabac'h e-touez ar pluñv. Hag e kase ar c'holc'hed eus un tu d'ar gwele d'egile gant e dreid krommet gant ar remm. Tachadoù e veze re domm dezhañ ha tachadoù all ne bade gant ar yeniennsklas en e izili. Hogen n'eo ket gant ar boan-gorf ez edo e spered, gant ar boan-galon ne lavaran ket. Hag eñ er-maez eus e wele da vale dre ar palez.

Treuziñ a ra ar salioù anezhañ. Ouzh kement moger ez eus livadurioù o tiskouez Kêr-Iz e-kreiz he brud. Mil iliz ha c'hoazh mil all, savet o zourioù betek bolz an neñvoù, gronnet gant nouspet ti ha c'hoazh pet all ? Hep lavaret kant kastell ha kant maner. Ha c'hoazh nag a draoù all ! Serriñ a ra ar roue kozh e zaoulagad ha setu ma wel dirazañ, sklaer ha fraezh, straedoù ar Gêr Veur da zeiz ar pardon : kant mil gwaz ha merc'hed kemend-all, gwisket en o c'haerañ, uhel o ment, laouen o dremm, o kanañ a-bouez o fenn.

Evel-se e oa Kêr-Iz gwechall !

Mont a ra Gradlon er-maez eus e balez, harpet e gorf toc'hor ouzh ur pennbazzh derv. Goloet eo an oabl a goumoul du, o tec'het gant ar spont, kaset d'ar red gant an avelgornog, hag o kuzhat a-bep-eil al loar en he c'hann. Dre ma 'z a ar c'hozhziad emañ ar vrasañ mizer en-dro dezhañ : tiez kouezhet en o foull, mogerioù dismantret, labouradegoù dilezet, serret-kloz an norioù warno, drez ha linad o kreskiñ stank el liorzhoù hag o vougañ trevadoù treut ar parkeier gouez. Tasmantoù-tud, treut-gagn ha sec'h-korn, aet ar vuhez diouto, a zo o ruzañ gant mil boan a-hed ar c'hleuzioù. Ouzh meur a wezenn zisec'h ez eus korfoù marv oc'h hejañ gant an avel, gwigour ganto. Leun eo an noz a youc'hadennoù skrijus.

246

Mont a ra da ribl ar mor hag eno emañ ker bras all an dienez. Dont a ra dour en e zaoulagad hag e teu ur c'habran-skorn da waskañ e galon.

Evel-se emañ Kêr-Iz hirio !

2

Pa 'n em gav ar roue kozh e Kambr ar C'huzul, an deiz war-lerc'h vintin, emañ bodet eno e holl vinistred. Trouz ha prezeg a zo ganto. Ne davont ket pa zegouezh an Den-Bet-Meur. Ne savont ket diwar o c'hadorioù zoken. « N'eo deus tamm doujañs ebet ken ouzhin », eme ar Roue-Bet-Bras outañ e-unan, en ur azezañ. Ha kerkent setu ma krogont gantañ. Kerkent setu ma kouezh warnañ klemmou, rebechoù, tamalloù.

- Ne vez ket kavet gwerzh d'hon avaloù-douar na d'hor pesked ken, eme an hini kentañ.

- Kermarc'h eg en deus graet freuz-boutig. Kergoad zo bet lakaet foar war e stal. Setu pemp kant micherour lakaet er porzh, eme unan all.

- Hanter kant mil a dud a zo o klask labour ha tregont mil all o deus ranket mont da bell war-lerc'h o bara, a lavar an trede.

- Berr eo ar goulou ganeomp. Paotred an tir-eoul a laka keraouez warnañ

hep ehanañ. Prestik e vezo troc'het deomp.

- Ne vez ket kavet gwenneg ebet ken na vije toull. Klemm a ra ar bobl.

- Petra da ober, Aotrou Roue ?

Sevel a ra Gradlon e zivrec'h en aer, hep rannañ ger. Sevel a ra ar guzulieren en ur c'hrozmolat ha mont kuit. Stardañ gwashoc'h a ra an dorn-skorn war galon ar c'hozhiad. « Goude lein, emezañ, e vo ret din mont da gaout va mignon kozh.»

247

3

Pell amzer eo bet Gwennoll e-ser ar Roue Kozh o ren aferioù ar Vro. E gwirionez eo eñ eo a veze o c'houarn Kêr-Iz pa oa en he barr. Neuze n'he doa ar Gêr Veur nemet ul lezenn : hini Doue. Ha gant al lezenn-se e kave pep hini e lod, rak pep hini a oa merket dezhañ chom en e stad. Ar paour a chome paour, hogen ne oa ket c'hoantus. Ar pinvidik a oa pinvidik, faüus avat ne oa ket. Hag evel-se ez ae mat an traoù en-dro. Na war-raok na war-gil.

Goude se avat e oa bet kresket kêr, stankaet ar vicherourien diwar-goust ar gouerien. Deut oa neuze Marevezh ar C'hredennoù Nevez. Maoutet oa bet Levr Gwenn an Aviel gant Levr Ruz an Doueed Nevez. Ha pellaet ar bobl diouzh hent strizh ar Feiz evit mont da c'haloupat ha da fringal war hent ledan an DIFOULTRE-KAER. E-giz-se eo da vihanañ e komprene Gwennoll an traoù.

Lakaet oa bet an Den-Doue dilabour diouzh e vicher veleg. En em dennañ en doa graet en e di bihan, e diavaez-kêr. Ha bremañ e kase e amzer o studial hag o klask penaos krouiñ energiezh nevez da gemeret lec'h an eoul-douar.

- Aze emaout ?

- C'hwi eo, va Roue ! eme Gwennoll en ur zigeriñ an nor.

- Quomodo Vadis ? eme Gradlon e kerneveg kozh.

- Taolit ho pouez, aotrou Sir. Penaos emañ ar yec'hed ganeoc'h ?

- Moriturus te salutat. Pelec'h out en em gavet gant da enklaskoù ? N'ouzon ket mui war be du treiñ. Emaint holl war va c'hein !

- Ne da ket kaer va studioù war-raok, aotrou va Roue. Dic'hast... heu... freuzet eo bet askell va milin-avel gant ur barr-amzer en deiz all, evel ouzoc'h. Ha n'eo ket lavaret am befe arc'hant a-walc'h da gempenn anezhi. Ur miz 'zo n'eus bet banne heol ebet. Emañ va melezourioù o vergliñ, kemend-all a c'hlav a zo bet. Brein an amzer ! Boued dister a vez roet d'ar chatal hag e-se fall-put an teil diwarno. Sioul e chom ar mor, ne vez tamm kas ebet gant al lanv. Pelec'h a gav deoc'h e c'hellin-me kavout nerzh nevez ?

- Hast afo ! Ret eo !

- Gant resped deoc'h aotrou va Roue, c'hwi hoc'h-unan a zo da damall. Re hir amzer ho peus gortozet kent kregiñ gant an enklaskoù-se. Paket berr ez omp bremañ !

248

- Hast buan, en an' Doue ! Prestik emañ ar Voterezh, an dro-mañ omp graet !

- A zo kaeroc'h, Sir, graet gant unan eus ho tiegezh.

- Siwazh din ! Gant va merc'h Ahes. Piv a ouezo rann-galon un tad en deus

savet ur verc'h hag a sav a-enep dezhañ !

4

Ahes, merc'h ar Roue Gradlon, tan ar Politikerezh en he c'halon ! Ahes, pennehêrez e Palez ar roue kozh, moudounet ez-yaouank gant he zad. Mervel a reas he mamm en ur lakaat anezhi war ar bed. Gant mevelien a renk uhel e voe savet. Ar gelennerien wellañ a voe klasket er broioù pell da zont d'he deskiñ war an holl skiantoù hag e teuas da vezañ gouiziek-meurbet. An arzourien vrudetañ a voe degaset d'he barrekaat war al livañ, ar c'hanañ, ar c'hoari-sonerezh. Ar sportourien greñvañ a gentelias anezhi diwar-benn an embregerezh-korf, an neuñvial, ar sturiañ-bagoù hag ar blankenn-dre-lien. Pell diouzh ar bobl e voe savet, rak Rouanez a oa da vezañ.

Siwazh ! Kentañ fazi a reas he zad a voe he reiñ da vagañ d'ur vaouez bet paour. Hag evel-se ez eas laezh ar Bobl enni hep gouzout d'ar Roue Kozh. Gwashoc'h c'hoazh a voe an eil fazi a reas. E kêr villiget Pariz he c'hasas da beurechuiñ he studi ! Eno e tarempredas paotred ha merc'hed ar menozioù nevez, daonet ra vezint !

Diwar ar mare-se e teuas he fenn da vezañ troet gant soñjoù droch. Gwelet e veze e-ser ar bobl, o treiñ he fenn dezhi, en ur lavaret ne oa ket reizh ar vuhez a ranke ren dindan galloud ar Roue Gradlon. Hep ehanañ e veze sikan etrezi hag he zad a-zivout penaos gouarn ar Gêr Veur. Meur a wech e voe skandalet gant an Den-Bet-Bras hag ur wech bennak zoken e voe darbet d'hemañ mont e kounnar ruz. « Ac'hanta ! Emezañ. Penaos em eus me da savet ! Re vrav 'm eus graet dit pa savez a-enep din bremañ. Ma karfen bezañ kastizet ac'hanout ez-vihan e vijes bet reishoc'h bremañ ! ».

Bodet he deus Ahes en-dro dezhi an holl dud ha ne blij ket renerezh he zad dezho. Kas a ra ar stourmoù war-raok. E penn an dibunadegoù e vez gwelet, ur banniel-liv-ar-gwad ganti. Diwar al leurennoù e vez klevet o tistagañ prezegennoù entanet. Lavaret a ra d'ar vicherourien diskregiñ diouzh o labour. Lavaret a ra d'ar re baour chom hep paeañ o foucher. Bec'h o devez ar Pennoù Bras ganti.

249

N'eus nemet un dra kement a laka diaes he spered. Penaos an Diaoul kas al labouradegoù, an uzinoù hag ar friturioù en-dro, evit reiñ labour d'an dud ? An eoul-maen, emit-hu ? Re ger, daoust m'en deus ispiser Landerne savet kenwerzh gant Targazh an Iran. An heol, an avel hag al lanv, livirit-hu ? Hag-eñ n'eo ket aet hanter-sod Gwennoll gant ar c'hoarielloù-se ?

- A ! Salv ma teufe ur priñs yaouank da zegas deomp ur burzhud, a soñj merc'h ar Roue Kozh, en ur hirvoudiñ en he gwele diouzh an noz pa zeu ar plac'h yaouank romantek da c'hounid war ar stourmerez didruez.

5

Paouez a hirvoudiñ Ahes kaer, rak setu m'emañ erru da briñs yaouank dit ! Ur mintinvezh a viz C'hwevrer e voe gwelet o tont en e garroñs aour. En e raok ez oa ur c'harrad mevelien gwisket e du ha tokarnet. War e lerc'h e teue ur niver bras a girri karget leun-chouk. Eñ, en e sav-kaer e penn a-raok e garroñs, a oa gwenn-kann penn-kil-ha-troad. Hag e taole ur sklerijenn splann-meurbet en-dro dezhañ. Mont a rae ar c'hirri d'ar pevarlamm-ruz. Ne oa loen ebet ouzh o streniañ. Ne zeue tamm trouz na moked diouto. Ken e chomas mantret an dud a oa o sellet.

Pa zegouezhas e Kêr-Iz e c'houlennas bezañ kaset davet ar Roue Kozh. « Me zo mab da roue Bro-C'hall, emezañ, ha ganin-me ez eus pinvidigezhioù e-leizh. » Degemeret e voe gant Gradlon. D'hemañ e roas an Den-Gwenn mil ha mil tra prizius-kenañ. Un dra all a roas dezhañ ouzhpenn hag a oa dreist d'ar re all : ur Goulou-hep-tan. Hag e-se e voe gounezet kalon ar c'hozhiad gantañ.

Da c'houde-se e tiskennas e kêr. D'hemañ-hen e roas un aotenn, d'houmañ-hen ur valerez-kafe ; d'ar bugel-mañ ur c'hoariell, d'ar c'houer-hont ur c'horoerez, d'ar micherour-mañ un heskenn, d'ar bezhinaer-hont ur skrabidoù. Da bep hini e roas un dra bennak nevez-flamm hag a oa ouzhpenn e c'hoant. Hag an holl draoù-se a oa TREDAN. Ken e voe gounezet kalon ar Bobl gantañ.

250

Prenañ a reas kaerañ Kastell Kêr-Iz, a-wel d'an holl. E ginklañ a reas gant a-bep-seurt traoù kaer. A-benn an noz e voe sklerijennet ar c'hastell-se. Gouleier ruz, glas, melen, gwenn a oa en-istribilh ouzh kement skourr. Goulou a oa ouzh kement preneustr. Goulaoù a bep tu, troet war-zu an neñv ha war-zu al lennoù hag al letonennoù. Eus ar stêrioù e strinke goulou, eus ar stivelloù e flistre goulou. Ar gwez hag ar reier a oa goulou-holl. Hag ar goulou-se ne oa ket goulou-lutig, ne oa ket goulou-tantad-keuneud, na goulou ar C'heler-Noz. Tra 'vat ! Goulou-TREDAN e oa ar goulou-se !

Buan ez eas ar brud eus an Den-Gwenn a-dreuz ar Vro. Kement den a renk uhel a c'hoantaas e welet. Eñ o degemeras. Lavaret a reas dezho e vrasefe o finvidigezh hag e voe gounezet o c'halon. An dud-e-karg a zeuas d'e gaout goude-se. Touiñ a reas dezho e kreskfe o galloud hag ez ejont d'ar gêr fouge enno. Neuze ez eas war-zu ar Bobl o lavaret e rofe dezhi arc'hant hag aesamant. Ha laouenaet e voe ar bobl.

Ouzhpenn kalon ar re vihan hag ar re vras a c'hounezas. Enebourien ar Roue Gradlon a blijas komzoù an Den-Estren dezho. Ha dreist da bep hini e plijas an Estrañjour da Ahes. Rak lavaret a reas dezhi e vije dalc'het ar yaouankizoù er vro, roet labour dezho, kresket o fae hag aesaet o buhez.

Ober a rafe kement-se ma sikourfent anezhañ da sevel ur Vilin Vras war ribl ar mor. Hag ar Vilin-se ne vije nag ur vilin-zour nag ur vilin-avel ! Ya a lavaras an holl, hep termal na soñjal.

Evel-se eo e teuas an Den Atomek er vro !

6

Keloù a voe kaset da Wennoll eus kement tra nevez, a oa o paouez en em gavout e Kêr-Iz. « Un aotrou Gwenn Kann... Ur Vilin Vras... Ar Goulou Tredan... » Treiñ a rae ar gerioù-se en e benn, hag eñ trubuilhet hep gouzout perak. A-greiz-holl e teuas da gompren pep tra hag eñ kerkent da gavout ar Roue Kozh.

En ur friko bras emañ Gradlon. Ur friko bras aozet gant an Den-Estren. Eno ouzh taol emañ holl binvidien ar gêr Veur. Eno ivez Ahes hag he strollad. Iskis eo gwelet ar re en em zrailhe n'eus ket keit-se c'hoazh o rannañ ar baraig asambles bremañ. Hogen ouzhpenn baraig a zo war an daol, anat deoc'h !

251

A-vec'h deuet an Den-Doue er sal setu ma tarzh ar goaperezh hag ar c'hoarzhadennoù. « Sell 'ta piv ! - Erru paotr e vilin-avel - Echu 'peus c'hoari, va faotrig », hag all... Ruziañ ra ar Roue Kozh o welet e vignon feal goapaet en un doare ker gros.

Aet eo Gwennoll war-eeun etrezek an Estrañjour. Erruet stok outañ e krog ennañ en ur lavaret kement-mañ : « Tud Kêr-Iz. Aet eo ho taoulagad dall gant ar sklerijenn taolet gant an Den-mañ hag gant ar pinvidigezhioù en deus roet deoc'h. Ne weloc'h ket mui pe zoare en deus : me lavar deoc'h, tort ha kamm eo, ruz-tan eo e zaoulagad, debret eo e groc'hen gant ar c'hleñved hag ouzh pep dorn en deus ouzhpenn pemp biz ! E vilin vras ! Ur vilin da zrailhañ tud an hini eo. Milin an Ankoù a ran me anezhi. » Mut eo pep den endra ma'z a er-maez eus ar sal. Prestik goude-se avat e krog ar cholivari en-dro e sal ar friko, kaset en-dro gant an Estren.

Dre gêr ha dre ar maeziou en em daol Gwennoll da zastum en-dro dezhañ e vignoned feal. Un nebeud dervezhioù warlerc'h ez int ur c'hant bennak, tud kadarn ha kalonek, prest da stourm ouzh Milin-an-Ankou. Kas a ra Gwennoll anezho etrezek Feunteun-Aod el lec'h m'emaer krog da sevel ar Vilin Nevez. Lakaet en deus seizenn-ar-vro en-dro d'e gof da ziskouez eo un den e karg eo a zo e penn an emsav, ha n'eo ket un-n'eus-forzh-piv. Nijellat a ra e vlev louet en-dro d'e dal roufennet-holl, luc'hiañ ra e zaoulagad dir en e benn. Eus ar vandenn a gas da benn stourm diwezhañ ar bed dieub e sav ur c'han a lavar o youl da chom tud digabestr en ur vro digailhar...

« ... Kentoc'h ni a varvo... kentoc'h ni a varvo ! »

Dirak ar chanter emañ mevelien tokarnet mab Roue Bro-C'hall o c'hortoz anezho. Tufañ ra ar pezhioù-kanol o boledoù-tan war ar Vretoned kalonek. Bale a reont atav, sonn o fenn, endra ma kouezh lod anezho. Berr e pad an emgann. Petra 'c'hell ur c'han ouzh an tan ! Kavout a ra Gwennoll repu e koadoù ar menez a-zioc'h ar Gêr Vras.

Ac'hano e wel al labourioù o tistrujañ e vro. Meur a zervezh ha meur a nozvezh e toull, kleuz ha faout an tourterien. Meur a viz e labour ar vañsonerien hag ar galvizien. Tamm-ha-tamm e tiwan ar vilin hag e sav uheloc'h-uhelañ he lein da bakañ koumoul an oabl. Diouzh un tu anezhi e lakaer korzennoù tev-souezhus betek an donvor. Diouzh an tu all ec'h istribilher orjalenoù hir-mantrus ouzh peulioù uhel-skrijus etrezek kêrbenn Bro-C'hall.

252

- Siwazn deomp, eme Gwennoll diwar gern ar menez : diouzh un tu al loustoni flaerius taolet e Mor-Breizh ; diouzh an tu all ar gwad nevez kaset da Bariz dre ar stagell vras, da vouetañ o Roue Laer, hag e-kreiz ar beg douar-mañ ar Gaoter daonet-se o virviñ, e-giz ur C'hriagn Bev Ramzel, o kinnig tarzhañ hep ehanañ.

En-dro d'ar Gaoter-se e savas labouradegoù, tiez ha manerioù e-leizh. Brasoc'h ha flammoc'h oa ar gêr Nevez eget Kêr-Iz kozh. Ene ha spered n'he doa ket avat. E dir ha betoñs edo, traoñ-ha-krec'h. Ar souezhusañ tra a oa er gêr nevez a oa Moger ar Vilin. Ker ledan ha ken uhel ne oa bet gwelet biskoazh ha graet oa-hi en un danvez dianav d'an holl. Lavaret a veze ouzh he gwelet ne c'hellfe biken na diaoul na Doue dont a-benn diouti.

Pa voe peurechu Kêr-Iz-Daou-Vil, hennezh oa he anv, e pedas an Den-Gwenn ar Bobl a-bezh d'ur gouel bras.

7

Aet eo an heol da guzh. Bez' e c'hell mont da gousket 'vat ! Un heol all, kalz splannoc'h ha flammoc'h a zo savet da sklerijennañ an tonnoù, ar c'herreg, an tevennoù hag ar Gêr Vras. Heol an Den Atomek ez eo.

Emañ an Den-Gwenn, e bourzh ul lestr-teir-gwern, e-kreiz ar pleg-mor, o ren ar C'hoari Bras. Ul lestr-dre-lien, livirit-hu ? Ne deo ar gouelioù anezhañ nemet faltazi, rak mont a ra al lestr-se war-raok dre vertuz an Nerzh Atomek, meulet ra vezo !

Nag ez oc'h disliv, stered an oabl, e-keñver ar goulou-se ! Ha te, loar, bet Rouanez an Noz, na dister ar skleur a daolez ! Setu ma laka an Den Atomek al listri da redek war melezour an dour, setu m'o laka d'en em gannañ. Setu ma laka sonerezh da strinkañ eus strad ar mor, setu ma laka pesked liesliv da zañsal war an houlennoù. Setu ma ra d'an oabl pokat d'an douar e Koroll Meur ar Bed Douarel trec'h war nerzh kuzh an Doueed Kozh.

253

Dirollañ a ra ar Bobl : he Mestr Nevez he deus kavet. Birviñ ra gwad Ahes en he holl wazied. Goulenn a ra bezañ kaset war-zu an Den-hont. Gant ur vagig

skañv ez a. Degouezhet stok ouzh al lestr e sav en e vourzh dre ur skeul-gerdin. Noazh dibitilh eo bremañ. Un dudi eo gwelet he c'horf stummet Laer, he divronn reut ha beget lemm, he divorzhed flour digor bras d'an Den-Estrañjour. En em reiñ a ra dezhañ ha diouzh an daou gorf skoulmet start e tiwan hag e tarzha brasañ orged brasañ stokad a blijadur bet a-viskoazh war zouar Bro-Gerne. Tridal a ra Ahes penn-kil-ha-troad, rak an den-se etre he divesker a zo Tredan.

Mezh en deus Gradlon, ar Roue Kozh, o welet e verc'h o ren ebatou noz dirak daoulagad an holl. Ha plijadur zo ennañ mesket gant ar vezh, rak en ur ober stad an Den Atomek, e sav a-du gant he zad, a-benn ar fin !

En noz-se e voe ar spontusañ diroll a voe bet biskoazh e Kêr-Iz. Bro-Gerne bet merc'h henañ an Iliz ur poent zo bet a yeas azalek an noz-se da heul an diaoul. Neuze e voe gwelet ar merc'hedigoù o koll o fleurenn. Gwelet e voe koubladoù paotred ha koubladoù merc'hed o kas an diroll d'e benn. Ar re gozh hag ar re yaouank ne oa harz ebet dezho. Ar re glañv hag ar re nammet zoken a gavas o lod. Strinkañ a reas an Orged hag ar Blijadur 'pad an noz ha 'pad an deiz war-lerc'h. Ha ma ve bet deut Gwennoll, an Den-Doue, da vale dre eno, sur e vije bet tomm d'e ler ivez.

8

Er penn-kentañ eus ar Prantad Nevez e teuas da wir ar pezh en devoa an Den Atomek lavaret. Labouradegoù e-leizh a voe digoret en-dro d'ar Gaoter Veur. Kavout a reas ar re yaouank labour enno. Er porzh nevesaet e paotas ar bagoù hag al listri a rae kenwerzh gant holl vroioù pinvidik ar bed. Da heul al lusk-se e kouezhas arc'hant a-vern e koufroù ha godelloù Kêr-Iz. Ne baouez ket mui al labour d'an dud hag amzer forzh pegement a veze laosket ganto d'en em reiñ d'ar plijadurezhioù ha d'an diduamantoù.

Tamm-ha-tamm avat e teuas kleñvedoù e-touez an dud. Kleñvedoù iskis ne ouie ar vedisined anv ebet dezho na louzoù diouto. Gwelet e veze bugale stummet en un doare skrijus o c'henel, hemañ-hen gant ul lagad hepken, e-kreiz e dal, henezh-hen gant teir brec'h ouzh e gorf. Meur a hini anezho a varve yaouankik-flamm, en ur goll o gwad pe gant un derzhienn-diremed. N'oa ket ral gwelet tud gouest e-kreiz o brud o tizeriañ war o zreid, den ne ouie perak.

254

A-nebeudoù ivez e teuas kemm en ardremez hag en natur en-dro da Ger-Iz. Mont a reas an tali, ar bezhin hag ar pioka da get diwar aodoù Kerne, debret gant ul louzaouenn-vor gwadok ha glaourennok dianav a zeuas da c'holeiñ pep tra. Ne c'helle den ebet ken mont en aod gant aon da goll un tamm eus e gorf, lonket gant an Debrerezh-kig-se. Paotred ha merc'hed o zeir-brec'h hag o femp-gar o doa tammoù da goll, leveroc'h-c'hwil ! Ar pesked hag ar c'hranked a oa un euzh sellet outo hag un doñjer tañva o c'hig brein. An dour-eien a oa blaz heugus gantañ. Al legumaj a oa difenn debriñ anezho.

Goude re gorfad edo liv ar c'hagn war Ger-Iz. Kendalc'her a rae memestra ar Vilin Vras da dreiñ, da daoler he stêriadoù dour zomm er mor hag he moked tev en oabl. Ken alies ha bemdez e teue karradoù iskis d'he bouetañ.

9

Un dervezh a viz Mezheven e voe klevet ur c'hwitelladenn skiltrus o tont eus Kaoter an Ankou. Ha trouz ebet ken. Kemennet e voe ouzh an dud chom kloz en o zi, hep dont er-maez. Meur a zervezh e chomas ar vilin a-sav. Hag en-dro adarre. Petra oa c'hoarvezet ? Den ne ouezas. Ur pennad goude se e voe kemennet adarre d'an dud chom serr en o c'hêr. Hiroc'h amzer e padas an ehan-labour. Pa zeujont er-maez eus o zoull e oa gwall gemmet an natur en-dro dezho. Suilhet oa pep tra, c'hwez an dev gant an aer. Ur frapad all war-lerc'h e voe kaset an holl dud e-pad ur miz pell eus Ker-Iz. Lavaret e voe dezho e oa abalamour ma oa labourioù bras d'ober er Vilin. Anat oa bremañ an enkrezh hag an anken war zremm

ar re yaouank koulz ha war hini ar re gozh. Den avat ne c'helle stourm nag enebañ, stag ma oa kement hini anezho ouzh ar Gaoter Veur gant Ere an Ezhomm.

Deo ! Un den c'hoarzh, un den hepken, a grede enebañ. Gwennoll an hini oa. Pa 'z ae da gaout an dud e kave dor prenn ha kalon serr. Pa 'z ae da gaout Gradlon e veze respontet dezhañ : « C'hwi, Tud a Iliz, a zo bet atav a-enep an Araokaat evit gallout dalc'her ar bobl dindan gazelge ». En ul levenez bras-meurbet edo ar Roue Kozh rak ne ouie doare eus an traoù nemet dre-berzh an Den Atomek. Ha gant hemañ ne veze nemet gerioù e-giz Pinvidigezh, Surentez, Diboan, Plijadur...

255

Ahes, a c'houlennoc'h ? Ren a ra Ahes ur vuhez dibreder gant an Den Atomek. En ur palez hobregonet, dindan an douar, emaint o chom, pell diouzh saotrezh ar bed. Kant mevel mut a zo en o servij. Biskoazh n'eo bet brasoc'h o finvidigezh na kreñvoc'h o galloud. Gouarn a reont ur vro ec'hon meurbet, kant mil mevel sentus o lakaat an urzh da ren. Den ebet ne c'hell mont el lec'h ma kar. N'eus den ebet ken mestr war e vuhez. Hag e daoulagad an holl emañ an dic'hoanag didermen.

10

Un nozvezh a viz Gwengolo e teuas Gwennoll d'ar red da gaout Gradlon. Berr e alan, spouron en e zaoulagad. « Va Roue ! Fin zo da gêr-Iz. O tont eus ar Vilin emañ. Faout eo ar voger anezhi. Eus an traoñ betek an nec'h. Moked flaerius a zeu er-maez diouti. Ha dour kontammet dre gement frailh. Birviñ ra gwashoc'h-gwazh. 'Mañ-hi 'vont da darzhañ hep dale. Ret eo tec'hout ! » Hag eñ ha sammañ ar roue kozh war e varc'h ha kuit d'ar pevarlamm ruz.

Bouderezh ponner zo en aer. Tommder iskis ha mougus. Emañ marc'h Gwennoll e dorioù ker pa tarz ar Gaoter. Tarzh kurun ha luc'hed tan. Un trouz spontus. Un trouz braouac'hus. Ur sklerijenn drellus. Ken ma faout an douar betek e greiz ; ken ma rog an oabl penn-da-benn en-dro d'ar bed ; ken ma sav ar mor en ur menez dour da doullañ an neñv.

Dihunet eo ar Roue Kabac'h. Emañ ar bobl pennfollet o redek e-kreiz an tousmac'h, krog an tan enno. « Ahes, va merc'hig, » eme ar roue kozh, en ur sevel anezhi war ar marc'h. Dirollañ ra ar mor e-kreiz an tangwall. Strinkañ ra an tonnoù spoumus ouzh seulioù ar marc'h ; pignat ra an dour buan, betek kof al loen. Strobotiñ ra ; n'eus ken e benn er-maez eus an dour bremañ. « En an' Doue, eme Gwennoll, taolit ho merc'h d'an traoñ ! » - Hogen stardañ muioc'h ' ra Gradlon e verc'h karet etre e zivrec'h. Emaint o vont da vezañ beuzet o-zri. Hag an Den Doue neuze ha bountañ Ahes en dour gant un taol bazh. Kerkent e chom ar mor en e sav. Sioulaat a ra an houlennoù tamm-ha-tamm. Tevel a ra ar c'hurun. Mervel a ra an tangwall.

Diwar lein ar menez m'int krapet warnañ e sell an daou zen ouzh ar pezh eo bet Kêr-Iz. Dour a zo en o c'halon. Kollet en deus Gradlon e verc'h ha Gwennoll en deus kollet pep tra. Dindano emañ ar mor brav ha sioul. Eus lorc'h ha fouge Kêr-Iz, roud ebet ken.

256

11

Ur pennad amzer goude liñvadenn Kêr-Iz, ez eus ul lestr-samm o tremen er-maez eus Beg ar Raz. E anv zo Moko pe Tonio. Sioul eo an noz. Kousket eo ar vartoloded. N'eus nemet ar c'habiten a vije war-sav. Harpet eo ouzh bardell al lestr o sellet ouzh an oabl steredennet. Soñjal a ra en e vaouez a gavo e penn ar veaj. Klevet a ra ur chan dudius o tont eus strad ar mor. Kreskiñ ra ar c'han hag e teu da skeiñ e galon. Birviñ ra e wad. Gervel ra ar mor anezhañ. N'hell mui padout. Splujañ ra war e benn en dour, ha mont da gaout, er goueled, un dra iskis, maouez an nec'h, lost pesk an traoñ hag he blev zo tali moan. Kerkent ha ma stok outi sachet gant nerzh diharz ar garantez e varv, rak an dra se a zo

tredan. Endra ma ya e lestr da goll war gerreg an aod.

Evel-se eo e kendalc'h Ahes, merc'h ar roue Gradlon, da gas he zorfedoù da benn en ur skuilhañ war hor bro ar marv du.

ECHU

Leve ar paour

« Ur vazh baleet mat
A dalvez kant skoed leve... »

Ur c'hrenn-lavar kozh eo hemañ. Pegen kozh ? N'oufen ket lavarout ; met ar pezh a ouzon, bet zo un amzer, tremen kant vloaz ' zo abaoe, emichañs e oa a-walc'h kant skoed da vevañ e-pad ar bloaz. Da vevañ sich, se zo sklaer, ha n'eo ket evel ur mondian.

D'ar mare-se, un devezhour a oa e briz dek gweneg bemdez hag e voued. M'en deveze gwreg ha bugale er gêr sur a-walc'h ne veze ket druz ar peuriñ gante bemdez, rak, n'oa sikour ebet a-berzh ar Stad da sikour sevel ar vugale.

Ul lodenn eus an devezhourien o doa un tamm douar war o c'hont o-unan, ur vuoc'h, daou bemoc'h pe un nebeud deñved, ur yar bennak. Lakat a raent un tamm ed, un tamm ed du, patatez, irvin ha piz ha fav.

Lod all n'o devoa nemet un netraig a liorz, neuze, o gwreg oa stammerez pe nezerez pe kannerez ma ne oa ket re garget a vugale.

Siwazh ! mareadoù amzer zo bet ne oa ket a labour d'an holl ; pe, mar boa labour, ne oa ket arc'hant e-mesk an dud da c'hallout paeañ tud d'o sikour. Neuze en em gave meur a hini rediet da vont en-dro da glask, pe vervel gant an naon.

Ar re gozh oa se o lod ma ne vezent mui gouest d'ober o lod, den ne c'houlenne ar frot oute. Nemet en un ti pinvidik bennak ma veze miret ar servijerien gozh da vervel evel unan eus izili an tiegezh.

A-hend-all, ne oa retred ebet. Ne oa nemet bolontez vat ar re o doa un tamm moien, met, evel ma vez laret : « Truez zo berr da vevañ ». Ha bez' oa e-touez ar beorien meur a hini ha na blegent ket da astenn o dorn. Ar beorien vezhus. Tud hag o dije bet un draig bennak war o c'hont, ha kouezhet e renk ar beorien dre wallchañsoù, kleñvedoù, darvoudoù a bep seurt.

258

Ar re-se o doa mizer, dreist-holl m'o devoa un namm bennak a vire oute da labourat.

Mont a raent, da skouer, da birc'hirinañ pell ha tost evit tud all pe, gant tud all hag o dije prometet ur veaj a zevosion da Sant-mañ-Sant pe Santez, pe un Itron Varia.

Anavezet 'm eus ouzhpenn unan hag a veze alies-alies e roud, un tamm a-dreuz hag a-hed ar Vro, o pirc'hirinañ. Lojañ 'raent war o roud pa veze re bell ar veaj da vezañ graet mont-dont en un devezh. (Meur a Varc'harid Fulup oa e Breizh, sur mat.)

Kefridioù all veze dezho ivez dre zroed. Mont da zegemenn ar marv pa veze ur marv er c'hontre.

Mont da glask tud da zougen ar c'horf, ar c'hurunennoù, ar flammeozoù a veze war gont ar paour a zaremprede ar peurvuiañ ti an hini marv.

Ar grasoù 'veze koulz all war gont ur paour pe baourez eus ar barrez, ha, end-eeun, eus ar seksion pa veze tu.

Seniñ ar glaz e chapel ar seksion 'veze roll ur paour, atav e veze sonet glaz e-pad ma veze an hini marv war ar varv-skaoñ, teir gwech bemdez.

Evit obidoù an dud a renk, 'veze roet karitez d'ar beorien goude an interamant, an eizhvet, an deiz-ha-bloaz.

Ur roll a oa er maerdi eus ar beorien o doa ar gwir da gaout karitez. Un nebeud gwenneien da bep hini, hervez an ezhomm ha niver ar vugale pe ar re gozh dic'houest da c'hounid. Ar roll-se oa dres roll ar bara. Bez' e oa ur roll all neuze evit an dud hag a roe bara.

Ur « bara » oa ur gont a ed-bara da reiñ bep miz d'ar paour designet da bep roer.

Ur wech ar bloaz 'veze ur C'huzul Kumun ispisial evit plasamant ar beorien ; rak bep bloaz 'veze kemm pe gemm : marv ar roer, marv an degemerer, pe aet er-maez a oad. Pa veze krog ar vugale da labourat n'o deveze ket o zud a vara ken evite.

Pep roer a ginnige hervez e voien hag e volontez vat. Darn ur bara, darn daou, darn un hanter-bara. Hag evit ar beorien oa memestra. Lod o doa daou pe dri bara, pe unan, pe un hanter-hini, hervez o ezhommoù.

Va zad-kozh, Jan-Mai 'n Olier, oa kuzulier, ha, hervez ma lavare eo kudenn ar bara-se a oa an hini diaesañ da zibuniñ, ne oa tu ebet da gontantiñ an holl.

259

Bez' oa tud hag a zalc'he renk. En o enor oa ret dezhe reiñ bara, met lod anezhe oa ken paour prest a-walc'h hag ar beorien war ar bara.

Bez' oa peorien hag a oa madik o jeu dre ma ouient sachañ dour d'o milin, met evel ma n'o devoa tra war o anv, ha na baeent tailhoù ebet e faote dezho bezañ dalc'het war « roll ar bara ».

Amañ - etre klochedoù - e fell din reiñ un alberz eus spered balc'h ur c'hemener. Karget e oa a vugale, 7 pe 8, ouzhpenn, ur vamm-gozh o ruzañ he c'hozhni er vizer. Ar wreg, gant kement a vugale ne c'helle ket mont da c'hounit. Bez' oa eta « war ar bara », un daou pe dri bara zoken. Ma, setu, anezhañ e-unan, ar c'hemener balc'h-se, ha kalonek, oa deut d'ar maerdi da lavarout disverkañ anezhañ diwar ar roll, a-dal ma oa kroget e vab henañ da vont d'e heul da wriat d'an tiez. « Unan nebeutoc'h da vevañ er gêr, » emezañ, « bevet eo d'am heul hag un tamm gwerzh-butun a dap ivez, a-walc'h da vagañ unan eus ar re vihan er gêr... ». N'eo ket en hon amzer a gejer bemdez gant seurt speredoù !

Kontantiñ an holl oa dreist galloud ar re oa karget eus al labour-se, dreist-holl, pa oa karget eus ar c'hefridi-se tud anavezet evit bezañ tud a-feson da laret eo tud leal.

Lod eus ar beorien a glemme eus ar profer, marteze gant abeg a-wechoù. N'o dije, emezo, nemet pailhorou-eost, hañvaloc'h eus boued-moc'h eget eus gwinizh-bara. Lod all a oa c'hoantus betek re, ordinal o chinañ, n'eo ket marteze hep ezhomm, rak diouer o devoa eus kalz a draoù emichañs. Ar profer neuze a c'houlenne ma vije kemmet paour dezhañ.

Klevet em eus mamm o lavarout e ranke alies ar guzulieren karget eus ar plasamant mirout evite o-unan ar beorien gasaüsañ, ar re ne c'houlenne den all ar frot oute.

E-touez ar beorien « war ar bara » oa hiniennoù gouest da labourat tamm pe damm, hag ar re o doa bolontez vat a rae un devezh eost pe ouzhpenn e ti an hini a roe dezhe ar bara-se, ha deiz an dornañ, holl beorien ar c'hontre a zeue da 'n em ginnig da sikour. Un tamm boued mat hag un nebeud gwerzh-butun a dapent, ur

sac'had pell ma veze da ziouerout, ur bec'h plouz da blouzañ o botoù-koad e-pad ar goañv.

E miz Mae, miz Mezheven, pa veze darev an had-lann, 'veze kalz a beorien o hadlannañ. Ul labour pitouilh a-walc'h oa hennezh, ha meur a c'horadenn 'veze tapet war-lerc'h ar pikadennoù, rak lemm eo drein al lann. Ur c'hrog 'veze da sachañ war ar bod ma veze re uhel, ar pogoù a lakent en o davanjer troñset. Dañjerus oa c'hoazh en askont d'an naered stank el lannegi hag er c'hleuzioù goloet a lann.

260

Ar pogoù 'veze ledet da sec'hañ en heol war ur serpilherenn, ha goloet gant ur serpilherenn all rak strinkañ a rae an had pell-mat pa strakent gant tommder an heol.

Ker 'veze gwerzhet an had lann ha disamm oa atav. Al lann-pil oa un hanter eus boued ar c'hezeg e-pad ar goañv, hag evel ma veze troc'het bep daou vloaz, hag a-wechoù er bloaz pa veze berr ar boued na bade ket gwall bell ar c'hefioù, ha ret oa adober an douar a-nevez ur wech an amzer.

Pa veze brav an amzer da hadlannañ ne oa ket ezhomm avat da vont da glask devezhour na devezhourez d'ober foenn. Kalz muioc'h a c'hounezent 'n o devezh o tastum had-lann.

Gwashañ tra 'vit ar paour oa pourvez danvez-tan a-benn ar goañv m'en doa un tamm ti. N'eo ket atav en dije lojeiz da glenkañ ar c'heuneud-sec'h hag ar c'hozh-koad a serrent bec'h ha bec'h er c'hoadoù tro-war-dro. Pa veze bet un nozvezh avelaj, torret skourroù sec'h ar gwez o dije mall da vont d'o dastum.

Pa veze ar c'houlz divarrañ ha fagodiñ keuneud 'veze lezet a-ratozh gant ar beorien ar briñsoù sec'h. E-lec'h ma veze gwelet kalz a goad sec'h, chomet da vreinañ a-stlabez war an douaroù 'veze laret : « Amañ avat, er vro-mañ 'zo peorien didalvez ! ».

E-pad an hañv, pardonioù ar chapelioù-kampagn oa darempredet gant kalz a dud. Tantad e noz derc'hent ar pardon, oferenoù mintin abred evit ar belerined, oferenn-bred war an ton bras ha gousperoù gant prosesion goude kreisteiz, diduamantoù evit ar yaouankiz, hag alies c'hoarioù a bep seurt an deiz war-lerc'h : an adpardon evel just.

En-dro d'ar chapelioù-se ha d'o feunteunioù burzhudus 'n em vode peorien ar c'hontre, gwechoù end-eeun o tont a-bell. Me 'gred e raent devezhioù mat, ar re da vihanañ a ouie ar vicher : ar re 'n em stalie e toull dor ar chapel veze diskabell, o chapeled en un dorn, ur skudell en dorn all. Kement hini a dremene o tont pe o vont er chapel a gleve ur goulenn truezus : « Ur gweneg d'ar paour ! » pe « Truez ouzh ar paour. En anv 'n Aotrou Krist binniget ! » hag all... War-dro ar feunteun, klozet peurvuiañ gant ur vogerenn, un ode pe ur skalierig da dostaat, e veze peorien ivez, prest da gargañ deoc'h bured pe voutailh pe ur skudellad da evañ war blas. An dour oa evit netra, met ur saflik hag ur vouilhenn 'n em gave tro-dro, dre fotañ bannac'hoù ha pasepiañ war an douar mouest. Ar bardonerien en o dilhad ha botoù ler da sul oa gwelloc'h ganto reiñ daou wenneg pe pemp gweneg d'ar paour, ha bezañ servijet war ar sec'h, dreist ar skalier pe ar vogerig.

261

Ar memes tud a wele unan bep bloaz oc'h ober al labour-se. Tud paour eus ar c'hontre.

Evit an euredoù, ar badeziantoù 'veze ivez meur a baour e toull ar porched o c'hortoz ur pezh moneiz bennak da vezañ stlapet en arigrap d'ar vugale ha roet en o dorn d'ar re gozh.

War-lerc'h ar marv, dilhad an hini tremenet 'veze roet ar peurliesañ d'ar beorien, nemet pa veze ezhommek ar familh o implijent o-unan, se zo sklaer.

An arc'hant a chañs : se oa ur pezh moneiz, pe arc'hant ivez ma veze bras ar somm, a veze roet da vont da heul ul loen gwerzhet. An arc'hant a chañs oa d'ober aluzen d'ar beorien, oa ket chañsus prenañ traoù gantañ, na lakat anezhañ gant an arc'hant-all. Lod ar paour oa. Darn eus ar varc'hadourien a chome gante meur a damm arc'hant a chañs evel-se, a lakae gantañ oferinier evit an anaon dilezet, ar reuzeudikañ eus ar beorien !

Ar re eus ar beorien hag o doa ti a glaske ivez kaout un tamm douar patatez digant an tieg eus o amezeien. E tu pe du d'ur park, dindan traoù-hañv (potaj, kaol pe patatez) e veze lezet ur bleñchennig gante, aret da heul ar park. Un tamm teil a serrent, ludu, kaoc'h-kezeg klasket war hentoù darempredet gant kezeg. Gwech o deveze, div pe teir yar, un danvadez pe ur c'havr. Teil mat, eus ar c'hentañ hervez o deveze ha kaset veze d'ar park gant karr ha tenn an hini a roe douar dezhe. Er bleñchenne-se, hervez, 'veze gwinizh kaer er bloaz goude.

Pa zichañse kaout ur c'hlodad moc'h bihan muioc'h a voc'h eget a vronnoù d'o mamm, 'veze roet d'ur paour diwar-dro, an hini, pe an daou pe dri 'veze ouzhpenn. Truez 'veze o lazhañ anezho. Koulskoude n'eo ket bep tro e teuent da vat. Ha ne oa ket a-walc'h reiñ ar moc'h bihan, roet 'veze bannac'hoù laezh d'o heul hag ur bec'h plouz fresk da lakaat dindane. M'o dije ur c'havr oa suroc'h o jeu, istimet eo al laezh gavr da sevel ne vern petore loen bihan, hag ar vugale vihan ivez, se 'm eus klevet alies. Hag ouzhpenn klevout, rak va-unan on bet savet gant laezh gavr betek va femp miz. Ha pelloc'h 'vijen bet dalc'het gant al laezh-se, panevet oa bet ganet e-kichen ti va zud daou vreur gevel, ha deut oa an tad da c'houlenn va magerez evit sikour sevel an daou vihan-se : Joseph ha Sebastien. Unan anezhe zo bev bepred, hag evel un doare kerentiezh a santan en e geñver ; iskis ?

262

Bez' oa peorien ha ne raent nemet div dro ar bloaz ha ne daent ket a-bell eus o chomaj, goude an eost da glask un tamm ed, gwinizh pe segal pe segal-winizh, hag un dro patateza pa veze echu da dennañ ar patatez tro hanter miz Here. Ar beorien-mañ o doa ti, hag un tamm micher bihan bennak « gagne-petit » evel ma vez laret : ober choukennoù, - an dud a vremañ n'o deus ket kalz anaoudegezh eus ar choukennoù. Ar baotred war ar pemdez a zouge holl choukennoù plouz pe foenn. Met d'ar sul, en o botoù-koad du da vont d'an oferenn, e-kerz ar goañv e tougent choukennoù danvez, bourret a stoub pe a c'hloan, dalc'het er penn uhelañ gant un doare plañsonenn graet gant gloan a bep seurt liv, war ur steuenn lin reut a-walc'h. Rabatiñ a rae ar blañsonenn-se war c'horre ar votez hag ar choukenn a yae tost betek bizied an troad. Ar beorien gozh eta a wertzhe ar choukennoù-se a dousennoù (div ha div) da gonversañted ar hourk e-lec'h ma prene an neb o deveze ezhomm.

An danvez na gouste netra dezhe koulz laret, peogwir d'ar mare ma komzan outañ e veze laketa lin e kalz a atantoù. An danvez da c'holo ar choukenn 'veze e lien kanab pe e « moleskin » pe berliñj.

D'ar vugale 'veze peget gant un tamm toaz tanav ar choukenn danvez-se ouzh chouk ar votez. Anez 'veze sav-taol kollet ur choukenn.

...Inkardañ gloan, nezañ gloan, ober stamm, oa micherioù bihan ar maouezed kozh n'o doa mui nerzh da vont d'o devezh. Ar baotred kozh akuit eus o daouarn a rae a bep seurt traoùigoù : skubellennoù bezv, restell-eost, torchennoù, koloennoù-gwenan, pa veze kaset danvez dezho.

Ar beorien rik, klaskerien-vara hep ti nag aoz oa an tristañ o doare, ha koulskoude, int eo a gane hag a gonte kaozioù ha rimadelloù.

O zier o devoa, lojañ 'raent pe e ti peorien all (gant ti), pe aliesoc'h er menajoù. A vare da vare e tremene an hevelep re, ur pennad a-raok noz e teuent da c'houlenn lojeiz. Neuze 'veze laret dezhe tennañ plouzh diouzh ar bern ha kas anezhañ d'ur c'hraou. Kraou ar saout a blije kalz dezhe, klouar 'veze an aer eno gant alan ar saout, ha nerzh 'veze santet o tont eus ar gouzer. Se 'veze er goañv, rak, d'ar mizioù-hañv, nemet glav a raje, e lojent e penn ar bern foenn pe blouzh, 'n em bakañ 'raent e-barzh ma veze fresk an noz.

Bara 'veze ganto en o bisac'h hag ar peurvuiañ eo gant o bara 'veze graet o c'hoan dezho hag o dijuniñ antronoz. Soubenn 'veze dalc'het dalc'hmat en tiez mat, 'vel ma veze dalc'het krampouezh ha bara. Ma veze deiz ar c'hig - teir gwech ar sizhun : sul, meurzh, yaou - o deveze patatez ha kig sall. An devezhioù all, pe batatez ha laezh trenk, pe hepken o soubenn-vara hag ur glogead soubenn da drempañ ur grampouezhenn evel an dud all.

Neuze, goude koan e kontent kaozioù hag e kanent, nemet re skuizh e vezent. Gant o faterioù hag o bennozhioù ne oant ket berr. Marteze diwar veg an teod, marteze ivez eus don o c'halon. Ne vern, brav da glevout bepred...

« Bennozh Doue ! Doue da brezervo ho loened ! Doue da vennigo ar vugale ! Chañs ha yec'hed d'an holl dud en ti-mañ ! h.a... » ha « Doue da bardono an anaon ! »

Pa oa digoret ar brezel 14 oa difennet d'ar beorien mont en-dro da glask. Labour oa neuze evit an holl pa oa aet kement a baotred d'an arme, tud yaouank, tud dimezet, tadoù a familh zoken, gant kalz a vugale.

Ret oa bet mirout bugale ar skol er gêr da labourat da 10, 11, 12 vloaz. Ar baotredigoù d'ar park, hag ar merc'hed bihan war ar menaj, tra ma yae o mamm d'ar park. Ar brezel oa digoret e derou miz Eost, ne oa ket hanter droc'het an ed. Peurechuiñ troc'hañ, klozañ, charreat, dornañ ; ha ne oa ger eus dornerezed er parkoù na traktorioù evel just. Gant tud ha kezeg, gant filzier ha koufoù bihan, nizerezed ha gwenterezed oa ret ober tout, ha kalz a dud oa ret kaout da zerc'hel ar stal da vont en-dro.

Me am boa 9 bloaz, met soñj 'm eus da welout ha da glevout penaos ne oa ket re vrav ordin dont a-benn eus ar rummad tud-se oa kustum da vevañ diwar ar c'hilsk, daoust ma ne oa ket avius o stad. Pa welent oa ezhomm bras anezhe e vezent un tamm direzon, darn outo. Lavaret 'vez : « Pa erru an eost e ya ar mevel da vestr ! ». Met pa ya mestr ha mevel d'ar brezel, mestrez an ti ne vez ket nemeur a zoujañs eviti.

Evit reiñ ur skouer : e ti va maeronez (Doue d'he fardono, marvet eo er sizhun santel diwezhañ d'an oad a 95 bloaz) seizh bugel e oant o terc'hel ur feurm bras a-walc'h gant o mamm, intañvez pell a oa, ur mevel bras hag ur paotr saout, ha devezhourien. En tu-hont, 'veze implijet ouzhpenn ar pevar mab, an div verc'h vras, an hini vihanañ oa er skol c'hoazh.

D'an deiz ma tigoras ar brezel pevarzek e oa partiet 4 asambles : tri mab hag ar mevel bras. Ar bevare mab da viz Meurzh 1915. Chom a rae an div verc'h, o mamm, ar paotr saout bihan war-dro un trevell a seurt-se e derou an Eost, hag e-pad pevar bloaz !

Unan eus ar baotred lazhet en Arras, unan gazet, marvet er bloavezhioù kentañ goude ar brezel, unan troc'het e c'har, ar bevare tapet gaz gantañ ivez ha chomet klañvidik a-hed e vuhez.

Ret e oa bet er bloavezhioù spontus-se kaout skoazell a bep seurt tud. Tud na ouezent ket penaos bern n'eo ket mammenn. Lavarout a rae va maeronez, hag a oa ar verc'h henañ, biken n'he dije ken truez ouzh ar beorien, ken heuget oa bet ganto. Met ne oa ket gwir, chomet oa brokus ha trugarezus e-keñver an dud

ezhommek e-pad he buhez hir, e gwir gristenez ma oa.

Bez' oa d'ar c'houlz-se (ar brezel-bed kentañ) labouradegoù lin stank a-walc'h er vro. Evel an dud all, micherourien al labouradegoù-se o doa ranket mont ivez d'ar brezel, setu kalz eus ar glaskerien oa bet ambochet el labouradegoù, paotred ha merc'hed oant ket re gozh na re vac'hagnet.

Milinoù-paper oa ivez e Benac'h ha Logivi-Plougras, aze oa c'hoarvezet ar memes tra. Met hervez ar c'hrenn-lavar kozh : « Paour a c'hounez. Paour a foet ! Paour n'eus ezhomm yalc'h ebet ! ».

Garv e kavent emichañs bezañ stag evel-se e-pad ar sizhun ha pa veze touchet ar pae a veze foetet prim-ha-prim. Tremen pa vez ha tremen pa ne vez, 'zo tremen ordin ivez 'keta ?

Bez' e oa meur a hini, tud distabil, ne oant ket gouest da chom neblec'h. Ar re-se oa bet ret dezhe kaout un itrik bennak evit bezañ lezet da vale eus an eil parrez d'eben. Unan bepred oa 'n em lakaet da ramoner siminaloù, un tammig asez binetenn gant un troad hir, daou pe dri bennad bazh gant klaouieroù houarn da stagañ an eil eus eben, ur boked gatgel, ur gordenn d'ober gante ur bakadenn dindan e gazel pe war e skoaz, hag e roud eus an eil ti d'egile !

265

Met va Doue, ne zistage ket an hanter nag ar c'hard eus an uzilh, ha ne oa ket ur ger da laret dezhañ pe vezec'h pouilhet gantañ. Laret e vez : « Du 'vel ur poutouarn ». Fañch n'oa bet biskoazh banne dour ebet war e fas emichañs abaoe ma oa deut diwar varlenn e vamm

An devezhioù foar er C'houerc'hed, d'ar c'hentañ ha d'an trede merc'her e veze Fañch er plas-foar o sikour diskargañ pe adkargañ ar c'hasedoù moc'h bihan er c'hirri. Sikour ? Ya, poz e zorn war ar c'hased ! A-walc'h a oa dezhañ evit tapout gwerzh ur chopinad, ha kerkent d'an ostaliri. Soñj 'm eus da glevout mamm o c'houlenn digantañ : « D'ober petra e lakez da arc'hant ivez Fañch ? » - « Da lonkañ, da lonkañ, da lonkañ... » eme Fañch. Kent mont da ramoner oa bet ur c'hrogad o werzhañ spilhoù ha paper-lizher... Met un digarez oa dezhañ da gaout droed da vont en-dro.

Pa oa aet da ramoner, kanfarted ar bourk - pe gentoc'h « Kêr ar C'houerc'hed » - rak arabat lavarout bourk amañ pichoñs ! - o doa fardet ur ruban lien dezhañ en-dro d'e dog gant ar gerioù-mañ, skrivet e liv-Sina : « Le Scour François, premier ramoneur de France ».

Bez' oa ivez ur paotr kozh bihan sioul ha na veze ket gwelet alies, eus Benac'h e oa, un tamm ti-soul en doa eno, ned ae ket a-bell, me 'gred e tistroe d'an noz d'e di. Abaf e oa ha seven-tre. P'errue a bazioù vouldou e toull an nor e rae ur waskennadenn. Neuze bep tro ar memes frazenn : « Dous eo 'n amzer, » eme Erwanig. N'em eus e anavezet nemet dindan an anv-se : « Erwanig dous an amzer ».

An Itron Moond, Mari Manac'h eus he anv plac'h yaouank, genidik ivez eus Benac'h, hag a oa ken brokus e-keñver peorien he bro pa oa deut da vezañ gwreg Roue an Nikel, he devoa bet kinniget da Erwanig reneveziñ dezhañ e di, lakaat un doenn mein-glas warnañ. Be ! nann, ne felle ket dezhañ, kalz gwasketoc'h oa un doenn blouz. Setu ma oa graet dezhañ un doenn nevez-flamm gant plouz. Aluzen a-walc'h da vevañ a roe dezhañ an Itron, met ur yec'hed a oa evitañ mont d'ober tammoù troioù.

Pochani (Paotr-Jani). Hemañ oa ur paotr fin hag a ouie tennañ dour d'e vilin. Lezet en doa e varv da vountañ hir, hir, hag evel ma oa gwenn, ha gwenn e vlev hir ivez, e veze graet ar « Père Noël » outañ gant an douristed.

266

Rak ne dae ket da glask nemeur tro-gêr. Prenañ 'rae kartennoù-post gant skeudennoù eus ar vro, ha d'ar mizioù hañv ez ae da werzhañ ar c'hartennoù-se da vord ar mor. Anglizien ar peurvuañ a veze d'ar c'houlz-se oc'h ober o zouristed dre amañ. Gwiskañ a rae dilhad truilhoù war c'horre da lakaat an dud da gaout truez outañ. Met e wreg, ur plac'hig vihan dister anezhi, a lare deomp : « Oho ! n'eo ket dav kaout truez ouzh Pochan, hennezh zo gwisket tomm dindan ». Dont a rae, eme Soaz, godelladoù moneiz gant Pochan goude un nebeud bloavezhioù e kostez an aod. Neuze 'vezent diskarget e-barzh ur c'helorn konfitur, hennezh eo ar « C'hofreufor » ! ha goloet gant pilhoù.

Soaz ne ouie kont eget. Padal, pa veze hec'h-unan en ti e prene an nor warni, e tiskarge he c'helorniad moneiz war an daol, e rae bernioù oute hervez o ment hag o liv, gwenneien, daouwenneien, pempgwenneien, dekgwenneien. pevarrealed... ne gredan ket veze kalz uheloc'h somm.

Hag e chome Soaz da arvestiñ an teñzor-se ! Krezus sur-mat ne c'helle ket bezañ evurusoc'h, ha, pa skuizhe, 'veze laket adarre ar moneiz er c'helorn.

Daoust da Vochan da vezañ deut war an oad a-benn am eus-me e anavezet, bez' en doa ar vrud da gaout mestrezed, ha Soaz haour a yae war gein ar marc'h ruz.

Turlutat a rae kement toull-moger oa tout da glask kuzhiadennoù Pochan, distroet gantañ da gas d'ar « Vrun », eme Soaz. Un deiz bepred - hi a gonte se d'am mamm - pa oa aet da veskañ ha da ziskargañ ar moneiz, ne oa mui nemet pilhoù er c'helorn, gant un dornad pezhioù bihan war c'horre. Ouzhpenn se kollet he broust da gannañ, he c'hontell hag he choukennoù nevez. Sodet oa ar paour kaezh Soaz. Deut oa du-mañ da lojañ en noz-se. « Biken ken ne zistroje d'ar gêr ». Met « Biken » Soaz ne bade ket pell ! An deiz war-lerc'h oa erruet Pochan da glask war-lerc'h Soaz, an dour en e zaoulagad. « Soaz kaezh ac'han, Soaz kaezh alesont ! » « Piv en deus bountet pennadoù ennout evel-se. N'eus kollet mann ebet, ha gant an arc'hant 'm eus prenet gwin ha sardined ! » Met, Soaz n'oa ket gouest da santout c'hwez ar sardined ha takenn win ne eve morse. Setu Pochan en em regale e-unan, Soaz na felle dezhi nemet kafe ha bara-amann.

Marvet oa Soaz n'oufen ket larout da be oad, rak ne oueze ket hec'h-unan he oad. Kozh e krede din oa, p'emeur yaouank-flamm e kaver kozh an dud aet war an oad. Ma, pinvidikañ den ar barrez n'eus bet lakaet e dud gantañ muioc'h a oferennoù eget n'en deus bet lakaet Pochan gant e wreg. Doue d'he fardono ! Me 'gred ez ae al lodenn vrasañ eus e aluzennoù da lakaat servijoù ganti, e-pad an nebeud bloavezhioù oa chomet war he lerc'h er bed-mañ. Aet oa d'an ospital d'echuiñ e amzer evel m'eo lod ar beorien gozh all.

267

P'emaon o komz eus servijoù, peorien tro'r bourk a oa devot da vont hep beure d'ar servijoù, ne verne gant piv e vijent bet lakaet. O dijuniñ a dapent evel-se : ur bannac'h kafe ha bara-amann, gwin gwenn a-wechoù pa veze tud a renk uhel : rak ar c'hiz oa da reiñ kafe d'an holl asistanted. O tont e-maez an iliz ez ae an dud d'ar vered da skuilh dour binniget war vez an hini oa ar servij en e intansion. Aze 'veze unan karget da lavarout, hanter sioul, hanter greñv : « Neb piv bennak en deus asistet er servij-mañ a zo pedet da vont betek ti hen-mañ-hen (un ostaleri) ». N'eo ket ar gerent a rae ar c'hemenn-se, alies e veze ar vaouez kozh a veze o larout ar grasoù gant ar re varv. Goude an dijuniñ-se e veze adarre laret grasoù, evit an hini marv, holl gerent desedet an asistanted, hag holl gerent desedet tud an ti ma veze ennañ an degemer. An holl a save en o sav da respont ar pedennoù.

Gant an dud o rouesaat er maezioù, ar vuhez o vont war geraat eo bet kemmet ar boazioù-se.

Bremañ e vez lakaet servijoù evit an anaon hep laret o anv hag anv an hini a erbed an oferennoù. Gant ur partikulier evit ur partikulier 'vez laret ar peurliesañ, kuit da zirenkañ den na da astenn frejoù, ken berr eo an dud an deiz a hiziv er menajoù m'emeur stag evel sklaved.

N'am eus komzet betek-hen nemet eus ar beorien rik, ar re oa rediet da vont en-dro da glask.

Meur a rummad peorien all oa c'hoazh, nebeutoc'h reuzeudik marteze dre m'o doa ti, met nompaz leizh o c'hof bemdez. Ar glac'har rusañ oa, evite, n'eo ket tremen o-unan, met gwelout o bugale o kaout naon, o kaout riv, o vezañ ret mat dezhe kas anezhe da c'hounit a-raok m'o dije graet o c'horf, ar peurvuiañ hep tamm skol ebet. Hep gopr er bloavezhioù kentañ nemet o boued, o lojeiz, un tamm dilhad, ur botoù koad bennak, gwenneien gwerzh-butun digant an dremenerien, pa vezent o servijiñ « en tiez mat » evel ma veze laret.

Pa vezent deut en oad da c'hounit gopr, ar peurliesañ e veze ret dezhe cheñch ti, cheñch mestr. Kemeret e veze adarre ur c'hrennard all en o flas da vesa 'r saout ha d'ober tammoù labourioù skañv.

268

Kerse 'veze gant ar baotredigoù alies gwech ivez kerse war vat. A-benn gounit gopr e oa ret mont d'ar park, deskiñ ober gant kezeg ha gant an holl ostilhoù. Alies pa veze echu ar miz e teue e vamm da glask ar gopr. Ezhomm bras anezhañ da furnis boued d'ar re vihanoc'h.

Gopr ur mevel, ha nebeutoc'h c'hoazh hini ur vatezh, ne oa ket bras en arc'hant, met, da heul e oa an diveouroù, da laret eo : botoù, dilhad, kemenerezh, fererezh, kannerezh ; alies ur c'hant ed d'o zud, ur golc'hedad pell, un devezh tenn, pe ouzhpenn, en holl o talvezout muioc'h eget ar gopr en arc'hant.

Bloavezhioù ha bloavezhioù o deveze ezhomm evit lakaat ur gwenneg bennak a-gostez da c'halloud soñjal sevel tiegezh. Gwelet em eus koulskoude tud eus an amzer-se deut da vezañ mat ar bed gante, o terc'hel feurmioù mentet mat, savet pazenn ha pazenn e skeul ar renkadoù diwar o foan, o interest hag o intrudu, ha, se 'zo sklaer, pa c'hoarzh ar chañs oute ha p'o deveze yec'hed.

* * *

Ha ma komzfen bremañ eus tiegezh ar paour... N'am eus ket e gwirionez soñj eus kalz a diez peorien. Tiez bihan soul, teñval, gant ur prenestr-dormant, un nebeud arrebeuri kozh-noe, un daol debret gant ar preñved.

Ur wech, o tistreiñ eus ar skol, hor boa Jermaine B. ha me bountet hor fri e ti Chanmai' Skolan. Treuz ur park eus an hent oa. E korn an oaled, sterniet gant prenn oa sañset e wele : ur vrec'hiad plouz hag un toullad truilhoù. Ur c'hased war e c'henou a servije da daol, ur varrikenn didal en he sav en ur c'horn all oa e armel, un dorchenn hanter dispennet e korn an tan oa e skabell, setu holl... Met gwelloc'h eo ur c'hraou moc'h er gêr eget ur c'hastell e lec'h all... « Ti brav, ti brav ! » eme Chanmai'. Ne oa ket diaes bezañ Doue dezhañ. Peder moger hag un doenn, un oaled da boazañ e bato !

E-kichen ti Chanmai' Skolan, ti Soaz ha Pochan oa ur c'hastell. An ti oa ken bihan ha ken teñval avat, met an tiegezh oa ken naet, ken lufret, skubet ken mat plas an ti ken na luc'he an douar.

269

An daol a veze koaret evel an arrebeuri all ha ne zebrent ket ouzh an daol 'vit ma chomfe atav propr. War an oaled hag a oa uhel e tebrent o fredoù. Soaz oa ur plac'h teurgn kenañ. « Oho, » eme Soaz, « bezañ paour ha bezañ lous ? Nann ! »

Greomp tro an ti : 'n ur vont tre oa en tu kleiz d'an nor un armel derv du izel, ha debret an treid pe vreïn eus mouestijenn an douar, ober a rae speurenn da waskediñ an daol, harp ouzh ar voger e-keñver ar prenestr, ur prenestrig a beder gwerenn vihan, c'hoazh e vanke unan, un almanak kozh e plas ar werenn.

N'oa ur bank d'azezañ nemet e tu plas an ti. Un daol vihan oa ur c'houign keuneud da boz ar beselloù, a-us dezhi, ul listrier gant un nebeud asiedoù ha skudilli war an estajerennoù.

En tu dehou d'an nor oa ur skeul da vont d'ar solier e-lec'h ma veze lojet an danvez tan, dindan ar skeul, ar potouarn da virviñ ar c'houez. Kelorn an dour, ur skubellenn, un nebeud ostilhoù a-hed ar voger ; tu enep an daol oa ur gwele « A la chapelle » n'am eus gwelet nemet eno, gant un rideoz koad. Neuze, ar pres pe armel, derv du ivez, blotoù koad o servijout da dreid dezhañ. Ar gwele-kloz e korn an oaled gant ur bank-tosel hag ur pres bihan war ur penn anezhañ : ur bojañig 'veze graet eus ar pres bihan-se, hennezh oa sañset da lakaat liboud ar babigoù. Er bank-tosel e veze klenket an dilhad da gannañ. War ar vantell siminal oa ur grusifi, ur santez Anna, ar bod beuz, ur c'hantolor ha boestoù ar c'hafe hag ar chikore ! setu holl !

270

PEORIEN NEVEZ

Komzet 'm eus hirik a-walc'h eus peorien va yaouankiz. Pell zo ne vez gwelet den ebet o klask an aluzon. Al lezennoù sokial o deus permetet da bep den ezhommek kaout er gêr ar pep retañ ha bezañ graet war e dro en ospital pa ne vez mui gouest d'ober e jeu e-unan.

Hogen, ur rummad peorien all omp-ni boaz da welout e toull hon dor - ni, ar vrezhonegerien a-vihanik.

Disheñvel a-grenn int eus peorien gwechall. Treset mat. Gwisket mat. Gouzout a reont komz ha kerzhout, ha n'eo ket bara emaint o klask. Ne vev ket an den gant bara hepken.

N'eo ket kennebeut magadur spered en deus graet diouer dezhe. Tud gouiziek int peurvuiañ, ha yaouank, ha kreñv. Un dra bennak avat a ra diouer dezhe, hag a ra dezhe gouzañv, an dra-se hag a zo ar pep pennañ e sevenadur ur Ouenn : ar Yezh.

Yezh, Hengoun, Arzoù, Lennegezh, Istor, Mojennoù ar Vro a zo o hini. Nac'het eo bet oute gant ar Stad teñzor o lignez, hag ar pezh a zo tristoc'h c'hoazh da anzav : o zud o deus o zroc'het eus o gwrizioù, graet eus o bugale estrenien en o Bro.

Diaes eo kompren penaos eo 'n em ledet war Vreizh ar walenn euzhus-se.

Un torfed a Ouennlzh, an hini mezhusañ, an hini grevusañ, an hini a ra eus ur Bobl dieub ur Bobl sklav.

- Dallentez ? Follentez ? pe Fallentez ?

- Marteze netra nemet Laoskentez...

Bountet zo bet gant ar C'hallaoued kement a dezennoù hag a siklezennoù e penn ar Vretoned, ha re dechet int bet pell, da sentiñ hep rebardiñ ouzh lezennoù Bro-C'hall daoust pegen dinatur e vefent.

Ha setu un nebeud bloavezhioù zo un dihun burzhudus ! Hor yaouankizoù, paotred evel merc'hed, levezonet moarvat gant skouer broioù bihan all, da lavarout eo minorelezhioù all, bet, int ivez, war ar bord da goll o sevenadur, a zo savet enno ur c'hoant diremed, un ezhom biologel da biaouañ a-nevez, kousto pe gousto, o sevenadur naturel bet nac'het oute 'n doare ken diskiant.

271

Kompren a rit bremañ petra ' fell d'ar glaskerien aluzon-mañ ?

Ar pep brasañ anezhe o deus dija desket ar yezh, kalz pe nebeut, dre ur skol dre lizher, ur skol-noz pe skol ar merc'her, dre stajoù-hañv. Darn all o deus klasket deskiñ o-unan el levrioù gant sikour yezhadurioù, geriadurioù, metodoù a bep seurt.

Pa 'z eont e-mesk ar Bobl, an dud oadet, e welont pegement a c'herioù a ra diouer dezho, ha setu ma klaskont pinvidikaat o geriadur dre gomz gant ar re eo c'hoazh o yezh pemdeziek ar brezhoneg bev.

Trist eo kouezhañ e renk klaskerien aluzon, p'edo ken pinvidik hor yezh-ni, ken poellek ha kempouezet mat, ma lavar ar yezhonourien ez eo ar Brezhoneg kaerañ Yezh Europa, ha ma vez-hi kelennet en un niver bras a skolioù-meur estren, un tamm dre holl er bed.

Dre c'hras Doue ha holontez tud emroüs eo bet dastumet ha lakaet war baper ar pep pouezusañ eus hon Herezh speredel, ha treuzkaset a rumm da rumm betek an deiz a hiziv.

Kenderc'hel a ra hon yaouankiz war o roudoù. Gwelout a rit anezhe o tont d'ho ti da gestal ur ger bennak, un dro-lavar bennak, ur rimadell, ur werz kozh, ur gontadenn, anvioù plant, amprevaned, ha me 'oar. O lakaat a reont gant evezh war o c'harnedig pe o c'hemeront war o enroller.

Pinvidigezhioù en arvar da vont da goll, pe da chom skornet evel ur c'hospital difrouezh, ha, d'an diwezh, da ziskenn er bez gant ar re gozh.

Un dra bouezus-tre eo labour ar glaskerien aluzon-se eta, rak, evit an holl, evit ur dazont e labouront, ha ni, ar re chañsus, ar re o deus komzet e-pad o buhez yezh ar Ouenn, hon dlead eo o sikour eus hon gwellañ. N'eus netra dister pa vez graet gant karantez ha poell.

Anat eo e c'houzañvont en o c'halon hag en o spered. Tamall a reont, ar re o deus nac'het outo teñzor prizius o gouenn, ha gant komzoù c'hwerv ha kriz a-wechoù.

« Savet omp bet, » emezo, « gant 'Sanders', 'Sanders' ha 'Neolait' ha nac'het ouzhimp laezh glan ha nerzhus hor Mamm-Vro. »

Pep Pobl he deus he Yezh, evel m'he deus pep bleuñvenn he liv hag he frond, pep delienn he stumm hag he ment. Lazhañ ur yezh zo lazhañ ur Bobl. Ene ur Bobl a vleugn dre he Yezh.

272

Ur Stad hag a lazh sevenadur he minorelezhioù 'zo evel ur liorzhour hag a lazhfe bleuñioù e liorz h nemet unan hepken hag a glaskfe leugnañ ganti e liorz h a-bezh.

Chañs vat d'ar beorien nevez da gaout aluzon frank e pep ti.

Aluzon diwar aluzon a gas ar paour da binvidik.

Chañs d'hor Yezh da vont er-maez a baour, pe, kentoc'h, chañs d'ar Brezhoneg da adkemer e renk e-touez ar yezhoù enoret.

N'eo ket hor Yezh a zo paour, met ar re o deus graet fae warni !

273

KRENN-LAVARIOÙ HA LAVARENNOÙ

Lavarennoù ha krenn-lavarioù a zo chomet stank er brezhoneg a-zivout ar beorien, klask a ran em memor hag o lakaat a ran war baper dre ma teuont da soñj din. Setu an hini kentañ da zont:

A-viskoazh ha da virviken
'mañ troad ar pindivig
war c'houzoug ar beorien.

Ar paour pa binvidika
Gant an Diaoul ez a.

Aluzon diwar aluzon
A gas ar paour da binvidik.

Vilañ tri dra 'zo er bed :
Un den kozh tano (lik)
Ur pinvidig gaouiad
Ur paour glorius.

Paour a c'hounez
Paour a foet
Paour 'n eus ezhomm, yalc'h ebet !

Paourik an alaourig
Freuzet e reor gant un drezennig.

Evel yar ar paour : a gluch dindan an dorn = doñv.

Kentoc'h e vanko laou en-dro d'ar beorien eget ne vanko arc'hant
eno.

274

Kentoc'h e varvo buoc'h ar paour eget na grevo ar fallakr-se.

Kog ar pinvidig ha kog ar paour o'n em respont :
- Du-mañ 'zo, hag a vo o o o !
- Du-mañ pa vez a ve(z) e e e !

Eus a baour da baour.

Kas ar paour da baour 'zo diaes.

Paour evel Job : paour-razh.

Mont a baour – Mont 'r maez a baour.

War e gostez evel Yann 'vont da baour.

Un ti bihan paour : Douar paour – Gwisket paour: Broiouù paour.

Paour kaezh bihan – Paour kaezh tud – Paour kaezh loen h.a...

Fritañ mizer gant paourentez
E pillig ar Garantez.

Eus an dud a di pa c'hoantaent mont da zezezhiata veze laret : « Ar re-se
'zo o tebriñ bara ar beorien ! ».

Eus an dud « ingravet » a rae tout o labour o-unan : « Ar re-se eo
gwelloc'h gante 'n em grevriñ o labourat eget reiñ un devezh da c'hounit d'ar
paour

275

« Ur wreg vat a baour ! » veze laret eus ur vaouez dispignerez pe didalvez
- pe : na oueze ket labourat.

Paouroc'h eget ar c'hi. Hennezh en devez un abid nevez ar bloaz (pa daol e

gozh vlev). Ha me 'n am bez hini bet kammed.

Eus bugale disourisi, didalvez, disinterest e vez laret : « Ar vugale-se a gaso o zud da baour ! ».

D'ar bloavezhioù fall 'vit trevadoù an douar, ma veze just ar boued ha ker spontus, a lare c'hoazh darn 'n ur farsal : « Evel-hen eo goulenn digant ar paour, ha yac'h eo e borc'hell (gant patatez hag irvin ha soubenn an tri zraig veze ret bevañ) ».

Gwellañ daou stumm da vont da baour : laerezh ha labourat d'ar sul !

(Añjela Duval eo bet roet dezhi Priz P. Trepos (FR3) evit " Leve ar Paour ".)

Friza an Hanternoz a-rez ar mor diroll

(*)

Ur gwir impalaeriezh war vor o doa savet ar Saksoned hag ar Friziz er 7vet hag en 8vet kantved. Betek donedigezh ar Vikinged e oant deuet a-benn da gaout en o beli ar broioù en em astenn a-hed Mor an Hanternoz. Eus arvor Flandrez a-vremañ betek arvor Su ar Jutland en em lede an douaroù m'he doa graet ar bobl frizat hec'h annez warno. « Friza Veur » a ra an istorourien eus an dachennad-se. Met n'eo ket ur rouantelezh unvan a oa anezhi. Rouantelezhioù bihan, ne lavaren ket. E brud o istor edo Friziz er c'hantvedoù-se. Abaoe avat o deus kilet mantrus, ha ne chom ket kalz a dra eus « Friza Veur » gwechall gozh.

FRIZA (« Fryslân » e frizeg) a reer c'hoazh eus unan eus proviñsoù an Izelvroioù. Deuet eo a-benn an emsav frizat da c'hounit ur seurt statud divyezhek evit ar vro : mont a ra madik a-walc'h en-dro ar skoliata, ha gant ar frizeg e reer a-zevri er vuhez foran koulz hag en abadennoù skingomz ha skinwel. Eno e oa bet Armañs Ar C'halvez o studiañ ar skoliata divyezhek e-pad an hañv 1954 hag aet e oa e zanevell da ober eil niverenn ar gelaouenn " Skol " a oa dres o paouez reiñ lañs dezhi. Dedennet-tre gant Friza e seblant bezañ bet an Emsav breizhat d'ar mare-se rak merzout a ran a-hend-all e oa bet gouestlet penn-da-benn d'ar vro-se unan eus niverennoù " Al Liamm " e 1951.

(*) « *Daoust d'ar pezh a glever lavaret alies, nebeut a-walc'h eo e skriver e brezhoneg diwar-benn ar broioù all, ha n'eo ket ken digor-se hor prenestroù ganeomp war ar bed a-ziavaez* », eme Fañch Broudig en ur studiadenenn bet skrivet gantañ diwar-benn an embannadurioù brezhonek (" Brud Nevez " - Gouere hag Eost 79).

277

Arabat e vefe ankounac'haat avat ez eus Friziz o chom e Bro-Alamagn ivez, pell-pell diouzh Friza an Izelvroioù, hag ar re-se eo gwall rouez e komzfed diwar o fenn. Ar bobl frizat a vremañ a zo bet dispartiet-krak he douaroù abaoe ar Grenn-amzer. Teir vroig a zo hiziv an deiz :

1. - FRIZA AN IZELVROIOÙ a zo ar rann vrasañ hag an hini ar stankañ ar boblañs enni : 547.223 a dud hervez niveridigezh 1974 ; 400.000 anezho a vefe gouest da gomz frizeg. Ouzhpenn se, e vefe war-dro 300.000 a Friziz zivroet o chom e proviñsoù all an Izelvroioù. FRIZA AR C'HUZH-HEOL a reer eus ar rann-se eus ar Frizegva a vremañ.

2. - E länder Saks-Izel, e Bro-Alamagn, e reer FRIZA AR SAV-HEOL eus ur c'hornadig-bro, e su kêr Emden. War a soñjer, ne chomfe nemet 3.000 a dud gouest da gomz o yezh etnikel eno... 3.000 a dud d'ar muiañ... ha marteze div wech nebeutoc'h ! Diaes eo hen gouzout resis. Tra souezhus, n'emañ ket ar vroig-se war vord ar mor daoust da Friziz da vezañ bet ur bobl a voraerien abaoe gouloudeiz o istor. « Saterlân » a reer ivez eus al lodenn-se eus ar Frizegva. Ur seurt enezennig etnikel kollet e-kreiz meurvor an alamanegerien eo ar Saterlân.

3. - An deirvet rann a zo anvet FRIZA AN HANTERNOZ. E länder Schleswig-Holstein emañ, dres e su an harzoù gant Bro-Danmark. Abaoe 1970 eo « Friza an Hanternoz » an anv ofisiel evit envel unan eus rannvroioù länder Schleswig-Holstein. 154.302 a dud a zo o chom e Kreis Nordfriesland, met an harzoù ofisiel-se a zo un tamm mat ledanoc'h eget douaroù ar bobl frizat a vremañ. Pet a dud a sell outo o-unan evel Friziz e Friza an Hanternoz hiziv an deiz ? Diaes meurbet eo gouzout. Soñjal a reer koulskoude e vefent 60.000 pe war-dro. 10.000 anezho hepken a vefe gouest c'hoazh da gomz frizeg.

Ouzhpenn FRIZA AR C'HUZH-HEOL, hini ar SAV-HEOL hag hini an HANTERNOZ, e vefe reizh lakaat ENEZ-HELGOLAND e-barzh ar gont ivez. Pell pell diouzh aodoù

Bro-Alamagn emañ an enezennig-se ha trouz a oa bet hir amzer etre gouarnamant Londrez hag hini Berlin evit bezañ perc'henn warni. N'eo ket souezhus tamm ebet, rak ur seurt kreñvlec'h e mor an Hanternoz eo Enez-Helgoland ; un dalvoudegezh vras a zo dezhi evit an arme-vor. E dalc'h Bro-Danmark e oa bet betek 1807, ha neuze o doa lakaet ar Saozon o c'hraban warni. E 1890, goude bezañ bet graet marc'had gant gouarnamant Berlin ez eo e dalc'h an Alamaned ez eas a-benn ar fin. Ar Saozon int-i a resevas Enez-Zańzibar en Afrika ar Sav-Heol evit bezañ bet asantet kuitaat Enez-Helgoland.

278

Ur rann eus ar Frizegva eo Enez-Helgoland ivez. 250 bennak a dud a c'hell c'hoazh komz frizeg eno ; *halunder* a reer eus o rannyezh.

Goude bezañ bet ur c'hreñvlec'h evit an arme-vor eo deuet an enezennig da vezañ ur c'hreñvlec'h giz nevez evit ar varc'hadourien vakańsoù. Ouzhpenn eizh-ugent otel, ostaleri, ha bed-and-breakfast am eus kontet war ul levrig-kelaouiñ touristed bet embannet warlene, pezh a gavan sabatuus evit un enezenn ken bihan. En alamaneg e oa moulet al levrig penn-da-benn, rak n'eus nemet Alamaned a ya da dremen o vakańsoù war an aodoù-se. Luc'hskeudennoù e-leizh a oa e-barzh evit sachañ lagad an dud : ur mell poull-neuiñ, bigi pourmen, shopping center, porzhioù c'hoari tennis, sonaoù, salioù rouzañ. tiez debriñ, tiez evañ, tiez disko, a-vil-vern... ha zoken ul labous mor o plavañ seder en oabl glas an enezennig-baradozig.

279

Ur « friesen-kongress » a vez dalc'het bep bloaz evit aesaat an darempredoù etre Friziz. E 1979. evel bep trede bloaz, e oa tro Friza an Hanternoz da zegemer an dileuridi. E Enez-Sylt e oa bet kavet an traoù en-dro. Diskouezadegoù skeudennoù ha fotoioù, kaozeadennoù, abadennoù kan ha dañs hag all a oa bet aozet a-ratozh evit an 2.000 bennak a dud o doa kemeret perzh er c'hendalc'h frizat.

Friza an Hanternoz an hini eo e vo gouestlet dezhi va fennad-skrid amañ da heul.

Ur vro beurgompez

Ur seurt strizh-douar a zo eus un darn vat eus länder Schleswig-Holstein e norz pellañ Bro-Alamagn. E tu ar c'huzh-heol d'ar strizh-douar emañ Mor an Hanternoz, hag e tu ar sav-heol emañ ar Mor Baltek. Souezhus bras eo an diforc'h a zo etre an daou aod-se, daoust dezho da vezañ tost-tost an eil ouzh egile : daou ugent kilometr bennak hepken, dres evel e ledenez Jutland e Bro-Danmark. Plijus eo an endro-bevañ a-hed ar mor Baltek gant e zorgennoù, e goadeier, e aberioù. e draezhennoùigoù, e gêriadennoù puchet er c'hlasvez. Pebezh cheñchamant avat a-hed mor an Hanternoz ! Torgenn ebet ken amañ ; plaenennoù kompez rik nemetken. A-us da live ar pradeier eo bet savet an hentoù, ha war rozioùigoù emañ kalz tiez-feurm ; n'eo ket souezhus tamm ebet gant ar gleb-dourteil ma vez an douaroù ! Gwez ha kaeoù, n'eus ket anezho koulz lavarout. Setu Friza an Hanternoz !

280

Seul dristoc'h am eus kavet ar c'hompezennoù-se ma oa fall-tre an amzer : dremmwel mouchet, oabl du-pod, koumoul cheñch-dicheñch, avel drenk, ha ken souden ha tra e tirolle ar glav da gouezhañ a-builh. Ya, ur c'hast' amzer evit an hañv, rak e kreiz miz Eost 1979 e oa. Anzav a rankan ivez ez on-me « paotr an torgennoù » ; o zrolinennoù kromm ha kuñv am eus ezhomm da santout en-dro din. Re zivuzul e kavan ar menezioù meur, ha me denig o vont drezo. Ar plaenennoù divent avat, kollet eo en em santan en o c'hreiz ; ha lavarout a ran ouzhin vanan evel dre ematizadur (1) : « Ale ! arabat digalonekaat ! n'eo ket ar c'hornbro-mañ ken enoüs ha ma seblant bezañ ! Sell pizh en-dro dit hag e deñzorioù kuzh a zizoloi ! » Kuzulikadeg a seurt-se a oa ennon, ha me o treuziñ kompezennoù Friza an Hanternoz. Met start eo bet !

Petra eo Friza an Hanternoz a-benn ar fin ? Da gentañ penn un dachennad-douar hir ha strizh dezhi war-dro tri-ugent kilometr a hed hag etre dek ha pemzek kilometr a lec'hed, war vord Mor an Hanternoz. Ha d'an eil : un toullad inizi, lod bras a-walc'h, evel Sylt, Föhr hag Amrum, lod all dister-tre ; Halligen a reer eus an inizi bihan-bihan se. Ar mor eo aner klask gwelout anezhañ pa'z erruer en ul lec'h merket evel ur porzh pe un draezhenn war gartenn an hentoù. Diresis souezhus eo trolinenn aodoù Friza an Hanternoz ; her c'hompren a ris gwelloc'h en ur vont da Enez-Sylt.

Lec'hid heugus ha douar frealzus

Hanter-kant vloaz 'zo eo bet staget Enez-Sylt ouzh an douar bras gant ur pezh chaoser, daouzek kilometr bennak dezhi. Met n'eus hent ebet warni evit ar c'hirri-tan. Evit an trenioù eo e oa bet savet. Hindenburg, hag eñ prezidant Republik an Alamagn d'ar mare-se, a zeuas e-unan da lidañ tremen an tren kentañ e 1927. Hag abaoe eo « Hindenburg-damm » a reer eus ar chaoser. Pa fell d'an dud mont gant o gwetur da Enez-Sylt e rankont lakaat anezhi e-barzh ur vagon ispisial. 2.000 gwetur a dremen bemdez evel-se e-pad an hañv, ha chom a ra an dud e-barzh evit treuziñ ar mor. Siwazh, n'em boa me nemet ur plas boutin e-barzh ur vagon ordinal. Domaj eo, rak plijet kenañ-kenañ e vijen-me bet o treuziñ ar mor e-barzh va c'harr-tan. Met n'on ket evit lavarout hag-eñ eo « mor » ar ger a dlefen ober gantañ ; setu ar seurt trowardroioù a c'hellen gwelout en ur vont d'an enezenn dre ar chaoser :

(1) ematzadur = autosuggestion

281

Tachennoù dindan edoù ; peurvanoù, bagadoù saout enno ; ur pikol sav-douar evit gwareziñ an atantoù diouzh ar reverzhioù ; deñved o peuriñ a bep tu d'ar sav-douar ha warnañ zoken ; peurajoù ; poulladoù dour lous ; deñved ; geotajoù ; bouilhennoù ; lec'hidegoù ; lec'hid ha dour sall mesk-ha-mesk, ledan, ledan, ha griz. Ha tamm-ha-tamm an dour ec'hon, ar mor. Ar Mor ! Allas ! ne bad ket pell. Setu al lec'hid adarre, al lec'hideier griz heugus, hag a-nebeudoù ar paludoù gant o deñved. Hag en-dro din bremañ, pegen frealzus, an douar-labour, an douar bev, gant un traktor o vont-dont warnañ. Korf douarek an enezenn ! Sylt ! Söl (2) !

En ur sellout ouzh eoullivadurioù Magnus Weidemann, e Mirdi Pobl Friza an Hanternoz, e bourc'h Keitum, e komprener gwelloc'h endro kevrinus Enez-Sylt. E don-donañ an traoù eo aet an arzour-se, hag eñ taolenner-maezioù. Boemet eo bet gant ar gwenodennoù o vont pleg-dibleg a-dreuz d'ar brugeier, d'ar raden ha d'ar geot-oya dindan koumoul kemm-digemm an deizioù avel drenk. Brasañ taolennad an diskouezadeg a oa unan souezhus : lec'hidegoù nemetken warni hag an oabl a-us dezho. Tachadoù lec'hid lufurus ha tachadoù dour sall, bannoù heol klañvidik un devezh arnev o skediñ war o melezour lous. Soñjal a rae din e oa al lec'hid heugus dre natur ; bremañ avat n'on ket sur ken. Kevrinus e c'hell bezañ ivez, ha boemus !

Touristed e pep lec'h

E penn al linenn, e porzh-houarn Westerland, e tiskennis. Ur mor a dud a oa o kantreal er straedoù rak evit degemer an hañvourien an hini eo e oa bet savet a-ratozh kaer ar gêr-se, ha dreist-holl ar re binvidikañ anezho. Muioç'h a stalioù-bravigoù a gaver stok-ha-stok er ru vrasañ eget e n'eus forzh peseurt kêr alaman all. Petra an diaoul emañ an holl dud-se oc'h ober en un enezenn lec'hideier en-dro dezhi ?

E tu ar sav-heol d'an enezenn en em astenn al lec'hideier hag ar paludoù, met traezhenoù eus ar re vravañ a zo e tu ar c'huzh-heol, e-tal ar mor bras. Resisoc'h e vefe lavarout eo un draezhenn hir souezhus an hini a zo : war-dro daougent kilometr hed dezhi, penn-da-benn d'an enezenn, hag unan eus ar re gaerañ en Europa an Hanternoz rak tevennoù bras goloet a c'heot-oya a zo en a-

dreñv.

(2) en alamaneg : Sylt (distagañ : Zult) ; e frizeg an enezenn : Söl (distagañ : Seul).

282-283

Stummet iskis eo Enez-Sylt : hir souezhus ha ken strizh ha tra : daou-ugent kilometr hed ha nebeutoc'h eget un hanter kilometr led dezhi e meur a lec'h. Brudet-tre eo stumm Enez-Sylt e Bro-Alamagn a-bezh. He zrolinenn a weler war pegskridoù a bep seurt stag ouzh penn a-dreñv kirri-tan, dre ar vro a-bezh, pezh a sinifi : « En Enez-Sylt on-me bet o tremen va vakañsoù ». Dres ur c'h-Côte d'Azur eo an enezenn evit an Alamaned. Marie-Chantale Pariz a blij 'bominapl Saint-Tropez dezhi, met he c'heniterv eus München pe Hamburg hi a zo sot gant Enez-Sylt. War ar c'h-Côte d'Azur-se avat n'eus nemet Alamaned o tremen o vakañsoù : 99,2 % hervez ar sondadegoù ; Suisiz hag Aostrianed a ya da ober ar peurrest, da lavarout eo n'eus nemet alamanegerien eno. N'eo ket souezhus diwar neuze eo en alamaneg e vez embannet penn-da-benn ar paperennoù bruderezh evit an douristed !

Peur e krogas Enez-Sylt da vezañ ken brudet ? Ken abred hag e kreiz ar c'hantved diwezhañ e stagas vakañsourien binvidik da erruout, d'ar c'houlz ma oa krog ar vedisined da aliañ aer yac'h ar mor bras evit pareañ kleñvedoù 'zo. Met war-lerc'h ar brezel-bed diwezhañ eo e teredas stank ar vakañsourien alaman. Pa zeraouas ekonomiezh ar Republik nevez da vont madik a-walc'h en-dro er bloavezhioù 1950 eo eno, e norz pellañ ar vro, e kustume pennoù-bras 'zo tremen o vakañsoù en o eiltiez, tud evel PDG labouradegoù Krupp, pe pennrener ar gelaouenn " Der Spiegel ". Tud evelto eo a voe anezho gwir lañserien ar St Trop " giz Europa an Hanternoz. 25.000 annezad he deus an enezenn hed-ha-hed ar bloaz, met 100.000 a dud a vez e-pad an hañv !

Estreget an dra-se izo avat. An traezhennoù « FKK » a ranker derc'hel kont anezho evit kompren brud Enez-Sylt. Petra an diaoul eo un draezhenn « FKK » ? Ul lec'h ma c'heller mont noazh-ran hed-ha-hed anezhañ. « FKK » a dalvez kement ha : « Freikörperkultur », da lavarout eo : « embregerezh-korf dizalc'h ». An anv iskis-se a oa bet lakaet diouzh ar c'hiz gant strolladoù yaouankizoù, er bloavezhioù 1920, evit chom hep feukañ tud 'zo. Chomet eo er yezh abaoe. Berzh mat en deus graet an « embregerezh-korf » mod nevez, rak an traezhennoù « hep » hag an traezhennoù « gant » (...slipoù-kouronkañ) ez eus kement eus an eil re hag eus ar re all hiziv an deiz.

284

Ar bromotourien en o bleud

A bep seurt promotourien a ouenn uhel o deus lakaet arc'hant bras evit arat a-feson an dachenn. Oteliou vue-sur-la-mer, pizzerias, bodegas, cafeterias, boestoù-noz « in », ha me 'oar, ez eus forzh pegement anezho. Met mont a reas ar soubenn da drenkañ da vat etre tud Enez-Sylt ha re an arc'hant bras pa lakaas en o fenn promotourien Stuttgart sevel un tour, ouzhpenn kant metr dezhañ ha mil ranndi bennak e-barzh. Hag evel ma vezer boas da ober e micherioù a seurt-se eo un anv a-zoare an hini a oa bet dibabet : ATLANTIS, na petra 'ta ! Sevel a-du a reas kuzul-kêr Westerland, hag ivez melestradurezhioù bras länder Schleswig-Holstein. Ur vaouez avat, Klara Ems hec'h anv, a yeas droug enni pa glevas keloù eus an torfed a oad o prientiñ sioul-sibouron. Un ur ober un nebeut sizhunvezhioù hepken eo ouzhpenn an hanter eus tud an enezenn o doa sinet a-enep da raktres ar bromotourien. « Bürgerinitiative » a raed eus o emsav, da lavarout eo : « ar sitoyaned oc'h ober »... hag an tour pompadus ne voe ket anezhañ rak kilañ o doa ranket ober ar pennoù bras. « Afer Atlantis » a reer eus an darvoud-se a vez sellet outañ evel unan eus brasañ trec'h ekologourien Bro-Alamagn.

« Eiltiez o deus amañ ur bern politikerien a vicher », a lavare din ur Syltad, « ... ha tud a bep seurt kostezennoù politikel a zo anezho. Hag o kenlabourat gant ar gouarnamant a vremañ pe a-enep a-grenn dezhañ e vefent, ne ra forzh ! Amañ emañ o eiltiez. Amañ e teuint en-dro da vare vakañsoù Nedeleg evit frikoioù bras fin ar bloaz ! »

N'eo ket forzh piv a c'hell prenañ un ti pe un eilti en Enez-Sylt ! Anzav a rankan diouzhtu eo brav meurbet tiez kozh an enezenn. Mogerioù brikennoù gwennrazet a vez dezho alies, toennoù soul warno, letonennoù dirazo, ha mogerioùigoù mein tro-dro d'o liorzhoù, un tammig diouzh feson ar c'haeoù a weler en-dro d'ar parkeier a-hed arvor pellañ ar broioù keltiek (... 'fin, e-giz ma vezent c'hoazh a-raok abadennoù tourtañ an adlodennañ evel just !). Bourk Keitum dreist-holl am eus kavet kaer, rak tiez giz ar vro a vez gwelet a bep tu d'ar ruioù. Strewet int dindan bodadoù gwez, pezh a zo gwall zic'hortoz en Enez-Sylt gant an dibaot ma vezont. N'eus ger resis ebet zoken e frizeg an hanternoz evit lavarout « ur wezenn » ! Ar ger a gustum ar frizegerien ober gantañ a vez implijet evit « brouskoad » ivez !

285

Atantoù kozh a c'hell bezañ eus an tiez-se, pe alies ivez kenkizioù bet savet gwechall gant ofiserien-a-vor a yae da redek ar broioù pell, rak un douar a voraerien a zo bet eus an enezenn. Ouzhpenn kant milion a lurioù kozh e vez gwerzhet un ti-soul hiziv an deiz ! Promotourien 'zo a zo bet louarnik a-walc'h zoken evit sevel tiez nevez giz gwechall ; lodennet e vez ar re-mañ da c'houde e div pe deir ranndi. War-dro ur milion a lurioù kozh e vez feurmet pep a apartamant « doenn soul » evit ur mizvezh e-kreiz an hañv !

Nag a gouerien, gwerzhet ganto ti-soul o zadoù-kozh da vakañsourien binvidik, o deus keuz bremañ d'o hêrezh kollet, hag int-i o chom e-kichen en un ti modern ha dibersonel ! « Ur bobl a borzhierien omp deuet da vezañ ! » a lavare ur Syltadez d'ur c'hazetenner a oa ouzh he goulennata (3).

Trubuilhet bras e vez an darn vrasañ eus pobloù minorezel Europa ar C'hornog gant an touristelezh abalamour d'o endro bevañ yac'hoc'h ha disheñvel. Menegomp berr-ha-berr : Okitania hag he c'h-Côte d'Azur, Katalonia hag he c'h-Costa Brava, Euskadi hag he c'h-Côte Basque, Breizh hag hec'h aodoù d'Emeraude, de Jade, de Granit rose ha me 'oar. Betek er menezioù uhel n'eus repu ebet ken : Romanced Bro-Suis ha Ladined an Dolomitoù a vez aloubet o douaroù bep goañv gant tud ar c'hêrioù bras deuet da « ober ski ». War an inizi, pell pell diouzh an Douar Bras n'eo ket gwelloc'h an afer : Korsika, *l'Ile de Beauté* ha *Sunny Jersey*...

Anvioù flammik a seurt-se a zo boutin d'ar broioù sujet. Anvioù all, ha n'int ket ken lirzhin siwazh, a zo boutin dezho ivez, evel « dilabour », « koñpleks a izelded », « emnac'h », « emlazh etnikel », hag a alkoolegezh ».

(3) Jean Launay : Sylt, une ile dans le vent - « Géo Nn 5, miz Gouere 79.

286

Ma lakaer ar Schleswig-Holstein keñver-ha-keñver gant rannvroioù all Bro-Alamagn e weler ez eo el lander-se e vez an nebutañ a arc'hant gant an dud, hervez ar studiadennoù ekonomikel (pezh ne sinifi ket e vefent paour-razh evel just !). Hag er Schleswig-Holstein, pehini eo ar c'horn-bro a zeu e lost ar statistikoù ? Friza an Hanternoz an hini eo, evel dre zegouezh ! Ganti e teu ar maout ivez evit pezh a sell ouzh niver an dud o vervel diwar evañ dreist-muzul. Studiet eo bet ar gudenn gant an Dr. Hans Christian Nichelsen. Hervezañ e vefe ul liamm e Friza an Hanternoz etre alkoolegezh un niver bras a dud ha mougadur disheñvelderioù etnikel o bro (4).

Atantoù evel inizi e-kreiz ar mor

An dilabour o deus gouzañvet atav Norz-Friziz. Da Amerika e kustument mont da glask fred. Er Stadoù-Unanet eo emañ kalz eus o diskennidi o vevañ. Bev-birvidik eo chomet eñvor bro o c'havell en o zouez. Forzh pegen treut ha melkonius e vefe Friza an Hanternoz eo don karantez ar bobl frizat evit he bro, evel m'en diskouez an 370 a dud a zo o chom en inizi Halligen.

Pelec'h emañ an inizi-se ? A-hed aodoù Friza an Hanternoz emaint, e su

Enez-Föhr hag Enez-Amrum. Dek enezennig a zo. N'eo ket « enezenn » ar ger a dlefed implijout, met n'eus ger all ebet nag e galleg nag e brezhoneg evit treiñ resis ar ger norz-alamanek « hallig »; Un « hallig » a zo ur gorread paludoù gant peurvanoù geot sall warno. Pa vez reverzhioù bras ha gwallamzer war un dro e c'hell bezañ goloet a zour an darn vrasañ eus ar peurvanoù. Ken dañjerus e c'hell bezañ ar c'houlz-se eus ar bloaz m'o deus savet ar gouerien turumelloù artifisiel a-us da live ar mor, abaoe derou ar c'hantved tremenet, evit diwall o ziez, o c'hrevier hag o c'hreñchoù.

(4) An Dr. Noël Bothorel eñ ivez a gave ar memes displegadenn da gudenn an alkoolegezh e Breizh : un enebiezh etre daou sevenadur, dreist-holl p'emañ an eil o waskañ war egile (s.o. " Contribution de l'étude de l'inadaptation sociale du Breton " e-barzh " Ar Vro" Nn 24). Moarvat en deus an divrezhonekaat lakaet ur maread eus hor c'henvroidi d'en em santout evel estrenien en o bro hag e-giz-se eo bet digoret frank dezho dorioù baradoz ar « startijenn ». Met gwall denn eo memes tra kavout un displegadenn nemetken d'an tech-se. E Breizh-Uhel e vez ken prizet all ar boutailhadoù hag ar barrikennadoù daoust dezhi da vezañ bet divrezhonekaet pell a-raok mac'homerezh ar sistem gouarn gall. Diouzh un tu all, tud Okitania n'int ket ken troet-se d'ar boeson ' daoust d'o yezh ha d'o sevenadur da gouezhañ e truilhoù ivez. Daoust ha pobloù Hanternoz Europa a vefe techet da evañ muioc'h a alkoool eget re ar c'hreisteiz abalamour d'ar wall-amzer ? Pe troet e vefent muioc'h d'an huñvre hag e vefe ar boeson ar gwellañ hent evit tizhout ar bed burzhodus-se ? Hep mar na marteze, ez eo ar pobloù keltiek en o fezh, mailhed war an evajoù mezevellus. Hervez Pearce Bailey en un dornlevr psikiatriezh bet embannet e 1955 ha meneget gant an Dr. Bothorel en e studiadenn, eo e-touez Skosiz, Kembreiz hag o diskennidi e vefe ar vezventi en he gwashañ er Stadoù-Unanet. War dachenn ar chopinata ez a mat-kenañ en-dro an darempredoù etrekeltiek ! « Guinness is good for you » ha « Santa Rosa, l'ami de l'estomac » a zo breur ha c'hoar e broioù ar Gelted !

287

Kilañ spontus o deus graet aodoù Friza an Hanternoz ha gorread hec'h inizi - dreist-holl hini an dek « hallig » - a-hed ar c'hantvedoù. E 1362 da gentañ. D'ar 17 à viz Genver er bloaz-se, e voe lonket ar pep brasañ eus inizi Friza an Hanternoz gant ar «Manndränke», da lavarout eo ar « veuzadeg veur ». Mervel a reas al lodenn vrasañ eus ar boblañs hag eus ar chatal. Mantrus e voe ivez beuzadegoù 1634. Abaoe, pa vez tre gant ar mor, e weler bemdez gorreadoù divent a draezh ha bouilhenn mesk-ha-mesk etre an dek « hallig » e-lec'h ma oa douar gwechall. « Watt » a reer eus ar gorreadoù-se. Kaoz a zo d'ober un dachennad gwarezet eus ar « Watt » abalamour d'an anevaled a vez kavet warnañ. Reuniged a zo da skouer, pezh a zo gwall rouez en Europa. Perak o deus kilet kement-se aodoù Friza an Hanternoz ? Ma ! ur vro astennet a-rez ar mor an hini eo, met estreget an abeg-se a zo. An dud o-unan o deus graet o gwalleur, war a seblant. E-pad pell amzer o deus Norz-Friziz turiet an douar evit tennañ tammoù taouarc'h dioutañ. Devet e vezent da c'houde a-benn dastum an holen a oa e-barzh hag e werzhañ. A-hed ar c'hantvedoù e oa bet aodoù evel-se. Hag un deiz, d'ar 17 a viz Genver 1362...

Bez' e c'hell ar mor pignat betek penn an turumelloù. Aon bras o doa bet tud an Halligen e 1962. Freuzet e oa bet dorioù ha prenestroù, hag ar pennoù-chatal a varvas a gantadoù. Un dourenn flaerius, temz-ludu, bouilhenn hag hañvouez mesk-ha-mesk enni, a yeas e-barzh an tiez hag a saotras pep tra. Dour ar puñsoù ne oa ket mat ken da evañ zoken ! War-lerc'h ar gwallzarvoud-se e tivizas gouarnamant Bro-Alamagn e rankfe pep ti kaout un « estaj-surentez » hervez al lezenn !

Aon bras o doa bet an eneziz e miz Genver 1976 ivez. En Enez-Hooge ez eas an dour sall betek e-barzh ar chapelig luteriat - an hini vihanañ 'zo e Bro-Alamagn. Freuzet e voe an nor gant unan eus bankoù al liorzha a oa bet dibradet gant nerzh ar gwagennoù ha stlapet outi evel ur maout-brezel. E-barzh ar vered e voe diframmet ur maen-bez a-ziwar an douar ha taolet ouzh hini an amezeg tostañ !

288

Daoust d'an dañjer, ne fell ket da dud an Halligen mont da vevañ en ul lec'h siouloc'h. E mod ebet ! Hini ebet eus ar familhoù ne asantas kuitaat an inizi war-lerc'h gwallzarvoudoù 1962 ha re 1976. Chom difrom-kaer dirak an tourmant, bezañ prest atav da adsevel oberoù diskaret gant droukrañs an neñvoù, setu temz-spered Friziz an inizi. Selaouomp displegadenoù pastor luteriat Enez-Hooge hag eñ o respont d'ur c'hazetenner a oa ouzh e c'houlennata (5) :

« Amañ, pa vez an dour o vont betek ar sal-degemer, e traoñ an ti, e pignomp war ur gador. Ma kendalc'h da sevel uheloc'h, neuze e pignomp war un daol. Uheloc'h c'hoazh ? An armel an hini eo a bignomp warni. Ha ma kendalc'h an dour da sevel uheloc'h c'hoazh eo en estaj kentañ e kav tud an Halligen repu ennañ.»

Netra aesoc'h neketa !...

Frizeg an Hanternoz, yezh nesañ d'ar saozneg

A-hed an aodoù frizat eo edo o chom hendadoù ar Saozon. Treuziñ Mor an Hanternoz o doa graet ur maread anezho e derou ar Grenn-amzer evit ober o annez e Breizh-Veur. Tost eo chomet ar saozneg ouzh ar frizeg. Boas e vezer da lodennañ ar yezhoù germanek e teir rann. Er rann gentañ emañ an alamaneg hag an izelvroeg, an eil ar saozneg hag ar frizeg hag en deirvet ar yezhoù skandinavek. Kavet e vo, amañ da heul, un nebeut gerioù e-giz standilhonoù :

Brezhoneg	Saozneg	Frizeg	Izelvroeg	Alamaneg
ni	us	ús	ons	uns
formaj-laezh	cheese	tsiis	kaas	Käse
alc'houez	key	kaei	stleutel	Schlüssel
bezañ bet	have been	ha west	ben geweest	bin gewesen
daou zañvad	two sheep	twa skiep	twee schapen	zwei Schafe

(5) Philippe Ganier-Raymond : Les terres du déluge - « Géo» Nn 9, miz Du 1979.

289-290

Friseg an Hanternoz a zo tostoc'h c'hoazh ouzh ar saozneg eget hini an Izelvroioù. Da skouer, setu penaos e vez lavaret : lun, meurzh, merc'her, yaou ha gwener e norz-frizeg. Etre krommelloù e verkan an distagadur am eus klevet :

MUUNDAI (moundai), TIISDAI (tisdai, gant un « i » hir), WINGSDAI (vinchdai), TUIRSDAI (tuirsdai), FRIIDAI (fridai, gant un « r » rollet tost tost ouzh an dent). An dibennoù am eus klevet gant an distagadur « i » e-lec'h « ai » ivez.

N'eus nemet 10.000 bennak a dud a zo gouest c'hoazh da gomz frizeg an hanternoz diwar an 60.000 a c'heller sellout outo evel Norz-Friziz. El lec'hioù-mañ eo e vez klevet c'hoazh kaozeal norz-frizeg : e kuzh-heol Enez-Föhr (war-dro 3.000 a dud), e Enez-Sylt (war-dro 2.000 a dud, er sav-heol dreist-holl), e Enez-Amrum, ha, war an douar bras, tro-dro da Niedebüll. En inizi Halligen eo marv frizeg an hanternoz e-giz yezh kevredigezhel, daoust da dud a-hiniennoù da anavezout anezhi.

Dek rannyezh a vefe e frizeg an hanternoz, ha bras a-walc'h eo an disheñvelderioù a zo etrezo evit lakaat diaes an dud pa fell dezho tremen eus an eil d'eben, ha dreist-holl eus rannyezhoù an douar bras da re an inizi. Ma 'm eus komprenet mat n'eus c'hoazh skritur unvan ebet a vefe implijet a-zevri. Gant an doareoù-skrivañ rannyezhel eo e reer evit an embannadurioù. Stabilaat hag eeunaat skritur PEP RANNYEZH a seblant bezañ bet pouezusoc'h betek bremañ evit yezhourien ar vro eget klask goveliañ un norz-frizeg unvan. Atav e vez resisaet war al levrioù-deskiñ, ar c'hasedigoù hag ar geriadurioù pehini eo ar rannyezh a vo kavet e-barzh, ha ken gwir all eo evit an embannadurioù nevez.

Ur pegskrid da lakaat war ar c'hirri-tan hag a zo bet prientet nevez 'zo gant an emsav norz-frizat, a ziskouez ar resped-se evit ar rannyezhoù. « WE

SNAAKE FRIISK » a weler merket warnañ gant lizherennoù bras, da lavarout eo : « komz a reomp (norz-)frizeg ». Met dindan, gant lizherennoù moanoc'h, e kaver anvioù all, ar re a vez implijet gant an norz-frizegerien al lec'h-mañ-lec'h evit envel o yezh : « freesk, frisch, fräisch, freesch, sölring, fering-ömrang, halunder »...

291

Ur stourm o vont war-raok

Diseblant e chom an darn vrasañ eus Norz-Friziz ouzh dazont o yezh hag ar frizegerien a-vihanik n'int ket kalz tommoc'h eget ar re all. Daoust d'o « c'harantez-vro » da vezañ don ez eo gwan an « emskiant a vroad » en o zouez. Evel e Breizh eo bet kaset bravik en-dro ar « c'houez-empenn » eno ivez gant ur stad c'halloudus. Koulskoude ne gav ket din tamm ebet e vefe marv an tan en holl galonoù.

Div gevredigezh a zo bet savet war-lerc'h ar brezel diwezhañ evit difenn gwirioù etnikel ar vro : an « Nordfriesische Verein für Heimatkunde und Heimatliebe » hag ar « Foriining for nationale Friiske ». Izili ar gevredigezh kentañ a c'houlenn e vefe anavezet gant ar gouarnamant gwirioù SEVENADUREL Friza an Hanternoz. An eil kevredigezh avat a sell ouzh Norz-Friziz evel ur bobl disheñvel diouzh an Alamaned ha fellout a ra d'hec'h izili gounid un EMRENEREZH DIABARZH evit ar vro ; evit se e kenlabouront gant strolladoù minorelezh danat ar Schleswig, da vare ar votadegoù da skouer.

Un tamm kaoz am eus bet gant unan eus izili ar Foriining, an Ao. Ommo Wilts, yezhoniour a-vicher e skol-veur gKiel. « Da gentañ, emezañ, ne oa frizeg an hanternoz nemet un dachenn-studi evidon... Met tamm-ha-tamm n'am eus ket sellet ken outañ evel ouzh un dra varv. Ha setu me krog da zeskiñ da vat ar yezh evit kaozeal anezhi ha difenn anezhi. »

Pell eo aet an Ao. Ommo Wilts gant e hent abaoe. Levrioù-deskiñ, geriadurioù ha kasedigoù en deus aozet evit an deraouidi hag evit bugale skolioù Enez-Sylt, gant skoazell frizegerien a-vihanik.

Kentelioù noz a vez bep bloaz evit deskiñ ar yezh. Chwec'h klas a oa evel-se e Enez-Sylt warlene. Hag e-barzh ar skolioù, penaos emañ kont ? Daou gelenner war frizeg an hanternoz a zo en Enez-Föhr : unan anezho el lise hag egile en ur skol kentañ derez. Ur skolaerez a zo ivez en Enez-Sylt. Un troc'h kaoz am eus bet ganti. Merc'h ispiser bourk Keitum (Fg : Kairem) eo hi ha war-dro pemp bloaz ha tregont eo. Hannelore Schaarschmidt-Runge eo hec'h anv.

« Ar frizeg eo va yezh kentañ, emezi. N'eus bet komzet nemet friisk atav etrezomp e ti va zud. »

292

Kelenn a ra frizeg pevarzek eurvezh bep sizhun. Met n'eo ket a-walc'h dezhi evit kaout un implij-amzer klok. Rankout a ra ober eurvezhioù embregerezh-korf ouzhpenn. Bugale dek hag unnek vloaz eo ar re a zo o teskiñ ar yezh ganti. Met ret eo dezhi goulenn aotre ar familhoù a-raok kregiñ gant he rummad kentelioù. Strewet eo hec'h eurvezhioù frizek etre peder skol hag eizh klas !

« Dre gomz eo e vez kaset en-dro ar c'hentelioù ganeoc'h ? am eus goulennet ouzh Hannelore.

- Dre gomz, ya. Met lenn ha skrivañ a zeskan d'ar vugale ivez.

- Ha n'eo ket re ziaes deoc'h ober war-dro ar c'hentelioù frizek abalamour d'an dizurzh a zo etre an doareoù-skrivañ ?

- Eo ! diaes eo ! E-giz diskoulm d'ar gudenn e heulian ar gwellañ ma c'hellan ur geriadur kozh e rannyezh Enez-Sylt hag a gavan mat-kenañ.

- Ha kavout a ra deoc'h en deus c'hoazh frizeg an hanternoz un dazont

bennak dirazañ ?

- En diasur emañ. Re abred eo evit lavarout resis. War-raok emañ an traoù o vont ganeomp abaoe un nebeud bloavezhioù met n'omp ket niverus a-malc'h c'hoazh.

- Ha petra a vefe ret mat ober evit saveteiñ ho yezh ?

- Da gentañ lezel ar vugale o deus kroget da zeskiñ frizeg ganin da genderc'hel er c'hlasoù war-lerc'h. Ya, an dra se eo a vefe d'ober da gentañ. »

Deuet e oa ur vignonez da Hannelore e-barzh an ti, ha deuet e oa da azezañ ouzh taol ganeomp. He mab trizek vloaz a oa ganti ivez.

« Friisk a gomzan gant Hannelore bep tro ma vezan asambles ganti, emezi. Mignonezed omp abaoe ar skol vihan. Kalz tud kenoad ganeomp a zo bet savet e frizeg evelomp-ni er bloavezhioù war-lerc'h ar brezel diwezhañ. Met bremañ eo echu.

- Perak 'ta ?

- Ma ! N'ouzon ket re vat me ! Ne wele ken an dud da betra e servijfe ar frizeg d'o bugale, setu...

- Hag ho mab ? Ha komz a ra frizeg eñ ivez ?

- Ya vat ! A-raok mont d'ar skol vihan ne ouie nemet frizeg. Met da c'houde ez eus bet cheñchet penn d'ar vazh rak bugale all ar skol ne ouient ket komz friisk. »

Ne seblante ket he mab bezañ kement-se a-du ganti. « Kompren a ran, mamm, met n' hellan ket kaozeal...

- Alato ! Kaozeal a rez ivez !

- Ne ran ket avat ! »

Alamaneg eme o teskiñ er skol. Ha galleg ha saozneg.

293

Displeget ez eus bet din ivez pegen levezonet eo bet buhez poblañs Enez-Sylt gant donedigezh ur bern repuidi eus Reter Alamagn e fin ar brezel diwezhañ. O tec'hout kuit dirak armeoù Stalin edont. Dre ma oant genidik eus aodoù ar mor eo gant o bigi-pesketa ez erruent alies. E skolioù 'zo e oa niverusoc'h o bugale eget re familhoù an enezenn. N'eo ket a-zindan zivin diwar neuze m'en deus kilet kalz ar frizeg war-lerc'h an darvoudoù-se.

" Nordfriisk Instituut "

(Institut Friza an Hanternoz)

kreñvlec'h yezh ha sevenadur ar vro

E 1949 an hini eo eo bet diazezet an ensavadur-se. Dastum kement tra a vez embannet diwar-benn Friza an Hanternoz (douaroniezh, ekonomiezh, naturoniezh, yezhoniezh, h.a.) kas war-raok labourioù-enklask, harpañ ar c'helenn-frizek, embann levrioù hag ur gelaouenn, setu lod eus palioù an Institut. Met n'eo ket tamm ebet un ensavadur ofisiel a zo anezhañ. Unan prevez an hini eo. E Bräist/Bredstedt (6) emañ e vurevioù. Eno eo am eus kejet gant unan eus renerien an Institut, an Ao. Reimer Kay Holander. Goulennet am eus outañ penaos e veze kaset en-dro an ensavadur. Setu e zisplegadurioù.

350.000 a z-deutschmark, setu well-wazh an arc'hant a vez implijet bep bloaz gant " Nordfriisk Instituut ". Eus pelec'h e teu ? Sikourioù foran a zo dreist-holl : digant länder Schleswig-Holstein, digant Kreis Nordfriesland,

digant Kêr-vBraist/Bredstedt hag ivez digant kevredigezhioù danat, rak o kenlabourat ganto emañ an emsav frizat. An holl sikourioù-se a ya d'ober war-dro 70 % eus an arc'hant a erru e kefioù an Institut. Skodenn-enrollañ e izili ha profoù mignoned Friza an Hanternoz a ya d'ober ar peurrest.

650 ezel en deus an Institut - en o zouez ur c'hantad bennak e « rann ar re yaouank ». E Friza an Hanternoz an hini eo emañ an hanter eus an izili o chom. E broioù estrañjour eme ar re all (Alamagn, Izelvroioù, Stadoù-Unanet, h.a.). Tri den gopraet a labour evit an Institut ; o micher eo. Daou zen all a vez goulennet o skoazell a vare da vare.

(6) Bräist e frizeg ; Bredstedt en alamaneg.

294

Ur gelaouenn a studi a vez embannet bep tri miz gant an Institut. " Nordfriesland " eo he zalbenn, ha dindanañ e weler ar gerioù displegañ-mañ : « Zeitschrift für Kultur - Politik - Wirtschaft », da lavarout eo : « Kelaouenn evit ar Sevenadur, ar Politikerezh hag an Ekonomiezh ». En alamaneg eo e vez embannet an darn vrasañ eus ar pennadoù-skrid. Pajennadoù e norz-friseg a vez koulskoude. Bep bloaz e teu ivez un dastumad studiadennoù a-zindan ar wask a reer " Nordfriesisches Jahrbuch " anezhañ. Ar re yaouank diouzh o zu a embann un deziadur, " Jarling " e dalbenn (" Ar bloaz-mañ ") ; e yezhoù ha rannyezhoù minorezel ar c'hornad eo e vez aozet da lavarout eo e friseg an hanternoz, e plattdeutsch (7) hag e platt-daneg (8).

(7) Evel-se e vez anvet rannyezhoù norz Bro-Alamagn hag a zo disheñvel tre diouzh ar yezh ofistel (pe hochdeutsch). Izel-sakseg a reer ivez anezho. Er Grenn-amzer e tiwanas ul lennegezh e rannyezhoù norz Bro-Alamagn, er porzhioù kenwerzh. Met war o diskar ez ejont adalek troidigezh bibl Luther e hochdeutsch er 16^{vet} kantved. Un nebeut kevredigezhioù a zo o strivañ evit difenn an izel-sakseg ; un doare-skrivañ unvan a zo bet diazezet ganto hanter vloaz 'zo. Met betek-henn ne seblant ket bezañ bet efedus-tre o strivoù. Mont a ra Guy Héraud betek strivañ kement-mañ : « N'eus netra heñveloc'h ouzh lec'h an izel-sakseg e Bro-Alamagn eget hini an okitaneg er Frañs. Div zachenn vras a risparti pep hini eus an div stad, ha klotañ a reont evit meur a dra gant poblañsoù hag endroioù-bevañ disheñvel a-walc'h » (" L'Europe des Ethnies ", p. 129).

(8) « Platt-daneg », da lavarout eo rannyezh eus ar Jutland, disheñvel-tre diouzh ar yezh unvan. Ur yezh aes-kenañ da zeskiñ e seblant bezañ an daneg evit pezh a sell ouzh he yezhadur, met torr-penn evit he skritur, he distagadur ha kudenn gasaüs he rannyezhoù. Setu pezh a lennan e-giz digorskrld en ul levrig-deskiñ evit an deraouidl : « Diaes kenañ e vez da dud Kopenhagen o c'henvroidi eus kreisteiz ha kuzh-heol ar Jutland, eus Enez-vBornholm hag eus kornbroioù all. An treloedachoù hag ar parlantoù rannvro ez eus 57 anezho e Bro-Danmark » (" Danois sans peine " - Host hag e vibien emb., Kopenhagen).

295-296

Souezhet bras e vezer pa seller ouzh al levrioù aozet gant an Institut evit ar vugale. Unan anezho, un albom kaer, ez eus c'hwec'h embannadur anezhañ e c'hwec'h eus ar rannyezhoù ! Unan all, istor *Sambo bihan*, troet diwar ar saozneg (" The story of Little Black Sambo ") a zo bet moulet pemp gwech, e pemp rannyezh disheñvel - en o zouez an halunder, parlant Enez-Helgoland, hag a vez komzet gant 250 a dud nemetken (ha pet a vugale ?...). Al lañs en deus bremañ ar " Paotrig Sambo " war ar " Paotrig Bara-Mel " ha ne oar eñ nemet «KL^{Tañ}» ha «gwenedegañ» (9) ! Un nebeut levrioù divyezhek a gaver ivez er c'hatalog, gant pajennadoù e plattdeutsch hag en ur rannyezh frizek tal-ouzh-tal. Kement-se a ziskouez pegen tenn eo kudenn an eeunañ er yezh vihan-se. Ar yezhourien ne seblantont ket gouzout re vat penaos kavout o zu evit unvaniñ an doareoù-skrivañ. Dres evel ma vefent paket en ur roued !

Tro am eus bet da zisplegañ e lec'h all pegen kasaüs e vez an disheñvelerioù rannyezhel evit an embannadurioù romankek e Bro-Suis (10). Pemp rannyezh a zo eno ha pemp doare-skrivañ. Met ne vez graet nemet gant an daou anezho a vez ar muiañ implijet evit an darn vrasañ eus an embannadurioù. Din-me

da c'houzout, diwar neuze, ez eo frizeg an hanternoz an hini a zeu ar maout gantañ evit pezh a sell ouzh azeulerezh an disheñvelderioù-moulañ.

Friziz : an dud prederiet hag ar re ziseblant

E Bräist/Bredstedt em eus kejet ivez gant Winfried Medler, hag eñ studier, implijet e-pad an hañv 79 gant « Nordfriisk Instituut » e-giz sekretour. An douristelezh eo e zanvez-studi er skol-veur. E Bräist/Bredstedt emañ e familh o chom ivez.

Ha ni krog da zivizout diwar-benn hor broioù :

« Gant da dud eo ac'h eus desket komz frizeg ?

- N'am eus ket ! tamm ebet ! Amañ e-barzh an Institut eo am eus desket. Amañ eo e komzan frizeg ivez, rak ar frizegerien a-vihanik n'eus ket anezho ken e Bräist koulz lavarout.

(9) Titl ul levrig troet diwar ar saozneg hag embannet nevez 'zo gant " Skol ar Merc'her " gant ar skridoù e KLT hag e gwenedeg kichen-ha-kichen.

(10) " Ar Romanched, ur bobl vihan en argoll " (« Dihun », miz Ebrel ha miz Mae 79). Met difoutre e vez alies ar paotr-mouler a ra war-dro « Dihun » ha distreset e oa bet kalz traoù gantañ : gerioù c'hwennet, tammoù frazennoù skubet, lizherennoù o vont da c'hoari « lamm-choug-e-benn » (da skouer : « Kemper » e-lec'h « Kembre » !) hag all, hag all !

297

- Hag abalamour da betra ac'h eus desket ?

- Evit abegoù personel a-walc'h e gwirionez...

- Ha Friziz eo da dud ?

- Ya vat ! met Alamaned a spered int, hag ez int. Ha penn-kil-ha-troad zoken !

- Ha petra a soñjont eus da strivoù evit komz frizeg ?

- N'int ket chalet gant an dra-se me 'lar dit ! Ha va c'hoar ivez ne ra ket foutre ! Klasket am eus deskiñ un nebeut gerioù dezhi, met ne fell ket dezhi ! Pas an disterañ hini, klevout a rez ! Netra d'ober ! E-barzh un ospital emañ-hi o labourat, ha war-dro bugale emañ oc'h ober. « Da betra an diaoul e servijo din ar frizeg em micher ? » a respont va c'hoar din.

- Ha komprenet e vezez diardoù gant an holl frizegerien a-vihanik bremañ ?

- Ne vez ket aes atav din, nag a dost ! Rannyezh an Douar Bras an hini eo am eus desket e-barzh an Institut - ar « Mooringen frisch » pa lavarin mat, ha bec'h a vez warnon pa gaozean gant tud an inizi. Ya, tenn eo din.

- Hag ar gerioù teknek, re ar vuhez modern, penaos e teuit a-benn d'en em zifretañ ganto ? Ijinet e vezont ganeoc'h pe ?...

- Diwar an alamaneg e tennomp anezho dre vras. Met ijinañ a reomp ivez. Sell, hiziv em eus ijinet unan va-unan. O pegañ paperennoù ar chomlec'hioù war goloioù-lizher e oan e-barzh ar burev hag ur mekanik ispisial a oa ganin. Frrssh... frrssh... a rae va mekanik, te 'oar. Ha setu a-greiz tout ur ger nevez o tont war va spered evit envel anezhañ, dres diwar an trouz-se a oan o klevout... »

Ankounac'haet am eus avat peseurt ger en doa kavet evit envel e venveg-pegañ !

Prederiet bras eo Winfried gant kudenn an douristelezh ziroll en e vro. En ur weladenniñ Bräist/Bredstedt ganin en deus displeget din e venozioù.

« Treuziñ hon douaroù, tizh ha mall warno, setu pezh a ra an darn vrasañ eus an douristed. N'ouzont ket zoken ez eus ur vro zisheñvel eus an hini emaint o treuziñ, Friza an Hanternoz hec'h anv ! Nann, n'ouzont ket an dra-se ! Ne welont netra. En o soñj n'eus netra emañ da vezañ gweladennet ! Tizh ha difrae atav ! Ha diwall diouto pe e vi flastret evel un touseg gant o gweturioù flamm ! Aozañ beajoù-dizoleiñ evit ar vakañsourien digor a spered, setu pezh a garfen ober e Friza an Hanternoz pa vo echu va studioù ganin er skol-veur. Ur sizhun bennak e padfe ar beajoù-se. Ha neuze e c'hellfe an dud lavarout : « Bremañ ec'h ouzomp petra eo Friza an Hanternoz ; ur vro diouti hec'h-unan hon eus dizoloet ». Ya, an dra-se eo am eus c'hoant d'ober. »

298

* * *

LENNADENNOÙ ALL :

E galleg :

Sylt, une ile dans le vent, gant Jean Launay ha Tassilo Trost. -

" Géo " Nn 5, miz Gouere 1979.

Les terres du déluge (diwar-benn an inizi Halligen), gant Philippe Ganier-Raymond - " Géo " Nn 9, miz Du 1979.

De l'Elbe à la Somme - L'espace saxon-frison des origines au X^e siècle, gant Eric Vanneufville, Amiens 1979 (Embannadurioù pikardat " Eklitra ", 88 bis, rue Gaulthier de Rumilly, 80000 Amiens).

E saozneg :

Linguistic minorities in Western Europe, gant Meic Stephens -Gomer Press (Llandysul - Dyfed - Kembre) 1976. - « The Danes of South Schleswig » (P. 421-431) ha « The North Frisians » (P. 432-439).

Frisian Roundtable - " For Preservation of the Frisian Legacy - By and for Frisians and Friends of Friesland ". - Kelaouenn embannet peder gwech ar bloaz gant Roy C. Ketelsen, 2885 Roosevelt Ave., Bronx, Ny. 10465 (Stadoù-Unanet).

En alamaneg :

Nord friesland - " Zeitschrift für Kultur. Politik, Wirtschaft " - Kelaouenn embannet peder gwech ar bloaz gant " Nordfriisk Instituut ", Osterstrasse 63, D-2257 Bredstedt/Bräist (Alamagn ar C'huzh-Heol).

Die friesische Sprache - Levrig embannet en Izelvroioù dindan paeroniezh " Informationsamt Provinz Friesland ".

E brezhoneg :

Al Liamm Nn 27 : un niverenn gouestlet penn-da-benn da Friza, savet gant harp kenlabourerien " De Tsjerne ".

Skol Nn 2, gouestlet da gelennadurezh ar frizeg en Izelvroioù.

Skol Nn 6, gouestlet da gudennoù ar skolioù er Schleswig (meneget eo kudenn an norz-frizeg).

Al Liamm Nn 136 : « Keloù eus Friza », P. 369-372.

Gwynfor Evans

Kustum e vezer e Breizh da ziskouez Kembre evel ur seurt paradoz sevenadurel : e skolioù kentañ derez ar c'hembraegva ez eo ar c'hembraeg a zo yezh ar skol, ne lavarant ket e vez graet skol gembraek, lavarout a ran e vez graet skol e kembraeg ; kantadoù, ya kantadoù, skolioù-mamm a zo evit deskiñ ar yezh d'ar re vihan ; un dousennad skolioù eil-derez a zo, war ar marc'had, ha kevrennoù Skol-veur ivez, oc'h ober o labour e kembraeg. Ma skrivit e kembraeg d'ur servij ofisiel, e vo respontet deoc'h e kembraeg. Er burevioù, er bankoù, en tiez-post, e vez ganeoc'h an dibab : paperioù e kembraeg, ma fell deoc'h, lakaet war wel, deoc'h da gemer, e-kichen ar re saoznek. A-hend-all, pa 'z it d'ar bank pe d'ar post e c'hellit peurluviañ komz e yezh ar vro hep kudenn ebet ha n'eo ket ar stourmerien hepken a vez klevet o komz kembraeg el lec'hioù ofisiel-se. El lez-varn zoken ez eus tu da gaout barnerien gembraeger ha n'eo ket troourien.

Muioc'h a gembraeg ez eus er skinwel en un devezh eget n'eus a vrezhoneg en ur miz.

Koulskoude, n'eo ket a-walc'h. Abaoe bloavezhioù ez eo krog Kembreiz gant ur stourmad nevez, pouezus-bras : kaout ur chadenn skinwel e kembraeg penn-da-benn - ar bedervet chadenn, an hini a zo da vezañ lakaet hep dale da vont en-dro e Breizh-Veur. Gant gouarnamant al Labour Party so bet prometet reiñ ar chadenn-se : bez' e c'heller soñjal, pe lavarout, n'eo ket chomet strollad al Labour pell a-walc'h e penn ar gouarnamant evit seveniñ ar bromesa. E raktres-gouarnamant ar c'h-Conservative Party evit mouezhiadegoù 1979 e oa prometet ar chadenn ivez ; taolit evezh : ne oa ket un dra lavaret 'vel-se 'vel-se, diwar dremen, gant kas an helavarded, e fin ur brezegenn entanet hag entanus bennak : bez' e oa ur bromesa start, skrivet du war wenn e Diskleriadur-Gouarnamant an Doried. Gounezet o deus ar Virourlen ar mouezhiadegoù hag e miz Mae da heul, er Queen's Speech, e oa adc'hraet ar bromesa... Neuze oant peg-mat er stur, ha deut ur soñj nevez dezho : e miz Gwengolo e tisklerie an Ao. Whitelaw e oa bet studiet ar gudenn gant ar gouarnamant, ha disheñvel e oa al Lezenn war ar Skinwel kinniget da Gambr ar C'humunou diouzh ar pezh a oa bet prometet : d'ar skinwel prevez e vo roet ar bedervet chadenn, en ur c'houlenn ganto a reiñ un niver eurvezhioù dereat d'ar c'hembraeg ». Ul lezenn evel-se an hini eo a vo kinniget da asant ar Rouanez. Touellet eo bet Kembreiz.

300

N'eo ket ar wech kentañ dezho bezañ touellet, anat eo. Ur bromesa all a zo da skouer war roll al Labour Party abaoe amzer Keir Hardie, da lavarout eo abaoe a-raok ar brezel-bed kentañ : an emrenerezh evit Kembre. An dra-se ivez a zo bet disoñjet bewech ma oa al Labour e penn ar gouarnamant : ne veze komzet da vat eus an emrenerezh nemet pa oa ar strollad e-maez a c'halloud. Ur wech hepken ez eus bet gant Kembreiz ha Skosiz an tu da lakaat ar gouarnamant da blegañ : pa oa ganto 13 kannad, ha gant gouarnamant al Labour ur muiañ-mouezhioù eus 3, pe 2, pe zoken 1. Dleet o dije neuze lakaat ar gouarnamant da gouezhañ, ha gouezhañ en-dro, keit ha na vije ket bet roet dezho o goulenn. Kavet o deus Skosiz gwelloc'h, hag aet eo Kembreiz da heul, mont e-barzh stourmadegoù ar politikerezh saoz, ha derc'hel en e blas ur gouarnamant « Labour » a bromete an emrenerezh « evit warc'hoazh ». A-benn ar fin eo bet trec'het Skosiz ha Kembreiz e votadeg ar Parlamant gant tu kleiz al Labour ha tu dehou ar Virourien unanet-start er voterezh - Na ruz, na gwenn, Saizon hepken ! ha Rule Britannia ! - Distroadet int bet ivez, war un dro gant al Labour, er mouezhiadegoù bras, gant ar voterien kerseet.

Ar wech-mañ avat n'eus bet c'hoari politikel ebet. Kudenn ar bedervet

chadenn e kembraeg a oa bet studiet a-hed bloavezhioù gant nouspet aozadur, poellgor, komision ha kengor, degemeret e oa bet menoz ar chadenn gembraek gant an holl, kerkoulz gant ar gouarnamant-o-vezañ ha gant ar gouarnamant-da-vezañ. Torret eo bet ar bromesa gant ar re zo aet ar galloud ganto, setu holl. Bremañ, e lavar Kembreiz kement-mañ : diouzh he lec'h er skinwel e vo tonkadur ar yezh. Lavarout a reer zoken : hep ur servij skinwel klok e kembraeg, ne c'hell ket ar yezh chom bev. Ha siellet e vo an tonkadur-se gant al lezenn a vo, a-benn un nebeut sizhunvezhioù, ma'z eo degemeret gant Kambr al Lorded, kaset d'ar Rouanez da sinañ. Setu perak en deus Gwynfor Evans diskleriet e paouezo, d'ar 6 a viz Here, da zebriñ boued, hag e chomo hep debriñ boued, keit ha na vo ket roet da Gembre ar pezh a zo bet prometet dezhi. Rener ar Strollad Broadel eo Gwynfor Evans, bet kannad Kembre e ti ar C'humunou e-pad meur a vloavezh, d'am soñj an den brasañ e Kembre a vremañ goude Saunders Lewis. Gouzout a reer e vo, eñ, den d'e c'her. Mervel a raio ma c'hoarvez d'an Ao. Whitelaw, bet gounezet gantañ un doare brud evel dileuriad ar gouarnamant er C'hwec'h Kontelezh, en Iwerzhon an Norzh, ma fell deoc'h ; mervel a raio a lavaren ma c'hoarvez d'an Ao. Whitelaw chom hep kemañ e soñj.

Lavaret eo bet er c'hazetennoù e oa prest ar gouarnamant « da gemer ar riskl d'ober ur merzher » met ne blegfe ket d'ur « bennpellaourlezh dre-c'houzañv » !!! Koulskoude e c'houlenn an Times digant ar gouarnamant, en unan eus pennadoù-digeriñ an 12 a viz Eost, ma vo adwelet al lezenn emeur o kempenn : furoc'h e vefe d'ar gouarnamant chom hep kaout trubuilh e Kembre war an dachenn-se ivez, kement a drubuilh a zo dija gantañ war dachennoù all, politikel, kevredigezhel, arboellerezhel.

Rak krog eo an trubuilh : ar re yaouank a stourm en un doare feuls a-walc'h, ar re goshoc'h a ya da welout an dud uhel e karg, an Ao. Whitelaw da skouer, kantadoù ha kantadoù a dud a ziskleir, en ur lakaat o anv war rolloù embannet er c'hazetennoù, e vo nac'het ganto paeañ o skodenn-skinwel.

301

Bezeta a vezo, emañ Gwynfor Evans o vont da gregiñ gant un emgann diaes, pouezus evit Kembre, met pouezus evidomp-holl ivez. Bez' e tleomp sikour anezhañ. Goulenn a reer gant ar c'hevredigezhioù, ar strolladoù hag aozadurioù a bep seurt, gant an dud prevez kas ul lizher-klemm da :

Mr Whitelaw
Home Secretary
Home Office
London - Great-Britain

Unanet e tle bezañ an holl bobloù bihan en hevelep stourm. Trec'h Kembre a vo ives hon trec'h.

Frañsez Vallée
GRAND DICTIONNAIRE FRANÇAIS-BRETON
advoulet dre offset
Priz : Boutin 160 lur.
Golo kolet skivertex : 220 lur
Keinet e ler : 300 lur
Mlle J. Queillé, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp
c.c.p. Rennes 1136 82 - Hep mizoù-kas evit ar mare

Al levrioù

" **Glas evel daoulagad C'hlas na oant ket ma re** " gant Per DENEZ, embannet gant " Al Liamm ".

Lenn an holl embannadurioù brezhonek a zeu da vezañ diaesoc'h-diaesañ. Anavezet em eus, dek pe bemzek vloaz 'zo, tud a fougee ober se ha me va-unan em eus bet graet kemend-all nemet e oa se p'edon yaouank-flamm pell, pell a zo. Bremañ ne ran mui evel just. Da skouer, n'am eus ket bet lennet " Diougan Gwenc'hlan " gant Per Denez, na bet c'hoant d'e lenn, ur c'heneil o vezañ lavaret din ne vefen ket plijet, a-hervez, gant aergelc'h an danevell.

Lennet em eus, avat, gant plijadur, " Glas evel daoulagad c'hlas ha. ". Abalamour, marteze, d'e dalbenn pe c'hoazh d'an daoulagad misterius-se a zo bet luc'hskeudennet e kelaouennoù 'zo. N'eus forzh ! Ret din anzav on bet kentoc'h souezhet, ha dipitet un tamm, gant derou al levr. Gout'ouzer pegen pouezus e vez penn-kentañ ur romant. Lennet e vo penn-da-benn pe dilezet kerkent ha digoret diouzh ar pajennadoù kentañ anezhañ ha, marteze zoken, ar bommoù kentañ. Evel just e c'hell ur skrivagner kregiñ gant un danevell evel ma kar nemet ma fell dezhañ e vefe peurlennet e levr ret eo dezhañ klask tapout evezh e lenner diouzhtu. Displegañ deomp resis doare ul liorz - pegen mat bennak e vefe graet - ha, dres goude, doare an ti stag outañ ne oa ket, hervezon, an doare gwellañ da gregiñ ganti. Daoust da se, dalc'het em eus da lenn hag aet on betek ar fin ha se eo ar gourc'hemenn gwellañ a c'hellfen ober da Ber Denez. Ur gourc'hemenn all a rin dezhañ eo da vezañ paket e zanevell en ur c'hant pajennad bennak. Sevel pikol levrioù tev a zo deuet da vezañ ar c'hiz gant skrivagnerien hag embannerien 'zo hag ur c'hiz fall eo, d'am soñj, rak piv en deus amzer a-walc'h da beurlenn anezho ? Evidomp-ni, brezhonegerien, e vefe gwashoc'h c'hoazh peogwir eo berr a-walc'h ganeomp an arc'hant a c'hellomp lakaat en embann levrioù. Ul levr bihan eo eta " Glas evel daoulagad ha. " a c'heller lenn en un alanad evel ma seblant bezañ bet skrivet gant ar skrivagner rak, souezhus ha ma'z eo, ne gaver disrann - ebet ennañ. Ur wech kroget ganti ez en em zispleg an istor evel dour ur stêr o leuniañ ingal he naoz (1)

Petra eo an danvez anezhañ ? Un istor a garantez eo a dra sur, a garantez touellet, avat, hag un istor skrijus war un dro peogwir e klask ur vaouez seveniñ he droukrañs hag e ra ken na ra. Un istor boutin a-walc'h evel ma c'hoarvez bemdez nemet kontet a-zoare.

Bet e oan en deiz all o komz diwar-benn al levr gant ur mignon hag a-du e voemp evit anzav ar blijadur hor boa kemeret ouzh e lenn met ivez evit kavout ne oa ket dibar, dic'hortoz a-walc'h klozadur an danevell. Droug ac'h eus bet graet din, kemend-all a rin dit ha, ma c'hellan, muioc'h ha mat pell 'zo. Gellet he dije, da skouer, ar bried perc'hennus ha drouk-se en em lakaat da garout kariadez he gwaz kouezet en he lasoù... Dudius e vije bet displegañ penaos e c'hell ar gasoni treiñ e karantez. Perak nann ? Dic'hortoz ha ma vije, en hor bed emgar, e vije bet se a-du ivez gant al lusk a-enep emled ar feulzder a zo ret-ret e greñvaat.

N'eus forzh penaos, ne oufed ket ober an hevelep rebech da C'hlaoda Houghton, ur skrivagner saoz anezhañ, en deus bet savet un danevell heñvel a-walc'h e zanzev ouzh hini Per Denez. Klevit ! Londrezad eus ar City a zo o paouez koll e wreg, ur vaouez peurgaer anezhi. He c'harout a rae dreist hag en un doare perc'hennus a-grenn. Mantret eo, evel just, ken n'he deus ken ar vuhez blaz na saour ebet evitañ. Ha setu ma kav e foñs un diretenn lizheroù bet skrivet gant e wreg, lizheroù a garantez hag e sav c'hoant ennañ da c'houzout piv an hini a oa he c'haredig. E glask, avat, a zo kalz hiroc'h eget hini maouez Per Denez rak mont a ra da gaout kement gwaz he dije darempredet e wreg. E gavout ne voe ket stank hag a-benn ar fin e ra e venoz : ne c'hell bezañ karedig

e wreg nemet al livour en deus bet graet he foltred. Distagañ a ra meur a daol-gontell gant ar paour kaezh livour. Ur wech distro d'ar gêr, sevenet gantañ e dorfed, petra 'gav eno hon den eus ar City, ouzh e c'hortoz, nemet ur vignonez d'e wreg. Toullañ kaoz a reont ha menegiñ al lizheroù. Diskuilhañ a ra-hi ar wirionez dezhañ : ne gare e wreg den all ebet nemetañ ; karet he dije, avat, e welout dieubet eus e emgarantez. Evitañ eta ha diwar-e-benn e-unan e oa bet skrivet al lizheroù...

Ha neuze, ma c'houlennfec'h ouzhin pe anv a oa gant maouez Per Denez ne oufen ket hel lavarout deoc'h rak n'eo ket bet roet deomp da c'houzout. Maouez peurgaer Houghton, avat, a zo CHRISTINA (2) hec'h anv ! Neuze... ya, marteze, en deus bet kavet Per Denez e awen e levr Glaoda Houghton. Ha pa vije ? Ne vefe netra souezhus ez afe ur c'helenner war ar saozneg, evel Per Denez, da glask e awen el lennegezh saoz a zo, evel ma oar an holl, pinvidik-mor.

L. ANDOUARD.

(1) Traoùigoù 'zo o deus bet souezhet ac'hanon e brezhoneg P. D. evel ar « be »où-se a zeu ken alies gantañ. (be' oan 'ta) ha stummoù 'zo eus ar verb gouzout evel an euzhadenn « ne ouiin ket... »

(2) " Christina " by Claude Houghton, The Tauchnitz Edition, Leipzig, 1936 - 237 pajennad ennañ.

304

EMBANNADURIOÙ AL LIAMM

Roll ar romantoù, danevelloù, eñvorennoù :

Alanig an tri roue, gant Roparz Hemon	20 L
Aquis Submersue, gant Storm (Tr. Per Denez)	10 L
Geotenn ar Wero'hez, gant Jakez Riou	17 L
An Irin glas, gant Renan Huon	25 L
Ho kervel a rin en noz, gant Roparz Hemon	28 L
An dour en-dro d'an Inizi, gant Youenn Drezen	13 L
Sizhun ar breur Arturo, gant Youenn Drezen	13 L
Tangi Kerviler, gant Roparz Hemon	18 L
War ribl an hent, gant Roparz Hemon	30 L
Tristan hag Izold, gant Langleiz (skeudennet)	40 L
Skol Louarn Veig Trebern, gant Youenn Drezen	
- Levrenn I	30 L
- Levrenn II	30 L
- Levrenn III	30 L
Ur galedenn a zen, gant Yeun ar Gow	10 L
Ar follet yaouank, gant Meavenn	10 L
Nenn Jani, gant Roparz Hemon	80 L
Romant ar Roue Arzhur, gant Langleiz	40 L
An deiz-ha-bloaz, gant Youenn Olier	28 L
Mari Vorgan, gant Roparz Hemon	25 L
Ti Vatriona, gant Soljenitzyn (tr. E. ar Barzhig)	16 L
Emgann Kergidu, gant Lan Inizan	
- Levrenn I	38 L
- Levrenn II	38 L
Itron Varia Garmez, gant Youenn Drezen	60 L
Pinvidigezh ar paour, gant Goulven Jacq	28 L
Diougan Gwenc'hlan, gant Per Denez	28 L
Ar Chalboter Huñvreoù, gant Tudual Huon	28 L
Glas evel daoulagad c'hlas ha ne oant ket ma re, gant Per Denez	27 L
Va zammig buhez, gant Jarl Priel	26 L
E skeud Tour bras Sant-Jermen, gant Yeun ar Gow	46 L
Ar Chase, gant Goulc'han Kervella	28 L
En ur rambreal, gant Y. V. Kerwerc'hez	40 L
Eñvorennoù ur prizoniad, gant A. an Diuzet	10 L
Lannevern e kañv, gant Jakez Konan	36 L

Grand Dictionnaire Français-Breton, gant F. Vallée 160 L
- gant ur golo kalet Skivertex 220 L

AVELIOÙ-TRO

(Gouere-Eost 1979)

1añ a viz Gouere. - Skrivet en deus an Aotrou'n Eskob Barbu ul lizher-kemenn da veleien ha kristenien Blougastell evit na yafent ket da welout ar pezh " Buhez Dom Mikael an Nobletz " a oa da vezañ c'hoariet eno da geñver gouel ar Bleun Brug.

3 a viz Gouere. - « La décentralisation est une idée dépassée » a ziskleir Jean-Philippe Lecat, ministr gall ar Sevenadur. Petra a fell dezhañ lavarout ?

8 a viz Gouere. - Un dell-gastiz a 5000 lur hepken en deus bet da baeañ rener milin boultr Pont-ar-Veuzeñn 'lec'h ma oa bet lazhet tri den da heul un darzhadenn.

9 a viz Gouere. - Tremenet en deus Jil Killivere e vachelouriezh e brezhoneg penn-da-benn, ... ha n'eo ket bet korbellec. Hag anavezet e vefe hor yezh gant ar Stad c'hall ?

14 a viz Gouere. - War-lerc'h Glenmor ha Meavenn e krog Guy Karo gant un harz-debriñ e ti-kêr Roazhon evit enebañ ouzh doareoù feuls ar Stad c'hall hag ivez Lezvarn Surentez ar Stad.

18 a viz Gouere. - En em glevout a ra Strollad Broadel Euskadi gant dileuridi gouarnamant Madrid war an doare ma vo adroet hec'h emrenerezh d'ar vro-hont, dre statud Gernika.

26 a viz Gouere. - Gwalldarzhañ a ra ur vombezenn nukleel en enezenn v-Mururoa, e Polinezia « c'hall ». Gant ar gwall-zarvoud-se e varvo daou zen.

29 a viz Gouere. - Roet e vez anv ar skrivagner gallek Charles Le Quintrec d'ur straed e Pleskob, e barrez c'henidik. Ar skrivagnerien vrezhonek, avat, a c'hortozo c'hoazh e-pad pell...

2 a viz Eost. - Muntret eo Juan Lapategi Carrasco, unan eus pennoù an E.T.A., e-kichen Donibane Lohitzun, e Norzeuskadi.

4 a viz Eost. - En El Djézair eo sinet un emglev-peoc'h etre gouarnamant Maouritania hag ar Sahraouied. Kuitaat a raio ar Vaouritaniz an tamm eus Sahara ar C'hornog a oa bet aloubet ganto.

6 a viz Eost. - Ouzhpenn 3 000 den en em vod en Hiroshima evit goulenn distruj an holl armoù nukleel dre ar bed.

7 a viz Eost. - Un trec'h evit an E.T.A. hag an holl stourmerien euskarat er C'hreisteiz : distreiñ a ra toullbac'hidi Soria da Vro-Euskadi.

8 a viz Eost. - En Euskadi an Hanternoz eo bet difennet gant ar pefed un match melldroad etre Donostia hag an Naoned a oa bet aozet evit skoazell an Ikastola-ou (ikastolak).

9 a viz Eost. - Sinañ a ra dileuridi gouarnamant Madrid ha re ar strolladoù katalan un emglev evit adreiñ hec'h emrenerezh d'ar « Principat ».

12 a viz Eost. - Abaoe dek vloaz emañ an arme saoz e Norz-iwerzhon. E-kerz an dek bloavezh-se ez eus bet lazhet ouzhpenn 2 000 den.

15 a viz Eost. - E pleg-mor Mec'hiko, en-dro da Ixtoc 1, en em led ar vrasañ lanv du a zo bet gwelet a-viskoazh er bed.

19 a vis Eost. - - Komz a ra Maurits Coppieters, kannad ar strollad flandrezek Volksunle e kendalc'h Unione di Populu Corsu, e Bastia. Touiñ a ra bezañ kannad an holl bobloù bihan e Parlement Europa e Strassburg.

21 a viz Eost. - Kinnig a ra Pierre Bernard, ezel ar C'huzul Sevenadurel, e vefe savet ur « radio-dieub » e Breizh.

26 a viz Eost. - Savet ez eus bet ur c'hraou deñved e Plogo war dachenn ar greizenn nukleel.

27 a viz Eost. - Mervel a ra Lord Mountbatten pe, diouzh e wir anv von Battenberg, e tarzhadenn e vag war aodoù Iwerzhon. En hevelep devezh ez eus bet lazhet 18 soudard saoz e Norziwerzhon. Gant an I.R.A. eo bet graet an daou daol.

28 a viz Eost. - Da geñver « skol-hañv ar jiskariz yaouank » e Kastell eo bet aloubet tour ar C'hreiskêr gant ur bodad tud eus an U.D.B. o deus displeget bannieloù ha pannelloù e-giz « Bretagne = Lorraine» .

29 a viz Eost. - Gwashoc'h-gwashañ e teu da vezañ an traoù evit Kurdiz Iran. Setu perak e c'houlenn Edmond Herve, maer Roazhon, ma savfe ar gouarnamant gall a-du evit o difenn, hag herzel ouzh ar «bobllazh».

GORWENAL.

Nevez embannet gant IMBOURC'H
Geriadur ar brezhoneg arnevez
jedoniezh, armerzh, mezekniezh, prederouriezh,
istor, politikouriezh, douaroniezh, kimiezh,
fizig, relijion, skiantoù an den, h.a.
400 pajenn
war-dro : 20.000 ger pe dro-lavar
Prix : 50 lur (52 lur gant ar mizoù-kas)
- K R. 1534 25 N Rennes, Y. Ollivier -

NOTENNOÙ

Hor mignoned

Gurun, mab Kristen ha Lama MEUR a zo laouen da gemenn deoc'h ganedigezh e c'hoar Ninnog, d'ar 14 a viz Mezheven e Roazhon.

Erwan EVENOU hag Anna WLAGEN, e bried, o merc'hed Nolwenn, Gwenola ha Gaid, a zo stad enno o kas keloù deoc'h eus ganedigezh o mabig ha breurig Gwendal Erwan, d'an 9 a viz Gouere e Kemperle.

Youenn SOUFFE2 DESPRE hag e wreg Claudine QUILLIARD, a gemenn deoc'h gant joa eured Sabine, o merc'h, gant Emmanuel BROCARD e Brest, d'ar 5 a viz Gouere.

Eliane KERJOANT ha Lukian KERGOAT o deus ar blijadur d'ober deoc'h da c'houzout ez int bet euredet d'an 22 a viz Eost e Plañvour (Bro-Wened)

Hor gwellañ gourc'hemennoù d'hor mignoned.

Profoù

Miz MEZHEVEN :

It. A. Langleiz, 45 lur ; Alan Autret, 45 ; Loeiz Bevan, 5 ; Mikael Korle, 5 ; Yann Bouessel du Bourg, 130 ; Aldrig Russon, 45 ; Yann Morvan, 5 ; Noel Peyr, 45 ; Brieg ar Rouz, 30 ; Rojer Radenn, 100 ; Herve Huon, 10 ; Soazig Daniellou, 20 ; Dr M. Rageot, 45 ; Gaetan Lhoste, 55.

- War un dro, 585 lur.

Miz GOUHERE : Dll M. J. Marot, 45 lur ; Jos Habask, 45 ; Maoris Joubin, 30 ; Yann Bouessel du Bourg, 130 ; Yann ar Gall, 55 ; Bernez Kadored, 50 ; Tangi Kenec'hdu, 5 ; Andrev Gwegen, 24,50 ; Erwan Evenou, 45 ; Robert M. Stevens, 10 ; Y. B. Kelvenneg, 15 ; D.J.C. Davies, 30 ; It. M. Giraudeau, 50 ; Glaoda Lañcheg, 15 ; Fulub ar Gwailh, 95.

- War um dro, 644,50 lur.

Profet eo bet d' Al Liamm abaoe derou ar bloaz 10 234,50 lur. Anaoudek-kenañ omp e-keñver hor skoazellerlen galonek.

Niverennoù kozh " Al Liamm "

Prenañ a c'heller an niverennoù-mañ : 69, 70, 71, 72, 74, 75, 76, 77, 91, 92, 93, 95, 105 betek 200.

Priz an niverennoù a zo : 10 lur pep hini (nemet an niverennoù 116 ha 151 hag a goust 12 lur pep hini, an niverenn 120 diwar-benn Iwerzhon, an niverenn doubl 166-167, an niverenn 190 diwar-benn Roparz Hemon hag a goust 18 lur pep hini).

Tu a zo da brenañ bloavezhioù klok, 55 lur pep hini, eue 1965 betek 1979 (niverennoù 108 betek 197).

An niverennoù a vez kaset kuit a vizoù-post. 10 % a zistaol a vez graet pa brener 50 akouerenn pe ouzhpenn. Ar goulennoù a zo d'ober digant Per ar Bihan. Goullo a-walc'h eo bepred hor c'hef, gant an dispignoù a vez d'ober, hag ar brenerien a skouerennoù kozh a ro deomp ur skoazell a-zoare.

Lizhiri

Digant M. K., Ploumagoar :

« Gouzout a ran eo ul labour start ober war-dro ur gelaouenn gant kudennoù a bep seurt, hogen karout a rafen resev Al Liamm gant va anv ha va chomlec'h e brezhoneg penn-da-benn. Ne vo ket diaesterioù a-berzh ar PTT abalamour ma resevan meur a lizher bemdez ha tost holl leuniet e brezhoneg. Ouzhpenn se emeon va-unan o resev skridoù brezhonek em c'horn-bro. Ur blijadur eo kaout Al Liamm gant e bennadoù liesseurt, plijus, kentelius, saourus e vefen techet da lavaret, evel un aval darev, blaz ar yac'h hag an dare ennañ. E gwirionez ez eo ur pec'hed chom hep tañvañ ur seurt aval bep daou viz. Evurus, hon eus ar gras da gaout levrioù nevez da lenn dre berzh ho labour embanner. Piv c'hoazh e Breizh ha dre bed ar Vretoned divroet n'en deus ket lennet Per Denez, ar vevh warno, ha Roparz Hemon, ha Tudou, Benead, Per Dioller, Kervella... Arabat rambreal, ret eo lenn, ha lenn, ha brezhoneg hepken. »

Digant M. M., prizoniad e Fresnes :

« Laouen-tre ez on d'ho kwelout o lidañ an 200vet niverenn ha kerseet ivez war un dro pa n'on ket evit bezañ ganeoc'h... Spi 'm eus e ralo berzh an devezh gouel-se. Kendalc'hit da gas war-raok Al Liamm hag a zo war un dro unan eus mein-bonn ha mein-diazez an azginivelezh vrezhonek.

Emañ hor c'hentañ prosez en e gerzh hag e nac'h an damallidi mont e galleg. Berzh en deus graet o emzalc'h ha salv ma kendalc'ho d'ober... A-hend-all ez a ar skol vrezhoneg en-dro, yac'hoc'h-yac'h. Barrek eo va holl skolidi d'en em zibab eus ar c'hentañ. Daouzek kentel a vez graet amañ bep sizhun ! Hag e sankomp bec'h par ma c'hellomp.

Va digarezit ma fazian, met seblantout a ra din e talvez an dro-lavar « mont diwar-bouez un neudenn vreïn » kement ha « marcher très vite » ha narenn « filer un mauvais coton », evel ma hañval bezan bet implijet war ar bajenn 155. Ernest ar Barzhig a rae ur bern implij anezhi. Roet e vez ivez war bluenn Jul Gros gant ar ster-se. »

RESPONT : Talvezout a ra resis: mont gant herr war n'eus forzh peseurt digarez, ha n'eo ket mont gant herr hepken.

309

Digant F. d. G., Laval :

« Kas a ran deoc'h priz va adkoumanant d' Al Liamm gant ar brasañ plijadur. Da eo ganin degemer ha lenn pep niverenn eus ar gelaouenn. Me ' gav din ez eo gwall blijus ha dudius, enni pennadoù a bep seurt. A-hend-all, e kinnig embannadurloù Al Liamm d'al lennerlen levrioù a bouez, evit ur priz izeloc'h eget hini al levrioù embannet e galleg.

Feuket e vezan a-wechoù gant lizheroù 'zo, lennet ganin e notennoù Al Liamm. Ne blij ken din gwelout tud o pismлгаñ diwar an disterañ digarez ha war zigarezioù goullo zoken.

Faltaziañ a ran pegen bras-divent ha diaes eo labour ar rener hag an holl re a zo oc'h ober war-dro Al Liamm. Setu perak ez eo ret d'al lennerien kaout anaoudegezh vat en o c'heñver. »

Digant D. J. C. D., Bangor, Cymru :

« Kalz plijadur am eus bet hevlene c'hoazh o lenn ho skridoù ha barzhonegoù dudius, ha dreist-holl Istor an darvoudoù e Breizh ha broioù all en Notennoù. Hep mar ebet Al Liamm a zo unan eus ar c'helc'hgelaouennoù gwellañ ha pouezusañ ar bed keltiek. »

Setu amañ arroudoù eus ul lizher bet kaset da Ber ar Bihan gant M. M., prizoniad e Fresnes :

« Erru eo an niverennoù (Al Liamm) ho peus kaset deomp, div da bep hini. Atav ken plijus da lenn eo Al Llaanm ha siwazh deomp ne zeu ket er-maez bep miz. Hogen gouzout a rit ez eo ran ar Vretoned gant ar rebechoùigoù hag e rankint bepred kavout abeg e tra pe dra !... Tamall a ran ouzh hor skrivagnerien vrezhonek, kozh ha yaouank, ober gant ur yezh re baour e-keñver barzhoniezh ha pinvidigezh hor geriaoueg, evel pa vefent e chal da vezañ komprenet gant ur mor a lennerien. Mar tremenomp hep implij perlezennoù hor yezh ez aio o sked ha skeud ha koll a raimp dibarderioù ha kened hol lavar. Arabat d'an neb a skriv filañ gant an diegi pe spazhañ e skrid e preder bezañ komprenet muioc'h pe aesoc'h... Hag ivez, re a dud a gred dezho bezañ barrek da stagañ gant danevell pe varzhoneg war zigarez o devez bet " graet" daou pe dri bloavezh brezhoneg.

Ur yezh ne vez gounezet nemet dre hir plediñ ganti...

Skrivet em eus nepell zo da Ronan Huon, d'e drugarekaat da vezañ kaset din embannadurioù diwezhañ Al Liamm. N'eus ket dudiusoc'h diverr-amzer evidon eget lenn, ha neuze pa lennan brezhoneg ! Dreist em eus kavet " Ar chalboter huñvreoù " e pep keñver. Ober a ra Tudou gant ur yezh vividik ha saourus, ha steuñvañ a ra ganti hor buhez evel m'emañ, pa sank e kondon ar feud evel pa darzh ouzh heol an deiz, met ne chom ket dibuk, morse. Setu ur viken n'hor boa ket bet skridoù talvoudus evel ar re-se... Ne vin ket, giz ' ouzoc'h en ho touez a-benn disul o frikotiñ ha friantañ seder. Met eno 'vin a galon o kemer nerzh evit derc'hel gant an erv boulc'het. Spi em eus e voc'h niverus ouzh taol hag e vo alejet deoc'h ul lapavan a feson ! ha spi em eus ivez e vo lod ac'hanoc'h o soñjal ennomp. Evit da skrin hor c'halon ! Rak ezhomm hor bo eus skoazell an holl vrogarourien evit mont ac'han ha da dañva, d'hon tro teñchezoù c'hwek ar frankiz.

G. S. - Ma anavezit tud hag o defe ntverennoù eus " Dihunamb " pe " Gwalarn " en o c'herz hag a vije mennet d'o gwerzhañ, e vefen laouen bras o vont e darempred ganto. »

310

Al Liamm hag ar c'helaouennoù

Da geñver 200vet niverenn " Al Liamm " ez eo bet gouestlet ul lodenn vat eus niverenn 155 ar gelaouenn **Evit ar Breshoneg** d'ar gelaouenn vrezhonek koshañ a zo e Breizh. Trugarez d'ar renerien. Koumanant : 30 lur evit 24 niverenn - c.c.p. 1076 86 X Rennes.

War **Le Monde du Dimanche** niverenn 11026 eus an 13 a viz Gouere ez eus bet ivez ur pennad hir gant André Meury diwar-benn Ronan Huon, ar gelaouenn " Al Liamm " hag Embannadurioù Al Liamm. Da heul ar pennad-se hon eus bet ouzhpenn 25 lizher o c'houlenn diskleriadurioù pe levrioù pe zoken o koumanantiñ d'ar gelaouenn. Meur a hini en deus goulennet penaos e oa tu deskiñ pe addeskiñ e yezh.

Embannadurioù Al Liamm

War-lerc'h **En ur rambreal** setu m'eo deut er-maez dastumad danevelloù Jakez Konan. E levr **Lannevern e kañv**, ennañ 224 pajenn a lako an dud da c'hoarzhin, ar pezh a zo rouez a-walc'h en hol lenegezh. Ar golo, e liv, a zo bet graet gant Tudual Huon.

Kaset zo bet d'ar voulerien tri levr all hag a zeuio er-maez a-raok fin ar bloaz : romant Youenn Olier **E penn an hent** ha daou levr danevelloù, gant Didrouz ha Ronan Huon.

Kamm etrekeltiek ar Vrezhonegerien

Dalc'het eo bet ar c'hamp e Skaer eus ar 14 a viz Gouere betek ar 26.

Evit ar 35 perzhiad e oa 8 kelenner, ar pezh en deus roet an tu da heuliañ a-dost pep rummad skolidi.

Bez' ez eus bet meur a brezegenn. Deut eo Padrig an Habask da gomz diwar-benn " Al Lanv " ur gelaouen nevez-savet. Komzet en deus ivez diwar-benn lec'h ar brezhoneg el lennegezh hag er gevredigezh. Gwendal Denez en deus kinniget deomp gant kalz a vousfent e labour war ar beskerezh e Douarnenez. Deuet eo ivez Daniel Jekel da zisplegañ penaos e vez dastumet tonioù gant " An Daspugnerien " er vro Vigoudenn. Kanet en deus e-unan ha lakaet ac'hanomp da selaou un nebeud tonioù enrollet. Herle Denez en deus komzet diwar-benn bro-Iwerzhon ha stad truezus ar gouezeleg. Ronan Huon en deus komzet diwar-benn Jarl Priel evel m'en deus e anavezet. Degaset en doa gantañ lizhiri saourus bet skrivet gant Priel a-hed o c'henlabour. Per Denez en deus roet deomp un tañva eus ur c'hendalc'h keltiek bet dalc'het e Berlin ar C'hornog. Tro en deus bet da zisplegañ deomp dre ar munud savidigezh ar voger. En endervezh en deus roet ur gentel yezhadur buan hag aes en un doare dudius-tre. Orin ar gwenedeg, setu an danvez a zo bet kinniget deomp gant Lukian Kergoat. Hervez an enklaskoù e vefe ar gwenedeg koshoc'h eget ar brezhonegoù all.

311

Implijet eo bet ar « magnetoscop » evit adwelout un toullad abadennoù eus " Breizh o vevañ " (Bitek-le, Barzhed war ar maez...), gwelout filmoù evit ar vugale lakaet e brezhoneg pe c'hoazh traoù filmet ganeomp pa 'z eo deut Y. Kraff da c'hoari pezh gant e strollad, da skouer. War a lavar ar berzhidi (dreist-holl an deraouidi) ez eo bet efedus-tre ar c'hamp. Plijus eo bet dre m'en deus graet pep hini ur striv evit chom hep lezel a-gostez den pe zen evel ma c'hoarvez a-wechoù.

Renet e oa ar C'hamp gant Anna ar Beg ha Gwennael Huon.

Gouel Al Liamm

Da geñver 200vet niverenn Al Liamm e oa bet divizet gant Kuzul ar Brezhoneg aozañ ur Gouel e Pondivi d'an 29 a viz Mezheven. Kant ugent bennak a vrezhonegerien - kenlabourerien ha mignoned ar gelaouenn - a oa deut eus pep korn eus Breizh ha zoken eus Bro-C'hall. Meur a hini ivez a zo en em zigarezet pa ne oa ket gouest da zont.

An Ao. Pavie, ur c'houmananter o chom e Pondivi, en doa kinniget, o vezañ ma oa ar sul, lavarout un oferenn e brezhoneg evit ar re a felle dezho. War-dro unnek eur ez eo en em gavet an holl e Palez ar C'hendalc'hioù. Er sal vras e oa aozet diskouezadegoù levrioù Al Liamm, Skol an Emsav, Emglev an Tiegezhioù hag all.

Meur a skrivagner a oa eno prest da sinañ e levrioù. Peadra a oa eta da sellout ha da brenañ da c'hortoz ar pred a voe servijet en ur sal bihanoc'h gant ti Robic. Boued a-zoare, muskadig ha gwin ruz a laka atav an teodoù da vont war-raok, ha trouzus a-walc'h e oa ar sal e fin ar pred. Taoliad ar vugale ne oa ket an hini sioulañ, anat eo. E-pad ar pred e voe goulennet digant Youenn Gwernig, Andrea ar Gouilh ha Jef Philippe kanañ, gwech traoù fentus, gwech traoù fromus.

En endervezh ez eus bet prezegennoù. Per Denez en deus komzet en anv Kuzul ar Brezhoneg hag en doa aozet ar Gouel. Ronan Huon a roas un diverrañ eus al labour a oa bet graet gant Al Liamm hag Embannadurioù Al Liamm abaoe an niverenn 100 hag a oa bet lidet 17 vloaz zo e Roazhon. Trugarekaat a reas an aozerien : Bernez an Nailh hag Arzel Ivikel, hag an holl vignoned a oa deut eno. Per ar Bihan a gomzas eus mererezh ar gelaouenn. Andrev Latimier ha Loeiz Bihannig ne oant ket bet evit dont siwazh, abalamour d'o yec'hed.

Echu ar prezegennoù e voe adarre un tamm kaniri ha Tudual Kalvez a c'hoarias gant ar gitar. O vezañ ma oa kaer an amzer ez eo aet an holl asambles da weladenniñ Kastell Pondivi a oa en tu all d'an hent. A-benn neuze e oa erru poent an distro. Meur a hini en deus lavaret e vije mat bodañ an dud aliesoc'h. Un digarez eo evit en em welout hag ober anaoudegezh gant skrivagnerien hag evit eskemm menozioù, reiñ ha degemer alioù ha dre se lakaat kudenn Vreizh hag ar yezh da vont muioc'h war-raok.

312

Ha mervel a raio Gwynf or Evans evit ar Skinwel kembraek ?

Embannet en deus Gwynfor Evans, prezidant Plaid Cymru, nevez'zo e krogfe d'ar c'hentañ a viz Here 1980 ar yun hag a bado betek an deiz ma vo roet da Gembreiz ur skinwel hollgembraek evel ma oa bet prometet dezho gant gouarnamant London un nebeut bloavezhioù 'zo. Diaes e vo lakaat an Itron Thatcher da blegañ met prest eo Gwynfor Evans da vont betek ar marv, evel Maer brudet Corcaigh, Terence MacSwiney. Ankeniet eo ur bern Kembreiz gant an afer-se.

Gouelioù keltiek Berlin

Etre ar 15 hag an 20 a viz Gouere ez eus en em vodet, e Berlin (Kornog), da geñver ar Berliner Festspiele (Gouelioù Bras Berlin), tud o tont eus an holl vroioù keltiek, anezho skrivagnerien, intellektualed, arzourien, h.a. Da heul pemp devezhiad bodadegoù-labour, gouestlet da gudennoù ar broioù keltiek, o deus an dud-se embannet daou ziskleriadur. Setu amañ testenn an diskleriadurioù-se. Evit pezh a sell ouzh an diskleriadur I, e c'houlenner ouzh ar c'hevredigezhioù, strolladoù ha personelezhioù eus ar broioù keltiek kas o c'hlemm d'an Home Secretary, Mr William Whitelaw, Home Office, London, Great-Britain.

DISKLERIADUR I.

Dileuridi a-berzh ar broioù keltiek, bodet er sizhun-mañ e Berlin, a zlskleir kement-mañ

- ankeniet-bras ez int o c'houzout en deus divizet Rener Strollad Broadel Kembre, an Ao. Gwynfor Evans, kregiñ, d'ar c'hwec'h a viz Here, gant un diouer-boued a gaso, diouzh ret, betek ar marv, evit ma vo roet da bobl Kembre ur chadenn skinwel e kembraeg penn-da-benn ;

- degas a reont da soñj eo bet prometet da vat ar chadenn-se gant ar gouarnamantoù sokialour ha mirour, hag ez eo bet torret ar bromesa, nevez 'zo, gant an Ao. Whitelaw en un diskleriadur da Parlamant Breizh-Veur, ar pezh en deus kaset Gwynfor Evans da gemer an diviz embannet gantañ ;

- goulenn a reont neuze 'ta gant ar gouarnamant saoz **bezañ** feal d'e bromesa ha reiñ an arc'hant a zo ezhomm evit ur chadenn skinwel e kembraeg ;

- gouestlañ a reont reiñ o skoazell da Wynfor Evans er stourm a vo renet gantañ evit rediañ gouarnamant Breizh-Veur da zerc'hel d'e bromesa ; sikour a raint anezhañ da gentañ dre vrudañ e stourm en holl vroioù keltiek ;

- keuz o deus o welout ne vez ket gwall-brest ar gouarnamantml kreizennour da anavezout, e gwirionez hag evit mat, o gwirloù sevenadurel d'ar broioù bihan a zo, evit ar mare, an tonkadur anezho en o dalc'h.

313

Degemeret eo bet an diskleriadur-mañ, a-unvouezh, gant tud eus broioù Kornog-Europa bodet e Berlin da geñver Gouelioù Bras Berlin. Gant ar Gouelioù-se eo bet roet an tu d'ar broadoù kelt da zivizout kenetrezo diwar-benn o c'hudennoù hag ivez da vrudañ ar pezh a soñjont diwar-benn o amzer-da-zont o-unan.

DISKLERIADUR II.

Gant ar Berliner Festspiele (Gouelioù Bras Berlin) e vez kinniget bep daou vloaz, da dud o tont eus broioù bihan gwasket Europa, ul leurenn da studiañ ha da vrudañ o c'hudennoù. Eus ar 15 d'an a viz Gouere 1980 ez eus bet en tu-hont da 250 den oc'h en em vodañ e Berlin, hag int o tont eus broioù Asturias, Breizh, Kernev-Veur, Skos, Galizia, Enez Manav, Iwerzhon ha Kembre. Da heul ar Simpoziom a zo bet graet e-pad ar Gouelioù, ez eus bet divizet embann an diskleriadur-mañ evit lakaat anavezout menoz ar pobloù meneget uheloc'h diwar-benn o amzer-da-zont e framm Europa.

Goulenn a reomp groñs ma vo anavezet gant gouarnamantoù Bro-C'hall, Breizh-Veur ha Bro-Spagn ez int kiriek eus buhez hag evurusted ar c'humuniezhoù broadel en em gav enklozet en o harzoù hag e tegas o folitikerezh kreizennour distruj e-leizh, ken arboellerezhel ha sokial, d'hor broadoù ; da heul an distruj-se e teu deomp un dilabour grevus-tre kontammadur an douar, ar mor hag an aer, hag, ar pezh a zo spontus-meurbet, an droug graet d'hor yezhoù hag hengounioù broadel. Goulenn a reomp ma vo anavezet d'hor yezhoù, en hor broioù, ar renk a yezh ofisiel, ha ma vint implijet er mass-media, dreist-holl er skinwel. Goulenn a reomp evit hor broioù an aozadurioù politikel a gaso d'an emrenerezh, an doare nemetañ da gaout ur politikerezh arbollerezhel doujus da ezhommoù hor pobloù, ur politikerezh a laka un termen da wallimplij hor finvidigezhioù hag hor pobloù, ar gwallimplij-se o vezañ ar pennabeg eus kement kudenn a sav hiziv dirazomp.

Pouezañ a reomp war beder gudenn a zo da vezañ diluziet diouzhtu, kudennoù hag a ziskouez mat e peseurt enkadenn emañ ar broioù keltiek :

1. Bez' emaoamp a-enep an dekred war an divyezhegiezh e Galizia, a lak ar galisianeg evel ur yezh a-isrenk en hor bro, ha goulenn a reomp evit hor yezh ur statud ofisiel ;

2. Goulenn a reomp ma vo savet diouzhtu un akademiezh eus ar yezh asturiat, evit ma vo roet d'ar yezh ur statud ofisiel ar skolioù, er skol-veur hag er media ;

3. Goulenn a reomp ma vo kelennet da vat hag e gwirionez yezh, istor ha sevenadur Breizh, adalek ar skol-vamm betek ar skol-veur, ha ma vo pourchaset ur servij klok skingomz ha skinwel e brezhoneg

4. Diskleriañ a reomp emaoamp a-du gant tud Plogo e Breizh en o stourm a-enep ar greizenn nukleel a zo sammet warno gant ur galloud dizouj e-keñver gwirioù mab-den.

314

Skridoù

- War niverenn 130 **Hor Yezh** e c'heller lenn Notennoù Fonologiezh gant Per Denez, Anien an niveroù, ur skrid diembann a c'hello dedennañ ar re a zo mailhed war ar jedoniezh. Savet eo bet gant Roperzh Ar Mason, ur gwenedour en doa graet « Polyteknik », hag eil lodenn " Testeni " ur vaouez 90 vloaz bet enrollet gant Y. E. Kemener ha Y. E. Abalan.
 - Setu amañ roll ar pennadoù a gaver war drede niverenn ar gelaouenn **Al Lanv** : Pennad-stur, Euskadi, Bro-India ha Gandhi, Prizonidi Iwerzhon, Gwirioù Mab-den Plogo, Hag hor yezh ?, Fleuriot, Laboused, Brave New world, Lagadlemm, Impalaerez ar Blues, Diwan ha Gerioù-Kroaz. Ar gelaouenn a bleustr war an darvoudoù a vremañ hag a zo skeudennet kaer. - Koumanant : 30 lur. " Al Lanv ", 7 straed ar Rektor P. Henry, 35000 Roazhon.
 - **Bremañ** a zo ur gelaouenn a vent vras, embannet gant Skol an Emsav, 12 pajenn enni, daouvizieq eo ha gouestlet d'ar stourmoù e Breizh, dreist-holl d'ar saotradur ha da afer Plago. Houmañ eo an niverenn 1. - Koumanant : 20 lur evit 6 niverenn. 8 straed Hoche, Roazhon.
 - **Skrid** a zo, evel an div gelaouenn a-us, renet ha skrivet an darn vrasañ anezhi gant tud yaouank, met pleustriñ a ra war al lennegezh. En niverenn 23 ez eus teir danevell : Ar *Merc'hodenner* gant Y.L. Dey, *Dev* gant Herle Denez hag *An Tren* gant Rozenn ar C'halvez. Ar skrid diwezhañ a zo un droidigezh eus pezh-c'hoari Jean Cocteau, Ar paour kaezh Martolod, gant Beatris Jouin.
 - War niverenn 126 **Imbourc'h** (kelaouenn a studi) e c'heller lenn kendalc'h an dielloù o tennañ da istor an Emsav. Ar wech-mañ ez eo un emziviz hir a-walc'h gant Finotte Peresse (Eñvorennoù diwar amzer Vreiz Atao) dastumet gant Herve Lanndiern, hag ur studiaden diwar-benn an Islam hag a zeu en he amzer, gant JR Erwan a vez, siwazh, teuc'h a-walc'h da lenn peurvuiañ.
 - **Wanig ha Wenig**, kelaouenn ar vugaligoù houmañ, a zeu ingal bep miz. Niverennoù Gouere hag Eost a zo deut er-maez. Leun eo a istorioù, skeudennoù ha c'hoarioù a bep seurt. - 25 lur an 12 niverenn- c.c.p. Lena Petton, 682 54 L Rennes.
 - Ma oa gouestlet niverenn 257 **Breizh** d'ar barzh e brezhoneg Maodez Glanndour, an niverenn 259 a gaver war he golo penn ar barzh e galleg X. Grall. Bez' ez eus bepred peder fajenn dedennus e brezhoneg e-kreiz ar gelaouenn e galleg. War an niverenn-mañ e roer ivez deomp keloù eus disparti an hini a save ar gelaouenn, ar brezhoneger Kristian Giraudon hag en deus divizet mont da veleg. Graet en doa war-dro an 21 niverenn diwezhañ eus ar gelaouenn. Keuz a c'heller kaout ouzh e welout o vont kuit, met kemeret e vo e lec'h gant ur brezhoneger all Yves Cadoret a zalc'ho, sur ar gelaouenn war an hent mat.
 - Dedennet omp bet gant " Sekrejoù un hanter-gloareg ", un danevell sinet Yann Gerven hag a zo bet embannet war niverenn 3 Planedenn. Un danevell hir eo, hirik a-wechoù, ha na c'heller ket lavarout diwar he fenn ez eo skouerius na kentelius tamm ebet, er c'hontrol. Traoùigoù diaes da gompren a zo e-barzh e-keñver yezh. Met bez' ez eo avat un istor bev, fromus ha kaset mat war-raok ha da hetañ eo e talc'ho ar skrivagner « nevez » -mañ gant e erv.
- 315
- Ul levrig koant evit ar vugale zo o paouez bezañ embannet gant Skol an Emsav. E anv zo **Lom war ar maez**. Skeudennoù a gaver war bep pajenn hag un destenn verr e brezhoneg eeun, aes da gompren da heul, troet gant M. Kerrain. Ar golo a zo e kartoñs tev. Troet eo bet al levr dija e galleg hag e kembraeg diwar ar c'hatalaneg. Moulet eo bet e Katalonia. Ar priz a zo 20 lur. Daou levr all heñvel a dlefe dont er-maez er mizioù a zeu. - Skol an Emsav, 8 straed Hoche, 35000 Roazhon.
 - Rann 5 (Bezout-Briat) ha 6 (Briad-Dak) **Geriadur Istorel ar Brezhoneg** gant Roparz Hemon a zo o paouez dont er-maez. An eil embannadur-mañ a zo moulet, tra

ma oa liesskrivet an hini kentañ. Ar re a fell dezho rakprenañ ar 6 rann da heul (7-12) a c'hell kas o skodenn (120 lur) da b-Preder, Penn Menez, Plomelin, 29000 Quimper - c.c.p. 16 093 13 J Paris.

- Emañ Preder ivez o paouez adembann, dindan stumm ul levr moulet ivez ar wech-mañ, **Pevar Skourr ar Mabinogi**, troidigezh diwar skrid al " Levr Gwenn ", kentskrid ha notennoù gant Fañch Eliès-Abeozen. Ar priz evit koumananterien Breder a zo 35 lur ha 42 lur er stalioù (116 pajenn).

- Niverenn diwezhañ deut er-maez Brud Nevez a zo doubl (34-35) ha kavout a reer enni pezh-c'hoari Bendan Brehan " An Ostaj " renket diwar ar saozneg gant Remi Derrien. Div varzhoneg gant Naig Rozmor hag eñvorennoù-beaj Y. Miossec (Dreist ar mor bras) a gaver ivez en niverenn-se.

- En hon niverenn diwezhañ hor boa meneget niverenn 426 **Bretagne Réelle**, talbennet " L'impact de Bretagne Réelle ", da lavarout eo ur roll eus ar c'helaouennoù o doa komzet eus B. R. Ne oa nemet ul lodenn rak abaoe ez eus bet kaset deomp peder levrenn all war ar memes danvez gant pennadoù-barn ar c'helaouennoù hag evezhiadennoù da heul gant rener B. R. (niv. 372 bis, 377 bis, 384 bis, 394 bis ha 402 bis).

- Deut eo er-maez niverenn 62 **An Teodeg**, embannet gant " Dugelezh Breiz ", eus Les Lilas. Enni e santer tommder ur c'hannadig savet gant keneiled ha n'eo ket dister evel ma vez alies seurt embannadurioù. Rak dedennus, ha gouiziek zoken, eo an darn vrasañ eus ar pennadoù, gant tud anavezet evel Goulc'hen Pennaod ha Paul Gagnet. Pledañ a reont gant an istor, politikerezh, lennegezh hag ar pennadoù-barn a zo talvoudus ha flemmus meur a wech. Moarvat n'he deus ket ar gelaouennig-mañ ar vrud a dlefe kaout. Ul lodenn a bouez a vez gouestlet peurliesañ d'hor yezh. - Koumanant : 35 lur. " Dugelezh Breiz ", 21 521 80G Paris.

- Ul levrig anvet **Pesketêr enez ar skorn** zo bet embannet gant " Collège Breton " Sant-Brieg (66 pajenn), gant P. Loti. E gwirionez n'eus el levrig nemet 26 pajenn diwar zorn P. Loti. Ar pennadoù all zo troet diwar Ch. Le Goffic (Eur groaz e Keralies) hag E. Renan (Pedenn war gorre Kêr Athena). Evit pezh a sell an doare-skrivañ n'eo hini ebet eus ar re a vez implijet er mare-mañ !

316

- Digant A. Le Mercier hon eus bet tri levrig daou anezho skriverezet hag unan moulet : **Pezhioù-c'hoari** a zo ennañ sketchou bet skingaset gwechall gant Jakez Kroc'hen ha Gwilhoù vihan, an eil levrig a zo ul levr kentelioù evit ar vugale. Adembannet eo bet gantañ ivez **Geotenn ar Werc'hez** (bepred e gwerzh e ti Al Liamm) ha da heul, ar 7 barzhoneg a zo bet skrivet gant Jakez Riou. Evit echuiñ ez eus pennadoù diwar-benn an oberour gant Helias ha Drezen.

- **Carn** niverenn 30, e saozneg dreist-holl, ha **Kannadig Keltia** niverenn 2 a zo deut er-maez o reiñ keleier eus ar Broioù Keltiek. Koumanant : 28,50 lur. J. A. Gwegen, Kervean-al-liorzhoù, 29235 Gwinevez (Plounevez-Lochrist) - c.c.p. 2 204 24 N Rennes.

- Tri levr e galleg a zo bet kaset deomp ivez. Da gentañ ar pempvet levr diwar-benn **Fañch Debauvais**. E gwreg Anna Youinou a zalc'h gant kalon da embann istor buhez ar stourmer hag ar re a veve en-dro dezhañ. Istalbenn al levrenn-mañ, 473 pajenn enni, a zo " Le destin des fidèles ". Priz al levr a zo 75 lur. Mme A. Debauvais, 20, place des Lices, 35000 Roazhon - c.c.p. 2656 42 N Rennes.

- Le **Trèfle Gaélique** gant Nojorkam a zeu deomp eus Bro-Velgia. Ul levr luc'hskeudennet ez eo ha pleustriñ a ra war beder eus ar broioù keltiek : Breizh, Kembre, Bro-Skos hag Iwerzhon. - Skignet eo gant Maison du Livre Français, 4, rue Félibien, 75007 Paris.

- **La Bretagne** a zo adarre ul levr gant Yann Brekilien, embannet gant PUF. Un doare « guide » ez eo. Ennañ e kaver da gentañ un alberz eus istor ar vro, an arz hag ar yezh ha neuze pennadoù war al lec'hioù brudetañ (360 pajenn).

Embannet ez eus bet gant PUF levrioù heñvel diwar-benn Bro-Spagn, Breizh-Veur, Bro-C'hres, ha. ha kêrioù brudet evel Roma, Firenze...

Ar stourmerien guzh

Da geñver Gouel Al Liamm e Pondivi hon eus bet tro da welout evit ar wech kentañ **Ermin a vro Baod**. N'hor boa morse klevet komz eus an Ermin-se ha ne anavezemp ket an hini a rae war-dro. Un den yaouank eo a sav bep sizhun ar c'hannadig-se hag a gas anezhañ d'an dud, div bajenn ennañ e gwenedeg. Reiñ a ra keleier eus ar c'hornad : ar film a dremen, ar c'hermesoù, fentigelloù berr, gerioù-kroaz. Klask a ra evel-se lakaat tud e gornad da lenn brezhoneg aes en ur zisplegañ gerioù zo. Ugent niverenn a zo deut er-maez.

Marteze ez eus kannadigoù all heñvel, savet hag ingalet didrouz dre ar vro, hag ur frealz eo gwelout un den yaouank oc'h ober seurt labour. " An Ermin " : 0,40 lur. Bellevue, Botchosse, 56150 Baod.

317

Timbr Diwan

Komite skoazell Diwan An Alre a zo o paouez embann un timbr evit sikour ar skol a zo bet digoret en Alre.

An timbr a c'hell bezañ peget e-kichen timbr ar post. Koustañ a ra 25 sentim. Skrivañ da Joel Le Baron, Ti Nehué, Krac'h, 56400 An Alre.

" An Amzer "

Ar gelaouennig sizhuniek An Amzer a zo erru gant eil niverenn ha tregont hag a c'houlenn e teufe unan bennak d'o skoazellañ pe ez aio ar gelaouenn da get. Skrivañ da " An Amzer ", 2 straed La Richardière, 35100 Roazhon.

Ar brizonidi bolitikel hag ar yezh

Setu un toullad linennoù tennet eus daou lizher digant stourmerien all bac'het e Fresnes (Bro-C'hall)

20-VI-80

« Resevet ho pennad-hir end-eeun, hag e respontan diouzhtu.

Dedennet on evel just gant niverennoù kozh Al Liamm, hag abalamour da se e c'houlennan ouzhoc'h kas an niverennoù 31, 32, 34, 35, 38, 47, 49, 51, d'am danvez-pried. Skrivañ a ran dezhi diouzhtu, e giz-se ne vo kudenn ebet. N'on ket pinvidik a-walc'h evit kemer an niverennoù all diouzhtu. Koulskoude, dedennet e vefen gant an niverennoù da heul. Ne brenan ket levrioù brezhonek da fichañ ul levraoueg bennak, met evit studiañ hor yezh vroadel. Dedennet on gant Gwalarn, Dihunamb, h.a., hep kaozeal diwar-benn al levrioù. Unan am eus c'hoant bras da gaout ENEZ AR ROD, gant Zavier Langleiz.

Amañ, ... labour hon eus war ar yezh : 12 kentel pep sizhun gant derezioù disheñvel evel just. Hep kaozeal eus ar c'hoariva. Lakaet hon eus hor soñj da sevel Gouel ar brezhoneg e Fresnes... »

« ... Amañ n'eus ket traoù nevez. Memes tra e vez atav ar vuhez en toull-bac'h. Gant meur a baotr e teskomp ur pezh-c'hoari savet gant Youenn Drezen " Andouilhenn ar person ". Farsus-tre ha plijus eo... »

Brezhonegerien nevez eo an daou stourmer-mañ : war studi ar yezh emaint abaoe bloaz. Stourmerien all a ra evelto.

Mat e vo kas dezho levrioù ha kelaouennoù.

Degemeret laouen e vo ho profoù gant Emglev an Tiegezhioù, 30, leurenn al Lisoù, 35000 Roazhon.

Bennozh Doue deoc'h...

318

UI lizher digant Per Denez

Setu amañ ul lizher hon eus bet digant Per Denez :

« D'ar 25 a viz Mezheven ez eus bet graet ur vodadeg, e savadurioù ar Rektordi, gant ar CNTE hag ar CRDP. Pal ar vodadeg a oa aozañ 'benn ar bloaz a zeu ar c'hentelioù dre lizher evit ar gelennerien war ar brezhoneg. A-douez an holl dud a zo o kelenn ar brezhoneg a-vremañ er skolioù-meur, on bet an hini nemetañ n'eo bet na kelaouet, na goulennet e ali digantañ, na pedet da zont : er c'hontrol eo bet pedet an AoAo. Morvannou, Le Du ha Le Berre. Ne gredan ket e vefe bet, er vodadeg-se, den ebet o klemm peogwir e oan bet lezet er-maez. O vezañ ma'z on kelenner war ar brezhoneg a-vremañ ha war al lennegezh a-vremañ, ne oa gwir ebet, na digarez ebet, da lezel ac'hanon a-gostez. Kaset am eus ul lizher-klemm da rektor-kansellour ar skolioù-meur.

Per Denez,
Kelenner e Skol-Veur Breizh-Uhel. »

Dedennus-tre e vefe gouzout perak ez eo bet lezet Per Denez a-gostez, hag eñ o kelenn e Skol-Veur Roazhon, ha pa oa dalc'het ar vodadeg er gêriadenn-se.

Harp da Vretoned dilabour

An Triskell Ruz, unvaniezh a Genharp da Stourmerien Vreizh a genstroll an holl strivoù da skoazellañ ar vignoned digarc'hariet. Ar striv-se a vez graet gant emglev gant an unvaniezhioù all a Genharp ha da gentañ gant Skoazell Vreizh. Un nebeud mignoned a vez dilabour pa teuont er-maez eus an toull-bac'h, mall zo ganto kavout skoazell evit se. Kement den a c'hell kinnig ul labour, pa ne vefe nemet evit nebeut amzer, e Breizh pe e diavaez a Vreizh evit ar re a chom harluet a-berzh lezenn, a zo pedet da skrivañ gant difrae da sekretour An Triskell Ruz : Yvon Craff, Talbodek, 29130 Kemperle.

Ur gevredigezh nevez : Telennourien Vreizh

En em gavet e Pondivi un tregont den bennak, telennourien pe aozerien telennoù an darn vrasañ anezho, da heul ur gouviadenn bet kaset dezho gant Gildas Jaffrennou (mab Taldir). Deuet e oa ivez an Ao. Emile d'Agon de la Contrie, Dileuriad evit ar Sonerezh e Breizh. Divizet o deus ar berzhidl krouiñ ur

gengevredigezh nevez, hec'h anv " Telennourien Vreizh - Harpistes de Bretagne " evit bodañ enni an holl delennourien, aozerien telennou ha kelennerien war an delenn a zo e pemp departamant Breizh.

319

Palioù pennañ ar gengevredigezh-mañ a vo brudañ an delenn geltiek e pep lec'h dre embann pennadoù, levrioù ha dielloù diwar he fenn, dre aozañ abadennoù-telenn er skingomz hag er skinwel, dre astenn he c'helennadurezh, dre aozañ prezegennoù, sonadegoù, prizioù ha kenstrivadegoù. Diouzh ret e talvezo ivez ar gengevredigezh-mañ da zifenn gwirioù hag enor an delennourien, ar gelennerien hag an aozerien telennou. Klask a raio ivez skoulmañ darempredoù gant ar c'hengevredigezhioù telennourien a gaver e broioù all eus ar bed ha dreist-holl er broioù keltiek, Iwerzhon, Bro-Skos ha Bro-Gembre. Neptu e chomo Telennourien Vreizh war an tachennoù politikel ha relijiel.

Dilennet ez eus bet ur burev :

- Prezidant : Soazig Noblet, eus Lannuon (renerez al laz-seniñ " An Dregeriz "),
- Is-prezidant : an It. Charmard-Bois, eus Brest (kelennerez war an delenn e Brest),
- Teñzorer : an Ao. Alain Le Berre, eus Gwened,
- Sekretourez : an It. Norrey Jaffrennou, eus Arradon,
- Prezidant an enor : an Ao. Rémy Chauvet ("Myrddhin").

Digor eo ar gengevredigezh-mañ d'an holl delennourien ha strolladoù telennourien, ken ar re a ra war-dro sonerezh klasel hag ar re a bleustr war ar sonerezh-pobl pe « folk ». Evit kaout titouroù ouzhpenn e c'heller skrivañ da sekretourez Telennourien Vreizh :

- Itron Norrey Jaffrennou, Kêr Alba, Bod Kelenn, 56610 Arradon.

Ar skodenn-vloaz a zo 30 F (15 F evit ar vugale hag ar studierien).

Enklask

Ha gallout a rafe unan eus lennerien AL LIAMM reiñ eomp disaouzan diwar-benn " Kegin Sant Yann ar Biz ", ur varzhoneg vrezhonek savet gant ur beleg, an aotrou ar Bailh. Kavet em eus meneg eus ar varzhoneg-se e levr Cambry, **Voyage dans le Finistère**, Brest, 1835, p. 90, ha notenn 3 ; setu ar pezh a lavar : « ... et même le prêtre louche Le Baill... ». « Ce Le Baill est l'auteur du Gueguin St Yan-ar-Bris, poème célèbre qui est le vert-vert des Bas-Bretons »).

Ne gavan meneg ebet nag eus Ar Bailh nag eus " Kegin Sant Yann ar Biz " e " Istor Lennegezh Vrezhonek an Amzer-vremañ " gant Abeozen. Petra eo ar gegin-se eta ? ? ?

R. D.

320

Kael Nn 11

	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
I	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-
II	-	-	-	-	-	X	-	-	X	-
III	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-
IV	-	-	-	X	-	X	-	-	-	-
V	-	X	-	-	-	-	X	-	-	-
VI	-	-	-	-	-	-	-	-	X	-
VII	-	-	-	-	-	-	X	-	-	X
VIII	-	-	-	-	-	X	-	-	-	-

IX - - X - X - - - - -
X - - - - - - - - - - -

A-led. - I. Klok hag anterin ha koulskoude hep penn na lost. - II. Evel-se e voe unanet Breizh ha Bro-C'hall (daou c'her) ; Merk al liester - III. An eil nemetken. - IV Unan ez eus ivez d'al linennoù ; Rae bro. - V. Reoù a sav kestell en oabl ; Ganet e Versailhez, marvet e gwirionez e Gdansk. - VI. Houmañ. - VII. Kelig an hañv ; Parezed. - VIII. Laboused kozh ; Dañjerus eo mont di. - IX. Rakverb ; Diblusk. - X. Da zoareañ Marc'harid.

A-serzh. - 1. Bloavezh ar merc'hed a c'hellfe bezañ. - 2. Danvez-tarzh ; Ma ve ur paotr oc'h ober ar vicher-se, e ve graet Laou anezhañ, emichañs. - 3. Pezh a reas ar 5 ouzh un doktor brudet all. - 4. An ekolo kentañ ; Klouar e vez peurliesañ, nemet pa losk (skritur K.L.T.). - 5. Ar C'helt soutilañ moarvat. - 6. Unan a ya klañv diwar ar vezventi ; Prenestr. - 7. Gant rabez hepken ; Kombod ur marc'h. - 8. Evel-se eo aet ar foll gant ar follez. - 9. Rener an eil eus ar IV ; Ster a dremen dre Gemper ; - 10. N'hell ket bezañ krogek pa vez gwenn ; Ar venec'h ruz a oa ha koulskoude ne oant ket.

GWALEREG.

DISKOULM D'AN GAEL Nn 10

A-led. - I. Niver-bihan. - II. Emober ; Alo. - III. Vat ; Sorser. -IV. Ejenarat. - V. Zero ; Egina. - VI. A-rekin ; Taf. - VII. Miz ; Letaer. - VIII. Zo ; Dir ; Fri. - IX. Enora ; Cook. - X. Gevel ; Na.

A-serzh. - 1. Nevez-amzer. - 2. Imajerion. - 3. Voterez ; Og. -4. EB ; Nok ; Dre. - 5. Resa ; Iliav ; 6. Brorener. - 7. Rag ; CL. -8. Hastit afo. - 9. Ale ; Naeron. - 10. Norzafrika.

AL LIAMM 202

TAOLENN

Tarzh un hengarantez gant Y. E. JARL	323
An den na gouske morse gant Reun ar C'HALAN	326
O c'hedal ar bleizi gant Lusian Tangi	330
Herri Hillion gant IONA	342
Al loarellou hag an emvataat anezho gant M. ha Y. J. ar C'HOLLO	359
Al levrioù	376
Notennoù	380

Tarzh un hengarantez

War da benn ken flour
 ha dour
 ar Steir
 E plez da vlev melen
 aourenn
 o sked hir.

Hag eus marzh va c'halon
 un donn
 a garantez
 Davedout a darzh
 gant c'hoarzh
 al levenez.

E klin va brec'h
 dinec'h
 e stou
 Da dal lirzhin
 e glizin
 va huñvreoù.

Ha nivlenn ar c'hlac'har
 diarvar
 a dec'h
 Dirak kelc'henn
 gwenn
 da zivrec'h.

Pa gantren ez tremm c'hlas
 balc'hvlaz
 an neñvoù,
 Galv karet
 chapeled
 hon eurioù,

324

Em c'hreiz e sav
 glav
 da vouezh ;
 Em c'herc'henn e kan
 tan
 ar vuhez.

Atav pa red,
 en deñvalded,
 da zaer,
 E talm gant tizh
 glaz kriz
 va freder,

A-dreuz noz du
 ha fru
 va hent
 War tir digenvez
 an enkrez
 kent.

'Us lein ar bed,
digened
ha goullo
Bannoù teñzor
va eñvor
am gorro,

War benn menez
gouez
ha gwerc'h
Da uhelvenozioù,
o bannoù
a gerc'h ;

325
Rak, dreist an ec'honder
hag an amzer,
e kouezh
Em c'halon, hep span,
erc'h kann
da garantez :

Noz a zouster,
gouleier
veure
Aoursteredenn
ha glizhenn
O Te!

An den na gouske morse

Gwechall gozh, war an duchenn, a-us da bleg-mor al Loc'h, e oa ur maner. Eno ne veve nemet un denjentil, un intañv, hag e verc'h vihan. Marvet e oa ar vamm en ur wilioudiñ, ha toc'hor e oa chomet ar plac'hig. Medisined vrudet a oa bet galvet d'ober war he zro, ha louzeier a bep seurt a oa bet lakaet war he chutig : poan gollet. Un druez e oa gwelout an nerzh o vont diganti a zeiz da zeiz. Ar paour kaezh tad ne ouie ken e pelec'h mont nag e pe du treiñ pa glevas anv eus ul louzaouer ken ampart ne oa kleñved na barefe. Kerkent e oa kaset ur c'hannad d'e gaout gant ur yalc'had aour melen, ha kemennet e oa dezhañ e vefe roet dezhañ ur yalc'had all mar deufe a-benn da bareañ ar verc'hig. Aet e oa tost da netra e-kreiz he gwele bras, ha gwennoc'h e oa he dremm eget al liñselioù. Al louzaouer ne reas nemet ur sell ouzh ar plac'hig ha raktal e lavaras : « N'eus nemet nerzh ar mor a vo trec'h d'ar c'hleñved ». Ha diouzhtu e voe lakaet an hini vihan war ur c'hraevazh. Douget e voe betek an aod, hag al louzaouer a reas gourc'hemenn ma vije soubet he c'horf en dour sall ha lakaet da sec'hañ dindan an heol, war ur pallenn, dirak ar mor. A-benn emberr e oa kreñv a-walc'h an hini vihan evit c'hoari war an draezhenn, ha deskiñ a reas da neuñ evel ur pesk.

Eürus e vevent, he zad hag hi, en o maner a-us d'an aod. Un drugar e veze evito, pignet war an tour kozh, parañ o selloù war ar mor. Na kaer e oa ar pezh a welent, ar spoum gwenn war ar mor glas, ar balan hag ar brug en o bleuñv war an tevenn, ar gouelini o tarnijal a-us d'an draezhenn. Ha pa veze fall an amzer e teue levezet leizh kalon ar verc'hig dirak nerzh spontus ar mor, an nerzh en doa roet dezhi ar pare. Bemdez ez ae da neuñ, zoken e-kreiz ar goañv, nemet pa veze re rust ar mor. Morse ne felle dezhi terriñ ar pleg he doa kemeret, zoken pa oa bet tapet ganti he femzek vloaz. Ur plac'h kaer e oa deut da vezañ, an hini goantañ a vije bet kavet en holl Vreizh-Izel, ha lorc'h a oa en he zad pa'z ae ganti d'an oferenn en iliz ar barrez. Ne oa ket gwall binvidik, met perc'henn e oa da veur a goumanant en tro-dro, ha n'o doa diouer nag ezhomm a netra. An tad e plije dezhañ bezañ dalc'hmat o chaseal. Ar verc'h a sikoure ar vatezh, bet he magerez, gant labour an ti. Gwaz ar vagerez a rae war-dro al liorzha hag ar c'hezeg. Eürus e vevjont, betek an deiz m'en en gavas ar verc'h diwezhat o tistreiñ d'ar gêr eus an aod. Aet e oa da neuñ evel boaz. Kavet e oa bet he c'horf war an aod, bloñset ha broñduet hed-a-hed. Semplet e oa. Pa zistroas hec'h anaoudegezh e tisklerias ne ouie ket petra a oa c'hoarvezet, met biskoazh ned eas tost ouzh ar mor goude an deiz-se.

327

Un nebeud goude en em gavas dougerez. Mantret e oa he zad gant ar glac'har hag ar vezh. Difenn a reas d'e verc'h mont er-maez eus ar maner, ha morse ne gredas en em ziskouez er gêriadenn. Ar person an hini eo a ranke mont da lavaret an oferenn e chapel ar maner. Ha koulskoude e oa divlam e verc'h. Touet he doa war ene he mamm n'he doa ket graet pec'hed ebet. Ha ne oa den ebet er vro holl en dije kredet mont tost da verc'h mestr ar maner. Ganet e voe ur bugel, hag an denjentil a varvas nepell goude, rannet e galon gant ar glac'har. Ar verc'h a chomas hec'h-unan er maner gant ar mevel kozh hag he magerez. Koantik e oa he mabig, hag un tammig iskis, gant e zaoulagad a cheñche liv, gwech ken glas hag an oabl, gwech ken du hag ur goabrenn. Iskisat tra, morse ne gouske. Ne oa ket grignous, tamm ebet met bewech ma teue e vamm da reiñ bronn dezhañ e veze dihun, sioul en e gavell, digor bras e zaoulagad gantañ.

Ar vamm en em roas da ziorren he mab. Lakaat a reas da brenañ levrioù a bep seurt ha stagañ a reas kalonek da studiañ. Kerkent hag e oa tapet e bemp bloaz gant ar paotrig e oa skoliet ha kelennet kerkoulz hag e vije bet e forzh pe skolaj. Se n'eo ket da lavaret ez ae an holl amzer gant ar studi. Ar mevel kozh a zeske dezhañ da c'hoari gant ar c'hleze, da dennañ gant fuzuilhoù e dad

kozh, ha da vont war varc'h. Lezet e veze da c'haloupat dre ar maezioù ha dre ar c'hoadoù, met difennet groñs e oa bet dezhañ mont tost d'ar mor. Ne oa ket bet pell o kompren ne oa ket evel ar vugale all : tec'hout a raent dirazañ kerkent ha ma welent anezhañ. Tenerik e oa kalon ar paotrig, hag a-benn emberr e kavas gwelloc'h chom e-unan eget lakaat ar vugale vihan da dec'hout gant ar spont. Den ebet ne zaremprede ar maner nemet an dud a ziavaez a c'hoarveze ganto mont e-biou : soudarded ha martoloded lezet da vont d'ar gêr pa oa echu gante o servij, baleerien-vro, pirc'hirined ha menec'h diarc'hen o c'houlenn an aluzen. Degemeret e vezent holl gant karantez, ha den ebet ne veze lezet da vont hep ur pred fonnus en e gof, ur vantell nevez war e gein, hag ur skoed flamm en e c'hodell.

328

Ar vamm a ouie mat tre ne vijent ket evit chom atav evel-se, pell diouzh ar bed. Gwelout a rae ne oa ket eürus he mab. Deut e oa d'an oad da gemer ur stad hervez e ouenn hag e renk, ha da glask ur plac'h yaouank da zimeziñ, met rannañ a rae kalon ar vamm pa soñje pegen kriz e veze graet d'ar vastarded e-touez re vras an douar, ha chom a rae hep ober netra. Ar vrud eus o madelezhioù a oa aet tro ar vro, ha kement den ezhommek a dremene dre eno a veze kaset d'ar maner, zoken ma ne grede ket tud ar vro ober kemend-all. Rak-se e voe kaset d'ar maner ul lean a zistroe eus Sant Jakez a Gompostel. Kozh-kozh e oa an den santel, hag an deiz war-lerc'h ne oa ket evit sevel diwar e wele, ken faezh ma oa gant ar pell ma oa bet en hent. Rankout a reas chom un nebeud devezhioù da ziskuiñ kent mont gant e hent. Pell e oa c'hoazh diouzh e vinic'hi. Buan e welas e oa gwasket spered an tiegezh gant ur bec'h ponner, hag ober a reas e soñj ned afe ket kuit kent dezhañ bezañ lamet o samm diwarno.

Pa zeuas ar paotr da c'houlenn hag ezhom en doa eus un dra bennak e krogas al lean da gomz gantañ. A-benn emberr e oa diskuliet dezhañ pegen truezus e oa stad ar paotr, ha pegen poanius e oa bet buhez e vamm. Al lean a sellas pizh outañ. E vouezh a oa leun a druez : « Va faotr paour, emezañ, plijet gant Doue e vijen bet gouest da reiñ deoc'h un digoll bennak evit ho madelezh e-keñver ar beorien hag ar gesterien. Kement-se a zo dreist galloud mab-den, 'm eus aon, daoust pegen tost d'an aotrou Doue e striv da vezañ. Ne gav ket din e oa ho tad eus gouenn an dud : eus gouenn ar vorganed ne lavaran ket. A-wechoù ez int dedennet gant merc'hed an douar. C'hoarvezout a ra ivez e vez hoalet ar vartoloded gant ur vari-vorgan. Goulennit ouzh ho mamm ma lavaro deoc'h ar pishañ ma c'hello ar pezh a c'hoarvezas ganti an deiz ma oa kavet semplet war an aod ».

329

Ar paotr a zisklerias d'e vamm ar pezh a oa bet diskuliet dezhañ gant al lean kozh. E vamm a dennas un huanadenn hir. « Biskoazh, emezi, n'em eus torret lezenn Doue. Biskoazh n' em eus pleget da c'hoantegezhioù ar c'hig. Un dra zo koulskoude am eus tavet war he fouez. Boull e oa ar mor dindan an heol, ha pa oan war var da semplañ em eus o gwelet ur skeud e-kichen va hini, war an traezh gwenn e goueled ar mor. - Trugarez deoc'h, mamm, eme ar paotr. Gouzout a ouzon n' eo ket gaou ar pezh ho peus lavaret din. Keuz bras am eus d'ho tilezel, va mammig kaezh, met war an douar, ne vo diskoulm ebet evit un den evel don. Da glask va zad e rankan mont. » Briata a reas e vamm gant karantez, hag eñ kuit war-du an tevenn. Ne chomas a-sav nemet ur predig, amzer da deurel ur sell diwezhañ etrezek e vamm, ha lammat a reas en dour don. Morse ne voe kavet e gorf.

bremañ

kazetenn ar stourmoù e Breizh

Pennadoù e brezhoneg simpl ha pinvidik war un dro.

Keleier a bep seurt diwar-benn buhez ha stourmoù Pobl Vreizh.

KOUMANANTIT !

Koumanant boutin : 25 lur

Koumanant skoazell : ar pezh a c'helloc'h reiñ

da : " bremañ " 8, straed Hoche 35000 ROAZHON

O c'hedal ar bleizi

« Deut eo ar mare din da vont », a lavaras Jakez da Lanig en ur zigromañ gant poan e zargreiz. Eizhtez 'oa e vezent o daou o tennañ avaloù-douar e tachenn vras Park Gwenn, eus ar mintin betek an noz. A-boan ma weled c'hoazh, diouzh an abardaez, liv o daoulagad en abeg d'ar boultrenn skañv ledet war o dremmoù gant aezhenn glouar miz Gwengolo.

« Lanig, klevet ho poa dec'h d'an noz ar bleizi o yudal war-du ar Waremm-Wez ? Dav eo din mont adarre hiziv d'ober dezho un degemer a-zoare », a lavaras ar mistr. Lanig ne responte morse, boas ma oa da glevout alies gant e vestr seurt rimadelloù ; ouzhpenn, ne blije ket re dezhañ chom e-unan da echuiñ al labour.

A-wechoù, pa veze bet gwelet pe glevet bleizi er vro ez ae Jakez da chaseal diouzh an abardaez, div pe deir gwech bep sizhun d'an nebeutañ. Techet spontus e oa gant ar vicher-se. Brav e veze gwelout an den o tont d'ar gêr, ul loen gantañ a-dreuz e skoaz, istribilhet war-bouez e lost ; ha lorc'h ennañ mar plij !

« A ! tud paour, hemañ en deus bet plom dindan e lost », a lavare bep gwech.

Jakez a oa un denig bihan, treut ha sec'h, met prim ha kreñv e-giz ur marc'h; gwevn evel ur wedenn derv ha start d'al labour pa ne sante ket c'hwez ar bleizi. Hervez a lavared e oa un tammig taer zoken ha ne oa ket aes mont re war veg e votoù. E vlev du a oa rodallet hir war e chouk ; e dog feltr, bet du pa oa nevez, a oa deut da vezañ louet dindan an heol hag ar glav ha kollet e oa gantañ, abaoe un nebeud bloavezhioù, an deir boulouzenn a fiche anezhañ gwechall, met merk ar gwri a verzed c'hoazh en-dro dezhañ. Kerkent e tifoupe Jakez a-zindan golc'hed pell kerc'h e wele-kloz, kerkent e lamme e dog war e benn ha ral an dud o deus bet ar gwir-dreist da arvestiñ ouzh kroc'hen tener e glopenn. Ur wechig bennak koulskoude e tegouezhe dezhañ mont d'an oferenn d'ar sul vintin hag en iliz e c'houzañve tennañ e dog.

331

Ar sulioù-se a oa devezhioù kaer. Ret e oa da Jakez troc'hañ pizh e varv stank ha kalet evel drein-pesk, dindan sklerijenn horjellus ar c'hantolor. Bep gwech e save trouz etrezañ hag e varv pe e aotenn pe ar c'hantolor ha klevet e veze neuze foeltradennoù a-zoare. Setu perak ne veze diverret ar reun nemet ur wech bep sizhun ha da sadorn e veze kement a vlev war zremm Jakez ha war penn ur broc'h kozh.

Goude an oferenn, anat eo, e oa dav d'an den didanañ e staoñ hag e c'hourlañchenn gant un nebeut banneoùigoù « hini-kreñv ». Hervez a lavare d'e vignoned, pa zeue tomm d'e vouzelloù ha d'e fri, n'eus netra gwelloc'h eget ur banne rom pe zaou evit yec'hed ar c'horf, ar spered hag an ene. Hag e save e dog diwar e dal gant un taolig biz-yod.

D'ar sulioù-se e tremene Jakez e zevezh penn-da-benn er vourc'h o tisplegañ a-dreuz hag a-hed an darvoudoù a c'hoarveze gantañ tost bep gwech pa 'z ae war-dro ar bleizi. Evel an holl chaseourien e plije dezhañ alies fougasañ ha kaeraat a rae bep gwech e daolioù kaerañ. Ne ouie ket mui zoken pe re eus e gontadennoù a oa gwir ha pe re a oa savet dre berzh e faltazi.

En em vodañ a rae en-dro dezhañ tolpadou bugale evit klevout doare gwirion al loened spontus e komze o mammoù diouto alies evit lakaat o c'hrouadurioù da sentiñ. Chom a rae souezhet ar baotredigoù hag ar merc'hedigoù, digor bras o

genaouiou, o selaou kontadennoù Jakez Treut. Skrijañ a rae pep hini anezho a vare da vare gant ar spont, met n'ez aent d'ar gêr nemet a-stlej gant o mammoù pa zeue ar re-mañ da gerc'hat anezho. Ne gredent ken e-pad pell amzer mont o-unan dreist an treuzoù da zizourañ er-maez goude koan. Kalz anezho a zihune e-kreiz an noz, gleb-teil o rochedoù en abeg d'ar bleiz kozh o doa gwelet, en o huñvre, troñset e vuzelloù, e zent hir krog e patenn o roched. Kalz all a wele deiz pe zeiz, koulz pe welloc'h eget Jakez Treut e-unan, daoulagad o luc'hañ e teñvalijenn o gweleoù-kloz, zoken pa veze mouchet o daoulagad dindan o fennweleoù.

Bep wech e tisplege Jakez d'ar vugale penaos e ranker kargañ ar fuzuilh. Ur fuzuilh vat a oa hini Jakez, met ne laoske ar benveg-se nemet un tenn hepken. Dre benn ar ganol e veze karget. Da gentañ e taoled enni ur c'hornadig poultr du, klozet e veze hemañ gant ur gelc'hennig feltr troc'het en un tog kozh bennak, a-raok lakaat ar plom hag un tamm feltr all warnañ. Gant ur vazhig houarn e veze stardet an tenn er ganol. « Arabat stardañ re paotred, a-hend-all e tarzho va benveg dirak va fri ! » .

332

Diskouez a rae an den da bep hini, gant jestroù resis, penaos ec'h embreger ar fuzuilh, ha pa veze ar vugale an nebeutañ war soñj, e rae van en un taol krenn da vukañ ar benveg e korn pe gorn war ur bleiz kozh.

« Diwallit bugale, hemañ a vo savet dezhañ e reor da lemman ! », a zistage dezho en ur zirollañ da c'hoarzhin pa wele anezho o kluchañ gant ar spont.

Kontañ a rae Jakez doare ar bleizi gwall c'hloazet gant an tenn ha ledet krenn, marv-mik, war un troc'had delioù sec'h ; ha doare ar re all, hanter lazhet hepken, o daoulagad dispourbellet, a ziskrape e-touez an drez hag ar raden en ur chaokat brankoù sec'h en ur zibluskañ gant o dent skourroù ha troñjennoù derv glas. Ne oa ket ur soubenn dezhañ dont a-benn da lazhañ ar re-mañ. Gant e horzh-fuzuilh e ranke ober al labour-se, ha hervezañ e oa bet meur a wech en arvar da gaout merk an dent en e zivesker. Ur wech hepken e oa bet dantet e ufern kleiz gant ur vleizez kozh. Poan en doa bet war an taol e-giz ma vije bet toullet e c'har gant ur wimeled pe ur minaoued, met pareet e oa Jakez hep bezañ louzaouet gant mezeg ebet hag un tammig kamm e oa chomet diwar ar gwallzarvoud-se.

Plijadur vras en deveze o tiskleriañ pegement a arc'hant a oa kouezhet warnañ dre berzh ar bleizi en doa lazhet. Gwir eo e raed d'ar mare-se ur yalc'had vat evit distrujañ al lazherien deñved ha saout : ugent lur evit ur barez o tougen, pemzek lur evit ur barez na oa ket o tougen, daouzek lur evit ur par hag un dek real bennak pe ur skoed evit ur bleiz bihan. Alies e oa bet Jakez o kas e loened da di an archerien d'ar barrez kanton. Hervez a lavare-eñ, en doa gounezet gant ar vicher-se ouzhpenn koumanant ur mevel bras, met marteze e fougase un disterig re.

Dont a rae bremañ an den da vezañ nec'het bras rak rouesaat a rae atav al loened gouez. « Hep dale ne c'hounezin ken va c'hreun nemet mont a rafen da chaseal ar gozed ! » a glemme a-wechoù. Abaoe an eost ne oa bet keloù eus bleiz ebet ha taget e oa Jakez gant an dristidigezh. Met pa en doa klevet disul doare deñved Penfrad dic'hastet e kreiz an deiz, e oa deut en-dro da zen ha plijadur vras en doa bet o klevout dec'h d'an noz yudadennoù er Waremm-Wez.

333

Chom a reas Lanig, daoubleget, e zaouarn war droad e varr, da sellout ouzh e vestr o pellaat en ur rampañ a-dreuz an irvi. Pres e oa war Jakez ha kerzhout a rae diwar-dizh a-hed an dachennad ed-du nevez-troc'het. Ur vandennad klujiri a savas a-daol-trumm en-dro dezhañ hag a lakaas anezhañ da skrijañ : « N'emaout ket mat paotr kozh, spontañ a rez dirak ur glujarig, ha na 'c'h eus ket aon dirak ar bleiz », a soñjas an den ennañ e-unan hag e reas ur c'hruz d'e ziskoaz. Dre ar wenodenn strizh a gammigelle etre ar strouezh e lammas Jakez war an hent-karr ha kerkent e tifoupas e korn ar porzh. Ne oa ket amzer da goll. Ur pezh tamm bara segal a droc'has tro-dro d'an dorzh ha warnañ ur mell tamm kig sall

druz : dav e oa dezhañ adkavout un tammig nerzh evit dont a-benn eus al loened gouez, abaoe kreisteiz e oa aet moan e sac'h. Amzer diskregiñ e fuzuilh, a veze atav karget ha prest, istribilhet ouzh speurenn e wele-kloz, e voe Jakez en-dro er-maez hag e troc'has en ur jilgammañ dre hent ar Ruot etrezek ar Waremm-Wez.

Pa glevas saout war an hent hag o funioù o ruzañ war ar vein e oa bet chifet bras. « N'em eus ket amzer da chom un hanter eur pe ouzhpenn da selaou Soaz Velen o trailhañ kaoc'h ! » a soñjas Jakez en ur ober un nebeud kammedoù war e giz hag e c'haolias kloued ar Menez-Rous. Kerkent e voe pellaet Soaz hag he saout e lammas en-dro war an hent, ha tizh warnañ adarre evel ma vije bet broudet gant an diaoul. Ne oa ket ar mare da chom da lugudiñ.

Treuziñ a reas hep dale hent-bras Kemper da Bouldruzig hag e sankas e hent kev Ploan a heulie d'ar mare-se bevenn ar Waremm-Wez. Anavezout a rae Jakez kement toull, kement beg maen a oa en hent strizh-se, evitañ da vezañ, zoken e kreiz an deiz, ken teñval ha reor an diaoul, klozet ma oa ouzh pep tu gant skourroù derv hir ha stank plaehennet start a-dreuz hag a-hed gant ur c'harzhad drez tev.

Dre ar wenodenn gentañ e krapas ar chaseour er brouskoad hag e tizhas, e nebeud kammedoù, ur frankizenn gaer e lec'h ne greske, en-dro d'ur c'hef derv kozh, nemet brug ha raden berr.

« Amañ, emeon mat ganti hiziv », a soñjas Jakez en ur azezañ war ur penngos kuzhet a-dreñv ur vodenn gelenn. Dibabet en doa al lec'h-se evit gedal al loened hep soñjal re-vat, met merzet en doa evel just, hep gouzout dezhañ marteze, e oa troet an avel d'an izel ; setu ne c'helle mont nemet e tu ar sav-heol.

334

Anavezout a rae e pep korn eus ar c'hoad lec'hioù all bet dibabet gantañ, gwech hemañ, gwech hennezh, hervez an amzer hervez an avel... hervez arouezioù all n'int bet diskleriet gantañ da zen ebet. Pep hini eus al lec'hioù-se a oa evitañ evel un neved. Aze en doa bet amzer, o c'hortoz ar bleizi, da brederiañ diwar-benn e dammig buhez, diwar-benn tonkadur mab-den, diwar-benn dazont ar bed.

Plijout a rae dezhañ dic'hastañ ar bleizi, met dreist-holl, pell diouzh an dud, evel dibradet eus ar bed, e ankounac'hae krenn rediezhoù e vuhez pemdeziek. Gwelout a rae neuze, dre e faltazi, an dud hanter varv o spered hag o skiant o vont hag o tont gant o zammig labour divalav, mat hepken da bourchas dezho o zammig bevañs treut. Evel un duchennad merien hanter zall ec'h ijine ar bed. Dre izelegezh marteze, en em lakae en o zouez : ne oa ket dreist ar re all dre ma ne rae nemet soñjal hep lakaat netra da vont war-raok. Ne oa ket troet e blanedenn war an tu-se.

Ar c'hoad a oa e rouantelezh, ha zoken e varadoz war an douar. Alies e oa chomet eno, didrouz, hep fiñval un disterig, hep tanañ e gorn pri, eurioù hag eurioù da selaou trouz ar bed ha da chaokat soñjoù. Daoust ma n'en doa ket taolet biskoazh e dreid er skol, en doa Jakez desket lenn ha gouzout a rae ouzhpenn un tammig galleg - galleg buoc'h, anat eo, evel a lavare e-unan -, ken lemm e oa e spered, e zaoulagad hag e zivskouarn ; savet en doa ur brederouriezh dezhañ e-unan, met den estreget e vab-bihan n'en deus bet an tu da vezañ deskoniet a-zivout e venozioù diwar-benn an denelezh hag ar bed. Pa veze er c'hoad, e-unan penn, hañv-c'hoañv, kluchet dindan ar glav, an avel pe ar grizilh, ne soñje ket hepken e doare danvezel e dammig buhez labourer-douar ha chaseour bleizi. Daoulammañ a rae e spered o prederiañ diwar-benn menozioù diheverz a bep seurt : orin ar bed, orin ar vuhez war an douar, an dargouezh, ar marv ha soñjal a rae ivez alies e stad tudigoù ar vro sujet a bep tu. Ne verze ken neuze, na trouz an avel en delioù, na kan al laboused en-dro dezhañ, na storlok ar c'hirri er pelloù.

Lavaret ez eus bet, gant tud mennet fall evel just, ne chome ket Jakez da skornañ ha da zrailhañ soñjoù er Waremm-Wez. Sañset e oa bet gwelet an den ur

wech bennak, o vont, en ur c'hwitellat evel ur pintig, war hent Ploan betek ti Katell, an intañvez yaouank. Setu tamallet Jakez da vezañ ur merc'hetaer daonet ; tamallet e gaou evel just. Lakomp e oa degouezhet dezhañ mont ur wech pe ziv da zianouediñ e vizied hag e dreid sklaset dirak un oaled bennak, met a dra sur ne oa ket en ur flourañ kroc'hen tener Katell e lazhe ar bleizi. Tud 'zo n'o deus kalon ebet hag e klaskont teurel ur si bennak war gein un denig kozh dizifenn !

335

Un hanter eur bennak e oa chomet Jakez, difiñv war e bigos, e fuzuilh a-dreuz war e zaoulin, o selaou ar mor bras a ruilhe war ar bili etre Penhors ha Ploan. Kroget e oa da glask empentiñ diventelezh ar mor hag ar « voull ront » e-keñver bihander ha disterder mab-den pa glevas un tammig trouz war hent Ploan. M'hen tou, n'en doa ket soñjet ur frapadig e oa Katell o tostaat !

A vare da vare e teue betek ennañ ur gomz bennak distaget a vouezh izel, met ne gomprenne netra. Tostaat a reas an dud, war bouez, en ur vale war ar geot war ribl an hent. Ne gleve ket trouz o botoù met dre o mouezhioù e c'helle gouzout damdost pelec'h e oant erruet. Ne ouie ket re vat pe oant daou pe dri. « Kentoc'h emaint tri », a soñjas Jakez, heskinet e ranellder seul vuiañ ma ne zeue ket a-benn da glevout fraezh o c'haoz. Pa errujont a-dal dezhañ e chomas an dud a-sav, met ken don e oa an hent ken ne dalveze ket ar boan klask gwelout o fennoù. Trubuilhet e oa Jakez o soñjal e emzalc'h iskis ar baotred pe ar merc'hed pe paotred ha merc'hed a gendalc'he da gomz a vouezh izel. Un ugent metrad bennak e oant dioutañ, e korn-tro an hent, nepell diouzh ar groaz greunvaen gozh kostezet abaoe kantvedoù.

« Tud glan o c'houstiañs o defe kerzhet war an hent hag o defe komzet gant ur vouezh reizh ; ar re-mañ ez eus ganto sur-tre pec'hedoù marvel pe un dra guzh ha dianzavus bennak », e soñjas diouzhtu. Gant evezh bras, en ur lakaat e dreid goustadik war an duchennoù geot evit diwall ouzh an delioù hag ar skourroù sec'h da zraskal, e reas un nebeud kammedoù etrezek an hent. Ne gredas ket mont re dost gant aon da vezañ diskoachet gant al lakepoded a oa en tu all d'ar c'hleuz. Klevout a reas neuze fraesoc'h ar mouezhioù ! gwir eo e oa deut an dud da gomz a-wechoù a vouezh uhel, didrabas ma oant dre ma ne oa tro-dro dezho na ki na kazh hervez e soñjent da nebeutañ. A vare da vare zoken e tirollent da c'hoarzhin. Daoust ha ne gleve ket pep tra e teuas Jakez buan-tre da c'houzout e oa degouezhet war dri laer. Ar re-mañ a oa o fistilhañ didrubuilh-tre en ur vutuniñ, o tegas soñj an eil d'egile eus o zroioù-kamm kaerañ hag o farsal diwar-benn an darvoudoù c'hoarvezet ganto koulz e-pad o « labour » hag en ur vale bro.

336

« Ha pa oas kouezhet war da benn e lenn Meilh-Waregez e-giz un houad klañv dilostet ! » a lavare unan anezho.

«Ha pa oamp bet e ti ar gov e Menez-Kerveyen 'ta ! Neuze e oa savet c'hwen en hol loeroù pa oa kroget mestr an ti da zisvantañ warnomp taolioù bazh a-dreuz hag a-hed gwashoc'h eget ur freilh war ul leuriad segal leizh ! Penaos an diaoul e oamp deut a-benn da sachañ hor skasoù ganeomp ! Sur-tre e oa an Aotrou Doue a-du ganeomp... Hag ouzhpenn se n'hor boa ket graet un dro wenn : arc'hant tamm ebet, met bloñsoù forzh pegement ! » a fentigelle unan all.

Klevout a reas Jakez ivez doare Chann Gerbiged war he daoulin dirak an oaled o pediñ ar Werc'hez Vari dre ma oa an hailhevoded o sammañ en he zi arc'hant ar moc'h lart he doa gwerzhet an derc'hent e foar Bloneour. Hag e c'hoarzhent diwar he c'houst !

Sabatuet e oa da gentañ ha fuloret spontus da c'houde o klevout tud ken dizonest, ken digalon ha ken kriz. Soñjal a reas lammat en un taol war an hent ha leuskel un tenn war al lavagnoned-se, met gouzout a ouie mat ne oa ket trawalc'h un tenn evit tri lakepod eus ar ouenn-se. Setu e reas e venoz da chom da selaou ha da c'hortoz.

Echu e oa fentigellañ gant al laeron diwar-benn o zroioù-kamm hag e teujont da zivizout ha da brederiañ a-zivout an taol diawelet ganto evit an abardaez-noz. Ne ouient ket re vat da belec'h mont d'ober o mestaol.

« E Kergelven e pakfemp ur yalc'had kaer », a ginnigas an hini kentañ.

« Ya ! Chom da lavarout ! N'eo ket bet c'hoazh an daou gi bleiz war da dro denig paour. Me n'on ket bet o kofes ar sizhun-mañ ha ne fell ket din mont da welout Sant Per. Ma n'ac'h eus ket gwelloc'h da ginnig deomp ez an d'ar gêr diwar-dizh ha n'eo ket hepken en ur biltrotañ e-giz marc'h kozh ar pilhaouer ! »

Pep hini anezho a zisplegas neuze d'e dro kement tra a ouie diwar-benn doare ar c'herioù tostañ. Jakez, atizet e ranellder, e zorn evel ur c'horned war e skouarn zehou a glaske gouzout disoc'h an diviz etre ar forbaned. Meneget e oa bet ganto Kereben, ar Ruot, Kerdous ha Kerhenteg, met arguziñ a raent kenetrezo ha Jakez, ne zeuas ket a-benn da c'houzout fraezh-ha-berr pehini eus ar c'hêrioù-se a vefe dibabet gant paotred an troc'h-yalc'h.

337

Tost un eur e oa c'hoazh a-raok serr-noz, a-raok na zeufe ar mare da laboused-noz evel ar re-mañ da gregiñ gant o labour divalav. Jakez, kounaret spontus, disoñjet gantañ e vleizi, e virvilhe bep seurt menozioù en e spered. Evel e oa deut en em dennas kuit, ken didrouz hag ar c'hazh o c'hedal ar voualc'h en-dro d'ar bern avaloù.

Kerkent treuzet gantañ an hent bras e lammas er Menez-Rous. Ha kuit an den d'an daoulamm-ruz, diarc'hen, ur votez e pep dorn. Pell 'zo n'en doa ket en em gavet ken bliv ha ken lijer ; ne sante nag ar vein hag an drein dindan e dreid, nag e fuzuilh o stekiñ ouzh e gein, nag e vragoù lien tiegezh rust o ruzañ hag o krafignat e c'haol. E-giz ur c'havr yaouank re vaget e lamme dreist ar c'hleuzioù.

Arabat e vefe soñjal e oa Jakez broudet gant ar spont. Biskoazh n'en deus bet an den-se aon dirak netra. Evit gwir en doa divizet lakaat al laeron da c'hwitañ war o zaol. Mont a reas eta eus an eil kêr d'eben da lavarout d'an dud teurel evezh ha bezañ prest d'ober d'an tri-se un degemer a-zoare. Dre ar Ruot e tremenas da gantañ, mont a reas betek Kereben. Re bell e oa Kerhenteg, n'en doe ket amzer a-walc'h da vont keit-se, setu e teuas en-dro da Gerdous. Penn-da-benn an hent en doa redet ha dic'hwezañ a rae ken a fuc'he evel un tarv fuloret, ar c'hwezenn o tiverañ pil-pil diouzh penn e fri, e roched gleb-teil peget ouzh e gorf.

E Kerdous en doa soñjet chom da c'hedal an tri lakez fall. Ne oa den eno gouest d'en em zifenn eus seurt pennoù tud. An tad-kozh daoubleget gant ar remm, a gave trawalc'h stlejañ e votoù hag e benn-a-dreñv a chome kalz re bell war e lerc'h. Ar mevel a oa berranal ha deut e oa ivez war an oad. Ar vestrez a oa intañvez hag he bugale a oa yaouankik c'hoazh. Ne oa ket eta, ur gwaz e kreiz e vrud, dibistig a-walc'h evit degas tomm da chupennoù ar gañfarded kintus.

Primveizet en doa Jakez e tibabfe al laeron ar vereuri-mañ, kentoc'h eget ar re all, hag e krogas diouzhtu da lakaat un tammig urzh war bep tra. Mestrez an tiegezh a gasas hep dale da gludañ gant ar vugale war ar grignol : ne oa ket ar mare da chom da sellout ouzh ar re a grene en o lostenn. An tad-kozh, azezet war maen an oaled, ken didrabas ha tra, a gendalc'he da vutuniñ, un etev-tan atav en e zorn. E gorn pri, bet torret ar pav anezhañ seizh gwech da nebeutañ, a oa sko e penn e fri nemet pa droe ar vodenn he fenn war zu an douar en abeg da vuñsunoù dizent ar c'hozhiad. Ar mevel kozh en doa prennet ar stalafioù, daoust ma ne oa ket tu da zont en ti dre ar prenestroù abalamour d'ar barrinier houarn a sparle anezho. Prennet ha morailhet en doa ivez an nor en doare ma oa bet displeget dezhañ gant Jakez.

338

Chom a reas neuze war c'hed en trepas, gantañ ur forc'h houarn troadet gant evlec'h ha ken lemm he bizied ha kerniel an diaoul. Ma ne oa ket dinec'h e

oa koulskoude un tammig lorc'h ennañ peogwir e oa bet lakaet gant Jakez da gemer perzh en abadenn emzifenn. Diouzh ret e vroudfe ar gwellañ ma c'helle kof al laer kentañ a zegouezhfe dirazañ, hag eñ avat un den kizidik-tre.

Jakez a bignas war ar solier hag a reas un toullig e plouz an doenn, dres bras a-walc'h evit gwelout ar porzh penn-da-benn hep bezañ gwelet eus an diavaez.

Echu e oa e dro gant an heol ha steuzet e oa diwar al leur-dornañ skeudoù hir ar gwez kistin. An eskell-kroc'hen a nijelle en ur gammigellañ tro-dro d'ar porzh hag ar gaouenn louet, kuzhet didrouz a-hed an deiz e-touez an iliaev ouzh talbenn an ti, he doa distaget dija div pe deir youc'hadenn kañvaouus. Ne oa ket teñval c'hoazh. Ur steredenn bennak a strinkellike en oabl digoabr. Al loar, ruz-glaou, a oa hanter guzhet e bodennoù haleg ar prad ; sur-tre he doa mezh o 'n em ziskouez gant he dremm livet en doare-se.

Ne voe Jakez tamm sabatuet ebet pa welas tri den o tegouezhout er porzh dre gloued al liorzhañ plouz an eil warlerc'h egile. Ne oa ket war ar re-mañ tres chilpetaerien, ne oant ket istrogelled. Gwisket e oant evel pep den seven. Ne glevet gante grik ebet. War-eeun e teujont betek dor an ti, didrubuilh-tre, hag e c'houlennjont digor : « Ni a zo o vont da Landudeg hag hon eus kollet hon hent », a lavaras an hini bras moan a oa, hervez e weled, mestr an triad. Evel just an ti a chomas didrouz, ha mut an annezidi. Setu gwall fuloret an tri hailhevod, ha taolioù war an nor, taolioù botoù ha taolioù bazh ; met ne fiñvas netra. Ar gaouenn louet avat, spontet gant ar safar, a nijas goustadik war doenn ar marchosi, hag e krogas da chikanañ ha da skandalat an dregaserien. Unan eus al laeron, anezhañ un den tev, bouilh ha kreñv, a gemeras lañs pemp pe c'hwec'h gwech evit dibrennañ pe zrailhañ an nor a daolioù skoaz disvantet a-nerzh-korf. En aner e strivas, an nor a oa graet e kistin yac'h-beuz, ha prenet e oa e kreiz hag en daou benn. Kravat a reas neuze e skoaz hanter vloñset hag e tic'hourdas e vrec'h en ur lakaat anezhi da dreiñ en aer evel bannoù ur vilin-avel.

339

Souezhet-mik e oa al lakepoded, ne oant ket boas da zegouezhout gant tiez gouest da herzel outo. Mont a rejont betek kreiz ar porzh da 'n em guzuliata a vouezh izel, o klask dirouestlañ ar gudenn dic'hortoz a oa kouezhet warno. Ne oa ket diaes gouzout pe hini a oa danvez o c'huzul-kuzh. Sellent a raent tro-dro dezho o klask ur benveg bennak da darzhañ an nor.

En ti, an dud a oa dizaonet dre ma ne glevet ken trouz ebet ha pep hini a soñje e oa echu an abadenn. Ar vugale zoken, kluchet ha tamolodet en-dro d'o mamm, hanter vorzhet o divesker, a oa prest da zinijal dre an diri evel ur vandennad filiped. Jakez, nemetañ, a wele troioù an tri laer hag a chome war e api. Dre ur serr-lagad hag un hej d'e benn e reas da gompren d'ar vestrez ha d'ar vugale ne oa ket ar mare c'hoazh da skarañ ouzh o zoull-kuzh na da fiñval kennebeut, ha pa vefe an nebeutañ.

Ne badas ket gwall bell an diviz etre an droukc'hraerien ; an urupailh bras en doa kavet hep dale an doare da zrailhañ an nor hep mar na marteze. Hag e turc'haas etrezek ar c'harrdi, an daou all war e lerc'h. Kregiñ a reas e gwalenn ar c'harr hag e c'hourc'hemennas d'e genseurtes lakaat o foan da boulzañ war an tal a-dreñv. Diloc'hañ a reas ar c'harr er-maez ouzh ar c'harrdi. Kemer a reas lañs war al leur, e walenn buket eeun war dor an ti.

« N'emañ ket ar mare din d'ober seo d'ar baotred-mañ », a soñjas Jakez, hag e laoskas un tenn...

Blenier ar c'harr a reas, hep lavarout grik, un droielladenn prim, e zivrec'h hir o foetañ an aer evel freilhoù, hag en em ledas war e gein a-hed e gorf. Ar c'harr, skoilhet unan eus e rodoù gant korf an den, a reas un hanter-tro war al leur en ur zraskal, e walenn o tiskrapañ an douar hag ar vein. An daou zen dibistig, sabatuet da gentañ, ha sonnet gant ar spont, a zivorfilas hag a soñjas tec'hout kuit evel div voualc'h spontet.

« Deuit amañ, paotred, pe anez e vo toullet ho kroc'hen ! Bez' eus louzoù ganin c'hoazh evit pareañ kailhenned eus ho kouenn ! Tri e oac'h o tont hag o-tri e rankot tec'hañ kuit », a hopas Jakez eus e guzhiadell.

En ur grenañ en o brageier e tistroas an daou zen hag e sammjont war o chouk o c'heneil paour a oa chomet difiñv, brevet e zargreiz dindan red ar c'harr. Hanter zouget, hanter stlejet, e voe an den etre an daou all ; e benn stouet war e vruched a vransigelle ouzh an eil tu d'egile. Etre e zilhad troñset hag e vragoù damziskennet e verzed merk ar vein war e gein hag e wad o tiverañ.

340

Un tog a chomas war al leur, ur votez a gouezhas diouzhtu eus troad an den. Ar votez all, stlejet war an douar e penn ur c'har diempret a chomas skoilhet ouzh kloued ar porzh. Hag e steuzias an triad en deñvalijenn.

Echu e oa an amzer gaer hag an hañv war un dro. Beuzet e oa ar vro Vigoudenn dindan ar glav. E bered Treogad e oa krommet o fennoù gant ar merc'hed evit diwall ouzh o c'hoefoù skañv da vezañ diskaret gant fourradoù an avel walarn a stlape ar glav war o c'hoc'hen evel dornadoù grouan. Ar baotred war o fennoù noazh, pep hini e dog gantañ en e zorn, e rede an dour en o c'herc'hennoù dindan o rochedoù, piv oar betek pelec'h. Ar c'hloc'h a sone glaz.

Ar vourc'hadenn en he fezh a oa e kañv abaoe tri devezh. Un den yaouank a oa bet kavet marv-mik en e wele diouzh ar mintin, hag eñ yac'h-pesk en derc'hent koulskoude. Ur c'hleñved spontus bennak a oa kouezhet warnan e-pad e gousk, hervez a lavare an dud.

Ma tegouezhfe d'ur furcher vak bennak lenn ar pennad-mañ betek e dibenn e rafen dezhañ un ali a bouez : arabat e vefe dezhañ soñjal hag arabat e vefe dezhañ dreist-holl diskleriañ re fraezh e oa Jakez un torfedour. War a gredan, ar wech kentañ a vefe d'un denig bennak dont da soñjal kement-se. C'hoari gant ar c'hirri a zo bet, evit ar wech ebatoù arvarus-tre evit an dud diampart.

Hervez am eus klevet, bez' eus c'hoazh dre ar vro un nebeud tud eus gouenn " An hini Treut ".

Va zad-kozh-kozh-kozh a oa un tamm brav a zen hag ur chaseour bleizi eus ar re wellañ.

NOTENNOÙ. — Gwedenn : liamm. Dargriez : degouezh, galleg «hasard».

341

NOTENNIG DIWAR-BENN AR BLEIZI :

Diwar Feiz ha Breiz kozh niverenn an 8 a viz Gouere 1879 :

Pevar dañvad da Youenn Person eus Brelevenez, o vezañ chomet er-maez a zo bet debret gant ar bleizi. Antronoz vintin ne chome anezho nemet un nebeud gloan hag eskern.

En ur barrez all e-kichen, ez eus bet c'hoarvezet ar memestra gant un nebeud all.

Seizh bleiz yaouank, paket e Lann Drebeurden a zo bet diskouezet d'an holl e Perroz. An daou vleiz kozh a zo deut tre, betek an aod da heul ar re o devoa tennet o re vihan diganto.

Ha war an niverenn eus an 22 a viz Du 1879 :

François Ollivier eus Kersko, e parrez Skaer, en deus lazhet gant

ampoezon, ur pezh mell bleiz (daou vetr hirder), en devoa lazhet tri leue dezhañ hag un nebeud denved d'e amezeg.

Ur vleizez zo bet lazhet war barrez Kerrien d'an 13 a viz Here, gant an Ao. Riou de Kergoaler. Un tamm mat a hini a oa, rak pouezañ a rae pevar ugent lur.

E Logeginer-Plouziri, d'an 11 a viz Du, Jak Riwal, eus Lambaol-Gwimilio en deus lazhet ur bleiz krenn. (Pouezañ a rae c'hwec'h ugent lur).

Herri Hillion

Ar Seizh-Sant - Breizh

Mignoned an Tad Herri Hillion a gemenn deoc'h gant glac'har eo aet da anaon o c'heneil d'ar 14 a viz Gwengolo 1980.
Lidet e vo an obidoù e Run Meno d'ar meurzh 16 a ziv eur.

(Kemennadenn " Ouest-France " o reiñ keloù e oa aet da anaon Herri Hillion.)

C'hwezh an tan ha lak ennañ ur c'hlaouenn vat
Evit ma vo kavet bev bepred gant ar re a zeuio warc'hoac'h.
(Krennlavar kozh)

War-dro ar bloaz 1934 eo hor boa, va fried Per Galbrun ha me, graet anaoudegezh gant Herri Hillion, hag eñ krennard o vont da skol Sant Bernez, e Bear. Ni a oa eno abaoe 1932, o terc'hel ur stal boltredañ. Eñ a oa o chom e ti e dud er Yellen, ur gêriadennig a zo war an tu dehou d'an hent bras pa 'z eer da Bederneg. E dad a oa eil-vestr martolod e retred. Hemañ oa addimezet goude marv e wreg, mamm Herri, gant ur genitervez dezhi. Ur verc'h henañ, Madalen, c'hoar Herri, hag ur verc'h all Ivet, lez-c'hoar dezhañ a oa eus an tiegezh-se. Tro am eus bet da vont eno gwech pe wech, hep bezañ bet darempredoù da gontañ gant tud Herri, d'ar mare-se.

343

Hag eñ, dre benaos e teuas d'hon zi ? Evit ur poltred bennak bet graet evitañ pe evit e dud ? Me gred eo kentoc'h, dre m'en doa klevet keloù eus hon doareoù brogarourien. Tu am boa bet da lakaat tud yaouank e Bear, e Benac'h hag e Gwengamp (Strollad Charlez Bleiz, renet gant an Ao. de Sonis hag an Ao. beleg Cocalign) da zeskiñ korolloù Breizh. Krog e oan neuze da sevel reolennoù evit an dañsoù, ha bez e oa bet embannet war An Oaled darn eus al labour gant tresadennoù graet gant va den. Bez hor boa bet d'ober ivez war-dro abadennoù, e Bear hag e lec'h all, gant korolloù, kanaouennoù brezhonek ha tammoù arvestadegoù c'hoariva brezhonek.

Kement-se holl, moarvat, a zedennas Herri davedomp, daoust ma ne gemere ket perzh, d'ar c'houlz-se en abadennoù a gomzan dioute. Hervez ar pezh am eus soñj ne oa ket e dud kement-se a-du gant an traoù-se. Dont a rae avat d'hon gweladenniñ e-pad an devezhioù ehan-skol, adalek ma 'z eas d'ar skol eil derez e Kintin. Evel-se hor boa klevet digantañ, gwech pe wech, e oa bet lavaret dezhañ gant renerien ar skolaj ne vije ket degemeret pelloc'h eno. Dre be abeg ? Da grediñ e oa war zigarez e spered broadelour. Pe ivez dre ma oa troet da arguzenniñ : ezhomm en doa diazezoù don war gement tra a vije kelennet dezhañ. Ar pezh a zisplije d'e gelennerien sur a-walc'h, troet ma oant kentoc'h da welout o skolidi o tegemer sentus ar pezh a vije desket dezhe. Ne oamp ket bet hep merzout en doa hon faotr c'hoant da vont da veleg. Ha setu ma klaskas, goude e c'hwitadenn gentañ, an tu da gas pelloc'h e vennad ha d'en em erbediñ da Gerbenead. Degemeret mat e oa bet, a gontas dimp, nemet goude un tri miz bennak en doa an Tad Abad e c'halvet en e vurev ha lavaret dezhañ n'helle ket e virout ken en e abati, p'en doa bet ul lizher digant Eskopti Sant-Brieg. Diskleriadenn ebet ouzhpenn ne oa bet roet d'ar paour kaezh Herri, a rankas distreiñ nec'het bras da Vear. E dud a rebeche hag a damalle dezhañ ar pezh a oa c'hoarvezet. Davedomp e teuas da zizammañ e galon ha va fried a gavas mat kinnig dezhañ deskiñ eilaozañ klichedoù luc'hskeudennoù (war blakennoù gwer d'ar c'houlz-se).

Diskouez a reas youl-vat hag akuiterezh a-walc'h.

344

Me gred eo war-dro ar c'houlz-se eo e komzas deomp eus e vignon Youenn Gwernig. Lakaet diaes moarvat gant rebechoù e dud, ez eas da skolaer-evezhier e skol gristen ar baotred Mael-Karaez. E-pad an ehanoù-skol e teue evel just betek hon zi hag e lavare deomp pegen diaes e kave doareoù ha temz-spered darn eus ar gelennerien, strizhder o spered, oc'h ober kentoc'h gant ur seurt gwaskerezh eget gant diskleriadurioù, hag o c'hoarioù gwidreüs a-enep dezhañ. Chom a reas eno koulskoude e-pad ur marevezh.

*

Tost echu ar brezel, e 1943-1944, e oa Herri e Bear. Kement-se a c'houzon, hag e welomp anezhañ o tont en hon zi bepred. Neuze e oa diaes yec'hed Per, va fried, hag evit se ez ejomp da gaout e vreur, mezeg e Brie-Comte-Robert, nepell eus Pariz. Eno eo hor boa klevet keloù eus muntr an Aotrou Perrot. Pa oamp deuet en-dro da Vear e weljomp pegen start e oa deuet an traoù da vezañ evit ar Vreizhiz brogarour. War ali va breur-kaer ez ejomp adarre davetañ. Ober a ris meur a dro, mont-dont, eus Brie da Vear, er mare-se.

Kavet e oa bet ur prener eus an Alre da gemer hon stal-boltredoù, evit e vab a oa o vont da zimeziñ. Renket e oa bet buan a-walc'h ar werzh. Mamm o chom gant ar priedoù yaouank, - rak hi ne fellas ket dezhi kuitaat ar vro, - d'o skoazellañ e-pad ma vijent o en em ziazezañ en o stal hag en o buhez nevez. Lakaet hor boa Herri da evezhiañ ouzh ar pezh a c'hellfe c'hoarvezout ha da virout darempred gant Mamm. E dad a gavas mat e lakaat da vont e strollad FFied Bear, dre c'hoant e wareziñ moarvat, rak anavezet e oa Herri evit bezañ diskouezet karantez e-keñver Breizh. Mamm a skrive deomp e Brie, ha me, evel ma em eus lavaret, a gavis tro da zistreiñ da Vear, dre ziv pe deir gwech, ha gwelout Mamm hag Herri ivez, ha kement-se, avat, gant teurel evezh, rak war drenkaat e yae an traoù.

Dre un embann war gelaouenn vicherel ar boltredourien hor boa bet ar chañs da gaout da brenañ ur stal a oa nevez varv he ferc'henn, e Vincennes. E-pad reuz bras dibenn ar brezel eo e Brie eo e chomjomp, en ur zont gwech ha gwech all da Vincennes evit en em glevout war ar munudoù gant an intañvez a ranke chom en ti, dalc'het ma oa en hec'h izili, a-raok gellout mont en un ti-degemer.

A-benn ur pennad, echu ar brezel, e klaskjomp dont da chom evit mat en hon zi nevez ha diazezañ ar gwellañ ma c'hellemp, d'ar c'houlz-se hon c'henwerzh hag hon buhez pemdeziek. Mamm ne zeuas ket ganeomp c'hoazh neuze.

*

345

Un deiz bennak, a lakaan war-dro dibenn ar bloaz 1944 ha derou 1945 e tegouezhas Herri. Gwelet a-walc'h en doa e oa poent bras dezhañ tec'hout eus Bear, a-raok ne vefe bet taget, e stumm pe stumm gant ar « buridigezh ». Eus du-mañ e skrivas d'e c'hoar hag a oa e Metz o chom. Buan a-walc'h e teuas pried homañ d'e gerc'hat evit mont di da chom. N'hellfen ket lavarout resis pegeit e chomas eno an dro-se, na pegoulz e teuas adarre d'hon c'haout...

Ar pezh a gontas deomp eo e oa bet, gant ur mignon breizhat, e bro-Velgia, hag eno e raent o-daou war-dro ur stal-labour da ober ha da werzhañ boteier. Diaesterioù a oa savet tro pe dro ha ranket o doa an daou genvroad dilezel o afer ha mont kuit.

Setu ma teuas Herri adarre davedomp. Bras a-walc'h e oa hon zi hag evitañ e oa ar « gambr vihan » e-lec'h ma c'helle mont da gousket ha lakaat tammoù traoù. A-hend-all, dre un diviz graet etrezomp bet heuliet aketus gantañ bep tro, e kemere e lod en dispignoù en ur reiñ arc'hant pa c'helle, pe oc'h ober un tamm-labour bennak evidomp war ar boltredouriezh.

Mont a reas da vMetz evit un eil tro, kavet gantañ un implij en ul

labouradeg strilhouriezh. Eno eo e teskas an doareoù-ober war-dro an danvezioù kimiek. Kement-se a dalvezas dezhañ e Run-Meno diwezhatoc'h e meur a stumm.

E Metz eo e savas darempred gant ar Vreizhiz a oa o chom eno, ha goulenn a reas diganeomp, un dro bennak dont da vannañ filmoù diwar-benn Breizh, bet fiñvskeudennet gant Per, va fried.

A-benn neuze e oa en em droet Herri etrezek kredennoù " Advantisted ar Seizhvet Devezh ". Rener an ti e-lec'h ma labourer a oa unan anezhe. Kaset e voe Herri gante, un dro bennak war studi an doueoniezh en ur Skol-Veur e bro Suis. E-pad ar marevezh ma chomas eno, ne roas ket eus e geloù...

*

346

Un dro bennak e tistroas adarre d'hon zi. Kavet oa bet gantañ, dre e genseurted " Advantisted ", ul labourer e Pariz, da c'hortoz bezañ kaset gante da visioniñ en Afrika. Ne lavare ket kalz tra deomp neuze, nemet hor boa merzet a-walc'h e tegemere ur bern lizheroù. Ha setu ma teuas un dro bennak da ziskleriañ deomp an enkadenn ma oa en em gavet enni. Hervez reolennoù ar rangredenn-se a oa aet d'he heul, e ranke dimeziñ a-raok mont da Afrika evel misioner. Kavet o doa an dud-se ur plac'h evitañ. Sentus, en doa kroget Herri gant an darempredoù, ha diganti eo e teue al lizheroù a zegouezhe evitañ du-mañ ! Nemet a-benn ur pennad en doa kavet gwelloc'h terriñ pep liamm ganti kenkoulz ha gant an Advantisted, hervez ar pezh a zisklerias deomp.

E keit ha ma oa bet Herri e bro Suis e oa bet lakaet d'ober war-dro ar mererezh-ti : degemer an dud, plediñ gant o lojeiz, eveshaat an implijidi, h.a... Kement-se a dalvezas dezhañ ivez sur-mat evit ar pezh en deus graet er Seizh-Sant.

Dre ma kave goudor en hon zi e klaskas, goude-se, en em zifretañ evit labourat ha diazezañ e damm buhez. N'ouzon ket just a-walc'h petra a reas e-pad ur pennad... betek ma klevjomp e oa e bro-Velgia evit an eil gwech. Desket en doa e Metz, pe en ul lec'h all bennak, ar vicher a wiader. Gant ur c'heneil breizhat (unan all ha n'anavezemp ket kennebeut), e prenas ardivinkoù diouzh-se ha sevel ur stal-labour, e-lec'h ma weent danvezioù eus an dibab. Krog e oant zoken d'o gwerzhañ da diez brudet e Pariz. Evit ar c'henwerzh-se e ranke Herri ober monedoneoù. Ur pellskrud a zegase deomp evit lavarout an deiz. Ar gambr vihan a oa bepred evitañ.

Un dro bennak, siwazh, e troas afer an danvezioù da fall. N'o doa ket hon daou genvroad sellet re dost ouzh lezennoù ar vro e-lec'h ma oant, diwar-benn an aotre a ranke an estrenien kaout evit sevel un ti-kenwerzh. Gwech pe wech, unan bennak a savas klemm, ha setu ma rankas an daou wiader dilezel o stal. Gwerzhañ evel ma c'helljont an ardivinkoù, ha mont kuit. Dre m'o doa kavet koulskoude, war al lec'h, tud evit o difenn, ne oant ket bet re gastizet. Herri, evel m'eo bet a-viskoazh, ha se betek e varv, a ouie krouiñ en-dro dezhañ un aergelc'h a vignoniezh.

Hag Herri du-mañ ur wech ouzhpenn. Ne chomas ket re bell a-raok kaout labour e ti tredanerezh Philips ha mont da chom en ur gambr en doa feurmet e bali Constant Coquelin, ur straed leun a diez tud cheuc'h enni. En o zouez, itronezed kozh, eus an noblañs darn anezhe. En unan eus an tiez-se, er c'hwec'hvet solieradur e oa e gambrig.

*

347

Ret eo din kontañ penaos e teuas da vezañ anvet pe lesanvet " Priñs Koadmoc'han " gant Skouted Bleimor a zaremprede d'ar c'houlz-se. Dre c'hoari ha dre fougeal tamm pe damm ivez, e plije d'ar yaouankizoù-se, sevel istorioù diwar-benn o ziegezhioù. An hini a gonte Herri Hillion a denne d'e dad-kozh. Ar " Priñs Kozh " a veze graet anezhañ gant tud Bear ha Pederneq, peogwir e oa

dimezet, hervez ar vrud, gant an diskennadez nemeti ken, eus un tiegezh a noblañsoù kozh, Koadmoc'han e anv. « Neuze, » eme ar skouted, bet plijet bras gante an doare koñchenn-se, « te, Herri a c'heller ober " Priñs bihan " diouzhit ? » Hag adalek neuze, ar skouted, ha tamm-ha-tamm an dud eveldomp, bet klevet ganimp an istor, a raemp " Priñs " anezhañ.

E-pad ma oa o chom e bali Constant Coquelin. ha savet c'hoant ennañ da fentigellañ e lakeas war e voest lizhiri e trepas degemer an ti, ur gartenn skrivet warni : « Priñs Koadmoc'han ». An itronezed a-zoare o lenn-se a grogas da lakaat e boest Herri, kartennoù o pediñ anezhañ da zont d'o gweladenniñ d'o deiz-degemer. Mont a reas ur wech bennak, ha goude, avat, memes tra, e kavas digarezioù evit tremen hep mont, a-raok na drenkfe an traoù !

Bez' emañ ganin bepred ar werenn, kizellet gantañ warni, an anv « Priñs Koadmoc'han ». Ober ur seurt tra war ar gwer en doa desket evel, a-benn neuze dija, kement a draoù all ! Evit va den ha me en doa enskrivet ivez war bep a werenn « Aotrou » hag « Itron » ; ar re-se avat a zo bet torret !

Ha bremañ un tammig istor o sellout ouzh ar pezh a veze graet e bro Bariz adalek 1946, e touez ar Vreizhiz divroet oc'h en em gavout eno. Adsavet e oa bet gant darn anezhe Kelc'h Keltiek Pariz. Aet e oamp, va fried ha me gante, ha da c'houde, Jef Penven, Perig Geraod, e wreg Lizig, Herri (un dro bennak ivez), hag un toullad kenvroiz all. Dindan renerezh, pegen talvoudus, Jef, e oa bet savet etrezomp ul laz-kanañ a beder mouezh, a reas berzh d'an mare-se. Ganin emañ bepred, roll ar ganerien, roll ar c'hanaouennoù hag ar follennoù sonerezh a raemp gante.

348

Goude ur pennadig e kavas Per Geraod tro da strollañ un toullad Breizhiz yaouank oc'h ober gant doareoù skouted hag o reiñ an anv a Skouted Bleimor d'ar bagad-se. Deskiñ a rae ar baotred seniñ gant ar vombard hag ar biniou. Herri a zaremprede ar Skouted ivez.

Ur strolladig kanañ a bemp : div blac'h, Herri ha daou baotr all a savjont. Emañ ivez ganin ar foto anezhe, gant dilhad o tennañ da c'hiz Plougastell, kempennet ha brodet gant Herri.

Penaos e oa bet kavet e Pariz un delenn ha penaos e teuas ar Bleizi Mor da zeskiñ c'hoari gant ar benveg kelt-se ?

Ur randonenn a vije bepred ganeomp, ar merc'hed. Lavarout a raemp e oa brav d'ar baotred seniñ gant binvioù breizhek, tra ma n'hor boa-ni, ar merc'hed, hini ebet !

Anavezet e oa an delennourez Roisin O Tuama, am boa gwelet-me e Dulenn da vare Kendalc'h Keltiek 1947 ; ha c'hoant hor boa da glask kaout ur seurt benveg kelt, a rae homañ ken brav gantañ !

Setu ma teuas un deiz bennak d'hon zi e Vincennes ar c'haner brudet a-walc'h er Radio d'ar c'houlz-se, Freddy Noel, eus Sant-Brieg, hag eñ laouen bras o lavarout deomp en doa gwelet e ti Martin, aozer binvioù seniñ a bep seurt, o chom e straed Vaugirard, un delenn vihan a vent gant hini Roisin hag a oa da werzhañ. Ne oamp ket bet pell o lammat betek eno ha prenañ an delenn-se.

Hervez ar pezh a lavaras deomp ar marc'hadour, en doa graet an delenn-se, diwar skouer unan bet fiziet ennañ gant an delennourez vrudet Lili Laskine. C'hoari gant an delenn vras a rae an arzoerez-mañ, nemet e kave gwelloc'h lakaat he deskarded d'ober gant an delenn vihan evit kregiñ.

Digant an aozour Martin e klevjomp ivez anv ha chomlec'h an dimezell Megevand, diskiblez da Lili Laskine ha deuet da vezañ, hi ivez, kelenneret war an delenn. Ne oan ket bet me pell o vont d'he c'havout evit klask deskiñ c'hoari gant va zelenn. Ne 'z is ket pell garni avat, diampart a-walc'h oan, ret hel lavarout. Ne gemeris nemet pemp kentel. Neuze e krogas ur remm spontus em brec'h

dehou, ha n'hellis ket mont pelloc'h gant va sorc'henn bezañ telennourez !

Hag amañ e teu Herri Hillion en afer. Lavaret em eus e vije, e-pad pennadoù, o chom ganeomp e Vincennes hag evel just en doa komzet gant renerien Bleimor eus va zelenn. Pa oa anat ne rafen netra ken ganti, en devoa Herri prenet ar benveg evit Armela, merc'h henañ Per ha Lizig Geraod. E stal Martin e oa bet kavet tamm-ha-tamm telennoù all. Ar re-mañ a voe eta ar rummad kentañ a reas gante merc'hed Bleimor. Herri en doa kavet ivez unan da brenañ hag ar baotred d'o zro a grogas da zeskiñ seniñ gant an delenn. Hag evel-se e teuas, e-doug ar bloavezhioù war-lerc'h, unan, yaouankik a-walc'h neuze, Alan Kochevelou, d'o heul war an dachenn-se. E dad, akuit da deurniañ ar c'hoad a glaskas neuze ober telennoù ha reiñ dezhe ur stumm heñveloc'h ouzh re Iwerzhon, eget ne oa re ti Martin.

349

Soñj am eus e oa bet tad Alan o c'houlenn diganin, peogwir e oan bet e Dulenn ha bet gwelet ganin eno, e-doug Kendalc'h Keltiek 1947, Roisin hag he zelenn, daoust ha na 'm bije ket un dresadenn pe un dra bennak o tiskouez stumm resis seurt binviji. Ne gavis da reiñ dezhañ nemet talbenn paper-lizher Dail Dulenn hag ur pezh moneiz bennak. Diwar ar skouerioù dister-se eo e reas e delennoù kentañ. Dont a reas, soñj mat am eus, da ziskouez deomp unan vihan, war-dro daou-ugent santimetr a uhelder dezhi, bet graet en un danvez doare olifant. Brav e oa nemet ne gave ket mat a-walc'h avat ar son a denne diouti.

*

Krediñ a ran e tlean amañ kenderc'hel gant an danevell o sellout ouzh « Priñs », evel ma veze anvet ganeomp adalek neuze. Rankout a rin distreiñ un tammig war draoù koshoc'h, ha digarez a c'houlennan ma rankan en em lakaat er gaoz adarre.

E Skol-Veur Drouized, Barzhed hag Ovizion Breizh, anavezetoc'h dindan an anv Goursez, e oan-me neuze sekretourez ar Poellgor abaoe 1950, p'en devoa Taldir roet e zilez ha bet anvet, dre vouezhiañ, evel Drouiz Meur war e lerc'h, Eostig Sarzhaw.

E 1952 e oa bet gouelioù e Ballon hag e Bains/Oust (1), en enor da Nevenoe, bet roue Breizh (826-851). En-dro d'an delwenn, oberenn gaer Rafig Tulou, e oa bet graet ul lideñvor gant izili ar C'hoursez. Eno en em gavas Loeiz Herriou, goude bezañ bet paouezet e-pad naontek vloaz da gemer perzh er gouelioù hag en oberoù all ar C'hoursez. Abegoù en doa, ha ne dalv ket komz diwar o fenn amañ. Eñ eo an hini a zlefe bezañ bet hon Drouiz Meur a bell 'zo.

(1) Bains/Oust : Baen-Ballon hervez Teo Jousset.

350

Priñs a oa en em gavet e Bains ivez ha me gred e oa neuze war ar renk da vezañ barzh. Bez' e oa gantañ, soñj am eus, ur marc'h-houarn, o stlejañ ur c'hasedig, ennañ un toullad pakadoù. En sell e oa da vont, goude ar gouel, d'ober un droiad dre Vreizh da glask an tu da zistreiñ d'ar vro. Ne gavas ket diouzhtu avat.

Gouelioù lid ar C'hoursez a dlee bezañ e Perroz, e miz Gouere 1952, un nebeud sizhunvezhioù war-lerc'h Bains. Kefridi a oa bet fiziet ennomp, Herri ha me : ragaozañ pep tra evit an devezhioù-se. Un degemer a-zoare ha skoazell a bep seurt stumm hor boa bet digant an aotrou hag an itron Gall-Jaouen, eñ o vezañ Drouiz er C'hoursez. Marv int o-daou, nemet un eñvor doujus am eus miret eus o madelezh hag o efedusted.

Krediñ a ran ne vezo ket didalvoud lavarout e oa bet sevenet ul labour a bouez evit adverat reolennoù hor c'hevrennad a Varzhed. Ar reolennoù-se, bet savet e bloavezhioù kentañ ar c'hantved a oa deuet da vezañ un tammig distumm hag heuliet e vezent en un doare diresis a-walc'h. Gant kenlabour Ron Peniarth (A. J. Raude), Herri ha me, hon-zri o chom e tro Pariz ; ha gant un eskemm

lizhiri gant an Drouiz Meur Eostig, a oa-eñ o chom e Naoned, e oa bet graet un adkempenn d'ar reolennoù-se. Ha se diwar skouer ar pezh a rae Goursez Kembre. Talvezout a rejont evit lidoù Perroz, ha me gred, tamm pe damm abaoe.

Skritelloù brav e liv ha bras a-walc'h a oa bet moulet evit brudañ ar gouelioù-se, skeudennet warne un drouiz douger-kleze. Herri ken dorniet mat hag arzour evel ma oa a aozas ivez un daolenn treset brav warni gantañ gerioù Pedenn ar C'hoursez. Staliet e oa bet war ar maen-log ha bez e c'helle bezañ gwelet mat gant an dud. Evit reiñ d'ar doare parch-se, neuz un diell gozh en devoa dammzevet an erienoù anezhi.

*

Petra a reas Herri e-doug ar bloavezhioù 1952 betek 1956 ? N'on ket evit hel lavarout resis.

D'an 22 a viz Du 1956 eo e varvas Per, va fried. A-benn neuze e oa deuet Herri adarre da labourat ganeomp. Asantiñ a reas chom d'am skoazellañ war al labour diskuliañ luc'hskeudenoù e-pad ur pennad, da c'hortoz ma kavfen ur prener evit ar stal, hag Herri diouzh e du, a c'hortoze keloù eus Breizh evit distreiñ d'ar vro evel ma felle dezhañ bepred.

351

Un deiz eta, e tegemeras ur galv digant Skolan, ur marc'hadour pesked bras hag e loc'has diouzhtu war-du Porzh-Noaloù.

Chomet va-unan en em zibabis evel ma c'hellis, ken na c'houlennas ar beleg Armañs ar C'halvez diganin e-doug miz Eost 1957 mont da Bloueg-ar-Mor evit e skoazellañ e Skol Sant-Erwan. An aotrou Kalvez e oa e soñj sevel en e skol ur gelennadurezh dre ar brezhoneg war gement danvez o doa ar vugale da zeskiñ hervez o oad. Laouen ec'h asantis, anat eo. Amzer din da werzhañ stal Vincennes da vMona Kerys ha d'he fried, hag e teuis da Bloueg.

Skol vrezhonek Ploueg-ar-Mor a badas eus 1957 betek dibenn bloavezh-skol 1961 ha bez' e kav din e tremenas Herri dre eno ur wech bennak.

Soñj am eus bezañ bet gant va mignoned Kervella oc'h ober un dro-vale e miz Gwengolo 1958 hag unan all e miz Gwengolo 1959, betek porzh-Noaloù, e-lec'h ma oa oc'h ober war-dro stal besked Skolan.

Soñj am eus bezañ e gavet en ur park tost d'ar mor, o sevel deñved. Bez' e oa ivez eno konikled ha yer. Evit al loened en doa savet lochennoù kempenn. Evitañ en doa graet ur seurt kased-gwele-kloz war bevar beulig dezhe un uhelder dereat a-us d'an douar evitañ da c'hellout en em silañ aes a-walc'h e-barzh. Evel dor, ur plankenn a c'helled lakaat da serriñ-digeriñ dre riklañ, dres evel dorioù ur gwele-kloz. Ne oa ket gwall ledan al lec'h er c'hased-se. Goloet e oa gant an doenn plenk warni un danvez ter-du bennak da herzel ouzh ar glav da gouezhañ warnañ. Ur c'holc'hed bennak hag ur c'hroc'hen dañvad dindanañ, ur pallennig warnañ, evel-se eo e kouske. Mat e vefe resisaat e oad en hañv evelkent !

Ur wech all, diwezhatoc'h, e kavis Herri en un ti e bourk Porzh-Noaloù. Diouzh ar pezh am eus soñj e oa neuze ur vaouez war an oad oc'h ober tamm pe damm war-dro an ti-se. Gwion ar Menteg a dlee bezañ war-dro eno ivez. Krog e oa Herri, neuze da ober ul labour moulerezh a-zoare evit un ti e Gwened.

*

Kavout a ran mat bremañ ober un tamm prederiañ ha distreiñ war an amzer dremenet. Adalek ma kemeras Herri ar pleg da zont davedomp a vare da vare, e Bear ha goude, hon eus bet graet en e geñver gant doareoù o lezel e frankiz gantañ. Ne fellas ket deomp gwech ebet, ober eus ar geneiliezhañ a savas etrezañ ha ni un digarez da waskañ warnañ.

E Bear, hag eñ yaouankik, e teue evel-se, diseblant d'hor c'haout. Pa c'hoarvezas gantañ taol diaes Skol Gintin, e tremenas du-mañ hanter devezhioù o pleustriñ evit en em lakaat da vat war ar c'hlichedoù-poltrediñ. Ha diwezhatoc'h e tistroas c'hoazh, d'ar mareoù ma klaske bezañ adkalonekaet, war-lerc'h an diaesterioù a gavas adarre war e hent. D'e dro e tiskouezas en hor c'heñver e fealded pa hor boa ranket lezel Mamm hec'h-unan e Bear gant hon zraoù, er marevezh diaes a ouezer.

Ha da c'houde, ken alies gwech ha ma teuas betek ennomp e Vincennes, ne chome ganeomp nemet dres ar pennadig amzer en doa ezhomm da zizanalat, a lavarfen, etre daou daol-esa, evit klask e hent, etrezek ar pal a oa e don e ene.

Degas a rae deomp ur pellskrud eus al lec'h ma vije evit lavarout deomp deiz hag eur e zistro. E zegemer a raemp, neuze adarre, hep klask pelloc'h eget ar pezh a blije dezhañ diskleriañ deomp, ar rak hag ar perak eus ar pezh a rae pe a zegouezhe gantañ. Ar pezh ne vire ket ouzhimp alies da chom e-pad pennadoù, goude koan, da varvailhat diwar-benn a bep seurt traoù.

Breutaat a blije dezhañ, ha din ivez, e brezhoneg evel just, ha diwar-benn a bep seurt traoù, o sellout ouzh ar relijion alies a-walc'h zoken. Gouzout a raen e veze prederiet gant se. Per o vont hag o tont eus e labouradeg a gemere perzh en tabutoù, keit ha ma veze ar poltredoù en dour. Heuliañ a rae ar gaoz e brezhoneg, o tiarbenniñ a-wechoù tezennoù Herri pe va re. Daoust da se ne save diaester ebet etrezomp.

Lazadoù kan a veze ganeomp, gwechoù all, ha niverus e oa ar sonioù brezhonek a anavezemp. Plijus oa evidomp lezel hon spered da vont betek ul levenez don. Komplidoù ar sul, embannet d'ar c'houlz-se gant Unvaniezh Speredel Breizh a vije ganeomp gwech pe wech. Per a gavas ken brav mouezh ha doare-kanañ Priñs ma enskrivas ar c'han-se.

Ne veze ket bepred ken sirius-se hon diduamantoù. A-wechoù e troe ar gaoz war « Koadmoc'han ». Dre c'hoari e klaskemp pelec'h e c'helle bezañ al lec'h-se ? Peogwir ez anavezemp mat a-walc'h an tachennoù douar tro-dro da Vear, e lakaemp da greizenn ar « Briñselezh » evel just, maner Gwer Lin, e-lec'h m'en doa bevet tad-kozh Herri.

Emañ maner Gwer Lin war tu dehou an hent a ya eus Bear da c'har Koneri. Gwenezan, Kernaour, Yellen, ar gêriadennig a oa enni ti tud Herri, a oa dioute ivez, peogwir e felle deomp reiñ un tamm diazez lec'hel d'ar mojennoù a ijinemp. Kalz pelloc'h, avat, e lakaemp an douaroù stag ouzh al lec'h marzhus-se : an holl re a zo sked Menez-Bre warne... Uhelenoù Treglañviz ha don dindane traoniennoù ar Yeodi, war un tu... Da vevenn, war-du Sant-Eler e lakaemp Kroazhent ar Marchosioù ha Lanneg ar Goñsorted, war hent ar C'hwerc'hed. Klevet e veze a bep seurt koñchoù diwar-benn an daou lec'h-mañ. Da vont da gaout eno, o tont eus Louargad e oa kement a groazhentoù, kement a dro-hentoù ken ma oa tu da goll e hent en ur seurt milendall.

Nemet, n'eo ket kement-se a lec'hioù resis a glaskemp evit Koadmoc'han. Bravoc'h e kavemp ober dioutañ ur vro a varzhelezh... ha bepred gant komzoù skañv ha fentus tamm pe damm avat.

Ha bremañ pa lakaan va soñj war gement-se e welan a-walc'h spered al lec'h-se o vont betek Traoñ-an-Dour, ken brav ma 'z eo bet kutuilhet gant hor mignonez Añjela a zo o chom eno hag o terc'hel penn war he douar, barzhonegoù ken kaer.

E 1951 e aozas Herri al levrig dornskrivet a zo warnañ tresadennoù fentus " Bizitit Koadmoc'han ". E pennadoù fentigellek ar skrid, en em sil brav arouez ar garantez-vro. Ur frazenn da skouer : « Dec'h Gwenc'hlan a stourme evit bezañ

ha chom Gwenc'hlan, hirie Koadmoc'han a stourm evit bezañ ha chom Koadmoc'han ».

Adverat a reas danvez al levrig-se evit ober un eil levr, e 1966 " Da Goadmoc'han gwitibunan ". Eñ eo an hini a reas labour moulañ al levrig, gant lizherennoù bet dibabet gantañ. Ul labour micherel a-zoare, graet e ti Galles e Gwened evel m'eo merket warnañ. Evit an ti-se e reas Herri labourioù all.

Evit echuiñ gant istor Koadmoc'han e rankan lavarout c'hoazh e reas Herri enklaskoù diwar-benn an anv-se hag e kavas roud dioutañ en dielloù. Maner Gouvernache, e Plouared a zo bet d'ar Goadmoc'haned. An ardamezioù a zo : pevar penn houc'h etre ur groaz du. Se en doa kavet hag e rae gante, hep lakaat lorc'h e kement-se. Hogen, kentoc'h evit kenderc'hel gant an dro-spered ijinus a oa dezhañ hag an doujañs e-keñver hon hendadoù.

354

Skol Sant-Erwan Ploueg-ar-Mor a badas betek ar bloaz 1961. Ar skolidi a oa eno e pañsion a oa dreist-holl bugale Breizhiz brogar. Tremen a rejont eno pevar bloavezh e klasoù kentañ derez. Bremañ e rankent mont, evit an eil derez, en ur skolaj all. Diouzh un tu all, al lezennoù a oa bet kemmet, ken ne oa ket tu da virout ar brezhoneg evel ma oa bet gallet hen ober betek neuze.

Klask a ris, en aner, ul labour all e Breizh. Kavout a ris ul labour mererezh en ur skol gristen en eskopti ar Mañs. Da vare ar vakañsoù e tistroen d'am zi e Brelevenez.

Klevet em boa un dro bennak e oa deuet Herri da sevel ur strollad menec'h e Seizh-Sant Plouared. Mont a ris d'e welout. Bez' e oa en un ti e penn ar blasenn, war-du hent Lannuon. A-boan ma ris anaoudegezh gant an dud a oa eno gantañ, war-dro ur stern-gwiader. E oant oc'h ober ur banniel warnañ, unan eus ar pevar avieler, bet raktreset gant Herri. Ur chapel o doa graet en ul lodenn all eus an ti-se ivez.

Un dro all, diwezhatoc'h, e kavis Herri, bepred war douar ar Seizh-Sant, en un draonienn izeloc'h eget ar bourk, war an hent a ya etrezek ar Stivell. Amañ en doa savet Herri hag e venec'h a Urzh Sant Koulman, savadurioù sebezus. Herri a oa kemeret gantañ an anv a dTad Koulmer. Savadurioù tric'horniek, frank ha goudoret brav. Edont o sevel unan all ouzhpenn, ken e chomas bamet gant o doareoù-ober ar beleg a oa ganin. Kavout a reas dreist an doare akuit a oa gante, mentad al lochennoù, kerkoulz hag an aer vat a oa enne.

Diwezhatoc'h c'hoazh e klevis n'en doa ket gallet an Tad Koulmer hag e baotred chom eno. Pa oa deuet ar goañv e oa re c'hleborek ha re yen an draonienn-se.

*

A-raok mont pelloc'h e fell din resisaat un dra. Adalek ma yeas Herri d'ar Seizh-Sant e teuas en-dro dezhañ kement a gelaouennerien ha kement a dud all ivez, ken ne gredan ket em befe kalz tra da lavarout ouzhpenn ar pezh a zo anavezet mui pe vui.

Evidon, ne glaskis ket gouzout penaos e teuas Urzh Sant Koulman da vezañ Urzh Avallon pe diwezhatoc'h « Compagnons Missionnaires Celtiques ». Fellout a ra din komz hepken eus an darempredoù a gavis mat mirout bepred gantañ. Keit all e oa mignoniezh etrezomp, lusket etrezek huñvreoù kaer diazezet war ar speredelezh kelt, en un doare eeun ha diardoù.

355

Aet oa gant e dud, goude, war ul lec'h uhel, Run Meno, etre Kerozern ha Seizh-Sant ar C'hwerc'hed. Sevel a rejont eno un ti koad hir. Kreiz an ti a oa kempennet evit ar vuhez a-gevred : predoù ha labourioù, gant a bep tu, dispartiet gant pallennoù-stign lec'hioù da brederiañ ha da gousket hervez koulz an deiz. Ur seurt tommerezh-kreiz en doa graet Herri gant brik ha korzennoù-

metal da gas aer domm dre an ti.

Ur chapel a oa ivez, war al lec'h uhelañ. Ur stumm kelc'hiek dezhi gant eizh pe nav du oc'h ober dirabas an doenn, e plenk bepred ha goloet gant un danvez bennak da harz ouzh ar glav. Bez' e oa enni ar pevar banniel peurc'hraet neuze ha war bep hini skeudenn ur sant avieler gant arouezioù, darn kevrinus, darn all anavezet mat gant ar gristenien. Er chapel e oa ivez ur benveg sonerezh ijinet gant Herri pa oa en Arzhon.

War penn uhelañ al lanneg, gant an ijin en doa, e lakeas Herri hag e dud, dour da sevel gant korzennoù. Toullet o doa, el lec'h meinek-se, ha dour a save dibaouez en ur poull. En Arzhon ivez en doa toullet ur puñs.

Un nebeud bloavezhioù goude e kavis Herri, un dro bennak, en ul lochenn en ur park e penn-traoñ Run Meno, e-unan-penn avat. Seder e oa bepred, daoust ma roas din da lenn lizheroù ha ne oant ket gwall blijus evitañ. Diwar ar pezh en doa respontet d'al lizheroù-se ha traoù all ouzhpenn, e veizis tro-spered ha kalonegezh Herri. Fellout a rae dezhañ e vefe miret gant ar venec'h ar reolennoù buhez bet degemeret betek neuze. Darn o doa torret anezhe ha dispartiet dioutañ. Ne glaskis ket gouzout pelloc'h ar pezh a oa c'hoarvezet resis.

Ur pennadig goude c'hoazh, e oa deuet tud all davetañ Gant skoazell ar perc'henn hag arc'hant digant hini pe hini, e rejont war-dro ul lanneg e-kichen an hini gentañ. Amañ e voe troc'het al lann uhel gante ha savet lochennoù prenn all. Ne glaskis ket gouzout hiroc'h perak e chome al lec'h kentañ e dalc'h ar re a oa en em zispartiet diouzh Herri. Ar re-mañ a oa aet er-maez a Vreizh hervez.

356

Un ti-degemer evit ar weladennerien a voe savet ivez hag anv nevez ar strollad a oa « Compagnons Missionnaires Celtiques ». N'am boa ket merzet mat perak o doa kemeret un anv gallek. Herri a zisplegas din e oa deuet, er strollad, tud ha ne oant na brezhonegerien na zoken Breizhiz. Kavet en doa Herri, dre an doare-se moarvat, an tu da ledañ muioc'h ar speredelezh kelt, a gaver en diavaez a Vreizh, ar Geltiegezh o venel roud diouti e meur a lec'h.

Mignoned din, tud war an oad ha re yaouank, bugale ivez a zo bet deuet ganin da Run Meno. Ne oa ket dioute touristed kurius. Lavarout a raent din, e oa manet roud en o spered diwar o emgav gant an Tad Herri, un dra divoutin, un elfenn dreist d'ar prederiadennoù pemdeziek. Darn a zo distroet, dreze o-unan, d'e welout ha kaset tud all gante.

Hep klask ober eus ar pennad-mañ ur c'han-meuliñ e tlean menegiñ koulskoude ar pezh a lavaras dirazon unan hag en doa bet tro da welout manac'h Run Meno. Tabutet en doa gantañ ha goude ur pennadig e lavaras Herri d'an den : « C'hwi a wel an traoù evel-se ? Ac'hanta, mat eo ». Ha ne bouezas ket muioc'h war spered an den. Hemañ a chomas levezonet hag estlammet dirak ur seurt eeunded. Perzhioù kalon en doa, a lakae anezhañ da vezañ evezhiek ouzh ar re all, ha chom feal e-keñver e vignoned hep klask emellout, ouzhpenn ar pezh a oa ret, en o aferioù. An tu en doa da zirouestlañ ar c'hudennoù a gave war e hent gant an nebeutañ a drouz. E dro-spered fentigeller a Dregeriad o reiñ tro dezhañ da skañvaat ar gaoz, da dremen hep feukañ na tagañ an hini a vreutae gantañ. Farsal a rae, neket ober goap ! ha diwar-benn an traoù pe an degouezhioù, kentoc'h eget diwar-benn an dud. En doare-se eo e tedenne an dud a zeue d'e welout.

Setu aze displeget ganin ar pezh a felle din lavarout diwar-benn darempredoù o deus padet tost da hanter-kant vloaz, darempredoù diazezet war ar garantez-bro gant Herri Hillion-Yellen-Priñs bihan Koadmoc'han-Tad Koulmer pe e galleg « Père Henri » evel ma veze anvet ur pennadig 'zo dre ma 'z ae war ledanaat sked Run Meno.

D'ar re o deus bevet tostoc'h dezhañ egedon, er bloavezhioù diwezhañ-mañ, ha kemeret lod en e oberoù, da embann diouzh o zu, ar pezh a gavint mat. Dleet

eo mirout eñvor eus an den-se en deus bet da bal, en e vuhez, diwall, mirout, lakaat da skediñ ar speredelezh kelt. Kemeret en doa da c'her-stur hini Goursezou Breizh ha Tramor " Ar Gwir en arbenn d'an Bed " hag evit se en deus bet da stourm ha da c'houzañv.

E miz Gwengolo 1980, adalek ma klevis keloù marv Herri e Run Meno.

357

NOTENNOÙ GOUDE-SKRID

Kement ha lavarout n'eo ket diwar eñvorennoù addihunet d'an ampoent evit ar skrid-mañ eo am eus komzet eus a bep seurt darvoudoùigoù, e c'hellan reiñ amañ war-lerc'h ur roll eus an holl draoù am eus bepred em zielloù o tennañ dezhe : poltredoù, follennoù sonerezh Jef Penven, filmoù Per Galbrun, taolennoù, daou levrig " Koadmoc'han " graet gant Herri Yellen.

1. - Roll kanerien Kelc'h Keltiek Pariz (1948/1950), gant anv H. Hillion warnañ.
2. - Roll ar c'hanaouennoù liestoniet a beder-mouezh gant Jef Penven ha skouerennoù war baper eus darn anezhe.
3. - Luc'hskeudenn va zelenn, an hini gantañ bet eus ti Martin (1951).
4. - Luc'hskeudenn peder telennezh " Bleimor ", gante telennoù hedvel ouzh va hini.
5. - Alan Kochevelou o seniñ telenn en hor sal e Vincennes, tra ma oa Per Galbrun o sonskrivañ evit ar wech kentañ, ar pezh a sone ar paotrig. Bez' e oa gantañ, neuze, un delenn bet graet gant e dad (1955).
6. - An aotrou Kochevelou, tad Alan o seniñ fleüt, ha Yellen ouzh an daol-skriavañ, un eurier gantañ en e zorn evit merkañ war baper pegeit e pade sonskrivad an ton-se. Bez' e oa un ton eus bro Lanngoned hag e felle d'an aotrou Kochevelou a dalvezfe evit e vab.
7. - Al laz-kanañ a-bemp (Quintette) "Bleimor" : Chantal Kergall, he c'hoar, Herri ha daou baotr all. Chantal Kergall a rae war-dro al laz-kanañ " A Coeur Joie " ivez, hag e vez bepred klevet hec'h anv er Radio, gwech ha gwech all.
8. - Reolennoù Goursez Breizh adnevesaet (1951/1952).
9. - E Bains-Oust : al lid en-dro da zelwenn Nevenoe (1952).
- 9a. - E Bains : Loeiz Herriou, Eostig Sarzhaw ha Iona (un tammig pelloc'h).
10. - Skouerennoù eus skrltell-embann Goursez Perroz (1952).
11. - An daolenn savet gant Yellen " Pedenn ar C'hoursez " (Perroz 1952).

358

12. - Sonskrid " Komplidoù ar Sul " kanet gant Yellen.
13. - Follenn " Floc'h an Aotrou ", bet savet ar c'homzoù hag ar sonerezh gant Yellen.
14. - Eñ eo a zo o kanañ ar sonig-se war ar bladenn " Komz ha Kan ", evit ar vugale (33 t, 1956).
15. - Taolennoù bihan, treset warne Sent kozh Breizh, ha war an tu gin, un arouez keltiek, hag " Urzh Menec'h Sant Koulman " (an embanner). (Maread kentañ Run Meno.)
16. - An daou levrig " Koadmoc'han ", oberenn Yellen.

Notennoù all :

- Embann a reas da gentañ al " Lizher Tregeriat ", leun a fent hag a farserezh. Ha goude se " Gwenedour " hag unan eus niverennoù ar gelaouennoù-mañ a voe ul levrig " Da Goadmoc'han gwitibunan " (moulet, 1966).
- Kelaouennigoù all a embannas e Run Meno. An hini diwezhañ anvet " La Voie d'Avallon ". War niverenn Ebrel/Mezheven 1980 e voe embannet poltredoù (darn eus dastumadenn P. Galbrun) o tiskouez gouelioù Goursez Breizh e lec'h-man-lec'h. Un diskouezadeg e oa bet e ti-kêr Perroz gant Goursez 1952. Dre zegouezh e oa manet al luc'hskeudennoù war hon lerc'h (unan oa o tiskouez Goursez 1909), ha dre zegouezh ivez e oant bet kaset da Herri e Run Meno n'eus ket pell...
- Filmoù 16 m/m en doa graet Per Galbrun : gouelioù dezhe un ton broadel, lec'hioù brudet evel iliz-veur Landreger, pe c'hoazh oberennoù an delwennour Killivig.
- Ar pevar pallenn kaer o tiskouez pep hini unan eus ar pevar avieler am boa gwelet, peurechuet a-benn neuze, e chapel Run Meno, gant arouezioù, darn hengounel hag anavezet. An erer : Sant Yann. An ael : Sant Vazhe. Al leon : Sant Mark. An ezen : Sant Lukaz ha reoù all kevrinusoc'h. Hini Sant Lukaz hepken a oa manet en eil chapelig Run Meno da vare marv an Tad Herri.
- Abaoe un nebeud bloavezhioù e oa krog d'ober " Louzeier", diazezet war ar plant hag an eoul, o fal : skañvaat ar boan dre riñvia, skañv an arzorn ha pleg ar vrec'h, da skouer. Evit ar remm ec'h eoulid an izili war lec'h ar boan.

Kinniget d'ar re a c'hoanta pinvidikaat ar yezh.

Al loarelloù hag an emvataat anezho

Un dekvloavezhiad eo chomet e-barr e vrud mestronierezh an egor : etre ar c'houlz ma voe bannet al loarelloù ijinet kentañ (1957) hag an hini ma voe peursevenet ar raktresad amerikat da dizhout al loar (Apollo, 1972). Abaoe, e seblant anat, er broioù diorroet, ez eo prederiet an dud da c'houzout penaos bastañ dezho o-unan ar c'hementad o deus ezhomm a c'hremm. Evezh an dud a vez kreizpeget ouzh primgemmadennoù priz an tireoul pe ouzh kreskerezh ar gremm nukleel, gant an direol hag an arvarus maz eo.

Ar bannañ loarelloù pe sontoù etreplanedel ? Se a seblant alies ur vizus a albac'henn en-dro da « c'h-gadgetoù », hep tamm gounid gwirion war dachenn ar vuhez pemdeziek. War ar blanedenn-mañ, hep mar ebet, ez eus c'hoazh ur mor a draoù da ober, met ur fed eo penaos ez eo hag e vo, muioc'h-mui, al loarelloù un darn-klokaat eus ar sevenadur kalvezel ez eo hon hini. Arouezius e seblant penaos e laker d'ul levr ledañ-deskamant a-zivout al loarelloù an talbenn-mañ : ° AL LOARELLOU OC'H OBER O RENKOÙ WAR AR BED ". Ha gwir e vefe e laka anat al loarelloù kement-se a c'halloud. E pe zoare emaoamp, pe e vezimp-ni dindan o mestroniezh ? Sed ar pezh a c'hoantaomp spisaat un tammig, er pennad-skrid-mañ, en ur bennaouiñ hon titouroù e-barzh oberennoù pe gelaouennoù skignañ-deskamant-skiantel nevez deuet er-maez, ar pal pellañ o vezañ reiñ skoazell da gompren daskemmerezh ar bed e-keñver kalvezelezh, an tizh kemeret gant an daskemmerezh-se o tont da vezañ un tizh daonet, evel maz eo bet merzet gant pep unan.

360

E-keñver yezhoniezh, ez eo ar fed-se, war ur gont a zo, pennabeg a ziaester-bevañ evit yezhoù bihan evel ar brezhoneg, o varn anezho, pe d'ar marv, pe d'en em zereadekaat dizamant : an dastumad-gerioù, ez eus ezhomm anezho er vuhez pemdeziek, a ya d'e ober, a-benn-bremañ, ha muioc'h-mui e tleo mont d'e ober, gerioù o verkañ menoziadoù nevez a-grenn.

Brasanaoudegezh eus al loarelloù

Abaoe m'en deus paouezet an talabao en-dro da aloubidigezh al Loar, e vezer douget da isprizachañ ar frank a strivadenn bet graet war dachenn al loarelloù. Da skouer : e-kerz 20 vloaz, ez eus bet bannet en tu-hont da 10.000 loarell ! 4.000 anezho a zo c'hoazh o troiata a-us d'hor pennoù : piv en dije kredet ? Rak, a vare da vare, ez eus hiniennoù anezho hag a zeu d'an traoñ. An hini ziwezhañ, e-keñver an deiziad, eo ar vrudet a " SKYLAB ", anezhi un arnodva egorel amerikat, kevezourezh eus ar seurt « pounner-a-bouez » (80 tonenn), meneg anezhi er c'helaouerezh pemdeziek, e-kerz miz Gouere 79, en abeg ma pourvezas an Aostralianed gant ur c'haer a dan-arvest, en ur zistreiñ e-barzh an aerwiskad.

E roll ar bozamantoù, hiviziken, emañ ar bannañ loarelloù, en URSS (100 ar bloaz, da lavarout eo 2 ar sizhun) hag en USA (25 ar bloaz). Ar broioù all (Europa, Japan) ne vannont - pe, evit lavarout reishoc'h, ne lakont bannañ - nemet nebeut-tre anezho. Koulskoude, war dachenn-vannañ Kourou, e Guyana, en em zifreter a-zoare evit lakaat a-ratre ar vannadell-dougen europat " Ariane ", war-lerc'h ur veaj kentañ deut da-vat, e miz Kerzu 1979. Adalek neuze, ni d'hon tro, Europiz, a c'hoario a-zevri-kaer gant al loarelloù.

A-benn bezañ gouest da droiata e-pad pell-amzer, evit gwir, e rank ul loarell bezañ bannet gant bannadelloù nerzhiek, en o c'harg he c'has er-maez eus

an aerwiskad ha lakaat enni an tizh bras-meurbet (eus 10.000 da 30.000 km d'an eur hervez an usuhelder) a viro outi da zistreiñ d'an traoñ. Padelezh ul loarell a zo a-feur gant an usuhelder ez eo-hi bannet betek ennañ : a-is da 130 km, e kouezh en-dro koulz lavarout diouzhtu. Rak an aerwiskad a zo du-se, evitañ da vezañ tanav-dreist, a zo a-walc'h d'he stardañ ha d'ober dezhi koll an tizh he deus ezhomm. Evel-se ez eus bet c'hoarvezet gant " Skylab ". Etre 200 ha 2.000 km, ar badelezh a vez jedet dre vloavezhioù pe dre gantvedoù. Larkoc'h, ez eo an divarvelezh a vez tizhet, evel evit al Loar.

361

An darn vrasañ, a-galz, eus al loarelloù a zo etre 200 ha 1.000 km, ar pezh a zo da geñveriañ, o sellout eus an egor, ouzh un nijadenn a-rez an douar. Rak skin an douar en deus kalz muioc'h a hed eget an usuhelder-se : war-dro 6.000 km. Al loarelloù a veaj eta a-rez an douar, gant 25-30.000 km d'an eur a dizh, e-keit ha m'emañ an douar o treiñ warnañ e-unan gant 2.000 km d'an eur hepken a dizh. En abeg da-se e fiñv an holl loarelloù e-barzh an oabl. Kenkoulz-all, padelezh un dro d'an douar, pe un « droiadenn », a zo a-feur gant an usuhelder : 1 eur hanter war 300 km, en tu-hont da 2 eurvezh war 2.000 km.

Ma kaser larkoc'h ar boellatadenn, e tiskouez ar jedadurioù penaos, war un usuhelder a 36.000 km, e pad an dro d'an douar 24 eurvezh rik. 36.000 km a-is, war-c'horre an douar, hag a-serzh e-keñver al loarell, un arvester eus an douar, me pe c'hwi, da skouer, a dro ivez en-dro da greiz an douar e-pad 24 eurvezh, evel ma oar pep unan. Ac'hano ar c'hlozadur-mañ al loarell a zeu da vezañ ur pik difiñv en oabl evit an arvester, peogwir ez eo kempouezet an tizh a zo ganti gant kresk an hed-redadenn a ra en-dro da greiz an douar. Ar seurt loarelloù-se a vez graet anezho loarelloù « difiñv-e-keñver an douar ».

Talvezout a rae ar boan displegañ ar bennreolenn anezho, rak gouest int da vezañ lakaet da dalvezout e doareoù dedennus-meurbet, evel ma vo gwelet larkoc'h : arvesterezed, adkaserezed... A-benn lec'hiañ ul loarell difiñv-e-keñver an douar, e ranker labourat resis-kenañ, tremen dre galz tastornadennoù, evit he lakaat difazi war ar c'helc'hhent divizet, implij kalz a c'hremm (muioc'h eget evit kas un draenn war al Loar). En abeg da-se, n'eur ket deut a-benn da vestroniañ ervat an deknikenn-se, nemet war hanter ar bloavezhioù 60.

Bed al loarelloù a zo e-barr an emzispakañ anezhañ. Niverus, liesseurt, a-wechoù dic'hortoz ha bepred oberius, maz eo ur souezh, eo ar sevenedigezhioù a c'hell c'hoarvezout a-ziwarno.

362-363

En abeg d'ar pezh a goust ar bannañ, ez eo gwir na laker ket war gelc'hhent ne vern petra, hag ez eo an ardivinkoù a vez lakaet war vourzh un dibab e gwirionez eus ar pep larkañ e-keñver ar peurijinekaat hag ar peurvunutaat. A-hend-all, e kemer an teknikennoù-se muioc'h a dalvoudusted eget war-c'horre an douar, e-lec'h ma c'hoarvez ur gont a zo a ziemsavioù (dистраñsadurioù posubl en darempredoù dre skingomz, strishadur an dachenn-welout).

Evit ar sevenedigezhioù da vezañ nes-tre an eil re d'ar re all e-keñver an deknikelezh rik, eo bet gwell ganimp, o vezañ ma oa se resisoc'h, disrannañ ar sevenedigezhioù peoc'hel diouzh ar re vrezelouriezhel. Un aes a zasstriv eo stlakañ an daouarn gant ar re gentañ ha c'hwitellat a-enep an eil re. Daoust, avat, hag ez eo ken eeun-se an traoù ? Gwelet e vo, diouzh un tu, e laka da c'hoarvezout ar sevenedigezhioù peoc'hel eneberezhioù grevus-meurbet e-keñver kalvezouriezh hag armerzh, ha, diouzh an tu all, e ro al loarelloù-spiañ an tu da wiriañ ha bez' e vez miret an emglevioù a-zivout an holladoù-armoù (englevioù SALT) ha dre-se da bellaat diouzh digempouezioù armeadel arvarus.

Al loarelloù dizarm

Al loarelloù hinouriezhel

Diouzhtu ez eus bet soñjet implij al loarelloù evit rakc'houzout an hin, rak, a-ziaraok, eo ret anzav n'oad ket aet kalz war-raok war ar c'hraf-se. Ar arbennigourien a varn penaos, gant an doareoù emgemañ a-vremañ, e chom diasur-kenañ ar rakverzhadennoù en tu-hont da 2-3 devezh. Ret eo anzav, kenkoulz-all, n'eo ket deut an implij eus al loarelloù-hinverkañ da gemmañ nemeur anaveziadoù ar gudenn. Ha koulskoude ez int bet dreistijinekaet-kenañ, al loarelloù-se ! Ar re arnevesañ eus al loarelloù-hinverkañ (SMS ha GOES evit an USA, METEOSAT evit Europa ha GMS evit ar Japan) a zo war gelañ difiñv e-keñver an douar (eus al lec'h m'emaint, e weler an drederenn eus gorread an douar) ; luc'hskeudenniñ a reont ar gorread koumoulek ouzh ar sklerijenn-natur (dispar e vez ar skeudennoù) ; dindan hedoù-gwagenn disheñvel an eil diouzh egile, e vuzuliont an aerbouez, an derez-gwrez, hag ar glebor, e-keñver usuhelderioù disheñvel ; treuzstummañ reont an holl anaveziadoù-se, al luc'hskeudennoù en o zouez, en arouezennoù tredanel, ha, da-c'houde, e gwagennoù, hag a vez degemeret gant imbourc'hlec'hioù a-seurt gant hini Pleuveur-Bodoù, e-lec'h ma vez an holl arouezennoù digevrinekaet ha marilhet. A-ziwar al loarelloù-se, e c'heller spurmantañ munudennoù dezho war-dro 2 km a vent. En tu-hont d'un anaoudegezh spisoc'h eus an aerwiskad, o deus al loarelloù-se sevenet un nebeut kefridioù talvoudus. Da skouer, diouzh ar stumm a zo d'ar c'houmoul, e c'hellont diguzhat ar c'horventennoù hag ar gouravel-droioù, spisaat al linenn-hent a heulhint war a c'heller soñjal, ha, diouzh ma vez, lakaat goullonderiñ ar c'herioù diouzh o zud : an degouezhenn-se a zo bet anezhi en U.S.A. Tu a roont c'hoazh da gaout un alberz eus tevder ar morglerennoù, ar pezh a ro an tu da dremen hep implij al listri-diglerennañ.

364

Ne c'hell ket al loarelloù, drezo o-unan, reiñ an tu da rakwelout an amzer a raio. Rak, da skouer, n'int ket gouest, bewech, da verkañ roud an avel en un andred resis. An evezhierz a-rez an douar a chom ar pep retañ ; hogen ar stankter anezhañ a chom dizingal-meurbet : d'ar muiañ er broioù diorroet, d'an disterañ er gouelc'hioù hag a-live gant ar meurvorioù. Ur frank-meurbet a enklask hinouriezhel, o kemer perzh ennañ 145 bro (anv ofisiel : GARP = Global Atmosphere Research Programm), a zo o paouez bezañ kaset da benn e-kerz ar c'hwec'hmiziad kentañ eus 1979, ar pal anezhañ dastum ar muiañ ar gwellañ a anaveziadoù hinouriezhel kempredel, lodennet war an hollad eus ar voull-zouar. Merzit kentoc'h ! En tu-hont da 9 loarell hinouriezhel, ez eus bet lakaet war-loc'h 10.000 imbourc'hlec'h-war-zouar, 400 a voueoù war-c'horre ar meurvorioù, 300 baloñs-sontañ e-barzh an aerwiskad, hag ez eus bet pourvezet gant ardivinkoù, diwar abeg divoas, 7.400 a listri ha 1.600 a girri-nij kenwerzhel. Gant ar yoc'h-se a anaveziadoù en he fezh, o deus an arbennigourien spi da ijinañ ul loarell-skouer, hag a gasfe diogelled ar rakverzadennoù eus 3 da 8 devezh. Gortozomp eta ! Ma c'hoarvezfe kement-se, e vefe bras-divent an disoc'hoù e-keñver armerzh, dreist-holl war graf al labour-douar.

A-raok ehanañ gant al loarelloù-hinverkañ, ez eo mat lavarout e c'hell ar re-mañ bezañ c'hoazh, diwar zegouezh, loarelloù-selaou-skingomz. Da skouer, e-kerz an oberiadeg GARP meneget a-us, al loarelloù-hinverkañ eo a gendastumas ar c'helaouadurioù bet kutuilhet war bourzh ar c'hirri-nij hag al listri-kenwerzh ha bet skingomzet ganto, e dibenn mareoù resis, dindan stumm berrgemenoù skingomzet.

365

Nebeut ' zo, da-geñver an « Transat mont-dont », lec'hiadur pep lestr a veze anavezet resis-tre, pep hini anezho o vezañ pourvezet gant ur skingaser e veze resevet e gasadennoù gant al loarell TIROS N (amerikat), prederiet gant an ardivink ARGOS (gall) ha treuzkaset d'ar CNES (Centre National d'Etudes Spatiales : Kreizenn vroadel a imbourc'hioù en egor), e Toulouse. Gant an ardivink ARGOS, c'hoazh, ez eus bet dispennet roudoù arzhed gwenn oc'h ergerzhout war ar vorglerenn.

Al loarell-pellziguzhat

Gant harp ar seurt-se a loarelloù, e kemerer da bal studiañ dre ar munud

gorre an douar hag ar peadra a zo warnañ. Ar bennreolenn eo luc'hskeudenniñ ar gorre-mañ dindan hedoù-gwagenn disheñvel (hewel pe isruz). Kement-mañ a dalv studiañ en un doare resisoc'h penaos e tistaol ar gorre-se sklerijenn an heol pe e kas diouzh e du e skinadurioù e-unan, ar pezh a ro an tu, diouzh ma vez, da wiriañ anien ar gorre-se. Al luc'hskeudenniñ klasel ne spir ket e-keñver ar seurt labour-se, rak, e gwir, ez eo ar sklerijenn ur c'hemmesk a sklerijennoù elfennel (eus ar ruz d'ar glas-ruz) ; hag al luc'hskeudenniñ klasel ne ro ket an tu da ziguzhat ar skingaserezh isruz, hemañ o vont ez strizh keñver-ha-keñver gant derez-gwrez ar c'horf a vez o skingas.

Dre an hent-se e c'heller dont a-benn da anaout ur bern traoù. Ar maout a ya bremañ gant an Amerikaned e-keñver ar pellziguzhat, gant o loarelloù LANDSAT, hag a ra o zroiadenn war 1.000 km a usuhelder hag a gemer skeudennoù dezho da vent 185 km war 185, gant ar galloud da zigoublañ munudennoù 80 km etrezo. Jediñ a reont ivez d'an Amerikaned, en a-raok, kementad o eostoù edeier... kenkoulz hag eostoù ar Rusianed. Jediñ a reont stuz o gounidegezhioù e-keñver yec'hed, rak ur blantenn glañv n'eus ket dezhi an hevelep skingaserezh isruz hag ur blantenn yac'h ; ar pezh a ro an tu da louzaouiñ a-raok ma vez re ziwedhat. Sevenedigezhioù all a c'hell c'hoazh c'hoarvezout, evel maz eo pellziguzherezh al lodennoù mastaret eus ar stêrioù, gouerioù ha lennoù, an tachennoù morlizadur war ar mor (anezho, dre-se, tachennoù peskus), ar pallennadoù-dour dindan zouar. Sevenedigezhioù « war skouer James Bond » a c'hellfe bezañ graet eus sevenedigezhioù 'zo, da skouer : an F.B.I. a merikat a zo en e soñj a-zevri evezhiañ, a-ziwar loarell, ar gounidigezhioù marijuana war-c'horre ar voull-zouar en he fezh. Kudenn dezhañ da zirouestlañ diouzhtu diforc'hañ skinluc'hadur ar marijuana.

366

Bro-C'hall a zo en he gouloù, war hir dermen, en em vataat war-eeun eus he loarelloù-pellziguzhat hec'h-unan, bet bannet gant " Ariane ". E-sell a-se he deus ur raktres anvet SPOT (Système Probatoire d'Observation de la Terre).

367

Al loarelloù-pellgelaouiñ (= loarelloù-adkas)

Al loarelloù-mañ a dalv da adkaslec'hioù etre an ehanlec'hioù-kas hag an ehanlec'hioù-degemer a zo war zouar... O zalvoudusted pennañ eo lakaat e darempred kenetrezo poentoù pell-meurbet an eil diouzh egile : a-ziwar ul loarell diliñv-e-keñver-an-douar, e weler, e gwir, an drederenn eus gorread an douar. Ober a reont evel hon tourioù-adkas hertzel ez omp boas outo, gant kalz tachennoù all a sevenidigezh, liesseurt-meurbet e gwirionez. Rak, evit gwir, ar gwagennoù adkaset gant al loarelloù-se a c'hell bezañ an adskeudennidigezh eus raktresadoù a bellwelerezh, eus pellgomzadennoù, eus pellskrivadennnoù, eus berrgemennnoù kevrinekaet, eus anaveziadoù a-berzh gourjederezed, eus luc'hskeudennoù, eus pajennadoù-kazetenn da vezañ pellvoulet... Lavarout a c'heller, en abeg d'o galloudegezhioù dreistniver, ez eo al loarelloù-pellgelaouiñ ar re ez eo tonket dezho ar muiañ kaout levezon war ar vuhez pemdeziek. N'eus mui meneg hepken a faltazierezh skiantel ; ha stourmerezhoù grevus a zo e-go etre broioù pe gevredigezhioù liesvroadel a zo.

Evit pezh a sell ouzh an darempredoù etrevroadel (dreistholl dre bellgomz), gant an Amerikaned eo emañ al levezon c'halloudekañ. Kenaozet o deus, abaoe 1964, ur gevredigezh etrevroadel, hec'h anv INTELSAT (International Communication Satellite Consortium). Er gevredigezh-se ez eus bet strollet, a-benn bremañ, 101 bro, o kemer perzh kellidel enni (da skouer : Bro-C'hall : 5 %, USA : 40 %), oc'h en em vataat eus servijoù rentet gant loarelloù ijinnet gant Amerikaned ha bannet ivez gant bannadelloù amerikad. Bez' ez eus bremañ un ugent bennak a loarelloù INTELSAT en oabl ha degouezhet eur gant ar 5vet remziad anezho e-keñver teknikelezh. INTELSAT a ya endro e-pad 7 vloaz, a bouez 1 donenn, hag a zo gouest da adkas 12.000 kelc'hredad-pellgomz pe 12 raktresad-pellwelerezh. Nerzh an arouezennoù treuzkaset a vezo brasoc'h eget gant an INTELSATOù kentañ, ar pezh a lakaio aesoc'h ha divisoc'h o degemer a-rez an douar (stignoù mentet disteroc'h).

An uslevezon-se d'an Amerikaned a zo pounner da c'houzañv d'ar Rusianed, hag a glask kenaozañ o gwiad etrevroadel o-unan, ha da Europiz. Ar C'hallaoued hag an Alamaned o deus brasdesket diouzh an teknikennoù-pellgelaouiñ en egor, gant o loarelloù boutin " Symphonie ", bet bannet gant ur vannadell amerikat. Peurbrientidigezh ar vannerez europaat ARIANE a dlefe reiñ an tu da Europiz da lakaat ehan da beuztrec'h an Amerikaned war bep kevezerezh, war hir dermen hepken, evelato. Evel ma vo gwelet, ARIANE d'he zro a vo kevezet gant ar VULZUN egorel amerikat. N'eo ket primgemmadennoù a raio diouer en amzer da zont !

368

O vezañ maz eo INTELSAT un taol-berzh e-keñver teknikelezh ha kenwerzh, e soñjer endeo sevel kevredigezhioù damheñvel, evit lakaat diogel an darempredoù, n'eo ket etre ehanlec'hioù difiñv, met etre traënoù fiñvus, evel al listri hag ar c'hirri-nij. Rak, war an dachenn-se, e vez alies diaester gant an darempredoù. En taol-mañ, e c'hell ar Rusianed ha Broioù ar Reter dont da izili e-barzh ar c'hevredigezhioù-se, ar pezh ne c'hoarvezo ket, hep ma tarzhef kudennoù politikel, pa soñjer el lañs kemeret war ar broioù-se gant an Amerikaned, e-keñver teknikelezh.

Broioù ' zo, darn frank-meurbet, darn strewet-kenañ a dammoù, o deus kroget d'en em vataat eus al loarelloù evit o darempredoù broadel o-unan, pe vroadel e vefe al loarelloù-mañ - evel maz eo re an URSS, an USA, ar C'hanada, Indonesia - pe loarelloù INTELSAT e vefent, evel re Aljeria. Ar roll anezho, hep mar, n'eo nemet boulc'het.

En abeg ma kendalc'h an teknikennoù da vont larkoc'h-larkañ, e c'hoarvezo dizale kudennoù politikel, rak ul loarell « vroadel » a c'hell, hep arvar, a-ziwar-youl pe get, dont da vezañ etrevroadel, diwar zic'hlannañ a-zioc'h ar broioù all. Hag evit gwir, meneg a zo, a-benn 1985, eus loarelloù-pellgelaouiñ nerzhed-dreist, ar c'hasadennoù diouto o c'hellout bezañ degemeret war-eeun gant prevezidi ordinal, war-bouez kaout ur stign izelbriz. Al loarell a ya neuze endro evel un ehanlec'h-kas. Kement-mañ a zegas riskl na vefe horjellat ar c'hempouezioù omp boas outo, war tachennoù evel ar yezhoù komzet, ar sevenadurioù hag ar politikerezh. Kalz broioù 'zo hag a ya nec'het endeo : anv a zo eus ar ret maz eo reoliennata. An dasstriv a c'hoarvez e broioù Kornog-Europa eo aozañ o-unan o loarelloù-int a bellwelerezh wareeun : gwell eo bezañ o tourañ eget bezañ douret ! Bro-C'hall, evit he lod, he deus savet ur raktres evit ur seurt loarell (anv : TDF 1), da vezañ bannet a-unan gant an Alamaned... mar plij ganto ! Afer da heuliañ...

369

En tu-hont d'an treuzkas raktresadoù-pellwelerezh ha pellgomzadennoù, ar pellgelaouerezhioù en egor a vezo emsav-dreist war an tachennoù meneget a-us en abeg d'o fonnder bras-meurbet. Da skouer, evit treuzkas anaveziadoù etre gourjederezoù disheñvel, ar fonnder a zo 20.000 gwech brasoc'h eget pa vez meneg da dreuzkas dre al linennoù-pellgomz ordinal. Evit pezh a sell ar pelladskrivañ-testennoù, e lavarar, diwar-benn al loarell vroadel gall dazont TELECOM 1, a vo lakaet war gelc'hhent e 1983, e treuzkaso danvez ul levr ken tev ha " Brezel ha Peoc'h " gant Leon Tolstoï dindan nebeutoc'h eget un eilvedenn. Seurt taolioù-berzh n'int dedennus nemet evit ar marc'hadaouerezh meur (big business) (embregerezhioù, arc'hantioù, kevredigezhioù-kreataat) hag ivez, na petra 'ta, evit an ensavadurioù-stad. Kenkoulz-all, ar gevredigezh amerikat evit ar gourjederezoù IBM n'he deus ket faziet war ar c'hraf-se, rak perzh-dre-arc'hant a gemer ar gevredigezh-se er gevredigezh SBS (Satellite Business System), hag a vanno al loarelloù-marc'hadaouerezh adalek 1980.

Al loarelloù evit et merdeñ

Emsav-dreist e c'hell bezañ al loarelloù evit ar verdeadurezh, rak an tu a roont d'en em lec'hiañ, gant ne vern pe amzer, war 100 m pe dost, pa ne c'heller ket, gant ar c'hwec'hvedenn-gelc'h, tizhout ken tost (war-dro 500 m hepken) ha c'hoazh war-bouez kaout amzer digoc'henn d'ober implij anezhi. Al listri

amerikat o deus kroget d'ober gant seurt loarelloù (gwiad TRANSIT). Eeun a-walc'h eo pennreolenn ar mont-en-dro anezho. Al loarell, a zaskas arouezennoù da-gaver mareoù anavezet mat, ha dre-se war lec'hiadurioù anavezet war linenn-hent al loarell. An dale a lak an arouezennoù-se da erruout betek al lestr a zo kenfeurel gant an hed a zo etrezañ hag al loarell. Al lestr a zo war ur gelc'hienn ez eo ar c'hreiz anezhi al loarell da goulz an daskasadenn hag ar skin anezhi a-feur gant dale an arouezennoù. War-bouez en em zaveiñ, war an hevelep koulz, da veur a loarell eus an hevelep stumm, e treser ken lies a gelc'hiennoù oc'h en em droc'hañ an eil eben en andred end-eeun m'emañ al lestr.

370

Al loarelloù armeadel

Al loarelloù-mañ eo a zo gouest d'ober ar re sabatuusañ eus an taolioù-berzh. Yoc'hadoù-arc'hant peurzivent a zo bet lakaet evit gwir, e-sell d'o c'has war-well, gant an div vro nemeto hag o deus anezho : an USA hag an URSS. Kenkoulz-all, al loarelloù dizarm en em vata eus teknikennoù bet peurbrientet da gentañ e-sell eus al loarelloù armeadel,

Al loarelloù-spiañ

Troiata 'ra al loarelloù tost-tre da c'horre an douar (200-300 km) ... dreist penn an amezeg.

An USA ne vannont nemet daou anezho ar bloaz, d'ar mare-mañ, met ar re-mañ a zo dreist d'ober taolioù-berzh. Hag evit gwir, emaoomp endeo gant ar pevare remziad anezho e-keñver teknikelezh, hini ar " Big Bird " -où, ur seurt euzhviled a 12 tonenn, ezhomm evit o bannañ eus ar c'halloudekañ eus bannadelloù binviaoueg-brezel an Amerikaned, an d- " Titan III D ". An euzhviled-mañ a ro bod da ardivinkoù peurijinekaet, en o zouez div fiñvskeudennerez, an hini c'halloudekañ eus ar re-mañ o reiñ an tu da welout munudennoù dezho en-dro da 30 kantvedmetrad a vent ! War-bouez kement-se, ne c'hoarvez kudenn brederius ebet, pa glasker spurmantañ savadurioù-brezel, kirri-emgann, kirri-dougen, bagadoù-soudarded war-loc'h. " Big Bird " a vez pourvezet gant un diguzherez-skinou-isruz, gouest da « santout » ar wrez diouzh ur strouezheg o teviñ, nemetken ! An deknikenn pellziguzhat a vez implijet c'hoazh evit divasklañ an touellguzherezh : kinkladurioù e prenn, skourroù kinkailhet ne lakont mui den da faziañ. An holl ditouroù-se a c'hell bezañ rakverniet war ul lietenn vagnetek hag esstlapet diouzh al loarell e-barzh klozennoùigoù (6 anezho) hag adtapet da-c'houde gant kirri-nij diouzh-se, pa zistro ar c'hlozennoùigoù e-barzh an aerwiskad. War-dro 35 a loarelloù-spiañ a vez bannet bep bloaz gant ar Rusianed : ar pennabeg d'an niver anezho da vezañ bras eo ma ne vez ket implijet teknikenn ar c'hlozennoùigoù-da-adtapañ.

Gant pep a rumm loarelloù, an Amerikaned hag ar Rusianed o deus heuliet ar brezel etre Indez ha Pakistan e 1971 hag Israel hag Arabiz e 1973... evel pa vefe en ur gador-vrec'h, gant ur gwel spisoc'h eus ar stuz ma vezent eget an emgannerien o-unan.

371

Al loarelloù-evezhiañ

Al loarelloù-evezhiañ a zo en o c'harg spisverzañ loc'hadur emvannadelloù etrerannvedel. En doare-se, ez a an « dale-diwars-drugarez », en degouezh a dagadenn nukleel, eus 15 munutenn gant ar radarioù klasel, da 30 munutenn. Al loarelloù-spiañ a zo kalz re verrwel evit ar seurt labour-se, rak strizh-meurbet eo o zachenn-welout.

An Amerikaned o deus evel-se 3 loarell-bellevezhiañ war gelc'hhent difiñv-e-keñver-an-douar. Diguzherezoù-skinou-isruz a vez o spisverzañ an eien-gwrez. Kerkent ha ma vezont war emziwall, ur fiñvskeudennerez a ro an tu da ziforc'hañ ur gwir emvannadell ... diouzh dassked an heol, diwar zegouezh, war ar c'houmoul. En tu-hont d'ur miliad a dennadennoù-emvannadell, etre 1971 ha 1974,

o deus endeo spisverzet al loarelloù-se, e-kerz ar vunutenn war-lerc'h o bannidigezh. Reiñ a reont an tu da anaout perzhioù-diforc'hañ an emvannadelloù-se ha da evezhiañ ouzh sevenidigezh an emglevioù SALT.

372

En ur evezhiañ a-dost, e c'heller furchal ar morioù hag ar meurvorioù, evit spisverzañ al listri, dre implij radarioù lakaet war bourzh al loarelloù, pe c'hoazh implij loarelloù diouzh-se, evit selaou a bep seurt skingasadennoù tredanel dizarm pe armeadel (spierezh elektronel).

Loarelloù all

Anat eo penaos o deus an armeidi o loarelloù-pellgomz dezho o-unan, ar re-mañ o lakaat darempred war an taol etre dastumlec'hioù armeadel, penngarterioù, listri ha kirri-nij, pegement bennak a bellder a vefe etrezo.

Implij a reont c'hoazh loarelloù evit ar merdeñ. Al loarelloù TRANSIT, da skouer, a dalvez un darn anezho d'an U.S. Navy. Gwelet e vo, en USA, e-kerz an dekvloavezhad 80-90, donedigezh loarelloù evit ar merdeñ peurspis (lec'hiadurezh war-dro 3 metrad !), pourvezet ma vint gant horolajoù peurreoliek (ar feur-direoliekaat anezho : 1 eilvedenn bep ... 300.000 bloaz !) : al loarelloù NAVSTAR. Ar gwiad nevez-se a vo dezhañ ur skeuliad-implijoù pinvidik-tre, adalek ar « soudard war vale » betek al loarelloù all, en ur dremen dre ar « Cruise missiles » pe emvannadelloù-beajourezed, ur seurt kirri-nij emvlenius o tougen ur bec'h nukleel, hag en em reno o-unan evel-se etrezek o fal, gant un dizhusted hep he far.

Ha bremañ ?

Goude dibunañ kemend-all a daolioù-berzh teknikel, eo deuet ar c'houlz d'en em c'houlennata.

Daoust hag e vo kemmet a-grenn hor buhez pemdeziek gant donedigezh al loarelloù ? Moarvat ne vo ket : implij skoazell ul loarell evit pellgomz eus Brest da Doulon a zo dic'hounid, hep mar ; raktresadoù-pellwelerezh an estren ne zedennint, hep mar, nemet un darn dister eus an dud. Evit pezh a sell ouzh an hin, an arbennigourien a soñj e vo ret gortoz 10 vloaz all c'hoazh, a-barzh tremen eus 2 da 8 devezh, e-keñver rakdiouganañ.

373

En enep da-se, avat, e seblant anat a-walc'h ez eo al loarelloù binvioù a c'halloud, ken war dachenn an armerzh, ken war dachenn ar politikerezh. Meneget eo bet endeo ar c'hevezerezhioù a zo o c'hoarvezout war dachenn al loarellou pellgelaouiñ. Etre an USA hag Europa ez eus da grediñ e vo c'hoazh mareoù tenn, o tegas da soñj aferioù " Concorde " hag " Airbus ". Bannidigezh " Ariane " a lako da skañvaat moustrerezh an Amerikaned, met ne vo ket evit pell ; rak hep dale, en USA, e vo an dougen-en-egor dispac'het - n'eus ket a stambouc'h er ger-mañ - hag ar priz a gousto ar bannañ loarelloù a vo digementet 5 pe 6 gwech, en abeg da implij bulzunoù egorel-da-adtapañ, anezho ur seurt kirri-nij-bannadelloù : bannadelloù pa loc'hont, o tiblas a-serzh war un dastumlec'h-bannañ, kirri-nij pa erruont, goude ober, etretant, loarelloù eus bec'hioù o vont betek 30 tonenn a bouez ! C'hoari he devo ARIANE o kenderc'hel da gevezañ ! Savomp ur vulzun egorel europat, a lavarot. N'eo ket un dister a dra : an NASA a labour abaoe 1972 war ar raktres-se hag a ouestl d'e seveniñ ar pep founnusañ eus he yoc'h-arc'hant. Diseblant ne c'heller ket chom e-keñver al lakaat-war-dreiñ ar bulzunoù, rak, en taol-mañ, e roint an tu, tamm-ha-tamm, da aozañ ur gwir greanterezh en egor (kreizennoù heolc'hremmus en egor, labouradegoù en egor evit oberiañ kemmeskadurioù-metaloù ispisial...).

Diouzh tu an armeidi, e seblant e vez renket an holl elfennoù e-sell eus ur brezel da c'hoarvezout en egor. Rak al loarelloù-brezel a zo, anat eo, pezhioù meur e-barzh an taol-echedoù emañ an « daou veur » o c'hoari an eil ouzh

egile. Ma tegouezh tabut, e teu da vezañ pennrenkel evit pep hini anezho skeiñ d'an traoñ loarellou egile. N'eo ket tuiou a ra diouer : emvannadelloù klasel, loarellou-hemolc'hiñ, skinoù laser kaset a-ziwar an douar, ha zoken, war a lavarer, kanolioù gant elektronou. Evel a weler, n'eo mui an egor kenster gant ar sioulder.

374

Keñveriet ouzh ar c'hlaoustreadou-se peurzivent, e seblant ar rannvroioù bihan-tre. Daoust hag e kavo ar stadoù arnevez digarez ac'hano da lemell c'hoazh diganto un tammig muioc'h eus o doareoù gwirvoudel

ROLL-GERIOÙ

A

aerwiskad : atmosphère.
adkaserez : relais (organe).
adkaslec'h relais (lieu)
anaveziad : donnée.
arreadel : militaire.
arnodva egorel : laboratoire spatial.
arouezenn : signal.

B

bannadell-dougen : fusée porteuse.
berrgemenn : message.
binviaoueg-brezel : arsenal militaire.
brasdeskiñ : s'initier.
bulzun egorel : navette spatiale.

C'h

Chwec'hvedenn-gelc'h : sextant (Vallée).

K

kelaouadur : information.
kelc'hhent orbite.
kelc'hredad : circuit.
kellidel : financier.
kemmeskadur-metalou : alliage.
kenfeurel : proportionnel.
kevrinekaat : coder.
klaoustread : enjeu.
kreizenn-heolc'hremmus : Centrale solaire.
kreizspeget : polarisé.
kreskerezh développement.

D

dale-diwar-drugarez : délai de grâce.
darn-klokaat : partie intégrante.
daskemmerezh : évolution.
dasstriv : réaction, réflexe.
dastumlet'h arreadel : base militaire.
diemsav : inconvenient.
digevrinekaat : décoder.
diogelded : fiabilité.
distrañsador : gêne, perturbation.

E

ehanlec'h station.
emvannedell : missile.
esstlapañ : éjecter.
etrerenvedel : intercontinental.

F

faltazierezh skiantel : science fiction.
feur-direoliekaat : dérèglement.
fiñvskeudennerez : caméra.

G

galloud-digoublañ : pouvoir de résolution.
gouravel-dro : cyclone.

gourjederez : ordinateur.
H
hed-redadenn : trajet.
hed-gwagenn : longueur d'onde.
hevelebakaat : identifier.

375

I
imbourc'hlec'h : station scientifique.
Isprizachañ : sous-estimer.
L
loarell : satellite.
lestr-diglerennañ : bateau brise-glace.
linenn-hent : trajectoire.
loarell-difinv-e-kenver-an-douar : géostationnaire.
loarell-hinverkañ : satellite météo.
loarell-selaou-skingomz : satellite d'écoute-radio.
loc'hadur : départ.

M
marc'hadaouerezh : business, les affaires.
menoziad : concept.
morglerenn : banquise.

P
pelladskrivañ : télécopier.
pellvoulañ : téléimprimer.
pellziguzhat : télédétection.
pennrenkel : prioritaire.
pennreolenn : principe pratique.
perzh-diforc'han : caractéristique.
peurbrientidigezh : mise au point.
peurijinekaat : sophistication.
peurvunutaat : miniaturisation.
pounner-a-bouez : poids lourd.
primgemmadenn : à coup, péripétie.

R
raktresad : programme.
rakverniañ : stocker.
rakverzanenn : prévision.

S
skeuliad : gamme.
skinluc'hadur : spectre (lumière).
sevenidigezh : application.
spisverzañ : repérer.
Stourmerez : affrontement.

T
tan-arvest : feu d'artifice.
tastornadenn : manoeuvre.
tizhusted : précision de tir.
touellguzherezh : camouflage.
traënn : objet.
troiadenn : révolution.

U
uslevezon : prépondérance.
usuhelder : altitude.

AL LEVRIOÙ

GLAS EVEL DAOULAGAD C'HLAS NA OANT KET MA RE

Goude souezhiñ un tamm war vurutelladenn L. F. Andouard a-zivout ar romantig skrivet ganin (gw. Al Liamm, niv. 201, p. 302), em eus bet soñj e oa c'hoarvezet din, pa oan studier, lenn ur pennad diwar-benn « klaskerezh an andonioù ». Savet e oa bet ar pennad-se, anat eo, gant ur c'helenner : atav e vez kavet, e-touez ar re-se, unan bennak oc'h en em c'houlenn petore kudenn souezhus an alma mater a c'hellfe pourchas dezhañ un danvez-studi diberc'henn, un terra incognita da ergerzhout, da ardameziñ ha da stagañ outi e anv. Hemañ, disoñjet ganin piv e oa ha n'em eus ket c'hoant da gaout soñj, en doa ijinet ur skiant nevez : an « andonerezh ». Ober un diniveradeg eus an temoù lennegel, ha gwelout goude-se penaos e oa tremenet an tem-mañ-tem eus an eil skrivagner d'egile : mont war-lerc'h an temoù, evel un Tailhanter war-lerc'h ar plasteg. Gwelout a rit penaos ez ay an traoù en-dro. Un tem, da gentañ. Lakaomp : ar mestr o pokat d'ar vatezh. Ur sakre rollad anvioù skrivagnerien a vo kavet da lakaat da heul. Neuze avat, evit bezañ skiantel, e vo ret spisaat, rak en dielfenañ emañ ar skiant : goude un devezh servij, daou zevezh, ur miz, goude ur bloaz, ugent vloaz... Ne vo ket diaes ober ur bern is-pennadoù. Ma'z eus tu, ober gant enebadurioù-daou, a vez atav sklaeroc'h ha neuze dispar evit ar mekanikoù ! a : o c'houzout d'ar wreg / hep gouzout d'ar wreg ; b : dimezet ar vatezh / dizimez ar vatezh ; k : gant ur bugel da heul / hep bugel da heul... Petra n'en dije ket graet ar c'helenner-se m'en dije bet ur gomputerez en e servij ! Na pebezh « bank anaoudegezhoù » en dije savet ! Tu a vije, hiziv, da ober ar goulenn ouzh an ordinateur : pet den dija o deus skrivet war an tem a gaver e levr Per Denez ? N'on ket sur e vije bet a-walc'h eus un niverenn a-bezh eus Al Liamm evit moulañ anezho-holl. Rak istor ar c'hoari-daou o treiñ da c'hoari-tri a zo

ken kozh

hag ar Baradoz :

gwelit istor Adam, Eva hag an naer, gant Doue an Tad, war ar marc'had, o sellout dre doull an alc'houez.

Ret eo din reiñ kerse da L. F. Andouard : morse n'am eus lennet ar romant " Kristina " en deus plijet dezhañ kemend-all, ha gant gwir abeg ne zouetan ket, hag e niverenn 201 Al Liamm eo am eus kavet meneg, evit ar wech kentañ, eus ar skrivagner, pe skrivagnerez, Claude Houghton, na seblant ket e vrud, pe he brud, bezañ aet kalz en tu-hont da 1936 ha d'an Tauchnitz edition.

PER DENEZ

377

AR CHALBOTER HUNVREOÙ

gant Tudual Huon

E soñj e oan da sevel ur pennad e brezhoneg diwar-benn levr kaer Tudual Huon evel m'am boa savet unan e galleg hag a zo bet embannet en un nebeud kelaouennoù " La Bretagne à Paris " 25-7-80, en o zouez. Met, a-benn ar fin, e kavan kerkoulz embann, gant e aotre, an diskleriadurioù en doa kaset din diwar e benn e-unan hag a zo kalz gwelloc'h eget ar pezh am eus skrivet hag a c'hellfen skrivañ.

A-hend-all ne vefen ket gouest da zisplegañ mat va mennozioù rag-eeun e brezhoneg ha re a zoujañs am eus evit yezh va c'halon a zeuio morse da vezañ siwazh yezh va fluenn, evit hen ober.

Ouzhpenn-se em eus bourret bepred el lizheroù, a sellan enta evel lod prizius eus hol lennegezh hep mar na marteze, ha muioc'h c'hoazh lod eus hor buhez.

Herve LANNDIERN.

Treboul 20/03/80.

Ral eo din skrivañ diwar va fenn ha marteze e vo un tamm luziet an traoù ganin. Spi am eus e viot gouest da gompren ar pep brasañ memes tra.

Ganet on bet e Brest d'an 20 a viz Genver 1953. Evel ma ouzoc'h ne oa nemet brezhoneg ganeomp er gêr, setu ma oa gwall zister ar galleg a zistripen pa 'z is, stag em c'hwec'h vloaz, d'ar skol c'hall. Ne gav ket din em eus bet diaesterioù o teskiñ galleg, n'em eus dalc'het tamm soñj ebet penaos e raen, soñj em eus avat e komzen brezhoneg gant skolaerien zo. Va holl studioù am eus graet e Brest, e Lise Sant Mark da gentañ betek an trede klas hag e Kerichen betek ar Bac. Ur Bac A evel just (ne oan ket ur mailh war ar jediñ). A5 em eus graet, da laret eo studiañ yezhoù dreist-holl (Spagnoleg, Germaneg, Saozneg). Skol-veur Vrest goude evit pakañ un aotreegezh war ar Saozneg. Skoazeller on bet e Kembre e-pad daou vloaz. Ar wech kentañ e Aberteifi (Cardigan e saozneg). Eno em eus bet tro da zeskiñ un tamm kembraeg. An eil gwech, e 1977, e oan e Llandrindod Wells, ur vro digembraek, siwazh. Me ' gav din ez eo e Kembre ez on staget da skrivañ e brezhoneg ha da vezañ dedennet gant al lennegezh. Kalz a saozneg a lennen d'ar c'houlz-se : Donleavy (marteze hoc'h eus lennet " The Ginger man " ?), Burgess, Kingsley-Amis, hag ur bern skrivagnerien all (Joyce evel just) ar pep brasañ e saozneg. Dilabour on bet ur pennad mat goude Kembre. Er bloavezh 1978 em eus labouret e ti ul luc'hskeudenner e Brest (stage en entreprise, plan Barre). Ur furlukinerezh evel just, rak echu gant ar staj, e oa echu gant ar vicher ! Dedennet-tre e oan hag ez on c'hoazh gant ar foto. D'am soñj ez eo un arz evel ar re all. Va c'hoñje am eus graet warlene en Arsanailh Brest ha goude bezañ chomet dilabour e-pad c'hwec'h miz bennak, setu me kelenner en ur skol brevez e Sant-Mark Brest. Me ' gav din ez on tonket da chom e Brest, daoust ma ne blij ket kalz din kêr Vrest.

378

Diwar-benn **Ar Chalboter** e c'hellfen reiñ deoc'h un nebeud diskleriadurioù. Ar gontadenn gentañ zo bet skrivet darn e Kembre, darn e Breizh. Ur seurt diviz am boa bet gant ur c'helenner hag e wreg. Bez' ez eo, ma fell deoc'h, un darvoud boutin eus ar vuhez pemdeziek. Un tamm muioc'h a fent em eus lakaet e-barzh memes tra. Rouez eo e skrivfen ur gontadenn buan ha buan. Tamm-ha-tamm e teu. Peurvuañ n'ouzon ket penaos ez echuo. Alies e krogan meur a gontadenn asambles. **Gant kranked bihan em fenn** eo ar gontadenn diwezhañ am eus skrivet. Ur bloaz labour, met hep labourat stank, o leuskel da c'hlec'hiañ. Bez' ez eo istor unan foll, met ivez, n'ouzon ket hag-eñ e vez gwelet, stourm un den, e-unan, un den ha ne vez ket komprenet gant ar re all, « un estren en e vro ». Klasket 'm eus implij geriaoueg ar mor (e-giz m'en deus graet Fañch al Lae e " Bilzig "). Setu perak marteze e kaver re a c'herioù diaes, resis ha fetis. **O arc'hant brein** eo ar gontadenn gentañ am eus bet skrivet e 1976 pe 77. Skrivet eo bet e Kembre. **Kleñved Jord A...** a zo bet krouet, en ur stumm, abalamour d'an darvoudoù am boa-me bevet. Edon e Kembre, war ar maez en un ti-feurm va-unan-penn e-touez ar menezioù hag an deñved. Un aergelc'h iskis. Lennet am boa " A winter in the Hill " gant John Wayne, hag am boa kavet dibar hag ivez " L'eau et les rêves " gant Bachelard. Ar prederour gall nemetañ hag a blij din. Un den kizidik, ur barzh anezhañ, daoust d'e spered skiantel-rik. Gouzout a ran e plij deoc'h ar gontadenn-se. Din-me ivez e plij, klasket am eus ober memes tra gant **Kranked bihan em fenn**. Ne gav ket din e vijen deut a-benn ken mat, daoust m'emañ an dour a bouez e-barzh ivez (cf. Virginia Woolf). Nerzh ar mor, e imor, e varradoù-fulor, e sioulder, hag an den, dister, gwan ha prederiet gant e stultennoù, sorc'hennet gant e vezañs, un tamm paranoiak. **Torfed koad Poulin** a zo disheñvel-krenn. P'edon er vro Bagan, em boa klevet kouerien o kontañ istorioù iskis c'hoarvezet er vro. Gant aked em eus graet gant yezh Leon evit derc'hel d'an

aergelc'h. Bec'h a-walc'h am eus bet o skrivañ anezhi ha meur a wech ez on bet kuzuliet gant va zad, e-ser cheñch an istor, lakaat muioc'h a vuhez, c'hwennañ ar park un tamm. Dav mont gant red ar vuhez a zo bet skrivet en un doare disheñvel-tre. Implijet em eus ar « skritur otomatek » er penn kentañ. Ne ouien, e doare ebet, da belec'h e oan o vont. Ur bern menozioù, istorioù o stekiñ, o tarzhañ a-gevret. Me gav din ez eo er gontadenn-se e kaver ar muiañ a fent, goaperezh e-leizh, c'hoarzhin goap ouzh ar skrivagner e-unan, ouzh ar vuhez, pal ar vuhez, hag all...

N'ouzon ket hag-eñ e c'hello kement-mañ sikour ac'hanoc'h. Skrivet em eus kalz p'edon dilabour e-pad an hañv tremenet. Stag on bremañ gant meur a gontadenn all ha daou romant-polis. Doue 'oar peur e vo prest pep tra. C'hoant-bras em eus stagañ da skrivañ traoù fentusoc'h (doare Jakez Konan e " Lannevern e kañv ", " Noblañs ") ; romantoù-polis e doare Jean Vautrin a blijfe din skrivañ (" Billy the kick ", " Bloody Mary "). Romantù aes da lenn, don a-walc'h, o tamall ar gevredigezh gant fent.

379

Disoñjet em eus komz diwar-benn **Ar Chalboter huñvreoù**, barzhoneg e komz plaen, savet e daou damm. Marv Yann Kel hag al lanv du a oa an daou zarvoud o doa fromet ac'hanon d'ar c'houlz-se. Mesket em eus an daou. N'ouzon ket hag-eñ ez eo anat d'an holl.

N'on ket staget da skrivañ danevelloù diouzhtu. Barzhonegoù berr em eus skrivet a-raok. Embannet int bet e-barzh " Al Liamm " hag e " Barzhaz Yod Kerc'h " (seizh pe eizh barzhoneg). Un nebeud re all zo bet ivez e-barzh ar gelaouenn " Yod Kerc'h ".

Dre zegouezh on deuet da vezañ rener " Yod Kerc'h ". C'hoant hor boa ober ur seurt " Charlie hebdo " e brezhoneg. Evel just n'eo ket bet posupl dre ma ne zeue ket er-maez alies a-walc'h. Va soñj zo bet sevel ur gelaouenn bannoù treset nemetken. Met kalz muioc'h a skridoù a oa eget a dresadennoù. A-viskoazh on bet dedennet gant ar bannoù treset ha lenn a ran muioc'h a vannoù treset e galleg eget levrioù all er yezh-se. 'M eus aon e ranker kaout kalz muioc'h a amzer evit sevel un istor ha tresañ anezhañ goude, re hir eo e gwirionez. Ret e vije ober nemet se, ma c'hellfen ne rafen nemet se ! Da lavarout eo dont da vezañ un treser a vicher. Aze e rankfen skrivañ e galleg, sevel istorioù e galleg, pezh n'on ket gouest d'ober. Muioc'h a blijadur a gavan o skrivañ e brezhoneg. Peur e vo savet ur gelaouenn bannoù treset e brezhoneg nemetken ? Berzh a rafe a gav din. Treserien a-walc'h zo.

TUDUAL.

G. S. - Dimezet on bet e miz Ebrel 1978 e Brest hag euredet e Lokenin e Bro-Wened. Stag on chomet ouzh Bro-Wened hag he yezh, abalamour d'am mamm ha d'he familh sur-mat. P'edon yaouankoc'h ez aen alies gant va breudeur du-hont hag e teue brav ar gwenedeg ganeomp. Stag on da studiañ pizh en-dro ar gwenedeg, ur rannyezh ken pinvidik o vervel a-nebeudoù.

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Euredet eo bet Anna AR BIHAN ha Yannig PICHAUD e Nanterre, d'an 30 a viz Eost.

Aziliz KAILHAREG hag he zud Yann ha Mona zo laouen bras o kemenn deoc'h ganedigezh Morwena-Riwanon-Izold, d'ar meurzh 22 a viz Gouhere.

Maiwenn LEMAITRE a ro deoc'h keloù ganedigezh he breurig Bran, e Langrolay, d'an 2 a viz Here.

Hor gwellañ gourc'hemenoù d'an holl

Kanvoù.

Aet eo da Anaon an Ao. PAVEC, beleg ha rener Skolaj Sant Jozef e Plestin abaoe 1965. Marv eo e fin miz Eost ; n'en devoa ket c'hoazh 50 vloaz... Ur skoazeller feal d' Al Liamm eo bet abaoe pell 'zo, hag un den ledan e spered, ha digor d'an holl.

D'e 57 vloaz, d'ar 14 a viz Gwengolo, ez eo aet da Anaon an Tad Herri HILLION, anavezet mat en emsav. Fromus-kenañ eo bet e obidoù, e chapel Run-Meno er C'hozh-Varc'had, ur bern mignoned deuet di da gimiadiñ diouzh unan eus dedennusañ personelezhioù Breizh. Douaret eo bet e bered Bear. (Gwelout pennad Iona diwar-benn Herri Hillion.)

D'an tiegezhioù glac'haret, hor truez hag hon gourc'hemenoù-kañv karantezus.

Profoù

MIZ EOST : Deneza Lueg, 15 lur ; Y. B. Toul al Lann, 40 ; Loeiz Dorval, 45 ; Yann Bouessel du Bourg, 140 ; Y. L. Boulbria, 64 ; Jakez Keineg, 45 ; Glaodig Liabeuf, 25 ; Timothy Bridgmann, 10 ; Elesbed Coin, 45 ; Tugdual Kalvez, 20 ; Fulub Cerceau, 45 ; R. Rannou, 15 ; Andrev Krogeneg, 100 ; H. Jamet, 45 ; Per Kergeno, 45.

- War un dro, 699 lur.

MIZ GWENGOLO : Joel ar Gelleg, 10 lur ; Y. Paol ar Rol, 5 ; Jakez Konan, 200 ; Dizanv, 200 ; Reun Ansker, 55 ; It. Tereza Bozeg, 45 ; Yann Bouessel du Bourg, 140 ; X. ar C'hoseg, 5 ; Alan Gwilhou, 55 ; Lusian Tangi, 45 ; Gwenael Huon, 45 ; Per Maillet, 45 ; Yvette Kervella, 30 ; Andrev Mandard, 100 ; G. Boivineau, 45 ; Andrea an Henañ, 55 ; Andrev Kornig, 25 ; E. ar Menn, 5 ; J. de Quelen, 5 ; Mikael an Eskob, 55 ; G. Rolland, 10 ; Mari-Frañseza Dutheil, 5 ; Joel Martini, 15.

- War un dro, 1 200 lur.

Abaoe penn kentañ ar bloaz hon eus bet 12 133,50 lur. Trugarekaat a reomp a wir galon hor skoazellerien galonek.

Niverennoù kozh " Al Liamm "

Prenañ a c'heller an niverennoù-mañ : 69, 71, 72, 75, 76, 77, 91, 92, 93, 105 betek 201.

Priz an niverennoù a zo : 10 lur pep hini (nemet an niverennoù 116 ha 151 hag a goust 12 lur pep hini, an niverenn 120 diwar-benn Iwerzhon, an niverenn doubl 166-167, an niverenn 190 diwar-benn Roparz Hemon hag a goust 18 lur pep hini).

Tu a zo da brenañ bloavezhioù klok, 55 lur pep hini, eus 1965 betek 1979 (niverennoù 108 betek 197).

An niverennoù kozh-se a zo gwerzhet marc'had-mat, hag ouzhpenn kaset kuit a vizoù-post. 10 % a zistaol a vez graet pa brener da nebeutañ 50 skouerenn.

Prenañ niverennoù kozh a zo degas d'ar gelaouenn ur skoazell a-zoare. Ar goulennnoù a zo d'ober digant Per ar Bihan.

Prenañ pegsun Al Liamm

Setu un doare d'ober bruderezh evit ar gelc'hgelaouenn, ha da skoazellañ ar c'hef. 5 lur e koust ar pezh, hogen 33 % a zistaol a vez graet pa brener 10 skouerenn. Goulenn digant Per ar Bihan.

Lizhiri

Digant R. R., Roazhon :

« Dre vras 'm eus kavet plijus lenn Al Liamm. Evel just, tout ar pennadoù ' zo e-barzh ne blijont ket din. Met, ne ran ket forzh. Plijus-tre e oa an niverenn 200, dreist-holl ar c'hontadennoù, met ivez studiaden F. Kervella. D'am soñj, ur bern tud hag a oar lenn ne ouzont ket ez eus Al Liamm o tont er-maez. Dav e vefe ober muioc'h a vruderezh, n'ouzon ket penaos, marteze en ur sevel skritelloù, traktoù, ha me ' oar-me. Evel just, koustañ a ra an dra-se. Ma, kendalc'hit memestra. »

Digant L. T., Laval :

« Plijet e vezan bep tro gant Al Liamm. Ha mall ruz a vez warnon gwelout ar gelaouenn-se o tegouezhout.

Ha ma tegouezhfe d'al lennerien kintus ha pismigus skrivañ deomp ar pennadoù a blijfe dezho kavout el Liamm, pegement e vefe kaeroc'h c'hoazh an traoù ! »

382

Digant J. P. P., Pariz :

« Me ' garfe goulenn diganeoc'h hag emañ e soñj renerien ar gelaouenn adembann eñvorennoù Jarl Priel ? Ken plijus em eus kavet " Va zammig buhez " ken e vefen dedennet-tre gant ar c'hendalc'h !

RESPONT : Tri levr eñvorennoù gant Jarl Priel a zo bet embannet gant « Embannadurioù Al Liamm » (distag-krenn eus ar gelaouenn e-keñver mererezh ha teñzorerezh). Al levr kentañ a zo bet adembannet dre ma oa bet gwerzhet buanoc'h eget an daou all " Va buhez e Rusia " hag " Amañ hag ahont ". An tri levr a oa bet embannet lerc'h-ouzh-lerc'h e 1954, 1955 ha 1957. Ne oa bet moulet nemet 500

skouerenn eus pep hini tra ma vez graet 2 500 bremañ peurvuiañ. Ouzhpenn dek vloaz oa bet ezhomm evit o feurwerzhañ holl. Setu perak e vo dav gortoz c'hoazh evit adembann. - R. H.

Digant G. J., prizoniad e Fresnes :

« Deut eo va danvez pried hiziv ha resevet em eus al levrioù a oa bet kaset dezhi ganeoc'h. Ho trugarekaat a ran evit kement a largentez ha spi 'm eus bezañ lakaet er-maez a-barzh nemeur a-raok e pell, da reiñ ur skoazell efedusoc'h da Al Liamm eget kaout levrioù evit netra, ha gouzout a ran n'eo ket pinvidik hoc'h embannadurioù, neuze e c'hellin ho skoazellañ en un doare dereat.

Lavaret em boa deoc'h, em lizher diwezhañ e oamp oc'h aozañ Gouel ar Brezhoneg. Graet eo bet disadorn diwezhañ 26 a viz Gouere. Plijadur a oa e-leizh ha dont a rae brav ar brezhoneg etrezomp. Savet 'm eus ur pennad diwar-benn an devezh-gouel hag e kasan anezhañ deoc'h. Marteze e vo re hir pe re bonner, hogen ar pennad kentañ savet ganin en hor yezh vroadel. Gwelit hag-eñ eo mat da dremen en Al Liamm. Kement a dud a c'houlenn penaos emañ ar vuhez amañ. Evel-se e vo gwelet ganto petra ' vez graet en toull-bac'h, dreist-holl a-zivout ar yezh.

Lennet 'm eus niverenn diwezhañ Al Liamm ha plijet on bet o welout pennad Y. B. Tillenon, kement ha gant hoc'h hini, leun a spi, hag evel ma lavarit : « bremañ dav dezhi etrezek an niverenn 300 ! ».

Plijet on bet ivez gant ho menoz diwar-benn danvez ar pennadoù embannet e-barzh Al Liamm. A-du on ganeoc'h, a bep seurt traoù zo mat da gaout. N'eus nemet un dra a blijfe din gwelout muioc'h enni : pennadoù diwar-benn kevredigezhioù evel " Skoazell Vreizh " pe war gudennoù a vremañ evel Plogoñv h.a. (kement-se a gaver kentoc'h e kelaouennoù evel *Al Lanv* pe *Bremañ*. - R.H.), rak, d'am soñj, roll Al Liamm a vefe ivez kinnig d'he lennerien pennadoù-stur, ur seurt «Komzoù dieub », digor d'an holl lennerien diwar-benn n'eus forzh peseurt kudenn. Dedennus e vefe evit an holl gouzout petra soñj ar vrezhonegerien a vremañ, zoken war gudennoù risklus a-walc'h. »

Digant E. R. :

« Poent eo din adkoumanantiñ da Al Liamm, hag ur blijadur eo din, rak plijout a ra kalz din ho kelaouenn. Mat-kaer em eus kavet an niverenn diwezhañ (201), dreist-holl pennad Goulc'han Kervella hag hini Añjela Duval.

383

Evuruzamant e vez kavet evel-se traoù plijus da lenn e brezhoneg, rak dister e vez, d'am soñj, ar pezh a vez klevet er skingomz, ken e-keñver stumm, ken e-keñver danvez (soñjal a ra moarvat ar re a ra war-dro ne vez nemet tud kozh o selaou brezhoneg).»

Setu amañ ul lizher hir a-walc'h digant hor mignon Perig Herbert a zo chalet gant ar frazennig am eus lakaet war an niverenn diwezhañ diwar-benn yezh ur mignon all, Jil Ewan. Skrivet em boa : « Jil Erwan a vez, siwazh, teuc'h a-walc'h da lenn peurvuiañ».

« Ne vezer ket boas da lenn, e-barzh Al Liamm, pismigadennoù eus ar seurt a blij kement da lod ha ret eo din anzav enta, ez on bet mantret o lenn ar frazenn verr bet skrivet diwar-benn J. Ewan en niverenn 201 (dindan an talbenn " Skridoù").

Barn oberennoù lennegel pe arzel ne vez morse un dra eus an aesañ moarvat. Koulskoude, war va meno, e ranker bepred teurel evezh ouzh an doare, dreist-holl pa vez kel a blediñ gant an danvez en ur ober div linenn evel m'emañ kont amañ.

Kompren a-walch a ran e vefe kavet tenn da lenn ar skridoù diwar zorn J.

E., ha kompren a ran kerkoulz all e vefe tud evit mont en hegas, bec'h dezho meizañ petra eo menoz an aozour ha pe bal a fell dezhañ tizhout. Ne gred ket din evelato e vefe reizh kaout a-se digarez da zistagañ enep dezhañ ur gomz digar bennak ouzh e yezh. Lezit an dra-se da re all.

Gouzout a reer pegen gouest eo J. E., pegen servijus ha gredus ivez, hep damantiñ d'e boan... Ma ! Evit va c'heloù-me, goude bezañ kenlabouret gantañ bloavezhioù-pad ha peogwir ez omp deut da vezañ keneiled vat, n'on ket evit asantiñ d'ur seurt frazenn : « J. E. a vez, siwazh, teuc'h a-walc'h da lenn peurluviañ ».

E gwirionez, n'eus ket ur skrivagner brezhonek a strivfe kement ha ma ra, da blediñ gant ezhommoù al lennerien evit pezh a sell ouzh ar yezh arnevez. Nag a boan e kemer hennezh da zisplegañ, gant aked bras, an termenoù hag an troioù-lavar diaes strewet gantañ en e skridoù ! Mar c'hoarvez da draoù zo gant J. Ewan bezañ tenn da intent ez eo, da gentañ penn, dre ma pleustr war zanvezioù amjestr, a vez gret ral a wech war o zro e brezhoneg, ha dre ma ra, ouzhpenn-se, gant ur yezh n'eo ket perc'hennet da vat gant al lenner. Er yezhoù all ivez ez eus kudennoù : daoust ha kalz a lennerien a zo evit kompren yezh Lacan, da skouer ? Bez' e c'hellfed a-walc'h keñveriañ labour J. Ewan gant an hini bet renet gant R. Hemon evit ar pennadoù a gaver en " Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh ". Disheñvel ar marevezh hag an doare da vont d'an danvezioù, hep ket a var, heñvel ar pal avat... evel an tamalloù ! Gant an eil skrivagner hag egile emamp dirak « yezhoù studi » e-giz ma lavar J. Ewan. Deuet omp da voazañ ouzh an hini gentañ (yezh Gwalarn) a-benn ar fin, ha bremañ emamp e tro da welout an tuioù gwan anezhi, da verzout pegen diasur ha pegen diresis e vez alies. An eil, avat, a zo oc'h en em zispakañ dirak hon daoulagad ha re abred eo, da'm meno, evit barn diouti...

N'eo ket alies em bez digarez da skrivañ deoc'h ha mar am eus graet hiziv n'eo ket hepken a-benn difenn ur mignon. Da ziwall ar gwir gant pep skrivagner da ren e labourioù evel ma kar ha da vont gant e hent, ha pa vez dall hemañ zoken, ne lavaran ket.

384

Re baour eo hol lennegezh evit c'hoazh (e-keñver kementad) ha, war a gredan, n'eo ket fur digalonekaat hor skrivagnerien dre varn o skridoù diwar c'horre pa n'eo ket en un doare rust.

Kent loc'hañ diwar ho tro e fell din lavarout pegen plijet e vezan bewech ma tegouezh Al Liamm ganin ha n'eo ket alies, kredit start, e vezan kaset da daeriñ e seurt giz. Ma vije bet sinet ar vurutelladennig da vihanañ, evel hini Andouard diwar-benn levr Per Denez, ne vijen ket bet lakaet da deurel ar bec'h war Al Liamm hag he rener (pep hini zo libr da lavarout e soñj er gelaouenn, ket 'ta). Kerse eo ganin n'eo ket bet kont evel-se. »

RESPONT. - Ar pennad zo bet skrivet gant Ronan Huon ha ne c'hell ket lakaat e anv war-lerc'h pep pennad. A-du on gant Perig Herbert pa lavar ez eus ur yezh evit pep danvez hag ur brouenn eo ar pennad diwar-benn al loarelloù a vo kavet en niverenn-mañ. - R. H.

Hor c'henlabourer L. T. eus Laval a skriv deomp o respont da lizher M. M. bet embannet war an niveretun 201 :

« ... Ha bez' e vefe mat an deiz hiziv, ma vefe tu d'hen ober, lakaat Al Liamm da vezañ ur gelaouenn a-ziforc'h, moulet evit un dousennad tud desket bras, arbennigourien war perlezennoù hor yezh ?

Mat eo, sur-tre, pennadoù lennegezh rik, gant ur c'heriaoueg pinvidik ha divoutin, met arabat digalonekaat al lennerien diampart a-walc'h (evel don siwazh !), arabat tennañ digant ar re-mañ o zammig boued-spered ha, dre ma ne gomprenfent netra ken, kas anezho da c'hwitellat gioc'hed. Ar gwellañ tra a zo d'ober betek-hen eo strivañ da lakaat ar Vreizhiz diouzh pep avel da vezañ

dedennet gant o yezh, ha pa vefe gant brezhoneg eeun da gentañ. Diwallomp eta ouzh ar brezhoneg da vezañ lazhet-mik gant « paotred ar perlezennoù ».

Diwezhatoc'h marteze, pa vo deuet an holl Vreizhiz da lenn brezhoneg (?) e c'hello hor bugale vihan, pe ar rummadoù all war o lerc'h, prederiañ war ar gudenn-se ha, marteze, cheñch penn d'ar vazh. Dav eo gwelout an traoù evel m'emañ ha kas pep tra en e boent, pe anez e vefemp re ziwezhat evit prenañ keuz 'm eus aon. »

L. T. a zo ur brezhoneger a-vihanik en deus kroget da skrivañ brezhoneg tri bloaz zo.

Digant P. H. :

« ... Kavet am eus kentoc'h gwashaour ho kevarc'h « da geñver an niverenn 200 » el Liamm, pa chom Al Liamm hor c'helaouenn lennegel vrasañ, moarvat e vank kenskriverien donezonet met rummadoù all a zeuio c'hoazh. Gant hon enkadenn gevredigezhel emañ an dalc'h, n'eo al lennegezh nemet adsked yec'hed ar yezh... Evidon e kavan dizingal a-walc'h boued Al Liamm, bourrañ a ran ken ha ken eus kontadennoù Reun-Menez Keldreg, reoù Miossec a blij din ivez, Goulc'han Kervella e teu traoù mat gantañ, barzhonegoù santet-don ha savet-skouer a failh deomp avat. Dre vras eta e soñjan n'eo ket mui koulz lennegezh ar gelaouenn hag eo bet, daoust d'an traoù mat a zo, hag e vefe poent klask yaouankaat ar gelaouenn en ur gregiñ marteze gant an notennoù... Evezhiadennoù diwar vont n'int ken. Plijet-dreist on bet gant levrioù zo bet embannet ganeoc'h nevez zo, *Lannevern e kañv*, *Ar chalboter huñvreoù*, *Diougan Gwenc'hlan*. Salv ma kendalc'hfe da zont ingal er-maez levrioù all a dalvoudegezh... ha ma vefe gwellaet doare brudañ ha skignañ hoc'h embannadurioù. E-keñver skignañ on sur, dre va skiant-prenet, e vefe bet kavet gwerzh vat da *E skeud tour bras Sant-Jermen* 'kostez Pleiben ma vefe bet brudet ha lakaet e gwerzh dre eno, heñvel gant Jakez Riou, Drezen, Jarl Priel, Ian Inizan, dreist-holl d'am soñj evit skrivagnerien a oa sanket don en tolead-mañ-tolead eus Breizh-Izel. Ret e vefe, daoust d'an dizeskadurezh renet a-berzh stad, klask tizhout an dud dre wellaat ha brasaat ar roued skignañ. Geriadur Roparz Hemon, daoust d'ar berzh a ra dija, a vefe tu da lakaat anezhañ hogos e pep ti a Vreizh-Izel ma vefe graet bruderezh. Ur gudenn a arc'hant eo sur-mat met marteze e vefe tu da wellaat an traoù memes tra. »

385

Respont d'an aotrou R. D. (" Al Liamm " Niv. 201, p. 319)

Setu amañ ar pezh a ouzon diwar-benn an Ao. Bailh hag e gegin :

Ganet eo bet Per Bailh e Lanveur (Bro-Dreger) d'ar 7 a viz Meurzh 1745. N'ouzon ket pegoulz e teuas da gure en e barrez c'henedik. C'hwec'h vloaz kent an Dispac'h (da lavarout eo wardro 1783) e voe difennet outañ oferenniñ gant e eskob en abeg d'e garantez vras ouzh an evajoù. E 1791 e reas le sentiñ ouzh al lezennoù nevez ha, goude se, e voe anvet da berson e Lanveur bepred, d'an 11 a viz Ebrel 1791.

E 1802, e voe digarget an Ao. Bailh da heul an Emglev etre ar Stad hag an Iliz ha distro ar person gwirion, an Ao. Trogoff. Chom a reas, koulskoude, evel beleg ordinal e Lanveur betek e varv, pevar bloaz goude, d'ar 5 a viz Gouere 1806.

Savet en deus an Ao. Bailh un nebeud barzhonegoù e brezhoneg, skañv a-walc'h evit un den a iliz a-hervez menoz e gempredidi. Titl resis e bennoberenn a zo : « Meuleudiguez gegin-gaer Cure Sant-Yan-ar-Bis ». Ur varzhoneg hir a-walc'h (pempzek pajenn in-12) moulet gant Aleksandr Ledan e Montroulez (gwelout levr Job Olier " Roll Levroniel ar c'hanaouennoù brezhonek war follennoù distag ", pp. 419-420). N'eus deziad ebet war al levrig-se, siwazh, hogen deuet eo er-maez moarvat war-dro 1805-1806.

Ur barzhonegour e voe an Ao. Bailh ha neket ur bouedoniour. Ar gegin, ma komzer anezhi, a zo un evnig koant meurbet (Richardig e vez graet anezhañ a-wechoù) ha « meuleudigezh ar gegin » a c'hell bezañ troet e galleg gant "Eloge du geai ". Keñveriet gant istor c'hwek ar peroked " Ver-Vert " e voe ar varzhoneg-se gant meur a skrivagner evel Cayot-Delandre e geriadur Ar Vot (gwel. an anv a Bailh »), Erwan-Vari Rudel er "C'helc'hweliad al lennegezh vrezhonek " (p. 30) pe G/Cambry, Souvestr, hag all...

386

Oberour ar varzhoneg « Ver-Vert » - gwelloc'h eget " Vert-Vert " - a zo un tad jezuist gall, an Ao. Batist Gresset (1709-1777), ezel an Akademiezh c'hall mar plij. E varzhoniezh, peder lodenn-gaer enni, a zo savet gant gwerzennoù deksilabennek skañv ha fentus. Danevellañ a ra istor dudius peroked al leanezed Maria-Lid eus kêr-Nevers a veajas betek Naoned, a zeskas ur bern foeltradennoù ha mallozhioù gant gisti hag ur manac'h tev hag a varvas a-benn ar fin gant e gofad goude bezañ debret re a zrajez.

Brudet a-walc'h e voe istor Ver-Vert e derou an XVIIIvet kantved rak adembannet e voe oberennoù an tad Gresset pell goude e varv, e 1803, 1811, 1823 ha troet en italianeg, en alamaneg hag e portugaleg. Awenet ganto e voe moarvat an Ao. Bailh a-raok skrivañ e varzhoneg.

Setu ar pezh a c'hellan lavarout diwar-benn peroked al leanezed. N'on ket gouiziektre koulskoude a-zivout kegin ar c'hure rak biskoazh n'em eus lennet troioù-kaer al loenig-se.

Lukian RAOUL,
Krec'h Goelo, 22590 Pordig *
* Porzhig hervez T. Jeusset.

Dieubidigezh evit ar re vac'het

Pedet omp da embann an diskieriadur-mañ :

« Bez ez eus 21 toullbac'had politikel brezhon en toull abaoe ouzhpenn daou vloaz hanter. Perak 'ta ez omp aze, a-dreñv ar barrinier ? Perak hon eus graet gwalldaolioù ? (Hep den lazhet na gloazet). Dre ma ne oa ket doare all ebet evit lakaat anat planedenn Pobl Vreizh en amzer-se. Bremañ eo anavezet kudenn Vreizh en Europa a-bezh, ha pelloc'h c'hoazh. Pal an tarzhadennoù e oa. Glan eo an dachenn bolitikel hiziv. Deomp-ni eo da labourat.

Ne fell ket deomp, tamm ebet, e vefe diskaret hon sevenadur hag hor yezh vroadel gant an impalaerelezh c'hall ; dismantret hon armerzh ; aloubet hon douar gant un arme estren pe gant kreizennoù derc'hanel ; saotret aodoù Breizh dibaouez... hep kontañ an dilabour.

Un drevadenn ez eo deut Breizh da vezañ, abaoe pell amzer dija. Setu penaos emañ an traoù, ha setu perak ez omp dic'houest, ni breizhiz ha brogarourien, da vevañ dindan ur mac'homerezh bennak, ha war bennoù hon daoulin. Karout a reomp hor bro, ur pec'hed a garantez eo. Hon fazi nemetañ.

Abaoe ez omp bac'het he deus savet meur a vouezh e Breizh hag e pep lec'h, evit hon dieubidigezh hag a-enep lez-varn surentez ar Stad c'hall. Ul lezenn direol hag a zo kontrol da Feuremglev Europa Gwirioù Mabden. Un emskiant vroadel a zeu e-touesk hor pobl hag ez eus peadra da vezañ laouen.

Poent bras eo deoc'h goulenn kreñv-tre e vefe lakaet an holl doullbac'hidi er-maez. Bez' ez eus tu d'hen ober. Setu perak ez eo pouezus-tre da bep hini ac'hanoc'h kemer perzh e stourm an distaoliadeg gant tud ar c'hK. A. D.

Un arouez poltikel ha brogar eo. Setu ar pezh a c'houlennomp ganeoc'h

d'an nebeutañ. Fiziañs ennoc'h hon eus. »

Padrig MONTAUZIER
toullbac'had politikel brezhon 688142 CNO 93
1, Av. de la Division Leclerc, 94261 Fresnes.

Enklask

« Kroget on, abaoe bloavezhioù, da sevel roll al levrioù enno brezhoneg, ha moulet a-raok 1810.

Evit pep levr e savan ur fichenn warni kement a sell ouzh ar mouladur, an oberenn, an oberour : an titl resis, ar pajennadur, ar sinadurioù, ar vent, anv ar skrivagner, hini ar mouler, ar bloavezh hag all... Evel-se e vo tu sevel ur roll eus an holl levrioù brezhonek moulet a-raok 1810 a raio enor da Vrelzh ha d'ar brezhoneg.

Ouzhpenn 200 levr disheñvel am eus gwelet dija el levraouegoù boutin pe brevez, e Breizh hag er-maez eus Breizh.

M'hoc'h eus levrioù e brezhoneg pe gant brezhoneg embannet a-raok 1810, pe a seblant bezañ embannet a-raok 1810, e vefen laouen da c'houzout pere.

Kasit din hepken o zitl, anv an oberour, hini ar mouler hag ar bloavezh. Me c'hellout lavarout deoc'h ma'z eo ul levr dibaot, pe marteze ul levr " unik " !

Ne venegan gwech ebet anv an den en deus al levr-mañ-levr en e levraoueg. Va fal a zo sevel roll al levrioù brezhonek embannet a-raok 1810, ha netra ken.

Trugarez deoc'h ma c'hellit va skoazellañ da gas da benn al labour-mañ. Eus va zu on laouen da reiñ diskleriadurioù war al levrioù ho pefe. Gouest on ivez da lavarout deoc'h titl al levrioù a zo diglok eus an derou, ha bloavezh al levr ma n'emañ ket war al levr.

Gwennole ar MENN, 15, allée des Frégates,
22000 Sant Brieg.

NOTENN. - Kroget em eus ivez da sevel roll an dornskridoù... Klask a ran mouladurioù oberennoù an Tad Maner evit peurechuiñ ar roll am eus savet dija.

Klask a zo war oberennoù : Bernard ar Speret Santel, Ian Cadec, Euzen Gueguen, Tanguy Gueguen, Jerome, Keranforn, Maner, Marigo, ar Briz, hag all... »

Kejadenoù an hañv e Ti Gwenn ha Dodik

Brudet eo Gwenn ha Dodik dre an taolennoù priañ livet, ganto un aergelc'h a vister, kred, hag ur seurt nerzh kuzh, anezho perzhioù keltiek-meurbet. E 1979 endeo o doa aozet abadennoù hañv niverus, ganto ar soñj da ziskouez pinvidigezh o bro da weladennourien an hañv.

388

Er bloaz-mañ o deus kaset da benn ar memes taol. Soñjit 'ta : 16 abadenn e-korf ur miz, ha leun bep tro o sal straed Kastellbriant e Sant-Malo. Eno eta e teuas barzhed, kanerien, arzourien, skiantourlen... En o zouez : Añjela Vannier, Evelyn Volden, Beatriz Balteg, Alan Allanig, Bernez Benoit, an Dregeriz, Yann Brekilien, Bernez de Parades, Ivon ar Menn, Yann Markale, Iren Frain Le Pohon, Yann Pikolek, Per Denez, Andrea ar Gouilh, Andreu Mussat, Stefan Manac'h, Per-Jakez Helias, Richard Feray, Erwan Philippe.

Gwir eo e teu Sant-Malo e-pad an hañv da vezañ ul lec'h darempredet-meurbet. Setu eta bruderezh a-feson hag un obererezh kalonek. Graet o doa ivez Gwenn ha Dodik, e-doug an nevez-amzer, e-pad ouzhpenn ur miz, un diskouezadeg levrioù brezhonek, en o stol, straed Porcon de la Barbinais.

Gouel Laenneg

E 1981 e vo lidet 200vet deiz-ha-bloaz ganedigezh Rene LAENNEG, tad ar bruskselaouennerezh hag unan eus krouerien ar medisinerzh modern. Ganet eo bet Rene Laenneg e Kemper d'ar 17 a viz C'hwevrer 1781, bevañ a reas en Naoned hag e Pariz ha mervel e Ploare. Ur Breizhad kalonek hag ur brezhoneger ampart e voe Rene Laenneg ha reizh eo e vefe lidet a zeiz-ha-bloaz war an ton bras gant ar vrezhonegerien panevefe nemet evit degas enor ha brud d'ar brezhoneg.

Goulennet e vo digant Goulc'han Kervella, an Doktor Rousseau, an Tad Bourdelles ha brezhonegerien all sevel pennadoù diwar-benn Laenneg evit Al Liamm ha kazetennoù all.

Aozet e vo ur gouel e brezhoneg en enor da Laenneg e Kemper pe e Douarnenez d'ar sul 15 a viz C'hwevrer.

Kendalc'h Keltiek 1980 en Iwerzhon

Dister a-walc'h eo bet ar C'hendalc'h Keltiek en Iwerzhon hevlene. Bez' ez eus bet war-dro 120 den o kemer perzh ennañ en o zouez un dek Breizhad bennak : Loik Chapel, re Helloko, Yann Fouere, Ivona Martin, Per Manac'h... Gant Loik Chapel e voe graet ar brezegenn diwar-benn Breizh.

Kendalc'h Keltiek 1981 e Breizh (18-23 a viz Gouere)

E Lanuon e vo dalc'het ar C'hendalc'h Keltiek ar bloaz a zeu, met kudennoù a sav gant an deiziadoù evit Kerneviz ha Manaviz dre ma echuo ar bloavezh-skol e Kernev-Veur hag e Manav d'ar 24 a viz Gouere hepken. Dilaouen e oa dileuridi Kernev-Veur ha Manav en Iwerzhon gant an deiziadoù dibabet met n'eus ket tu d'ober a-hend-all e gwirionez en abeg d'an Eisteddfod. Skrivet e vo gant Sekretourva Etrevroadel ar C'hendalc'h Keltiek d'an Educational Committee e Kernev-Veur ha Manav evit ma c'hello dont kelennerien ha skolidi d'ar C'hendalc'h.

389

Ur vodadeg-labour a vo dalc'het d'ar sadorn 27 a viz Gwengolo da 14 eur e Lanuon er Greizenn Jean Savidan evit prientiñ kendalc'h 1981.

Kinniget en deus Yann Poilvet, rener ar gelc'hgelaouenn " Armor ", reiñ ur plas dereat da Gendalc'h Keltiek Lanuon. Mont a raio Loik Chapel ha Per Denez d'e welout evit gwelout penaos kenlabourat gantañ.

Adalek bremañ e vo ret aozañ un emvod bep miz evit prientiñ mat Kendalc'h Keltiek Lanuon ha fiziout ul labour da bep hini.

Skolioù Brezhoneg an hañv.

Er Skol Sant Alan e Skaer ez eo bet dalc'het adarre Kamp Etrekeltlek ar Vrezhonegerien en en pemzektez miz Gouere ha kemeret o deus 40 den perzh ennañ bemdez. 65 den a zo tremenet en holl. Labour mat a zo bet graet er c'hamp. Bez' e oa kalz kelennerien met mankout a rae brezhonegerien all da grouiñ un aergelc'h brezhonek er c'hamp.

E 1981 e vo ret kavout deiziadoù all evit Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien en abeg d'ar C'hendalc'h Keltiek.

E " Crash-Course" Roazhon ez eus bet 130 den hevlene ha nac'het ez eus bet adarre ur bern tud dre ziouer a blas. En Oriant n'eus bet nemet 40 den dre ma voe kroget re zivezhat ar bruderezh. Tu a vefe marteze da zigeriñ ivez ur " Crash-Course " e Gwened e 1981 met ar gudenn vras a vo kavout kelennerien... Emeur e soñj ivez aozañ un dibenn-sizhun vrezhoneg en nevez-amzer.

Skol " Ober "

War-raok e talc'h Skol Ober da vont. Kaset e vo bruderezh d'ar c'hazetennoù e derou miz Gwengolo. Ret e vo adembann ivez ur skritell vruderezh.

Ouzhpenn 80 skoliad a heuilh er c'hentelioù kembraeg. 18 kentel hepken a zo bet lakaet e brezhoneg ha mat e vefe mont pelloc'h. Peurwerzhet eo bet ar geriadurig brezhoneg-kembraeg embannet warlene, e berr amzer. Tennet e oa bet 150 skouerenn anezhañ hepken. Adembannet e vo a-benn nebeut.

Anv 'zo da grouiñ ivez kentelioù esperanteg (dre ar brezhoneg) hep dale.

Al Liamm

Eizh levr a oa bet embannet gant AL LIAMM e 1979 :

- Gwiadenn ar Vuhez, gant Benead.
- Ho kervel a rin en noz, gant Roparz Hemon (adembann.).
- Yezhadur berr ar brezhoneg, gant Roparz Hemon.
- C'hoariva, gant Roparz Hemon (2 levr).
- Glas evel daoulagad c'hlas na oant ket ma re, gant Per Denez.
- Diougan Gwenc'hlan, gant Per Denez.

390

E 1980, ez eus bet embannet dija 5 levr nevez, tennet bep gwech war-dro 2 500 skouerenn anezho :

- Ar Chase, gant Goulc'hen Kervella.
- Ar Veaj-se ur wech e oa, gant Per Diolier.
- En ur rambreal, gant Kerwerc'hez (adembann.).
- Ar Chalboter huñvreoù, gant Tudual Huon.
- Lannevern e kañv, gant Jakez Konan.

Tri levr nevez all a zo dindan ar wask :

- E penn an hent, gant Youenn Olier.
- Truez va Doue, gant Didrouz.
- Ur vouezh er vorenn, gant Ronan Huon.

A-benn nebeut e teuio er-maez ivez :

- Levr Izaia (ar Bibl Santel).

- Levr ar blanedenn, gant Reun ar C'halan.
- Ur wech e oa ur c'hrennard, ur deskard, ur soudard, gant Taldir (adembann.).
- Kontadennoù Fañch an Uhel.

Emañ an Embannadurioù AL LIAMM o paouez embann ur c'hatalog nevez.

Anv 'zo da embann ivez, marteze e 1981, ul levr e galleg **Pep tra** (diwar-benn ar brezhoneg ha lennegezh Vreizh) prientet gant ur strollad tud ennañ : Gwennole ar Menn, Vefa de Bellaing, Jorj Gwegen, Bernez an Nailh, ha re all c'hoazh...

Wanig ha Wenig

Keinet ez eus bet dastumadennoù eus Wanig ha Wenig. Gwerzhet e vezont 30 lur + 7 lur evit ar mizoù-kas).

M. L. Fave, Kernevez, 29250 Kastell-Paol.

Geriadur bras Frañsez Vallée

Reiñ a ra Per Manac'h da c'houzout en deus bet asant ar C'huzul Sevenadurel evit ur brestadenn-arc'hant. Tennet ez eus bet 5 000 skouerenn eus ar Geriadur Bras ha tost da 900 a zo bet gwerzhet dija, war-eeun d'an dud, dre ar Coop Breizh hag ivez dre ar F.N.A.C. e Pariz.

Skol

Gwerzhet mat e vez Herve ha Nora abaoe m'eo deut er-maez an embannadur diwezhañ, dindan ur stumm nevez (4 000 skouerenn a zo bet tennet dioutañ). Hep dale e vo kaset d'ar goumananterien 2 oberenn lakaet e brezhoneg :

- Va stourm evit Iwerzhon, gant Dan Breen.
- Valentina a Roc'han, gant Paol Feval.

391

Ar stourm evit an unvaniezh

Abaoe 1974 ez eo rannet Breizh war dachenn ar melestradur, ar skingomz, ar skinwel, h.a... Distaget eo bet Bro-Naoned eus peurrest ar Vro ha staget d'ur rannvro dinatur anvet " Pays de la Loire " Broioù al Liger) a-enep da youl ar boblañs. Aozet e vo ur Pemzektez-stourm evit an unvaniezh eus ar 4 d'an 18 a viz Here ha kemer a raio perzh Kuzul ar Brezhoneg ennañ.

Chekennoù brezhonek.

Prest eo ar chekennoù brezhonek er C.M.B. ha roet e vezont d'ar glianted abaoe dibenn miz Gwengolo. Skrivañ a raie Kuzul ar Brezhoneg d'ar bankoù all evit goulenn outo embann chekennoù brezhonek ivez.

Un dezenn war hol Lennegezh

D'ar gwener 10 a viz Here en deus difennet Fañch Morvannou e dezenn doktorelezh dirak barnerien ar Skol-veur e Roazhon.

Danvez kinniget : " Lennegezh wenedek hanterenn gentañ an 19vet kantved ".
Trec'het en deus Fañch Morvannou gant ar meneg « enorus-kenañ ».
Gourc'hemenoù kalonek dezhañ, ha salv ma vo niverus an dud a ray eveltañ, da greskiñ anaoudegezh hor peadra sevenadurel.

Kemennadur

Pedet omp bet da embann kement-mañ :

« Roazhon, d'an 9 a viz Here 1980.

Aotrou,

Dek miz goude ma voe krouet, e teu AN AMZER da vezañ moulet war vent vras, d.l.e. war ar vent Tabloid. Ar vent-se a zo an hini dibabet da vat.

AN AMZER, kelaouenn sizhuniek vrezhonek nemeti, a gendalc'h da gemer ur plas muioc'h-mui pouezus er gwask brezhonek.

Deuet eo da vezañ ur gwir venveg da gelaouiñ an dud. Koulskoude, n'eus ket c'hoazh lennerien a-walc'h, d'hor soñj. Degemerit, Aotrou, hor gwellañ gourc'hemenoù. »

AN AMZER kelaouenn sizhuniek

2, straed Ar Richardière, 35100 ROAZHON Pell. (99) 50-52-74

K.R.P. (dazont) Roazhon 3133 94 T

392

Priz ar C'huzul Etrevroadel evit kendalc'h ar yezh vrezhonek

Priz ar C'huzul Etrevroadel a zo bet roet evit an trede gwech da heul da Embannadurioù Al Liamm. Aet eo ar wech-mañ gant Per Denez evit e levr " Glas evel daoulagad c'hlas ha ne oant ket

Hor gwellañ gourc'hemenoù a gasomp d'hor mignon ha kenlabourer.

Skridoù

- War niverenn 4 **Al Lanv** (Gouere-Eost 1980) e c'heller lenn keleier ha pennadoù diwar-benn Berlin, Katalonia, Okitania, Kembre, Breizh, ar sonerezh ha Diwan. - Koumanant : 30 lur. Al Lanv, 7 st. ar Rektor P. Henry, 35000 Roazhon.

- War niverenn 127-128 **Imbourc'h** (Gouere) e kaver notenoù politikel gant Youenn Olier, Prosez war vuhez ha burzhudoù Sant Erwan gant Klerg, Ober ur pred gwirion eo keduniñ ouzh kreud ha gwad ar C'hrist, gant Jil Ewan, hag evit echuiñ pennadoù-barn war levrioù Tudual Huon, Goulc'han Kervella ha Leon Fleuriot. - Koumanant : 30 lur. KRP 1534 25 Rennes, war anv Y. Ollivier.

- Niverenn 31 **Carn** ha niverenn 3 **Kannadig Keltia**, hemañ e brezhoneg hag e galleg a zo deuet er-maez. War ar c'hannadig ez eus ur penad diwar-benn Gwynfor Evans ha ne yuno ket peogwir ez eo aet an trec'h gantañ hag e vo savet, evel ma oa bet prometet, ur chadenn skinwel hollgembraek. - Koumanant d'an div gelaouenn : 28,50 lur. Jorj Abherve-Gwegen, Kerberenez, k.r.p. 2204 24 N Rennes.

- **Hor yezh** niverenn 131-132 (Meurzh 1980). Daou bennad a bouez a zo en niverenn-mañ. An hini kentañ " Notenoù sonerezh " a zo bet savet gant ar sonaozour Perig Herbert. Studiañ a ra geriaoua ar sonerezh, resisaat a ra ster ar gerioù ha ret e oa bezañ un den eus ar vicher evit hen ober. An eil pennad diwar zorn Per Denez a zo diwar-benn " Kannadig Gwalarn " savet gant Roparz Hemon evit ar bobl hag ar vugale. Diskouez a ra Per Denez ne rae ket fae Roparz Hemon war yezh ar bobl evel ma 'z eus bet klasket lakaat da grediñ gant e enebourien. - Koumanant : 30 lur. KRP P. Denis 1499 51 M Rennes.

Roparz Hemon troet e poloneg

A-drugarez d'hor mignon Aldrig Russon hag a zo e darempred gantañ en deus Jerzy Wielunski, ur polonad koumanantet d' Al Liamm troet e poloneg danevelloù gant Roparz Hemon. Setu ar pezh a skriv Jerzy Wielunski deomp : « Va soñj a zo treiñ levrioù brezhoneg e poloneg. Graet eo ar bazenn gentañ : va zroidigezh eus " An div faven " a zo paouez bezañ embannet war ur gelaouenn bolonat. Bremañ e karfen lenn ha dibab an traoù gwellañ.

393

« Karout a rafen eta kaout romantoù, kontadennoù, ha danevelloù. Ho pediñ a ran d'ober an dibab hoc'h-unan eus ar skridoù gwellañ d'ho soñj a zo bet skrivet war-eeun e brezhoneg... »

Hor gwellañ gourc'hemennoù a gasomp da Jerzy Wileunski ha spi hon eus e vo troet hol lennegezh e yezhoù all evel ma 'z eo bet graet dija, e kembraeg, nederlandeg, italianeg ha marteze e yezhoù all.

Lavaromp ouzhpenn hon eus bet ni e niv. 184 Al Liamm, a-drugarez da J. Y. Aberhel un tanva eus lennegezh Polska (" Istor ur banne te ", gant Adolf Rudnicki.).

Miziad sevenadurel e Kemper

Ur miziad sevenadurel a zo bet aozet e Kemper e miz Here gant Ti an Holl ha gant izili eus Skol an Emsav. Dre se ez eus bet graet kentelioù brezhoneg, diskouezet film Plogoňv, c'hoariet pezhioù gant Strollad ar vro Bagan hag ivez Marion ar Faoued gant strollad Karaez. Abadennoù zo bet ivez ha tabutoù war al levr e Breizh, Istor Breizh, al lennegezh vrezhonek hag all.

Keleier eus Roazhon

Kemenn a reer deomp e vo un diskouezadeg tresadennoù keltiek gant Robert Berthelie e stal " Breizh " e Roazhon. Digoret e vo d'ar sadorn 15 a viz Du hag e chomo digor betek an 13 a viz Kerzu.

An itron Debauvais a sino he levrioù e stal " Breizh " ivez e Roazhon, 17 straed Penhoet, d'ar sadorn 15 a viz Du. Emañ-hi o paouez embann he fempvet levr : goude marv he gwaz e kont he stourm hag hini he mab evit dreistbevañ e dibenn ar brezel e 1945, ar c'hampoù, ar goulennadegoù hag he distro e Pariz e-lec'h ma voe lezet da vont. Gwelout a reomp ar stourmerien vreizhat o vevañ e kêrbenn Bro-C'hall goude bezañ bet bountet er-maez eus Breizh. Tri bloaz goude e kont ivez merzhererezh he breur Jos Youenou torret e benn dezhañ e kamp Struthof e Bro-Elzas d'ar 14 a viz C'hwevrer 1945.

Oaled Sant Erwan

Savet e 1968, Oaled Sant Erwan a zo ur greizenn sevenadurel a spered katolik o labourat evit ar brezhoneg.

Kinnig a ra deoc'h :

1. Kentelioù brezhonek digoust, koulz evit ar re a zo o kregiñ gant ar yezh evel ar re a zo o klask barrekaat warni. Roet e vez ivez kentelioù d'ar vugale en anv strollad " Emglev an Tiegezhioù ".
2. Kaozeadenoù pe gendivizoù ur wech ar miz e-pad ar bloavezh-skol.
3. Kelc'hioù studi war ar feiz kristen, renet gant ur beleg, bep merc'her eil diwezhañ ar miz eus miz Here betek miz Mezheven.
4. Ur sal hag ur stal-wer e-lec'h ma vez kavet kalz embannadennoù brezhonek da brenañ pe da amprestañ.
5. Tud da vrezhonegañ ganeoc'h d'an eurioù digor-mañ :
 - bep lun eus 17 eur 30 betek 19 eur 30,
 - bep meurzh eus 18 eur betek 20 eur,
 - bep merc'her eus 14 eur betek 16 eur,
 - bep yaou eus 18 eur betek 19 eur 30,
 - bep gwener eus 17 eur 15 betek 18 eur 15.

A-hend-all e ya Oaled Sant Erwan d'ar gouelioù ha pardonioù a vez lidet amañ hag ahont. Tu he devez evel-se da zivizout gant an dud ha da zisplegañ he stalig-werzh. A-unan gant strolladoù all e kemer perzh ivez e buhez sevenadurel kêr Vrest.

Chomlec'h : 28, straed Charles Berthelot, Brest.
Eno e kavot kement titour ho pefe c'hoant da gaout.

" Les 7 spirales "

Setu talbenn ul levr skeudennaouet, savet gant an treser An ROUE. Ar priz a zo 131,70 lur, gant ar mizoù-post, da gas da : Editions Terre Inconnue, 24, rue Bretonnaise, 49300 Cholet. An tresadennoù a zo kaer, modern, met gant merk an arz keltiek hengounel, ha kontañ a reont avanturioù Iouweën Ar Gweën.

Bodadeg-vloaz ar C'hevre Keltiek

Tro Breizh e oa adarre er bloaz-mañ da reiñ degemer da vodadeg-vloaz ar C'hevre Keltiek. E Ti-Kendalc'h e voe dalc'het d'an 30 hag 31 a viz Eost. O kemer perzh enni e oa dileuridi eus holl skourroù ar C'hevre war-bouez re Enez Vanav hag ar Stadoù-Unanet. Betek ar poent diwezhañ e toujemp na zeuje den ebet eus an tu all da Vor Breizh peogwir e oa ar besketaerien o kas stankañ an holl borzhioù d'al listri-beajourien. Kerneveuriz, Kembreiz hag Iwerzhoniz a zeuas e-barzh dre Sant-Malo ; Skosiz a rankas ober an dro dre Zeebrugge ha re London dre g-Calais. E Ti-Kendalc'h e kavjomp bod diouzh hon hetoù : un endro bourrus, lojeiz ha boued d'ur priz dereat-tre.

Un daolennad-labour garg a oa bet ragaozet, arabat d'ar brezegerien chom da randoniñ. Divizet oa eta ober diouzh ur rollad reolennoù evit ren an divizoù ha

kemmañ kadoriad goude pep dalc'h. Evel boas e oa ezhomm da blediñ da aferioù diabarzh hor c'henurzhiadur, kudennoù mererezh, arc'hanterezh, bonreizh. Pep sekretour a roas kont eus stad hag obererezh e skourr e-pad ar bloaz tremenet. Hag ur vrastaolenn eus emzispieg ar C'hevre hag ar c'hefridioù sevenet eus e berzh a voe treset gant ar sekretour-kreiz.

395

Gwellaet-kalz eo bet frammadur ar C'hevre abaoe ar vodadeg diwezhañ. Skourr Kembre, nammet e-pad bloavezhioù dre'n abeg ma ne oa gouest den ebet da ober a-zevri war-dro e izili, a zo deut buhez ennañ da heul anvidigezh Zonia Bowen da gadoriadez hag Ifor Williams da sekretour. Niver an izili hag a oa kouezhet gwall-izel a zo hogozik tric'hemmet e berr amzer, ha daoust ma neo ket mui Ifor un den yaouank n'en devez ket diegi o kas CARN gantañ da werzhañ el lec'hioù ma vez tro, evel er gouelioù sevenadurel. Hevlene e oa adarre un deltenn « geltiek » e Maez an Eisteddfod, a-drugarez da Zonia, ha paeet an hanter eus ar feurm anezhi gant ar C'hevre : kavout a reas Ifor sav da 180 skouerenn eus CARN eno. Warlene e oa bet dastumet 600 sinatur en deltenn d'ur skrid o c'houlenn e ve laosket ar brizonidi vreizhat dieub (kaset e voent da brezidant ar CSE).

Skourr Breizh hag a zalc'he mat e renk e-keñver an niver izili en deus graet lammgresk goude da Jorj abHerve-Gwegen bout bet dilennet da sekretour : bremañ ez eus 33 % muioc'h a goumananterien war e roll eget bloaz 'zo. Ar berzh-se a ranker lakaat war gont aked bras ar sekretour, ar bruderezh a zo bet graet evit ar C'hevre er c'helaouennoù ha dreist-holl Kannadig Keltia, ar stagadenn vuhezek da g-CARN a vez embannet e brezhoneg hag e galleg evit aesaat an traoù d'ar re a vefe gwall-luget gant ar saozneg.

Gant skourr Iwerzhon e voe roet skoazell evit brudañ ar skol-hañv etrevroadel hag a voe aozet en Indreabhán, e Konamara, e miz Eost. Dont a reas 18 den bennak - dreist-holl eus London, Kembre ha Belfast. Un taol-berzh eo bet hag aozet e vo adarre er bloaz zeu emichañs. Ma 'z eus e-touez lennerien Al Liamm tud hag a garfe kregiñ da zeskiñ iwerzhoneg en e amgelc'h hengounel, koulz ha gouzout hiroc'h diwar-benn Iwerzhon a vremañ, ra skrivint d'am chomlec'h (9 Bóthar Cnoc Sion, Ath Cliath 9, Eire).

E Kernev-Veur ez eo kresket-mat niver an izili ivez. Tizhet eo ar skourr un tammig gant an dizunvaniezh a ren etre ar Cornish Nationalist Party ha Mebyon Kernow, daoust ma klask chom a-us d'an disrann-se. Laouen e vefe hor sekretourez, Jenefer Lowe, o kaout keloù eus tud eus ar broioù keltiek all hag a vije o tont da Gernev-Veur hag int gouest da brezeg diwar-benn tra pe dra dalvoudus eus buhez o bro : aozañ a rafe bodadegoù evito.

Da Vanaviz hag a fell dezho herzel ouzh estrenaat hag aloubidigezh o enez gant mondianed ha trafikerien e vank kelaouennoù hag aozadurioù da vrudañ o menozioù. Harpañ a reont war ar C'hevre Keltiek hag e drimizieg. N'eus koulz lavaret nemet en hor c'helc'hgelaouenn ma vez embannet reoliek pennadoù e manaveg. Setu moarvat perak e vez gwerzhet CARN en Enez Vanav c'hwec'h gwech muioc'h eget en Iwerzhon e kenfeur gant niver ar boblañs.

E London e kej Iwerzhoniz, Kembreiz, Kerneveuriz ha zoken Breizhiz e bodadegoù ar skourr. Reiñ a reont testeni eus ar c'hengred etrekeltiek pa vez diskeladegoù pe abadennoù da eñvoriñ an darvoud-mañ-darvoud eus istor ar broioù keltiek. Tostoc'h ma 'z int da zouar bras Europa e c'hell darn eus an izili kemer perzh en anv ar C'hevre e c'hoarvoudoù 'vez eno. Ifan Lloyd da skouer a yeas eus hor perzh da dest e prosez ar Vretoned en diskar-amzer 1979.

396

Ur skourr a zo evit Norzh-Amerika, met daoust m'hon eus e-leizh a izili er rannved-se, n'eus kaer nemet div greizenn ma 'z eus darempredoù stank etre o izili : e New York e talc'her bodadennoù reoliek, ur gendael dibenn-sizhun gant sonerezh ha prezegennoù a vez e miz Ebrel, ur fest a vez aozet da geñver Kala goañv (evit lidañ derou ar Bloaz Keltiek !). Divizet o deus harpañ ar brizonidi vreizhat. E Philadelphia e kenlabouront war an dachenn sevenadurel, ez resis

hini ar sonerezh ha hini ar yezhoù : ober a reer skol iwerzhonek, skol gembraek hag e-pad ur pennad en deus graet Jay Callaghan kentelioù brezhonek ivez. Kemeret en deus ar C'hevreur perzh e strivadoù boutin gant aozadurioù all : lizher da bennministr Republik Iwerzhon o c'houlenn outañ pouezañ muioc'h war ar Saozon da lemell o nerzhioù armet eus ar 6-Kontelezh, an dra gentañ da ober evit toullañ hent d'ar peoc'h ; un disklêriadur o c'houlenn e ve anavezet gwirioù 'zo da brizonidi ar Gevrenn-H e Long Kesh ; perzh en ur gendael e Skol-veur Vincennes diwar-benn Norzh-Iwerzhon.

O respont da c'houlennoù niverus, hon eus roet disklêriadurioù ha titourioù da studieren o skrivañ tezennoù, da gelennerien oc'h aozañ kentelioù diwar-benn sevenadur ar broioù keltiek, da aozerien Gouel Keltiek Berlin, da aozer ur rummad programmoù skingomz diwar-benn ar Gelted da vezañ skignet e 15 yezh er broioù komunour ; da aozer ur c'hounskrid a-zivout lec'h ar yezhoù « nebeut-komzet » er skingomz hag er skinwel, e-sell da gaout harp digant ar Gumuniezh Armerzhel Europat ; h.a.

Darempredoù mat hon eus gant kevredigezhioù etrekeltiek all er Stadoù-Unanet, e Kanada, en Aostralia koulz ha gant ar C'hendalc'h Keltiek hag aozerien ar Gouel Hollgeltiek (Cill Airne). Dileuridi eus ar C'hevreur Keltiek a zo e poellgor an Oireachtas (gouel bras ar sevenadur iwerzhonat) hag e poellgor Funduireacht an Phiarsaigh (un ensavadur da enoriñ eñvor Pádraig Mac Phiarais (P. Pearse).

Kendalc'h hon eus da embann CARN reoliek bep tri miz. Ezhomm a vefe da gaout muioc'h a genskriverien, muioc'h a amzer da skrivañ... ha da zivankañ ; muioc'h a luc'hskeudennoù. Da zivall hon eus ouzh digresk an niver a skouerennoù gwerzhet er stalioù (daoust ma c'hoariomp war goll ganto). Karout a rafemp gwelout muioc'h eus hon izili o kemer o zu eus ar bodadegoù pe ar gouelioù evit hon harpañ da werzhañ ar gelc'hgelaouenn.

Divizet e voe envel Micheál O Laoire, sekretour skourr London, da adsekretour-kreiz ha da « rener-bruderezh ». Da gadoriad e voe anvet Jorj abHerve-Gwegen, hag a zo a-hend-all sekretour skourr Breizh. Roy Green, e-pad bloavezhioù e karg eus skourr Kernev-Veur, a vo bremañ teñzorier ar C'hevreur.

397

Un dousennad mennadoù a voe degemeret gant ar vodadeg, da vezañ kemennet d'ar pennadurezhioù a sellont outo. Evel-se hon eus divizet :

- 1) goulenn ouzh gouarnamant London seveniñ e bromesa ober eus ar 4vet kanol skinwel BBC e Kembre unan gouestlet da brogrammoù e kembraeg penn-da-benn. Gouzout a reer o deus pleget abaoe d'ar goulenn-se hag a oa harpet gant an darn vrasañ eus Kembreiz ha n'eo ket ret bremañ da w-Gwynfor Evans kas da benn e vennad ober yun-enebiñ ;
- 2) goulenn e ve pellskignet programmoù dezho un endalc'h « keltiek » hag aozet evit unan eus ar broioù keltiek - evel CAN SEO evit deskiñ gouezeleg Bro-Skos - e doare da vezañ gwelet pe glevet er broioù keltiek all ;
- 3) o soñjal er skolioù brezhonek, ha dreist-holl re z-DIWAN, goulenn ouzh an dud hag o deus karg eus ar c'hevredigezhioù hag an embannadurioù brezhonek bodañ ar c'hentañ 'r gwellañ ur c'hendalc'h evit en em glevout diwar-benn un doare-skrivañ nemetañ ha lakaat evel-se ezhommoù ur c'helennerzh poellek a-us d'an holl selledoù all. Abegoù ar mennad-se : an dra dalvoudusañ eo bremañ ar skolioù DIWAN evit derc'hel bev ar brezhoneg ; ur skoilh eo d'ar skolidi koulz ha d'ar skolaerien pa'z eus doareoù-skrivañ disheñvel ; tra a eil renk eo an doare-skrivañ p'emañ ar yezh en arvar bras da vervel. A-du e oa ar vodadeg evit disklêriañ e ve koulz ha dougen da ziskar ar brezhoneg nac'h klask emglev war ar poent-se (*).
- 4) pediñ « Parlamant Europa » Strasbourg da c'houlenn ouzh holl stadoù ar Gumuniezh Armerzhel Europat anavezout da gement den pe gevredigezh hag a vez graet gaou outañ pe outi gant ar pennadurezhioù-Stad ar gwir da glask dic'haou en ur ober engalv d'al Lez-Varn Europat ; goulenn ivez e ve roet da houmañ karg

da blediñ da gudennoù gwirioù denel dre ar Gumuniezh penn-da-benn. Abeg a zo da vout prederiet gant an doare ma vez krignet muioc'h-mui ar frankizoù hiniennel ha kevredel pergen en abeg d'an treuzjubennadur a vez graet eus al lezennoù gant an aozadurioù-Stad. Talvout a rafe da Vreizhiz ha da Vanaviz ;

5) goulenn ouzh UNESCO embann 1982 evel Bloavezh ar Yezhoù-Bihanniver, evit tennañ evezh etrevroadel war an arvar m' emañ ennañ an darn vrasañ eus ar yezhoù-se da vont da get. Pa vez disklêriet gant UNESCO ur « Bloavezh an Dramañ-Dra » e vez skignet ganto a bep seurt paperennoù ha skridoù o tiskouez talvoudegezh an danvez. Stadoù 'zo na fell ket dezho e ve graet tra ebet a-zevri evit derc'hel bev o « yezhoù rannvroel » a harzo sur ouzh ur seurt diviz, peogwir e tegasfe muioc'h a vri d'ar pezh o deus klasket displetaat. Evit kas ar mennad-se da benn e vefe ezhomm da c'houzout, e kement bro ma c'heller, piv an dud a zo izili eus ar Gomision UNESCO er vro pe er Stad-se, ha neuze dizoleiñ hag-eñ a zo en o zouez ur re bennak hag a ve a-du gant harpañ ar yezhoù bihan. Dre hanterouriezh seurt tud e vo ret mont evit kaout ur chañs bennak da lakaat an aozadur etrevroadel da blediñ d'hon erbedenn. Ur pikol labour eo ha dav e vo deomp kavout tud hag o deus muioc'h a bouez egedomp evit sammañ ar gefridi. Spi hon eus e kavimp harp evit digeriñ an hent da vihanañ. Pediñ a reomp eta ar re a zo a-du gant hor mennad d'ober enklask er vro m'emañ e-sell da gavout an anvioù hon eus ezhomm ha d'o c'hemenn deomp an abretañ 'r gwellañ ;

6) adsellout ouzh an divizoù graet e Kendalc'h ar Yezhoù Keltiek e Rath Chairn, 1976, ha klask seveniñ darn anezho (n'eus bet graet koulz lavarout netra d'o heul) ;

398

7) harpañ ar strivadeg o c'houlenn e ve anavezet d'ar brizonidi iwerzhonat er Gevrenn-H e Long Kesh ha d'ar Republikanezed bac'het en Ard Mhacha ar gwir da chom hep ober labour toull-bac'h ha hep gwiskañ dilhad-prizon ; da gevrediñ gant ar brizonidi all ; da gaout dihedoù ha da wellaat o deskadurezh ; da gaout ur weladenn, ul lizher hag ur pakad bep sizhun ; ha da gaout diskarg-kastiz evel ma vez roet d'ar brizonidi all (**)

8) nec'het ma 'z omp gant politikerezh diskiant an daou zreist-galloud-bed hag o c'hevredidi europat o verniañ dek gwech muioc'h a armoù nukleel eget n'eus ezhomm evit diouennañ kement tra vev ha gant ur vrezlegezh a laka buhez an holl bobloù en arvar bras, e c'houlenn ar C'hevre Keltiek e ve tennet kuit ha foeltret an armoù nukleel hag ar gwikefreoù-pellvannañ diazezet gant gouarnamantoù Pariz, London hag ar Stadoù-Unanet en Enez Hir, St-Mawgan, Holy Loch ; e ve serret tamm-ha-tamm an holl ziazevvaoù milourel estren en hor broioù hag implijet an arc'hant espernet evit o digoll eus ar wallegezh o deus gouzañvet war an dachenn armerzhel ha kevredigezhel ; hag e tisklêriomp bout kengred gant al luskad a c'houlenn ober eus Europa un dachenn diac'hub eus kement arm nukleel.

Divizet hor boa daou vloaz 'zo ne dlefe ket Galisia hag Asturias bezañ degemeret er C'hevre Keltiek. Laouen e voemp o klevout J. Abherve-Gwegen o kontañ e droiad en div vro-se en hañv tremenet, met daoust da neuizioù 'zo eus o doare-bevañ ha sevenadur, n'omp ket bet douget da gemmañ hor meno.

A-benn bloaz eo en Enez Vanav e vo dalc'het ar vodadeg. E dibenn-miz Eost pe derou Gwengolo.

Goude labourat start e tleer distennañ. D'ar sadorn noz hor boe plijadur oc'h arvestiñ ouzh daou sketch e brezhoneg bev displeget gant strolladig Youenn Kraff (ret e oa bet dezhañ reiñ un diverrañ e saozneg da gentañ). An nozvezh a-raok e oa bet darbet deomp koll hon hent e teñvalijenn ar maezioù o tistreiñ eus un tamm fest-noz en ur vereuri : daoust d'ar sistr diskennet brokus ne oamp ket mezv, met war ar postoù heñchañ e oa merket kement seurt anv nemet « St-Vincent-sur-Oust ». A-drugarez d'ar sterenn ha goude kalz dael er c'hroazhentoù e teujomp a-benn da adkavout hor c'henkiz.

(*) Gouzout a reomp e vefe kudennoù pleustrek met gant youl vat e tlefe bezañ tu d'o dirouestlañ hep koll re a amzer nag a arc'hant.

(**) Nac'h a ra ar pennadurezhioù saoz dalc'hmat anzav ar gwirioù-se hag e kendalc'h evel-se 385 prizoniad bennak da vevañ en un endro heugus en o c'helligoù ha krez ebet warno nemet ur pallenn. Lavarout a reer ez eo int o-unan o deus dibabet gouzañv evel ma reont ha ne c'heller ket asantiñ d'o goulenn hep grataat doujusted d'an taolioù a damaller dezho. Padal, kondaonet int bet holl hervez reolennoù dibar ar C'homite Diplock (da skouer, a-walc'h oa evit prouenn a-enep dezho disklèriadur ur mestr-polis). Skouer Gluseppl Conlon, marvet da heul un hir a yun-enebiñ, en deus diskouezet ur wech ouzhpenn nevez 'zo ez eus Republikaned en toull-bac'h evit torfedoù ha n'o deus ket graet. Gwalldaolioù izili ar bolis pe an arme saoz ne lezer ket anezho da deurel skeud war doujusted an nerzhioù-se. Ur c'hrennard a 16 vloaz a voe diskennet gant un archer pa oa o livañ ul lugan bennak war ur voger ; ur muntr e oa met anv ebet da gastizañ ar muntrer. Hini ebet eus ar soudarded n'en deus paket ha pa ve un devezh hepken en toull-bac'h abaoe 1968 daoust ma 'z eo bet anataet meur a wech o doa drouklazhet tud dinoaz : n'eo ket dav dezho bout figus ! Gwallziforc'h zo atav a-enep darn eus poblañs ar 6-Kontelezh : keit ha ma kendalc'ho e vo tud o krediñ e rankont stourm dre heg. N'eo ket torfedourien «voutin» a chomfe daou, tri ha zoken pevar bloaz gant tra nemet ur pallen da wiskamant. Pa vez en Argentina pe en Afganistan e c'hoarvez seurt harzerezh e oar « media » Bro-Saoz komz eus gwaskerezh hag e kavont mat a-walc'h doareoù-ober kriz ar stourmerien guzh. Pa gontroller ar skinwel hag ar c'helaouennoù bras eo aes livañ gevier. Nemet en Amerika e kav ar Saozon o far hag e teu mignoned ar stourmerien iwerzhonat a-benn da zispenn o bruderezh. Gwelit peseurt degemer kalonek a zo bet roet n'eus ket pell gant pennoù bras stad Massachusetts da Francis Mac Cann, bet paotr e ballenn e-pad daou vloaz ! Fuloret-bras ar Saozon !

Kal Nn 12

	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
I	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-
II	-	-	-	-	-	X	-	-	-	-
III	-	-	-	-	-	-	-	-	X	-
IV	-	-	-	X	-	-	-	-	-	-
V	-	-	X	-	-	-	-	-	-	-
VI	-	-	-	-	-	X	-	X	-	-
VII	-	-	-	-	-	-	-	-	X	-
VIII	-	-	X	-	-	X	-	-	-	-
IX	-	X	-	-	-	-	-	-	-	-
X	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-

A-led. - I. Pevare pourvezer an Ankou. - II. Mignon da unan a voe pefed e Breizh ; Kase e garr. - III Ar vicher a ran. - IV. Diskoulm ; Evel ur c'hazh gleb. - V. Goueled-kêr ; Melloù. - VI. Peadra da gas ur c'harr (lizherenn-dal kemmet) ; Notenn. - VII Peadra da c'hounit. - VIII. A bep tu da Napoleon ; Ha pa ve argant pe dud forzh pegement war e lerc'h, e vo dibourvez atav ; Hennezh ne blij ket dezhañ diskoulmañ, - IX. Abalamour d'an uzin eo mac'hagnet e-giz-se ? - X. Ne reer anv anezhi nemet pa vez mat.

A-serzh. - 1. Ar re-se a zo mall warno ma vo echu ar sizhun. -2. He sabr a zo mat da blegañ. - 3. Stad a-vremañ ; Perc'hennañ ; Unan a zo a-enep d'al Lu. - 4. Lezet e vo da gozhañ abred pe ziwezhat ; Da c'houzout an doare. - 5. Ken touz eo o zorgennoñ ha Menez-Arre, met kalz tommoc'h eo d'an den warno. - 6. Emañ sant Per o chom en hini an Neñv, moarvat ; Raganv. - 7. Na labous-yar, na mailhardig koulskoude. - 8. Araogenn ; C'hoant o doa Iwerzhoniz d'her c'haout er gêr. - 9. Raganv ; Diskennet pa ziskenner ; Pa ne dro ket gant an amzer e tro an amzer

gantañ. -10. Ne vez ket goulennet digant sant Tupedu.

GWALEREG.

DISKOULM D'AR GAEL Nn 11.

A-led. - I. Penn-da-benn. - 11.-E gaou ; ON. - III. Digenseurt. - IV. Ene ;
Troee. - V. N.A.S.A. ; S.D.N. ; - VI. Unnekvett. - VII. Geizoù ; Re. - VIII. Eznet
; Koll. - IX. Ne ; Pelli. - X. Trantellek.

A-serzh. - 1. Peder-ugent - 2. Egin ; Nezer. - 3. Nagenniñ. -4. Noe ; Aezenn. -
5. Duns Skot. - 6. Avu ; Pe. - 7. Boet ; Kel. -8. En ur stroll. - 9. Rod ; Elle.
- 10. Notenn ; Lik.

AL LIAMM 203

TAOLENN

Sonennig gant ar REBEDOUR	403
An deizioù du gant Reun ar C'HALAN	405
Ar medisinerezh oc'h ober ul lamm bras war-raok gant Laenneg gant Goulc'han KERVELLA	409
Laenneg ? Piv eo hennezh ? gant Per BOURDELLES	425
Laenneg brezhoneger gant an Dr ROUSSEAU (br. gant Bernez Rouz)	439
O foetañ hent dre Iwerzhon gant Gweltaz ar BOZEG (br. gant Jakez Konan)	450
Ur rummad abadennoù diwar-benn Breizh er skinwel kembraek gant Gwyn GRIFFITHS	455
Notennoù	457
Roll ar pennadoù bet embannet e 1980	469

Sonennig

Kelien a dro
Ouzh ar solier,
Em fenn marteze ?
O c'hortoz lizhiri
Na zeuint morse.

Bevañ ken tost, bloavezhioù-pad
Ha chom dianav
An eil d'egile.
Debriñ tal-ouzh-tal,
Ouzh ar memes taol,
Kousket hag huanadiñ en hevelep gwele
Pep hini e-unanik
Kloz en e huñvre...

Kelien a dro
Ouzh ar solier,
Em fenn marteze ?

Breou a red etre da vizied
'Vel an dour
E lennigoù da zaoulagad
Estren, distrad...
Zoken beuzet em re.
Marv ar goanag.
Freuzet pep tra
Siwazh, sanket don oa an higenn
Ret e vo troc'hañ an tamm
'Vit he lemel
Hogen kontammet e chomo ar gouli.

404

Kelien a dro
Ouzh ar solier,
Em fenn marteze ?
O c'hortoz lizhiri
Na zeuint morse.

An deizioù du

Kroget e oa an traoù gant an ospital
 Krouget e oa bet ar vezeged gant ar re glañv
 Aet e oant skuizh o c'hortoz ma teufe ar marv
 Ret e oa dezho chom bev e-kreiz o breinadur
 Ar vugale zoken a gave hir an amzer
 Ha pa vezent o c'hoari dindan heol Mezheven
 D'ar mare ma vez skignet ar foenn
 Ar c'hrouadurig ouzh ar vronn
 A zislonke laezh e vamm digernez
 Mouget e oa bet goulou an druez

2

Tavet e oa an avel war ar mor
 An dour a oa evel plomm teuzet
 Ne oa ket bet taolet pled ouzh an arouezioù
 Ouzh an damez-keur dianket
 Ouzh al lakez-pikez a risigne
 Ouzh ar bleunioù suilhet en nevez-amzer
 Ouzh al loar gweñvet ha ruz
 Den ebet ne grede tennañ e alan
 Na pell e oamp eus ar pezh a garemp
 Merglet e oa dir an amzer

3

Degouezhet e oa an deizioù du
 Deizioù dilañs, deizioù diflach
 An heklev ne responte ket
 Tavet e oa kan an dremmwel
 Mut e oa aet al laouenanig
 An dud a yude gant an aon
 C'hwez ar gwad a oa gant an noz
 Kontilli a luc'he a-dreñv d'an norioù
 Lugerniñ a rae ar marv war beg an armoù
 Hag an douar a sache war an treid

4

Ne oant ket deizioù da vevañ
 An amzer a ziere an eurioù
 Digoret e oa bet an nor d'ar vrumenn
 Chadennet kili al liorzhoù kozh
 Ha torret diremed gwerenn an dazont
 Ret e oa gouzañv ar poanioù
 Ret e oa gortoz ret e oa plegañ
 Dindan skourjez kriz an arnev
 Mab-den a rede war-lerc'h ar marv
 An emlzh a gase da boanioù all

5

An abardaezh a ruze dre ar bouldrenn
 An deñvalijenn a zic'hlanne eus pep tu
 Ne oa ket tu da dennan a-raok na da gilañ
 Dilec'hiet e oa bet ahel ar bed
 An ene a rede dre ar gouelec'hioù
 O soñjal e baradozioù kollet
 An hun en doa pleget e zivaskell
 An orolajoù a verke trizek eur

Naered-gwiber a hente ar feunteunioù
Ur penn-marv a c'hoarzhe en e gorn

6

Ar stered ne zeuent mui tost d'an douar
Tec'het o doa pell diouzhimp
An neñv a oa war var da gouezhañ
Ur c'hleze a dreuze hon nozioù
Ar genou en doa kollet blaz ar pokoù
Ne c'halle mui nemet dantañ
Gwad a chome e korn ar muzelloù
Gwiblen ar galon he doa kroget da wigourat
Stegnet e oa griped an dic'hoanag
Lazhet e veze ar c'houzker gant e huñvre

407

7

Roud ebet eus ar maen-jad
War ruzell ar c'huzh-heol
Stered ebet da regiñ bolz an oabl
Ha maged du ar c'horfoù devet
An tan ne zisplege mui e vrankoù aour
Lazhet e oa bet war lein an tourioù
Ar milinoù ne valent mui ar glac'har
Glas e oa bep c'hoarzhadenn
Bag ebet war ar mor bras
Met lestr an Ankou a oa war e eor

8

Ar jipsianez a yude e-kreiz he gwallhuñvre
Ne oa ket evit dont er-maez eus an tromor
C'hoant e oa deomp da lonkañ barr an eurioù
Met ar c'hoant a oa ur gontell lemm
Dilamet e oa bet diganeomp c'hoari ar garantez
Al loar ne dreuze mui ar prenestroù
An noz a nac'he deomp teñzor an ankounac'h
Pelec'h e oa aet ar plac'hed o diweuz ruz ?
Penaos e vije bet pilet ur voger ken tev ?
Bleizi-broc'hed a yude e fabourzioù ar gêrbenn

9

Ar c'hoantegezh ne zeue mui d'an emgav
Kollet e oa bet tonioù gwechall
Ar maouezed a lide aberzhioù kuzh
E-tal mogerioù lufret gant o brozhioù
Ur c'hilhog du a gane komplidoù
Lazhet e veze an dremenidi
Ha sunet dezho mel o eskern
Ar saeoù gwenn a oa saotret gant ar gwad
An doueed varv a huñvree en o mougev
Ur sterenn du e oa ar garantez.

408

10

Al levenez ne gane mui e toull an nor
Ar plac'hed ne ginnigent mui
Frouezh burzhudus o c'horf
Plegañ a raent o daoulin
E-lec'h dañsal e skeud al loar
Dizolo o divronn ganto,
Noazh ha sonn evel gwechall
Ret e oa kaout diskred ouzh ar c'houlmed
Ret e oa kaout diskred ouzh ar vuhez
Ar c'hantvedoù ned aent da neblec'h

11

Prennet e oa bet an norojoù
Al liorzhoù a oa aet da veredoù
Hag ar c'helien a voude war an teil
Ne oa ket tu d'en em vezviñ
Tavet e oa mouezh ar merc'hed
Pilhoù a skrigne a-dreñv dar prenestroù
Ur c'hwitellerez a c'harne er pellder
An tumporell diwezhañ a storloke dre ar straedoù
Ar gwad a zeue da vezañ dour

12

Ar c'hleier a sone ar glaz
An noz a ziskenne dre ar maged
Ar gwez-ivin a rae ur c'hevren du
Ne veze ket lakaet bleunioù war ar bezioù
Hag ar re varv, ne zeuent mui en hon touez
Forzh penaos piv a oa bev c'hoazh ?
Pep hini a grede e oa ur spes anezhañ
Ar c'hoummoù a ruilhe o foanioù
Bez' e oa kelc'hioù war gorre an dour
An Ankou a gouske sioul e goueled an ouf

Ar medisinerezh oc'h ober ul lamm bras war-raok gant Laenneg

gant kenlabour hegarat Armand BOUGET evit ar poltriji.

« An Doktor bras Laenneg
A oa ur medisin
Mab d'un alvokad gouiziek
A Gemper Gaourintin.
Laenneg dre e spered
En deus savet e benn
Ken uhel ar re vrudet
Hipokrat ha Galien. »

Evel-se eo e krog ar barzhoneg *Meuleudi an Aotrou Laenneg* bet embannet e niverenn c'hwec'h ar gazetenn holl-vrezhoneg " Feiz ha Breiz " (bloavezh 1865). A dra sur e savas Laenneg e vrud ken uhel hag hini Hipokrat ha Galien. A-drugarez d'e dad ne voe ket avat, kentoc'h en desped dezhañ !

E dad, Teofil-Mari Laenneg, a oa un oristal a baotr. Den a lezenn, e kase e amzer o sevel rimadelloù da veuliñ pe da ziskar an hemañ-hen. Sevel prosezou, digeriñ afer da gement den 'oa, sachañ dle war e gein ha n'eo ket soursial ouzh deskadurezh e vugale. Bez' e oa e gwirionez un den foultr e stal ha ne ouie ket gouarn ur gwenneg. Goude kaout madoù ha leve a-vern e tailhas an arc'hant d'e vibien p'edont o kas o studi da benn e Pariz. Klask enebañ ouzh ar c'hoant en doa Hyacinthe da vont da vedisin a reas ivez. Hemañ avat daoust ma veze c'hoariet divalav dezhañ gant e dad a chomas stag outañ gant ar garantez evit Breizh, hec'h ardremez, he yezh hag he sevenadur.

410

POLTRED LAENNEG – diwar ul livadurig-olifant. – Daoust d'e zremm da vezañ treut n'emañ ket gwall-anat ar c'hlenved warni. Ha bravaat ar medisin brudet en deus graet al livour ? Pe neuze edo Laenneg en ur pennad aesoc'h eus e vuhez, ma oa distanet an droug ha diskuizhet an den ? Mont da chom war ar maez pe war an arvor a oa a-walc'h alies da Laenneg da zont yac'h en-dro, evit gwir. En ur vont war an oad avat e rouesaio ar frapadoù yec'hed hag e wasko startoc'h-start ar c'hleñved warnañ.

411

Gant e eontr Gwilhou, breur d'e dad, e voe rikouret Hyacinthe. Mervel a reas e vamm p'oa-eñ nemet pemp bloaz. D'e eizh vloaz e voe kemeret da sevel gant Gwilhou hag a oa medisin en Naoned. Dre ar bed oa bet Gwilhou o c'haloupat hag o teskiñ e vicher. En Edimbourg, gant ar mezeg brudet Humer e oa bet o studial ha neuze e Montpellier. E-pad ur pennad e oa bet o labourat e Kemper ha goude se e oa deut d'ober e ziazez d'an Naoned. Unnek ospital oa en Naoned d'ar marevioù-se hag ur Skol-veur evit ar Vezeien. Gwilhou a voe anvet e penn ar skol-se e-pad un nebeud bloavezhioù.

Gant e eontr, anat eo, e voe hentchet Hyacinthe war-zu ar Medisinerezh. Deskiñ anezhañ a raio en ospitalioù ar gêr vras, envel anezhañ da surjian-skoazeller p'oa eñ surjian arme-aodoù-Breizh, o reiñ tro dezhañ evel-se da c'hounid un tamm gwerzh-butun. Diwezhatoc'h pa vezo aet Hyacinthe da Bariz e kendalc'ho da gaout darempred gantañ, da vroudañ anezhañ en e enklaskoù. Daou vab dezhañ ez aio ivez da studial ar Medisinerezh da Bariz.

E 1795 eo e stag Hyacinthe d'e studi-medisin en Naoned. Pemp bloaz e chomo

eno. Gant ar C'hreizennañ degaset da heul ar Reveulzi Vras ez a da fall ar skolioù bras ha meur, estreget re Bariz. Di e ranker mont hiviziken da zastum gouiziegezh. Soñj mont di en deus ivez Hyacinthe, bountet gant e eontr. Re verr eo lost an arc'hant gantañ avat hag e rank mont da c'houlenn an aluzen digant e dad. E 1801 e ra e ziskenn e Pariz a-benn ar fin, evit ar wech kentañ.

E-doug ar pennad amzer en deus tremenet en Naoned en deus bet darempred gant Medisinerezh ha Medisined. Lakaet en deus e alar da vat en ervenn ar skiant-se, hag a zo berr c'hoazh. Da bell e toullo an ervenn-se diwezhatoc'h. E darempred emañ gant ar c'hleñved ivez. Marvet eo e vamm gant an droug-skevent. War a leverer e krogas an droug-se en holl familh. D'e seitek vloaz e ra e annez e ti Hyacinthe hag ac'han d'e varv e chomo war e gein, da stourm outañ. War hir dermen eo e gleñved, gant krogadoù diaes ha frapadoù diskrog. Peseurt doare den oa d'ar mare-se ? « Dister e gorf, fall e yec'hed, droug-livet e zremm gant pikoù panez, blev ruz ha fin war e benn... Ha padal fentiri ha nerzh-bevañ ennañ forzh pegement... En em daoler a ra da embregiñ an holl sportoù, da studial skiantoù an natur ha d'en em zeskiñ war an arzoù... »

412

O teskiñ e vicher e Pariz

Setu eñ neuze e Pariz. Ugent vloaz n'eo ken. Mesk ha dizurzh a zo er Studioù-Medisinerezh. Diskaret eo bet ar Skolioù Roueel. Emaer o klask adzevel an Deskadurezh war bep tachenn. Lavaret a reer penaos Napoleon e-ser brezelekaat ha skuilhañ ar gwad war an hanter eus ar bed a roas ul lañs nevez da Skiant-ar-Yec'hed. Pep tachenn-vrezel oa un dachenn-embregiñ evit ar surjiane !

E pe stuz ez edo ar Vezegiezh kent penn kentañ an XIX-vet kantved, emit-hu ? Da skiant n'oa nemet faltazi ha glabousezh. Da louzoù, tennañ gwad ha kas war vaez. Ar c'hoarivaour gall meur Molière en deus c'hoarzhed goap ouzh medisined e amzer en e bezhioù-c'hoari (« Ar garantez-vedisin », « Ar medisin en desped dezhañ », « Ar c'hlañvour kamm-ki-pa-gar »). Drezo e c'heller kaout un alberz eus ar pezh oa. Arabat krediñ avat n'oa nemet an doare-se o ren. Fazi e vefe rak abaoe meur a gantved ez edod krog da studial pizh ha kempenn doareoù ar c'horf, ar vuhez, ar yec'hed hag ar c'hleñved. Ret eo ober anv eus skiantourien ha medisined 'zo hag a gasas war-raok skiant-ar-c'horf hag hini ar c'hleñvedoù a-dreuz kredennoù enep-skiantel o amzer hag enebouriezh ar bras eus an dud. Vesale, Ambroise Paré, Harvey, Lavoisier, Hunter, Haller, Vasalva, Morgani na pa ve ken, o lakaat un tamm sklerijenn e teñvalijenn ar c'hanvedoù.

E penn kentañ an XIX-vet kantved avat e vrasaio buanoc'h ar sklerijenn. Kemm bras a zeuio en doare da welet ar skiant-se. Hag eus pelec'h a gav deoc'h e teuio ar sklerijenn ? Eus Pariz evel just !... Skol-Bariz a reer eus ar bodad medisined a reas d'ar Medisinerezh mont war-raok. Eno edo Bichat a skrivas levrioù Korfadurezh, eno edo Corvisart, medisin Napoleon, brudet dre e zoare skiantel da studial ar c'hleñvedoù-kalon, eno edo ivez ar surjian Dupuytren.

E-pad tri bloaz e tesko Hiacynthe, e peurzesko kentoc'h, e vicher e Pariz. Gant Corvisart dreist-holl ha Dupuytren e raio e vad eus an doare skiantel da studial ha da labourat : sellet pizh ouzh ar re glañv, notenniñ dre ar munud kement a denn d'ar c'hleñved, dispenn ar c'horfoù marv evit klask warno roudoù ha doareoù ar c'hleñved. Kerkent kazimant e krog da embann e kelaouennoù medisinerzh an enklaskoù hag ar c'havadennoù a ra e-unan e-ser studial. Nag a draoù nevez e teu da zizoleiñ e berr amzer, ha n'eo ket medisin c'hoazh ! « Tanijennoù ar rouedenn-gof », « Krezoù a-ratozh benvegennoù 'zo », « Kleñvedoù kalon »... Bet entremar da zistreiñ da labourat da Vreizh e ra e soñj 'barzh-ar-fin da chom e Pariz. Pelec'h a-hend-all e c'hellfe kendalc'her gant e enklaskoù ? Tremet a ra arnodennoù ha kenstrivadegoù hag e teu ar maout gantañ tost bewech.

Dija eo bras e skiant hag e-se e sav avi ha gwarizi en-dro dezhañ, dreist-holl a-berzh Dupuytren. A-raok bezañ anvet da zoktor e krou kentelioù prevez Anatomiezh el lec'h ma tesk d'ar studierien ha da vedisined all leun a draoù

nevez bet dastumet en e raok ha gantañ e-unan. E miz Mezheven 1804 e tremen, gant berzh bras, e dezenn diwar-benn « Kinnigoù diwar-benn kelennadurezh Hipokrates, e-keñver ar Medisinerezh pleustrek ».

Setu eñ mezeg da vat. 23 vloaz n'eo ken. A-raok bezañ deut er-maez eus a stad a studier setu eñ kelenner. Berniet en deus gouiziegezh dezhañ ha d'ar re all, koulz er Gorfadurezh hag er C'hleñvedoù. Pleustret en deus ivez un doare da labourat : pizh, reizh, fur ha poellek. Hag iskis a-walc'h eo gwelet anezhañ o taremprediñ war ar memes tro traoù ken di-skiantel ha lennegezh, brezhoneg ha relijion...

Laenneg, medisin-kêr

Kregiñ a ra re glañv da zont d'e gaout, e kêr-Bariz. Buan a-walc'h e stanka an niver anezho. Klask a ra bezañ anvet da vedisin en ospitalioù-kêr, en aner avat abalamour d'ar warizi a zo diwanet en-dro dezhañ. Chom a raio tost da zek vloaz a-raok tizhout kaout seurt karg.

Gouzout petra ez edo labour ha doare-bevañ ur medisin e kêr-Bariz d'ar poent-se a zo start a-walc'h. A dra sur ez eus bet savet studiadennoù diwar-benn seurt kudenn, evel ma'z eus bet graet a-zivout medisined Breizh (Tezenn J. Leonard na pa ve ken : « Medisined kornog Bro-C'hall » - embannet e 1978). D'an neb en deus amzer d'o c'hilask ! En ur lenn buhezioù Laenneg avat e teuer a-benn da lakaat meur a dra war-wel, hag a zo kontrol an eil ouzh egile a-wechoù.

Daoust hag aezamant hag arc'hant en doa ar medisin-kêr ?

414

« E 1809 e teu Laenneg da vedisin gant ar c'hardinal Fesch, eontr da Napoleon. Ret mat e voe dezhañ diwar-neuze ren e vuhez war an ton bras, kaout karr skañv ha matezh en e di... daoust m'oa berr an arc'hant gantañ ». Daoust ha paeet e veze a-zoare gant henhont, pe neuze e veze lakaet ar medisin war ar memes renk gant ar vevelien ? Penaos kompren ivez en defe gallet prenañ kemend-all a zouarou, atantoù ha mereurioù war-zu traoñ Kernev er pennad-se eus e vuhez, goude ma oa treut ar peuriñ gantañ e Pariz, war e veno da vihanañ ? Talvoudegezh an traoù marteze ?

Daoust hag e c'helle ar paour kaout medisin e kêr, er-maez eus Ospitalioù ar Garitez ?

« Tost ha mat ouzh an dud oa. Ne rae ket forzh gant an arc'hant. Bras ha bihan a zeue d'e gaout. Karout a rae ar re glañv anezhañ... » An arroudenn-se a rofe a-walc'h da grediñ n'oa ket a gemm etre ar paour hag ar pinvidik. Selaouomp bremañ Laenneg e-unan o komz diwar-benn goañvezh 1812-1813 pa oa ar Gosaked o tostaat d'an red ouzh Pariz : « Tec'het eo an holl vourc'hizien hag an holl noblañsoù kuit eus Pariz, gant aon rak ar Rused. Ne chom ganin-me kliant ebet ken ! Goullonderet eo kêr-Bariz. »

Peseurt emzalc'h en doa gant ar re glañv, emezit-hu ? Selaouomp ar medisin bras adarre, en Ospital ar Salpetrier e 1814 ma oa deut dit e-pad un nebeud mizioù d'ober war-dro ar soudarded gloazet ha klañv : « Komz gant ar re c'hloazet hag ar re glañv ? Sed aze al louzoù nemetañ a rafe ur vad bennak da « va » Bretoned. » - Hag an arroudenn-mañ c'hoazh o lakaat anat talvoudegezh ar yezh en darempredoù : « Diaesoc'h e veze kavet ar Vretoned da gompren gant an vedisined eget an Alamanted hag ar Rused zoken, abalamour ne ouient ger galleg ebet. Dre ma oa krog kleñved ar gêr enno, dre ma oant troc'het diouzh ar re all abalamour d'o yezh ec'h en em leze ar Vretoned da vervel, o nac'h bezañ louzaouet zoken. Aliesoc'h a se e skoe falc'h an Ankou outo. » Doujañs vras en doa Laenneg ouzh ar glañvourien eta. « Gant ma reoc'h, a lavaro diwezhatoc'h d'e skolidi, arabat deoc'h skuizhañ ar re glañv en ur chom re hir da c'houlennata pe eksaminañ anezho ». Doujañs betek re a-wechoù, a levere lod eus e genvreudeur hag a rae ar « Jezuist » outañ. Diseven e kave rankout harpañ e skouarn ouzh

peultrin ar merc'hed, gant aon d'o feukiñ. Arabat deomp avat na c'hoarzhin goap na kemer abeg en doujañs-se, rak panefe hi marteze n'en defe ket klasket hentoù nevez d'ar Medisinerezh !

415

Kavadennoù bras Laenneg

Eus an hentoù nevez-se eo e fell din kaozeal dreist-holl. Penaos en deus Laenneg lakaet e boan hag e ijin da eeunañ ha da ledanaat ar gwenodennoù a oa bet graet en e raok, ha d'ober diouto hentoù bras ? Gwelet hon eus penaos en doa staget da zegas boued d'ar skiant kerkent hag ugent vloaz. Gouzout a reomp penaos ivez e klaskas e-pad e vuhez sevel ul levr bras diwar-benn skiant an Anatomopatologiezh. Evit kas da benn e enklaskoù ez eo ret dezhañ labourat en ospitalioù. Ne deo nemet e 1816 e vezo anvet eno. En ospital Necker eo ez aio, un ospital eus an « Assistance Publique ». Bez' eo anezhañ un ospital bihan war lezoù Pariz, dalc'het gant Seurezed eus ar Garitez. Lec'h da gant klañvour zo ennañ.

Setu amañ, tennet eus ul lizher en doa kaset d'ur mignon dezhañ, penaos ez ae e amzer e-biou e-doug un dervezh-labour : « Da 7 eur hanter pe da 8 eur e savan eus va gwele, rak kalz e rankan kousked abalamour d'am c'hleñved. Alies e konsultan tud klañv e-ser gwiskañ va dilhad. Goude se ez an d'an ospital war-dro ar glañvourien zo eno. Neuze e teskan ar skolidi. Benn am bez graet un tamm skol dezho, da lavaret eo a-benn 10 eur hanter e vez poent din kregiñ gant va zroiad e kêr. Betek 5 eur hanter e kaso ac'hanon. Koaniañ a ran neuze. Da 6 eur hanter e ran un droiad all betek 10 eur. Ac'hano da 11 eur e lakaan un tamm urzh em aferioù, renkañ evezhiadennoù va skolidi, skrivañ lizhiri... »

Bezomp mar keroc'h e toull-dor ospital Necker er bloavezh 1816 war-dro 8 eur hanter. Pavatadeg ul loen ha storlok rodoù ur charbañ war bavezioù Pariz. Diskorntreiñ ra ar c'harr pelloc'h. Diskenn a ra ar medisin dioutañ. Tog ledan zo gantañ war e benn, mantell hir ha du war e gein. Treut eo an den, terzhienn o virviñ en e zaoulagad lemm, askornek ha droug-livet e zremm, hejet penn-da-benn gant ur paz yud. Anat eo ar c'hleñved warnañ... Deomp d'e heul e salioù bras an ospital. Gweleoù a bep tu, tud toc'hor gourvezet warno. Krog eo ar medisin da c'houlennata ur c'hlañvour, ur studier 'zo o notenniñ pizh pep tra. Gouzout a ra bremañ penaos en deus ar c'hleñved kroget ha peseurt diaezamant a ra d'an den klañv. Sellet a ra a-dost outañ : e liv, e groc'hen, kemer e derzhienn, sellet ouzh e greñch, ouzh e droazh... hejañ anezhañ, muzuliañ tro e vruched, skeiñ ouzh e gein gant e vizied ha selaou an trouz a ra ; ha neuze harpañ e skouarn ouzh ar peultrin ha klask klevet un dra bennak. Rik ha krak en deus graet ar pezh 'oa d'ober. Meur a dra en deus merket ha dizoloet. Hogen n'eo ket a-walc'h. Meur a dra all a zo chomet kuzh dezhañ, ar pezh a zo e diabarzh ar c'horf.

416

Deomp gantañ c'hoazh er sal a zo e-kichen houmañ. Un den nevez-marvet zo war un daol e-kreiz ar sal. Klañv bras edo gant e skevent. « Kavout a raimp an dra-mañ-dra-hont ennañ » eme Laenneg d'e skolidi. Hag en ha digeriñ ar c'horf, dispenn anezhañ ha sellet dre ar munud ouzh pep tamm outañ, dreist-holl ar skevent, en ur ziskrivañ pep tra. Aes a-walc'h gwelout roudoù ar c'hleñved war ar c'horf marv. Penaos kavout anezho ez-vev ? Setu ar pezh a laka Laenneg diaes bras.

KENTEL KORFADUREZH AR MEDISIN NIKOLAZ TULP. - Livadur gant REMBRAND, 1632. - Evel war an daolenn-mañ e teskas Laenneg skiant an dispenn-korfoù. Diwezhatoc'h hen desko d'e skolidi hag hen pleustro evit klask roudoù ar c'hleñvedoù. Kustum oa da lavaret en a-raok ar pezh oa e soñj kavout. Neuze e troc'he hag e tiskrive dre ar munut ar pezh a zizoloe dindan e gontell hag e re-sizailh.

Atav, emezañ, em eus bet klasket kavout an diskoulm da deir gudenn : 1°) Lakaat anat ar c'hleñved war ar c'horf marv. 2°) Anaout ar c'hleñved ez-vev dre arouezioù diarvar ha skiantel. 3°) Stourm ouzh ar c'hleñved gant an doareoù gwellañ bet desket deomp dre ar skiant-prenet.

Dre forzh en em soñjal ha klask e teuas da gavout ha da ijinan ar benveg a anver **stetoskop** pe **selaouenner**.

« E 1816, emezañ, e voen galvet war-dro ur vaouez hag he doa doare da vezañ klañv gant he c'halon. Lart a-walc'h oa hag e-se ne oa ket aes gouzout tra pe tra diwar-benn ha c'hleñved en ur zornatañ he bruched pe en ur skeiñ outañ. Dre ma oa hi maouez ne oa ket dereat din stagañ va skouarn ouzh he c'hrebez da selaou trouz he c'halon. Neuze eo e teuas da soñj din un dra anevezet meurbet ! Lakait ho skouarn harp ouzh un treust koad ha goulennit gant unan bennak skeiñ er penn all eus an treust gant ur spilhenn : kreñv ha fraezh-kenañ e klevfoc'h an taolioù spilhenn ! Kaout a reas din ez oa tro da dennañ implij eus an dra-se. Ha me ha pakañ peg en ur c'haier-paper, rollan anezhañ start, lakaat ur penn anezhañ ouzh bruched ar glañvourez hag ar penn all ouzh va skouarn. Mil souezhet e voen : un tamm mat fraeshoc'h ha kreñvoc'h e veze klevet trouz ar galon en doare-se ! Estreget ar galon, emeve, e c'heller selaou gant ar benveg-se ! Forzh peseurt trouz a zo e peultrin an dud : an alan o vont hag o tont, ar vouezh... Kerkent e stagis da studial an doare nevez-se en Ospital Necker hag abaoe n'em eus ket bet diskroget. Dastumet em eus skiant o klevet an trouzioù.

Envel a ra ar benveg-se **stetoskop**. Studial a raio warnañ betek ar marv. E-unan e savo ar re gentañ, en ur implijout danvezioù ha stummoù disheñvel dioutañ evit degas gwellaenn dezhañ. « Koad fav, emezañ, eo ar gwellañ danvez d'ober ar stetoskop. Da selaou ar skevent e rank bezañ kleuz. Evit ar galon hag ar vouezh avat e c'hell bezañ leun. Daou damm koad a ya d'ober anezhañ, un troadad hirder d'ar benveg hag ur meudad hanter a led er penn. »

Talvouclegezh ar stetoskop a vrasaio hep ehan azalek ar poent-se. En em lakaat a raio medisined ar bed-holl d'ober gantañ. E Pariz hag e Breizh eo e vezo implijet da gentañ, o vezañ ma teuas di d'en em ziazezañ kalz eus skolidi Laenneg. Ur breizhat all, Lejumeau de Kergaradek, eus Montroulez, a raio gant ar stetoskop-se evit ar wech kentañ evit selaou ar vugaligoù e korf o mammoù.

D'an doare nevez-se da selaou ar vuhez pe ar c'hleñved er c'horf e ro Laenneg an anv-mañ : Selaouennerezh dre hanterouriezh (1) evit diforc'hañ anezhi diouzh ar Selaouennerezh war-eeun (2), a veze implijet dija gant Hipokrates hag a zo stagañ ar skouarn ouzh ar c'horf da selaou.

Selaou a ra eta ha notenniñ. Klevout a ra trouzioù nevez-famm ha souezhus. Diskrivañ a ra pep hini anezho ha reiñ pep a anv dezho. Da skouer « les râles crépitants » hag a zo « heñvel-mik ouzh trouz an holen lakaet da grazañ war an tan », « égophonie » zo « ur vouezh hag a gren heñvel ouzh hini ar c'harvig », « le tintement métallique » a zo « heñvel ouzh hini un draezhenn o kouezhañ en ur werenn zir pe borselen » hag all... Gwelloc'h a ra c'hoazh : stagañ an trouzioù-se ouzh kleñvedoù. Pep kleñved, evel ma ouezer en deus e zoare hag e drouzioù dezhañ e-unan, dreist-holl kleñvedoù ar skevent, ar vouezh, ar gwazhied hag ar galon. Tamm-ha-tamm en ur selaou hag en ur zispenn ar c'horfoù marv e teu a-benn da resisaat ar c'hleñvedoù anavezet ha da ziskrivañ pizh kleñvedoù nevez. Pleustriñ a ra da vat un doare labourat bet arnodet en e raok gant e vestr Corvisart, an doare « anatomo-clinique », da lavarout eo liammañ an arouezioù kavet ez-vev gant ar roudoù kavet war ar c'horf marv. E-pad pell amzer war e lerc'h e vezo embreget an doare-se evit degas anaoudegezh er c'hleñvedoù.

Gant ar benveg nevez da selaou ha gant an dispenn korfoù marv e teu e berr amzer da lakaat urzh e skiant ar c'hleñvedoù-skevent. Bodañ a ra an holl arouezioù a denn da bep kleñved, diskrivañ a ra pizh pep kleñved : penaos e teu ar c'hleñved-se war-wel ez-vev, penaos e vez anal war ar c'horf dispennet hag all... Ar Berr-alan, ar Pleurezi, Koeñvadur ar skevent, an Amfizem, ar Pnemoni a zo bet displeget da vat gantañ. Frankadur ar C'horzennoù-skevent ha Gor-ar-skevent a zo bet taolennet evit ar wech kentañ gantañ. Estreget Laenneg evel

just a labouras war gement-se : e vignoned hag e skolidi a reas ivez studioù ha tezennoù diwar-benn ar c'hleñvedoù en ur ober o mad eus kelennadurezh o mestr.

- (1) Auscultation médiate.
- (2) Auscultation immédiate.

419

STETOSKOP PE SELAOUENNER LAENNEG. - Diwar e levr bet embannet e 1819. - Laenneg e-unan eo en deus bet turgnet ar re gentañ. Gwall gemmet eo bet stumm ha danvez ar benveg-se e-pad an daou gantved tremenet abaoe. A-galz eo bet gwellaet an dalvoudegezh hag ar spister anezhañ evel just. Elektronek eo deut da vezañ an amzer hiziv zoken. « Gant ar benveg-se, eme Laenneg, em eus dizoloet arouezioù nevez-flamm, asur ha diarvar, aes da glevet hag aes anaout drezo ar c'hleñvedoù kalon ha skevent. Deut on da gompren penaos ne oa ket par d'an doare-se evit dizoleiñ ar c'hleñvedoù ez-vev.»

420

Ur c'hleñved dreist-holl a vezo pleustret gant Laenneg er bloavezhioù diwezhañ eus e vuhez. An Droug-Skevent, pe an Tuberkuloz an hini eo. En e raok ne ouie ket gwall vat ar vedisined petra oa an droug-se. Ftisi a veze graet eus kement kleñved-skevent a lakae an den da zizeriañ war e dreid, tuberkuloz hag all. Ar romantikourien a rae *langis* dioutañ, ur c'hleñved diouzh ar c'hiz, brav a-walc'h zoken, evel e Romant Marc'harid Gauthier. Ne ouie ket gwall vat c'hoazh an dud e oa ur c'hleñved spegus anezhañ. War-dro daou ugent kleñved disparti a oa, a soñje ar vezeien. Laenneg eo a lavaro evit ar wech kentañ : « An hevelep kleñved eo. Stummoù disheñvel dezhañ ». Hag en taolennañ ez-rik ha resis pep stemm ha pep doare. Rebechet e vezo dezhañ bezañ chomet hep pouezañ a-walc'h war ar spegus ma oa ar c'hleñved-se. Evit gwir den n'her gouie c'hoazh re vat. Anavezet oa an tuberkuloz abaoe an amzerioù kozh. Laenneg a resiso mat anezhañ. E 1865 nemetken e vezo lakaet anat ez eo ur c'hleñved kontammus, gant ar mezeg gall Villemin. Koch eo a ziskrivo ar mikrob a zo penn-kaoz d'an tuberkuloz, *Mycobacterium tuberculosis*, ma vez graet Basil Koch dioutañ (1882). Goude se e vezo dizoloet ar skinoù-X ha lakaet da dalvezout gant Bouchard ha Beclère evit gwelout roudoù ar c'hleñved er skevent a-raok zoken m'en defe kroget d'ober e reuz war an den (1897). Da stourm ouzh ar c'hleñved-se e vezo kavet ul louzoù e 1944, ar « streptomycine » hag dreist-holl an « isoniazide » e 1952. Gwall skeiñ en deus bet graet ar c'hleñved-se betek an deiz a hiziv. E penn kentañ an XX-vet kantved e varve war-dro 220 den diwar 100 000 gantañ ; 100 e 1936, 50 e 1950 ha 18 e 1963. Ha kement-mañ e Bro-C'hall a-bezh. Da virout na krogfe ar c'hleñved war an dud e vez lakaet ar « vrec'h » dioutañ. Hini Calmette ha Guérin an hini eo, ma vez graet BCG dioutañ hag a zo bet implijet evit ar wech kentañ war an dud e 1921. Gwelout a reer penaos ez eus bet ranket gortoz tost da 150 vloaz evit ma vije gallet enebiñ ouzh an tuberkuloz azalek ar poent ma voe diskrivet gant Laenneg.

E miz Eost 1819 e teu a-zindan ar wask levr Laenneg « Diwar-benn ar selaouennerezh-dre-hanterouriezh, pe Studiaden diwar-benn diagnostik ar c'hleñvedoù-skevent ha kalon diazezet war an doare nevez-se da furchal ». Eno emañ an holl ouiziegezh en deus nevez dastumet. 13 lur pe 16 e koust an oberenn-se. D'he heul e vez kavet ar stetoskop da brenañ, 3 lur an tamm. Kerkent ha deut er-maez e vezo meulet gant lod. Ar bras eus ar vezeien ha skiantourien a chomo diseblant. Ur c'halz all a c'hoarzhaz goap outañ, dre warizi pe sottoni. Estreget meuleudi a veze kavet er c'hazetennoù medisinerzh.

421

PAJENN GENTAÑ EIL VOULADENN LEVR LAENNEG : « Studiaden diwar-benn ar selaou-dre-hanterouriezh » . - Ennañ e tiskriv pizh kement en deus gwelet, en ur zegas prouennoù anat-meurbet war-wel. Ken skiantel, ken rik ha resis ma'z eo kement tra zo el levr-se ma chomo gwir ha talvoudus da viken, war-bouez un nebeud arroudennoù. Gantañ eo e c'hello hiviziken ar vedisined gouzout ez-resis peseurt kleñved zo krog er c'hlañavour en ur imbours'hiñ pizh ha kempenn anezhañ.

Tamm-ha-tamm avat ez aio ar vrud dioutañ en tu all da harzoù Bro-C'hall. Medisined eus ar bed-holl a falvezo dezho dont da zeskiñ gant Laenneg. En em dennet eo e Breizh da ziskuizhañ e gorf hag e spered. E 1821 e tistro da Bariz. Bremañ avat e kouezh puilh an enorioù war e choug. Klask a ra louzoù diouzh an droug-skevent. Lakaat a raio degas bezhin eus arvor Breizh zoken da glask yac'haat ar glañvourien. Siwazh ne c'heller fiziout d'ar poent-se nemet war « an aer fresk ha yac'h, ar boued skañv ha yac'hus, an diskuizh hag un nebeud louzaouennoù » da glask enebañ ouzh an tuberkuloz. Gwasket e vezo e fin e vuhez gant tabutoù savet a-enep dezhañ gant ur medisiner brudet all ginidik a Vreizh, Broussais e anv, un teilog ha brabañser a zen anezhañ. E 1826 e vezo advoulet e levr brudet. En nevez-amzer eus ar bloavezh-se e tistro da Vreizh, klañv da vat, war ur c'hravazh kazimant. Mont a ra da anaon e miz Eost, skubet er bez gant an droug-skevent end-eeun.

Beziet eo bet e bered Ploare el lec'h m'eo bet douaret ivez Jakez Riou marvet gant an droug-skevent end-eeun. E pep danevell eus *Geotenn ar Werc'hez* e kaver tost da vat anv eus ar c'hleñved-se : tud o tizeriañ, krog ar paz yud enno, o tufañ gwad hag o skrijañ gant an derzhienn... « An doktor zo tremenet er sal, ha, goude harpañ e skouarn ouzh e skevent, ha selaou roc'h e alan en eil hag egile, en deus lavaret dezhañ : Gwellaat a rit. - Gwellaat ? Ha n'eo ket bet morse ken morlivet !... Gwellaat ? Hag aner eo bet d'ar vedisined klask disec'hañ unan eus e skevent ha lazhañ ar c'hleñved !... Gwellaat ! pa en deus skopet gwad a-hed an noz, ha p'emañ e galon o lammat en ur c'horf dizeriet.... » E 1928 eo e skrive Jakez Riou kement-mañ e *Prometheus Ereet*.

Ha klevet ho peus an istor-mañ bet embannet e Feiz ha Breiz e 1920 hag adembannet gant *Al Liamm* en dastumadenn *Gwinizh hepken*. Ennañ a reer anv eus patrom Gradlon, diskennet eus e varc'h etre tourioù iliz-veur Kemper hag aet da c'houlenn kuzul gant delwenn Laenneg war ar blasenn. « Ar roue a yae atav war e bouez. Bep an amzer en deveze taolioù paz hag e ranke chom a-sav, evel evit kaout e alan. Pa voe degouezhet pemp pe c'hwec'h kammed diouzh patrom Laenneg, hemañ a ziskennas diwar e gador. Soublañ a reas e benn izel evit saludiñ ar roue. Hemañ a reas eveltañ pa voe degouezhet e-kichen ar gael a ra an dro da batrom Laenneg. Jozek a glevas anezho o kaozeal met re bell oa evit klevet mat petra a lavarent. Sur e oa, e komzent brezhoneg rak klevet a rae Laenneg o lavaret : Mat, mat-tre ! Neuze hemañ a grogas gant e zaou zorn e diskoaz ar roue ; treiñ a reas e gein war-du ennañ hag e lakeas e skouarn da selaou e-giz ma ra ar medisiner pa vez war-dro ar re glañv. Selaou a rae a-zehou hag a-gleiz, ha gant kil e vizied e skoe war gein maen ar roue kozh. E c'hellit krediñ ne reas ket a drouz kleuz : tamperamant en devoa c'hoazh. Goude e lakeas e skouarn war e beultrin, e gostezioù. Ar roue en deveze taolioù paz bep-an-amzer ha Laenneg a lavare : " Mat ! N'eus netra, netra ! " Pa voe echu gant Laenneg e lavarjont adarre ur ger bennak an eil d'egile. Neuze Laenneg a saludas ar roue en ur lavarout : " Kenavo, aotrou roue ! .. Hag ez eas da azezañ war e gador. »

Pegen brav an darempred etre an amzer-gozh hag an amzer-vremañ, etre ar faltazi hag ar wirionez, neketa ! Ha pegen iskis gwelet penaos Laenneg lakaet er vojenn a zeu da goll ar perzh skiantel en doa, da lavaret eo ar stetoskop ma ne reer anv ebet anezhañ amañ.

*

Er bloavezh 1981 emaomp. Daou c'hant vloaz a zo aet e-biou abaoe m'eo bet ganet Laenneg ha kant vloaz ha tri ugent abaoe m'en deus dastumet e c'houiziegezh en e Levr Meur. Kemm bras a zo deut c'hoazh er medisinerzh abaoe. Gwellaet, ledanaet ha donaat eo bet an anaoudegezh eus ar c'hleñvedoù. Seul vui ez eer seul vui a gleñvedoù nevez a vez dizoloet evel just ha lod anezho a ra goap ouzh ar skiant e-pad pell. Ar c'hriagn-bev, na pa ve ken, a zo dianav-mat c'hoazh e meur a geñver. Ret esperout avat ne chomo ket er stad-se re hir amzer. Ha fiziañs a c'hellomp kaout. Da anaout ha dizoleiñ ar c'hleñvedoù ez eus bet

ijinet kant ha mil doare nevez abaoe Laenneg. Bremañ e c'heller kas binvioù-sellet e korf an den ken aes ha tra. Petra lavaran ! Ne vez ket ret o c'has zoken ! Eus an diavaez e c'heller dielfennañ an diabarzh gant ardivinkoù souezhus. Ha prestik emañ kemeret lec'h ar medisin gant ar benveg ma reer «ordinateur» anezhañ.

Da stourm ouzh ar c'hleñvedoù kant doare all, koulz louzoù, surjianerezh skinmedisinerezh, medisinerezh-dre-spilhoù, dre-heñvelgleñvederezh ha me oar me... Dont a ra ar vezegiezh, ofisiel ha nann-ofisiel, da astenn o buhez da galz ha da bellaat diouzhomp-ni an Ankou bep tro ma c'hell...

424

Siwazh ! Na dister e seblant ar stourm-se evit ar Vuhez bezañ e-keñver hini ar Marv dre ar bed... Nag a gleñvedoù nevez ijinet gant hor c'hevredigezhioù. Kleñvedoù diwanet diouzh hon doare-bevañ, o tagañ an den koulz en e spered hag en e gorf. Emaomp, evit gwir, o vont d'ar red war-zu ur stad enep-yec'hed.

Ha te Laenneg, deut da vezañ medisin gant ar Roue Gradlon, petra a zeu war da spered pa'z a da spes da vale war devinier Feunteun-Aod da heul hini ar Roue Kozh ? Daoust hag ez eus repu c'hoazh war aodoù Breizh evit ar c'hlañavour debret gant ar c'hleñved ?

LEVR-LENNADUREZH DIWAR-BENN LAENNEG

1) E brezhoneg :

e Feiz ha Breiz : 1865 niv. 5 ha 6 - 1868 niv. 187 - 1926 paj. 392 ha 423.
e Arvor niv. 126, bloavezh 1943, gant an Dr Rousseau.
E Imbourc'h 1978, niv. 104, gant Per Bourdelles.
E Al Liamm : Gwinizh hepken.

2) Buhezioù Laenneg e galleg :

Setu un nebeud anezho nemetken, rak kalz a zo bet skrivet diwar-benn Laenneg, koulz levrioù distag ha studiadennoù e levrioù medisinerezh pe enklask evel Société Archéologique du Finistère... :

- Laennec, ti Flammarion e 1932, gant an Dr Henri Duclos.
- Laennec, gant an Dr A. Roux.
- La vie ardente de Laennec, gant A. de Corbie, Editions SPES, 1950.
- Laennec, médecin breton, gant Roger Kervran, Hachette, 1955.

Degas a ran da soñj ivez ez eus bet graet ur film, da nebeutañ e galleg diwar-benn Laenneg : " Docteur Laennec ", gant Maurice Cloche, komzoù gant Jean-Bernard Luc ; Pierre Blanchard o c'hoari perzh Laenneg. Graet eo bet war-dro ar bloavezh 1949.

Laenneg ? Piv eo hennezh ?

I. - AN DEN HAG E ENEBOUR
Yaouankiz un emzivad.

Tost da zaou c'hant vloaz 'zo, e teuas Bro-C'hall da vezañ e-pad un hanter-kant vloaz bennak, ur wir Rouantelezh an Ankou. Kentañ ' voe, pennoù an Dispac'h bras a reas o mistri dre ar Spont hag an dibennerez, brezel a-ziabarzh ha brezel a-ziavaez. Napoleon a gasas ar brezel pelloc'h c'hoazh : betek kreistez Bro-Spagn diouzh un tu, betek Berlin ha Moskov en tu all. Goude ar brezelioù e teuas tro ar c'hleñved : a bep tu e tistroe an armeoù trec'h, o charreat war o lerc'h o c'hlañvourien taget gant an derzhienn-domm, an tifuz hag o re c'hloazet. Diwezhatoc'h c'hoazh, er c'hêrioù bras da gentañ, war ar maez goude, e voe tro an droug-skevent da lazhañ, hag ar c'holera ivez a reas e reuz.

E-keit-se un den, ur Breizhad, ur c'hristen, hep nag arc'hant na galloud na yec'hed dezhañ, a lakae e holl boan hag e zeskadurezh da stourm ouzh an Ankou. An doktor Laenneg a reer anezhañ. E skeudenn a zo bremañ e-tal lliz-veur Sant Kaourintin e Kemper. E Kemper e voe ganet. Bet eo unan eus brasañ medisined ar bed. War sichenn an delwenn e lenner kement-mañ (e galleg eo bet garanet, met ma vije bet goulennet e ali digant Laenneg, e vije bet e brezhoneg sur mat !). Treiñ a ran eta :

Da LAENNEG, Rene-Teofil-Hiasent, bet ganet e KEMPER an 8vet a viz C'hwevrer 1781, Kelenner e Skol-veur ar Medisinerezh e Pariz, hag e Skolaj Bro-C'hall, Ezel eus an Akademiezh Medisinerezh, eo bet lakaet ober ar savadur-mañ gant Breuriezh holl Vedisined Bro-Chall, gant Breizh, hag ar Vedisined gall hag estren.

426

Levrioù a zo bet savet diwar e benn, pennadoù e pep yezh (Loeiz Herrieu a ro un diverrañ eus e vuhez e " Tud brudet hon bro-ni ", me am eus embannet e " Imbourc'h " e 1978 (niv. 104) ur pennad diwar-benn Laenneg brezhonegour). Ur film a zo bet graet ivez. N'eo ket fall hemañ... nemet ne ro da anavezout nemet ar medisin : ar breizhad a zo lezet a-gostez...

" Vive le son du canon ! " (Son dañs a Vro-C'hall).

Eizh vloaz e oa Laenneg pa grogas an Dispac'h gal). Da gentañ, e voe kalz a Vretoned a-du gant ar « menozioù nevez » (Jord Kadoudal e-unan !). Met pa fellas da Vourc'hizien ar c'hêrioù kas ar re yaouank d'ar brezel, dibennañ ar veleien ha « rekizisioniñ » pep tra, pa zeuas ar soudarded fall-baeet da laerezh war ar maezioù, neuze ar baotred o doa fuzuilhò war ar « portez-arm », war vantell ar siminal, a grogas enno, evit difenn « ar person hag ar patô ». An oferenn a veze lidet en ur c'horn distro e koad pe laneg, ar gouerien armet ouzh gward, rak ma vije bet degouezhet warno an « Nasion » ne vije bet nemet an dibennerez evito.

E ti un eontr dezhañ e oa Laenneg, e Naoned. Marv e oa e vamm. E dad, e-karg dindan ar gouarnamant ne blede ket gant e emzivad, tri anezho. E blijadur a oa foraniñ e holl beadra d'ober predoù lipous, da brenañ dilhad kaer, d'ober sonerezh, da ginnig prezantoù d'an itronezed... E zaou baotrig a voe maget ha desavet e Naoned, e ti o eontr medisin. Ne oa ket pinvidik hemañ, a-drugarez Doue evit Teofil ! rak ma en dije bet ar paotrig arc'hant, e vije moarvat deuet da vezañ ken dibreder ha ken yen e galon hag hini e dad, rak eñ ivez a blije dezhañ dilhad mistr, an dañs hag ar fleüt. Daoust dezhañ bezañ un den

madelezhus, e eontr, dedennet gant ar « menozioù nevez » en doa kasoni ouzh ar veleien hag ar gouerien. E Naoned, e vezent fuzuilhet, ha beuzet a vagadoù, a lestradoù !

Laenneg, er skol, a oa speredekoc'h eget nep hini all. E-sell mont da vedisin evel e eontr, e labouras er c'hlañvdiou evel klañvdiour ; hag evel klañvdiour e voe galvet d'an arme evit mont gant paotred an Nasion da vrezeliñ ouzh kouerien Bro-Wened.

427

Kristen, paour, doktor, klañv... ha brezhonegour.

Da ugent vloaz, ez eas Laenneg da Bariz evit studiañ medisinerezh, peogwir e oa bet serret Skol-veur Naoned gant an Dispac'h. N'en doa ket peadra da baeañ ar wetur, ha setu e kerzhas war-droad, ur vazh en un dorn hag e fuzuilh ouzh e skoaz. Ur miz a lakeas d'ober e veaj. Ar gouarnamant nevez, ur jeneral en e benn, anvet Buonaparte, en doa adlakaet un tammig urzh er vro.

Buonaparte a reas ivez ar peoc'h gant ar Pab ; hag ar skrivagner breizhat Kastelbriant a savas ul levr hag a reas berzh, da veuliñ ar relijion gristen hag ar c'haerderioù krouet ganti. E Pariz, e reas Laenneg anaoudegezh gant un nebeud mignoned hag a oa kristenien, an doktor Bayle dreist ar re all, seizh vloaz koshoc'h egetañ. Da 22 vloaz, e-pad an oferenn, goude ar Bater, ur c'houlouenn en e zorn, e reas Laenneg dirak e vignoned ar bedenn-mañ d'en em ouestlañ d'ar Werc'hez : « Santez Mari, mamm da Zoue, ha Gwerc'hez, c'hwi eo a zibaban hiziv evit va Itron, va Fatronez ha va Advokadez. Prometiñ a ran ne lavarin biken, na biken ne rin, netra a-enep deoc'h. Plijet deoc'h va c'hemer evit ho servijour. Bezit em c'hichen em holl oberoù, ha n'am dilezit ket da eur ar marv. »

E Skol ar Medisinerezh, e voe buan anavezet pegen speredek e oa Laenneg. E bloaz e ouestl d'ar Werc'hez, e c'honzas daou briz uhel. Met peogwir n'en doa ket zoken arc'hant a-walc'h evit prenañ al levrioù a rae diouer dezhañ, gant petra en dije prenet dilhad dereat da vont dirak ar pennoù-bras da gemer e brizioù, ha mont goude da leinañ gant al loreidi all da di ar Ministr ?

Edo o labourat war an « dezenn » en devez pep danvez-medisin da « souten » evit kaout aotre da zougen an anv a Zoktor. Diwar-benn Hipokratez e oa e dezenn, medisin an Amzer Gozh. Hiziv c'hoazh, e ra pep medisin yaouank " Le Hipokratez " da zisklaeriañ e raio pep tra en e c'halloud evit difenn ar vuhez. Ha pa 'm eus gwelet e Pariz ar C'hlañvdi a zoug e anv, e oa bet unan bennak o livañ war ar voger, dindan boltred an doktor Laenneg : « Nann d'an diskar-bugale ! ». Eñ a zo bet ken feal d'e le da zifenn ar vuhez ha ma'z eo bet d'ar gouestl graet d'ar Werc'hez.

E-pad ar goañvezh-se eta, e studie start war e dezenn, hag eñ krog ar berr-alan ennañ, ha ret dezhañ evit kaout e alan chom dichupenn ha diroched e miz C'hwevrer dirak e daol-skrivañ, digor-frank ar prenestr warnañ daoust d'ar yenijenn. Ur gwall-c'hoañvezh ! Naon ha riv en deus gouzañvet. Ret e voe dezhañ gwerzhañ e vontr. Hag e-keit-se, e dad addimezet anvet e Sant-Brieg, a zispigne arc'hant e vugale hag hini e eil-wreg ; ha Napoleon a rae brezel ha brezel c'hoazh, o ledañ korfoù marv dre Europa a-bezh...

428

D'e eontr, medisin Naoned, eo e kinnigas Laenneg e dezenn : « D'am eontr madelezhus ha karet, va eil-dad, Gwilherm-Frañsez Laenneg ». E latin e oa ar skrid. Penn-da-benn e vuhez, e kelennas Laenneg e latin, hag e c'hellas evel-se ar vedisined estren en kompren ha dont d'ar skol gantañ.

Neuze ivez en em lakeas da addeskiñ brezhoneg - ankouaet e Naoned. Goulenn a reas levrioù digant e dad hag a skrive brezhoneg. Ha setu penaos e c'hallo Laenneg, un nebeud bloavezhioù diwezhatoc'h, ober kement a vad d'ar soudarded

vreizhat.

E vreur henañ lazhet gant an droug-skevent : pasion ar soudarded vreizhat.

1810 ! Emañ bremañ, goude kement a wad skuilhet war gen lies a dachenn-vrezel (e Breizh e reer « ar Bleiz-brezel » anezhañ), emañ bremañ Napoleon e-kreiz e c'hloar. E 1810 ivez, e teu c'hoar Laenneg, Mari-Anna, da zegas d'he breur ur c'heloù mantrus : o breur Mikael (Michaud) a zo marvet gant an droug-skevent. Lakaet en deus e ziwedhañ beradenn-vuhez da urzhiañ paperoù ha da baeañ dle e dad. Disoc'h al labour, en deus kofesaet, pardonet d'e dad, hag ez eo marvet.

An droug-skevent ! etre Laenneg hag e enebour emañ an emgann meur o kregiñ ! Ar c'hleñved eo a drec'ho da gantañ, hag a lazho an den, met an trec'h diwezhañ a vo gant Laenneg, rak a-drugarez d'al labourioù boulc'het gantañ, hag e penn an hent digoret gantañ, an Droug a vezo trec'het ! Hogen, nag a studi, a boan, hag a amzer a vezo ret !

Mari-Anna a gavas he breur o tougen « bourell ar reuz hag al labour » : klañv, dibourvez, heug gant Pariz, e sorc'henn gant distreiñ da Vreizh ; harpet koulskoude gant an doktor Bayle, rak gant studiañ an droug-skevent e oa ivez preder hemañ. Ma c'hellje da vihanañ an doktor yaouank ober baleadennoù war ar maez, an hirañ ar gwellañ : netra ne ra kement a vad dezhañ evel ar skuizhder en e zivhar hag an aer vat en e greiz. Siwazh ! hediñ straedoù eo a zo d'ober, ha kemer ar wetur evit gonit amzer ; mont war-dro ar re glañv en o ziez pe er c'hlañvdi. Ha paeañ ne reont ket ! Ar binvidien a gav o devez graet kaer d'ar medisin bihan treut ha taget gant ar berralan, pa o devez fiziet ennañ o yec'hed ken talvoudus ! Hag e ti ar paour, an doktor eo a lez, en ur vont er-maez, un tammig arc'hant war an daol.

429

Ha n'eo ket holl : droug-stomok en deus Laenneg : rak ar vedisined a zebr pa c'hellont, tamm bremañ, tamm goude... Peogwir eo paour ha klañvidik, penaos e teufe soñj da Laenneg dimeziñ ? Pell ac'hano, da ur bloaz ha tregont e ra e destamant.

Neuze e c'hoarvezas ar pezh a oa da c'hoarvezout : dre forzh kas ar brezel pelloc'h-pellañ, Napoleon, goude trec'hiñ ar re all, a voe trec'het d'e dro. E armeoù a voe diarbennet ha kaset war o c'hiz etrezek Pariz. Ar c'hlañvdioù eno a oa leun a soudarded tizhet hag a glañvourien taget gant an tifuz. Ar reuzeudikañ anezho a oa ar Vretoned : e Pariz, den d'o c'hompren, den da gomz outo... Laenneg a c'houlennas digant o ofisourien o bodañ a-gevret e Klañvdi ar Salpêtrière, e lec'h ma laboure-eñ, dezho da c'hellout da vihanañ komz an eil ouzh egile ; hag eñ, daoust d'ar bec'h-labour, a stagas adarre da beurzeskiñ ar brezhoneg. War dachenn ar medisinerezh, e kavas studierien da reiñ skoazell dezhañ : unnek a zanvez-medisined yaouank a varvas dindan ar bec'h.

Setu ar pezh a skriv Laenneg en ul lizher : « Lakaet em eus degas d'am sal ar Vretoned a oa e lec'h all. Kerkent hag em bez un herradig amzer, e pignan d'ar sal-se d'ober kaoz ganto, rak ezhom bras o deus da vezañ frealzet ! A bep korn a Vreizh ez eus tud ganin, ha renket em eus deskiñ pep rannyezh ».

Ne voe den d'e drugarekaat nemet eskob Kemper ; hag e respontas d'an eskob : « Ne c'hellen ket ober kalz tra evito. Ar glañvourien, faezh-divi, berniet er c'hlañvdioù : n'o doa na boued yac'h, na louzeier na lienaj, nag a-walc'h a vedisined, a surjianed, a glañvdiourien, d'ober war o zro. Hon Bretoned a oa da glemm dreist ar re all. Ar re anezho am eus gallet bodañ em sal ne oant ket ken reuzeudik : n'eus marvet nemet unan diwar c'hwec'h anezho, tra ma varve, eus ar soudarded c'hall, unan diwar dri... Ouzhpenn se, ne oa e Pariz beleg ebet o c'houzout brezhoneg. Un Avielour eus hoc'h eskopti a zo deut d'am skoazellañ, hag em eus gwelet pebezh vad a rae dezho o tont d'o gwelout : nerzh-kalon ha yec'hed a zeue d'am c'hlañvourien. Savet em boa ivez un tammig prezegenn a zevosion e brezhoneg ; hag ur beleg parizian a zo deut a-benn d'he distagañ

reizh a-walc'h evit bezañ komprenet : hag en deus roet Sakramant an Nouenn d'ar re a zo marvet, nemet unanig bennak ».

430

Kerlaouarneg, e Ploare.

Peurbaeet en doa dle e dad en ur werzhañ kement a zeue dezhañ a-berzh e vamm, nemet mereuri Kerlaouarneg e Ploare, tostik-tost da Zouarnenez. Evit distagañ diouzh buhez Pariz, e tivizas distreiñ d'e vro ha bezañ medisin war ar maez, ha kerzhout, ha lonkañ aer vat ha c'hwez ar bezhin.

Kerlaouarneg avat a oa e dirapar. Ha setu war ar marc'had e dad, d'an ampoent, en em luziet er politikerezh evel ur genaoueg, o koll e implij a sekretour-prefeti ! Bremañ e vo ret d'ar mab gonit buhez e dad ivez, hag hemañ o tispign buanoc'h eget ne c'hell e vab gonit ! Ret eta da Laenneg distreiñ da Bariz evit adsammañ « bourell ar reuz hag al labour » ha bevañ adarre a-hed an amzer e-touez re glañv ha tud war o zremenvan.

An droug-skevent o skeiñ adarre.

Unan eus ar c'hentañ mignoned a reas gweladenn dezho pa voe distro da Bariz, evel dres, an doktor Bayle, « e vreur henañ », an hini en doa en degaset d'ar Werc'hez hag en heñchet en e studioù war an droug-skevent. Hogen skoet e voe Laenneg o welout Bayle pebezh tres skuizh a oa warnañ.

« Perak, eme Laenneg, n'ez poa ket lavaret din e oas klañv ? » - « Ha perak em bije ? » eme v-Bayle. « Gouzout mat a rez ne c'hellomp netra a-enep an droug-skevent. N'omp ket zoken evit dizoleiñ abred a-walc'h pegoulz e vez krog. Ha pa gavomp anezhañ, n'hon devez louzoù ebet evit en pareañ... An aer yac'h, marteze ? Met an aer yac'h n'eo graet nag evit hon c'hlañvourien, nag evidomp-ni medisined Pariz ! »

En e wreg yaouank e fizias Bayle e sekred kriz ; ha nebeut amzer goude, e varvas.

War an dachenn-labour pleustret gant Bayle, war studi an droug-skevent, e labouro bremañ Laenneg. Ne oa ket evit kas diwar e spered ar c'hleñved-se lazhet gantañ e vreur hag e vignon, ha bemdez o lazhañ muioc'h-mui a dud.

431

II. - AN EMGANN

" Mors et vita duello conflixere mirando. "
(Etre ar Marv hag ar Vuhez e voe ur c'hrogad spontus.)

Evit galloud pareañ ur c'hleñved, e vez tri diviz ret :

1. - gouzout da gantañ natur ar c'hleñved, an ezel tizhet gantañ, ha pegen gwall-dizhet,
2. - kavout goude se an abeg : petra a vez kirieg d'ar c'hleñved,
3. - ha d'an trede, kavout al louzeier, ar remed.

N'en doa Laenneg esper ebet da gas an erv da benn. Re all, diwezhatoc'h, a gavo ar mikrob ; ha re all c'hoazh, war e lerc'h, a gavo al louzoù... Hogen gouzout, a-raok pep tra, penaos e tag an droug-se ar skevent ; an holl zoareoù anezhañ adalek ar c'hentañ betek an diwezhañ... Penaos ober avat ? Ne oa radio ebet evit gwelout en diabarzh.

Gant e genderv Meriadeg, mab medisin Naoned, ha gant ur paread medisined breizhat yaouank, e klaske Laenneg gouzout, en ur zigeriñ, en ur skejañ, pa veze

marv ur c'hlañvour, e gorf divuhez. Goude ar marv ! hogen a-barzh stourm ouzh ar c'hleñved, e-pad ar vuhez eo e vije bet ret gouzout !

Ar re glañv o-unan a ouie a-walc'h e oa dall deskadurezh ar vedisined, ne c'halle o louzeier ober vad ebet dezho... nemet o c'has d'ar vered. Hag alies e veze Laenneg degemeret fall gant ar glañvourien trenket o c'halon : « Petra a zeuit c'hwi d'ober amañ ?... skrapat arc'hant ? ». Skrapat arc'hant ! Ne rae ket sur mat ! eñ eo a leze en ur vont e-maez, un tamm eus e arc'hant gant an tiegezh ezhommek ; hag e goustiañs a vedisin kristen a oa gwasket gant ar remors : « Daoust hag emamp o c'hoari hag o farsal diwar-goust an dud kaezh, ni medisined ? - Seblant a reomp da louzaouiñ ar glañvourien, ha n'ouzomp ket zoken petra eo o c'hleñved ! »

432

Ne oa ken evit padout gant ar morc'hed. Dismantret e yec'hed gant aer flaerius Pariz, merzheriet gant an droug-penn, an droug en e vruched (ya ! droug en e vruched, hep soñjal e oa krog ennañ ivez ar c'hleñved en diskaro pa vo deut e dro !) e ra e ziviz kuitaat Pariz ha distreiñ da Vreizh evit mat... Ac'hanta, ne raio ket ! Lavaret e vije e oa un nerzh trec'h dezhañ ouzh e stagañ en desped dezhañ ouzh ar studi-enklask a oa ar blanedenn merket dezhañ er bed-mañ, e erv kriz, danvez e eost kaer. Ha ma n'eas ket da Vreizh, eo dre ma roed dezhañ d'an ampoent ar pezh a oa bet nac'het outañ betek-henn : bezañ Mestr-medisin e Klañvdi Necker... Ne gredas ket nac'h, hag ur wech boulc'het al labour, e savo mall ennañ, rak evit studiañ kleñvedoù ar skevent, amañ edo an dachenn.

Ya 'met ! c'hoazh ur wech, penaos ? Ar c'hof a c'heller palvata : blot eo, gallout a reer santout dindan ar bizied al lec'hioù kizidik, pe re galet, pe re wak. Met ar skevent hag ar galon, hag a zo evel en ur gaoued-eskern, penaos gouzout petra a c'hoarvez dezho ? Gant pegañ ar skouarn, e klever tra pe dra... Hogen petra ? ha klañvourien ar c'hlañvdioù a veze, d'ar mare-se, ken lous ! Hag an itronezed a skrije pa rae neuz ar medisn da begañ e skouarn ouzh o bruched ! Gant ar vezh !

A ! ma vije klevet fraezh, ma vije komprenet trouzioù ar skevent o tec'hwezhañ ha taolioù ar galon o skeiñ !

Setu penaos, hervez ar vrud (daoust ma ne vezer ket sur-tre) e kavas Laenneg an diskoulm : ar benveg en doa ezhom anezhañ. Un abardaez dibenn-hañv e oa anezhi. Deut e oa ar peoc'h. Laenneg e-unan a gemere en deiz-se e amzer da vont war droad a-hed ar straed. Dre borzh Palez al Louvre e tremenas, hag a oa leun c'hoazh gant dismantrou manet war-lerc'h an Dispac'h. Bugale a oa o c'hoari, ha plijadur vras dezho : ur c'hrennard a skrabe gant ur spilhenn penn un treust tev hag hir. En aer ne veze klevet netra, met er penn all d'an treust, gant pegañ ar skouarn, e klevet mat-tre. An trouz a zeue eta dre an treust ! Laenneg a chomas a-sav, hag a gemeras lod e c'hoari ar vugale. Fent d'ar re-mañ o welout an aotrou o c'hoari ganto !

Ur menoz a savas en e benn en un taol. Edo o vont war-dro ur plac'h yaouank klañv he c'halon ; met penaos gouzout peseurt kleñved ? hevelep kudenn bepred... Lartik e oa homañ : a-dreuz eskern ar c'hostezennoù hag al lart kuilh, ne veze klevet netra !... Daoust avat ?...

Hastañ a rae Laenneg bremañ. Kerkent hag aet en ti, e c'hoanteas c'hoazh klevout gant e skouarn. Netra, netra ! Ur c'haier a c'houlennas neuze (ur c'haierad paper-lizher a voe roet dezhañ eme darn 'zo). Rollañ start, a reas ar c'haier, lakaat ur penn war vruched ar glañvourez, ha lakaat e skouarn-eñ er penn all. Bremañ e kleve ! klevout a rae mat-fraezh daou-daol ar galon ! Graet e oa ar gammed kentañ... Kavet e oa ar benveg. Evit gwir, un hanter-kant vloaz kent, un medisn aostriat en doa ijinet kemend-all. Met ne oa ket aet pelloc'h gant e venveg. Laenneg avat, en ur ober daou vloaz, a oa o vont da notañ holl drouzoù bruched an den, ha da zisklaeriañ petra a verke pep hini anezho.

433

Ur gwall-labour war ar stern evitañ ! Daou vloavezh spontus e voe an daou

vloavezh-se, gwashaet c'hoazh gant ar c'hleñvedoù a groge ennañ a bep eil : ur reuziad kriz a urloù e miz Meurzh ; droug-penn, skuizhder, mezevelladennoù e miz Ebrel ; ret dezhañ kousket e-pad daouzek eurvezh pep noz evit kaout nerzh da labourat a lazh-korf war an deiz...

Gant e zeskarded, er c'hlañvdi, e tremene ar gorzenn war vruched pep klañvour, hag e save dre skrid ar roll eus kement trouz a gleve. An daou viz kentañ dreist-holl a voe daou viziad spontus, peadra da ziskar un den... Goude se, e Sal ar C'helc'hva, kel lies klañvour a varve a veze skejet e gorf. Ha pep gwech e veze anat en doa Laenneg, netra nemet klevout an trouz, divinet reizh, a-raok gwelout, stad ar skevent.

A ! ma n'en dije bet labouret nemet evitañ e-unan, e vije bet aet da Vreizh. Met, evel ur c'hristen ma oa, e laboure evit an holl dud, ar re a vremañ, ha dreist-holl, peogwir ne oa ket evit muioc'h, evit re an amzer da zont... Desket en doa zoken turgnañ koad, hag eñ e-unan a rae ar gorzenn-goad a implije bremañ e-lec'h ar c'haier. « Stetoskop » a reas eus ar gorzenn-se. Ha dre ma oa krog medisined vras Pariz, hep gouzout c'hoazh netra resis, d'ober goap outañ e kavas c'hoazh amzer, e seizh miz, da sevel ul levr evit displegañ e gavadennoù. " De l'auscultation médiate " (Selaouennerezh dre venveg) ; ha da dresañ an holl dresadurioù : ar benveg, ar stummoù gwellañ da reiñ dezhañ evit selaou ar pezh a venned klevout ; stadoù ar skevent klañv, gant ar c'hevioù e lec'h pe lec'h anezhi... E burev va medisin ez eus ur stetoskop war ar siminal, e stumm un drompilh. « Unan da selaou kalon ar bugel e korf e vamm, » eme va medisin.

Perak 'ta e oa deut Laenneg a-benn d'ober gant ar stetoskop ar pezh n'en doa ket gallet ar medisin aostriat ober ? Da gentañ dre ma oa lemm-tre e skouarn. Ur muziker mat e oa. A-walc'h e oa dezhañ, da skouer, klevout komzoù ar c'hanaouennoù brezhonek n'en doa ket klevet abaoe ma oa bugel, hag e teue raktal an ton gantañ war e fleüt.

434

D'an eil, dre ma oa ken lemm all e spered. Pa vo lavaret ar wirionez, re a fiziañs moarvat en doa lakaet Laenneg en e stetoskop : ne oa ket gouest ar re all d'ober gantañ ar pezh a rae-eñ. N'eo ket a-walc'h, eme ar re gozh, kaout ur benveg mat, ret e vez d'ar benveg-se bezañ « troadet » mat !

Kerlouarneg.

Daou zevezh goude bezañ skrivet an diwezhañ ger eus e levr, e skarzhas Laenneg eus Pariz, hag eñ divi, e genderv Meriadeg (mab medisin Naoned) ouzh e heul. Ne felle ket dezhañ chom er gêr vras un devezh ouzhpenn...

... Teir gwech on bet e pelerinaj e Kerlouarneg. Dre « Straed Kerlouarneg » e kuitaer bourc'h Ploare, a-hed ur vali gaer, gwez a bep tu dezhi. En ur c'hroaz-hent, e kaver ur chapel, hag e talc'her bepred gant ar vali. Dre ur gloued, e tegouezher en ur c'hoad bihan, plantet gwechall gant Laenneg war lanneg Kerherroù. Izeloc'h, e kaver an ti, merouri ha maner, penn-ouzh-penn. Laenneg ivez en deus savet an dourell, hag a vasone gant ar vasonerien. Kement e laboure gant e zaouarn ha ma rae gant e spered. Gwellaat an douaroù (pajennoù kentelioù e brezhoneg a skrive evit deskiñ d'ar merour penaos lakaat gwellaenn en douaroù). E Loktudi, e tidouras geunioù. Liorzhour ha kalvez e oa ivez, ken ampart an eil hag egile.

Pep beure, ez ae d'an oferenn da iliz Ploare e penn ar vali hir. Tremenet em eus dre ar porched ma tremene-eñ, doujet em eus dirak kaerded an iliz, kemeret dour benniget er piñsin eveltañ, pedet dirak an aoter gaer, evel ma rae. Ha gwelet e levraoueg Kemper an « Heurioù brezonec ha latin » ken uzet ar c'hein anezhañ gant e zaouarn ma 'z eo bet hanter-zisverket an titl.

Goude an oferenn, e tiskenne betek Douarnenez evit dibunañ brezhoneg gant ar voraerien ; hag ez ae da welout an dud en o ziez, dreist-holl ar beorien

glañv, hag e leze ur skoed war an daol en ur vont er-maez ; rak eürus e veze o komz ouzh ar vugale, an danvez-priedoù, hag holl dud e vro, ar re vras hag ar re vihan.

A-wechoù avat, e tiplipe eus Ploare : mont a rae, war droad bepred, da welout kerent ha mignoned dre Vreizh a-bezh : Karaez, Gwengamp, Lannuon ha pelloc'h. Kavet en doa yec'hed d'e gorf, peoc'h d'e spered. Tri bloaz e vevas evel-se, ma 'm eus kontet mat...

435

Darn a-du ha darn a-enep.

Peogwir ne oa nemet daou-ugent vloaz, ha ret dezhañ gonit e vuhez, e plegas da zistreiñ da Bariz. Ret e oa dezhañ dreist-holl respont d'ar gwall-deodadoù a zibune enep dezhañ doktored uhel ar gêr Veur. Siwazh ! an hini a oa an trenkañ e warizi a oa ur Breizhad, eus Sant-Malo : an doktor Broussais. Laenneg a chomas sioul e-pad pell-amzer, dre ma oa egile breizhat eveltañ. Un deiz avat, ez eas dirazañ da damall dezhañ tal-ouzh-tal e sotonioù hag e zroukkomzoù.

Ur Breizhad all, ar skrivagner brudet Kastelbriant (eus Sant-Malo evel Broussais) a voe an hini a skrivas diwar-benn Laenneg ar pennad speredekañ ha furañ, daoust ma ne oa ket Kastelbriant medisin : « Gant ur gorzenn, harpet ur penn anezhi ouzh lec'h pe lec'h war ziavaez ar c'horf, hor c'henvroad desket-bras, ar breizhad Laenneg, a zo deut a-benn da anaout, netra nemet klevout trouz an alan, natur kleñved ar galon hag ar bruched. Ar gavadenn-se a zo unan gaer ha talvoudus, gouest da zigeriñ un amzer nevez en Istor ar Medisinerezh ».

Komprenet o doa ar Saozon hag an Alamaned kement-se, hag e teuent d'ar skol gantañ... Studierien Pariz avat a weler er film, bountet pennadoù enno gant o c'helennerien, o c'hoari ur pezh-farsus evit ober goap outañ : " Ar Fleüt achantet ". Ar c'hlañavour, er pezh, a zo azezet war ur gador. Ar « medisin » a c'hoari ar fleüt ; ha setu ar c'hlañavour pareet ! Gant ar gavadenn nevez, n'eus netra ken d'ober !

Hag e weler, er film bepred, unan eus ar c'hoarierien yaouank, degouezhet keloù gantañ ez eo klañv danvez e bried : « An droug-skevent, » eme ar vedisined parizian. Hag e teu ar paour-kaezh paotr, nec'het-bras, da c'houlenn digant Laenneg dont da selaouennañ ar glañvourezh. - Mont a ra - « Nann, eme Laenneg ; n'eo ket droug-skevent : ur gor eo, ha gant flañchañ, e c'heller he saveteiñ. - Flañchañ ! emac'h vont d'he lazhañ ! » eme ar re-all. Ha Laenneg oc'h oberiata, evel ma raed en amzer-se, hep na lakaat da gousket na digizidikaat. Ha gantañ emañ ar wirionez : an diskargadur a flistr : lin-brein eo, ur gor eta ! Salvet eo ar plac'h yaouank... Ya, gant Laenneg emañ ar wirionez, ha rentet en deus ar vad evit an droug.

Ijinet eo bet an istor-mañ gant oberour ar film, d'am menoz. Ar pezh avat n'eo ket diwar faltazi, eo gwarizi medisined vras Pariz, ha gouiziegezh hag ampartiz Laenneg, hag e vadelezh.

436

Ur barr-heol.

Adkrogomp avat gant ar gwirvoud evel ma oa. Daoust d'ar warizi ha d'ar flemmadennoù, e eostas evelkent Laenneg e-pad ur mare e lod a enorioù hag a eürusted. Anvet e voe da vedisin d'an Dukez de Berry, merc'h-kaer d'ar roue. Yac'h-pesk e oa homañ, met plijout a rae dezhi degemer Laenneg en he falez hag ober kaoz gantañ.

Anvet e voe da gelenner e Skolaj Bro-C'hall, da ezel eus an Akademiezh Medisinerezh ; roet dezhañ ar Groaz a Enor. Brudet eo bremañ evel gwellañ medisin a zo e Pariz.

Ur geniterv pell dezhañ, hag hi intañvez, a zeu da zerc'hel e di. Ha setu

Laenneg o timeziñ ! N'eo ket dre m'en doa amzer d'ober al lez, met ar gwall-deodoù a gave da abegiñ dre ma oa ur vaouez en e di, ken e teuas Laenneg da soñjal e oa dleet dezhañ dimeziñ dezhi evit mirout dezhi hec'h enor... Er film, ez eo-hi kaer ha koant. Evit gwir, ne oa ket ! Bras hag hir e oa he fri, hag e-leizh a vutun a lakae ennañ. Kalon vat he devoa avat, ken e lavare an dud e oa he dremm un dremm gwaz, hag he c'halon ur galon maouez.

Bet o deus esperañs da gaout ur bugel, hag e tride kalon Laenneg... Met e wreg o vezañ kouezhet klañv, e kolljont an esperañs-se. Hag e voe evitañ evel pa en dije kollet e yaouankiz evit an eil gwech.

Kleñved ha tremenvan.

En deiz kentañ a Ebrel 1826, e teuas da Laenneg terzhienn, paz, poan en e vruched hag en e gein. E vignoned ne gredent ket e oa an droug-skevent e oa... Er film, ez a neuze, dianav, da c'houlenn e ali digant ur medisin diwar ar maez unan hag a implij ar stetoskop, ha peogwir n'anavez ket Laenneg, ne vezo ket dallet gant ar vignoniezh. « Droug-skevent, hag a washaio gorrek, hag aesaat marevezh ha marevezh. » Setu ar pezh a gav ar medisin-mañ.

Neuze e kimiadas Laenneg ouzh ar briñsez, hag e kuitaas Pariz gant e wreg hag e geginerez evit mont da Gerlouarneg. Ar veaj, er goañv, dindan ar glav hag an avel, a voe ur gwir galvar : ar c'hleñved, ar red-korf, ur gwall-zarvoud, ar gwall-amzer. Laenneg avat, c'hoarvezet a c'hoarvezo, a lavare a vouezh uhel ar chapelled, zoken en douvez dindan ar wetur eilpennet !

437

E Kerlouarneg, dirak e verourien, bec'h dezho o waskañ war o daeroù, e reas daoust da skuizhder ar veaj, tro al liorzhañ hag ar berje a-raok mont d'e wele ; eürus... rak bremañ pa vo galvet gant Doue, e tiskuiuzho e gorf paour en douar Breizh... Marteze avat, e c'hellho c'hoazh ur wech ar mor, al lanneier, ar pinennou en parañ evel m'o doa graet diagent ?... Pe daoust hag en deus, da 45 bloaz, sachet re holl war e nerzh ?

Antronoz e santas e oa erru e pal e vuhez. « Va mignoned medisined, emezañ, ne gavont netra. Me, avat, ma c'helljen lakaat ar gorzenn-goad warnon va-unan, me oar petra a glevfen ! » Hag e reas, war e wele, ur poltred anezhañ e-unan, liv ar marv en e gerc'henn.

Pa ne veze ket re zinerzh, e veze pourmenet, rollet en ur pallenn, war ur weturig, betek traezhenn ar Ri. Eno e selle, e selle pell-pell amzer, ouzh ar mor. Pa ne voe ken evit diskenn betek an aod, e veze kaset betek Chapelig Lanngroaz. Diwezhatoc'h, n'ae ken nemet d'ar c'hoad bihan plantet el laneg, hag ar verouri ma oa ar vasonerien o labourat warni.

Kofes a reas, e latin ; ha diwar neuze, e chomas war e wele, a-drek unan eus prenestroù ar solieradur kentañ. En deizioù diwezhañ e chome war e c'hwen, e zaoulagad d'al laez, ha ne ouied ket hag eñ oa e anaoudegezh gantañ. D'ar sul d'abardaez, e seblantas dihuniñ, e lemas e walenn-eured diwar e viz, he lakeas war an daol-noz, hag e lavaras : « Ne felle ket din lezel gant unan all ar rann-galon da lemel anezhi din, » hag e varvas.

An daou zen a zeuas da zisklaeriañ er maerdi e oa aet da Anaon unan eus brasañ medisined ar bed, ne ouient ket sinañ o anv... Douget e voe e gorf gant tud, betek an iliz ha betek ar vered : ne oa ket ponner. E dad ne gemeras ket ar boan da zont eus Sant-Brieg d'e interamant.

Ar re o deus studiet buhez Laenneg a zo bet souezhet o welout an den-se, ken skoet ha gwallet, a-ziavaez yenijenn-galon e dad, gant ar baourentez e-pad pell amzer, gant ar warizi ; hag en e gorf gant ar c'hleñvedoù hag ar reuz-labour, ha miret gantañ daoust da bep tra ar peoc'h en e ene hag en e galon. O fiziet en doa er Werc'hez : « Va c'hemerit evit ho servijour ; bezit em c'hichen

em holl oberoù, ha n'am dilezit ket da eur ar marv. Amen ». N'eo ket « dre va fait » ma echuan e vuhez evel ur sarmon ! Evel-se e voe, ha n'eus netra da gompren e Laenneg a-hend-all !

438

Kalz a glañvdioù a zoug gant lorc'h anv Laenneg : hini Kemper, unan e Pariz. Un delwenn anezhañ a zo e skeud Iliz-veur Kemper ; ha muioc'h-mui eo bet roet e anv da straedoù ha plasennoù en hor bro : e Ploare evel just, e Sant-Brieg, ha nevez 'zo e Gwareg, e Bear... hag all.

Ar bann-esperañs en deus lakaet da barañ n'eo biskoazh bet mouget. O ! hiziv c'hoazh e sav enebiezh outañ : e Kemper eo bet torret lod eus an delwenn. Perak 'ta ? Napoleon a lazhe hag a zo mil-meulet er skolioù hag a-ziavaez d'ar skol ; Laenneg a roas e vuhez evit saveteiñ buhez ar re all. Da bep unan da zibab e Dud-Veur hervez e vennad.

Goude Laenneg eo deut Pasteur ha Koch, kaverien ar mikrob ; ha goude se eo bet kavet ar radio : ha goude se c'hoazh eo bet kavet ar rimifon hag al louzeier all, ha peurzistroadet an droug-skevent. Ar re-se o deus pleustret an hent digoret gant Laenneg : hent Trec'h ar Vuhez war ar Marv.

Bep daou viz lennit

Al Lanv

kelaouenn sokialour breizhek

liesdoare : politikerezh etrevroadel, stourmadoù ar vro, sevenadur, bandennoù treset...

Koumanant bloaz : 30 lur - Skoazell : ad. 50 lur

da :

AL LANV, 7, st. ar Rektor Paul Henry, 35000 ROAZHON

Laenneg brezhoneger

« Nebeut a dud, a skrivas Ar Gonideg, a oar e implije an Dr Laenneg, ken brudet, ar pennadoù-amzer vak a chome gantañ goude e labourioù medisinerezh, da studiañ yezh ha lennegezh Vreizh. Degemeret en doa gant plijadur va doareskrivañ nevez filozofek (!) ha gras a gaven en hon eskemm lizheroù. E levraoueg Kemper ez eus ur skouerenn eus kentañ embannadur va yezhadur, staget en doa ur follenn baper gwenn ouzh pep pajenn, evit notenniñ e evezhiadennoù, ha kas a rae kelou din diouto. »

Aet eo un tammig pell Ar Gonideg gant e veuleudioù, met diwezhatoc'h e skribo e-kerz ul lizher kaset da Laouenan an 9 a viz Gwengolo 1828 : « Laennec a légué à la bibliothèque de Quimper tous les ouvrages et manuscrits bretons, gallois, etc. Dans ce nombre se trouve un exemplaire de ma grammaire qu'il avait accompagné de notes critiques des plus judicieuses. »

Klasket eo bet war-lerc'h ar yezhadur-se gant Gaston Esnault a-raok dezhañ embann e studiadenn " Laennec bretonnant " e miz Gouere 1919. N'eo ket bet kavet gantañ e levraoueg Kemper, setu perak e c'houlenne : « L'exemplaire dont parle Le Gonidec a-t-il existé ? Est-il conservé quelque part ? »

N'eo ket aet da get al levr ken prizius-se, chomet ma oa etre daouarn warlerc'hidi Guillaume Laennec. Un tregont vloaz 'zo bennak e kejas an hini en doa miret anezhañ, gant unan eus e gamaladed skolaj deuet da vezañ medisin. Da hemañ ' voe roet al levr o vezañ m'en doa imbourc'het war vuhez Laenneg ha studiet ar brezhoneg war ar marc'had. Tu ez eus bet da welout al levr dibar-se e meur a ziskouezadeg e-doug ar bloavezhioù tremenet. Notennoù war follennoù distag ne gaver ket ennañ, nemet evezhiadennoù skrivet gant dom Laenneg war riblenn pe war draoñ pajennoù 'zo. Bodet oa gant ar yezhadur-se notennoù labour a vefe diaes lakaat deziad warno, met talvoudus ' vefe o studiañ pizh koulskoude.

René, Théophile, Hyacinthe Laenneg, brud warnañ da vezañ savet medisinerezh skiantel hon amzer, a zo bet ganet d'ar 17 a viz C'hwevrer 1781 e Kemper, en ur familh a renk uhel. Maer Kemper etre 1764 ha 1766 ha kannad da Vreujoù Breizh eo bet e dad-kozh Michel, ginidik a Zouarnenez. E dri vab dezhañ a oa anezho : Théophile Marie Laennec d'Angeville, letanant en Amiraliezh - Guillaume François Laennec de la Renardais, doktor war ar medisinerezh e skolveur Montpellier - Michel Jean Alexandre Laennec de Penticorre, beleg, doktor ar Sorbonne. Ouzhpenn an titloù-se e oa dezho o-zri deskadurezh vrezhonek a-zoare, a oa bet peuret ganto e-barzh oberennoù an Tad Gregor a Rostrenen : Ar geriadur (1732) hag ar yezhadur (1738) embannet dre urzh « Nosseigneurs les Etats de Bretagne »,

Un nebeut gwerzennoù, tennet eus ul levrig " Hommage d'un père de famille ", embannet e Brest e 1804, a c'hell reiñ deomp da c'houzout pegen barrek war ar brezhoneg e oa Théophile Marie, tad hor medisin brudet :

Va mouesiou war ar c'honsulad hed-buez
- Het-Buez hon renit : buez, buez d'eoc'h
Roed ho peus d'eomp ann trec'h hag ar peoc'h

War zavidigez Bonaparte d'ann impalaerded
- Mouez hor goulennou zo klevet gand Doue ;

Kouezed eo an dud kriz, ar re ziboell tec'het
Stardomp a ren eunn tad ann ere c'houek meurbet,
Ere torret siouaz ! Gand eunn alfo goue.
Meulomp Napoleon ! ar frankiz a zistro :
D'he genvroiz e kemenn eur c'henvro

War zigwez ann impalaerded da wenn Bonaparte
- Ar gurunenn roed a greiz hor c'halonou,
Ra bado gand ho kwen het-ahed ar bloasiou.

Breutaat a rafed an oberenn-se diwar he danvez, diwar an doare ma 'z eo displeget ne rafed nemet meuleudiou. Tu a oa bet d'ar skrivagner klokaat e zeskadurezh keltiek en ur lenn ul levr nevez deuet er-maez : " Nouvelles Recherches sur la langue, l'origine et les antiquités des Bretons, par La Tour d'Auvergne-Corret, capitaine au 88° régiment d'infanterie - Bayonne - Fauvet - 1792 », adembannet e 1795 e Pariz. Théophile Malo Corret, bet ganet e Karaez d'an 23 a viz Kerzu 1743, ha Théophile Marie Laennec bet ganet e 1747 o doa an hevelep anv-badez dre ma oa dezho o-daou an hevelep tad paeron : « Maître Théophile Mathurin Huchet, sieur de Dangeville, conseiller-avocat du Roi au siège présidial de Quimper ».

441

E-keit-se e oa René, e vab, o paouez mont da vedisin. E dezenn en doa kinniget d'an 11 a viz Mezheven (22 Prairial). Degemer a reas fall-tre kudoù e dad d'ur galloud a oa, evel ma skrive an 11 a viz Gouere, breutaet a bep tu gant an holl.

D'ar mare-se setu pell mat dija ne oa ket mui ar c'hemperad ma oa, e darempred gant yezh e hendadoù bet klevet ha komzet gantañ en e vugaleaj. Goude bezañ kollet e vamm d'an oad a c'hwec'h vloaz e oa bet fiziet da gentañ en e eontr Michel, person Elien, ha bloaz goude en e eontr all Guillaume, medisin en Naoned. Chomet eo eno etre 1788 ha 1801 a-raok mont da Bariz da gas a-benn e studioù war ar medisinerezh. Du-hont ec'h adkave gant plijadur e genvroiz, e-giz 'vez graet a-viskoazh gant an holl Vretoned en harlu. N'eo ket souezh eta ma kavas dudi gant ar studioù keltiek, dedennet ma oa an dud ganto e penn kentañ ar bloavezh 1805, dreist-holl gant labourioù Bullet, Le Brigant, La Tour d'Auvergne, Cambry, Eloi Johanneau. Bodañ ar geltiegourion en ur gevredigezh-studi a voe menoz an daou ziwezhañ-mañ. Pledañ a rejont gant goulenn an aotreoù. Ne oant ket hep gouzout an dudiañ m' oa Napoleon e-unan war istor ar Gelted nag ar bourrañ m' oa war varzhonegoù Ossian. Ar gentañ bodadeg foran a voe bet dalc'het ganto d'an 22 a viz C'hwevrer. Brudañ a reas ar " Gazette de France " an darvoud un nebeut devezhioù war-lerc'h. Ha setu ma c'houlenn Laennec digant e dad, kement levr brezhoneg a c'hellfe kas : geriadurioù, yezhadurioù, bibloù, barzhonegoù liesseurt embannet pe dornskrivet hep ankounac'haat dreist-holl ar c'hanaouennoù a vefe tu dezhañ diskoachañ. Kantikoù, geriadur galleg-brezhoneg ha yezhadur an Tad Gregor a Rostrenen a gasas an tad d'e vab d'an 8 a viz Eost. Stagañ a reas hemañ da zeskiñ gant harp an nebeut levrioù dister-se.

442

Frouezh a roas diouzhtu e labour. Setu e gentañ lizher d'ar 27 a viz Eost 1805 :

« Va zad qer, recevet am eus ar pacq eus ar vouezyegez brezounecq pehini c'houi oc'h eus caçzet din me. En a zo erruet e gentell. Ar vacquançzou eus an academia a Lousaourez a rento din eun nebeud amser evit disqui al Langaich-ze vamm pehini en me am eus esprimet ar re guentan caranteziou hac ar re guentan prederyou eus va vugaleaich. Ar Veaich bihan pehini me a ya ober en zy an itrounezed Laubrière ha Pompery a c'hallow, marteze, difraea va inraucq. Me aznevez yve daou scolyerien eus al Lousaouerez pere a c'houvez ar vrezounecq, ha c'hand pere ve a c'hallow prezecq, pa ve a vezo un nebeud creoc'h en Langaich-ze... »

E galleg eo peurrest al lizher hir-se.

Miz Gwengolo 1805./ E vakañsoù emañ Laenneg e ti kerentiezh dezhañ e-kichen Soissons. Fest a zo un devezh, hag ijinañ a ra un diduelli e-lec'h e ya lod d'ober o gourc'hemenoù. E brezhoneg e ya unan anezho, " le Père Boniface " .

Ur pautr oun sqyantus meurbed pehiny
Peur-redet am eus an holl douarou.
Compset am eus, hep mar, da meur a hiny,
Ha me a gouvez an holl langaichou.

E lavar anezy gand guiryonez,
Va Loysa, en oll an yezou,
Ur hano c'huecquoc'h n'em eus aznevet
Egued hoz hiny da hor c'halonnou.

D'ar 15 a viz Genver 1806 :

Mon cher papa,
Ur bloavez mad a reqedtan deoc'h, da va mamm qer, ha da va c'hoar, digant Doue.
E galleg eo peurrest al lizher.

D'an 10 a viz Meurzh 1806./ Tennet eus ul lizher ennañ war-dro 50 linennad :

« Va zad qer,
Recevet am eus ho lizer eus an naonteg guenver pehiny casset hoc'h eus digant an autrou D. (...) scrivit din er brezoneg, ne allan get c'hoaz scriva vad ha vuan, hogen lenn a ran gant aezony al levriou bere gasset hoc'h eus din, hag al lizer-ma am eus scrivet hoges hep dictioner.

443

Ne c'hall guet disqui ar vrezoneg nemed en ur lenn : rag n'am eus get an amzer da ober ur study reizus eus an yez-se. (...)
Roit ur pocq evidon-me da va c'hoar bihan pehiny dle veza vremen brassoc'h ma he breur ; me hoc'h pocq, va zad qer. »

D'an 31 a viz Kerzu 1806./ Tennet eus ul lizher ennañ war-dro 20 linennad :

« Va zad qer,
Recevet am eus ho lizerou hag ho clugiri. (...) Gand levnez bras a zesqan penaus abarz-nemeur distrei a reot e Quemper. (...)
Voilà assez de breton pour une fois, car je ne pense pas vite dans cette langue et j'ai été plus d'une demi-heure à faire ce que je viens d'écrire. (...)
Ur bloavez nevez a dezrou, digant Doue a reqedtan he ve mad hag eurus evit va zad qer
ho map caret. »

D'an 18 a viz Eost 1807 :

« Va zad qer
An autrou Van-Des-Stein pehiny a zougo deoc'h al lizeric-ma mont a ra da Vrest evit guelet ar guer-hont ha listri-brezel, tra pehiny n'en deus biscoaz guelet. An autrou-ze studya a ra er guir, eus ar vro flamancq eo, ha mar er vro-hont, an oll hevel ynt dezan, tud ynt mad, gouizyecq, ha sevenn meurbed. Grit d'ezan, me ho ped, un diguemer mad, ha mar hoc'h eus ur mignon bennac e Vrest, roit dezan lizerou erbed.
ho briatat a ran va zad qer
ho map. »

D'ar 15 a viz Genver 1808./ E galleg emañ ar penn kentañ :

« Chetu ar c'henta deiz eus ar bloaz zo tremenet, ha n'em eus get c'hoas casset deoc'h va c'hoanchou evit ar bloaz man ; ar pezh oll eo mad ha gounidecq deoc'h pe evit an en, pe evit an amser, a reqedtan d'hoc'h, ha da va mam quer digant Doue. »

E galleg emañ ar peurrest betek ar fin.

444

Mut e chom da c'houde e-pad pell amzer. Ne gaver meneg ebet diwar e studioù war ar brezhoneg etre ar 15 a viz Genver 1808 hag ar 15 a viz Ebrel 1814, nag e lizheroù nag e vuhez. Youl vras a oa dezhañ koulskoude da vont gant studi e yezh, ha deuet e oa a-benn da c'hoari ganti mat a-walc'h. Daou dra a zispleg perak en deus dilezet ar brezhoneg e-pad ur mare : ezhommoù e ostizien o niver war gresk - « Je suis en ce moment encombré, c'est-à-dire enseveli sous les décombres d'une multitude de malades, je vis au milieu des morts et des mourants », a skrivas e-kerz nevez-hañv ar bloavezh 1812 - ha diemglevioù poanuis en e familh a-hend-all. Lipet eo bet e strapenn gant an tad Laenneg, hag hini e wreg war ar marc'had. Madoù houmañ a oa perc'henn warno e vugale, met evel just en doa nac'het an tad daskoriñ kontoù ar wardoniezh. Ret dezho sevel prosez dirak al lez-varn, ha dav d'an tad koufon treuzvarc'hata e miz Here 1809 : anzavout a ra e zleoù d'e vugale, hag ober a ra dilez eus e vadoù a-bezh dezho. Degouezhet a ra mat kement-se da Dheophile - rak kalz a-raok, ne vefe ket bet posupl dezhañ - e teu da vezañ da vat perc'henn Kerlouarneg, domani e familh e Ploare. Diwar neuze e laka ennañ e holl aked hag e holl spi.

Abalamour d'e labour brevus ha d'e zoanioù personel n'eus ket bet amzer vak d'ar breizhad harluet da bleustriñ war yezh e dadoù. Darvoudoù a-ziavaez a lak anezhañ d'ar brezhoneg en-dro, en un doare dic'hortoz ha fromus.

1814... Aloubet eo Bro-C'hall gant an armeoù kevredet ha gwastet gant an tifuz. Tec'hout a ra ar pennoù bras ; kas a ra Laenneg ar pep pouezusañ eus e vadoù, e zornskridoù dreist-holl, da Naoned. Klañv pe gloazet e tistro da Bariz ar soudarded a-viliadoù : n'eus ket trawalc'h eus ospitalioù an arme ha leun-chouk eo an ospitalioù all. Soudarded yaouank eus Breizh e-leizh e tizolo ar medisin emrous e-lec'h m'emañ gant e labour, er Salpêtrière, gwalleürusoc'h evit ar re all dre ma 'z int o-unan gant o yezh ha gwallenkrezet gant an droug-hirnez. Displegañ a ra penaos en deus sikouret e genvroiz en o reuzeudigezh du, en ul lizher d'e genderv Christophe d'ar 15 a viz Ebrel.

Lavarout a ra penaos e oa lazhus e servij. Pell-tre 'mañ an ospital, hag ur wech graet e weladennoù n'en deus ket graet an hanter eus ar pezh en doa d'ober. En ospital damaozet eo ret dezhañ mont eus un tu d'egile evit lakaat da gas en e sal ar Vreizhizeliz a oa er salioù all. Ret eo dezhañ neuze chom da varvailhat gant ar glañvourien reuzeudik. Dizoloet en deus e oa an divizoù-se ar gwellañ remed evit ar Vretoned harluet. Evit gallout kaozeal ganto, int tud eus pep korn a Vreizh-Izel, en deus adkroget gant e studioù war ar c'heltieg, ha lavarout a ra e teu a-benn da gomz bravik. Prest eo da reiñ ur brouenn eus se en ur skrivañ « e rannyezh Leon » d'e eontr.

445

E miz Mezheven e ya kuit ar soudarded diwezhañ eus an ospital. Harpañ a ra Laenneg gant e vicher hep dezhañ bezañ trugarekaet tamm ebet gant ar melestradur daoust d'e galonegezh, d'e striv ha d'e labour en doa kaset evit ur bennozh Doue. Mgr Dombideau de Crouseilhes, eskob Kemper, eo an hini nemetañ en deus soñjet e drugarekaat evit bezañ miret da vervel kement a soudarded eus Penn ar Bed. Graet en deus Laenneg ur respont dezhañ an 2 a viz Mezheven 1814.

E drugarekaat a ra evit ar vadelezh en deus diskouezet en e geñver, evit ar sikour roet gantañ d'ar Vretoned harluet e Pariz gant an darvoudoù.

Hervezañ e oa e genvroiz, gwalleürusoc'h eget ar soudarded all dre ma ne c'hellent na kompren na komz ar yezh a glevent en-dro dezho. Ar vedisined a gave diaesoc'h kompren anezho eget an Alamaned hag ar Rusianed.

Laenneg a lavar en deus klasket skañvaat o foanioù hag eo deuet a-benn mui pe vui da saveteiñ gant se muioc'h a glañvourien.

Klasket en deus ivez degas dezho sikour ar relijion, met ne oa den-a-iliz ebet brezhoneger, nemet unan eus eskopti Kemper, an ao. Floc'h, a zeue gwech an amzer evit komz gant ar Vretoned.

Met ur beleg all, a rae war-dro ar c'hloazidi, en doa goulennet ouzh Laenneg treiñ e brezhoneg ur bedenn a zisplege aes a-walc'h d'ar re war o zremenvan.

Kemer penn an hent da Vreizh a reas Theophile un nebeut sizhunvezhioù goude, o vezañ ma oa echu ar reuz e Pariz. Kuit ez a gant rederig Roazhon d'an 10 a viz Eost goude 13 bloavezh harlu. D'ar 16 emañ e Lanuon, d'an 20 e Kemper ha mont a ra tre an ozhac'h en e zomani, e Kerlouarneg, un nebeut devezhioù goude. Mantrus eo stad an traoù du-hont met eñ d'ober e renkoù gant prientiñ an adaozañ. Korn-tro ebet evitañ n'en deus ar brezhoneg, dizoloet gantañ en e vugaleaj e-barzh Elien, desket gantañ e Pariz adalek 1805, gwellaet dre forzh dezhañ daremprediñ e genvroiz en ospital ar Salpêtrière, pa zeu en-dro da Bariz e miz Here. Pa dremenas Laenneg e Naoned e chomas abaf e eontr Guillaume o klevet pegen brav e teue ar brezhoneg gantañ ha pegen souezhus oa e bouez-mouezh a vro vigoudenn.

446

Test 'zo d'e wellaenn gant ar skrid brezhonek pouezusañ en deus lezet deomp, savet gantañ ar bloavezh war-lerc'h. Brouilhed ul lizher d'e verourien e Kerlouarneg eo. Tu a zo en ur lenn anezhañ d'en em c'houlenn da biv eo dav reiñ meuleudi : d'an hini en deus skrivet pe d'ar re o deus lennet anezhañ :

« Pariz 23 miz-du 1815.

Ma mignoned

Ann aotrou Grivart a laro deoc'h ar konditionou ma fell d'inn ganto, rei deoc'h ar ferm euz a Gerlouarneg. Me em euz sonchet dinn e ve mad ive scrifa deoc'h var ann dra-ze, evit ma hellot komprenn guell a ze, ha guellet a zevri ar pez vezo mad evidoc'h.

Me a fell dinn ma vevot evel ma tere em douar, ha ma hellot diorrenn ho pugale ha dastumi danvez evito dre ho labour hag ho kundu vat, me a fell dinn ive kahoud ar pez a apparchand ouzinn, me a sonch dinn e kavimp ann eil re hag ar re all ann dra-ze er konditionou a zo ama varlec'h... »

4 fajennad vras hag heñvel a zo da heul hag echuiñ a ra : « ... Doue r'ho viro e iec'het c'hui hag ho pugale. »

Gaston Esnault goude bezañ studiet al lizheroù-se a not ar gwellaennoù bras graet gant Laenneg e implij ar yezh. Spisaat a ra ar gwellaennoù-se : kemmadurioù mat, liesterioù diaes implijet hep fazi, hag all. Notiñ a ra ivez levezon vras Ar Gonideg war ar « studier gouiziek » a ra eus Laenneg.

Diaes eo gouzout pe vare eo deuet perc'henn eus skouerenn brizius ar yezhadur-se, notennet gantañ er pajennoù 16, 18, 23, 24 ha 132, ha pegoulz ez eo aet o darempredoù da start gant an daou vreizhad brudet-mañ. Met aesaet eo bet kement-se marteze dre m'o doa kejet pell 'zo dija, ar pezh n'eo ket bet diskleriet gant nikun eus buhezskriverien Laenneg, memes ar re zreistañ e-giz Kervran daoust ma vez kavet oberenn Dujardin en e levrlennadurezh.

447

Gouzout a ouzer eo deuet er-maez ar yezhadur " kelto-breizhek " eus gwask moulerezh Rougeron, straed ar Wennilienn e Pariz, e 1807. " Adsaverezh ar

Medisinerezh a zo da vezañ gortozet un nebeut bloavezhioù c'hoazh... Dav lavarout e oa kement-se diaesoc'h.

D'ar 15 a viz Eost 1819 e voe embannet an " Traité d'auscultation médiate " gant Feugueray embannour, 4 straed ar c'hloerdi Sant Benead, hag evit an Aotrouien Brosson ha Chaudé. Degemeret e voe etre ar skiantourien gant savboentoù a bep seurt. Ar gwellañ barner anezhañ ' voe marteze Chateaubriand :

« Au moyen d'un tube appliqué aux parties extérieures du corps, notre savant compatriote breton, le Docteur Laennec, est parvenu à reconnaître, par la nature du bruit de la respiration, la nature des affections du coeur et de la poitrine. Cette belle et grande découverte fera époque dans l'histoire de l'art... »

Echu e labour gant an oberour, ne c'hell ket padout e-giz-se ken. E soñj a ra diouzhtu e miz Ebrel : skrivañ a ra d'e eontr d'ar 24 :

« Après dix-neuf ans de travaux très pénibles, je vais quitter Paris et non seulement sans fortune, mais sans être bien assuré du nécessaire. »

Met ne c'hell mont kuit gant e gariolenn nemet d'an 8 a viz Here. Diouzhtu d'an 30 a skriv d'e genderv eus Douarnenez :

« Je suis arrivé ici sain et sauf, mon cher Mériadec, et je me trouve si bien du changement de vie et de l'exercice que j'espère fermement être de retour après les vacances prochaines à Paris... »

Fiziañs dispar an holl glañvourien, ar re zesket memes. Ar pare e Breizh a badas daou vloavezh hag ar brezhoneg a voe kaoz deus outañ kalz. Tu vefe d'ober a-zivout ar yezh gant ar pezh en doa skrivet e mare ar Salpêtrière : « C'est là le médicament sur lequel je puis le plus compter... ».

« Je puis attester, a skrivas Duchâtelier goude bezañ darempredet anezhañ d'ar mare-se, qu'il aimait cette langue avec une espèce de passion qui lui rappelait son origine, car il s'était entouré de beaucoup de livres bretons... »

448

En ur zegas soñj eus e skiant-prenet e skrivas d' Ar Gonideg :

« La différence des dialectes n'empêche pas deux hommes qui savent bien leur langue de s'entendre. J'ai vu, réunis dans un hôpital de Paris, des conscrits de tous les cantons de la Basse Bretagne : je leur parlais breton de Léon, ils m'entendaient fort bien, et la grande différence de leurs dialectes ne les obligeait qu'à se répéter de temps en temps quelques mots, ou à changer la tournure de phrase quand ils avaient de la peine à être pleinement compris. »

Dic'houest da vont gant ul labour hep dont a-benn outañ, ar spered oberiant a zen-mañ a felle dezhañ kaout anaoudegezh eus ar yezhoù keltiek all, meur a skourr diouto dibaoe an disrann zo bet etre ar gouezeleg (iwerzhoneg, skoseg, manaveg) hag ar predeneg (kembraeg, brezhoneg, kerneveg). Diwar hennezh e pledas dreist-holl Laennec : kenskrivañ a rae gant tud ouiziek a vro-Gembrelenn a rae ar bibl kembraek, gant ur geriadur Latin-Kembraeg ha Kembraeg-Latin savet gant Davies, un oberenn rouez, memes e Breizh-Veur, hag a zo bet sinet da ievraoueg Kemper. Klask a reas ivez e-barzh an " Archeologia Britannica " gant Lloyd, oberenn brizius d'e soñj dre ma oa anezhi ur studiaden a-ziwar ar c'herneveg a zo anezhañ hanter hent etre ar c'hembraeg ha brezhoneg Leon. Goulenn a reas, en aner, ouzh e vignon ha troer Forbes eus Kevredigezh Kernevat an Tironiezh, diskleriadurioù a-ziwar ar c'herneveg. Ur mestr a oa deuet da vezañ war an dachenn : ne c'hell ket hen diskleriañ gwelloc'h eget al linennoù-mañ diwar bluenn Johanneau e 1826, krouer gant Cambry eus an « Académie Celtique » :

« Ce désir de vous revoir vient encore d'être augmenté par ce que m'a dit

M. Le Gonidec sur vos travaux dans les dialectes celtiques et par l'espoir qu'il m'a donné que le ministre pourrait bien créer pour vous une chaire où l'on enseignerait tous ces dialectes comparés... »

Pell a-walc'h e chomas a-raok respont, hag hen ober a reas d'ar 6 a viz Mae 1826, un nebeut a-raok e varv siwazh, gant ur fentigell, ar pezh ne oa ket kalz diouzh e c'hiz :

« Notre ami commun, M. Le Gonidec, s'est trompé, et sur ce que vous lui aviez dit, et sur ce que je lui ai dit moi-même. Je me suis amusé à bâtons rompus plutôt qu'occupé de philosophie celtique et actuellement surtout je ne puis pas même y penser. »

449

Ma vez keñveriet gant e oberenn skiantel, al labourioù bihanañ a zo o paouez bezañ meneget, ne c'hell ober, hep mar nemet diduall outo.

Met kefridi ar pennoù meur a zo lakaat mab-den da intent ar pezh a dermene Ernest Renan, ur skouer all m'en deus komzet eus luskadennoù donañ an ene keltiek :

« Il me semble bien souvent que j'ai au fond du cœur une Ville d'Ys qui sonne encore des cloches obstinées à convoquer aux offices sacrés des fidèles qui n'entendent plus. Parfois, je m'arrête pour prêter l'oreille à ces tremblantes vibrations, qui me paraissent venir de profondeurs infinies, comme des voix d'un autre monde. »

Evit klevout kleier Kêr Is hag e vije gwelloc'h heñcher eget « penitiour Kerlouarneg » ? Hag e vije gwelloc'h eget bered Ploare ?

C'hoarzhit un tamm, bep miz!
gant DIHUN
kelaouenn farsus war un dro gant
breizh, kelaouenn a severiadur
5 lur e ti ho marc'hadour-butun. 50 lur evit
ar bloaz da breizh, le Pradi, Trédion 56250 ELVEN
C.C.P. 213553 V Roazhon

Kontadenn Nedeleg

O foateñ hent dre Iwerzhon

Buan ha buan, a vouezh izel, e c'houlennas plac'h ar post diganin ha gwir e oa edon o c'hortoz ul lizher-arc'hant. Dre sin e ris « nann » dezhi.

Edo ar mell polis a oa ouzh ma ambroug, o sellout dre ar prenestr, ouzh ar c'houmoul bras diforc'h a dremene dre an oabl d'an druilh-drast.

Ur polis sioul e oa, dezhañ krabanoù evel golvizhier. Moarvat e veze o ren ur vuhez dinec'h ha didrubuilh en toull-kêr-mañ war harzoù Connemara ha Mayo.

Er-maez, dre-holl, an avel vouest en em sile dindan dilhad an dremenidi o hastañ etre daou varrad-glav, hag o skornañ a rae bete mel o eskern.

Ne oa nemet paotred Mari-Robin, gwarezet-mat en o berruzennoù tev, a gement a gerzhje gorrek dre ar straedoù en ur deurel o selloù a-gleiz hag a-zehou dre ma'z aent.

Evidon-me avat, petra 'n diaoul e oan deuet da ober en toull-mañ ?

*

Ur sizhunvezh bennak kentoc'h e oan dilestret e Rosslare, war ribl un aod trist ha plaen ha n'am adwelfe nemet evit sevel war al lestr-treizher.

Da gentañ avat e oa ret din monet da c'h-Galway da di ur Breizhad eus an Orient evit gonit trawalc'h a « gregin » da baeañ ma beaj-distro war ar " Saint-Patrick " betek an Havr-Nevez. Ur c'homper din eus an Henbont hen anaveze ervat ha digantañ eo em boa gouvezet ar stek.

Ren a rae paotr an Orient ur stal " Emporzh-Esporzh ", met soursial a rae dreist-holl ouzh kenwerzh ar pesked hag ar morc'hivri.

451

Sebezus eo evelkent, ne vefe ket troet Iwerzhoniz gant ar pesketa hag i o vevañ en un enezenn. Brezhoned eo a oa deuet da 'n em ziazezañ amañ ha da besketa en o lec'h !

Souezhusat bro !

Dispar eo Donegal ha Connemara. Dreist-holl d'ar c'houlz-mañ a'r bloaz.

Ruzet am boa ma botoù dre nouspet bro adalek Norzafrika bete Sveden en ur dremen dre Durkia. En o c'heñver avat, pegen kaer e oa amañ !

Ur vro baour, mein dre-holl. Lennoù, stankoù, poullou-dour. Kezeg en o frankiz. Saout, bihan ha du, nebeut anezho, met deñved a-leizh ! Lanneieroù ha lanneieroù c'hoazh. Ha neuze un toullad Iwerzhoniz.

Peseurt labour a ra ar re-mañ ? Tennañ taouarc'h. Gant ar bal ! Netra nemet se. Bep daou pe dri c'hant metr a-hed an hent, bernioù taouarc'h o c'hortoz unan bennak d'o dastum.

Danvez-tan paour evit tud paour.

Padal, an holl o devoa ar feson da vevañ dibreder. Ken plaen ha tra. Ya !

War an deiz ! Rak diouzh an noz e veze disheñvel an traoù abalamour d'ar « guinness ». Neuze e kroge an traoù da fraoñval. Ha tud vat, kement ha fraoñval, fraoñval a raent ! C'hoariadennoù-bilhard, fin ebet dezho, gwerenn ha bazh-c'hoari en dorn a bep eil. Padout a rae an abadenn ken na zeue an taolioù da vezañ diasur, ar c'hwitadennoù o terriñ ar blijadur a save diwar ar c'hoari. Bez' e veze atav ur paotr en ur c'horn o kregiñ da ganañ tonioù eus ar vro ha re all da ziskanañ. Pa gemenne an ostiz, ruz e fas siviennek, evel boaz : « Ladies ha gentlemen. it's time », evit reiñ da intent e veze o vonet da serriñ an norioù ha na werzhje ken a vier, e terede an holl d'an daol-evañ evit kemer o diarbennou. Gant daou pe dri fintad « guinness » dirazo e kave an dudoù keizh ar vuhez kalz konfortusoc'h. Ha me ivez !

Souezhusat bro !

Padet e oa se un toullad deizioù. Gwashañ 'zo, un devezh, e oan en em gavet hep ul liard toull em godell.

Pa lavarinn mat, ne oa ket ar wech kentañ din da vezañ bet peurgarzhed ma yalc'h. Kustum en em zibaban e stumm pe stumm. Kavout a rae din e vefe heñvel en dro-mañ adarve : pe e tegouezhfen gant unan bennak gouest d'am sikour, pe ez afen da c'h-Galway da welout paotr an Orient.

452

Nemet, ur sizhun a-raok an Nedeleg, zoken en ur vro evel houmañ e-lec'h na vez ket lakaet al lipouzerezh da lezenn, e vez ken bras ar bernioù boued saourus war lañsedoù ar stalioù ma ne c'haller ket stourm ouzh galv ar vouzellenn c'houllo.

« Emañ an holl dud-se, » a soñjen, « o vont da gorfata ha me n'am bo ket an disterañ griñsenn b-pudding da flumañ ! »

*

Pa 'z oan antreet e ti O'Conolly, stal vras kêr, e ouien a-walc'h petra edon oc'h ober. Chom a ris a-sav dirak taolioù rann ar gigerezh-voc'h. Ken diseblant ha tra, ha me da voutañ buan-buan dindan ma c'habig ur « pork-pie », gouzout a rit, an doare torzhioù-pastez, un hanter-troatad treuz dezho ha na gaver nemet er broioù giz saoz. A-hervez, e vez ret o adtommañ.

« Bo ! » emezon-me. « Kargañ a ray un toull en-yen kerkoulz-all ! »

P'edon o tremen dirak rannoù all eus ar stal e fellas din klokaat ma fourvezioù. Hag e ris. Gant ar « pork-pie » e tlejen bezañ bet ma gwalc'h. Met pa vezer kouezhet en toull m'edon kouezhet ennañ, ne vezer ket evit paouez. Gouzout a ouzoc'h petra eo, n'eo ket 'ta ?

Dreist-holl pa vez an Nedeleg a-benn pevar devezh.

Klevout a ris ervat an « hello » huchet din gant ur mevel p'edon o tostaat ouzh dor ar maez. Chom difrom e oa an afer. War ma flaen enta e talc'his da vonet ken na voe tremenet an treuzoù ganin. Neuze avat, koulz eo din lavarout deoc'h, ne chomis ket da dermal. He me da sachañ ma skasoù ganin... war an ton bras.

Siwazh, hen anzav a reot, ur wall-blanedenn a oa warnon.

N'emaoc'h ket hep gouzout penaos, er broioù-tramor, e vez atav ur « Bobby » e korn an hent. Ac'hanta, un ugent metrad bennak dirazon e welis unan. Ur pezh hini. Ha me kerkent da bouezañ war ar starderez. Re ziwezhat avat ! A-benn neuze e huched a-bouez-penn war ma lerc'h.

*

En ti-polis, e troadis dezho ur mell gaou. Edon o c'hortoz, emezon, ul

lizher-arc'hant, met, a-hervez, en abeg d'an diskrogadegoù-labour e Bro-C'hall, e oa sac'het en un tu bennak, sur a-walc'h.

453

Ma ! Paotred Mari-Robin, en Iwerzhon, n'int ket gwashoc'h eget e-lec'h all. Brudet eo Iwerzhoniz, peurvuiañ, da vezañ kilienn, met muiañ plijadur o devez eo oc'h en em gannañ kenetrezo.

En ur ger, ne oan ket bet dotuet.

Tremen a ris an noz er bidouf. Bevet ha lojet, na petra 'ta !

En deiz war-lerc'h, ambrouget gant ar polis en devoa lakaet e graban warnon ez is d'an ti-post da welout ha degouezhet e oa ar « sapre » lizher-arc'hant-se.

Mann ebet, evel just.

En trede deiz, ha ni d'ober hon tro adarre. En taol-se an hini eo e c'houlennas plac'h ar post (o welout edo ar « Bobby » o c'henaouegal ouzh ar c'houmoul) diganin ha gortoz a raen e gwirionez ul lizher-arc'hant. Ha dre sin em boa graet « nann » dezhi.

Ur wech distro d'an ti-polis e krogis da soñjal da vat n'halle ket ar c'hoari-se padout ken. Ret e oa din tennañ ur goñchenn all eus ma c'helorn.

Meneg ebet, avat, da gomz eus paotr Galway, an hini e oa bet lavaret din monet d'e gae. N'am boa aotre-labour ebet. Eñ eo en defe trubuilh o vezañ kinniget reiñ labour din. Ne farser ket gant se er vro-mañ.

Ha setu m'edod e derc'hent an Nedeleg. Poan-spered am boa o soñjal e rankfen debriñ ma adkoan er bidouf.

O tamc'hoapaat e lavaras din ar polis diouzh servij e vefe gwelloc'h ar geusteurenn diouzh an noz. Un taol-kaer evidon-me, e gwirionez !

Ne oan ket o vonet, evelkent, da bediñ ar Mabig Jezuz a oa e C'hinivelezh emberr, da zonet d'am zennañ eus ar wall-blegenn-mañ ! Tremen a raen ma amzer evel ma c'hallen, dreist-holl oc'h ober netra (ar pezh ez on ur pabor da ober) en ur c'hortoz an eur da vonet d'an ti-post. Un tamm baleadenn e vefe bepred !

Setu perak, evit ruflañ bannac'hoù frank a aer yac'h, e kerzhen war ma gorregezh. Padraig, an eontr-kordenn ouzh ma ambroug, a rae kemend-all. Anat e oa ne zisplije ket dezhañ aveliñ e benn pa 'z oa tu d'hen ober.

*

Pa respontas plac'h ar post, a-dreñv he draf, e krede dezhi e oa un dra bennak evidon, e krogis da ober goulennoù ouzhin-me ma-unan.

454

Ar wech kentañ e voe din sellout outi da vat. Koant a-walc'h e oa, met netra ouzhpenn. Koulskoude, gant he brizhennoù, e kaven feson « finetik » dezhi. Touiñ am bije graet edo o vousc'hoarzhin. Furchal a reas, en ur ruziañ, er bernioù paperoù a oa en he c'hichen.

« Un dra bennak 'zo hag a ya a-dreuz, » a lavarais ouzhin ma-unan. « Ne oar den du-mañ emañ-me amañ ! Penaos ar foeltr e vefe un dra bennak evidon ? »

Sellout a ris en-dro din hag e taolis pled neuze e oa paouezet al labour a-dreñv an drafoù all ivez. Evel dre zegouezh, ur paotr, un enseller pe un dra bennak e-giz-se, a oa o c'hortoz en e sav-sonn e-kreiz ar sal, digas, e zivrec'h e-pign a-hed e gorf ha troet e zaoulagad da gaout e votoù.

Arc'houzougal a ris evit klask gwelout petra a oa ken dedennus er c'hozh botoù-se, pa glevis Maureen (Maureen a ran anezhi, rak holl verc'hed Iwerzhon e vez graet Maureen pe v-Mary anezho) o lavarout :

« Ya, setu-eñ ! Setu ho lizher-arc'hant ! »

Hag hi da astenn din ur paper hag o tiskouez din gant he biz al lec'h ma 'm boa sinañ da ober :

« Sinit amañ, » emezi.

Pezh a ris, hep gouzout din, hgozik.

Met daoust petra 'n diaoul a oa o c'hoarvezout ? Ober a rae un taol-lagad din. An enseller, savet e zaoulagad gantañ diwar e votoù, a selle ouzhin hag a rae un tamm jestrig mignon din. A-dreñv an drafoù all, memes pezh-c'hoari !

Biskoazh kemend-all ! Ne oa ket gwir evelkent ! Graet o devoa ur gest ha roet pep a skodenn evit ma zennañ eus ma enkadenn ha me dianav-mik dezho !

Dre an draf e voe tremenet ur pakad bilhedoù din. C'hoant am boa da boket dezho holl, hogen ne zeuas ganin nemet : « Thank you ! ». Sellout a ris outo an eil war-lerc'h egile, fromet an tamm ac'hanon.

« Merry Christmas ! Nedeleg laouen ! » a lavarjont c'hoazh.

Diouzh o gwelout e tiskouezent bezañ ken fromet ha me. Ya da ! Evit gwir, ur ral a Nedeleg laouen !

Padraig, « ma » folis, a rae evel pa n'en dije gwelet na klevet seurt. Daoust ha 'n em glevet e oa ganto ivez ? E c'hallje bezañ.

Souezhusat bro !

(tr. Jakez KONAN)

Ur rummad abadennoù diwar-benn Breizh er skinwel kembraek

N'eus ket bet kalz levrioù diwar-benn Bro-Gembre embannet e Breizh ken e brezhoneg, ken e galleg. E Bro-Gembre avat, ez eus bet savet meur a levr diwar-benn Breizh abaoe ur c'hantved. An hini kentañ anezho a voe skrivet gant O. M. Edwards hag a veajas dre Vreizh er bloavezhioù 1890. Da heul e teuas Ambrose Bebb hag a dremenas kalz amzer e Breizh er bloavezhioù 20 ha 30 hag a skrivas tri levr diwar-benn ar beajoù-se. Dont a reas an Arc'hdrouiz Dyfnallt d'e dro da Vreizh er bloavezhioù 30 ha kontañ a reas ivez e veaj en ul levr ; ouzhpenn se, en deus e vab Geraint Dyfnallt Owen troet e kembraeg kontadennoù eus Breizh, a voe embannet e div levrenn. Da heul embannidigezh trede levr Ambrose Bebb diwar-benn Breizh, deuet er-maez e 1940, e voe un troc'h betek embannidigezh va levr-me " Crwydro Llydaw " e dibenn 1977 (s.o. Al Liamm niv. 185, Du-Kerzu 1977, p. 486, hag Al Liamm niv. 187, Meurzh-Ebrel 1978, p. 140).

Emañ BBC Kembre o paouez skignañ e miz Here ur rummad peder abadenn gembraek, 30 munutenn pep hini anezho, diwar-benn Breizh. Kinniget e voe an hini gentañ d'an 10 a viz Here hag an hini diwezhañ d'an 31. Plediñ a reas an abadenn gentañ gant ar beajoù graet gant O. M. Edwards, Bebb ha Dyfnallt ha keñveriañ a reas ar vro a weljont en o mare gant Breizh a vremañ. Studiet e voe ivez en abadenn gentañ emzalc'h pep hini eus an tri beajour e-keñver ar vro-c'hoar. Edwards da skouer a oa ur protestant strizh, feuket bras gant tech ar Vretoned da gavout mat ar gwin... ha ne gare tamm ebet an Iliz katolik. En abeg da se ez eo farsus-tre lenn e levr bremañ, evel ma tisplegas Hywel Teifi Edwards, ar paotr a ginnig an abadenn. Evit ar pezh a sell ouzh Bebb ha Dyfnallt e vagent ur garantez don evit Breizh. Ar pezh a zo souezhus e oa Bebb gallgar, hag en abeg da se o devoa emsaverien vrezhon 'zo ar vrasañ disfiziañs en e geñver : Taldir, da skouer, ne fizias morse ennañ. Tremena a reas ivez an abadenn gentañ-mañ war un diskouezadeg taolennoù bet livet e Breizh gant Gauguin, Cézanne ha livourien all nebeutoc'h anavezet, en o zouez un nebeut Bretoned. Aozet e oa bet an diskouezadeg-se warlene e London en Akademiezh Roueel an Arzoù-Kaer.

An eil abadenn a selle ouzh stad ar brezhoneg. Bez' e oa enni ur pennad-kaoz gant Fañch Gourvil, a voe mignon gant Bebb ha Dyfnallt. Da Fañch Gourvil e oa bet dediet levr Bebb " Pererindodau " (Pirc'hirinajoù). Hervez Gourvil ez eo teñval-tre amzer-da-zont ar brezhoneg. Pennadoù-kaoz a oa ivez en abadenn gant Per Denez hag Odile ar Skav hag a ziskouezjont kalz muioc'h a fiziañs en amzer-da-zont. Anv a zo bet ivez eus Diwan, ha diskouezet e voe un toullad skolioù-mamm.

456

Gouestlet e oa an drede abadenn d'ar relijion e Breizh ha diskouezet e voe pardon Santez-Anna-ar-Palud, kalvar Gwimilio, iliz Sant-Tegoneg (bet taolennet en un doare kaer-meurbet gant Ambrose Bebb en unan eus e levrioù). Reiñ a rae ivez an abadenn ul lod a-bouez d'ar visionerien brotestant a zeuas eus Kembre da Vreizh e dibenn ar c'hantved tremenet hag e derou ar c'hantved-mañ. Meneg a oa dreist-holl eus W. Jenkyn Jones ha Gerlan Williams a zeuas o-daou da Gemper. E 1926 e voe un tabut bras etre Ambrose Bebb ha Gerlan Williams dre bennadoù ha lizhiri e-barzh " Cymru " diwar-benn pardonioù Breizh. Evit Williams e oant oberenn an diaoul met o difenn a reas Bebb gant entan ha birvilh. En hevelep abadenn e oa ur pennad-kaoz gant an Ao. Klerg a gendalc'h d'ober dalc'hmat gant ar brezhoneg en e barrez. Echuiñ a rae an abadenn gant ur varnadenn diwar-benn diskar an iliz e Breizh. Ne raio ket droug an amdroadur-se d'ar brezhoneg o vezañ ma n'en deus ket mui plas enni, koulz lavarout (disheñvel-krenn eo an traoù e Kembre, e-lec'h m'eo chomet ar chapelioù kreñvlec'hioù ar c'hembraeg).

Plediñ a rae an abadenn diwezhañ gant ekonomiezh Vreizh. Diskouezet e voe enni e-pad ur pennad mat SICA Kastell-Paol ha labouradeg Citroën e Roazhon.

Komzet e voe ivez enni eus ar pesketaerezh hag eus an douristelezh, ha pouezet e voe kalz war heuliadennoù drastus gwallzarvoudoù evel hini al lestr Amoco Cadiz. Kinniget e voe mordredanva ar Renz evel un diskoulm kalz dereatoc'h da ezhommoù energiezh ar vro eget ar pezh a zo kinniget e Plogo...

Kinniget e oa ar beder abadenñ-se gant Hywel Teifi Edwards, ur c'helaouenner birvidik hag entanet. Daoust ma oa e veaj kentañ da Vreizh ez eo kouezhet tamm-ha-tamm e karantez ganti. Ur c'hlaoustre arvarus e c'helle seblantout bezañ dibabet un den ha na oa aet morse da Vreizh evit kinnig ar rummad abadennoù-se. E gwirionez edo etre daouarn sur-kenañ gant Rhys Lewis evel aozer an abadennoù, hag eñ oc'h anavezout Breizh mat-kenañ e gwirionez. Tremenet en deus ur bloavezh e Gwened evel kelenner er bloavezhioù 60, ha deuet eo en-dro da Vreizh meur a wech abaoe.

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Arzel YVIQUEL hag e wreg, Lenaig, Herve ha Mari a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh Gael, d'an 18 a viz Here e Kervignag.

Evelyne RAOUL ha Laorañs GUILLAUME a zo laouen o reiñ deoc'h da c'houzout ec'h eo kresket an dud en o zi gant ganedigezh Koulm Lena, d'an 8 a viz Here e Lannuon.

Mona Ar BEG ha Thierry GAHINET a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o merc'h Solenn-Mona-Bleunienn, e Kemper d'ar 15 a viz Du.

Anna Ar BEG ha Fañch DUGAST a zo laouenn o kemenn deoc'h ez int bet euredet d'ar 27 a viz Kerzu e iliz an Erge Vras e Kemper.

Hor gwellañ gourc'hemennoù a gasomp d'hor mignoned.

Kañvoù

Mantret eo Poellgor ar C'hoursez da gemenn deoc'h ez eo set da anaon, d'an 30 a viz Here 1980, e Wennded EOSTIG SARZHAV (Per Loisel), pevare Drouiz-Meur.

Bezef laouen gwennved ar Gelted da viken.

Gant tristidigezh hon eus gouvezet e oa marv Roje GUERVENNOU, koumananter feal, hag a oa o chom e Dieppe.

D'e eñvor, hor soñjoù mantret.

Profoù

MIZ EOST :

Deneza Lueg, 15 lur ; Y. B. Toull al Lann, 40 ; Loeiz Dorval, 45 ; Yann Bouessel du Bourg, 140 ; Y. Loeiz Boulbria, 64 ; Jakez Keineg, 45 ; Glaodig Liabeuf, 25 ; Timothy Bridgman, 10 ; Elesbed Coin, 40 ; Tugdual Kalvez, 20 ; Fulub Cerceau, 45 ; R. Rannou, 15 ; Andrev Krogeneg, 100 ; Huberz Jamet, 45 ; Per Kergeno, 45.
- War un dro, 699 lur.

MIZ GWENGOLO :

Joel ar Gelleg, 10 lur ; Y. Paol ar Rol, 5 ; Jakez Konan, 200 ; Dianav, 200 ; Reun Ansker, 55 ; It. Tereza Bozeg, 45 ; Yann Bouessel du Bourg, 140 ; X. ar C'hoseg, 5 ; Alan Gwilhou, 55 ; Lusian Tangi, 45 ; Gwenael Huon, 45 ; Per Mailliet, 45 ; Yvette Kervella, 30 ; Andrev Mandard, 100 ; G. Boivineau, 45 ; Andrea an Henañ, 55 ; Andrev Kornig, 25 ; E. ar Menn, 5 ; J. de Quelen, 5 ; Mikael an Eskob, 55 ; G. Rolland, 10 ; Mari-Frañseza Dutheil, 5 ; Joel Martini, 15.
- War un dro, 1 200 lur.

MIZ HERE :

D. Jouve, 2 lur ; Ch. Goanac'h, 45 ; Erwan Rihet, 55 ; Yann ar Gall, 45 ; Yann

Bouessel du Bourg, 140 ; P. an Danteg, 5 ; Laorañs Guillaumie, 25 ; It. A. Gourmelen, 45 ; Marsel Perennou, 35 ; Youenn Rosmordug, 90 ; Glaoda Chauvez, 45 ; Soazig Lavanant, Y. Kailhareg, 5.
- War un dro, 542 lur.

MIZ DU :

Per Gazio, 110 lur ; It. K. Faou, 45 ; Per ar Meur, 45 ; Yann Bouessel du Bourg, 140 ; Erwan Libouban, 15 ; Jos Kemener, 10.
- War un dro, 365 lur.

Profet eo bet d'ar gelaouenn, abaoe derou ar bloaz, 13 040,50 lur. Hep ar skoazell brizius-se e vije bet, anat, kalz muioc'h a ziaesterioù... Trugarez vras eta, en anv ar brezhoneg.

458

Priz ar c'houmanant o kreskiñ

Gant kresk ar frejoù-moulañ hag ar mizoù-post, e rankomp sevel ni ivez priz ar skodenn vloaz hag a vo, adalek derou ar bloaz a zeu :

- 60 lur evit Breizh ha Bro-C'hall,
- 70 lur evit ar broioù all,
- 100 lur evit an niverennoù kaset dre garr-nij,
- 45 lur evit ar studierien, soudarded...,
- 5 lur evit a vo da baeañ pa gemmor chomlec'h.

Evel just, n'eo ket sur tamm ebet e c'hellimp derc'hel gant ar prizioù-se evit ur bloaz... Strivoù a bep seurt a vo graet ha kontañ a reomp war skoazell efedus hor c'heneiled ivez.

Un teñzorer nevez evit " Al Liamm "

Yann-Ber D'HAESE en deus asantet kemer war e choug, adalek derou 1981, karg teñzorezh ar gelaouenn. E chomlec'h a zo Pont Keryau, 29190 Pleyben hag e niverenn C.C.P. 4914-83 B Paris.

Per ar Bihan a gendalc'h da werzhañ an niverennoù kozh ha da skoazellañ " Al Liamm " e meur a zoare.

459

Niverennoù kozh " Al Liamm "

Prenañ a c'heller an niverenn-mañ : 70, 71, 72, 75, 76, 77, 91, 92, 93, 105 betek 202.

Ni a fellfe deomp gwerzhañ, e-korf 3 miz, un toullad brav a niverennoù kozh, hag evit se, betek dibenn miz Meurzh 1981, e vo kendalc'het gant ar prizioù kozh, da lavarout eo : 10 lur ar pezh (nemet an niverennoù 116 ha 151 hag a goust 12 lur pep hini, an niverenn 120 diwar-benn Iwerzhon, an niverenn doubl 166-167, an niverenn 190 diwar-benn Roparz Hemon hag a goust 18 lur pep hini. Tu a vo ivez da brenañ bloavezhioù klok, 55 lur pep hini, eus 1965 betek 1979 (niverennoù 108 betek 197).

Spi hon eus e vo niverus ar re a skoazello ac'hanomp er mod-se, en ur glokaat war un dro o dastumadeg. Ar goulennoù a zo d'ober digant Per ar Bihan, 16, rue des Fours à Chaux, 35400 Sant Malo, c.c.p. 5349-06 A Paris.

Lizhiri

Digant P. E. A., Pleuveur-Gaoter :

« Plijadur 'm eus bepred o lenn Al Liamm, ken talvoudus ha dedennus ma 'z eo evidon.

Dibaot eo din chom diseblant e-keñver ar gelaouenn-se, rak digor eo he spered, hag embannet e vez skridoù a bep seurt, gwell a se.

Goude ma 'z eo bet gounezet gant Añjela Duval warlene ar priz Per Trepos, e oan dihabask da lenn " Leve ar paour ", ur pennad skrivet ganti evit ar genstrivadeg-se ; setu ma oan laouen o kavout an destenn en he fezh en ho niverenn diwezhañ. Trugarez deoc'h eta.

A-hend-all, evit pezh a sell ouzh hoc'h embannadurioù, n'eus dudiusoc'h trugar evidon eget ober anaoudegezh gant skrivagnerien, yaouank pe war an oad, dre ho labour.

Gwelout a ran gwech ha gwech all bruderezh evit Al Liamm war gazetennoù, zoken war " Ouest-France " (daoust ma 'z eus nebeut a dra vat da lavarout diwar he fenn) ha talvoudus eo kement-mañ a-benn ma kresko niver ho lennerien. »

Digant Y. F. J., Kemper

« Gwechall en ur vro vihan e oa tud hag a laboure evit o yezh. Stourmerien a veze graet diouto. Ar re-se n'o doa tamm ehan ken na vije desket o yezh gant holl dud ar vro. Labour 'oa d'ober. Ne oa ket ar mare da lezel da gouezhañ.

Labour oa d'ober. Met labour oa graet ivez. Ha mod-se n'eus ket pell ' zo e voe graet ur c'hontrad gant paotred al lizhiri, da laret ar P.T.T. Ar ministr a c'houlennas ma vije graet kentelioù d'an holl re oa e-barzh e servijoù. Graet oa bet, buan hag aes. Ya, met ur gudenn a oa : penaos ober evit an arnodennoù. Setu ma oa bet soñjet ober mod-se : skrivañ al lizhiri gant chomlec'hioù e galleg. Da baotred ar P.T.T. da gas al lizhiri-se lec'h oa dav. Ne zeujent ket a-benn da bep taol. Met bez' zo lod a zo fin a-walc'h, e-touesk paotred al lizhiri... Gwir...

Ha mod-se on prest da bouezañ war an enseller evit m'en dije paotr ar P.T.T. o labourat war c'hornad Erge vihan Kemper e aotreegezh vrezhonek. Sur en deus heuliet kentelioù brezhoneg gant Skol an Emsav evit kas din ul lizher skrivet : " 3, rue de Paimpol ", pa'z eo ma chomlec'h (e galleg) : 3, rue de Pemp Poul.

Salud. Ha d'ar c'hentañ. »

460

Ur bloaz zo e penaos e skrive din un amerikan eus kêr Ohio evit gouzout penaos e c'hellfe deskiñ brezhoneg. Kaset am boa dezhañ bruderezh Skol Ober. D'ar 16 a viz Du em eus resevet ut lizher digantañ. E adskrivañ a ran gant ar fazioù evit diskouez pegen ampart eo deut da vezañ e ken nebeut amzer (ur reizhadenn bennak a vo kavet etre klochedoù). - R. H.

« Aotrou ker,

Setu ur bloavezh en e bezh m'emaon o teskiñ brezhoneg, ha setu me oar-me pegement a amzer e choman hep skrivañ deoc'h. Digarezit ac'hanon, mar plij. Kalz traoù a zo degouezhet abaoe va lizher diwezhañ, ha kalz brezhoneg am eus desket. Unan eus plijadurioù brasoc'h (brasañ) va buhez eo bet an deskoni-se, ha deoc'h-c'hwi dreist-holl e tlean va zrugarekadenoù pennañ evit bezañ digoret an nor war ho yezh vurzhodus, yezh an douar keltiek, yezh, ma kredan lavarout, va

zremened pell, rak kembreat e oa va zad-kozh, evel m'em eus skrivet deoc'h ur wech, m'em eus soñj mat. Gallout a ran, betek henn, lenn aes a-walc'h e brezhoneg, ha komz a c'hellan un tammig ivez, evel m'am eus bet tu da c'houzout en doare-mañ.

Rankout a raen mont adarre da Skol-Veur Middlebury, Vermont, en hañv-mañ, evit echuiñ va « maîtrise » e spagnoleg. Brudet-tre eo ar skol evit he skolioù-yezh - bez' e vez roet rummad-kentelioù (rummadoù kentelioù) bep hañv e galleg, spagnoleg, italianeg, almaeneg (alamaneg), rusianeg, japaneg ha sinaeg. Pa gemeris rollad ar skol e miz C'hwevrer e verkis e-touez anvioù kelennerien ar skol c'hallek hini Per-Jakez Heliás, un den a anavezit-c'hwi gout'ouzon. En em lakaet em eus da labourat kalet-tre, ha p'en em ginnigis d'an Aotrou Heliás e brezhoneg, na souezhet e voe-eñ ! Lavaret en deus penaos e komzen gant pouez-mouezh vat (mat) a-walc'h. En em vodañ a raemp ur wech an amzer e-pad an hañv evit kaozeal un nebeud diwar-benn Breizh, he sevenadur hag he lennegezh. Un den eus ar re wellañ eo an Aotrou Heliás, pa laran !

N'on ket c'hoazh barrek-tre war ar yezh skrivet hag ho pediñ a ran da zigareziñ an doare diampart m'en em zisplegan ennañ (enni). Heuliañ a ran trede derez Skol Ober c'hoazh, ha spi am eus ez aio va brezhoneg da welaat dizale (war wellaat).

Goulennet em eus digant va zad ha ne fellfe ket dezhañ prenañ din Geriadur an Aotrou Vallée d'an Nedeleg. Spi am eus ec'h asanto. E saozneg e skrivo-eñ deoc'h, rak ne oar (tamm) galleg ebet nemet ar pezh en deus desket er skol tregont vloaz 'zo - ha pelloc'h ! Mar n'eo ket a-walc'h an arc'hant a gaso deoc'h, bez' ez eus (ul) lur pe zaou war va c'hont gant an Dimezell Queillé. Fellout a rafe din kaout al levr dre garr-nij, ha gouzout a ran e koust kement-se ker a-walc'h e Bro-C'hall. Gallout a rit goulenn diganin-me ar pezh a chomo da baeañ mar deus (deo) ret.

Hetañ a ran un Nedeleg laouen deoc'h ha d'ho tiegezh.

R. Hawkes, Ohio. >

461

UI lizher a vo mat prederiañ war an danvez anezhañ

Martial MENARD
692 354 - CNO - 87
Prison de Fresnes (94261)

d'an 13 a viz Eost

Kenvroad ker,

Un toulladig keleier a gasan deoc'h, da gentañ evit ho trugarekaat da vezañ kaset niverennoù Al Liamm am eus lennet gant kalz a blijadur, dreist-holl ar pennadoù savet gant Yeun ar Gow, Youenn Drezen ha skrivagnerien all eus ar memes bleud, da lavarout eo tud a ouie brezhoneg eus an dibab ha pinvidik-mor o geriaoueg. Kalz a splot a c'hellfe gonit ar vrezhonegerien nevez ouzh o studiañ ! boued-spered ha dudi a gaver tro-ha-tro. N'eo ket koufoniñ amzer kennebeut lenn lizhiri ho koumananterien, war a seblant ez eo lenner Al Liamm ur spazher-laou dibar ! Bepred war-nes digoumanantiñ kerkent ha ma kav ur pennad n'eo ket d'e c'hrad !...

Degemeret em eus ivez gant kemend-all a blijadur an niverenn 200 ; siwazh eo aet niver ar goumananterien war goazhañ un disterañ. Nag a zigasted a ranker gouzañv a-berzh skañbenneien n'o deus ket meizet eo a-bouez striv pep hini... Da grediñ eo n'eus nemet toulloù-skragn eus ar Vretoned ! Spi 'm eus e c'helloc'h evelkent tizhout 1 500 koumananter hep re a zale... N'eo ket dreistdiraez pa

soñjer ervat, met ret eo hejañ ha strilhañ an dud evel ur wezenn-bilhoù ! morboriet int bet a-viskoazh. Anavezout a ran re a dud barrek a-walc'h war ar brezhoneg hag a dremen ken aes ha tra hep koumanantiñ da gelaouenn ebet, panevet paperennoù amañ hag ahont lennet ganto evelseik. Ur stourm brudañ renet ez-virvidik a c'hellfe pourchas deoc'h tud nevez.

N'eo ket embann nevezenti lavarout ez eus skol vrezhonek e Toull-bac'h Fresnes, met stad a-walc'h a zo ennon da vezañ kaset va c'henvac'hidi war hentoù yac'h an deskiñ brezhoneg ! Rak mat ha tremen mat ez a an traoù amañ war an dachenn-se ; peuzechu eo ganeomp levr eil derez Per Denez, *Hag ar brezhoneg en deus kemeret e greñv war ar galleg en hon touez en ur ober ur bloaz*. Studiañ pizh a ra va skolidi ha bourrañ a reont o lenn al levrioù a alian da brenañ.

War an niverenn 200 e kemennit c'hoazh ez eus kelaouennoù kozh da werzhañ, en o zouez " Kroaz ar Vretoned ", ha " Dihunamb ". Dedennet on gant " Kroaz ar Vretoned " hag a-du on da brenañ ! ha bez e c'hellfec'h va lakaat e darempred gant an den o gwerzh ?...

Lenn a ran pizh kement levr brezhonek am eus evit tennañ diouto ar berniad gerioù n'emaint ket e geriadur Roparz Hemon. Evit bremañ em eus dastumet tost da vil ger... War ar memes tro e tastuman an troioù-lavar hag uhel e sav o bern ivez ! Lakaet em eus labour war ar stern evit daou vloaz, spi 'm eus ne dapin ket muioc'h ! Setu penaos e uzan va amzer, hag ar c'hentelioù brezhonek war ar priz !

Kas a ran deoc'h va gwellañ soñjoù e karantez hor yezh.

462

Kreizenn enklask breizhat ha keltiek (C.R.B.C.)

Un nebeut mizioù zo hon eus embannet roll ar Skolioù-Meur koumanantet d' Al Liamm. Notet hor boa ne oa ket en o zouez Skol-veur Vrest. E gwirionez e oa koumanantet dindan an anv C.R.B.C., ur greizenn renet gant unan eus hor c'houmananterien goshañ, Y. Le Gallo, kelenner. E bediñ a reomp d'hon digareziñ. Levraoueg ar greizenn a zo pinvidik-tre ha digor eo da gement hini a fell dezhañ ober enklaskoù.

Rakpren levrioù " Al Liamm "

Pediñ a reomp hol lennerien d'hon digareziñ evit dale an niverenn-mañ ha marteze an niverenn a zeu, daoust ma n'omp tamm ebet kiriek eus se. Tu a vo eta da rakprenañ an tri levr a zo dindan ar wask betek ar c'hentañ a viz C'hwevrer 1981 : « ur vouezh er vorenn », gant Ronan Huon, « E penn an hent », gant Youenn Olier, ha « Truez va Doue », gant Didrouz.

Teurel a reomp evezh hol lennerien war briz " Ur vouezh er vorenn " a zo bet kemmet. Jedet e oa bet, dre fazi, e vije 180 pajenn el levr pa 'z eus 200. Ar prizioù-rakpren eta a zo : war baper boutin : 28 lur e-lec'h 33 diwezhatoc'h ha war baper kaer (Arches) : 36 lur e-lec'h 42 diwezhatoc'h. Goulenn digant J. Quéillé.

World Literature today

" World Literature today " a zo ur gelaouennig lennegel amerikan drimiziek. Bep gwech ma teu er-maez ul levr gant Al Liamm e vez embannet e-barzh ur pennad-barn gant hor mignon Reun ar C'halan, kelenner e Skol-veur Wellesley. Tro hon eus bet

da lenn pennadoù nevez 'zo diwar-benn « Vijeled an deiz diwezhañ », « Gwiadenn ar vuhez », « Glas evel daoulagad c'hlas na oant ket ma re », « Ar Chalboter huñvreoù » hag « Ar Chase ». Ar gelaouenn a vez embannet gant Skol-veur Norman en Oklahoma (U.S.A.).

Skridoù ha kelaouennoù

- Dindan ur golo kaer evel boaz hag embannet en un doare aketus e kinnig deomp ar gelaouenn drimiziek **Skrid** (niv. 24) barzhonegoù ha pennadoù bet skrivet dreist-holl gant tud yaouank. Ur pennad dedennus diwar zorn Per Denez a gaver ivez en niverenn-mañ dindan an talbenn « Istor ar rannyezhoù ».

- **Bleun-Brug** niverenn 2 a zo, evel kustum, e galleg hag e brezhoneg. V. Seite a ro deomp ur pennad diwar-benn ar Chaloni Bleunven aet da anaon e miz Gouere diwezhañ. Graet en doa war-dro ar gelaouenn " Bleun-Brug " ha skrivet meur a bennad e brezhoneg er gelaouenn-se. An Aotrou Mevelleg a varn un nebeud oberennoù brezhonek deut er-maez er mizioù tremenet : eil levr « C'hoariva » Roparz Hemon, ar pezh-c'hoari « O Chezuz », lakaet e brezhoneg gant R. Derrien, hag « Ar Chase » gant Goulc'han Kervella.

463

- Degouezhet eo ganeomp ivez pempvet niverenn (Mezheven-Gwengolo) ar gelaouenn « viziek » **Brud-Nevez**. E-barzh e kaver barzhonegoù, div sonenn bet dastumet gant Kerlann, ur sketch gant P. Helias bet skingaset e 1957 ha dibenn eñvorennoù Yves Miossec, hep ankounac'haat ur varnadenn veulus savet gant P. M. Mevel diwar-benn « Ar veaj-se ur wech e oa ».

- **Imbourc'h** a zo o paouez embann (liesskrivet) ur geriadur eus ar brezhoneg arnevez (Brezhonek-Gallek). Kavout a reer ennañ ar gerioù nevez bet ijinet gant SADED ha kenlabourerien " Imbourc'h ". Ur stagadenn eo d'an niverenn 125-126. Bez' ez eus el levr-se 400 pajenn bennak skrivet bras. Ar priz a zo 37 lur evit ar goumananterien ha 52 lur evit ar re all - k.r.p. 1 534 25 N Roazhon, Y. Ollivier.

- **Imajer** niverenn 1 a zo ur gelaouenn eus ment " An Amzer ", savet evit embann keleier a bep seurt ha bruderezh. 16 pajenn zo enni. Koumanant : 25 lur - k.r.p. Dazont Roazhon 313 394 T.

- **An Teodeg** hag **An Tribann** a zo div gelaouenn graet war ar memes patrom hag embannet er memes lec'h en offset o-div. Pennadoù e brezhoneg hag e galleg a gaver enno. Evit pezh a sell ouzh " An Tribann ", kelaouenn ar Gorsedd, ne ouimp ket e oa c'hoazh anezhi. Al lodenn vrasañ eus ar gelaouenn a zo e brezhoneg. Ar pennad-digeriñ eo prezegenn ar pempvet drouiz meur Gwenc'hlan da geñver ar Gorsedd diwezhañ hag e diabarzh ar gelaouenn e kaver ur follenn o kemenn ez eo aet ar pevare drouiz meur da anaon e miz Here. En niverenn e kaver c'hoazh ur pennad skiantel diwar-benn Deiziadur Coligny gant G. Pennaod.

- Degouezhet eo ganeomp ivez ar c'helaouennoù **Bremañ, An Amzer, Evit ar brezhoneg**, o-zeir e brezhoneg penn-da-benn, **L'Avenir de la Bretagne**, e galleg, hag **An Lef Kernevek**. War niverenn miz Du-Kerzu **Vivre au Pays**, kelaouenn PSU Breizh, e c'heller lenn daou bennad hir a-walc'h e brezhoneg. Unan diwar-benn Lezvarn ar Stad ha prosez ar Vretoned yaouank hag egile, e gwenedeg, e stumm un diviz war ar film « Le Cheval d'Orgueil », pe gentoc'h a-enep dezhañ.

- Hor mignon R. Laouenan a zo o paouez skrivañ ur mell levr 340 pajenn ennañ, e galleg : *Le Tocsin de la Moisson*, lodenn gentañ an tri levr emañ e soñj skrivañ diwar-benn ar brezel bras kentañ. Rentañ a ra kont amañ eus ar sizhuniou diwezhañ a-raok ma krogas ar brezel. E-pad pemp bloaz en deus Roger Laouenan graet enklaskoù en dielloù, er c'helaouennoù hag e kaieroù bet lezet war-lerc'h soudarded al lazhadeg vras ma kollas enni Breizh 240 000 eus he bugale. Embannet eo bet al levr gant France-Empire.

Le Lian des Gazettes

Deut eo a-benn ar gevredigezh **Les Amis du parler gallo** da embann ur pikol levr, anezhañ dastumad un toullad pennadoù deut er-maez e-pad ur bloaz ha gouestlet d'an hêrezh sevenadurel ha lennegel e Breizh-Uhel.

Leun a vuhez eo al levr, n'eo ket hepken en abeg d'ar pennadoù, met ivez gant an tresadennoù ha luc'hskeudennoù, Prizius-kenañ e vo evel just evit ar stourmerien ha diskouez a ra splann an hent graet abaoe ur bloaz gant an Emsav Gallo.

Menegomp ez eo deut er-maez al levr gant skoazell kêrioù Roazhon ha Sant-Brieg. Da c'houlenn diskleriadurioù, skrivañ d'ar chomlec'h-mañ : Les Amis du Parler Gallo, B.P. 48, 22190 Plerin.

An Teodeg

An Teodeg, embannet gant Bretoned ar gevredigezh " Dugelez Breiz ", diazezet e Les Lilas, a zo muioc'h eget kannadig ur gevredigezh. Pennadoù talvoudus a gaver e-barzh, skridvarnerezh diwar-benn filmoù, levrioù, ha dreist-holl diwar-benn ar studiadennoù hag oberennoù a skiant hag a lennegezhgouestlet da zanvezioù keltiek, ha pa vent embannet e Breizh pe e lec'h all. Koumanant-bloaz : 35 lur, c.c.p. Dugelez Breizh 21 521 80 G Paris.

Fichennañ " Barr-Heol

Marv eo Barr-Heol abaoe miz Kerzu 1978. War a leverer, a bep ma teue er-maez e veze savet fichenoù war ar yezh anezhañ : geriadur, skritur, troioù-lavar hag all. Pa veze liesskrivet ar gelc'hgelaouenn, e veze un toulladig vioù-koukou ; hogen kerkent ha ma oa bet moulet e Pederneg e oa bet gwashaet an traoù. Setu perak e rankan, me bet pennskrivagner " Barr-Heol ", berzañ ar re o deus savet fichenoù pe a garfe sevel fichenoù war Yezh ar gelc'hgelaouenn da vezañ war-vezh, gant aon da gemer evel gwir yezh ar pennskrivagner hag e genlabourerien ar pezh a welont moulet. Neuze 'ta kement fichenn, kement menegad savet diwar ar gelc'hgelaouenn, dreist-holl evit pezh a sell ouzh kudennoù arvarus, nemet e vefent bet gwiriektaet gant Klerg e-unan, a zo da vezañ degemeret gant kalz a evezh.

KLERG.

Ur benveg nevez evit anaout Kêr-Roazhon

Dindan ar wask e vo lakaet a-barzh nemeur " Roazhon Hiziv ".

Petra eo " Roazhon Hiziv " ? Ul levrig eo, kavet ennañ :

- 1°) Ur roll divyezhek (galleg/brezhoneg) eus holl straedoù Roazhon.
- 2°) Ur plaen brezhonek eus kreizkêr Roazhon.
- 3°) Ur bern titouroù ha chomlec'hioù (e brezhoneg) a servijo da Roazhoniz ha d'an dud o tremen un nebeut devezhioù eno Mererezhioù prefeddi, maerdi), Monumantoù, Mirdioù, Arvestoù (ar c'hoarivaoù, fiñvskeudenndioù, salioù M.J.C.où-.), Liorzhoù, Sportoù (ar sportvaoù, salioù, marc'hvaoù marc'hhouarnvaoù, poull-neñvoù, tennis...), Klañvdioù, Kelennadurezh,

Levraouegoù, Polis hag Archerezh, Relijion, Beredoù, Kannadtiou, ar Post, Skingomz ha Skinwel, Kelaouennoù, Dezougerezh, hag all...

Dont a raio er-maez a-benn nebeut.

Gwerzhet e vo 6 lur an tamm, 5 lur ma vez prenet 10 war un dro.

Titouroù ha gwerzhioù : An Amzer, Mererezh, 2 straed ar Richardière, 35100 Roazhon - k.r.p. (Decambourg) : Roazhon 25 97 V.

465

Beaj Gwynfor Evans e Breizh

Deut oa e miz Ebrel 1947 eizh Kembrek - an holl anezho personelezhioù diouzh an dibab - d'ober un enklask e Breizh war blas ar yezh ha frankiz ar menozioù en hor bro. An danevell embannet da heul o beaj a oa bet evit gouarnamant Bro-C'hall ur varnadenn daer, daoust dezhi bezañ bet distaget en un doare seven-kenañ... E miz Du 1980 ez eo Gwynfor Evans hag a zo deut da weladenniñ Breizh, diouzhtu war-lerc'h an trec'h bras gonezet gantañ war ar Saozon (so. Al Liamm niv. 201, pp. 299 ha 312). Ul levrig, ur bern skeudennoù ennañ a vo embannet gant Kuzul ar Brezhoneg war ar veaj pouezus-se. Moarvat e vo an disoc'hoù anezhañ ken efedus da reiñ lañs d'an emsav ha ma oa bet reoù enklask 1947...

Kentelioù kembraeg e Kêr-Vreizh

D'an 8 a viz Du 1980 ez eus bet kroget gant kentelioù kembraeg e Kêr-Vreizh. Graet e vezont, evel er bloavezhioù tremenet, d'ar sadorn da 3 eur d'enderv. Hevlene, war-c'houlenn ar skolidi, e vo kendalc'het gant levrenn gentañ " Ar c'hembraeg hep poan " embannet e ti Preder, betek dibenn ar bloaz, ha, da c'houde, e vo kroget da studiañ pennadoù liesseurt tennet eus kelc'hgelaouennoù pe romantoù, arnodskridoù ha..., ken ne vo tu da zegemer er c'hentelioù-se nemet ar re a zo gante un tamm anaoudegezh eus ar c'hembraeg endeo. Kêr-Vreizh, 43, rue St-Placide, 75006 Paris (digor bep sadorn eus 4 eur da 8 eur noz).

Enor da dud veur Breizh

Nevez 'zo e lavare ur c'hembread deut da weladenniñ Breizh pegen souezhet ha feuket e oa o welout e kêr-Roazhon da skouer enoret estrenien enepbreizhat evel Gambetta ha Jul Ferry, roet o anv da valioù bras, tra ma oa roet anv Breizhiz veur d'un nebeut straedoùigoù dister. Arouez un dibab, siwazh... Ur skouer dreist er c'heñver-se a zo o paouez bezañ roet gant Kreizenn sevenadurel vrezhon Gwengamp : diwar vremañ e vo hec'h anv Kreizenn sevenadurel vrezhon Roparz Hemon. Setu un doare stourm nevez da embreger : pouezañ e pep lec'h, e pep kêr evit ma vo daskoret da dud veur Breizh ar plas a enor a zellezont. Un doare dinoaz hag efedus eo da gas war-raok al labour didrevadenniñ hor bro boulc'het brav endeo war veur a dachenn : embannidigezh levrioù, kelaouennoù, pladennoù, skolioù brezhonek dre gomz ha dre lizher, skolioù Diwan, abadennoù skingomz ha skinwel, chekennoù brezhonek, panelloù a bep seurt, ha., ha.

466

Chomlec'h Kreizenn sevenadurel vrezhon Roparz Hemon : place de Verdun, e Gwengamp. Digor e vez ar greizenn pep meurzh da noz ha pep merc'her goude merenn evit ar c'hentelioù, hag ivez pep sadorn etre 3 eur ha 4 eur evit amprestiñ levrioù.

En hevelep spered, e vo lidet eil bloaz-ha-kantved Laenneg gant Kuzul ar Brezhoneg. Ur pred bras a vo aozet en e enor e Lokorn, e ti Chipon, d'ar sul 15

a viz C'hwevrer. Diouzh ar beure e vo lidet un oferenn vrezhonek hag ivez un emgav e bered Ploare dirak bez Laenneg. Da c'houzout hiroc'h, goulenn digant Kuzul ar Brezhoneg 28 straed an Tri Breur ar Gov, 22000 Sant-Brieg - Pg (96) 33 26 66.

Ar brezhoneg er vuhez voutin

Muioc'h-mui e weler er c'helaouennoù pemdeziek embannet er vro ar menoz breizhek o toullañ e hent, daoust d'ar spered gall a zo oc'h ober e reuz, siwazh, er journalioù-se. Nevez 'zo da skouer en " Télégramme " ez eus bet kaoz eus ur c'huzul-kumun lec'h e vez pleustret pep tra e brezhoneg, ha meneget ivez war an tu kontrol beleien 'zo hag a nac'h selaou ouzh tud o kofesiñ o fec'hedoù e yezh ar vro (hag int brezhonegerien...). Gant fent e oa echuet ar pennadig o lavarout penaos e oa posubl bremañ paeañ dîner an iliz gant chekennoù brezhonek... Hogen a-wechoù e oar c'hoazh an Iliz ober gant ar yezh en un doare dreist (brezhoneg brezhonek evel m'en dije lavaret an Ao. Klerg e Barr-Heog, evel da skouer, da Ouel an Hollsent e Plouilio. Posubl eo bet d'an holl klevout war wagennoù radio an Arvorig an oferenn gaer lidet en deiz-se, ha souezhus eo al levezon a c'hell seurt darvoud kaout war an dud : e-touez an engroez aet d'ar vered goude an oferenn ne veze klevet ger gallek ebet (nemet, ret hen anzav, gant ar vugale...). Enrollet eo bet an oferenn war gasedigoù (ur c'hantad), .30 lur pep hini, da vezañ goulennet digant an Ao. Herri Le Jeune, person Plouilio, 22300 Lannuon.

467

Seblantoù mat... ha fall !

E-pad pell amzer e oa an emsaverien ar « vox clamans in deserti », da lavarout eo e stourment e-touez an digomprenusted hag a-wechoù ar gasoni... Bremañ eo kemmet an traoù, ha, ma weler siwazh ar yezh o vont da get er werin, e-keñver spered e c'heller soñjal emañ ar Vretoned o kas kuit o si a izelegezh ha krog da brizout en un doare dereat talvoudegezh o sevenadur : skolioù bihan " Diwan " o tigeriñ e pep lec'h, pennadoù-brud embannet er c'helaouennoù (kalz diouto e Breizh-Uhel evel, skouer « Les Informations - Le Pays » e bro-Redon), filmoù koustus kinniget d'an dud - disingal o zalvoudegezh ret eo hen anzav...

Munudoù all, a c'hell bezañ sellet evel dister hogen a ziskouez un emdroadur a bouez : da skouer, lenn a reomp er « Paysan d'Ille-et-Vilaine » niv. 1089 (16 a viz Here 1980) penaos, en o labour imbourc'h o deus ensavadurioù bras (INRA - GEVES - ITCF) krouet un had ed goañv nevez a zo bet badezet **Roazon**. Nebeut a dra ? Ya, hogen gwechall, ne vije ket bet huñvreet keleier ar seurt-se, na gwelout ar « Gwenn-ha-Du » e pep lec'h evel ma weler bremañ...

War an tu enep e c'heller klemm, siwazh, pa weler ar c'hastizoù kalet lakaet war choug hor c'henvroiz bet re daer en o obererezh... E Korsika, lec'h e vez kavet muioc'h a genskoazell en em ziskouez kalz abafoc'h barnerien al lez-surentez... N'eus nemet ur spered trec'hus a c'hell hor c'has war-raok !

Sonerezh

Skingsaset ez eus bet war France-Musique e fin miz Eost, en abadenn " Le livre d'or ", ur pezh sonerezh gant hor mignon Perig Herbert evit Denise Megevand, telennourez ha « productrice » vrudet. Anv ar sonadenn a zo " An Dorgenn " evit an delenn geltiek.

Kas a reomp da Berig Herbert hor gwellañ gourc'hemenoù ha laouen e vijemp bet

da c'houzout en a-raok e vije bet skingaset e bezh-sonerezh.

468

Kael Nn 13

	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
I	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-
II	-	-	-	-	-	X	-	-	-	-
III	-	-	-	X	-	-	-	-	-	-
IV	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-
V	-	-	-	-	-	-	X	X	-	-
VI	-	-	X	-	-	-	-	-	-	-
VII	-	X	-	-	-	-	-	-	-	-
VIII	-	-	-	X	X	-	X	-	-	-
IX	-	-	-	-	-	X	-	-	X	-
X	-	-	-	-	-	-	-	-	-	-

A-led : I. Paour-kaezh Konomor : un hanter-zousennad en doa ! - II. Marc'h Hamon ne vez ket ; Rosgo a c'hellfed ober anezhañ e Brezhoneg. - III. En diabarzh e oa ivez e Breizh gwechall ; Heuliañ skouer an abostol pe ar mezhvier. - IV. Pa rae Tremeur gant an traezh, ne oa ket plijet Konomor. - V. Techet da grediñ (skritur KLT); Malet e vez an derv outañ. - VI. N'eus nemet hini Doue a vez skrivet evel-se ; Kentañ rener Breizh Dishual. - VII. Digaledan. - VIII. Ar wezenn-se ne veze ket kavet er c'hoadoù nag el liorzhoù ; Pe en hanternoz Breizh, pe en hanternoz Amerika. - IX. Karget a win da zislonkañ ha divezv-krenn koulskoude ; Daouhanteret gant an Tad Maner. - X. Pa hucher « Bis ! » war ar re-se, n'eo ket gant ar spi ma kendalc'hint da ganañ

A-serzh : 1. Ket ker ker. - 2. An dore gwellañ da zeskiñ Brezhoneg ; Diwar. - 3. Desket mat e vezer drezi ; N'eo ket daou hag unan ha koulskoude eo trederenn nav. - 4. Raganv ; Meur a vroadelour a yeas d'ar skol gant ar sant-se en Iwerzhon (eilpennet) ; Tonket e vez an holl yezhoù da echuiñ evel-se. - 5. Ar re-se n'int ket berr, paneve o lostenn a ve ; To pa ri. - 6. Evit ober un den, ne dalv ket muioc'h eget ur c'hemener (skritur KLT). - 7. Meur a hini a oa gwechall dirak iliz Sant-Korantin, moarvat ; Beg bras ha krabanoù hir ; N'eo ket er Vatikan ma vez gwelet ar marilh-se war ar c'hirri. - 8. Bez ez eus bet kavet evitañ moarvat ; Vi ket degemerus. - 9. Sente ouzh Kalloc'h, met war an tu gin. - 10. Lezenner.

GWALEREG.

DISKOULM D'AR GAEL Nn 12.

A-led I. Karr-dre-dan. - II. Olier ; Neze. - III. Roegerez. - IV. Rez ; Mezhet. - V. Iz ; Pezhioù. - VI. Geved ; Re - VII. Anatadur. NN ; Ol ; Dube. - IX. Breniliz. - X. Donedigezh.

A-serzh : 1. Korriganed. - 2. Aloezenn. - 3. Riez ; Va ; BN, - 4. Reg ; Petore. - 5. Dremaled. - 6. Rez ; Ni. - 7. Enez-Heudig. - 8. Dezhi ; Rule. - 9. Az ; Eor ; Biz. 10. Neptuegezh.

Roll ar Pennadoù

bet embannet gant AL LIAMM

- bloavezh 1980 (niv. 198-203) -
 anvioù an oberourien hervez urzh al lizherenneg
 (198/040 a dalvez : niverenn 198, pajenn 40)

ANDOUARD (Loeiz)	
Yec'hed ar vamm-gozh	198/040
Al levrioù	201/302
(" Glas evel daoulagad c'hlas na oant ket ma re ", gant Per Denez)	
Ar c'hwil-derv (s.o. Padraig Mac Piarais).	
Kil an ti (s.o. Séan O Riordain).	
BOURDELLES (Per)	
Laenneg ? Piv eo hennezh ?	203/425
BOZEG (Gweltaz ar)	
O foetañ hent dit Iwerzhon (kontadenn Nedeleg)	203/450
(br. gant Jakez Konan)	
BRAS (Anatol ar)	
Ar skourjez tan	200/207
(br. gant Daniel Giraudon)	
COLLO (M. ha Y. J. ar C'h/)	
Al loarellou hag an emvataat anezho	202/359
DELAPORTE (R.)	
John Millington Synge ha Breizh	198/017
DENEZ (Per)	
Gwynfor Evans	200/299
Al levrioù	202/376
(" Glas evel daoulagad c'hlas na oant ket ma re ")	
DUVAL (Añjela)	
Porno	198/005
Leve ar aour (Priz Per Trepos 1979)	201/257
GALAN (Reun ar C'h/)	
An den na gouske morse	202/326
An deizioù du	203/405
GIRAUDON (Daniel)	
Ar skourjez tan (s.o. Anatol ar Bras)	
GORWENAL	
Avelioù-tro (Genver-Chwevrer 1979)	198/058
Avelioù-tro (Meurzh-Ebrel 1979)	199/140
Avelioù-tro (Mae-Mezheven 1979)	200/222
Avelioù-tro (Gouere-Eost 1979)	201/305
GRIFFITHS (Gwyn)	
Danevelloù brezhoneg troet hag embannet e kembraeg	198/049
Ur rummad abadennoù diwar-benn Breizh er skinwel kembraek	203/455
GWEGEN (Jorj)	
En ur gantreal dre straedoù Budapest	199/114

Friza an Hanternoz a-rez ar mor diroll	201/276
HUON (Roman) Da geñver an niverenn 200	200/163
HUON (Tudual) Al levrioù (" Ar chalboter huñvreoù ")	202/377
IONA Herri Hillion	202/342
JARL (Yann-Eozen) Tarzh ar c'hañv Tarzh ar sklaerder Tarzh ar garantez Tarzh ar baourentez Tarzh an hengarantez	199/083 199/084 200/166 201/243 202/323
KERVELLA (Frañsez) Studi al lec'hioù, un digor war istor ar vro	200/207
KERVELLA (Goulc'han) C'hoariva brezhonek Kêr-Iz blaavezh 2000, pe Milin an Ankou Ar medisinerezh oc'h ober ul lamm bras war-raok gant Laenneg	199/134 201/245 203/409
KERVENDAL (F.) Nann ! ne zevimp ket hon ilizoù !	198/053
KIDNA (Sten) Hervelina Germeur Galloeg, normaneg hag all	198/003 198/035
KLERG Gaston Latimier	199/097
KONAN (Jakez) O foetañ hent dre Iwerzhon (s.o. Gweltaz ar Bozeg)	
LANNDIERN (Herve) Priz Langleiz 1979 d'ur c'helenner skol-veur amerikan Al levrioù (" Ar chalboter huñvreoù ", gant Tudual Huon)	198/046 202/377
LATIMIER (Andrev) E koun ur mignon kar-e-vro	199/106
Mac PIARAIS (Padraig) Ar c'hwil-derv (troet a-ziwar ar gouezeleg gant Loeiz Andouard)	199/093
MENEZ-KELDREG (Reun) Daleañ a ra An dud n'int ket fur	198/006 200/186
MEULER (Laouig ar) Un dro-besketa e Karanteg Karreg an diaoul	199/088 200/180
MIOSSEC (J. C.) Sant Pistrakig Al lizher	199/085 200/193

NAILH (Bernez an) Un dro e levraoueg ar C'hendalc'h	199/108
O RIORDAIN (Séan) Kil an ti (Troet ha notennet gant Loeiz Andouard)	200/170
PENNAOD (Goulven) Levrioù deskiñ nevez	199/143
REBEDOUR (ar) Sonennig	203/403
RENARD (Dominique) Pipi	198/015
ROUSSEAU (Dr) Laenneg brezhoneger	203/439
ROUZ (Bernez) Laenneg brezhoneger (s.o. Dr Rousseau)	
TANGI (Lusian) Unan eus troioù-kamm ar garantez O c'hedal ar bleizi	200/173 202/320
TILLENON (Yann-Ber) Evit ar re a zo en toull	200/168